



Archives et bibliothèque diocésaine de Quimper et Léon

Document numérisé

Source : <http://catholique-quimper.cef.fr/diocese/bibliotheque-et-archives.html>

2011

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezouneec.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten à goust :

Evit eur bloas..... DAOU SCOUET.
Evit c'huec'h miz..... EUR SCOUET.
Evit tri miz..... C'HUEC'H REAL.
Eur gazeten ebken..... DAOU VENNEC.

Ar bacamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Belec e Kemper.

Ar paemanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

ROM. — Gouel ar Rouanez eo ar memor eus an deiz ma en em ziskuezas Jesus da dri Roue eus a vro Sao-Heol; ha kementse evit diskuez oa deut evit savetei an oll, evit cas dre an oll garteriou eus ar bed ar sclerijen eus ar virionez. Ar gouel-ma ta so evel eur gomansamant eus a c'houel ar Pantecost, eus an deiz-se e pehini, pa voa deut ar mare da gas an aviel dre ar bed oll, ar Speret-Santel a ziliamas teodou an ebstel, hag ho lakeas da goms var eun dro kement iez pe langach so var an douar. Ne deus nemet eun Doue, eun iliz, eur feiz; mes bez'ez eus var ar bed cals a garteriadou tud, ha pep carter en deus he iez pe he langach; mes an oll zo galvet d'an anaoudeguez eus ar virionez. Evit diskuez kementse, ha rei da anaout er memes amzer eo eus a Rom, evel eus a eun eienen, e tle diblas sclerijen an aviel evit en em skigna dre ar bed oll, e rer d'an deiz-ma er guær-ze eur gouel e pehini e veuler an tri Roue e guerziou hag e prezeguennou, hag e comzer, cazi e kement iez so anavezet, eus a vadelez hor Zalver da veza galvet an oll boblou d'ar guir feiz. Scolerion scolach, ar *propagand*, da lavaret scolach evit skigna ar feiz, eo a deu evelse da goms a guementse pehini en he iez, latin, gallec, brezouneec, etc. En eur guer, evel an eus lavaret hueloc'h, e kement iez couls lavaret so var an douar.

An Tad Santel n'en deus ket gallet *preconiza* brema an Eskibien, hanvet evit ar Frans, da lavaret eo, disclerija e roe dezho he otre hag ar c'hallout da c'houarn ho Escoption. N'oa ket bet a amzer da ober an enclascou red evit kementse. Lavaret a rer e chomint ac'hann da vis meurs. N'eus ket gret ken nebeut a Gardinalet en dervezioù-ma.

PARIS. — E Paris, mar gueler cals dizurziou, e veler cals a œuvrou mad. Evel ma zeus brema dienez e carteriou eus an Itali, ha dreist oll er penn dioc'h ar c'hreiz, cals bugale a guita ar c'harteriou-ze evit

mont da glasc ho bara er broiou estren ha muia ma c'hellont er c'heriou bras. Ar vugale-ze, na petra ta, a so dilezet, n'o deus den d'ho c'helen na da zeski dezho netra eus ho relijion. Eun tad eus a urs ar Barnabitet so en em laket e Paris da zestum ar vugale-ze ha da zeski dezho ho c'hatekiz. Aleiz a'eneou mad en deus cavet d'he zicour d'ho beva ha d'ho guisca. Deis gouel ar Rouanez en deus gallet lacat eur vanden vad anezho da gommunia. Nons ar Pap, da lavaret eo, an hini a zalc'h leac'h ar Pap e Paris, a voa deut he unan da rei ho Doue d'ar vugale-ze ha da goms outho e iez ho bro. Roet en deus dezho da anaout peguement ema bugale emzivad evel dho var var d'en em goll. Hag e guirionez, mar en em goll ken alicz a grouadur, hag hi dirag daoulagad tad ha mam, penaus n'en em golfe ket ar re n'o deus ket zoken eun den eus ho anaoudeguez d'ho c'hentelia? Pebez mirit eta evit ar re a guemer truez outho hag o deus ar vadelez d'ho c'helen!

FREJUS. — En dervezioù-ma eus badezet e parrez Beausset eur morian eus ar re zua. N'en deus nemet pemzeg vloas. Digasset oa bet da Suez evit beza guerzet. Eno en doa gallet tec'het ha mont da c'houl scoazel oc'h Consul ar Frans, an Aotrou Emerat. An Itron Emerat en em gargas anezan, her c'hassas e Frans eleac'h ma hen lakeas etre daouarn person ar barrez ma comzomp anezhi. Ar pastor mad-ze en deus he guclennet hag hirio ar morian iaouanc a anavez mad he relijion hag a so eur skuer a vertus. Badezet eo bet ha recevet en deus he Zoue dirag eun niver bras a dud pere a voa oll teneret ho c'halon o velet kementse.

E Brest ez eus taguet unan bennag gant ar c'holera; mes ne ra ket a zistruch. An Aotrou'n Escop so eat di evit rei courach da dud ar guær-ze ha miret outho da guemeret aoun. An Aotrou Prefet a voa eat ive da Vrest eun devez bennag kentoc'h. Ar c'hlenvet a varf nebeut a dud gantha; mes cals a guemer aoun, hag an aoun-ze

a ra muioc'h a zrong evit ar c'hlenvet. Brema e leverer eo eat couls lavaret ar c'holera eus a Vrest.

An Aotrou Yvenat a voa oc'h ober scol e Botsorhel, so hanvet vikel e Sant Marc.

An Aotrou Gilard, vikel e Sizun, so hanvet professor er scolach dalc'het gant an Aotrou Bellec, e Kemperle.

An Aotrou Poteur, professor er scolach dalc'het gant an Aotrou Bellec, e Kemperle, so hanvet vikel e Sizun.

An Aotrou Combot, professor e Lesneven, an Aotrou Clisson, hag an Aotrou Gueguen, avieler eus a Blouzeniel, so maro en derveziou tremenet.

D'ar 17 a viz c'huevrer, retred brezouneec evit ar voazet e Lesneven, hag evit ar merc'hed e Kemperle.

G. M.

Ar Pap, hen gouzout a rear, ar Pap, abaoe seiz pe eiz vloaz-so, a so eat da baour. N'en deuz ket awalc'h, na tost, evid ar pez a zigouez ganthan da ober, pe evid ober lezeñ vad war he dammik rouantelez, pe evid beva ar re a zo oc'h he sicour da c'houarn ann Ilis catholik, famill ar guir gristenien. Mes bugale vad na lezont ket eunn tad da gaout ezomm ha dienez. Ama neira essetoc'h ma carfe ann holl en em glevout. Tri gwennek er bloaz digant pep kristen, ma vent roet, kementse a vez awalc'h, ha piou n'ho rofe ket, ma carfe.

Enn eunn escopti euz a Franc, pebez volonteze vad war ghemment-ma? Ar ghest a zo bet caer enn holl ilizou; mes ouz-penn cetu ama eul lizer deut da unan euz a veleien ann Escopti: Autrou, eme ann den-ze, bez'am euz ann enor da gass d'e-hoc'h va c'halanna bihan evid hon Tad Santel ar Pap. Na roan nemet cant livr. Nebeud a dra eo evid ezommou ker braz, ha kals nebeutoc'h c'hoaz evit ma c'halon. Pa hellin, me a roi muioc'h, hag a greiz ma c'halon! Mes bep bloaz e roinn kement-all, nag a vez red d'in tremen gant bara sec'h. — Va c'hoar a ro ive ar c'hant livr e doa prestet d'hon Tad Santel ar Pap ar bloas tremenet, hag ouz-penn, scler eo, ar mad pe ann interest diwarn-ezho epad ar bloaz. M. D.

L. Delaciz 57

Ar Breur hag ar C'hoar.

Comzet on eus er follien diveza, eus a barc ar Verzerien, eus ar re a voue laket d'ar maro el leac'h-ze tost da Zantez Anna Venet; setu ama petra leverer divar benn unan eus an dudchentil a voa condaonet da goll ho buez eno.

An Aotrou cont Turgis, dijentil iaouanc eus a guichen Guenet, a voa etouez an noblans en em gannas e Kiberon evit ho roue. Destumet eno etre ar mor hag arme ar Republic, teir guech hag ouспен creoc'h evitho, e voue red dezo en em rei, pe vervel. Casset e vouent da Alre, ha laket evel bandennou denvet en ilizou a bere e voa gret prizoniou.

Eno e vouent condaonet d'ar maro, hag ac'hano e tennet eur vanden bemdez hag a gunduet da barc ar Verzerien, eleac'h ma ho lazet gant tennou. An dudchentil-ze a voa lod anezho pell a voa dindan an armou, hag ho zud en ho maneriu a voa nec'het bras gantho dre ne vouent ket peleac'h edont, ha ne recevent kelou ebet digantho.

An Aotrou Turgis en doa kuitet tri-pe bevar mis a voa maner an Theix, eleac'h m'en doa lezet he vam, intanvez eur pennad a voa, he c'hoar eus ar memez oad gantha, hag eur guinterve dezan, minorez savet eno gant an Itron Turgis e kichen he merc'h. Abaoe ma voa eat en hent, ar c'hont iaouanc n'en devoa digasset kelou ebet d'he vam. Evelse calon ar vam guéz a voa serret gant an nec'hamant couls ha calonou ar c'hoar hag ar guinterve.

Tremenet oa emgann Kiberon, hag an itron nag he diou zemezel n'o doa ket clevet pe a voa an Aotrou Turgis eno pe n'edo ket; n'o doa ket clevet ken nebeut petra vije great oc'h ar brizonerien kemeret eno. An eil nosvez goude an emgann-ze e rea eun amzer spontus. An avel a soroc'he hag a lakea pep tra da stracal. Eur glao diluch a goeze; tan ha curun a rea bep en amzer.

E maner an Theix, an Itron hag an diou zemezel a voa en eur zal, melconiet meurbet. Scrija a reant o clevet an amzer. Ar vam guéz e devoa couls lavaret collet ar guelet kement a zaelou e devoa scuillet o sonjal en he map, gant aoun na vije digouezet droug gantha.

— Va map paour, peleac'h em a? emezhi o clevet an ti o stracal gant an avel.

— Allas! va mam, eme ar verc'h, ne allomp ket her gouzout, mes pedomp ar Verc'hez evithan. Va mam guer, dont a rei en dro; Doue ne lamo ket ho map diganeoc'h.

— N'hoac'h eus recevet goal-guelou ebet? eme an nizez.

— Nan, eme an Itron, nan, va bugale. Mes ar pez am laz eo defot receo eur c'helou bennag, mad pe fall.

Neuze en em lakejont ho zeir d'an daoulin da lavaret an *Ave, maris stella*.

Eur mevel a deuas neuze er zal da gnempen an daol evit coan. Ar mevel-ze a voa ed he amzer en ti; fidel evel eun ale'huez. Caret a rea cals he vestrez hag he bugale, hag ep aoun ebet ec'h ellet fiziout peptra enha. Evelse ive e veze lavaret dirazhan ar pez ne vije ket credet lavaret dirag mitizien all. An Itron a c'houlennas outhan:

— N'oc'h eus clevet kelou ebet, Alan?

— Kelou ebet, Itron; ne ouzeur ket c'hoas petra vezo gret oc'h an dudchentil so prizonerien en Alre.

— Petra yezo great outho a gaf deoc'h, eme an nizez?

— Petra vezo great? eme ar verc'h; ho lacat d'ar maro sur; n'eus ket izom da c'houlenn.

An Itron a iea ive da lavaret he guer; mes ne devoe ket a amzer. Eun taol cloc'h a glesjont e dor ar pors,

hag a lakeas ho c'halon da zridal, hag ho zeir e sajjont ker buan en ho zal.

— Va breur eo, eme ar verc'h iaouanc; me hen anavez dioc'h an taol cloc'h. Ar c'hi ive pehini en doa harzet da guenta a glevet o iudal gant ar joa hag oc'h ober lit d'an hini a voa e toul an nor.

Alan a ias buan da zigueri, hag eur momet goude, an Aotrou cont Turgis a voa er zal e kichen he vam, he c'hoar hag he guinterve. N'em eus ket izom da lavaret pebez levezet a voue eno. An Itron a voa evel p'e divije collet he skiant gant ar joa da veza cavet he map. Rei a rea a bep seurt gourc'hemennou d'he merc'h, d'he nizez, d'ar mevel evit lacat poursach pep tra er maner en eun doare dereat da zigumeret ar c'hont iaouanc.

Pell a voa n'oa bet er maner pred ebet kel laouen ha ma voue coan an nosvez-ze. N'hor c'huitai mui, ha ne ket-ta? a lavare bep en amzer an Itron d'he map. Hi hag he nizez ne zontent ket hirroc'h evit er joa o devoa o velet ar c'hont iaouanc deut en dro d'ar maner. Mes e creiz al levezet-ze ar c'hont iaouanc he unan n'oa ket dinec'h avoalc'h, hag he c'hoar pehini a vele hirroc'h evit he mam hag he c'hinterve, a vele avoalc'h an nec'hamant-ze scrivet var dal he breur. Ar breur hag ar c'hoar a voa ganet ho daou var eun dro, ha ker bras oa an henvelidiguez entrezho ma vije bet diez anaout an eil dioc'h e guile anezo panele ho guiscamant. A hent all e vije lavaret n'o devoa nement eur memez calon hag eur memez ene, hag evelse brema ive ar c'hoar a zante en eun doare bennag ar pez a dremene e speret he breur.

Pa oa deut unneg heur, ar vam, goude beza laket he map da lavaret dezhi abenn diou pe deir guc'h kement a voa digouezet gantha abaoe m'oa eat euz ar guer, her pedas da vont da gousket. Rag, emezhi, izom avoalc'h oc'h eus da eana goude kement a dregas, a boan hag a nec'hamant oc'h eus bet en derveziou-ma. Ar c'hont a zaoulinas evit caout benediction he vam, ha neuze en em dennas d'he gampr. An Itron hag he nizez a ias ive da gousket laouen bras. Mes ar verc'h iaouanc hag ar mevel mad pehini ive en doa, evel an demezel, santet e voa c'hoas eun dra bennag oc'h ober nec'h d'ar c'hont, ne zontent ket mont da guemeret repos.

An nemorant eur vech all. G. M.

Pense pe coll ar Borysten.

D'ar pemzecved deiz euz a viz kerzu diveza eo bet eun taul-mor cre ha stravilhuz etre Toulon hag Oran. — Oran zo eur porz-mor euz an Aljeri.

Ghetu ama ar pez en deuz scrivet en eul liser d'he guerent, an Autrou Verett, doctor-medecin, divar ben eul lestr, hanvet ar Borysten, hag a zo bet brevet ouz eur roc'h ha goueledet er mor.

Oran, ar c'houec'h var-n-uguent euz a viz kerzu 1865. Ma c'herent ker ha mad,

Al lestr, hanvet ar Borysten, hon dougue d'an Africa,

en deuz skoet ouz eur roc'h, ar guener, pemzecved deiz euz a viz kerzu, var dro dec heur da noz. — Daou-hanteret eo bet en eun taul ha goueledet eun nebeud goude. Bez-e oamp eun hanter leo pe var dro dioc'h an aud. — Penauz am euz-me en em viret ouz ar maro? N'ouzoun agren; n'ouzoun ket. — Guelet am euz ar maro ken tost ma oen prest da vervel. Gortoz a reen va zro. — Hon angoni e deuz padet seiz heur, seiz heur a angoni, e creiz eun noz teval, o clevet trouz an avel, ha trouz an tarzou mor. — Daou gant hag c'hanter c'hant oamp var al lestr. — Collet hon euz dec ha triuguent beuzet er mor. — Ne d'oun ket evit lavaret kement oll a zo arruet er moment euzuz-ze, me lavaro dehoc'h hepken ar pez am euz guelet. — Bez'e oa var al lestr seiz pe eiz intron, bugale, eur belec, marc'hadourien euz ar guer a Varseil, diou gompagnunez soudarded, labourerien, Arabed, Zouaved, pevar medecin, an autrouez Godard, Dogny, Rous ha Weber, triouec'h martolod gant ho officerien. — D'ar guener, pemzecved euz ar miz, mestr al lestr a lavaraz e arrujemp e Oran var dro nao pe dec heur da noz. Braz oa bet neuze hon joa. Rag, e guirionez, eun dra trist meurbed eo guelet hepken an env hag an dour epad eiz-heur ha daou-uguent. — Neuze na poaniuz hag enouz eo beza bransellet hep chan var eul lestr l'c'hoantaat braz a recur an douar. O leina, an oll a oa joauz meurbed. — da eiz heur en em leker dija da lagadenna ar valizennou evit gallout douara buhanoc'h. Da nao heur e oamp c'hoaz o cauzeal var ar pont. — Ar mor a zeuz rustoc'h en eun taul. Mont a riz-me da gousket. — Mez horrelladur al lestr a viraz ouzin da serri va daoulagad. En em glem a reen d'an hini oa em c'hichen mez na responte guer. Kousket a rea evel eun eal. — Moredi a reen couscoude abaoe eun heur pe var dro, pa gleviz unan o crial: — Stop, em'omp varnezi; troit adre, buan. Na glever mui trouz ar rot. Al lestr na ia ket mui, chom a ra hep mont pelloc'h, an oll a red var ar pont. Ahanta, a lavaran d'am mignon, arruet omp, antren a reomp er porz; plegua recur ar goueliou var c'horre. O veza lavaret ar c'homziou ze e tiskenniz euz va guele hag e pigniz var ar pont. — Souden a clever eur strac hag a jaka spont e calon an oll. Al lestr a vranselle en eun doare ken cre ma coueziz d'an traoungant calz a re all. Clevet eo souden eur martolod o crial: O va Doue, ho pet truez ouzomp, collet omp. — Stoket en doa al lestr ouz eur roc'h, hag en em hanter digoret. — An dour a antre e strad al lestr. Antren a ree o virvi, ar soudardet a gouske var ar pont, a sav hag a red du-hont, du-ma, o crial a bouez-penn. — An tremenidi hanterguisket a sailh euz ho c'hambrigou. — Doue a oa pedet a vouez huel. An eil a lavare kenavezo d'eguile. Eur marc'hadour a garg he bistolen evit en em laza, mes lamet eo bet he bistolen digantha. Al lestr hejet gant ar gouagennou a vranselle muioc'h mui. Ar c'hloc'h a son evel da eun tan goal. An avel o trouzal a vire da glevout son ar c'hloc'h, mes clevet a oa an oll o crial, oc'h ouela, oc'h huanadi, oc'h hirvoudi, o pedi.

Netra tristoc'h, spontusoc'h stravilhusoc'h ! Evid'oun me biscoaz n'am euz guelet, biscoaz n'am euz lenet eun darvoud ken euzus ha ker pouner var ar galoun ! Beza eno iac'h, iaouanc, leun a vuez, a esperanz, ha diraz-hoc'h ha var an heur eur maro cris ha trist meurbed !

En heur diveza ze, ha na heller rei d'anaveout, an Aotrou Moisset belec a roaz an absolven d'an oll. Daë-lou ar belec mad-ze, o annonz ar pardon digant Doue da zaou c'hant hag c'hant c'hant en ho heur diveza a lekeaz an oll da ouela leiz ho unan. Eun neubeudic goude al lestr en em daulaz d'an tu deou. An dour a antre gant trouz er zal vraz hag er c'hambrigo. An oll a oa poulset var eun tu. — En dour e oamp beteg an discoaz. Red oa neu bete scramp an derez a gundue var ar pont. — Neuze cri ebet mui ; pep hini en em savete hep lavaret guer. — Arruet ouz treid an derez e veliz Dogny o neu em c'hichen, pignat a reomp hon daou, mez arruet er penn huella euz an derez, e cavomp an or serret, hag e clevomp crial : diouallit, ar wuern vraz a ia da goueza, discaret oa a dailiou bach, mez eur ouagen a strincaz er mor ar vartoloded a drouc'he anezhi. E lein an derez en em gave eun or houarn serret cloz. Daou doul bihan oa great en or ze. An or, o veza alc'houezet, ne oamp ket evit he discar nag he brevi ha Dogny da lavaret d'in : collet omp. An dour a save en derez. — O tremen ma fenn dre doul an or, petra velan-me : Rous, Godar ha Weber, cluchet var lein an or, oc'h en em zerc'hel, evel ma hellent. — Guelout a reont ac'hanou hag e crient : buan. Verett, buan, tremen dre doul an or. Collet omp, chachet ho deuz kement varn'oun ma ho deuz ma zennet, ha Dogny goude. Chetu ni eta hon pemp var eul lec'h var behini tri den ho defe bet poan o terc'hel, adre d'eomp eur mor fuloruz, a zebu c'hoaz ar mor. Eur minuten goude e clevomp crieu : oll diadre al lestr a strake hag a c'houelede en eun taul o cas gantha er mor ugent den, ha goude cri ebet mui.

An noz a oa teval, mez ar gouagennou oa sklerijennet gant eun tan phosphoric, an dour goude a goueze var-nomp evel eur glao-tan. Biscoaz n'am boa guelet kement-all. — Ar gouagennou a scube ar pont gant eur gounar, na heller ket da gompren. Oll ar re n'en em zalc'hent ket stard a oa skrapet ha taulet er mor. Klevet oa ar gouagennou o tont a bell, ha pa arruent e ple-guemp or penn hag en em stardemp an eil ouz eguile. Menezion dour a goueze varnomp : aoun hor boa na zeufent da derri an or var behini e oamp ha d'hon teureul hon unan er mor. Weber a lavaraz d'in : Veret, comp da vervel, mez mar en em savete unan ac'hanomp, ra doue e scrivo d'hon kerent kentre ma hello. — Stardet hon euz an daouarn trezomp ouspen dec guech, o lavaret kenavezo an eil d'eguile. Ar gouagennou na lezent mui repos ebet ganeomp. An dour a zivere hed hon kein, hag a gargue hon daoulagad hag hon guinou. Pa vije scubet ar pont gant eur ouagen nevez e tiffamme unan bennag euz ar vanden, a bep tu e oa clevet hiniennou o crial : harpit ac'hanou, riscla a ran, collet oun.

Eun Eveziat (contrôleur) a vel he c'hreg skrapet gant eur ouagen. Egr c'hrouadur triuec'h miz e doa var he divrec'h. O veza ne oa ket evit he dere'hel, e sailh he unan er mor, o lavaret : Mervel a raimp assambles. Ar belec an autrou Moisset a zo bet beuzet em c'hichen. Astennet am euz an dorn dezan, mes n'en deuz ket gallet hen tizout. Croguet en deuz e traoun va lavregou, mes an tam roguet zo chomet en he zorn, hag ar gou-agen e deuz her strapet.

Var dro teir heur goude hanter-noz e esseomp pignat var ar bord c'hoaz disolo, mes diaz a oa mont di. Red oa pignat etre dion ouagen, anez e vizemp skrabet ha discaret en dour. Taulet oa bet neuze d'eomp eur gorden. He starda a reomp en dro d'hon corf. Ar-soudarded cluchet var bord al lestr a chome dizolo, a chach ac'hanomp an eil goude eguile. Oc'h arruout d'al laë, eur soudard a anavezaz ac'hanou. C'hui eo a zo aze, Autrou Verett, emezan. Roit d'in an dorn, dalc'hit mad, hag en em lezit da vont. Ma zenna a ra, ha goude e teue ive Dogny, Rous ha Veber. — Eun hanter c'hant camed diouzomp en em gave ar roc'h hor boa stoket outhan. Mez penauz mont beteg ar roc'h-ze ? Eur gorden a dlie dere'hel lec'h da eur pont. Eur vaguic vihan zo lakeet var ar mor. Brevet eo bet en eun taol. Eun eil baguic zo brevet er memes doare, hag ar pevar martolod divar-nezhi, beuzet. — Eur martolod, hanvet ar Guen, da behini e tleomp oll ar vuez, a stagaz eur gorden en dro d'he gorf, hag en han Doue, en em daulaz er mor. Pemp guech e esseaz douara, pemp guech eo distaulet ha blonsset. Erfin arruout a ra var ar roc'h, hag e stag eno ar gorden. O terc'hel stard ouz ar gorden e neuomp hag e treuzomp ar mor counaret dindan hon treid. Da nao heur da vintin e oa an oll var ar roc'h. — En em gonta a reomp. Dec ha triugent a vanke. Beuzet oant bet. Ar mor a zistaulaz tri anezho ouz ar roc'h. N'euz den evit compren ar pez a zantomp oll er galon o velout an tri corf maro-ze. Lamet eo bet digantho ho boutou, hag int bet roet d'ar re ho doa collet ho re. Ober a reomp tan gant ar plench distaguet diouc'h ar bagou vihan brevet. — Mouchouerou guen zo stagnet ouz bisier hir plantet var ar roc'h evit rei d'anaveout e oamp en ezom, hag evit digaz tud d'hor sicour. N'hor boa mui cloc'h ebet da son en hon danger. Ar roc'h-ze var behini e oamp, n'eo ken nemet eun enezen vihan, zec'h, huel hag hep tam douar ebet. Banne dour ebet da eva, netra da zibri, scornet gant ar riou, glebet beteg an eskern ! pebez enkrez ! n'hor boa mui nerz ebet. Calz ne oant mui evit en em zerc'hel var ho zreid. Discaret oant ha taulet var an douar gant an naoun, ar zec'hed, an anken hag ar glac'har. Chetu e pe stad en em gavemp. — Erfin, o madelez an Autrou Doue ! var dro kreiz teiz e velomp eul lestr bihan var behini oa gourallieren spagnoled (courageurs). O veza anavezet hon signou ha guelet ar mogued euz hon tan, e tostajont hag e teujont d'hon caout. Oh ! pebez joa douz evit an oll ! rei a rejont d'eomp eur zac'had guispidi-vor, bara ha butun. Goude e verdeajont buhan varzu Oran evit disrevela hon pense.

Glao a reaz goude creisteiz. Lakaat a rejomp en disglao ebarz faouton ar roc'h, ar graguez, ar vugale, hag ar re glanv. Ar soudarded a roe ho c'habellou (capotes) d'ar re. Oa sortiet euz ho c'hambrigo hep beza guisket. Tremen a reomp an noz en dro d'an tan hor boa alumet. Epad an diou nozvez-ze e kouskemp dindan ar stered. En em doma a raemp, evel ma hellemp, gant planten-nou zec'h ha gant ar plench euz al lestr.

N'hor boa da eva nemed dour-glao mesket gant dour vor a gavemp en toulou euz ar roc'h. Neuze, va c'herent ker, e anduriz diouerou eris ; eun naon estranch. Diou vech en deiz e vije roet d'eomp eun tamic bara bihan henvel ouz vi eur iar, ha netra da eva. Erfin, dizul, seiteved euz ar miz (o douz esperanz) e velomp o tont d'hon caout pemp lestr bihan spagnoled. Poki a raemp an eil d'eguile, en em starda a raemp an eil ouz eguile, savetet omp ! savetet omp ! Ar graguez, ar vugale hag ar re glanv a bignaz el listri ar re guenta, ha goudeze oll ar re all. Da eun heur goude creisteiz e antremp e porz Oran. Eur vanden-vraz a dud hon gortoze var an aud. Asten a raent d'eomp an daouarn. Ar goazed a save hag a vranselle ho zokou. Ar merc'hed a ziscoueze ho mouchouerou. — Guisket a oamp en eun doare dic'hez. An intron Munier e doa evit guiscamant cabel (capote) eur soudard. He goaz en doa lakeet en dro d'he dreid tamou mezer euz a lavregou roguet. Evidoun-me am boa ma zae, mez tok ebet mui. Eur mouchouer am boa en dro d'am fenn. Ma heuzou, evel oll ar rest a oa losket gant an dour vor. Ma bizied treid ho zreuz. Va lavregou a oa bet roguet gant ar belec ker beuzet. Oc'h arruout var zouar, ne hellen ket chom em za ; diskiantet a oan, me sonje d'in e hunvreen. Collet am euz ma valizennou, ma daou gui. Paour keaz loened, n'am euz ket bet amzer d'ho dierea. Conservet am euz ma gibern, ma horolach, ma fistolen, mez e pe seurt stad an traou-ze oll. — Erfin bez'am euz c'hoas ar vallen veach hoc'h eus roet d'in o kuitat, mam vad. Distalet eo bet varzu ar roc'h gant ar gouagennou, hag an deiz varlerc'h eur soudard en deuz he digasset d'in.

Le Bellaigis 57. M. D.

(Tennet euz ar gazeten Le Monde).

YVONIC TIMAD.

Yvonic Timad a zo an trede a vepren eun tiec a Vreiz, ho chom e Kerfur, parrez Lan.... He vamm a varvaz oc'h lie lakaat er beg, had he dad, o velet peger reuzeudic oa ar c'hrouadur a jome ganthan da zével ne ouie ouz piou en em erbedi, pa zeuas da sonjal en eur giniter en devoa, eur vaonez deut var an oad. Per n'he anaveze nemet diouz ar brud vad he doa er vro, rag evit-ho da veza kerent ken tost n'en em zarempredent ket. Noa ket ive pell abaoe m'oa deuet ar giniter er vro. Mari e doa tremenet he amzeriou kenta'er gouent. Neket ma vije leanez pe var nez beza. Ne oa en ti Doue-ze nemet plac'h. Evel m'he doa speret lemm ha caloun vad, he teuas da veza devot bras.

er renk an izella coulz dre ar c'hentellou a gleve ha dre ar skoueriou mad a vele. A greiz m'edo en he guir vella, a vel da dremen an nemorant euz he huez gant al leanezet e savaz an dispac'h e Franc. Eun dour-nadig tud fallagr, savet divar an droug-speret a rea al lezen en hor bro baour. An dud counnaret-ze, evit trei ar bed d'ho guiz, a falvezaz dezo lakaat Doue er meaz anezhan ; hag evit dont abenn euz ho zaol petra raint-hi ? Evel a rer hirio ; clask diskar an ilis. Setu perac ne lezjont gant ar veleien ken guir nemet da dec'het pe da vont d'ar groug. Al leanezet ive a garie re an Autrou Doue. Sevel a reant ar merc'hedigou en he zonzans, hag abred, ar gouenchou a oue goulonderet ; ho madou a ieas da heul re an ilizou gant an nation. Setu petra oue caoz da Vari da zistrei d'he bro. Eno, e serr al liardou e devoa espernet, hag an tamou labour a elle da ober, e vevas didrouz, e servich Doue hag he nessa. En amzer drubuilluz-ze e oue evit he c'henvroiz evel eun Eal digasset gant Doue. An neb en deuz c'hoant, neket tro a vank dezhan da ziskuez he galoun vad. Mari a en em ancounac'hea he-unan evit en em rei oll d'ar beurien ha d'an dud izomek. He guelet a rajac'h o redet a dreuz ar meziou, al lanneier, da heb poent euz an noz, daoust d'ar glao, d'an erc'h, da heb seurt gwal-amzer, na da betra ? da glask eur beleg mad a ouie cuzet var dro, da zont da gaout eur paour keas clanvour a c'houlenne, en han Doue, cofez he bec'hejou araog mervel. Ma vije ret e chomje noz deiz da zioual ar beurien glan ; mond a rea zoken avechou da glask an aluzen evit-ho, ha pa zigoueze dizhi beza digemeret fall, he zea pelloc'h evel pe dije bet diou aluzen eleac'h unan.

Pa veze er gear he custume dastum en he zi, diouz an abardaez ar vugaleou euz ar c'hontre, hag e teske dezho ho chreançou. E tall da veza prizonniet, rag ped, d'ar poent-ze, zo bet casset dirag ar barner, hag ac'hano dar groug, var n'abec ma kevet en ho zi eul levr catikismou ? Mari a garie re he Doue evit caout aoun rag ar maro, re a blijadur he doa o teski d'ar vugaleou anaout ha caret Jesus-Christ. Beveach ma teuje dizhi lavaret an hano benniget-ze, e lavarjac'h ouz he c'hlevet e teuze he c'haloun en tan euz he c'harantez evit he Zalver.

D'ar zul, er memes tra e c'halve ar plac'het iaouang. Evit ho distrei diouz gwal gompagnonez, an dansou hag an ebatou a lakea ar zitoyanet evit distrei an dud diouz servich Doue. Mari a lenne dezo eul levr mad benag, a gane ganto ar c'hantico he doa desket er gouent, hag araog ho dilezel e vije lavaret ar rozera. Setu pe implij a rea ar plac'h santel-ze euz he amzer.

D'ar poent abaoe-ze eo e teuas Per a Kerfur d'he fedo da gemeret ar gark da zével he vab bihan. Digemeret mad e oue a ellit credi ; rag m'ar d'oa e calon Mari kement a vadelez e kenver an estren, hag hi elje dilezel he zud nessa en eun ezom ker bras ? En tronoz, Per fouge en-han da veza ken eas dizamet euz eur beac'h ken pounner, a lakeas Yvonic etre

daouarn he giniter. Eun eal muioc'h da garet e oue evit Mari : Entent ouz ar c'hrouaduric-ze, he gempen, he luskat, pellaat diout-han peb droug a ioa evit-hi an disterra dever euz he c'harg. An den ne vev ket ebken a vara emezhi, ha gant guir. Neket aoualc'h sevel ar c'horf, he voaza d'al labour ha d'ar boan. Bez hon euz ivez eur speret hag ha c'houlen sclerijen, eur galoun hag he dens izom da garet, hag a renker abred trei d'ar vad. Mari ne parlante ket dizoare evit eur vaouez. Evelze ive aveac'h m'oa dent Yvonic en oad da jagouillat er ger benage oue desket dezhan he *Bater*; ha dre ma creske, e vije clevet, en he c'hoariou he-unan o vrus-cana coulz pe vell, eur c'houlblat benag euz eur c'hantic a zeske dezhan he eil vamm. D'an oajou-ze oe ker sentus, ker karantezus ma rea avi d'an oll mammou divar dro. Eleac'h caout avi, e vije bet guell dezho deski ho c'hatekismou, ha sevel diout-han ho bugale. Mari ne ouie ken. A ne ket eno e ma gourc'hemennou Doue, reolen a vuez evit an oll, braz ha hihan. Dale hit mad d'al lezen-ze, va mignon, a lavare Mari aliez, dre ma save Yvonic, hag e viot goaz mad, ha guir gristen. Nep piou benag a garr Doue hag al labour a dremen dre ar vuez ma didrouz ha dibec'h, da c'headal caout digor er Baradoz. Ne ket ret e ve an oll merzerien na menec'h. Doue er lavar, a piou a ouffe en dislavaret? n'euz nemet heull ar gourc'hemennou.

Yvonic a zavaz en eur seurt scol d'an aod a drivec'h vloaz. Stard var he izili, ha startoc'h c'hoas var he greden. Ma na ouie ket calz a dra a zescadureziou ar bed, ec'h ouie da viana traou aoualc'h evit caret Doue, hag ober he labour. Desket en doa gouscoude lenn mad, ha scrifa eun tamic. Diouz an noz pa deue euz ar parc, da c'headal coan, pe c'houde, he vrassa plijadur oa cregi en eul levr devot benag, a brene gant ar guenneien a esperne da zul, hag a zispign peur-liessa ar re euz he oajou er c'hoariou hag en hostaleriou. Diout-ho he peur c'hreiz he zescadurez ar gaerra helfe an den da gaout : Caret Doue, an nessa al labour. Mari n'he doa bet biscoas ken mennos hag abaoue m'oa dent Yvonic d'he zi, ne baouezaz d'er goulou ouz Doue. Ret e oue dizhi beva pell aoualc'h evit tanva ar frouez euz he foan hag he aket. Dre ma teue ar gosni, e cave da stourm out-hi an nosveziou e devoa collet guechall gant ar re glan. N'en em gleme ket a gement-ze, re aoun he devoa da goll he fae. Eur gaouadic clenvet a zeuz dizhi he feur-c'hassas. Tremmen a reas evel eur mouchic goulou, hag he zremenvan a oue evel ouz he buez, leun a garantez evit Doue hag a esperanc d'he velet; he c'homsou diveza a jomas doun e caloun Yvonic. An den, emezhi, en do desket d'ar re all an hent euz ar gourc'hemennou, a lugerno evel stered epad an oll eternite.

Kerkent a m'he doue rentet he huanad diveza, Yvonic a lakeas cass ar c'helou d'he dad. Per ne reas van. Ma vije bet eun dra benag da c'headal diouz he giniter, ne vije ket bet ken dieguz. Yvonic a oue lezet

he unan da zougen kaon d'he eil vamm. E dad gouscoude a gemennas dezhan dont d'ar gear kenta ma c'helje. Yvonic a verzaz ar peziec a ioa e ti he giniter, hag ho roas da lakaat pedi Doue evit-hi; ne zalc'has nemet eul levr benag, hag ar chapeled du a garie kement Mari. Araog en em lakaat en hent, e zeas da gimmiada diouz ar veret; var ar bez a c'holoe an hini a garie kement, he scuillas daelou puill, hag ec'h en em erbedaz out he vamm vad. U. N.

(Eur pennad-all ar vech all).

AR BETTERABES AC AR MELCHEN.

AR BETTERABES.

Neus quet pel c'hoas ne oa, couls lavar anavezet tam ar betterabes er vro. Brema e maint e meur a dieguès, ac eb dale e vezint laqued e bep leac'h, rac n'eus brouscon ebet ker fonnus evit roei bern da voëta al loennet er goan. Leusquer a ra an douar var e lerc'h er guella doare evit roei guinis pe lin, erves a guerer; ha goude eller caout c'hoas melchen, varlerc'h p'ini, en eur troi aneza a ben bloas, ho pezo eun eost al, guinis pe querc'h, eb lacat tremp al ebet, da lavarout e vezo pevar eost var an tremp laquet da betterabes.

Eller caout betterabes mad en douarou nostamant; guellet em eus re gaer en douarou rian ha tuffec, ha ne rent van doc'h ar sec'hor pa vize tollet teil avoalc'h ha labourer dezho e doare. Ar betterabes a dal c'hoas en eur feson al : ne vreinout quet quer buan ac ar brouscon al; chom a reout iac'h ac eb col deus ho daloudegues betec mis mae ha mis even avechou; eleac'h ar panes a vez corseñnet ha sabrenet kerquent ac ar mis meurs. Ouspen, ar betterabes a zo eassoc'h da c'houenna, abalamour e vent laqued a renquennadou, daou droatet e tre-z-ho, ha trivec'h mentet var an cro etre peb betterabezen.

Ne vezont quet teo morse pa hader anez-ho gant an dorn ha pa n'em gavont re dost an eil deben, rac neuze n'ho deus quet a hed avoalc'h evit ober ho cresk : n'em voug a reont ac e chomont dister, doare ar c'harotes ac ar panes. An douar a zlc beza arret abred, dre zevechou caer, e mis-du pe er mis-kerzu, ar c'henta a eller ober goude ar calagoan. Peurvuia, en hon bro, ne arret nemed eur vech an douar betterabes, ha ne reer al labour-ze nemet pa vez deut mare ada; dre an dra-ze n'euz nemet brouscon fal, ha re peubet da voeta al loennet e doare pad ar goan.

An aotrou Bodin, eus a Roazon, p'ini a ra eller ouarn, an dornerezet ac ar benviou al, a zo deut a ben, bouez laboura gant evez ha trempa mad, da gaout betec c'houec'h uguent mil lur betterabes, ac ouспен, dre zevez-arat. Ama, hon eus hon-unan kementse, e douarou ha n'int quet ker couls coulscoude ac ar re labour an aotrou Bodin en he diegues.

Heure ar Zent evit ar Sizun-ma.

DILLUN, 5 C'huevrer. — Santez Agatha, guerc'hez ha merzerez.

DIMEURS 6. — Memor eus a bassion hor Zalver.

DIMERC'HER 7. — Sant Romuald, abad.

DIZIQU 8. — Sant Ian Matha.

DIRGUENER 9. — Sant Tit, escop, diskibl Sant Paul, abostol.

DISSADORN 10. — Santez Scolastic, guerc'hez.

DISSUL 11. — Sul ar C'hinquagezim. Setu ama e brezouneec an aviell hirio :

Jesus a dennas a gostez an daouzec abostol, hag a lavaras dezho : setu ni o vont da Jeruzalem, ha kement o deus seritet ar brofeted divarben map an den a ielo da benn. Rag laket e vezo etre daouarn ar gentilet (an dud n'int ket eus a bopl Doue;) great e vezo goap anezhan; scourjzet e vezo; crachet e vezo en he vizach. Ha goude ma o devezo he scourjzet, hen lakaint d'ar maro, hag an trede deiz e teui adarre e buez.

Hoguen an Ebestel ne ententchont netra a guementse; ar goms-ze a voa evitho eun dra guzet; ne vouient ket petra lavare.

Digouezout a reas, pa edont tost da Jericho, ma voa e kichen an hent eun den dall azezet o c'houl an aluzen. O clevet trouz eur vanden dud o vont ebou, e c'houlennas petra voa. Lavaret oue dezhan edo Jesus a Nazareth o tremen. Hag hen dioc'h-te da grial : Jesus, map da Zavid, ho pet truez ouzin ! Ar re a voa e penn ar vanden her scandale o clase ober dezhan tevel. Meshen a grie goas oc'h goas : Map David, ho pet truez ouzin !

Jesus a jomas a za hag a c'hourc'hemennas digas an dall d'he gaout. P'oa deut tost, e c'houlennas outhan : petra c'hoantait a rafen-me deoc'h ? Aotrou, rei din ar guelet, eme an dall. Mad, eme Jesus, sellit, ho feiz he deus he saveteet.

Dioc'htu e teuas ar guelet dezhan hag e c'heuille Jesus en eur renta gloar da Zoue. Hag an oll bopl, o velet kementse, en em lakeas da veuli Doue ive. Luc. xviii. 31.

G. M.

E Roslohab, an ticien ho deus ho betterabes ber-niet el leur ha goloet mad, ho fanes en douar eleac'h n'em vironet doc'h ar scorn, ar re-ze ho deus bevans ac'han da vis mae, eb beza nec'het clasq goud pe-naoz e vaguint ho loennet betec ar mare-ze. Lec'h n'eus quen nemet caol pe irvinou, eller, dindan neu-bet a zevechou, guellet anezho mont gat ar scorn, evel ez eo bet c'hoarvezet daou vloaz zo : ne chom neuze nemet eun tam foen ac eun tam colo da roei d'ar chatal, boetach ber, gat pini e castizont ac e collont eals d'hoc'h ho daloudegues. Ne fel quet din lavar e dister dilezel tre ar c'haol; mes furoc'h e vefe caout nebeutoc'h ha cresqui ar betterabes ac ar panes; rac ar c'haol a zo eun dra chausus er goan, nebeut a zellou a ra er mare-ze, n'int quet eaz da gutuil, couzien ez eus dour pe reo out-ho, ac en doare-ze ne reont quet kenneubet eals a vad dal loennet. Ar guella ma vez ar c'haol a zo et misiou divezad deus an han, a dal ar mis c'houere betec mis-du; rac neuze ez eo prim ar melchen ac ar boedou-al.

Ar c'haol, a gav din, nequet kercouls boetach, evel a lavar an oll; guellet a ran ar zaout dripi anez-ho piz pa n'eus nemet-ho; mes kerkent a ma roer dez-ho betterabes da heul, e losquont ar c'haol a sclabe en dro dez-ho var ar gouzer. Ar betterabes a zo guell-loc'h d'al loennet evit ne gred an dud; rac eul loen-corn, boeted-gant betterabes ha colo querc'h ebken, a vezo e doare guerza d'ar c'higuer beb daou vis pe daou vis anter d'an hirra.

Ar betterabes a zo dourec, ha dre-ze pa vez ien an amzer ez int re gri, ha neuze al leaz a viana a dol, ac an aman e za fal en e c'houez ac en e vlaç. Evit mirout oc'h quement-se, neus quen nemet souba ar betterabes en dour tom, abars ho rei d'al loennet, pe teurel eur banne guellen clouar varnez-ho; eguisse e vezint eur boetach dreist, ispicial en eur roei d'ho heul eun tamic foen.

Ar guella seurt betterabes ar re velen cren (*globe jaune*) ac ar re velen (*Desbarres*); ar re hanvet *dissette* n'int quet couls, na da voueta na da deurel bern.

TH. DE P.

(An dilec'h ar vech quenta.)

KAN EUR VAMM

DA EAL-MAD HE BUGEL KOUSKET.

Prestik va bugel vo kousket,
Hag he skouarn ouz va mouez stoufet,
Te da viana, he Elik gwenn,
Te zelaouet va c'hanaouen.

Va Laouik-Vihan a zo koant,
He vleo melen, he zellou drant,
Seulvui e taoler pled outhan,
Seulvui e karer anezhan.

M'am euz vit an kaloun eur vamm,
D'he breder ma n'ehanann tamm,
Gwan oun, siouaz hag avechou
Skuisder a zarr va malvennou.

Hag hi digor, n'ouzon netra
Nemet luskellat ha kana :
« Toutouik kaer kaer bihanik,
« Ni iei da la-la hon daouik. »

Kaer am euz ober var he dro,
Kana ha gouela beb eil tro,
Lies war he ziou-chodik ru
E red diou wazik daelou dru.

Mar ez euz c'hweryder er vuez,
A-dal he c'henta goulou-dez,
Araog he c'huz-heol, me her goar,
Ez euz enn-hi poan ha glac'har.

Eur vech ma vezo er vered
Korf ar vamm dener douaret,
Peleac'h e klasko ar bugel

Nerz ha frealz enn he drevet?

Oh te El-mad ne varvi ket,
Iaouank ha nerzuz out bepred;
Bepred, n'eo ket ouz ar bleizi
Va oanik-me a zifenni.

Ar Mabik-Jezuz, da roue
A c'hanaz eun nosvez a oe,
Paouroc'h c'hoaz eged va bugel,
N'en doa ket zo ken eur c'havel !

Ganet oe evit unani,
Dre he varo he Dad ha ni,
Hag evit endevout grasou,
Grasou dann oll yugaligou.

Dre Vabik Mari me az ped,

Ro skoazel d'am Laouik karet,
E peb amzer hag e pep lec'h,
Mir hen, mir hen tre da zivrec'h!

Ar vleunen lintruz, d'ar heure,
A wenv dindan heol ar c'hreste,
Ia! Mes ar bleunenouigou
N'ho deuz ket a Eledigou.

A-dal he nijaden genta
Ann evnik liez a zempla,

Hogen, mar sempla n'en deuz ket
Eun Elik Doue d'he viret.

Elik, Elik gwenni askellet,
War neizik va evnik pleget,
Ha neket gwir, te hen reno,
Hag evel breur te hen c'haro!

War he dal, nevez badezet,
Siel Jezuz a zo moulet,

Breur eo d'id; oh ia va bugel,
Evel d-oud, Laouik zo eun el.

Meuleudi d'ar Mabik Jezuz,
Enor d'he Vamm garantezuz;
Da Eled-vad ar vugale
Doujanz grad-vad ha karante.

K. G. G. G.
Barz ar Blaouez.

Profit ha plijadur zo bepred oc'h ober vad d'ar paour.

Eur belec a vro C'hall zo bet sacret escop n'euz ket pell. Eat eo da visita ar gueur ema ganct. — Eun tan a joa oa preparet var leur vraz Kreiz-Kear. An escop nevez zo pedet da zont da lakaat an tan er bern koad dastumet evit beza losket. — Dont a reaz gant beleien ha gant tud all a bep renk. — An aotrou Mær oa euz he guerent. Ar c'houlouen a enor o veza bet kenniguet d'ezhan evit allumi an tan, an Aotrou'n Escop a c'houlouen gant an Aotrou Mær : Pet fagoden hoc'h euz-hu great bernia aze? Daou c'hant, eme an Aotrou Mær. — Mad, eme an Aotrou'n Escop. — Bez' hon euz en hon kear var dro kant tieguez paour. — Red eo rei ar fagot-ze d'ezho, hag e lec'h eun tan a joa, e vezo kant. — Deuz-tu servicherien ar mær a ia da guere'hat unan euz a bep ti ar re baour. Lodennet eo etrezho ar c'hoad evit beza losket en eun doare guelloc'h. Servicha a reaz da doma ar vugale vihan, an dud koz, an dud klanv ha da boaza lein an devezourien. An oll a veulaz cundu an Aotrou'n Escop hag a bedaz Doue da rei d'ezhan buez hir hag ar c'hraç da ober calz a vad en he escopti. M. D.

(Tennet euz ar gazetten : ar *Messenger de la Charite*).

Le delaigne S.J.

N'eus ket pell e voa var dachen foar P... unan eus ar galouperien bro-ze a ia e pep leac'h da zerc'hel c'hoariou pe lotriou. Ar re-ze a vez gantho aleiz a draou var ho stal, ha pephini evit he arc'hant, a ell tenna eur billet. Mar tenn mad, en deus eun dra bennag. Ar c'halouperien bro-ze a bren ive traou pa gayont dioc'h ho doare ha marc'had mad, dreist oll bleoiou merc'hed pa gavont unan bennag diot avoalc'h evit guerza ar gurunen-ze laket dezho var ho fenn gant an Aotrou Doue.

Var blacen P... eta e voa unan eus an aclepoted-se. Eur plac'h iaouanc goude beza tennet meur a villet ep caout netra, en em gavas he godel goullou. Potr ar stal a c'houlennas outhi he bleo da brena. Ar plac'h iaouanc a verz he bleo evit eun nebeut billejou, ha goude beza ho zrouc'het hag ho roet, en em laca adarre da c'hoari. Eat eo beteg ar billet diveza ep caout an distera tra. Gant ar billet diveza gouscoude e devoue eun dra. Mes petra? Divinit, lenner, ha guelit ar chans! — Eur grip! eur grip pa ne devoa mui a vleao! G. M.

Cazeten ar Meziou a goms evelen : an amzer a jom clouar hag eun tamic gleb; bep en amzer sourradou avel ha barrou glao. E neb leac'h n'eus bet c'hoas na scorn nag erc'h, izom a vije bet gouscoude eun tamic goan calet evit distruja eul loden eus ar prenvat hag eus al loenedigou-ze a veler o virvi var an douar pa deu an nevez amzer hag a lonk ar froneziou dre ma sayont.

Ar goal avelou so bet o deus great freuz var ar mor bras, ha dreist oll er Manch. Listri marc'hadour so eat meur a hini da goll var aodchou Frans hag aodchou Brozaos. Meur a zen a vor o deus collet ho buez, ha meur a zroug all c'hoaz so c'hoarvezet tro var dro var hon aodchou. Ar peuillou telegraf so bet torret ha discaret e meur a lec'h; hag ar c'heleier n'eus ket gallet ho c'has ato d'ho mare.

Diabarz ar vro pep tra so didrouz; mes n'eus ket a levenez. Priz an ed, ep ma c'helfet lavaret e ve diskennet, ne da ket ken nebeut var an tu huelat. P'eo guir eta e chom an ed guelloc'h marc'had evit na voa kent, ar pez zo da ober eo clasc an tu da gaout eost mad eb dispign kement. Ar pez a rer oc'h heuilla kenteliou al labourerien douar gueziec. G. M.

PRIS AN ED.

KEMPER. — 27 Guenver.		PONT'NABAT. — 25 Guenver.	
Guinis.	46 lur, 77 c.	Guinis.	46 lur, 63 c.
Segal.	40 lur, 43 c.	Segal.	40 lur, 50 c.
Eiz.	9 lur, 07 c.	Eiz.	40 lur, 03 c.
Ed-du.	9 lur, 08 c.	Ed-du.	8 lur, 48 c.
Kerc'h.	7 lur, 89 c.	Kerc'h.	8 lur, 50 c.
Avalou-douar	3 lur, 35 c.	Avalou-douar	2 lur, 60 c.
MONTRouLEZ. — 20 Guenver.		BREST. — 15 Guenver.	
Guinis.	47 lur, 77 c.	Guinis.	47 lur, 08 c.
Segal.	« lur, « c.	Segal.	43 lur, 33 c.
Eiz.	9 lur, 83 c.	Eiz.	8 lur, 43 c.
Ed-du.	40 lur, 93 c.	Ed-du.	8 lur, 59 c.
Kerc'h.	9 lur, 03 c.	Kerc'h.	9 lur, 24 c.
Avalou-douar	7 lur, « c.	Avalou-douar	4 lur, 90 c.

Ar Gerant : AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand AR. DE KERANGAL, Moulter an Escopti.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezouneec.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten a goust :

Evit eur bloas.....	DAOU SGOUET.
Evit c'huec'h miz.....	EUR SGOUET.
Evit tri miz.....	C'HUEG'H REAL.
Eur gazetenn ebken.....	DAOU TENNEC.

Ar baecamant a dle beza great araog caout ar gazetenn.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazetenn a adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Belec e Kemper.
Ar paemanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

MANDAMANT

AOTROU'N ESCOP KEMPER HA LEON,

EVIT CORAIZ 1866.

Rene-Nicolaz SERGENT,

Dre c'hraz Doue hag hon Tad Santel ar Pab, Escop Kemper ha Leon, hag unan euz an Eskibien hanvet gant PII-IX, da azeza e kichen he drom,

D'ar Veleien ha d'ar Gristenien fidel eus hon Escopti, salut ha bennos en hor Zalver Jesus-Christ.

HOR BREUDEUR KER,

Ne deo ket epken pa reomp pinijen ha pa iunomp eo on eus eun dra bennag da zioueret, mes en hor buez oll, e pe stad bennag en em gafemp, on eus da zioueret cals traou, hag an diouer-ze, poanius evidomp, a so talvoudec bras evit hor zilvidiguez. Evit na gollimp ket ar guel eus ar virionez-ze, an Ilis e deus laket derveziou ha mareou e pere e c'hoar'hemmen an diouer pe an abstinans-ze en eun doare particulier, ha red mad eo evessat penaus ar gourc'hemmen-ze ne deo ket eul lezen nevez. Sant Ambroas a lavar e voue enhez ar c'henta gourc'hemmen roet d'an den. Sant Bazil a lavar ouспен penaus an den, o vancout da zenti, a gollas ar peoc'h hag an euruset, ha ne ell caout adarre ar peoc'h hag an euruset-ze nemet o vont da heul Jesus-Christ en hent an diouer pe an abstinans. Bez'ez eo ato ar guir merc evit anaout guir servicherien an Aotrou Doue.

Ar c'hallout da ober miracloù pe burzudou, ne ket bet roet d'an oll. Ar precursor Sant Ian Vadezour he-unan ne reas ket a vurzudou etouez ar hopl ker-souezet o velet he vuez santel.

An oll n'o deus ket scuillet ho goad evit ar virionez : an diskibl muia caret a varvas e peoc'h er gær a Ephez, hag a voa coz bras pa varvas. N'o deus ket an oll pinvi-

dikeat an ilis dre ho scriidou goueziec; Sant Francez, hanvet ar *Seraphic*, n'en deus lezet gant he ziskibien nemet he feiz didroel hag he skuer vad, ken nerzus d'ho douguen d'ar vertus.

Ne ket chomet an oll ep dimizi; n'o deus ket tec'het an oll dioc'h trubuillou ar bed; Sant Loiz e mesc tud he di, e creis an tregas en devoa evel Roue, etouez an danjerou, e penn an armeou, so deut da veza eun den ervez calon Doue.

Mes nicun anezho n'en deus great he zilvidiguez ep dioueret eun dra bennag, ep dioueret cals traou, ep douguen en ho c'horf ar mercou pe an hevelidiguez eus a boaniou Jesus-Christ.

Pec'herien omp oll, hor breudeur ker, ha dre-ze eo red mad deomp paea hon dle da justis Doue. An Ilis pelhini a anavez mad ar virionez-ze, hag a so er memes amzer melconiet o velet pe guel lezirec omp da baea eun dle a rankimp gouscoude da baea, an Ilis a fell dezhi hon lacat d'hen ober oc'h ordren deomp iun an amzer santel-ma eus ar c'horais. Aoun e deus rag justis an Doue eternal; aoun e deus evidomp rag an deiz ma zaimp dirag lezvarn pe tribunal ar Barner souveren. Mam leun a furnez an Env, an Ilis a voar ervad e vez aliez touellet he bugale dre an orgouil hag ar garantez evit ho c'horf, e vez aliez ho eneou goloet a vouillen eleac'h beza neat, ha rag-ze e ra dezho tremen dre ar binijen evit ho goalc'hi eus ar sclabez-ze. Evel ma teu an tan da lacat an aour er c'hleuzeur da luguerni muioch, evel ma teu founnez Babylon da rei muioch a liberte d'an tri den iaouanc o tvi al liamou a voa en dro dezho, evelse ar binijen hor rent neat dirag Doue hag a zistruj al liamou hor stague oc'h hor pec'hejou.

Var guern menez Sinai, Moizez ne ell receo taolennou al lezen nemet goude beza iunet daou ugent dervez. Elias a voue red dezhan ive iun kement all araog pignat var menez Horeb, ar menez huel ha burzudus-ze. Pobl Doue ne allas mont en douar prometet nemet goude m'en doa iunet er gouelec'h pe en dezert. Digorit an

Aviel, hag e velot enhan ez eo deut ar iun a zaou ugent dervez da veza santel dre ma en deus hor Zalver Jesus great he-unan ar iun-ze. Lavaret a ra d'he ziskibien e raint evel dhan pa ne vezo mui en ho zonez.

Evelse ive ar voazant-ze da ober Corais, ken talvoudus evit ar zilvidiguez, a deu deomp eus an Ebestel, evel ma hen desk deomp a eur vouez an tadou hag an doctoret eus an ilis. Ma teufe unan benag da lavaret deoc'h ne ve ket guir an dra-ze, livirit dezhan gant Tertullian : « Piou oc'h-tu ? A be seurt lignez oc'h-hu ? A beleac'h e teuit-hu ? Pe seurt guir oc'h eus-hu da glasc lacat var var eur virionez hag a so etre hon daouarn abaoue trivac'h cant vloas ? Savit a vloas da vloas beteg an amzer guenta, e pep leac'h e cavot hon lezen fontet var testeniou ha ne oufe den mont a enep dezho, hag ec'h erruot beteg ar re guenta o deus bet al lezen-ze digant Doue, beteg ar re o deus he recevet eus a c'hinou an tad a familh he-unan.

Setu eno, hor breudeur ker, petra sonj an Ilis pa deu evit destum he bugale hag ho lacat da iun ha da ober pinijen epad ar c'horais, da ordren deomp rei dezho da glevet ar memes kelennadureziou evel a roe guech all ar profet Joel.

Doue ra viro e ve en ho touez den ebet hag a rafe evel Ezau, a drofe he guein d'an heritach so oc'h he c'hortoz evit contanti ioulou he gorf ; a rafe evel bran Noe, a glaske kig ha goad, eleac'h ober evel ar goulm, imach ar c'hristen fidel, gortoz ma teui ar Speret-Santel d'ho lacat da gutuil ar bod glaz a ro da anaout int pardonet.

Pep seurt digareziou a glasker pe a ivanter evit chom ep plega d'al lezen-ze eus ar iun hag eus ar vijel. An dud n'en em ziazont ket evit discleria ne deo ket al lezen-ze eun dever evitho ; ne gredont ket e vent cre avoalc'h evit he miret. N'o deus ket a nerz da iun, emezho, ha gouscoude ne gavont-hi ket a nerz avoalc'h evit douguen ar beac'h a ebatou foll ha poanuis ?

Gouzaon a rer eur verzerenti evit ar bed hag he c'hiziou tenn ; evithan e tispigner he zanvez, e kemerer tregas, e coller he iec'het : Rag eun dra epken e vez aonn, hag an dra-ze eo crucifia he gorf gant he ioulou direol. Ha bez'ez oc'h-hu diskibien da Jesus-Christ, a lavare Sant Ambroas d'ar gristenien lezirec ha didalvez ? Beva a rit er feston hag en ebatou epad ma teu ho Mestr divin da c'houzaon an naon hag ar zec'bet, ha poanuis a bep seurt.

Ar grouadurien o deus bet digant Doue ar rezon, o deus oll eur c'hoant bras da veza eurus. Ar c'hoant-ze enha he unan, n'eus droug ebet enha p'eo guir e teu digant Doue. Goassa zo eo calz a glasc ho eurusdet eleac'h n'her c'haver morse ; hag er c'hiz-ze ez cont var eun d'en em goll. Evel ma zomp crouet dioc'h henvelediguez Doue, e tleomp he anaout, he garet, he zervicha, beza en unvaniez gantha ; evit an dra-ze eo roet deomp ar vuez. Doue eo ar fin hag ar goman-samant a bep tra, enha epken e caf an oll sperejou eul leac'h a repos, peadra d'ho leuni. E penn an oll

draou a deu d'hon deoco ha d'hor sacha pell diouthan, ne gaver nemet dizurs, poan speret, distruch, hag ar maro. David a zave he vouez hag a lavare : Aotrou, va c'halon n'eh devezo morse he voualc'h ken no pezo dispaket ho cloar dirazhon. Goude David e velomp he vap Salomon o niveri gant c'huervder an tromplezonou en deus bet en he vuez. Laket em eus sevel traou caer hag a ra eston an oll ; savet em eus paleziou, plantet em eus guez eus ar re gaera ; bet em eus servicherien ; destumet em eus berniou aour hag arc'hant ; bet em eus muioc'h a zanvez evit kement hini so bet em raog e Jeruzalem ; n'em eus morse lezet va daoulagad da vancout a netra eus ar pez a c'hoanteant ; va c'halon am eus lezet da danva a bep seurt plijadurezou ; mes anavezet em eus ne voa en traou-ze oll nemet avel ha poan speret.

Ia, va Doue, eme Sant Augustin, hor great oc'h eus evidoc'h, hag hor c'halon a zo diez ken na reposo enhoc'h. Perag kemense, hor breudeur ker ? abalamour, eme Sant Bernard, hon ene o veza bras avoalc'h evit possedi Doue, ne vezo carguet, leunet al ledander anezhi nemet gant Doue he unan, hag e chomo goullou anez. Greomp hor gallout evit pleustri hag entent mad ar c'henteliou-ze. Bezomp var evez rag kenteliou all ha n'int ket henvel oc'h ar re-ze, kenteliou digar pere hor pella dioc'h Doue, a lam he guiriou digant ar relijion, a dro hag a zistro guiriou ar rezon beteg ho c'has da netra, ne fell ket dezho e ve mui netra dreist naturel, da lavaret eo, dreist an den, ha dre guementse zoken e tiscaront an den ken izel hag al loenet.

Ia, hen lavaret a reomp c'hoas, an den so gret evit an eurusdet. En he ene e sant eur c'hoant ar brassa da veza eurus ; mes santout a ra ive penaus pa zeo great dioc'h henvelediguez Doue, pa zeo guir en deus eur speret libr, da lavaret eo, a ell trei en tu ma car, e tle clase he eurusdet eleac'h m'ema, ha ne dle ket en em lezel da veza tromplet gant traou ha ne dint nemet ar skeud eus ar pez a glasc.

Al loen aneza he unan a dro ato varzu ar pez ma ze douguet d'ezhan dre natur ; ne vanc morse da guementse ; mes an den ne da ket evelse. Kement en deus guelet ha desket o deus ato diskuezet d'ezhan penaus ma rafe evel al loenet, senti epken oc'h ioulou he gorf, e teufe d'en em strinca en eur mor a boanuis hag a valeuriou. Rag neuze e tistruch ar privilachou huella en deus bet ; ferri a ra an urs caer a dle beza etre he gorf hag he ene, lacat a ra an dizunvaniez etrezho ; en em zishenvelebi, en em ziscar, en em zistruja a ra he unan. Evelse ta en eur vressa dindan ho treid lezen ar iun hag ar vijel, pell dioc'h ober eun dra a behini ec'h allac'h en em fougual, e roit tro ha guir d'ho rezon memes d'ho tamal, ha ma lessac'h ar rezon-ze da goms, e rebechse deoc'h ho follentez hag ho tallentez.

E guirionez, ne allit ket nac'h ez eus en den eun dra bennag ouспен an izili hag ar skianchou naturel ; bez'ez eus enha da guenta ha dreist oll eur speret great evit anaout, caret ha labourat ervez ar virionez anavezet

ha caret. Hoguen, dioc'h eun tu, mar deo etrezeg ar virionez e tro he speret, mar deo etrezeg ar mad e tro he garantez ; dioc'h eun-tu all, skianchou he gorf pere so evel benviachou gant pere e ra ar pez en deuz da ober, ar skianchou-ze her sach gant cals a nerz varzu an traou a jench ha ne badont netra. Dre-ze en em gaf en den evel diou volonte ; an Abostol ho galf diou lezen. Steki a reont dalc'h mad an eil oc'h eben, hag unan anezho a ra en tu-ma hag eben en tu hont. Pa den skianchou ar c'horf da veza trec'h e chom en den, eme ar memes Abostol, frouez a varo. Ar vertus eo ta lacat ar speret hag ar virionez da drec'hi ; ha ragze kement gourc'hemmen a rer evit lacat ar c'horf da suja d'ar speret, a so eul lezen ervez ar rezon hag ar furnez, hag a gundu d'an eurusdet.

En despet da guement a ell da lavaret an dud direol ha difeiz, e c'houzoc'h ervad ne deo ket ar memez tra evit an den, ez eus eur c'hem bras evitan, etre heuilla he ioulou fall hag ho zrec'hi, hag ez eo zoken red ha red mad dezhan enebi outho evit beza eurus. Pa den an Ilis da ober he gallout evit rei courach deoc'h, ha da zeski deoc'h abred an doare da drec'hi aben ma vezo deut ar mare da c'houren, silaout mouez ar vam vad-ze ; heuillit he aliou ; peb gallout e deus recevet evit ho ren.

An Ilis ne deus nemet eur guennadurez, ne zench morse netra eus ar pez a zell oc'h ar sacramanchou, morse ne dor al liam a so o staga an oll gristenien fidel oc'h ar penn visibl ; diskuez a ra eus a beleac'h e teu o sevel azalec Pii Nao, ar Pab-se ker caret ha ken amprouet pehini he gouarn hirio, bete Sant Per, beteg hor Salver Jesus-Christ. Abaoue bremaic naontec cant vloas, ep beza distroet dioc'h he c'harg na dioc'h he hent gant freuz an dispac'herien, na gant aheurtamant an heretiket, e kelen ar bobliou, hag e tesk dezho en he c'hreden pehini a lianvomp ar Symbolen pe ar *Crede*, creden hag a so scler, eaz da zeski, e her gomzou, ne jench morse, an oll guirionezou roet dizi gant Doue da viret. Gouzout a ra ema ar Speret-Santel oc'h he ren, hag en em harp, ep aoun da veza tromplet, var guer he fondator en deus prometet beza ganthi bete fin ar bed. Evelse ive e deus ato condaonet pep errol, pep tra nevez hag estren pere ne voant ket revelet gant Doue. Guelet e deus oc'h en em zistaga diouthi rouanet ha carteriadou tud abez, kentoc'h evit gouzaon netra nevez, na rei diguemer d'an distera tra nevez en defe clasket en em veski etouez he guirioneziou, pe chench eun dra bennag en he c'helennadurez. E creiz ar bern credennou-ze a bep seurt etouez pere en em goller en amzer-ma, an Ilis ato sur eus ar guirionezou a zesc deomp, ato sur eus ar c'hallout e deus d'ho deski, a jom en he za hag a zao he mouez ep aoun hag ep an distera donetans.

O teski d'an den en em anaout he unan, e tiskuez dezhan ez eo an distruch great enhan dre ar pec'het, a zo caus ma zeus enhan brezel etre ar speret hag ar c'hic ; ez-eo red dezhan caout ar c'hras, da lavaret eo

eun nerz ha n'en deus ket anezhan he unan, evit gallout trec'hi ebars er vrezel-ze ; hag ez eo ivez eun dever evithan lacat he nerz hag he c'hallout he unan da sicour ar c'hras, ha kementse-a volonte vad ep ma ve contragnet d'hen ober.

Mar clase lacat ar c'hristen d'en em denna e troad ar Groas, ha da zioueret dalc'h mad eun dra bennag, eo dre ma c'hanavez mad izomou he galon ; gouzout a ra e ra muioc'h a vad da galon eur guir gristen an traou a ziouer, evit na ra da galon eun den difeiz an traou a guemer.

Oll on eus faziou da rebech deomp hon unan, hor breudeur ker, hag evel a lavar Sant Ian, *Mar leveromp omp dibec'h, en em dromplomp hon unan ; n'ema ket ar virionez enhomp*. Salver ar Bed eo a zesk deomp eo red ober pinijen. *Ma na rit pinijen, emezan, ez eot oll da goll !* E keit ha ma tiskuez deomp ar Feiz ar poanuis eternal diet d'ar pec'het, e velomp gant daoulagad hor c'horf ar poanuis a zigas ato ive d'he heul er vuez-ma. Evessait oc'h ar goaligner a bep seurt skignet dre ar bed. Savit ho sonch beteg ar c'hariou, ar c'harteriou scoet gant clenvejou, kernez ha reuziou all ha ne oufe den da niveri, sellit oc'h ar steriadou goad gant pere eo bet ruziet carteriou a bez. N'eus douet ebet n'o doa tud ar broiou-ze lezet da zont en ho zonez al laeronis, an dislealdet, al leoudouet ; deut oant da ancounac'hat Doue, en em roet oant d'ar vesventi, d'ar pec'het mezus. Mes gouscoude ha coupaploc'h oant evidomp-ni ? *Doue so bet trugarezuz en hor c'henver*. He vadelez eo e deus great hon espern ; he drugarez eo e deus miret na vije great deomp evel so bet great da re all ; ar pez so digouezet gantho a ziskuez deomp petra veritemp hon unan. Hor bet aoun na deufe abars ar fin justis Doue d'hor skei ma chomomp re hir ep ober pinijen.

Digoret aviel Sant Lucas ; kemerit an trizecvet pennad. Jesus a goms oc'h ar Juzevien divar benn eun den bennag eus a C'halilee. Pilat en doa mesket goad an dud-ze gant an hini a veze scuillet en ho sacrificion. *Ha sonjal a rit-hu, eme hor Zalver, e voa an dud-ze a C'halilee brassoc'h pec'herien evit ar re all abalamour ma o deus gouzanvet poanuis ker criz ? Nan ; mes ma na rit pinijen ez eot oll da goll er memes tra.*

Tour Siloe a voa coezet, hag o coeza en doa flastret trivac'h den. Goude beza digasset da zonc'h a guementse Jesus a lavaras adarre : *Ha cridi a rit-hu e voa brassoc'h dle ar re-ze evit dle an dud all so o chom e Jeruzalem ? Nan, me hen lavar deoc'h ; mes ma na rit pinijen, ez eot oll da goll er memes tra.*

Pec'het ebet ne jomo ep beza punisset. Red eo ep mar ebet, eme Sant Gregor, e teufe ar pec'her da c'houzaon anezhan he unan ar boan so dlet d'he bec'het, pe red eo e ve punisset gant Doue. Araog Sant Gregor, Tertullien a lavare oa an den en eun doare bennag goestlet d'ar binijen, ganet evit ar binijen. *Homo penitentiae natus*. Mar deo an oll, ha zoken ar re vella, a dle ober pinijen, pe seurt guir o defie da chom ep he

ober ar re so carguet ho c'houstians a bec'hejou grevus hag ep niver? Doue ra bellai dioutho eun seurt sonj pehini a ve eur guir follentez hag a densfe ep mar var ho lerc'h eur c'heuz eternal! Da lacat evez zo, eme Sant Augustin, na ve keuz an deiz divcza, keuz ha ne rafe vad ebet, ne rafe nemet teleur an ene en anken. (*Erit in ultimo die pœnitentia, sed infructuosa*), hag an Abostol Sant Paul a ziscleri d'ar bec'herien, e vezo scrijus ecitho coeza etre daouarn an Doue beo.

Kementse oll a zo guir, hen anzao a rit; gouscoude, hor breudeur ker, ha clasc a rajac'h-hu ar binijen ma ne raje an Ilis eur gourc'hemen abenn deoc'h d'hen ober? Deomp larcoc'h ha lakeomp ho pefe, dre eur chans ar brassa, dalc'het neat ha disclabez sae venn ho padiziant, evelato e tlefac'h labourat ha poania da ober pinijen. Eur virionez eo hag a gomprenot æz avoalc'h.

Ann dilerc'h eur vech-all.

HISTOR ZANTEL.

(C'HOUEC'HVED PENNAD VAR-N-UGHEM).

Ezaü ha Jakob en em vel, hag en em zisparti mignouned.

Jakob goude he beg-gourren ouc'h ann Eal, a zeue gant he dud varzu douar Kanaan. O veza savet he zaoulagad, e velaz euz a bell he vreur Ezaü o tont, ha pevar c'hant den gant-han. Hag e tispartiaz bugale Lia ha Rachel dionc'h bugale ann diou vatez.

Lakaat a reaz er penn a-raok ann diou vatez gant ho bugale; Lia hag he re enn eil banden, ha Rachel gant Jozeph ar re ziveza. Hag hen he-unan, o vont a-raok, a stonaz seiz gueach beteg ann douar, ken na oe deuet Ezaü tost d'ezhan.

Ezaü euz he gostez, a redaz var arbenn he vreur, hen dighemeraz a vriad-kaer, hag oc'h he zerc'hel stard etre he zivreaç'h, e pokaz d'ezhan en eur ouela.

Neuze, o veza savet he zaoulagad, e velaz ar merc'hed hag ar vugale vihan, hag e lavaraz: nag ar re-ma, piou int-hi? ha d'id-de efent-hi? Jakob a respontaz: ar vugaligou en deuz roet Doue d'ho servicher int.

Ar vitizien, o tostaat gant ho bugale, a stouaz beteg ann douar. Lia a zeuaz goude, gant he re, hag a stouaz d'ann douar er memes fesoun; Rachel ha Joseph varlerc'h ar re all en em daolaz ivez d'ann douar d'he zaludi.

Hag Ezaü a lavaraz: petra eo ar bandennou chatal a zo digouezet gan-en var va hent? Ho c'hasset am euz a-raok eme Jakob, evit ma kavjenn trugarez dirag va Aotrou.

Hag Ezaü a respontaz: kalz madou am euz, va breur ker, dalc'h gan-ez ar pez a zo d'id.

Nann, eme Jakob, ne ra ket evel-se, me az ped; hoghen mar am euz kavet trugarez dira-z-oud, kemer ar prezant dister-ze digan-en, rag guelet am euz da zrem evel pa em be guelet drem ann Aotrou Doue. Bez mad em c'henver; ha kemer lod euz ar vennoz vraz-se am

euz het digant Doue. Doue pehini a ro pep tra en deuz roet d'in ar madou-ze.

Ezaü, var beden he vreur, ho c'hemeraz, gant beac'h; hag a lavaraz: beachomp hon daou kevret, ha me zalc'ho kompagnuev d'id enn da hent.

Jakob, pehini en doa bepred aoun evit he dud, a respontaz: gouzout a rit, va Aotrou, em euz gan-en bugaligou vihan, goall-dener, danvadezed ha bioc'hed prest da ala; mar-d-ann d'ho skuiza, oc'h ober re a hent dioc'h-tu, va loened a hell mervel holl enn eun devez. Ra'z ai va Aotrou a-raog he zervicher, ha me heulio nebeut-da-nebeut he roudou, ken na vezinn digouezet gant va Aotrou e Seir.

Ezaü a respontaz: me az ped, ra choumo da vihana lod euz ann dud a zo gan-en da ober heul d'id enn da hent, ha da zifenni ac'hanoud, mar bez ezom.

Ne ket ret, eme Jakob, eun dra hepken am euz ezom, ra gavinn trugarez dira-z-oud, va breur.

Ezaü eta a zistroaz da Zeir enn deiz-se memes, dre ann hent ma oa deuet. Jakob euz he du, a erruaz e douar Kanaan, hag o veza savet eun ti, ha plantet he deltoù, e hanvaz al leac'h-sé Sokoth, ar pez a ziniti teltoù.

Tremen a reaz goudeze bete Salem, eur ghear-vonre'h d'ar Sichimied, hag e choumaz e kichen ar ghear-ze. Prena a reaz, evit kant oan, digant bugale Hemor tad Sichem, lod euz ar park e pehini en devoa plantet he del. Hag o veza savet eno eun aoter, e reaz eur zakrifis var-n-ezhi da Zoue braz Israël.

(Guelet on eus er pennad-ma eun dra hag a ra plijadur d'an env hag an douar; daou vreur oc'h en em bardoni hag oc'h en em vriata goude eun disparti a ughent vloaz. Petra na hell ket ober eur spered-dous ha vuel (humbl), sikouret gant gras Doue? Ezaü, o tont gant pevar c'hant den armet, var hent he vreur, a oa var zonz d'hel laza hen hag he holl dud. Mes biz ann Aotrou Doue a droaz tu d'he galoun; kunvelez Jakob, he vuelded, he brezanchou great a galoun vad, a reaz ar peur rest.

Breudeur ha c'hoarezed, glazet pell-ze marteze ann eil ouz eghile abalamour da eun tammik interest, da eur gaouad gouarizi, pe evit disteroc'h tra, kemerit skouer var ann daou vreur-ma. Grit evel Jakob; list da vont lod euz ho kuir, Doue ho tigollo. Na pa vec'h ar breur hena, deuit a-raok, grit iskuz ar c'henta, hag ar peoc'h a zeui enn ho kerentiez.)

— K A N A N —

Ann env hag ann douar a arvest gant dudi
Daou vreur pell-ze glazet, oc'h en em bardoni.
Breudeur ha c'hoarezed, kemerit skouer out-ho,
List da vont euz ho kuir, Doue ho tigollo.

Eun interest dister, eun tammik gouarizi,
A laka meur avech etrez-hoc'h disparti;
Pedit evel Jakob, Doue gant eun taol biz,
A dro ar c'halonou; ar peoc'h a zeu kentiz. J.W. Henry.

BUEZ MARI-AMIS PICART.

(KENTA PENNAD.)

Mari-Amis Picart a zeuaz er bed d'an eil a viz c'houevrer 1599, e parrez Guiclan, en escopti Leon, hag a oue badezet er memez devez en iliz Guimilio. Ian Picart, he zad, hag Agath Malegoll, he mam, a ioa tieien baour, n'ho devoa evid oll vevans nemed poan ho divrec'h, mes en distro e tremenent an eil hag eguile evid tud a zoujans Doue.

Ar grouadurez-ma ne devoa c'hoaz nemed eur seiz vloaz bennag pa glevaz ober er gador meuleudi ar guerc'hited hag ar verzerenti, ha d'an ampoent ec'h en em zantaz ken douguet da blijout da Jezuz-Christ, ma c'houlennaz oc'h Doue an teir c'hras-ma: Arguenta, da ober hepred he volentez santel; an eil, da veva ha da vervel guerc'hez, hag an drede, da c'houzaon poanniou garo ar verzerien. Hognen he buez a zis-couez ervad e oue selaouet he pheden.

Mari-Amis, goude deza desket gant he zad ar guirioniesiou kenta euz ar relijion, a oue d'an oad a eiz vloaz, lakeat da zervicha e ti Gristoph Abgrall, unan euz ar santella couerieded euz an amezeguez, hag a ioa er memez amzer marc'hadour. Eno, ar verc'hig vian-ma a oue carguet da zioal al loened. Al labour-ze he felleaz dioc'h trouz ar bed hag a roaz d'ez an dro d'en em rei d'ar beden a galoun a pea he oll fljadur. Hep den nemet-hi he unan hed an deiz, e tremene ar mintinvez oc'h unani he c'haloun gant ar veleien a lavare an oferen en ilizou tro var dro a elle da velet euz al leac'h m'en em gave. He c'harantez a greske sul vui, sul c'hoaz pa gleva seni evid ar gorreou. Er c'hiz-ze e deveze perz er sacrific santel m'en em gave en-han a spered ken aliez ha bemdez.

D'an oad a drizeg vloaz, distro da di he zud, e doue ar c'hlaç'har da velet he zad o coueza en eur c'hlenvet hir, hag ar pez a oue goassa, oc'h ober d'ezan he unan eur gouli hag a grogaz dizale ar c'hountron en-han. Mari-Amis a oue aliet neuze gant Doue da vont da bardouna da Zant-Neven, chapel a zevosion euz a escopti Treguer. Hognen nag hi a oue braz he joa en eur gaout, en distro ac'hano, he zad ker iac'h ha ma na vije het biscoaz clanv. Rag-se, evid discouez da Zoue he anaoudeguez vad, e kemeraz hivi-ziken ar c'hustum santel da vont beb bloaz d'ar chapel-ze keid ha ma choumaz gant-hi ar c'herzet.

En unan euz ar beachou-ze e reaz anaoudeguez gant an Tad Kintin, hag an tad-ze, evel ma prijie meur-bed Mari-Amis abalamour d'he vertus, a roaz d'ez eur groaz en eur he phedi d'he miret hed he oll buez hag en eur ziscleria d'ez er memez amzer e divije izoum braz euz ar groaz-ze evid caout an nerz da c'houzaon he foanniou, daoust gouscoude ma tlie an Aotrou Doue he unan beza he divennour.

Da benn eun nebeud bloaveziou, Ian Picart, goude eur vuez leun a oberou mad, a varvaz evel eur zant. Var he dremenvar, e c'halvaz he vugale oll en dro

de vele hag, o veza roet d'ezo cuzulliou euz ar re furra, e comzaz oc'h Mari-Amis hag e tiscleriaz d'ez ar poanniou iskiz e devije da c'houzaon; he alia a eure da zerc'hel mad, ep ober van euz a lavariou an dud.

Goude maro he zad, Mari-Amis a joumaz gant he mam beteg an oad a bemp bloaz ha tregont evid renta d'ez an oll servichou mad a ioa en he galloud; hag evid gounid hirroc'h a-ze evit-hi e kemeraz forz poan da zeski beza kemenerez ha guiderez. E doug he labour, he spered a veze-ato e Doue hag e traou an Env. Bemdez c'houlou e cleve an oferen, hag evid digoll an amzer a dremene en iliz e labour e beteg pell an noz. Ar suliou hag ar gouliou a roe oll d'ar bedev ha d'an oberou mad. Hast e doa bepred da glevet comziou Doue, hag ar c'homsiou-ze a vague en he c'haloun a zougue en-hi frouez ar re builla.

Eun dimezel vad eaz a Vountroulez, o veza anavezet an tensor-ma a vertus, a c'hoanteaz he c'haout en he zi evit kemeret perz en he c'harantez e kenver ar beorien ha eaz d'ezo he aluzennou. He mam a aotrez gant-hi; mes hep dale e santaz an dienez euz he merc'h hag e kemennaz d'ez distrei d'ar guær. Ar zervicherez santel, evit-hi d'en em gaout eüruz braz e ti he mestrez uevez, ne varc'hatas ket da guitaat anezi dalc'h ma oue meneg da zenti oc'h monez he mam. Distrei a eure eta d'ar guær ha d'he labour guent, mes allaz ne choumaz eno pell e peoc'h. He mam hag e c'herent all a felle d'ezo e timesie; clasc a rejont he deseou dre bep seurt ijinou, hag evel m'ac'h enebe hepred, e rejont d'ez fors rebechou ha betek zoken fors disme-gans. Mes caer ho doue, ne eljont ket dont a benn euz eur galoun a ioa en em roet da Zoue eur vech evid mad. Eur goms en doa lavaret Ian Picart, he zad, var he vele a varo, a roaz da Vari-Amis an nerz da guenderc'hel er sonj e devoa da joum bepred guerc'h. He mam o veza discleriet d'he fried an nec'h e devoa gant ar pez a deuche ar grouadurez-ma da veza, eur vech ne divije mui a dad var an douar, hen a lavaraz d'ez ne zilez morse an Aotrou Doue ar re a laca en-han ho fisians, ha neuze en eur goms oc'h he verc'h, e lavaraz d'ez: Va merc'h, eme-z-han, list ho mam da lavaret ha grit ervez ma viot aliet gant Doue. Hognen ar c'homsiou-ze euz a berz eun tad ker santel a joumaz ato doue spered he verc'h. Gouscoude er mare m'ac'h enebe er c'hiz-ze out he mam, e talc'he bepred evit-hi ar memez doujans; hag he mam euz he c'hostez, o velet ervad ne oa galloud ebed da drec'hi he zantimant, ne gomsaz mui d'ez a zimeziou. M.

AR BETTERABES AC AR MELCHEN.

AR MELCHEN.

Ar melchen ar guella ac ar founussa bouet hon eus da roi dal loennet en han. Dont a ra mad er vro, nemet en douarou segal; ha c'hoas, bouez treza ha trempa an

douarou-ze e doare, eller caout enho daou droc'h ben-nag er bloas; en douarou guinis, ar melchen ro tri droc'h ha pevar zoken, pa ne zigonez ket re a sec'hor. E meur a vro e creiz Frans, ag e-Breiz, en dro da Naonet, e leker nebeut a velchen, abalamour alies an domder en deus re a ners ha ne ro neuze nemet eun troc'h ber a difon. Mes er vroioù-ze e ma al *luzern*, pihini zo couls hag ar melchen ha cals founussoc'h. Ne ra van doc'h ar sec'hor couzien e deus grissiou kement a bicher hag ez eont don en douar; ama, ar guisq dindan zo peurluiva meinez, courriec pe tuffec, ha nellont ket mont larg avoalc'h er guiscou-ze evit caout ho ners ha dont da vad. Ne veler ket a luzern kenebeut en hor vro nemet e Loctudy, Penmarc'h, Roscof hag ama hag ahont, hed an aod, lec'h ez eus douar condon ha dreist ar re all.

Ar melchen nel ket dont en douar aliessoc'h evit bep eiz vloas; pa vez laket re aliez e za da fall er goan; nem zieria a ra ha mont a ra cuit a tacadou ha peb a nebeut ben an amzer nevez. Evit mirout oc'h kement-ze, e lakaomp, e Roslohan, en tieguechou labouret gant skiant, eun anter deus an douar eleac'h a reer ar boued han dindan melchen, an anter al dindan charrons. Eguisse, pa zigouez adarre ar bouet han en dachen, ar melchen a ia eleac'h medo kent ar charrons, hag ar charrons eleac'h medo ar melchen.

Hervez am eus lavaret, nebeut a velchen e lekeont e bro Naonet; enho ar bouetach han zo peurluiva charrons mesket a guerc'h; al loden vrasa a vez hadet abars ar goan, al loden-all er mis c'huevrer pe e mis meurs, doc'h ma zigouez an amzer. Guelet em eus, er bloas-ma, er vro-ze, ar charrons o tiouanna kerkent hag anter deus ar mis here; rag ar charrons abred ar guella d'en em zifen doc'h ar goan; founussoc'h e vez ive da droc'hi evit ar charrons meurs.

Ar charrons ne ro nemet eun troc'h hag eller lacat var he lerc'h id-du, petraman ober en douar-ze eur vaguerz colza, evel ma reomp ama, evit planta e leac'h all ben ma vo deut mare coant-Mikel; eller ive ada anezho da jom evit rei eost, pe guir ar charrons a zo bet teilet.

E Naonet e hadont c'hoas eur boetach-al da gaout varlerc'h ar charrons ha da roi d'al loennet pad ar mis c'houere, mis eost ha lod doc'h mis guengolo, da lavaret e doare gortos ken ne vez deut ieot da droc'hi pe da beuri er foenneier. Evit caout ar bouetach a lavaran, e c'hadont mesk a mesk id-du, piz, segal, querc'h, eiz ha guiniz-spagn. Ar c'hemesk-ze a blich d'al loennet; guellad a reont ganthan, eleac'h ar re n'ho deus nemet ar pes a gavont er meaz er mare-ze, a rank aliez castiza. peurluiva, evit boulc'ha ar bouet-ze, e c'hortozont ken ne vez stag eun nebeut greun oc'h an id-du zo e touez.

TH. DE P.

An Eal hag ar buguel en he gavel. (Troet eus a eur verz gallec, great gant eur barer, he hano Ian Mehou).

Eun Eal guen-cann a ioa soublet
He bennic ganthan da zellet,
Da zellet sioul ous eur buguel
Cousket coantic en he gavel.

Ken henvel outhan her c'have
Ma lavaras: « deus ganen-me,
Deus, o va breur, deus d'ar c'hoar;
Te zo re gaer vit an douar.

« Eno ne zeus evit an den
Plijadur ebet eb anken:
Ar c'hoarz zoken a dro e lenv,
Hag an oll ebatou e canv.

« Eno pa za'n den d'ar festou,
An Encrez zo var he zeulou;
Ha dioc'h an noz e lam ive
Kerkent hag hen en he vele.

« Hag e teuffe roud an anken
Var da dal-te ken dirouven!
Da zivoc'h-te ker brao livet
Dre an daelou a ve goenvet!

« Oh! nan, nan, te deui ganen-me
Aount varlaez da di Zoue:
Eno hon daou en eur guichen
Nhi vezo eurus da viken.

« Hag arabat e ve goelvan
Nag hirvoud var da dremenvan;
Arabat eo e ve guelet
Den en da di e canv guisket.

« Ra vezo laouen peb hini
Evel p'as bet o vadezi;
D'as oad-te an deis diveza
Zo caeroc'h eguet ar c'henta. »

Er guis-se pa en deus comzet,
An eal guen en deus dispaket
Varzu an env he ziuaskel....
Mammic guez!... Maro da vuguel.

GABRIEL MORVAN,
vikel e Plouonguer.

Ar Breur hag ar C'hoar.

An demezel a ieas goustadic da guichen dor cambr, he breur, hag ac'hano ep en em ziskuez dezan, her guelas var he zaoulin o pidi. Eul levr a voa etre he zaouarn, hag e save eun tamic he-vouez. He c'hoar a dosteas he scouarn da zilaou, hag e clevas petra a lenne... Pedennou an agoni! Ne devoue ket ar galon da vont da goms outhan, hag ez eas d'he c'hambr mantret. Eun nebeudic goude e teuas Alan da skei var he dor.

— Demezel guez! Saveteit ho preur! C'hui epken a ell hen ober.

— Petra zo? Petra zo c'hoarvezet gant va breur?

— Oh! ma c'houfac'h, demezel baour! Ho preur a

ia d'ar maro! An dudchentil kemeret e Kiberon so barnet d'ar maro er mintin-ma en Alre, ha varc'hoas da c'houlou deiz e vezint fuzillet!

— Ha va breur a dle mervel ive?

— Ho preur so condaonet evel ar re all. Var he c'her eo lezet da zont da velet he vam. Mes roet en deus he c'her da vont d'ar maro varc'hoas vintin. He c'her! demezel!

— He c'her! he honor! eme ar c'hoar guez! Mes penaus he zavetei!

— An Aotrou Cont ne vanco ket d'he c'her. Gourc'hennet en deus din dere hel prest he varc'h hag he zihuna abenn peder heur. Me zo redet da di Gildas ar merour hag hen en deus, en eur vouela, lavaret din ar pez a gontan deoc'h.

— An demezel a reas eur zonc'h hag a lavaras d'ar mevel:

— Va breur ne dai ket d'ar maro; n'hen dihunit ket; minn na vezo trouz ebet en ti epad an noz; me guemer an afer em c'harg.

— Miret a reot outhan da vont, demezel?

— Doue n'en deus ket he zigasset d'am mam evit he lamet diganthi. It, ha grit ar pez am eus lavaret deoc'h.

Alan en em dennas, hag an demezel Turgis a ieas d'an daoulin evit pidi eur pennad. Gondeze e scrifas eur guer hennag var eun tam paper hag hen lezas var an daol. Troc'ha a reas ive he bleo hir ha caer hag ho destumas var an daol e kichen ar paper. Neuze pa gave dezhi oa cousket c'huec he breur, ez eas d'he gampr hag e kemeras he zillad. Teleur a reas eur zell varnezan en eur lavaret a galon kenavezo dezan. An den iaouane a voa ken torret gant ar skuisher en devoa het en derveziou araog, ma c'hallas he c'hoar ober he zro ep he zihuna. Deut d'he c'hambr, e lakeasan dillad soudart-ze, ha pa voa en em vasket, oc'h ober eur zell er mellezour, e devoue evel aoun, ken henvel en em gave oc'h he breur. Mont a reas goudeze d'ar marchossi eleac'h ma cavas prest marc'h ar C'hont, ervez an urs roet d'ar mevel, hag ez eas en hent ep gouzout dare da zen.

Abenn ma teujot antronoz da guerc'hat an dudchentil evit ho c'has d'ar maro, edo an demezel en ho zouez eleac'h he breur. Mont a reas d'an dachen en eur bidi, he daoulagad izel, rag bez' ez oa unan eus ar guerc'hezete pere, hervez Sant Ambroas, n'o deus ket aoun rag ar maro, mes o deus aoun rag eur zell. Ar gommunion e doa recevet an dere'hent a roe ners dezhi. Ne devoa aoun nemet rag eun dra, na vije dihunit he breur ha na deuje da vint outhi da vervel en he leac'h. Digonezet var an dachen, Escop Dol, pehini a voa etouez ar brizonerien, a roas an absolven diveza, hag an demezel a voue unan eus ar re guenta discaret gant ar bouliji.

Pemp heur anter oa pa zihunas ar C'hont. Spontet e tilam eus he vele, mes ne gave ket he zillad. Caout a reas eun habit all, hag he guiskas buan. Neuze e tigor an nor hag e caf ar mevel daoulinet var an treuzou.

— Pet heur eo?

— Re zivezat eo, Aotrou Cont.

— Re zivezat! malheurus, gouzout a rez petra gollan-me?

— Ho puez, va mestr ker, a dliac'h da goll du-ze.

— Va honor! kerc'h buan va marc'h araog ma teui va mam ha va c'hoar. Compren a ellez em oa c'hoant d'ho guelet; mes va guer am eus roet....

Kementse a voue lavaret a vouez izel, mes gouscoude an Itron a glevas hag a ziredas.

— Itron, eme Alan, dalc'hit-hen, pe ez a da vont d'ar maro!

— Va map, eme ar vam guez, en eur lamet gantha a dro vriad, ne di ket d'ar maro!... Mar marvez, me varvo ive.

Etre daou Alan a voa eat da gampr an demezel evit he guelver da zont da zicour he mam da zele'her he breur. Mes caer en doa skei, den ne responte. Mont a reas er gampr, ha ne gavas den enhi. Ar guele n'oa bet den enha en noz-ze. Dont a reas en eur grial:

— An demezel ne ma ket aze! Ne ket bet en he guele!

Buan ez ejont oll da gampr an demezel, hag an Itron Turgis a velas da guenta ar bleo hag an tam paper. Cregui a reas er paper, hag e taolas eun taol lagad varnezhan, mes coeza a reas eus he za, hag ar map eo hel lennas. Setu ama petra voa var ar paper-ze:

« Va breur ker, ne varvi ket, ha saveteit e vezo da « honor. Chom beo, ha consol hor mam; mir outhi da « vouela re din; nag hen a so dons din mervel evidhout!
« Na me so eurus hirio da veza ken henvel ouzit!
« Kenavezo, va mam guer; kenavezo, va breur muia
« caret; kenavezo, va c'hoar Adel; en em velet a
« ramp adarre etre divrec'h an Aotrou Doue! »

« MARI. »

— Hag e lessen va c'hoar da vont d'ar maro! eme ar C'hont. Hag en em ziframas eus a zaouarn he vam, hag hen en eul lam d'an traon gant an deleziou. He vam hag ar re all a ieas var he lerc'h. E dor an ti e tigouezas ar merour gantha. Hema a jomas sebezet oll hag a ieas var adren o velet ar C'hont iaouane:

— Petra, c'hui, Aotrou! C'hui a zo aze? Ha piou am eus-me ta guelet bremaic o coeza dindan ar bouliji, ho tillad gantha, hag henvel poch ouzoc'h?

— Va c'hoar eo! maleurus ma zoun! Va c'hoar eo so maro em leac'h, maro evit va zavetei!

Ar C'hont a goezas semplet, hag he vam, e creiz he anken, e devoue ners calon avoalc'h evit chom en he za ha kemeret sourei eus he map, penher iviziken.

Ar C'hont a voue douguet var eur guele en eur gampr euz. Pa denaz he anaoudeguez dezhan, en devoa eun derzien ar grea. Ne rea nemet alteri, ha crial, o lavaret he lezet da vont ac'hano; her galvet da vont d'ar maro; e voa dlet, e voa red dezhan mont d'ar maro.

Ar memez dervez, da noz, Adel, an nizez, guisket evel eur plac'h divar ar meaz, a ieas, Alan, ar merour hag hi, da glasc corf he c'hiniterv. Goude beza clasket pell amzer etouez ar c'horfou maro, he c'hafchont.

Delc'her a rea etre he daouarn eur chapelet e doa bet guehall digant he breur; Adel a zerras dezhi he daou-lagad, hag a zestumas he c'horf gant ar brassa respet. Neuze Alan hag ar merour he dougas d'ar maner. Laket e vone er chapel, e troad an aoter, hag eno, epad pell amzer, e tejot da bidi evithi. G. M.

Hano ar Zent evit ar Sizun-ma.

DILLUN, 12 c'huevrer. — Santez Jannet Valoa, rouanez a Frans.

DIMEURS, 13. — Sant Hiler, escop ha doctor eus an ilis.

DIMERC'HER, 14. — Merc'her al Ludu. Ofis an deiz.

DIZIQU, 15. — Sant Andre Corsin, escop.

DIRGUENER, 16. — Curunen spern hor Zalver.

DISSADORN, 17. — Sant Guevroc, abad.

DISSUL, 18. — Ar zul kenta eus ar C'horaz.

An Aviel hirio. Jesus a vone casset gant ar Speret Santel er gouelec'h, pe en desert, evit beza tentet gant an diaoul. Ha goude m'en doa iunet daou-uguent dervez ha daou-uguent nosvez, en devoue naoun. Hag an tentatour o tostât, a lavaraz dezhan: Mar d'oc'h mab Doue, lavarit d'ar vein-ze dont da veza bara.

Jesus a respontas dezhan: Ne ket gant bara epken eo e vef an den, mes gant kement coms a deu eus a c'hinon Doue.

Neuze an diaoul hen dougas d'ar guær santel (da Jeruzalem), hag hen lakeas var (ein an templ, hag a lavaraz dezhan: mar doc'h map Doue, en em dolit d'an traon, rag scrifet eo: Gourc'hemennet en deuz d'he Alez ho tioual; asten a raint ho daouarn d'ho tiguemeret, gant aoun na stocac'h ho troad oc'h eur mean bennag.

Jesus a lavaraz dezhan: scrifet eo ive: Ne dentot ket an Aotrou ho Toue.

An diaoul a grogas enha adarre hag hen dougas var eur menez huel huel; diskuez a reas dezhan oll rouanteziou ar bed hag ho braoenteziou, hag e lavaraz dezhan: Kementse oll a roin deoc'h, mar kirit stouet d'am adori. Hoguen Jesus a respontas dezhan: tec'h kuit, Satan, rag scrifet eo: Ne adorot nemet an Aotrou ho Toue, ha ne zervichot nemethan.

Neuze an diaoul a iegas kuit, hag an Alez a dos-teaz outhan evit he zervicha. (S. VAZE. IV. 1). G. M.

ROM. — Hano so da ziscleria eurus Lois-Mari Grignon Monfort, missioner a Vreiz. An den abostolic-ze en deus prezeguet e cals a lec'hioù a Vreiz hag er c'harterioù all er penn d'ar C'huz-Heol d'ar Frans. Maro eo divar greiz rei eur mission e parres Sant-Laurans, en escopti Luçon, an 28 a viz ebrel 1716, d'an oad a 45 bloas. Hen eo deus fontet urs ar veleien missionerien a gompagnunez Mari, hag hini *Merc'hed ar Furnez*, pe ar *Seurc'zet-Guenn-Guz*.

Er miziou diveza-ma ez eus diblasset evit ar mis-

sionou; evit an enezennou hanvet *Antill* hag a zo d'ar Zaozon, daou velec eus an Itali ha daou gloarec eus a Frans; evit ar Senegambi, nao missioner a Frans ha diou soeur, ar re-ma so eus a Vreuriey ar Speret-Santel, eus a Galon-Santel-Mari hag eus ar Conception didach a Gastr; evit Madras, tri missioner iaouane eus an Irland; evit ar ster Mackensi, evit Colombi, evit ar C'hanada, evit an Texas, pevar missioner eus an Irland ha seiz eus a Frans; ar re-ma so a douez an tadou Oblat eus a Vari-concevet-ep-pec'het.

Mont a ra ato cals a dud iaouane da Rom evit en em lacat e servich ar Pap. Eus ar Beljic dreist-oll ez a eun niver bras; pep parrez a gas eur zoudart, ha lod a gas ouspen. G. M.

KELEIER.

An tenna d'ar zort, e departamant Finister, er pemp arrondissement, a gommanso ar 26 a viz c'huevrer.

Cazetennou Brest a lavar ez a ar c'hlenvet en he dro. E creiz kær n'euz mui a dud clan, hag eus an tro var dro n'eus ket ken nebeut kement a vervent hag a so bet. An ear en em iac'h a e pep leac'h.

Er sizun-ma e comzer adarre eus a gals penseou. Meur a lestr so eat da goll cannet gant ar goal ave-lou. Coms a rer dreist oll eus eul lestr saoz a voa enha daou c'hant hag anter-cant den pere zo heuzet oll nemet c'huéc'h pe seiz.

Ar c'hlenvet var al loenet (*typhus*), a zalc'h ato e Brozaos. Skei a ra ato a bep seurt loenet corn. Bete dec mil, a leverer, so bet taguet gant ar c'hlenvet er memes sizun.

An ed a jom ato er memez priz. E costez an Anternoz epken d'an Europ eo guelleat eun dra bennag varnezhan er sizun diveza. Evit e leac'h all ne guera tam. G. M.

PRIS AN ED.

KEMPER. — 3 C'huevrer.	PONT'NABAT — 1 ^{er} C'huevrer
Guinis.... 46 lur, 89 c.	Guinis.... 46 lur, 78 c.
Segal.... 40 lur, 46 c.	Segal.... 40 lur, 65 c.
Eiz..... 9 lur, 07 c.	Eiz..... 40 lur, 03 c.
Ed-du.... 9 lur, 04 c.	Ed-du.... 8 lur, 48 c.
Kerc'h.... 7 lur, 97 c.	Kerc'h.... 8 lur, 38 c.
Avalou-douar 3 lur, 35 c.	Avalou-douar 2 lur, 60 c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand Ar. DE KERANGAL, Moulur an Escopti.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezouneec.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten a goust:

Evit eur bloas.....	DAOU SCOUET.
Evit c'huéc'h miz.....	EUR SCOUET.
Evit tri miz.....	C'HUEC'H REAL.
Eur gazeten ebken.....	DAOU VENNEC.

Ar bacamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Belec e Kemper.

Ar paeamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

MANDAMANT

AOTROU'N ESCOP KEMPER HA LEON,

EVIT CORAIZ 1866.

EIL PENNAD.

HOR BREUDEUR KER,

Ar C'honcil a Drant a ziscleri penaus *Doue ne vel netra da rebech d'ar re so ganet eun eil guech e Jesus-Christ*; mes deski a ra ive penaus ar pec'het originel, goude zoken ma vez bet lamet pe efaset, a les var he lerc'h an ioul d'ar pec'het, hag an ioul-ze, petra bennag ne deo ket ar pec'het eo, a zo red gouscoude d'ar gristenien stourm outhan dalc'h mad; ha buez an den so chenchet evelse en eur brezel a ranc an oll da zouten, en hevelep feson ne vezo curunet den ma n'en devez brezeleket beteg ar fin. Ar C'honcil a lavar c'hoas e tleer en em zivisca dioc'h an den coz. S. Paul o kelen he ziskibien a lavar dezho *lacad da vervel ar pez so enho a zouarec*. Hor mestr divin a ordren deomp kemeret *an hent striz eus ar binijen hag eus ar boan*, abalamour ma zeo dreizhan eo ez ear d'ar vuez. Hag e guirionez, hor breudeur ker, ar Relijion oll so fountet var an dever-ze pehini a zell ouzomp oll hag a so gouscoude anavezet ha saoueret ken nebent, an dever da zioual, ne ket epken oc'h ar pec'het, mes c'hoas oc'h kement a zong d'ar pec'het, oc'h kement hen laca da ziouan en hor c'halon. Evit efasi ar pec'het eo en em c'hreat den hor Zalver hag ez eo maro var ar groas. Evit distruja ar pez so oc'h eul ar pec'het, an orguil, ar garantez evit madou ar bed hag evit ar plijadurezou, eo salvevet dezhan beva en eur stad dister, er baouren-tez hag er boan. Ne anavez evit he ziskibien nemet *ar re a gar he groas hag he doug gantha*. He rouantelez a bromet d'ar re en em drec'ho ho unan. Red eo gouzaon evel dhan mar fell deomp dont da veza bugale da Zoue ha caout pers en heritach an Enn.

Evelse ta, hor Breudeur ker, red eo rei diguemer d'ar binijen gant he foanion, hag an Ilis oc'h ober deomp eur gourc'hemenn a guementse, ne ra nemet ordren deomp ar pez a c'houlen diganeomp ar relijion ha zoken natur an den. Disprij oc'h eus evit an hini ne ket guest da zioueret eun dra bennag pa vez izom, n'en deus ket a ners avoalc'h da zioueret netra a guement a ell ober plijadur d'he gorf, a ro d'ar c'horf-ze kement a c'houl, ha ne ean nemet pa vanc dezhan ar peadra, pe pa vez distrujet gantha he iec'het.

Kement hon eus lavaret, hor Breudeur ker, a ro deoc'h da anaout n'en deus ar c'hristen rezon ebet d'en em zizama eus a lezen ar binijen, ez eo al lezen-ze evit an oll, hag e c'hell an oll he miret.

Hon lezit da lavaret c'hoas eur guer en eur achui. Ne denfac'h ket eus ar iun a gorf ar oll trouez a ellit da c'hortoz diouthan, ma na labourfac'h ket ive da renta santel hoc'h ene, evel m'her goulenn diganeoc'h ar Speret-Santel dre c'hinou he brofet. Mar ho pese goal voazamanchou pere a zalc'hfe an dizurz en ho ti; ma velfet enha goal skuerioù, an tadou hag ar mamou o chom ep rei d'ho bugale ar skuer eus eur vuez christen; ar vugale o veza dizent, oc'h en em rei d'an lezireguez ha d'an dizurs; an dud pinvidic hag a renc huel o teuzi ho danvez e dispignou bras ha foll, an dud entre o clasc hale var ar poent-ze var roudou ar re vras, ha beteg an dud paour o tispign ive e follenteziou beteg ho honor hag ar pezig o defe izom anezhan evit caout bara, gant an anken da velet goudeze ne deus chomet gantho nemet ioulou fall n'o deus ket gallet da gontanti; ma ve guelet kementse, ar iun a gorf n'en defe nemeur a dalvoudeguez. Da betra e servichfe ar binijen a gorf, ma na gomansfe ive an ene da zioueret pep pec'het? Ar guir iun a so da guenta oll eun dra hag a zell oc'h ane. Petra dalse deoc'h plega ho penn, lacat en dro deoc'h ar cilis pe eun habit a binijen, stouet d'an douar var al ludu, ma n'en em lakit ket da derri al liamou ho talc'h stag oc'h ar pec'het? Rannit goudeze ho pevans gant ar re o deus naoun, roit lojeis d'ar re n'o deus ket,

guiskit ar re noaz, ha Doue a silaouo ho peden, rag *caret a ra re o deus plijadur o rei.*

Bez e c'hell beza avechou rezoniou da ober eur chenchamaut hennag e lezen ar iun hag ar vijel, rezoniou hag a c'houlouen avechou ma ve douseat al lezen-ze, mes an dever da ober binijen a jom ato. Mar d'ema en hor galout dousaat ar iun, diminui ar vijel, ne alfemp ket, n'eus fors pe seurt digareza ve clasket, lamet divarnoc'h all lezen-ze a behini ne all den en em zizama. Ar rezoniou a zigasser hirio var araog, ez eo diaez beva, ne deo ket ker kre iec'het an den, ha meur a rezon all; ar rezoniou-ze a ell lacat an Ilis, pehini a so ato leun a garantez hag a druez evit he bugale, da zousat eun nebeut he lezen evit ar peza zell oc'h an traou diavez; gouscoude n'her gra nemet gant ma teui he bugale da zioueret anezho ho unan traou all, ha kementse evit ma c'hellint tenna frouez eus an derveziou a binijen-ma hanvet gant Sant Paul *derveziou a silvidiguez.* Anat eo penaus ma na ellit ket miret al lezen-ma, e tleit prena, dre œuvrou a zevotion ha dre ar peza root d'ar paour, ar peza guemerit evit ezamanchou ar vuez. Bez e tleit en em zantifia dre an aluzen, ober œuvrou mad eleac'h ar peza n'en deus ket ho corf a ners avoac'h da c'houlouzaou, ha bale evelse en hent ar silvidiguez.

En eil pennad eus a Actou an ebestel e lennomp penaus sant Per, an unec abostol-all en dro dezan, a gomze ous eun niver bras a dud deut eus a guement corn so er bed. Oc'h asten he zorn etrezeg enho, e teske dezo, gant ar c'hallout en doa bet digant he vestr, penaus oa maro Jesus-Christ, penaus oa savet a varo da veo, penaus e rene brema er c'hloar. An dud estren-ze souezet o clevet he gomzou, souezet ive e c'haljent compren petra lavare, *a voue touchet ho c'halon gant keuz ha glac'har.* Lavaret a reant da Ber ha d'an ebestell all: *Tud, hor breudeur, petra raimp-ni? Per a respontas: Grit pinijen, ha ra vezo badezet pep hini ac'hanoc'h en hano Jesus-Christ.*

Evelldho e c'houlennot ouzomp: petra raimp-ni, pehini eo ar binijen a dleompni da ober evit diarben justis Doue, evit diarben ar goaligner hor sco er bed-ma, ha miret ouzomp da veza malheurus en eternite?

Tud so hag o deus prezeguet oa avoalc'h chench a vuez, cundui eur vuez guelloc'h. Setu aze a dra sur eun dra vad; gouscoude n'en em lezomp ket da veza tromplet; ne deo da hirra nemet eul loden eus ar peza dleomp. Ar re a zesc eo avoalc'h kemense hag a dol er mæz diazamancho ar binijen hag al labourou poanius, ne oufent ober ken nemet dont abenn da lacat lezel a gostez kement a ell e guirionez paea evit hor pec'hejou, kement pinijen a ell beza talvoudec evidomp.

Ra guitai ar pec'her hag an den difeiz an hentcho ma kerzent enho hag a gas d'ar maro, ra bellaint dioutho ho goaloulou, ha ra zistroint a greis calon ous Doue. Keuz er galon, hag evez oc'h kement a ell ober dezho coeza adarre, setu ar bez a dleont da gaout; red eo ouспен e c'houlouzent a volonte vad, *poan ha dicezant evit paea ho dizurziou tremenet.*

C'hui pere oc'h eus great disleadet ha kementse abalamour ma zeo stag ho calon oc'h an danvez ha ma oc'h eus aoun da zioueret netra; c'hui pere so ken troet oc'h plijadurezou an douar ma zoc'h bet sclapet gantho en dizurs; c'hui pere a zizec'h gant ar c'hoant d'en em zevel dreist ar re all; c'hui pere so trenket gant ar gassoni, crignet gant an avi, *distroit ous Doue a greiz ho calon. Kement so guir, kement so glan, kement so leal, kement so santel, setu ar peza dle beza en ho sonch.*

En em roit d'an œuvrou mad, d'ar beden, d'ar binijen, d'an aluzen.

Ar beden, o terc'hel ato mad d'ar feiz, d'an esperans ha d'ar garantez, a zao an ene hag he c'has bete'n env, hag ac'hano e teu en dro leun a ners hag a laouenidiguez. Ar iun a zalc'h ar vertuz en ene hag a gas kuit ar pec'hejou.

An Ilis e deus nebeut ha nebeut douseat kement ar iun, diminuet kement ar galetter anezhan, m'a n'ho deus mui hirio ar gristenien ar re dinersa, digarez ebet da gaout aoun razhan na da goll calon. Natur an den, troet etrezeg an droug dre ar pec'het, a gaf poanius al lezen-ze; poanius eo, ep mar, ha red mad eo e ve; rag enhi e tle beza ar c'heuz, ar c'hlae'har, ar gontrition eus hor pec'hejou, ha dre-ze ive an teac'h hag an diouer dioc'h plijadurezou, ebatou ha joausdet ar bed. Anez, evel on eus lavaret diaraog, ar c'horf epken a c'houlouze, ne ve eno nemet eun dra a zianvez ha ne dase ket beteg an ene. Mar cavomp re bounner gourc'hemennou an Ilis, mar disprijomp ar zourei a guemer ac'hanomp, *ma na fell ket deomp he anaout evit mam var an douar, arabat eo deomp sonjat or bezo Doue evit tad en envou.*

Ar beden, gant ar iun hag an aluzen hoc'h he heul, a dal hirroc'h evit an oll denzoriou. An aluzen a zioval an den oc'h ar maro, a efas he bec'hejou hag a ra dezhan caout trugarez. Ar c'homzou-ze eus an æl Raphael da Dobi a vere deomp penaus e c'hellimp diskuez ha guirion eo hor pinijen. Kentoc'h an den santel Tobi en doa desket d'he vap penaus *an nep en deus cals a dle rei cals, hag an nep en deus nebeut, a dle rei a galon vad eul loden eus an nebeut-ze.* Lavaret a rea c'hoas penaus *an aluzen a vir oc'h an ene da goeza en denvalijen.* Lavaret a reot marteze oc'h eus cargou aleis, hag eun tiad mad a dud da ziorren. Nemet muioc'h aze a izom n'oc'h eus ken da rei, eme Sant Cyprian, *evit tenna varnoc'h ha var ho pugale bennos an env.*

Mont a ra var gresc, eme c'hui, ar c'hestou, ar profou hag an doareou all da c'houlouen arc'hant, ha ne aller ket caout da rei dezho oll!

Ar re a goms evelse a dlefe da guenta en em lacat da c'hrosmolat o velet e za bemdez cals muioc'h c'hoas var gresc ar spectaclo, ar festou, ar baliou, an ebatou eleac'h ma caver tro-da ober dispignou ker bras evit an daol hag e dillad brao. Marteze e teufent da velet penaus, en eur lamet eul loden eus an dispignou foll-ze pere a rai cals a nec'hamant dezho en heur ho maro, e cafent cre hag æz peadra avoalc'h evit sicour oc'h an oll œu-

voud mad; e pere oc'h alfent kemeret pers.

Hervez an Abostol Sant Paul, an hini a ro an alen azo heaven oc'h al labourer douar pehini, pell dioc'h c'hoant e ve eur c'holl evithan an had a daol en douar, ar c'hemer evit eur gounit, dre an esper en deus epi dezhan eunneost puil. Var guementse e lavar da d' Corinth penaus *an hini a had nebeut, a costo nebeut, g an hini a dol cals had en douar, a zestumo ive cals eo.* Breppennad araog eus ar memes lizer, e veul carantez a dud fidel a Vacedoan: *Paour bras oant, emezhan, gouscoude int deut anezho ho unan da rei kement hag ellent ha zoken en tu all d'ar peza ellent, oc'h hor peza hag oc'h hon aspedi da receo ho aluzennou, ha d'ho lez da guemeret pers er guestou a reamp.* Compren a reat an gristenien vad-ze perag e tesk deomp ar Speret-Santel penaus an hini en deus truez oc'h ar paour a ro d'Zone, a ro nebeut evit caout cals. Ho pet sonch eo an œuvrou mad a vag ar feiz; *pa vanc an œuvrou mad d'ho madga, e tizec'h, pe kentoc'h, ez eo maro. J.-C. a ro he c'allas d'ar vuez feiz ne zougue nemet deliou, hag ar vuez feiz-ze a zizec'has beteg he griziou. Ar servicher lezreg'n en doa ket laket da dalout an talant fiziet enhan: a voue taolet er mæz en denvalijen, eleac'h ma vezo lenv ha scrign-dent.*

Ra deui calon pehini ac'hanomp da veza mantret gant eur guir glac'har; sonjomp a zevri peguer buhan e tremen ar spes eus ar bed-ma; peguer bresc eo ar madou so etre hon daouarn; greomp hor gallout evit digoll an amzer dremenet. Eleac'h en em lezel da veza tromplet gant speret ar bed pehini en deus collet he eunder en eur goll ar feiz, bezomp sentuz oc'h an ilis pehini a ro deomp *gourc'hemennou a vuez.* Lakeomp hor poan da dremen santelamant amzer ar C'horais evit ma roi Doue deomp madoberou nevez, ha ma kendalc'ho deomp ar re on doa bet kentoc'h digantha.

Divarben ar Cherais.

O terc'hel cont eus an niver bras a lizerou deut deomp e furn a beden, hag eus an uzachou kemeret en Escoptiou tosta deomp, ez omp en em glevet divar benn ar C'horais gant hor breudeur henorus ar Chalomet ha Chabistr ar Cathedral. Goude beza keza kemeret ho aliou, roet gantho en eun *deliberation* an 23 a viz guenver 1865, eleac'h ma c'halient ober ar peza on eus great, ez omp en em adresset d'ar Gador apostolic pehini epken e deus ar gallout da rei an *dispans general* a voa leac'h da c'houlouen. Hon tad santel ar Pap, dre eun *indult apostolic*, (eul lizer a c'hras), eus ar 26 a viz ebril 1865 en deus teurvezet rei an dispans-ze. An termeniou pe ar c'homzou a bere eo en em zervichet ar Pap evit he rei a vere eo roet deomp evit tri bloas, ha pa vezo tremenet an tri bloas-ze, e tleimp en em adressi adarre da Gador Sant Per. Lavaret a ra penaus an dispans-ze pa he roomp, ne roomp anezhi nemet evit eur bloas en hon Escopti, hag e tleimp he merca hag he nevezi bep Corais. Hervez comzou ar Pap, azalec ar sul kenta eus ar C'horais beteg ar meurs eus ar Sizun Santel (hag ive d'ar meurs-ze)

e vezo gallet dibri kik, da zul, meur a vech, ha d'al lun, d'ar meurs, ha d'ar iaou, da eur pred epken. Ne ro ket an otre da zibri kig ha pesked d'ar memes pred; ar merc'her, ar guener hag ar zadorn a so ato vijel. An Tad Santel a echu en eur lavaret e tle an dud fidel en em derri da ober aluzennou, hag an aluzennou-ze a dlevez beza implijet ganeomp-ni evit sicour ar re baour hag evit izomou all hon Escopti.

N'em eus ket izom da lavaret penaus an *indult-ze* eus ar Pap o veza eur c'hras, eur permission epken, pep hini a vezo libr da brofita anezhan pe da jom ep ober, da lavaret eo, da zibri kig en derveziou ma hier permet, pe da ober coraiz evel a reat kent.

DRE AR REZONIQU-ZE,

ON EUS GOURC'HEMENET HAG E COURC'HEMENNOMP:

ART. KENTA. — Gallet e vezo dibri kig azalec ar c'henta sul eus ar c'horais beteg ar meurs eus ar Sizun santel, hag ivez d'ar meurs-ze, d'ar zul, d'al lun, d'ar meurs ha d'ar iaou; d'ar zul, da veur a bred, ha d'an derveziou all, da eur pred epken. Ne dleer ket rei kig ha pesked d'ar memes pred.

EIL ART. — Gallet e vezo dibri amann, leaz ha fourmach epad ar c'horais oll, ha viou bete Dissul Bleu-niou, hag ive d'ar zul-ze.

TREDE ART. — Ar gossoret, aumonierien, personet, a ello ouспен, gant n'her graint ket en eur feson jeneral, discleria eo dispanset, ken eus ar iun, ken eus an derveziou all a vijel, ar re o defe eur rezon vad ben-nag da c'houlouen an dispans-ze.

PEVARE ART. — Ar permissionou hag an dispansouze ne dint roet nemet gant condition ma vezo roet eun aluzen evit œuvrou mad hon escopti. Ar gristenien fidel o devezo sonch e tleont, e plas ar peza ma tousaer evelse dezho al lezen, ober pinijennou all, rei skuer vad o veza aketus da vont d'an oll exercisou a relijion, o veza souciussoc'h da ober œuvrou a garantez.

PEMPET ART. — An aluzennou evit ar c'horais a vezo roet d'ar Bersonet, pe autramant tolet en eur c'hef a dlevez beza laket evit kementse e pep ilis eus hon escopti epad ar c'horais hed ha hed. Ar c'hef-ze a vezo scrifet varnezhan e lizerennou selear evit petra eo laket. An arc'hbeleien hag ar bersonet canton so pedet da lacat ho digas goude Pasc da zecretour hon escopti, evit ma ho lacamp da zervichout d'an œuvrou mad a vezo muia izom da ober.

C'HEUC'HVET ART. — Ar bastoret a ello comans Pasc eun nebeut kentoc'h evit an amzer merket gant an Ilis, hag hen asten eun nebeut goude; ne dleint ket gouscoude, e penn ebet, mont pell dious an amzer merket gant an Ilis.

Hag e vezo, ar mandamant-ma, lennet a vouez huel e pron an oferen bred ar zulvez goude ma vezo digouezet er parrezio.

Roet e Kemper, dindan hor sin ha siel hon armou;

ha sin secretour an escopti, an 10 a vis c'huevrer 1866.

† RENE,

Escop Kemper ha Leon.

DRE AN AOTROU'N ESCOP :

TEPHANY,

Chalon a honor, Secretour an Escopti.

Ar Retred brezouec evit ar merc'hed, e Kemper, hag a voa merket er bref da zigueri ar 7 a viz Ebrel kenta, a zo casset d'ar zadorn 12 a viz Mae.

Ar Retred-ze a dle beza anonset er pron, pemzec dez araog, da lavaret eo, d'ar zul 29 a viz Ebrel; eleac'h he anons ar 25 a vis Meurs evel m'eo merket er bref.

SANT-BRIEC. — Ad Aotrou David, Escop Sant-Briec, a zo, evel mac'h wezer, ghinidik euz ar ghear a Lyon. Missionner zoken eo bet enn-hi pell amzer. Lyon a zo ann eil kear euz a rouantelez Franz. Ann Aotrou'n Escop a oa eat da Lyon evit tremen eun nebeud dervezion e touez he gherent hag he vignoned. Skrivet so bet dezhan e oa digouezet ar c'hlenved-nevez enn he escopti. Kerkent en deuz kuiteat kerent ha mignoned, ha distroet buan da Sant-Briec. Arruet eo er ghear d'ann dregondved euz a viz ghenver. Ann deiz varlerc'h mintin mad eo eat da Vringolo, evit bisita an dud klanv tizet gand ar c'hlenved-nevez.

Bringolo, pares eus a ganton Kastelaudren, en em gav etre Guingamp ha Sant-Briec. Arruet eno gant ann Aotrou Ollier, he vikel-vraz, ez eont ho daou da velout ann oll dud klanv. Prokuli a reont d'ezho sikour ha konsolation a bep zeurt. O veza bet enn holl tier ma oa tud klanv enno, e teujont goude d'ann iliz pares. Ar pastor mad ha karantezuz-ze a lavar eno dirag eur bobl braz a dud dastumet enn iliz, pedennou enn enor d'ar Verch'hez Vari ha da Sant Rok, sant hag a ve pedet enn holl broiou, epad ar c'hlenvejou peguz. Goude-ze ann Aotrou'n Escop a ro aliou d'an holl, ken evit en em virout diouc'h ar c'hlenved, ken evit en em sikour ann eil eghile, ma teufent da chom clany. Araok ho c'huitaat, e lekeaz e kaloun ann holl kouraj ha fizianz. Assuri a ra d'ezho var lavar ha testi ar vidisined, e vihannea nerz ar c'hlenved hag e clanyal nebeutoc'h a dud.

BREST — Ann Aotrou Gazailhan a oa, n'euz ket pell, Eskop e Guened. Enn eur c'hlenved hirr ha poaniuz eo bet red d'ezhan dilezef he garg a Eskop. Pareet eo brema. Deuet eo da choum d'ar ghear a Vrest. Kerkent ha ma en deuz klevet lavaret e oa paket tud e Brest gant ar c'hlenved-nevez, en deuz skrivet al lizer-ma d'an Aotrou Lukaz, kenta belek euz a hospital ar porz-mor :

« Aotrou keaz,

« Klevout a rann lavaret eo digouezet e Brest ar c'hlenved-nevez. Pedomp eta ha pedomp stard hag a

goun evit ma vo pelleet diouzomp ha diouc'h hon b. En eunn hospital, evel hini Brest, ez euz bep kalz a dud klanv. Red eo noz ha deiz beza varz evit ho bizita ha selaou ho c'hoessionou. Da bep hir e ve galvet eur belek da rei d'ar re-hont pe dr re-ma ho sakramanchou diveza. O veza occupet el-se noz ha deiz, ho pezo, hep mar, ezomm a sour. Hoghen ouz piou kaout rekourz? Ouz ar velen all euz ar paresiou e kear? Daoust d'ho bolonz vad ha d'ho c'hoant d'en em zispign enn holl d'ann oll, ne d-int ket evit dont da sikour ac'han-hoc'h. ez' ho devezo ho-unan labour dreist-penn gant ho rressianis. P'eo guir eta e vezo labour evit ann oll, me zeu d'en em ghiniga dehoc'h. Dibreder ounn. Diskarg ounn brema euz a bep sourci braz. Joa vraz m be o konsoli, o kelenn, o koess hag o sakramanti ann dud klanv. Na oufen ket ober eun implij guelloc'h euz an amzer am euz evit diskuiza. En em servichit eta ac'hanoun. Aotreit d'in mont d'ho sikour. Eun enor a vezo evidoun, ha me Escop, beza eur pennad amzer eil belek hospital ar porz-mor, hag evit guir, eunn Eskop hag eur Belek na hellont dezirout netra guelloc'h eghet koll ho iec'hed, ho buez zoken o soulaji tud klanv har o savetei eneo. »

Le Sidaigir 57

M. D.

Rom. — Pep bloaz ha da bep couls euz ar bloaz e veler e Rom tud a bep bro hag a bell bro. — Dont a ra di tud euz an America, euz an Asia, euz an Africa; mes dreist holl, euz an Europa hag euz pep corn anezhi; euz ar Russi, euz an Alemagn, euz an Autrich, euz a Vro-Zaoz, euz a Frans, ha couls lavaret, euz a holl escoptiou Frans. — Coulscoude ar voure'hisien euz a Rom a lavar hag a scriv en ho gazetennou, n'euz bet biscoaz guellet muioch a dud o tont da Rom eguet en amzer-man. — Seulvui m'edo enkrezet an Tad Santel gant lod euz he vugale, seul aketusoc'h aze en em ziskouez he vugale vad da zont d'her saludi ha d'her c'honsoli en he enkreziou. — Calz a draou a zo da velout ha da vizita er gear a Rom. — Tachennou hir ha ledan, palesiou huel, gant mogueriou ha prenestou kizellet, monumanchou a bep seurt, taolennou iskiz, statuou euz an dibab; eun niver braz a ilizou hag euz ar re gaera ha pinvidica, coulscoude ne ket evit kement-se holl, ez a an darnvuia euz an dud da Rom.

Evit petra eta ez-eont-hi? Evit caout ar gonsolation da velet ar Pab, d'en em strinka d'he dreid ha da receo he venediction. — Hag evit guir, pa erru er gear unan bennag, bet e Rom, ar c'henta tra a ve goulennet digant-han eo: ha guellet hoc'h eus-hu hon Tad Santel ar Pab? — Mar teu da respont: salocraz, n'am euz ket guellet anezhan. — Penaoz? Bet oc'h e Rom, ha n'hoc'h euz ket guellet ar Pab! — Eunn all er c'hontrol, mar hell lavaret: ia, bet ounn e Rom, hag am euz guellet eur veach, diou veach hon Tad Santel ar Pab. — An holl a zo laouen oc'h her selaou. — Hag hen d'en em lakaat neuze da ziscleria ar blijadur en deuz bet oc'h he velet;

pep en tenezet oa he galon pa en deuz en em gavet ken tost d'ezhan, poket d'he dreid, recevet digant-han eur vedalen eunn imaj, pe eun dra bennag all, pa en deuz herc'h klevet o komz pe o prezeg en eun iliz. Rag hon Tad Santel ar Pab en deuz ar vadelez da zigueri ha da selaou an holl braz ha bihan, paour ha pinvidik. Kement enna gouez euz he c'hinou a zo silaouet ha skrivet doun er c'halonou. Ar re ho deuz bet an eur-vad d'her guelout ha d'her c'blevout, n'ankounac'hont morse ar pezh ho deuz guellet neuze ha klevet.

N'ez ket pell, hon Tad Santel ar Pab, hervez he custum mad, en em ziskouez d'an dud deuet evit her guellet hag her saludi. — Keid ha ma oa an holl daoulinet d'ezhan evit reseo he venediction, e teu souden diou dimezel-gusket ha fichet caer, d'en em strinka d'he dreid ha d'ho glebia gant ho daerou. An Tad Santel a lavar d'ezho sevel. — Na savont ket. — Choum a reont daoulinet, o tiskouez ar c'hlaer ar vrassa. An Tad Santel o veza tenezet he galon oc'h ho guelout ken ankennet, a lavar d'ezho: — Va bugale, ha perag' ta emedoc'h-hu ken glac'haret? — Tad Santel, a respont: Ni zo protestantezed, hag hor bese c'hoant da veza catholikezed. — Ama, eme ar Pab, perak na veac'h ket p'ouren difenn ouz-hoc'h? — Hor mam, emez-ho. — Mam an demezelled-ze en em zalc'he en he zao eun nebeud pelloc'h. — He drem a oa deread mes eun nebeud garo. Oc'h he guelout an Tad Santel a seblantaz skilla hag en em droubli, evel hor Salver e kichen bez Lazar. Goude-ze o sevel he vouez, e lavar d'ar vam: Itroun en hano Jezuz-Krist euz a behini e talc'han al leac'h var an douar: goulenni a ran diganeoc'h an diou verch'ha. Da Jezuz e oant araok beza d'ehoc'h. — Guelet ho deuz ar sklerijen. — Divallit d'en em lakaat etrez-ho hag ar sklerijen-ze gant aoun na helfac'h ket he guelout hoc'h-unan. — Ar vam hag an diou verch'ha vezo hep pell recevet en iliz catholic. M. D.

Le Sidaigir 57

AR C'HOLERA E BREST.

Lizer eur Martolod iac'hanne d'he Vamm.

Va Mam guer,

Clevet oc'h eus, a dra-zur, ez eus deut da Vrest eun aotrou ag a zo c'houez fall gantan, hanvet colera. Mes matreze n'ouzo'h ket mad pe seurd distruch hen deus greden-hon touez. Rag, eguis ma lennit ar gazeten *Feiz ha Breiz*, oc'h eus mechaus guellet ar c'homzou-ma var ganta seillen an hini deut da zivea: « e Brest ez eus taguet unan benag gant ar c'holera; mes ne ra ket a zistruch.

Evit sur, an hini an eus skrivet ar c'homzou-ze, ne voar ket an distruch en euz gret aman ar c'hlenvet, pe da viana, n'eus ket c'hoant gantan lavaret ar virionez. Guir eo ne ket ato mad lavaret ar virionez pen-da-ben, ispisial pa gomzer eus eur c'hlenvet quen distruch,

gant aoun da lacat re a spont hag a anken etonez an dud. Mes eguis me zeo breman tec'het cuit diouzomp, a drugare Doue, hag eguis ma credan ne viot mui nec'het gant ho mab muia caret, ato iac'h-pesq ha lard-pill, ez an da lavaret deoc'h ar pezh a zo guir var ben an distruch an eus gret ar c'holera e Brest.

Unan benag a zo bet taguet gant ar c'holera, a lavar ar gazeten. — Unan benag a zo brao da glevet! Mes siouas! evit lavaret guir, ez eo red lavaret meur a gant. — A zo bet taguet. — Ia, ha goal dagnet zoken; rag ar c'holera a zo eun tamic goassoc'h eguet eur blei pe eur c'hi-boser, he skilfou a zo goal vilimus, ha ne ket brao en em denna a zian he grabanou. Eur vech croguet mad ar c'holera en eun den, ez eo coulz dezan ober he zonz ha sina mad he baperiou evit ar bed-all; rag riscus-bras e ranco lipat he loa. Dec pe zaouzec heur a zo avoalc'h evit her scuba.

Hervez ma leverer, e pares Sant Lois ez eus bet dec enterrant a nao ugent en eur mis; betec c'houezec a zo bet eun devez; tregont benag anezo a hell beza maro gant clenvejou all. — E pares Carmes, elec'h maz eus ouспен eun nanter neubetoc'h a dud eguet e Sant-Lois, ez eus maro gouscoude vardro c'houec'h ugent, ha lakeomp da viana dec a pevar ugent gant ar c'holera. — En hospitaliou ez eus bet ive calz distruch. — Ouspen-ze, pareziou Sant-Martin ha Recouvrans an eus collet c'hoas peadra a dud.

Truezus ha spontus e voa guellet betec dec ha tri-ugent corf maro o vont er memes devez varzu an douar benniguet. Clevet a meus ez eus eat e gueret Brest, e pad ar mis tremenet, var dro pemp cant den, etre bras ha bian.

Beleien pareziou Brest, coulz hag ar vidisinet, an eus gret mad ho dever. Poaniet ho deus oll var dro ar re glan, evel soudardet calonnec var dachen ar brezel. Brud vad a zo anezo dre bevar c'horn gear; hag hervez an doare outo, ne dint ket potret aounic. Epad an teir zizun ma zeo bet didruez ar c'hlenvet, n'ho deus ket bet calz amzer dic'han. Nos-de a vije ar zac'h var guein unan benag. Avechou zoken a vije guellet tri, pevar, pemp en hent er memes amzer.

Mar deus eat calz corfou d'ar veret, ez eus eat ive calz eneo d'ar barados. Rag clevet am eus gant eur mignon beleg ez eo maro an dud keas-ze gant keuz ha glac'har d'ho fec'hejou, goude beza recevet ho zacramanchou, leun a feiz, a fianz hag a garantez evit Doue.

An Aotrou'n Escop, tad muia caret Breizis-Izel, a zo plijet gantan dont betec enno epad ar c'hlenvet evit rei deomp he vennos. Lavaret a zo dign hen deus gret plijadur vras da Aotrou Person Sant Lois, o tisken en he dy, epad ma zeo chomet e Brest. Joaüded a voa e caloun mest ar bares o tiguemer mest an Escopti. Diou vech eo pignet an Aotrou'n Escop er memez sulves e cadour-brezeg Ilis Sant Lois; digouet eo dign beza en oferen-bred hag er gousperou ar zulfes-se, ha plijadur am eus bet o clevet ar Pastor mad o lavaret d'he zenvet calz comzou a galon, comzou a garantez hag a denneri-

diguez, evit halia an oll da lacat ho fianz e Jesus-Christ hag en he Vam benniguet. Eat eo ive da velet ar glanvourien d'an hospitaliou, ha gret hen deus an dro d'ar c'hampou, en eur rei he vennos da bephini.

Setu aze, va mam guer, ar pezh am aoue c'hoant da lavaret deoc'h divar ben ar c'holera. Eur c'hlenvet eo a ne ket brao caout affer oontan. Mes arabat eo caout aoun; rag ar guella tra da ober, evit dioual mad oontan, ez eo beza diaoun ha dinec'h. Ar grenerien a bac aneann da guentant.

Kenavo eta, va mam vad; ato fianz e Doue hag er Verc'hez; n'ho pezit aoun ebet rag ar c'holera; ha lavaromp breman eur *Bater* hag eun *De profundis* evit an oll dud distrujet gantan....

« Roit ar reposvan eternal,
« Va Doue, d'an anaoun fidel;
« Tostait oontan ar sclerijen,
« Evit m'ho cielo da virviken. »

Evelse bezet gret.

Ho mab muia caret, PERIC AR BRETON.

Brest, d'ar bemp a viz fevrier 1866.

AR FALS DOCTORET HAG HO LAVARIOU.

XXII.

- N'em beuz ket amzer da zonjal em silvidiguez.
- Amzer o peuz da zibri bouet?
- Me oar kemeret.
- Ha perac e tebrit?
- Selaou? Evit chom beo, ar bouet eo buez ar c'horf.
- Pehini a dal muya? Pe oc'h ene, pe ho corf?
- Silaou adarre; va ene, petra-ta.
- Grit eta evit oc'h ene da viana ar pezh a rit evit ho corf.

Caout, kemeret a rit, amzer da zerc'hel ho corf beo, ha ne gavit ket a amzer da zerc'hel oc'h ene!

Me garfe guelet ho mestr o tont da lavaret deoc'h da vare ar pret, ne royo ket deoc'h a amzer da zibri. C'houi a oese lavaret dezhan: chomit eb tam mar kirit, evidon me zo o vont d'am lein. Da guenta eo ret beva.

Ha me a lavar deoc'h ive: Da guenta, araoc buez ar c'horf, ema buez an ene, da guenta dalc'hit an ene-ze beo. Oc'h ene eo al loden vella ac'hanoc'h. Hoc'h ene eo a laca ac'hanoc'h da veza eun den; anez oc'h ene e vizac'h henvel oc'h al loenet all.

Ar relijion eo a vag an ene, eo he dalc'h beo, hag e livirit n'ho peuz ket amzer d'he heulia. Kemerit an amzer-ze n'eus fors e pelleac'h, n'eus fors gant piou e viot, n'eus fors peguement a goust deoc'h. Den na hell miret ouzoc'h d'he guemeret, nag ho mestr, nag ho tad, nag ho mam.

Den na hell miret ouzoc'h da zavetei oc'h ene; ha ma felfe da unan benac en ober, lavarit dezhan evel an

ebestel, guechall: me a zo guelloc'h ganeen senti ous Doue evit ous an dud.

Mez, eme c'houi, va micher a vir ouzin da labourat evit va zilvidiguez.

Tolit evez mad, ha m'ar de gouir ar pes a livirit, list eno ho micher ha kemerit eun all. Ar vuez ma zo ber, mez ar vuez all a bado atao; da betra e talfe deoc'h gounit ar bed-ma holl, ma teuit da goll oc'h ene?

Mez lavarit ar virionez, ha gouir eo ne hellit ket en em zavetei, beza gouir gristen en ho micher?

Hag ho micher eo a vir ouzoc'h d'ober eun tam peden d'eus ar mintin ha d'euz an nos? Hag ho micher eo a vir ouzoc'h da zével, eur vech an amzer, ho calon hag ho speret var zu Doue, da guinic dezhan ho labourou hag ho poaniou? Hag ho micher eo ho laca da charneal, da douet Doue, da vevi, d'ober falloniou, da zrougprezeg, da ober gaou oc'h ho nesa? An amzer a dremenit oc'h ober an traou-ze, a ve cant guech re anezhan evit ober ac'hanoc'h eur c'hristen mad, ma carfac'h he implija evit savetei oc'h ene. Ne ket ho micher kennebeut a vir ouzoc'h da vont eur vech an amzer da gaout eur belec, da c'houlou diganthen ar pardon d'eus ho pec'hejou, eur c'huzul mad bennac, hag eun tamic ners evit beva guelloc'h en amzer da zont.

Evit ober ar zilvidiguez e caver atao amzer; ia pa ves c'hoant avoalc'h; mez ret eo caout c'hoant.

Ne livirit ken eta: n'em beus ket a amzer da veva e gouir gristen, eur gaou a lavarfac'h. Livirit, mar kirit n'em beuz ket kement a amzer hag am be c'hoant.

Ha neuze ne ket ret caout cals a amzer evit caret Doue, tec'het d'euz ar pec'het, caout keus d'eus ar pec'hejou. Ne ket ret caout kementse a amzer evit lavaret eun tam pedennou bemdez, mont d'an oferen bep sul, ha mont da govez pedir pe bemp guech ar bloaz.

Bez a zeuz re-all hag a ra an traou-ze holl ha cals c'hoas gantho; me a anavez a ne dremenont morse eur miz eb mont da govez ha da gommunia, ha n'int ket falloc'h tyeyen evit an dra-ze. Penaos a reont? Poania; poagnit eveltho, hag eveltho e vevot e gouir gristenien, hag evelthoez eo t d'ar barados elleac'h mont d'an ifern.

An neb ne royo ket da Zoue he amzer, n'en do ket diganthen he varados. Y. P.

ALUZEN AR BARS.

Var don: *Kimiad ar Zoudard yaouano.*

Ar bars evit pep unan en deus guerz ha peden: Ma cav eun den ankeniet en deus ivez anken, Pa vel eun all o ouela e ranc scuilla daelou, D'an nep a huanado e ro huanadou.

Mes petra dalfe dezan anaout ar vuez, Gout guelloc'h eguet nicun pelec'h eus berrentez,

DISSADORN 24. — Cotuerou. Sant Mathias, abostol.

DISSUL 25. — Eil sul eus ar c'horais. An aviel hirio.

Jesus a guemeraz Per, Jakez ha ian he vreur, hag ho c'hassas a gostez var eur menez huel. Hag en em drans-figuras, da lavaret eo, e chenchas henvediguez dirazho. He vizach a zeuas da veza skedus evel an heol, hag he viscamant guenn evel an erc'h. Ha setu hi o velet Moizes hag Elias o coms ous Jesus.

Per a guemeraz ar goms, hag a lavaraz da Jesus: Aotrou, mad eo deomp beza ama. Mar kirit, ni savo ama teir dinel, unan evidoc'h, unan evit Moizes, hag eun all evit Elias. N'en doa ket echuet he goms, na vouent goloet gant eur goabren skedus; hag eus ar goabren e teuas eur vouez hag a lavaraz: Hema eo va map muia caret; va oll joausdet am eus laket enhan; silaouit-hen.

An diskibien o clevet kemense a goezas d'an douar var ho guinou, hag o devoe aoun bras.

Jesus a dosteas hag a douchas outho en eur lavaret; savit, ha n'ho pet ket aoun.

Sevel a rejont neuze ho daoulagad, ha ne veljont mui nemet Jesus he unan en he stad kent.

Pa edont o tisken divar ar menez, Jesus a roas dezho ar gourc'hemen-ma: Na livirit da zen ar pezh oc'h eus guelet ken a vezo savet map an den eus a varo da veo.

S. VAZE XVII. 4. G. M.

KELEIER.

E Caen en Normandi, ar c'holera en deuz samet kals muioch a vecherien eghet ar re all. Eur gazeten euz ar ghear-se a lavar ne ket souez, ha ne-deuz ket a gliemou avoalc'h a enep an digor lezet gant inien-nou da gontammi ho nesa. Oberourien ha guerzerien evach, setu ar vuntrerien a damall. Dies eo komprenn, em'hizi, pe seurt doare loudouriach a gaver en toullou tavarnou-se e pere cals a zispign ho iec'het gant ho danvez. Ar guin-ardant a glasker enho, n'e ouffe ket beza falloc'h hag e ve great gant Lucifer he-unan e kaoter vras an ivern. Kaoteriou ker goloet a lousdouni a zervich d'hen ober. Ouspenn an daou-fars anezhan a zo koz marc'hadourez anvet e gallec *trois-six*, abalamour, a gredfen, m'eo gwest da zevi teir gueach, c'hueach, pe drivac'h gueach cornailen ar c'hrenfa aneval. He zenna a rear peur-liessa euz a veterabez goasket ha silet. An nemorant all euz ar pezh a ra an evac'h ken karet gant ar vecherien, ne ket ker garo d'ar c'hourlanthen. Red eo mouga eun nebeudic nerz an tan, ha setu perac e kemesker an dour *bete* gant dour all e pini e taoler *the* ha *caramel* da rei liou melen. An *the* hac ar *caramel-ze* a goust var dro eur guennec, hag an dour *bete* var dro eiz guennec dre litrat. Ne d'eo ket ker ar c'hontamm; hoghen n'eo ket iac'hussoc'h da eva. Evit guelet pe seurt distroj a ra en ho stomoc, n'hoch euz nemet

Ma ma hell nemet cana ha kennig domp bepret An o huez ous che vokedou ep tam bara ebet?

A pa ve eun pezh gant he vouez dudius, O cana d'an den naonec, n'her rento ket nerzus. Ag a oalc'h ead ar paour e creis he vrassa poan An alizon a galon; ar c'haerra bomou can?...

Ne ket avoalc'h, breur keaz, rac en da zienez Er bed-ma oc'h eus isom ha sicour ha truez, Eus a zavez c'leis ma pefe eul loden D'haec'h beza glac'haet te ve guelet iaouen.

Gant ma pezh peadra da veva en da aes, Ma hellit ep nec'hamant caout da vara bemdes, N'ec'h eus ket isom muyoc'h, te vezo dibreder, Ne anavezi morse blasphem na disesper.

Brao bras oc'h anavezan isomou da vuez. — Perac n'am eus-me galloud da rei eun tam danvez? Mes dre ma cressk em c'halon ar c'hoant da rei eun dra Ne gavan nemet guerziou;... n'ouzon nemet cana!

Nan, n'ouzon nemet cana, mes gant va c'hanaouen A-ne p'alen ket guelloc'h eguet gant aour melen? Ma tescan d'id dre be du cass ar boan diouzid M'ouc'h eguet eun teizor am bezo roet d'id.

Gant esperans oar seder; selaou ar bars ervad: An Doue oll galloudec ouzomp a daul pled mad; Betez he bon ankeniou e par he vadelez. Dre a hoan e teuomp purroc'h, vel an aour er fournez.

Hon Doue a zo ker mad na velomp dre'r bed-ma Nemet he vadoberou laket ker brao ganta, Bez e dar peb disterra eus he graonadurien. Mouez a ro d'al labous ha frouez d'ar vezen.

Da bep touzaonen bemnos e ro glizen an Ee A v'lar paterennet er boket d'ar beure; He c'hilao a dremp an doar, an eol hen toma, Dreizho e sao an eost, dreizho e velenna.

He zro a vere d'al loar, hac ho hent d'ar stered. Diuna ra an eol, hac er c'hass da gousket. Dhe zro e ro peb amzer; he zorn a zalc'h peb tra, Goal avel eun spontus couls hac ar mor goassa.

R.

Hano ar Zent evit ar Sizun-ma.

DIMEUN 19. — Sant Julian, Escop

DIMEUN 20. — Santez Martina, guerc'hez ha merzerez.

DIMERC'HER 21. — Cotuerou. Sant Gildas, abad.

DIZIQU 22. — Cadon Sant Per en Antioch.

DINGENER 23. — Cotuerou. Lans ha tachou hor Zalver.

trouc'ha eur bastel kig bevin kris ha skuill varn'hi eur banne. Dizale e veloc'h ar c'hic o venna; hoghen ne venn nemet abalamour m'eo devet.

Kement-ze a c'hoarvez ivez er stomogou : devet e vezont a neubeut da neubeut. Eur veach, eme an ini a scriv e gazetenn Caen, e velis digheri corf eur mecher; he stomoc a ioa suillet, ha crial a rea dindan cizaill ar medecin, evel ma vije ket eun tam ler roset. Eaz eo neuze koumpren e c'helfe eur c'hlenvet hag a grog dreist oll er stomogou hag er boezellou, beza goassoc'h d'ar re a ev kement a vin a dan. Setu perac, evit mad ho corf, kouls hag evit hini oc'h ene, e pedimp ac'hanoc'h da lezel an evach traitour-se. Eur banne guin, pe eur banne bier, pe zoken eur banne chist, gant na vezo ket great a govadou, a zo kals guelfoc'h da derri ar sec'het. X.

Laval. — En escopti Laval ez eus eur Chapel en honor d'an Itron Varia ar Salet, hag eno e tigouez cals burzudou. Setu ama unan erruet nevez-ze. Eur seurez venn a Evron a voa casset gant ar c'hlenvet bete dor ar maro. Collet e doa he ners oll ha zoken ar vouez. Ar vedecinet o doa collet ho foan var he zro. He zeod a zirente. Ar plac'h paour a voa goloet a balastrou, hag abaoue pemp sizun n'oa ket savet divar he guele. O veza clevet lenn eur gazetenn eleac'h ma comzet eus a eun den pareet dre vuzud, e pedas he c'hoarezet da ober evithi eun navet en Itron Varia ar Salet. Epad an nao dervez, ar glanvouez a ieas falla oc'h falla. D'ar zul kenta an Asvent e voue roet ar gommunion dezi abred, hag e voue lavaret an oferen evithi. Kerkent en em gavas pare. Edon er gador gofez, eme berson ar bareze, pa deuas ar vam superioez da skei var va dor, ha da lavaret din en eur c'hoarzin, en eur lenva : « Ar c'hoar M.... so pare. Coms a ra cre; lavaret a ra e fell dezhi sevel ha dont d'an oferen. » — « Mad, eme ve, list-hi da drugarecat Doue; ne oufe morse he drugarecat avoalc'h nag hi, na ni kennebeut. »

Ar c'hoar M.... a zavas, a glevas an oferen; ha goude creiseiz e teuas d'ar gousperou ep beza scuiz. He oll balastrou ha mouchou a voa distaguet, sec'het, ha ne jome cleizen ebet var ho lere'h. Antronoz ez eas he unan da chapel Itron Varia ar Salet da drugarecat ar Verc'hez. G. M.

Epad un nec miz eus ar bloaz 1865 ez eus casset euz a Frans da Vrozaoz 19,250 ejen, 3,045 bioc'h; 3,283 leue, 30,338 danvad, 52,857 pen-moc'h, 597,420 pen-ier hag ouidi : an anter tost muioc'h evit a iea kent.

Eat euz ive. er bloas diveza, cals muioc'h a ed da Vrozaos eus a Frans evit na dea er bloaveziou all. Eat ez eus eur milion 632 poezellat viniz (quintaux), 28,644 poezellat segal, 711,173 poezellat eiz, eur milion 214,896 poezellat bleut.

Setu ama petra so erruet a valeurion pe a accidantchou var an hentchou houarn e Frans epad ar

bloas 1865. Pemp beacher ha seiz eus ar re a labour var dro ar c'hirri tan o deus collet ho buez; 80 beacher hag 91 a botret a c'hirri tan so bet gloazet. Mar zonzjer ez eus eat dre an hentchou houarn 71 milion a veachourien, e veler n'en deus collet he vuez nemet eur beacher dre bemzeg milion. Ar pezo zo sur nebeut a dra. G. M.

E Escopti Sant-Briec e vezo teir retret brezounec epad ar C'horaiz-ma.

Ar guenta, evit ar baotred, d'an 18 a viz c'houevrer, er Gouent-Nevez e Lannion.

An eil, evit ar baotred, d'ar 25 a viz c'houevrer, pe an eil sul euz ar C'horaiz e couent Seurezed-ar-Groas, e Landreguer.

An deirved, evit ar merc'hed, d'ar 4 euz a viz meurs, er Gouent-Nevez, e Lanion. M. D.

HENT HOUARN.

Da be heur e tiblas hng e tigouez ar c'hirri tan epad ar goan.

O VONT A GASTELLIN VARZU NAONET.

Table with 7 columns: kenta trein, eil trein, trede trein, 1° cl. e paer, 2° cl. e paer, 3° cl. e paer, and rows for Castellin, Kemperle, Lorient, Redon, Savene, Naonet.

O TONT EUS AN NAONET VARZU CASTELLIN.

Table with 4 columns: kenta trein, eil trein, trede trein, and rows for Naonet, Savene, Redon, Lorient, Kemperle, Kemper, Castellin.

PRIS AN ED.

Table with 2 columns: KEMPER and PONT NABAT, listing prices for Guinis, Segal, Eiz, Ed-du, Kerc'h, and Avalou-douar.

Ar Gerant : AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand AR. DE KERANGAL, Mouler an Escopti.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezounec.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten a goust :

Table listing subscription rates for different regions: Evit eur bloas, Evit c'huoc'h miz, Evit tri miz, Eur gazetenn ebken.

Ar bacamant a dle beza great araog caout ar gazetenn.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazetenn a dleer da adressi oll d'an Autrou MORVAN, Belec e Kemper.

Ar pacamanehou a dleer da adressi d'an Autrou SALAUN, ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Autrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

E Rom, muioc'h evit e leac'h all ebet, e ra an ilis he gallout evit miret oc'h ar gristenien fidel da lenn levriou fall ha lacat etre ho daouarn levriou mad. Varlene oa savet eno eur vreuriezh evit kementse, hag ar re so er vreuriezh-ze a ra cals vad. Kemeret o deus ar Verc'hez evit kenta patronez, ha sant Paul evit eil patron. Ar Pap a ro aleiz a c'hrasou d'ar vreuriezh-ze. E pep leac'h e tle an oll dional oc'h al levriou hag ar scridou fall pere n'int mad nemet da deleur breinadurez e calon an den, ha d'he lacat da goll ar feiz.

An dud fidel o deus kement a fiziais hirio e pedennou an Tad santel, ma credont eo avoalc'h caout he venediction evit receo digant Doue ar pezo o deus c'hoant, ha Doue a ra avechou burzudou evit recompansi ar re o deus feiz evelse. N'eus ket pell, eun den clan, toc'hor, goude beza recevet he Zoue, epad ma edo ar beleg oc'h he zicour da drugarecat an Doue mad a voa diskennet en he galon, pa voa digouezet gant ar beden a ver peur liessa evit hon Tad Santel ar Pap, a zavas he vouez, ha leun a fiziais, e lavaras : « Tad Santel, ato em eus bet sonch ac'hanoc'h em fedennou dister. C'hui pehini oc'h eus bet kement a c'hrasou digant Doue evit tud clan, grit din-me ive caout digantha ar iec'het. » Fallout a reas dezhan neuze caout imach Pii nao, hag e pocas dezhan calonec. Goulen a reas caout benediction ar Pap. Scrifet e voue dre an telegraf, hag a benn c'huoc'h heur amzer e teuas ar respont. Pii nao a lavare e roe a greis calon ar venediction a c'houlennet outhan evit an den clan. Kerkent ar c'hlanvour a eanas da deleur goad, ar pez a rea eun nebeut a voa, ha brema eo pare mad. An oll, e c'hellit cridi, o deus rentet meuleudi da Zoue ha d'ar Pap evit eur pare ken trum hag a esperet ken nebeut. Tennet eus ar gazetenn Stendado.

Hon Tad Santel ar Pap, pehini, evel a voar an oll, a so er baourentez, ne ell ket miret gouscoude da gas eur zicour bennag d'ar gristenien en em gaf en dienez, e pe gorn bennag eus ar bed e vent. Roet en deus er sizun-

vezion-ma mil lur evit an dud reuzeudic eus ar Goadeloup, en eur verca dezo he c'hlae'har dre na elle ket rei d'he vugale, en ho izom, eun testeni brassoc'h eus he garantez a dad evitho.

Al levriou fall a gresc an niver anezo bemdez, hag evelse en deus pep unan muioc'h evit biscoas a izom da lacat evez pe seurt levriou a lenno. Eun den a speret a lavare en dez all divar benn unan eus al levriou-ze nevez moulet, ha falloc'h c'hoas, red ha ma ve, evit ar re all : « Me a grede n'oa nemet map Doue hag a vije en em c'hreat den, mes abaoue m'am eus lennet al levreze, em eus c'hoant da gridi eo en em c'hreat den an droug speret ive dindan furm ar scrifagner en deus her great evit coll an eneo. »

Setu ama hag a ziskuez petra eller da c'hortoz digant an dispac'herien pere a ra freuz e pep leac'h, ha dreist oll en Itali eleac'h ma zint pe ma credont beza mistri. E Livourn, e couent an tadou Minoret ez oa eur servicher hag a deuas ar maro dezhan. An den-ze a voa eur c'hristen mad, hag a leze var he lere'h eun intanvez ha pevar map, a bere ar c'hessa a voa soudart hag an diveza c'hoas bian. An tadou a guemeras an eil hag an trede eus ar pevar map-se evit del'cher plas ho zad. Mes an daou botr iaouane-ze a voa dizuch, ha caer a voa ho c'helen ha rei dezho alio mad, ne allet ket dont abenn anezho. Lacat a reant freuz ha dispac'h er gouent, ha red e voue ho lacat er mæz. Gouscoude an tadou, dre droug oc'h an intanvez hag oc'h he map bihana, a roe dezo dec lur ha triguent eiz guennec er miz.

An œuvr a drugarez-ze eus an Tadou a voue diskuezet anaondeguez vad evithi en doare-ma. Eur mintinvez an daou ganfart hag ho breur cossa ar zoudart a ieas d'ar gouent. En em lacat a rejont da gana pouil d'ar venac'h ha da loskeur leoudouet evel droug sperejou. Goudeze e tigorjont dre ners dor cambr an tad gardien. En em stleja a rejont varnezhan, he ganna hag he

e'houlia kement, ma zeo sur ne jomo ket beo. Red eo bet rei dezhan he reiziou buana ma c'hellet. Kerkent ha ma voa lazet an tad gardien, ar c'belou so eat dre guær, hag ez eus deut da guichen ar gouent eur vanden lamponet goloet a druillou, eur scrij ho guele. En em laket int da grial, da sutal, da loskeur leoudouet gant ar fougue a voa enho dre ma voa lazet an tad; ha gour-drous a reant c'hoas laza an tadou all, distruja oll ha lacat an tan er gouent. Setu aze oberou caer an dispac'h-erien.

Leun a rer e Cazeten ar Meziou : Bete vrema, an ed en douar a so caer; druz int ha doareet mad. Aoun o deus gouscoude cals na rafent ho c'hresk re abred, ha na deufe scorn pe reo divezad er bloas d'ho distruja pe da viana da ober droug dezho. Aoun a zo ive na ve guelet divezatoc'h prevet, c'huilet hag a bep seurt loenedigou munut o sevel a vilionou hag o tibri oll froueziou an douar. Evel m'eo bet tom an han, e tle beza anezo ep niver en douarou, hag evel n'eus ket bet a c'hoan avoalc'h d'ho laza, ec'h elfent dont en nevez amzer-ma da ober distruch e pep leac'h. Departamanchou so eleac'h m'en deus ar prefet ordrenet tenna ar *chenillet* dioc'h ar guez araog ma savo ar bourjonou; rag ma vent lezet e crignsent ar bourjonou dre ma safent ha ne-ve na bleun na frouez.

Er memes cazeten e cavomp eul lizer e pehini eul labourer a Vreiz a goms evelen : « Eun dra a vanc c'hoas d'al labourerien vian, da lavaret eo, d'ar re o deus merouriou pe fermiou bihan, hag ar re-ma so bras an niver anezo e Frans. Ouspen an anter eus al labourerien douar ne ket bras ho merouriou. Me garje guelet sevel merouriou scol a uguent pe dregont devez arat epken, e pep seurt douarou, ha ne vije ket izom ouспен tri pe bevar mil lur evit ho fonta, hag a ranfe en em zalc'her divar ho c'houst ho unan. Eno, a gredan, ec'h alfe al labourerien vian ma comzan anezho, caout skuer ha kenteliou hag a alfe servichout dezho. Pa za ar verourien vian-ma da zellet oc'h merouriou scol bras, ne deont nemet dre guriozite. Caer e cavont ar pez a velont, mes ne glascont ket ober ar pez o deuz guelet, ha n'o deus ket ken nebeut a beadra d'hen ober. Evelse ec'h erru ma za an dieien vras var araog, hag an dieien vian a jom ato e vel vel, ma na deuont ket zoken adren.

Labourat a rer a greo var chapel nevez Santez Anna Venet. An danvez so charreet cals anezo, hag ar mo-gueriou so dija a rez an douar. An hini en deus ar marc'had eus an tam labour-ze en deus tri bloas evit he ober. Mes cridi a rer e vezo echu cals kentoc'h.

(Conteur Breton.)

An Aotrou Guillerm, person e Lanneanou, so hanvet person e Santoz.

An Aotrou Broc'h, vikel e Lannilis, so hanvet person e Lanneanou.

An Aotrou Morvan, vikel e Ploumouguer, so hanvet person er Forest-Fouesnant.

An Aotrou Jacq, vikel e Santoz, so hanvet vikel e Ploumouguer.

Dissadorn 3 Meurs, retred brezouec evit ar voazet e Kemper. G. M.

BUEZ MARI-AMIS PICART.

(EIL PENNAD.)

Pep tra e buez ar plac'hig fur-ma a ziscoueze pe-guement e casea ar bed hag he blijaduresiou. Morse ne veze cavet e touez an ebatoù nag ar c'hoariou. Ma vije deread d'ezi mont da eun eured bennag, ec'h heulie an dud nevez d'an ilis, mes hep kemeret perz ebed en dansou nag en direolamanchou a veleur peur-voia er fricojou. Aketuz en hê labour, he oll diver-amzer oa mont d'an ilizou divar dro da glevet comsiou Doue, pe goms euz a draou an env gant tud guiziec ha vertuzuz. Kemeret a reaz evid he c'hovesour eun den sclerijennet braz, au Aotrou Guillerm, persoun Guimilio, hag a-oue divezatoc'h vikel vraz en escopti Leon.

Ar belec-ma a oue estounet da guenta o caout kemend all a zescadurez en eur verc'h divar ar mæz, mes ne zaleaz ket da anaout ervad e oa hi kelennet gant ar Speret Santel he unan. En em garga a reaz da hench a ene-ma, hag en ober a eure gand calz a furnez, en hend diez ha trubuilluz ma'z ea da guezet dreiz-han.

An hend-ze oue hend ar c'hroasiou. Mari-Amis, en he bugaleach, e devoa goulennet oc'h Doue ar c'hras da c'houzaon poanniou garo ar verzerien; hoguen, d'an oad a bemp bloaz ha tregont ec'h anavezaz ez ea d'he he goulen da veza sevenet. Rei a eure zoken d'he c'hovesour anaoudeguez a guemend-se. Hag eleal ne oue ket pell na zigouezaz gant-hi an dro da c'houzaon. D'an 19 a viz maë 1634, gouel sant Eozen, ec'h heuliaz prosesion hê pharrez da iliz Lambader. Eno e tremenaz an deiz-påd e treid an aoteriou he spered oll e Doue, en hevelep doare m'edo c'houec'h heur diouz an noz hep m'e divije kemeret esken. Neuze ec'h en em lakeaz en hend evid distrei d'ar guær, hag evel m'edo o tibri eun tam bara gros, ec'h en em gavaz gant eun den var varc'h. Hoguen an den-ze a grogaz en he breac'h hag o veza diskennet d'an douar, e reaz out-hi eur goulen hag a lakeaz anizi da rusia beteg ar beo. En eun seurt trubuill, Mari-Amis a c'halvaz a vouez huel hag an Aotrou Doue, hag ar verc'hez Vari ha sant Ian Avieler d'he zicour. Cran-chat a ra oc'h an aour a guinniguer d'ezi ha clasc a ra guella ma c'hell en em ziframma euz a dre daouarn ar fallac a fell d'ezan he deseo. An den-ze, en he gounnar, a laoscaz daou den var-n-ezi, mes he ziou bistolen a grevaz etre he zaouarn. Hed an noz pen-

an den-ze padaz ar vrezel entre-z-ho, ha goulouet mad an den-ze abarz ma c'hellaz ar plac'h vertuzuz-ma distrei d'ar guær gant ar goustians gouscoude da veza divoant ha m'edo he enor. An darn-voia euz he bleo an da bet distrammet a zournadou euz he phenn hag he memproù oll roguet ha dirouget gant ar c'hi counna. Neuze, d'ezan, an toufou-ze a oue paket ha coun-dronet d'ar maro gant barner Montroulez. Mari-Amis euz he c'houez a joumaz trivac'h devez hep gallout, gant lavaret na parlant; n'a guellet, ha calz hirroc'h anezan abarz ascaout ar iec'hed.

Mes ne ket ar groaz ze hep-ken e devoue da zouguen d'ezan vicherer-ma da Zoue. Rag er bloaz var lerc'h e devoue meur a ali euz an env hag a roaz sclear d'ezi da anaout an hend euz ar c'hroasiou ma tlie kerzet dreiz-han. Ar guel euz a boanniou ar re zaonet hag anezan niver braz a dud a zeu da goueza en ivern, a iez ken douz he spered, ma scrije gant an euz ar brasa. Hoguen an Aotrou Guillerm, he aliaz da guinnig hivi-ziken, evid conversion ar bec'herien, kemend e divije da c'houzaon ar rest euz he buez. Hen ober a eure-rag eun, ha beteg he mare e talc'haz bemdez d'ar c'hustum santel-ze, koid diana ha ma choumaz gant-hi he skiant vad. He poanniou iskiz, ar poanniou-ze he zaolaz en em stad ar reuzedica, a goumansaz d'ar seizvet a viz gost 1635, derchent gouel sant Siriac hag he gen-veudeur merzerien; hag adaleg ar mare-ze beteg fin he buez, e c'houzanvaz anezo gant ar memez anken, he vech ma rea an iliz gouel eur zant bennag hag en devoa scillet he c'hoad evid Jezus-Christ.

Vandrol ar poent-se, an Aotrou Guillerm, persoun Guimilio, e oue hanvet vikel vraz e Leon ha setu perag e oue mad d'ezan mont da Gastel da choum. Hoguen dreiz-han oc'h Mari-Amis a vele couezet en eun an-ken ker braz all hep m'e divije christen ebed an oll daz-zousial enez, an aotrou-ze he aliaz da zont ive da Gastel. Evid ac'hano sur, Mari-Amis ne oa tam anezan da vont di, evel pa zeblanche beza dija var aoun an trubuillou a die c'hoaryout eno gant-hi. Gouscoude, gant aoun ive da vont a enep bolontez Doue, ne fellaz d'ezi rebarbi nemed eun nebeud. Erruet e Castel-Paol, Mari-Amis a oue lakeat da guenta e ti eun dimezel vertuzuz ha carantezuz, ha prestig goude e ouent an Ursulinezet. Mes ar re-ma, abalamour d'ar stad eskiz anezi, ne c'haljont ket he derc'hel gant-ho. Neuze an Aotrou Guillerm a roaz d'ezi eun toullig camp gant eur plac'h evid he zervicha. M.

AR FALS DOCTORET HAG HO LAVARIOU.

XXIII.

N'hon ket goest! Ré ziez eo!

Livirit eta ne fell ket deoc'h. En affer ar zilvidiguez e reer ar pez a ves c'hoant. Ne ket galloud, mez calon eo a far. Aon a ves rac al labour hag e tenner adren.

Ar goir gristen zo eun den a galon; henvel eo oc'h eur soudard mad, n'en deus aon rac netra. He Jesus-Christ eo e cav he ners. Pa en deus bet lamm e sae ractical hag e crog adarre goassoc'h evit biscoas.

N'hon ket goest! An den didalvez, n'en deus ket a c'hoant da labourat, a lavar n'hon ket goest.

Dont a rei eun devez hag e velfoc'h ec'h hellac'h; mez re zivezat e viot neuze; an amzer da labourat a vo tremenet. Neuze e viot dirag hor Zalver evit beza barnet, hag he cleffoc'h anezhan o lavaret deoc'h ar c'homzou spontus-ma: pellait diouzin tud milliguet, it d'an tan evit atao, c'houezet evit an diaoulou. Neuze e leverot ennoc'h hoc'h-unan: mar carjen ec'h hellen en em zavetei.

Coulscoude, ne lavarit ket a c'heyer tre. Nan, ac'hano-c'h oc'h unan na hellit ket beza eur c'hristen mad, nan, ne viot ket evit trec'hi ho techou fall, miret gour-c'hemennou Doue ha re an Ilis, ma na rit ket ar pez en d'euz lavaret hor Zalver deoc'h d'ober: pell-zo ec'h ouzoc'h petra en d'euz lavaret d'ober.

Pedi Doue, miret ar zuliou gant œuvrou mad ha pedennou, silaou ar prezeguennou, tostet eur vech an amzer eus ar sacramanchou, tec'het d'eus kement tra a zong d'ar pec'het.

Eb ober an traou-ze ne hellit ket beza mad; mez mar grit an traou-ze e viot mad, ha n'ho po ket cals a boan zoken.

Peguement a dud a bep oad, a bep renk, o d'euz goassoc'h techou evidoc'h, hag o d'euz ho zrec'het hag ho lakeet da blega ho fenn; muyoc'h o d'euz da dec'het ha da boania evidoc'h ha coulscoude e talc'hon mad. Perac ne halfac'h ket ober ar pes a reont?

Eur zoudard coz a oa boezet da douet Doue abaoe he yaouankis. Beb guer e pec'he. Eun devez, goude eur brezeguen gaer en doa clevet, e lacas en he benn distrei ouz Doue. Mont a ras da goves, ha lavaret a ras enhan he unan: birviken na douin mui; hag e pemzec devez e teuas a benn d'eus he voazamant fall. Da guenta ez e digantan eb'ha ouie; neuze e lavare en he galon: pardont d'in, va Doue, ra vezo benniguet oc'h hano! Pa gleven ar soudardet all o touet, emezhan, e teue c'hoant d'in d'ober eveltho; ouспен antercant guech bemdez e ranken derc'hel var va zeot.

Silaout c'hoas:

Eun osac'h divar ar mæz a oa eur mevier touet. Bep sul, bep gouel, bep marc'hat e veze mezo; hag ouспен en doa goal vin. Eun devez e teuas d'ar guer d'eus eur foar leun he gorf evel atao. Cas a ra he vreg hag he vugale er mæz an ty a daoliou treid; terri a ra kement a gouez etre he zaouarn, ha lacat a ra an tan en ty. Heb dale, kement en doa a voa devet, hag he unan, en doa bet mil boan oc'h en em denna d'euz an tan. Antronoz vintin, o velet he holl beadra he ludu, ec'h en em lacas da vouela dourec hag e lavaras: nan, biken berad *eau-de-vie* n'a dei dre va muzellou. Daou-uguent vloas goude e couezas clan. Ar midicin a roas

lien da gorn ar c'hleuz ; tam labour great a zoare n'a d'he boent. Pa deuc an cost d'ar gear Per a vele pegen dister he teue da veza. Mond a rea en egar, a dre an displijadur en doa gwalc'h he galoun ec'h enem roe d'ar goler, d'ar malloziou ruz. Pa zeue he vugale dirazhan e cunnare out-ho, rebechou-dreug, pedennou, les-haniou, m'a na doa skrij he velet hag he glevet. Ar baotret a respoune var ar memes ton, evel pa dije ar guir vad chom e tu an hini a raje ann hirra chadennou. Piou elfe lavaret pegen nec'het oue Yvonic en eur seurt buez. M'en dije c'hoaz tro da parlant ? Pebez poan evit-han clevet he dad, d'he oat, en despet d'he glenvel, ho leusker a leiz he c'hinou ar sacreou, tonnerdeou. Sounna a rea ar goad en he waziet, pa vele he dad perz-duet gant he zroug, hag e vreudeur o c'hoarzin goab dezhan ha d'he c'hourdrouzou. Re zigenver ec'h en em gave c'hoaz e touez he dud, evit beza selaouet, ne helle nemet rei skuer vad, senti ha pedi Doue da gaout truez out-ho.

Eur mintinvez a viz even, epad m'edo ann oll ouz taol o paouez dijunia, sioul braz, Per a lakeas treina he gador bete ar prenest. Ober a reas eur zell ouz doare ann amzer. An eol a ioa guenn, ann ezen a ioa tomm, hag e tu ar Chreiz-Deiz e save berniou coumoul du ha guen, hag a glasse gounit var ann avel.

Jakez, eme Ber, starn dioc'h-tu da gezek, ha kea da gerc'hat ar foenn, hag affol Araog an noz e vo glao. Jakez a ioa e lacat he voutou ler da vond en hent, a ne reas van.

Clevet a rez ? mil...m..., eme an tad droug enhan.

— Ia, ia, clevet aoualc'h, eme, egile. Clevet hag ober zo daou, neket ? Me zo mall din mond d'ar foar. Fanch a ielo, mar karr.

— Ia mar kar, eme Fanch, d'he dro, a ioa dirag eun tamic mellezour e kempenn he vle. Gout a rez e ma or hirio e tenna d'ar guenn er Meziou-Glaz. Kerc'h da foenn ma c'heuz c'hoant ; neket da zaout ho dreb ?

— Petra? c'hoant ober goab ac'hanon-me a c'heuz, ive te, mec'hiec? Brema zouden e renko eun den senti ouzite, evel pa nem be ken da ober.

— A te, kringner erskern, caout a ra did he c'heus muioc'h a vir evid hon-me ?

— Mad ne da ket ta. Me ra fors goude ann oll pe vo saveteet ar foen pe ne vint ket. Pe ger kaer blavez benag a ve, me ne meuz ket eul liard muioc'h da ober va frenadennou. Seac'h pe c'heub, evel mar kirint, me a ia d'ar foar.

— Ne rez forz ? Na me ken nebeut. Muioc'h a joa em euz-me ouz eur picerat chist evit ouz da zac'had arc'hante. Ken a vo ann distro.

E pad m'edo an daou vreur oc'h en em rebech, hag ho clasq goud piou a dec'hje da genta, ar paot coz a ia eur gounnar henna ken a ionenne cornou he c'hinou.

— Bugale ar gounnar, tamou an diaoul ! S... eme Ber divar eun nebeut ; me garre e vec'h samet da vond divar va zro. Dre he alfo he claskas sevel. Allaz, ar paour keaz, n'en doa ket a nerz da zouguen he veac'h.—

Yvonic pa velas he dad e vond da gueza, a lammas d'en harpa, hag er savas compez var he gador.

— Va zad, emezhan, gant eur vouez leun a druez ; pe guir ne hell ket ar baotret all mond, livirit din penaoz en em gemer a me gerc'ho ar foen.

U. N.

ALUZEN AR BARS.

Var don : *Kimiad ar Zoudard yaouane.*

(EIL PENNAD.)

Nemet he vadoberou (1) e peb lec'h ne gavâr :
Dre'r pec'het m'hon eus collet peb guir da vont d'ar c'hloar

Elec'h beza hor barner, hon tad vezo Doue,
Oll hen deus bet hor galvet, oll hor c'hasso d'an e.

Ma cav deomp avechou omp dilezet gantan,
Ous he c'hrassou da zisken e viromp hon unan.
Ma caromp ober ar mad e sicour ac'hanomp ;
Ma fell domp ober an droug e tleer hen tamall domp.

Ne ket roet ar vuez d'an den evit ouela ;
Er guel eus ar barados e tle ober pep tra.
M'hon eus poanniou da c'houzaon, e teuont diganomp ;
Peb tra zo plijadurus vit Doue p'er greomp.

Ma ve ar feiz a renfe hon oll zonjezonou,
A pa ve red eur burzud ve maguet hor c'horfou ;
A ma ve renet guelloc'h ioulou hor c'halon
Pebez nerz a gafempni er garantez guirion !

Gant c'huezen drus hon tal eo trempet hor bara,
Mes ar bara gounezet eo a gals ar c'hueca.
Al labour a zo evel ous eur rozen c'huez-vad
A blij domp, ag e c'houfemp liva he drein gant goad.

Var eun tal drant discoezomp skeud eun ene laouen,
Ha dizec'homp an daelou hon dinerzfe a grenn.
Hor buez zo eun dachen, ous ar brezel harzomp ;
Stard bepret, Doue hor guel ; he varados vo domp.

Ar philosophet païen gant ho furnez lore'hus
Evit trec'hi ar c'hlae'har en em gave nerzuz,
A ne ket mez d'eur c'hristen discoes kement a zoan,
Crena vel eun digalon, arguila rac ar boan !...

Gant vertuziou calonec e teuar abenn bepret ;
Diouallomp ta hor c'halon ous clenvel, ous cousket ;
Etouez an dud reuseudic ar poanniou ni drec'ho,
Clemou ar re vo trec'het gant hor mouez ni vougo.

Prim e ten ar glemerien da veza digalon ;
Ma sonjan re em foan e potuez muyoc'h varnon,
Credi ez on evurus eo an dezo furra.
Pa vez ar peoc'h er galon e vez ar c'horf essa.

(1) Doue.

Ha petra eo an douar ? — Eun hent d'an tremeniad
E barnediguez Doue vo pouezet domp peb vad.
When deus gouzanvet Jesus evit mont d'ar c'hloar,
Nag aoun hor be o pignat var he lerc'h d'ar c'halvar ?

Kement so var an douar a ia gant an amzer :
Ar maro da bep mare a sco en hor c'hever ;
Ne ra fors eus hon hano, eus hon nerz, hon danvez,
Ne heomp nemet her gortos, n'oar espern den james.
Oll eta var an douar evel breudeur bevomp.
En esperjar barados vit Doue labouromp ;
En em zoublomp d'ar boan gant Doue pa blijô
Nepjara he volonteaz a vez laouen ato. R.

Hano ar Zent evit ar Sizun-ma.

DILON, 26. — c'huevrer. — Saint Per Damien, escop
ha doctor eus an iliz.

DIMEURS, 27. — Santez Mac'harit a Gortoon, peni-
tañez.

DIMERG HER, 28. — Sant Ruelin, escop.

DIZIQU, 1^{re} meurs. — Sant Albin, escop.

DINGUENER, 2. — Al liser a zervichas da liana hor
Zalver.

DISSADORN, 3. — Sant Guennole, abat Landevennee.

DISSUL, 4. — Trade sul eus ar C'horaiz. An Aviel
hirio.

Jesus a jasseas eun diaoul eus a gorf eun den mut ;
ha ph'oa chasset an diaoul kuit, an den mut a bar-
lantas. Hag an oll a voa souezet. Hoguen lod anezho a
lavaras dre ners Beelzebub, prins an diaoulou eo
d'chasse an diaoulou, ha lod all, evit he amprou, a
c'houenne outhan ober eur burzud en ear.

Jesus eta, oc'h anaout ho zonjezonou, a lavaraz
dezho. Ar rouantelez en em guemer outhan he unan,
a vezo distrujet, hag an ti so dizunvanies enhan, ne
bado ket. Ma ra eta Satan ar brezel dezhan he unan,
penaos e pado he ren ? Gouscoude e livirit eo dre ners
Beelzebub e chassan an diaoulou. Mar deo dre ners
Beelzebub e chassan-me an diaoulou, ho pugale-hu
dre ners piou her chassont-hi ? Ho pugale a vezo
ho parnerien. Mes mar deo dre ners Doue e chas-
san an diaoulou (evel ma zeo red deoc'h hen anzae),
ec'h ellit beza sur eo deut rouantelez Doue beteg
enhoc'h.

Kell, ha ma vez eun den armet mad o tional he di,
kement en deus so dizanjer. Mes mar teu eun all
creoc'h evit-han d'he drec'hi, e lamo digantha an ar-
mou var bere e fizie, hag e roi he zanvez d'an nep
ma caro.

An hini ne ma ket ganhen so a enep din, hag an
hini na zestum ket ganhen, a fouillez.

Pa vez eat eur speret lous er meaz eus a eun den,
e za dre lec'hioù dizour o clask an tu da eana, hag
evel ne gaf paouez ebet, e lavar : Mont a rin en dro

d'an ti ma edon enha. Ha pa ziguez en ti-ze, her
c'haf scubet ha kempennet. Neuze e za da guerc'hat
seiz droug speret all goassoc'h evit-han ; mont a reont
en ti, hag e chomont enhan. Ha stad diveza an den-
ze a deu da veza goassoc'h evit ar c'henta.

Pa edo Jesus o lavaret kementse, eur vaouez a zavaz
he mouez eus a douez an dud hag a lavaraz : Euruz ar
c'hof en deus ho touguet, hag an divron oc'h eus sunet.
Jesus a lavaraz : eurussoc'h eo c'hoas ar re a zilaou
comzou Doue, hag a ra dioutho. (Luc. xi. 14). G. M.

Meleier ha Mhaouallou.

Eun Autrou truezuz hag eur Soudard anaoudec.

Chetu ama ar pez a scriver euz a Sarguemin ; kearie
vihan var bord rouantelez Franç e tu ar sao-heaul.

Er bloaz mil eiz kant ha pevarzec, hon bro, siouaz
d'eomp, a zo bet kemeret dre nerz gant an estranjourien.
— Epad ma chome e Franç an armeou a ziaveaz-bro,
eo c'hoarvezet kement a scrivomp ama. Eur bourc'hiz
euz hon kear en deuz neuze saveteet he vuez da eur
soudard prussian. Chetu ama penauz :

Eun devez e velaz o font euz a di kear (ar mairie) eur
soudard iaouane, teval he zaoulagad, he zrem dislivet.
Ken dinerzet a oa ma n'helle mui n'em zerc'hel var he
dreid. — Bez'en doa en he zorn eur billet a logiz. Ar
paour keaz soudard prussian a oa paket gant an darsien,
ha, koulz lavaret, hanter-varo. Casset a oa da Sarguemin
evit guellaat. O tostaat ouz hon bourc'hiz, e tiscouezas
d'ezhan ar billet. Goulen a reaz digantha da be seurt ti
e oa casset, ha ma vije kemeret eno anezhan eur sourey
bennac. Mez an numero euz ar billet a verk e ti ar
baoura famil euz ar vro. — Au autrou truezuz a bignaz
d'an ti kear (ar mairie) a reaz sench ar billet, hag a
zigassaz ar soudard elanv gantha d'he di. Epad eur miz
e kemeraz anezhan ar sourey ar brassa. Ar soudard a
vuellaz. Mez siouaz ! ker e constaz d'an aotrou-ze beza
bet ker mad e kenver an divroad-ze. Mam an autrou-ze
paket he unan gant an darsien a varvaz deuz-tu.

Meur a vloavez a oa tremenet abaoe an amzer-ze.
Ar bourc'hiz en doa ancounac'heet ar mad en doa great.
Mez ar soudard n'en doa ket ancounac'heet anezhan.
Oc'h en em velout avancet en oad, hag o santout e
tostac ar maro, e savaz en he speret eun dezir braz da
az-velet he vad-oberour, pe marteze, siouaz ! da vont
da bedi var bez an den mad-ze. Hir a oa an hent,
braz e tlie beza an dispign, n'euz forz, dont a reaz euz
ar penn pella d'euz an Almagn, hag en doa an eur-vad
da az-kavout an hini en doa hen diguemeret en he di
hanter cant vloaz arauc. Oh ! va zad ! emezhan,
en eur em deureul etre he zivrec'h hag oc'h her
starda var he galon ! — Brema, evel ar prophed Simeon,
e varvin e peoc'h, p'am euz gueleet an hini a zo bet evidon
eun eil tad. En eur vont kuit euz he di, e roaz d'ezhan

eur c'hop arc'hant alaouret, var behini oa kizellet ar c'homzou-ma : dent oun d'ho cavout enebour hag hoc'h euz va diguemeret evel eur mignon. Henvel ouz ar Samaritan, c'hui oc'h euz va recevet, pa oan dilezet gant an oll dud all. *L. Delaizir.*

Tennet euz ar Gazeten *Le Monde*. M. D.

Eur c'houeriat eus an Auvergn a voue galvet n'eus ket pell da renta testeni dirag al lezvarn.

Ar barnet a lavaraz dezhan :

- Test, savit ho torn da doui...
- Toui, Aotrou, me ne douan morse, *fischtra* !
- Ama e rer al le, e touer...
- Oh ! Aotrou, gouzout avoalc'h a rit eo difennet.
- Lavaret a ran e rankit toui...
- Ah.... c'hui fell deoc'h ? Mad. — Ha potr an Auvergn da glasc brassa leoudouet en doa losket morse en he vuez : me garre mont gant an d....

Daou vignon a jome eur pennadic mad an eil dioc'h eguile, ar pezh ne vire ket outho d'en em velet eur vech en amzer. Eun dervez unan anezho a gavas eguile oc'h ober he destamant. Hema pa velas he vignon, a lavaraz dezhan :

- Gouzout a rez-te pehini eo ar goulou kenta a ran dre an testamant-ma ?
- A beleac'h e c'houfen-me ?
- Mad, pidi a ran va fried da zimizi adarre kerkeret ha ma vezin maro.
- Sell-ta ; ha perag ?
- Abalamour m'am eus c'hoant e ve eun den hag en deffe keuz din.

Dirag eur lez-varn oa galvet n'eus ket pell ar vam hag ar map evit beza teston.

P'oa deut tro ar vam da renta testeni, e voue goulennet outhi : pe oad oc'h eus ?

- Tregont vloas, emezhi.
- Ar map a reas eur zell a gorn outhi pa he c'hlevas ; goude p'oa deut he dro da goms, ha pa voue goulennet outhan ive pe oad en doa, e respontas :
- Eur bloas muioc'h evit va mam.
- Ar merc'hed, red ha ma ve, ne blij ket ar gosni dezho.

En dez-all, daou bried a voa eat da di eur c'hemener da lacat kemeret muzul evit ober eun habit nevez d'an ozac'h. Ar c'hemener a guemer he wencle hag he ruban croc'hen azen evit muzula izili ar goas. An ozac'h hen leze da ober he vicher ep lavaret guer. Mes ar c'hreg a gave abeg e kement a rea ar c'hemener. Choug, discoas, kein, hed, lec'het, e pep leac'h e cave dezhi e kemere eur muzul re hir pe re ver. C'huizi a rea ar c'hemener o clasc ober he lavar oc'h an itron. Pa en devoa gant poan avoalc'h kemeret muzul ar cheletennou, e voue lavaret dezhan kemeret ive muzul ar bragou.

Hola, eme ar c'hemener neuze o trei oc'h ar c'hreg, evit muzul ar bragou, varnoc'h-hu eo e tlean he guemeret, rag c'hui eo hen doug !

Clevet oc'h eus hano avechou eus a dud engravet, tud avarisius, a so an arc'hant ho Doue. Setu aman unan hag en deus aoun o tibri bara, ha gouscoude ne voar ket niver he zanvez. He c'hreg a grog ar boan daoulagad enhi, hag a so e risel da goll ar gullet. Va den ne gred mui sellet oc'h he c'hreg na goulou outhi eus he c'helou gant aoun na c'houlou medecin. Gouscoude ar c'hreg a lavar dezhan erfin ne ell mui padout. Petra bennag ma ranne he galon couls lavaret o lacat gnelver eur medecin, e voue red hen ober, rag ne alle ket lavaret n'en doa ket a beadra d'he baea.

P'oa deut ar medecin, ha p'en doa sellet mad oc'h Jaoulagad an itron, e lavaraz he fareje abouez poan.

— Peguement a gousto an dra-ze din-me ? eme an avarisius ?

— Mil lur.

Hag ar paour kez den da huanada. Red oue gouscoude lezel ar medecin da labourat. Pa en doa tennet ar c'hroc'hen divar eul lagad, an itron a vele mad gant al lagad-ze. Neuze an Aotrou a lavaraz d'ar medecin : paouezit brema ; sellit, setu aze pemp cant lur ; an itron a velo avoalc'h gant eul lagad !

An itron so chomet born, mes an Aotrou en deus espernet pemp cant lur.

Eun ozac'h all a voa evelse hag a goezas eun dervez he c'hreg eus a brenest he c'hambr var ar ru. An ozac'h paour, pa he guelas o coeza, a gomansas da grial : o Doue ! he montr a ioa ganthi ! ma tor he montr ! G. M.

PRIS AN ED.

KEMPER. — 17 C'huevrer.		PONT'NABAT — 15 C'huevrer.	
Guinis....	46 lur, 89 c.	Guinis....	46 lur, 78 c.
Segal.....	40 lur, 46 c.	Segal.....	40 lur, 50 c.
Eiz.....	9 lur, 07 c.	Eiz.....	10 lur, 46 c.
Ed-du....	9 lur, 04 c.	Ed-du....	8 lur, 48 c.
Kerc'h....	7 lur, 97 c.	Kerc'h....	8 lur, 75 c.
Avalou-douar	3 lur, 35 c.	Avalou-douar	2 lur, 60 c.
MONTROULEZ — 10 C'huevrer.		BREST. — 5 C'huevrer.	
Guinis....	47 lur, 37 c.	Guinis....	46 lur, 64 c.
Segal.....	44 lur, 87 c.	Segal.....	43 lur, 77 c.
Eiz.....	9 lur, 80 c.	Eiz.....	8 lur, 09 c.
Ed-du....	40 lur, 38 c.	Ed-du....	8 lur, 03 c.
Kerc'h....	8 lur, 84 c.	Kerc'h....	9 lur, 14 c.
Avalou-douar	6 lur, 50 c.	Avalou-douar	4 lur, 45 c.

Ar Gerant : AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand AR. DE KERANGAL, Mouler an Escopit

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezouneec.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten a goust :

Evit eur bloas.....	DAOU SCOUET.
Evit c'huic'h miz.....	EUR SCOUET.
Evit tri miz.....	C'HUEC'H REAL.
Eun gazeten ebken.....	DAOU VENNEG.

Ar beaumont a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijrou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Belec e Kemper.

Ar paeamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kempér.

KEMPER, 3 Meurs 1866.

An derveziou c'ned, ha zoken marteze an derveziou kenta eus ar c'horaiz, a zo bep bloas evit meur a hini derveziou a zizurs hag a follentez. E Paris, epad an derveziou-ze, oc'h adorer eun Doue nevez, hag an Doue-ze zo eun zegen-lard. An ejen-ze a vez casset ha digasset dre guær en eur c'har kempennet ha clinket gant. Pa vez fall an amzer, ma tremen ar zacriment (moulet ra vezo) dre eur ru, den ne gred dont er mæz eus he di evit he adori, mes pa dremen an Doue-ze eus ar c'hiz nevez, n'eus fors pe guer cris amzer a ve kement pen-saon so e kær a deuio da renta dezhan he deyer ha da ober jolôri en he honor. Er c'hoerion- all e veler ive tud oc'h ober a bep seurt follenteziou, pe ben em dic'hiza, ha neuze e ve lavaret e vent parava an eil d'eguile o clasc gouzout piou a vezo muia diskant. Kementse a laca lod eus a dud ar broiou all da lavaret penaus ar Francizien a goll ho fenn d'an deziou c'ned, ez eus eur rum anezho foll da staga, hag eur rum all ha ne deo nemeur furroc'h p'eo guir kemeront ho ebat hag ho flijadur o velet dizurziou hag azevou ar rum guenta. Hogen an dud-ze so christemen, pe da viana en em lacat e reont e renk ar gristenien, petra bennag ma ve cals mui a leac'h d'ho c'hemeret evit paianet pa ho gueler evelse.

Var ar mæz ne veler ket kement a follenteziou. Gouscoude meur a hini a ra ho foursach evit an amzer a binijen, evit ar c'horaiz, dre eun dizurs bennag, dreist oll dre ar vesventi. Ne ouzon ket petra zouch an dud-ze, mes ar pezh a dleer da zonjal oc'h ho gullet eo kement-ma : Setu aze tud hag a ia da gomans ar c'horaiz, christenien hag a ia d'en em lacat e pinijen, rag calz anezho o devezo labourou tenn ha cals poan, hag evelse e raint pinijen da viana a gorf ; hag e ve lavaret oc'h ho gullet o defe c'hoant, araog goulou pardon, da zerra outho ho unan dor an drugarez. Henvel int oc'h eur servicher en defe tennet drou-

lans he vestr, hag a ve bet taolet gant ar mestr-ze er meaz eus he di. O velet pe guer reuzedic eo he stad abaoe n'ema mui en ti mad eleac'h m'oa eurus, ar servicher a lavar outhan he unan : Ne allan ket beva evelen ; red eo din mont varc'hoas da c'houlou pardon digant va mestr, mes hirio, araog mont, e zan da ober goassa ma c'hellin dezhan. Ne ouzon ket pe seurt diguemer a rafe antronoz ar mestr d'ar servicher-ze ; credabl eo ne ve ket diguemeret re vad. Setu eno gouscoude petra ra ar gristenien o tont, araog staga da binijen ar c'horaiz, da derri lezen Doue goassoc'h eguet er mareou-all. Ne dlefet ket keza souezet e ve eur binijen gollet evitho, an hini a rasent goude beza c'huezet an tan eus a goler Doue en ho enep, en amzer ma zeant da c'houlou gras ha trugarez digantha.

Mar e deus an ilis santel er glac'har da velet cals christenien oc'h ober follenteziou e deuz ive ar gonsolation da velet dalc'h mad o tont d'en em deleur etre he divrec'h unan bennag eus he bugale pere a voa tec'het diouthi, pe o devoa bet ar malheur da c'henele er meas eus ar guir feiz. Eur plac'h iaouanc naonteg vloas, eus a Vurtemberg, e deus, er sizunveziou-ma, lezet relijion Luther evit dont en ilis catholic, ha meur a hini all a so c'hoas var ar poent d'ober evelidi. Dibaot a speret eun en em laca da studia ha da lacat credennou ar fals relijionou e kem gant guirionezou ar relijion gatholic, na den ar sclerijen da bara d'ho daoulagad. Ha neuze gras Doue a deu da sicour an hini a glasc ar virionez gant eur galon eun ha didroel.

An Tad Santel ar Pap en deus benniguet ar c'henta mean evit eun ilis a dleer da zavel e Rom en honor da sant Thomas Cantorbéry. An ilis-ze a zaver evit scolach ar Zaonon. Ar scolach Saon-ze a oa bet fontet gant Gregor XIII evit ar glouer a Vro-Zaos a deu da studia da Rom. Ar scolach-se en devoa eun ilis, mes d'an dispac'h, pe d'ar revolution vras, scolach hag ilis a voue distrujet. Pa deuas ar peoc'h, Pii VII

BUEZ MARI-AMIS PICART.

(TREDE PENNAD).

Var nevez m'oa erruet e Castel, Mari-Amis e doa discleriet da unan euz he anaoudeguez e vije tamallet da zibri ha da eva e cuz, ha da veza eun douellerez fall. Discleria a eure c'hoaz e vije taolet er mæz euz he c'hampr ha dilezet gant he c'hovesour. Hoguen divezatoc'h oue gulet scler ar virionez euz he c'homsiou. He stad burzuduz a bade bepred hag a ioa ken estoun, ma na c'hellaz epad trivac'h vloaz-amzer kemeret ken magadurez nemet ar gommunion a reseve meur a vech er zizun, hervez an testeni roet d'eomp gant an Aotrou du Louet, escop Kemper, a ioa bet vikel vraz e Leon, hag en doa bet anavezet mad ar verc'h santel-ma.

Hoguen an hini a ioa bet roet da Vari-Amis evid he zeryicha a ioa eur scanbennig iaouanc hanvet Gabriela. Ne zalez ket da ober anaoudeguez gant eur plac'h all euz a guær ha da guemeret perz el laeron-siou-guin a rea bouma divar goust he mestr. Mari-Amis a scandalaz he flac'h hag a glascz miret out-hi na zarempredche mui al laerez-ze, oc'h he gour-drouz, ma na baouesie pelloc'h, da ober he gour-c'hemenou d'an Aotrou Guillerm. Kemend-ze a oue aoualc'h evit lacaat ar goad da zavel da benn Gabriela, hag e lavarez evid oll respount e c'houesie manivic ober d'ez euz zae nevez, hag eleal ne zalc'haz nemed re vad d'he gær. Aliet ma'z oa gand daou enebour da Vari-Amis, an teod fall-ma ne doue ket a aoun da doui var he le e oa he mestrez eun droumpleurez hag a zebre traou mad e cuz, beteg zoken abarz mont da gommunia, hag e tispenne c'hoaz he c'horv gant he ivinou evid rei da gredi d'an dud e c'houzanve poanniou ar verzerien. Aslavaret a rea ouspen-ze e oa he mestrez eur vaouez fall hag e devoa bet meur a grouadur. Hoguen an dra-ze a oue peadra hag ouzpen evid lacaat an oll da gasaat Mari-Amis. An hini a guemeret hag a enoret bete neuze evel eur santez, ne oue mui nemed eur plac'h fall, eun hypocritez, eun douellerez, eun droug-spered. Er penn kenta an Aotrou Guillerm a zivennaz caoz ar baouez guæz ankennet-ma hag a zeblante credi ervad e oa direbech caër euz a guemend a damallet d'ez, mes gant an amzer e teuz ive da veza gounezet gant teodou fall, hag er bloaz 1640 ne fellaz d'ezan mui covéz ar plac'h vertuzuz-ma, hag e tivennaz rei d'ez ar gommunion, beteg zoken en amzer-Basc. Ouzpen-ze c'hoaz, e taolæs anezi er mæz euz an ti en doa fermet evit-hi, en hevelep doare ne devoa mui evit oll lojeiz nemet ar pave.

Gouscoude an Aotrou Poulpri, unan euz a bennou ar veleien e Leon, o velet Mari-Amis en eur stad ken trist all, en doue truez out-hi hag he repuaz en he di eleac'h ma choumaz beteg he maro. Hoguen ar belec carantezuz-ma a oue soursius da lacaat dre scrud an oll draou burzuduz a velaz o c'hoarvout gant

ar servicherez santel-ze. Enz eur c'hostez all, an Aotrou Guillerm, eun nebeud araog he varo, a zeuz da anaout an tor en devoa bet o credi an droug a lavaret euz ar plac'h vertuzuz-ze, hag a roaz d'ez mercou anat euz ar c'heuz en devoa da veza bet selaouet an teodou fall.

Gabriela d'he zro-ne zalez ket da zouguen ar boan euz he zorfet; rag anaout a rejot scler ar faosoni euz a guement e devoa lavaret. Rac prestic goude e roaz eur goall scouer ha ne c'hallaz ket dere'hel cuzet hag a ziscuillaz d'an oll he buez dizurz ha direol. Bez' e doue, siouaz d'ez! eur maro an trista.

Hoguen dre-ze ma oue dizoloet fallagriez Gabriela, e oue ive anavezet scler e oa Mari-Amis eur plac'h santel ha direbech. Setu eno perag adalec ar mare-ze ne devoe nemeur a dra da c'houzaon euz a berz an dud. Mes avad he foanniou ankennuz ne c'huiteant ket ato.

Eun dra hag a ziscouez ar sclerra santelez ar zervicherez-ma da Zoue, eo ar stad a rea anezi an Aotrou Nobletz. Mari-Amis a ioa nevez erruet e Castel, pa oue dre eur sclerijen euz an euz anavezet he stad gant ar misioner santel-ma. Pedi a reaz unan euz he anaoudeguez da vont euz he herz da gaout Mari-Amis ha da gas d'ez eun nebeud bili euz an aod. Carga a eure anezan c'hoaz da lavaret d'ez penaoz evel ar bili-ze a ioa dalc'h mad rodellet gant ar mor, evel-se ive e vije e doug he oll buez e goasc ar poanniou, ar c'hroasiou, ar c'hohtroliesiou. Hoguen gulet or beuz a ziraog ar virionez euz ar pez en devoa lavaret ar servicher braz-ze da Zoue. Mari-Amis kercoulez e doa bet ive digant Doue an anaoudeguez euz an amzer da zont. Evel-se eun demezel hag a ioa nizez d'an Aotrou du Louet, o veza c'hoaz plac'h iaouanc, a c'houlennaz ha beteg diou vech oc'h ar verc'h santel-ma ar sicour euz he fedennou, hag en eil tro hou-ma a lavarez d'ez: Pedet am benz, emez-hi, ha caër o pezo cuzat ha clasc digaresiou; leanez e viot, cavet e viot gant an Aotrou Doue. Hoguen an dimezel-ze, er mare-ze nec'het braz divar ben ar stad a vuez a dlle da guemeret, a zeuz gant an amzer da veza ar pez e devoa lavaret Mari-Amis.

Etre daou e tosta ar poent ma'z ea ar verc'h santel-ma da veza digollet euz he foanniou braz. Gouscoude abarz mervel e devoe c'hoaz ar c'hac'har da zione-ret an Aotrou Michel Nobletz hag an Aotrou Poulpri, maro eun nebeud misiou en he raog. Mes ne choumaz ket pell e buez var ho lerc'h. Var dro fin miz du 1652 ec'h heanaz he foanniou burzuduz ha d'an ampoent ec'h anzavaz e varveche da ben eur miz; hag eleal, d'an 20 a viz kerzu, e clanvaz hag an deiz var lerc'h e c'houlennaz he zacamanchou diveza, a resevaz gant eur feiz hag eur garantez ker braz ma lakea da vouela kemend re a ioa var al leac'h. Eur pennadig gouscoude ec'h en em zantaz trubuillet oll gant ar spount rag barnediguez an Aotrou Doue, mes dizale ec'h ascavaz ar f'isians hag ar peoc'h euz eun ene mad.

An Aotrou Laval, Escop Leon, a zeuz d'he gulet an deiz ma varvaz hag o veza roet dezi he venedicsion, ec'h heanaz erbedaz he unan oc'h he fedennou. Eun nebeud goude Mari-Amis a zavaz var bennou he daoulin, a bedaz calbung an Aotrou Doue hag he zent, hag en eur lavaret an hanoiou santel a Jezus hag a Vari, e tre-menazid an aod a dri-bloaz hag anter cant, d'ar 25 a viz menazid an aod a dri-bloaz hag anter cant, d'ar 25 a viz kerzu 1652. Antronoz e oue enterret he c'horv e Castel-Paul en iliz-catedral. Ann Aotrou'n Escop hag oll veleien kevren am gave en he enterrament. M.

AN TAD MILLERHOT

Etouez an devezourien, an dud paour hag ar brizounerien euz ar gear a Paris.

An Tad Millerhot, pa en gav gand he zezezourien ker ha gand he beorien muia karet, a oar, guir eo, kauzeal ha distagua oc' doare; hoguen gouzout a ra ive sevel ar gomz pa ve red, ha beza elavar en he zarmoniou.

Eun devez, o veza diskouezet d'he audited oar red aguen mont da goesaat, ha diskouezet pe ken talvouduz oa ar gonsion e c'houlennaz diganthen he unan: — Hoguen ha n'ouzet ket ama unan bennag hag en defe c'hoant da lavaret d'in, mar kredfe mad: — Ha gallout a ran-me mont d'anzao va fec'hejou da eur belek? — Tad, her gouzout a rit. Bez' ez euz pec'hejou ken mezuz, ken lous, ken heuzuz ma na heller sonjal enho hep ruza dirazomp hon unan. — Penaoz ta, kaout an nerz d'ho discleria da eur belek? Petra a sonje hen ac'hanoun? — Koll a haf en evit biken he istim vad. — Va fellaat diouthan a rate gant horrol. — Va beudeur keaz; — Ar belek ho fellafe, a revuzle d'ehoc'h he istim, he garantez dre ma ho p-cuz discleriet d'ezhan fautou braz. — Ah! ha ouzoc'h ket petra eo kalon eur belek, kalon eur c'hoesour. — Ma halfen me diskouez d'ehoc'h unan. — Ma halfen rei d'ehoc'h d'anaveot petra zo o rullha e kalon eur belek pa selaou koesion eur pec'her braz. — Kanguet eo neuze he galon a bep seurt santi-manchou douz ha dudiz. — Trugarekaat a ra Doue d'ho peza kouseryet beo; hen trugarekaat a ra da veza bet choazel hag hen pec'her he unan, evit ho savetei. — Ho trugarekaat a ra hoc'h unan da veza leket enhan ho f'izians. En em eskلامي a ra o velet ho kourach. Ha peral ne lavaren-me? En eun doare bennak, bez' en deuz doujanz evidhoc'h. — Aveichou en defe c'hoant d'en em strinka d'ho taoulin. Me a c'houlenn pardon digant an eneoù vertuzuz. Mez mar en deuz ar belek mui a garantez evit unan kentoc'h evit eun all, bez' ez eo evit ar pec'her braz. — Euz anezhan e teu son d'ezhan dreist ar re all en he bedennou hag en he ovelennou. — Ar belek! Ho fellaat diouthan! Hoguen digas a rit d'ezhan joa ha levez. — Prokuli a rit d'ezhan unan euz ar c'haera deizioù euz he vuez.

Va breudeur, tenn eo sur, ha poaniuz labour eur belek. — Tremen an deizioù hed ha hed, hag aliez lod euz an nozveziou o selaou histor mizeriou ar vuez reu-

zeudik-ma. — Hoguen goude ma ve bet sikouret eur paour, troet kalon eur pec'her varzu Doue, oh! gant pebez joa e lavarer: — Merci, va Doue; roit d'in kalz a zeizioù henvel ouz hema. — N'ho pet aoun ta, va breur. — Deut, deut; roit d'eomp eun tam bennag euz an eurved-ze; n'he lamit ket diganeomp. — N'hon bezo biken hini all ebet. — Biken, biken. — Renonset hon euz d'an oll joaiou all. — Ho pet truez ouzomp. — Hon rentit euz. En em rentit euz hoc'h unan. — Setu aze eur brezeguen vad, eur brezeguen gouest da sench tu d'ar c'halonou. — Setu aze eur brezeguen a vije mad da ober, nan hepken d'an dudigon, mez d'an oll paour ha pinvidik.

En eur aichui eur retreat, an Tad Millerhot, a lavare d'ar re n'ho doa ket profitet euz an instructionou. — Va breudeur muia karet, c'hui a sonj d'ehoc'h marteze ez-an da lavaret d'ehoc'h komziou rust ha dipituz. — En hano Doue, hen ober a helfen marteze, mez n'her grain ket, guel eo ganen asten d'ehoc'h an dorn, kaout truez ouzoc'h ha kemer lod euz ho-maleur. — Ho savetei, da vihana ho lakaat en hent mad, a vije bet eun dra caer ha dudiz evidoun belek. — N'eo ket fall d'ehoc'h rei d'in ar gonsolation-ze. — Doue n'en deuz ket ma c'havet mad d'hen ober. — Eun all, esperanz am euz, a vezo eurusoc'h. Kouscoude na reketan drouk ebet d'ehoc'h; er c'hohtrol, dizirout ha goulenn a ran pep seurt mad evithoc'h; me bedo atao evidhoc'h. — Dont a rei eun deiz divezatoc'h. Hirio ez-euz c'hoaz liammou re ziez da derri.

Va breudeur, mont a ran da gonta d'ehoc'h eun histor ne ket guir, ha ne hell ket her beza. Eur barabolen eo. — Lavaret a reeur penaoz en eur vrø er penn huella euz an douar varzu an hanter noz, ar riu a zo ken lem, ken lem ma teu ar c'homziou da skorna. — Daouzen, eun nebeudik dispartiet an eil diouc'h egnile, a gomz etrezho, mez n'en em glevont ket. — Ho c'homziou a chom skornet en ear. — Mez pa deu an nevez amzer, ar c'homziou a ziskorn hag em'int klevet. — Va breudeur, riu zo ive en dro d'ho eneoù, hag hon komziou a skorn en dro d'ezho. — Mez pa deuio an nevez amzer, pa luguerno heol an Aotrou Doue, ar c'homziou-ze a ziskorno. — Mont a rint neuze e goueled ho kalonou, da vihana en heur euz ho maro.

Oh ia, her c'hredi hag hen esperout a ran. — Dont a rai evidhoc'h eun amzer a c'hraz hag a vizerikord. — Oh ia, eur joa vraz am euz o sonjal na vezo kollet hini ebet ac'hanoc'h. — Va lezit da vont kuit o kass ganen an esperanz-ma: en em gavimp eun deiz oll assemblez, oll euz da virviken.

Karantez an Tad Millerhot evit ar bec'herien a zo ker braz ha ken tener ma teu da deneraat ar c'halonou muia kalet. — Prezeguet en doa eur retreat en eur prisoun, kalz a vad en doa græt eno. — Eun nebeud derveziou goude e teuz adarre da velet he brisonerien ker. — Skei a ra var dor ar prison. Piu zo aze? An Tad Millerhot. — Digorret eo an or, mont a el lec'h ma oant oll o kemer an ear. — Souden an oll dud dalc'het

eno, laeron, lod kondaonet d'ar galeou, en em zestum en dro dezhan, en em daol etre he zivrec'h, hag e pok d'ezho oll evel eun tad d'he vugale. — Ar re a oa ereet ho zreid gant chadennou ha dalc'het er c'hachot, her ped ho unan da zont da lavaret d'ezho eur gomz bennag a gonsolation. — An Tad Milleriot pa erru en eur prison, a ia raktal da gavout ar re falla. — En em deureal a ra e kreiz banden ar re fallakra ha muia diskredik. — He gomziou douz ha tener a zo evit ar re na gredont nag en Doue nag en diaoul. — Rei a ra d'ezho an dorn, hag en eur gauseal gantho, e sko goustad var ho divjod. — Eun devez unan a lavaraz d'ezhan : — Tad, ha n'hoc'h euz ket souj eo me am euz lavaret d'ehoc'h an deiz all komziou injuriuz ? Ama ia ! Komziou injuriuz ! — Mez hag aoun am euz me euz an dra-ze ! — Er c'hontrol, pa ve bet distaguet ouzin eur bikol injur bennak, he diguemeran evel eun dra vad, hag ho karan muioch aze, neuze gouzout a ran e talvezit muioch egnet ho komziou. — Pa z'eo eet kuit an Tad Milleriot e lavaront : setu aze eur belek hag en deuz eur galon vad. Mar ian eun deiz da goessaat, ouz hennez en em adressin, ha peurvuia abred pe divezad e c'halvont an Tad Milleriot.

Tennet euz ar gazetenn *Le Messager de la Charité.*
Le Belair 57. M. D.

LEVR AL LABOURER. //

II,

Ar C'hoajou.

Choazet eta hoc'h had epad ann dilost han, Laket hen enn douar pa ve torret ar goan. Evit digas gouez sapr dre holl enn ho lannou, 630 N'hoc'h euz nemet sevel moude gant ho marrou ; Hada goude ho kreun, her c'huzet gant douar, E berr e kellido, e savo hep arvar : Hag enn amzer-nevez e velot o tarza Ho sapinek iaouanc, hag hep pell o c'hlaza. 635 Evit holl ar gouez all e vezo red arat, Trei, distrei ann douar kent sonjal ho lakat. Kentre vel m'ho goueler a zivar ann haden, O tont euz ann douar, hag o sevel ho fenn, Ez eo red ho c'houennat, displanta al louzou, 640 Gant aoun na ve mouguet e berr ar plantennou. Evit ar vech kenta ma na zeu ket ho koue, Ne gollit ket kaloun, mes hadit a neve. N'espernit na labour, na mizou, na kardel ; Implijit hoc'h arar, ho krog hag ho rastel, 645 Meur a zouar, hevel ouz eur paour kez dleour, Ne zaskoront netra med dre boan ha labour. Pep bro e deuz he c'hiz da hada ar c'hoajou. Hiniennou a skign ann had a zornadou ; Darn evit ho lacat e renkou penn da benn, 650 A guemer ho muzul, a zispleg ho linen, Evit ma tigouezo an eil ouz eguile,

Eur vezen ouz gouezen, eunn ale ouz ale ; 'Vel se, ar soudarded kent monet d'ann emgan, 655 E laker enn ho lec'h, enn he renk pep unan. C'hui ivez pa hadit gouez iaouanc er parkou, Pe pa ho distaguit a zioc'h treid ar c'hefiou, Ne lakit ket re dost ann eil ouz egile, 'Vit ma hellint essoc'h ober griziu neve, 660 Digueri ho delion, astenn skourrou krevoc'h, Kemer korf ha sevel ho fennou huelloc'h. Merer, mar am c'hredit, ouz ar c'havr, ann danva Evel ouz ar vocen, diouallit mad ho koad. Lezit ho marc'h diheul da c'houirin er blienen, 665 Da redek, da zailha, da c'hoeza he zifroen Ouz treid ar menezioz ho teuvet da voeta ; Hag en ho prajou glaz, ho zaoud da vusella ; Mes a zioc'h ho koajou iaouank ha re dener Harzet holl al loened, eun sevel girsier.

Na zit ket da guemer skouer var ar re louad, A gaver meur a vech o tibenna ho c'hoad. Eur vezen dibennet a zizec'ho goude ; 670 Kollet he c'hurunen, kollet he levne, Na vezo mui klevet e kreiz ann noz teval, Hejet gant ann avel, evel kent o trouzal, Evel eunn intanvez glac'haret ar vezen. Na rei nemed paouraat, goasked gand ann anken.

M. D. ha Remarque.
Hano ar Zent evit ar Sizun-ma.

- DILLUN 5 meurs. — Sant Remond Penafort.
- DIMEURS 6. — Sant Jaoua, escop a Leon.
- DIMERC'HER 7. — Sant Thomas Aquin, doctor eun an Ilis.
- DIZIOU 8. — Sant Ian Doue.
- DIRGUENER 9. — Pemp Gouli Hor Zalver.
- DISSADORN 10. — An daou-uguent Merzer.
- DISSUL 11. — Pevare Sul eus ar C'hoariz.

An Avel hirio :

Jesus a ieas en tu all da vor Galilee, pe mor beriad. Eur bopl tud hen heuille, dre ma velent burzudou a rea var ar re glan. Jesus en em dennas var eur menez, hag a azezas eno gant he ziskibien. Edot tost da Basc, gouel bras ar Iuzevien. O veza eta savet he zaoulagad, hag o velet eun vanden vras a dud o tont etrezeg enha, Jesus a lavaraz da Filip : A beleac'h e prenimp-ni bara evit re da zibri d'an dud-se ? Kement-se a lavare evit he ant

... rag hen a voue avoalc'h petra die da ober. Filip a respontas : Daou c'hant dinerat vara ne ve ket avoalc'h evit rei eun tamic bihan da bep hini. ... An Aotrou D. H. a zistroe eus a Vitry da Bais. Gaout a ra var he hent eur vaouez coz beach dozit o vale ha goloet gant ar c'huez, rag an amzer a oa tom. An Aotrou D. truezus bras e kenver ar beomen da bere e ro bep bloas eul loden vad eus he zavo. ... An Aotrou D. en devoa eun truez bras outho, hag a lavare outhanche unan : red eo ho zicour, mes penaus n'eo bet ar garantez evit an nessa ha calon vad an den o deus. ... An Aotrou D. a ziskennas, a zavas en he garroz, a lam hag an tri buguel e kichen ar baourez coz avo eno arrog, ha neuze hen hag ar zoudard a deu var dreat. Red eo gouzent penaus an Aotrou D. en deus pevar loguent vloas. Digouezet e Paris, e pae car evit ho c'has pephim d'he lojeis, hag e ro dezho ouспен eun aluzen gaer. Neuze eza he unan d'he di gant ar blijadur da veza great eun ceuvr-a drugarez, ha da veza eun tem seuzet he unan evit renta servich da dud paour.

NEVEZENTIQU.

EUN DEN MADELEZUS.

... An Aotrou D. H. a zistroe eus a Vitry da Bais. Gaout a ra var he hent eur vaouez coz beach dozit o vale ha goloet gant ar c'huez, rag an amzer a oa tom. An Aotrou D. truezus bras e kenver ar beomen da bere e ro bep bloas eul loden vad eus he zavo. ... An Aotrou D. en devoa eun truez bras outho, hag a lavare outhanche unan : red eo ho zicour, mes penaus n'eo bet ar garantez evit an nessa ha calon vad an den o deus. ... An Aotrou D. a ziskennas, a zavas en he garroz, a lam hag an tri buguel e kichen ar baourez coz avo eno arrog, ha neuze hen hag ar zoudard a deu var dreat. Red eo gouzent penaus an Aotrou D. en deus pevar loguent vloas. Digouezet e Paris, e pae car evit ho c'has pephim d'he lojeis, hag e ro dezho ouспен eun aluzen gaer. Neuze eza he unan d'he di gant ar blijadur da veza great eun ceuvr-a drugarez, ha da veza eun tem seuzet he unan evit renta servich da dud paour.

Eur vech all an Aotrou D. a voa he nnan en he garroz evel an dro ma on eus comzet anezhi. Neuze ez ea eus a Paris da Boulogn. Pa zonje nebenta, e santas oa pounnereat ar c'harroz hag oa tennoc'h var ar marc'h. Distrei a ra da zellet, hag e vel eul labourer savet e lost ar c'har hag azezet eno dibreder. Evel kent pa velas an Aotrou D. o sellet outhan, e savas aoun gantha, hag ez ea da lamet knit. — Da beleac'h ez it-hu, eme an Aotrou ? Savit ama em c'hichen, hag e viot cals aessoc'h evit aze. Al labourer a zavas er c'harros ; mes gouscoude oa lent ha nec'het eun tamig. Mes abenn eur pennad en doa collet he lenteguez, ha setu hen o lavaret d'an aotrou D. : — Red eo anzaou, evel kent, Aotrou, ez a an traou cals guelloc'h hirio evit guech all. — An dra-ze so guir, eme'n Aotrou ; mes petra gavit-hu a ia guelloc'h hirio ? — Hag izom am eus da lavaret deoc'h ? — Ia zur. Marteze e fell deoc'h coms eus an hentchou houarn, eus an telegraf electric... — Ne ket e traou evelse e sonjan-me. — E petra-ta ? — Guech all, Aotrou, e roet taoliou fouet d'ar re a zave e lost ar c'harroziou, hag hirio e peder anezho da zevel ebars. G. M.

UVRE EUN ERMIT.

Eun Ermit goude beza bet chomet pell da gompren ar varn barticulier a deuas ar c'houket dezhan hac en devoue an uvre-ma : Guelet a reas hor Zalver azezet en he c'hloar ; e c'hars he dreid ez oa eun Ael eur valanc gantan en he zorn, ha dre ma teue eun den maro dirazan e lakea er balançou an daou bacat a ioa gantan. Re alies ar pacat a veze ar pec'hejou ennan a veze ar brassa hac ar pounerra a gals, elec'h pacat an ceuvrou mad a veze goulllo ha goal scanv. Gouscoude e teuas eur vaouez ag a ioa cals brassoc'h he facat a ceuvrou mad eguet eguile. An Ermit en doa plijadur dija ; mes peguer sebezet e oue, goude m'hen doa laket an Ael an daou bacat er valanc, pa oue cavet an hini bian ar pounerra, ha pa oue savet an hini bras e doare pa na vije nemet avel ennan. An Ael o velet oa souezet an Ermit a reas sin dezhan da dostaat, hac a zigoras ar pacat bras dirazan. Guelet a reas ebars eleis eleis a bacadou bian, ha var bep hini anezo oa scrifet unan eus ar gueriou-ma : pedennou, coessionou, communionou, aluzennou, etc. — Penos ta, em'en Ermit, ec'h ell kement all a ceuvrou mad beza ker scanv e balançou an eternite ?... An Ael a zigoras unan eus ar pacadou bian, hac a oa goulllo ; goudeze e tigoras eun all hac oa goulllo ive ! An Ermit a zionas neuze. Anaout a reas en uvre-ze eur guentel a rea Doue dezhan evit her c'helen, gant aoun na raje he oberou evit plijout d'an dud ha na golje evelse he virit. Lavaret a reas ennan he unan : ar mad

a rear dre fougue pe dre ourgouil ne de mui mad dirag Doue, eleac'h eur verennad dour roet en he hano ne jomo ket ep recompanç.

AN TOULL DOUN.

Eun deis eun den o pourmen var ar meas a velas ous ar c'hostes sounna eus eun toull doun spontus eur vezen ag a ioa enni eur seurt frouez a blije cals dezan.

Kerkent, ha n'eus fors pe daill a ioa evintan da derri he c'houzoug, e laca en he benn mont da guerc'hat eus ar frouez-se. Caer ho deus he vignounet her c'hentelia o clasc hen diouall dious droug, e tispriz ho aliou mad; mont a ra a lamou, a rus, var riel, en eur rampat, ha cetu hen ec'hars troad ar vezen. Scrimpat ou-thi hen doa da ober, ha n'oa ket eun dra eas; crial a reat oontan e colje he vuez.

Lezel ra ar re all da grial, poania a ra ker couls gant he zaouarn ha gant he dreid m'eo en em gavet e beg ar vezen, el lec'h n'eus dindan he dreid azioc'h an toul doun nemet eur scoultr ken displet ma c'hell terri da bep mare.

Deut d'an traon! Dent d'an traon! a lavarer dezan a bep leac'h.

Mes sulvuy a aoun a guemer ar re all ous he velet sulvuy e teu da veza divergount; goap a ra eus ar spount o deus, ha dre fouguerez e fell dezan pignat huelloc'h c'hoas... Ar scoultr a strac hac a dorr, hac an diskiant a goes gantan en toull doun.

Ne ket dies gouzout petra a fell d'ar barabolen-ze da lavaret. Ar pec'heur a n'hen em laka ket dalc'h-mad e tro da goeza en eun toull an dounna hac an tenvalla a zo, pa fell dezan caout eus ar frouez a blij d'he galoun! Ar vuez ag hi a zo creoc'h, startoc'h eguet ar scoultr-se m'edo hon den dibouel varnezan azioc'h an toull doun?... hac ar maro ha na hell ket da bep mare terri ar scoultr a zoug ar pec'heur? R.

Eur Zoudard nec'het.

Epad ar vrezel diveza so bet en Itali etre ar Francizien hag an Autrichianet, eur zoudard en em gavas nec'het bras. Edoat a veac'h oc'h en em ganna, hag ar Francizien, na petrata, a c'houneze ato. Eun dervez eur rejimant, o vont varlerc'h an enebourien pere a dec'he, en devoa da dreuzi eur pezdouar leun a laguigner. Eur zoudart, eus a botret Breiz-izel, a zancelas bete pennou he zaouliu en eun toul lagnen. Poan en devoue o clasc en em denna ac'hano. Gouscoude, abouez roueat avoalc'h, e tennas he zivesker eus ar pri goet-ze. Mes eur votez dezhan a jomas c'bars, ha caer en devoue, ne ellas ket he c'haout. Setu-hen ta o redet da heul he gamaradet, eun troad arc'hennet, hag eun troad diare'hen. Ec'h ellit cridi, ar zoudard n'edo ket ep neac'h. N'oa ket brao brao da vont evelse dirag he vistri. Mes ep dale e tigoueschont var eun dachen eleac'h ma zoa eun niver bras a Autri-

chianet, hag eno e voue tan adarre. Kerkent ha ma vo comanset an emgann, ar zoudard-ma a velet o skei an enebourien evel pa vije egaret, ha bep en amzer plegue hag e furche evel pa vije o clasc eun dra bennag.

Pa voa eanet ar stourmad ha casset an Autrichianet da beuri, eun ofiser [pehini] en doa evesseat oc'h ar zoudard-ma epad an emgann, a c'houlennas outhan.

— Petra rea dide plega ha stouet d'an douar bep amzer epad an abaden?

— Ah! me ia da lavaret deoc'h, va c'habiten, ma zo an dichans ganen hirio epad an deiz. Er mintin-ma o tremen an draonien duhont, oun sancler el lagnen, ha em eus collet eur votez. Neuze e lavaren ouzin va unan eur c'hazerlik bennag, emichans, en devezo bremaic vadelez da rei he votez din. Evelse pa eo digoret an ta em eus discaret brassa cazerlik a voa dirazhon. Plegu oun bet da denna he votez, mes bah! re vian! Neuz oun eat d'eun all; re vian ive. Guelet em eus neuz eur paour kez treud hag a herelle var he zivesker. Evit hema eme ve, ne dal ket ar boan skei varnezhan ne ket mad he voutou din-me. Eat oun larcoc'h, hag scoen ato var ar re gorfeta. Ha ne ket dischans a eus-me? Trivac'h am eus discaret, hag eus a drivac'h nicun anezho n'en deus gallet rei din eur votez bre avoalc'h dioc'h va zroad! Gouscoude va zroad-ma ne ket bras, evel a velit.

— Petra fell did, eme ar c'habiten, an Autrichianet so hirio oll en ho bouteier ber. — Hag hen da gouez d'an ofiserien vras dischans ar Breton kez pehini zonje ket zoken en doa great burzudou en devez-ze hag en doa gounezet ar groas a henor hag eur bouteier nevez. G. M.

PREIS AN ED.

Table with 4 columns: Location (KEMPER, PONTNABAT, MONTROULEZ, BREST), Subscription Type (C'huevrer), and Price (Guinis, Segal, Eiz, Ed-du, Kerc'h, Avalou-douar).

Ar Gerant : AR. DE KERANGAL

Kemper, moulet gand AR. DE KERANGAL, Moulet an Escop

FEIZ HA BREIZ,

HELLOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezouec.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten a goust :

Table with 2 columns: Subscription Type (Eun bloas, Evit c'houez-h miz, Evit c'houez-h miz, Evit c'houez-h miz) and Price (DAOU SGOUET, EUR SGOUET, C'HUEC'H REAL, DAOU VENNEG).

Abonnamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Autrou MORVAN, Belec e Kemper.

Ar paeamanchou a dleer da adressi d'an Autrou SALAUN, ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Autrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

Guch all eun den gouziec var he veno, a fallas dezhan ne da gridi penaus var an douar netra ne droc, ne ma ne live. Unan eus ar re a voa oc'h he zilaou da rei ar guentel gaer-ze, en em lakeas da drei en dro d'an douar evit diskuez dezhan oa gaou ar pez a lavare; hag evel ma talc'he c'hoas d'he fals creden, en em lakeas da rei an douar dorn dezhan. Neuze gouscoude, oun red dezhan anzaou penaus an hini her scoe a finve he vrac'h. Brounna ve c'hoaz unan bennag hag o defe c'hoant da nac'h an traou burzudus, ar miracloù, e c'heller lavaret penaus Doue a sco varnezho ive en eun doare bennag evit ho effontagn da anzao e ra burzudou pa gar. Bannet a lacat eur burzud bennag dirag ho daoulagad.

Setu ama adarre eun all, ar sœur Casimir, eus a Escopli-Sens, pareet dre vuzud dioc'h eur c'hlenvet oc'h pellin n'oa mui pare ebet. Ar medecin he unan, hac ne deo ket eun den re egredie, a assur n'e deus gallet pareu nemet dre virac'h. Collet e doa he mouez, he nerz hac oken he anaoudeguer. He c'hoarezet a ra eun navet evit he troad aoter ar Verc'hez, ha kerkent e teu dezbi ar goms, oc'h ell parlant ha zoken cana. He nerz a zistro kerkent dibri a ell bouet, hag antronoz e za d'an ofiser. Ne jom ganthi eus he c'hlenvet nemet ma zeo eun tamic dinersoc'h ha ma e deus muioc'h a naoun evit kent, pa pez ne ket souez goude beza bet keit all epad hini. Setu penaus e tiskuez Doue dalc'h mad he c'halloud ha madelez ar Verc'hez Vari.

Eun Eskob a Frans, Escop Nim, en he vandamant evit ar c'horaz, a lavar penaus ar penn caoz eus a gals an dizurziou a veler hirio etouez an dud, eo an dispignou re vras a ra ar iaouankiz pe a rer evitho. Ac'hano emezhan e teu an dud iaouanc-ze da guemeret techou fall, d'en em rei d'ar fougue, d'ar pec'het, da lacat ho zud da goeza er verrentez, hag aliez da goll ar feiz pe da viana da zemplat enhi. Kement all a alfet da lavaret evit an dud divar ar mæz. Cals eus an dizurziou a veler etouez an dud, ha dreist oll etouez ar iaouankiz, ma ve

evesseat mad e caffet n'o deus ken penn caus nemet ma zeus aleiz a dadou hag a vamou hag a lez re a arc'hant etre daouarn ho bugale c'hoaz iaouanc. Ac'hano e teu d'ar vugale-ze ar c'hoant d'en em visca caeroch evit na c'houlen ho stad; ac'hano e teu ma en em roont abred d'an evach ha d'ar c'hoariou. Ac'hano e kemeront techou fall e pere a dra sar ne vijent kuezet morse ma na vije ket bet re a beadra en ho ardanez. An techou fall-ze, eur vech kemeret, n'ho zorrer nemeur, hag an dud iaouanc-ze, eur vech deut da veza mistri eus ho danvez, a zalc'h d'ar memes dizurziou, hag en em ro dezho zoken alies goasoc'h goas. Ac'hano, evit ar vuez-ma, tieguezioù mad o vont d'an traon, tud en dienez var fin ho amzer; evit ar vuez all, cals eus an dud-se a gollo ho ene, rag ne dorrin morse ho goal voazamanchou, ha follenteziou ho iaouankiz a ielo gatho bete'r bez. Hoguen, hel lavaret a ran c'hoas, an dud-se mar o divije bet nebeutoc'h da zispign er bloaveziou kenta eus ho iaouankiz, ne vijent morse coezet en dizurziou-ze pere a ra ho malheur er bed-ma hag er bed-all.

Dimerc'her al ludu eus diblaset dec Missioner eus a di ar missionou diaveaz bro, evit mont d'al leac'h merket da bep hini anezho. Setu ama ho hanojou :

An Aotronez Herry-August Blanchard, eus a Boatié, ha Jakes Mac-Carrou, eus an Irland, evit Coimbatour; Sebastian Frichot, eus a Paris; Loiz Herry Michaud, eus a Luçon; Clauda-Victor Cros, eus a Lyon, hag Osee-Gedeon Legrand, eus a Boatie, evit Saigon. Mari-Joseph-Aimé Baulez, eus a Varseil, ha Loiz-Emil Simonet eus a Langr, evit Pondichery. Jul Alfons Cousin, eus a Luçon, ha Ian-Vari Marin, eus a Autun, evit ar Japon.

Unan eus a renerien clouerdi pe seminer Versail, a scrif deomp ar pez so ama varlerc'h, oc'h hor pi-di d'heñ lacat er gazeten :

Rei a ellan deoc'h eur c'helou bennag divar benn

pere n'o deus ket c'hoas a c'hriziu doun.

Petra benag ma zeus eur mestr mad oc'h ober, hag a voar cals guelloc'h evidomp petra zo izom, na jomomp ket gouscoude ep ober hon lod. Evit beza tiec mad e ranker ober cals traou, e ranker gouzout, ha zoken araog, meur a dra, e ranker beza var evez.

Ma creten lavaret ar pezh a zonzjan, e lavaren : lakeomp evez oc'h ar bouet cbatal; brema e sao ar ieot, mes marteze e miz ebrel ne rai ket. Ar goan a dle beza e penn pe benn eus ar bissac'h. Ma na espernomp ket brema ar bouet loenet, e tissemp beza ber. Mes eun tiec mad hag eveziant a gaf crog ato eun tu bennag.

Ar glaoeier so bet e fin an discar amzer hag er goan o deus stardet an douar, hag a lacai al louzeier fall da bouza gant an nevez amzer. Mes dioc'h eur c'hostez all al labouset bian n'eus bet nag ere'h na seorn oc'h hegal outho, hag o deus distrujet, lonket eur bern a ajou fall hag a brenvedigou. Evelse e laca an Aotrou Doue ato ar mad e kichen an droug.

Na zistrujomp ket eta al labousedigou-ze, rag eur vad vras a reont deomp. E kementse e vezo red c'huen-nat a zevri; mes bez' hon euz divrec'h, hag ostillou evit kementse.

Pa vezo evesseat mad oc'h pep tra, ar goan ne vezo ket bet ker fall ha m'or boa aoun na vije, hag ar blavez ne vezo ket ken abred ha ma sonjet.

Brema on eus re a c'blao; aben daou viz marteze e clemimp gant re a zec'hor.

Na ancounac'haomp morse penaus abouez poania, labourat, beza reglet, evessaat, e teuer abenn a bep tra.

G. M.

SANT-BRIEC. — An aotrou Chatton, person Paul, bet guech all oc'h ober scol e seminer-bihan Plouguernevel, so hanvet person e Guengamp;

An aotrou Guichet, person Plestin, so hanvet person e Landreguer;

An aotrou Moignet, person Callac, so hanvet person e Plestin;

An aotrou Poncin, person Peavenan, so hanvet person e Callac.

Evit cotnerou ar c'horaz, ar 24 a vis c'huevrer 1866, ez eus bet eun ordination e Sant-Briec. Dec cloarec iaonanc o deus recevet an tonsur, pe ar gurunen; unan ha tregont o deus recevet ar pevar urs biban; great ez eus c'huezeg abostoler, pevarzec avieler, ha c'huec'h beleg.

Ervez eul lizer eus ar ministr, roet ar 7 a vis ebrel 1851, ar re a golfe loenet dre glenjejou stagus n'o deus guir ebet da gaout digoll nemet mear ar barrez a rofe testeni dezho eus bet var dro al loenet-ze eur medecin-veteriner aprouvet ha carguet da louzaoui al loenet-elan. Evit ma c'helfent caout digoll ep ma ve bet ar medecin-

ze var dro ho loenet, eo red ne ve medecin-veteriner ebet varn'bed diou leo dioc'h al leac'h m'eo bet ar c'hlenvet.

Mad e ve eta d'an dud divar ar mæz anaout ar vedecinet veteriner - ze aprouvet ha carguet da louzaoui al loenet-elan. Setu ama ho hanoiou :

- An aotrou Kerzean hag an aotrou Tanguy, e Landerne;
- An aotrou Feger e Brest; an aotrou Bergot e Lannilis;
- An aotrou Elcouet hag an aotrou Morel, e Montroulez;
- An aotrou Richard, e Kemper;
- An aotrou Binet, e Kemperle.

Eur c'haner, unan eus an dud-ze a c'honit ho bouet dioc'h ho mouez, a voa en em laket en dez-all da gava dirag eur vanden dud. Eleac'h ma edo ez oa eur bern foen adren he gucin. Red eo ne vije ket dudies he vonez, rag kerkent ha ma voa comanset gantha he ganaouen, setu ar re her silaoue oc'h en em lacat lod da c'hoarzin, lod da sutal, hag oll da ober trouz ha safar. Ar c'haner gouscoude ne lentas ket. Sellet a ra adren he gucin hag e vel ar foen. Setu hen hag o vont da guerc'hat foen hag o lacat anezho briat ama briat ahont. Pa en doa laket evelse eun nebeut briaou foen a rene, e tro oc'h he dud hag e lavar dezho : alo ! deut pa guerot; setu aze prest ho coan ! piou a jomas balc'h he c'hinou ? An dud-ze pere, me voar vad, ne voant ket e sonch beza kemeret evit ezen.

En eost tremen eun tiec a gassas he vevel da di eun amezeg en eur gueriaden all evit goulenn outhan he zornerez. Hema a respontas d'ar mevel : « va dornerez-me ne da morse ac'hann. Lavarit d'ho mestr digas he eost ama, hag e vezo dornet dezhan. »

Ar c'homzou-ze a voue kemeret evit eur goaperez gant eguile pehini a glaskas an dro da gas, evel ma leverer, an dors d'ar guær. He c'haout a reas ep dale.

Eur pennad goude, perc'hen an dornerez a ias da arat hag a dorras he alar. Setu hen o cas ive he vevel da c'houlenn alar he amezeg. Hema d'he dro a respontas : « va cler-me ne deont morse var ar mæz. Lavarit d'ho mestr digas he barec ama, hag e vezo aret dezhan. »

G. M.

PRIS AN ED.

KEMPER. — 3 Meurs.		PONT'NABAT — 4 ^{or} Meurs.	
Guinis....	46 lur, 89 c.	Guinis....	46 lur, 78 c.
Segal....	40 lur, 46 c.	Segal....	40 lur, 20 c.
Eiz.....	9 lur, 07 c.	Eiz.....	9 lur, 89 c.
Ed-du....	9 lur, 04 c.	Ed-du....	8 lur, 63 c.
Kerc'h....	7 lur, 97 c.	Kerc'h....	8 lur, 75 c.
Avalou-douar	3 lur, 35 c.	Avalou-douar	2 lur, 60 c.

Ar Gerant : AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand AR. DE KERANGAL, Moulur an Escopti.

FEIZ HA BREIZ,

KELLOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezouneec.

Eur Abonnamant d'ar Gazeten a goust :

Evit eur bloas.....	DAOU SCOUET.
Evit c'huec'h miz.....	EUR SCOUET.
Evit tri miz.....	C'HUEC'H REAL.
Eur gazeten ebken.....	DAOU VENNEC.

Ar pacamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar serijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Belec e Kemper.

Ar pacamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 17 Meurs 1866.

Mad ar c'horaz e rer alciz a brezeguennou, hag e kar hevear anezho. E kar dreist oll e veler, ha da zul ha da handez an dud oc'h en em zestum evit silaou comzou Doue. An den er deus izom e ve digasset da zonch dezho bep en amzer eus a Zone, eus a virionezou ar feiz, eus he zevenioù; anez e teufe d'ho ancounac'hat. Evelse d'ar mare-ma eus ar bloas, epad ma teu pep tra en em veze var an douar, an ilis a fell dizhi he vezeze, sperejou an oll gristenien ar zonch eus ar guirionezou-ze a dlefe beza dalc'h mad dirag hon daou lagad.

Hebeantien ar feiz a labour ato da zistruja ar Relijion ha da goll an eneou; hag eo red stourm outho, hag eo red kelen ar gristenien ha diskuez dezho petra dleont da ober evit na vezint ket tromplet gantho.

Seulvui ma c'hanavezer ar guirionezou a deu deomp digant Doue, seulvui ho fleustrer, seulvui ec'h evesseer outho, seulvui ive ho c'harer, seulvui a blijadur a vez o sonjal enho, seulvui e caver æssoc'h da viret ar goue nemennou a roont deomp.

Ma ve anavezet mad ar relijion, e ve heuillet guelloc'h. Mes adversour ar silvidiguez a ro da gridi d'an dud gouzout, d'ar re zoken o deus eun tamic descadurez bennag penaus studia guirionezou ar feiz, studia lezen Doue mede ket dioc'h ho doare, n'o deus izom ebet d'he ober d'ar re n'o deus ket a zescadurez e ro da goll oc'h gouzout gouscoude avoalc'h, hag e clasc miret outho na zeskint hirroc'h. Hag evelse ez eus eun niver bras haner anavezont ket avoalc'h ho relijion, ha dre ze ne oulent morse he heuilla gant ar memez calon evel ar re he anavezet mad.

Setu eng ar c'hem bras a zo hag a vezo ato etre ar guir Relijion hag ar fals relijionou, da lavaret eo, etre ar guir hag ar gaou. En guir Relijion, ar re he anavezet muia he heuil ive gant ar muia plijadur; er fals Relijionou

ar re o deus muia anaoudeguez anezho eo ar re guenta o trei kein dezho.

Ar gardinalet so e Rom carguet eus a aferiou canonization ar zant, a zo prez varnezho brema. Eus a Frans epken ez eus eun ugent bennag hag a zo hano d'ho c'hanoniza pe d'ho discleria eurus. Etouez ar re all ema Beniguet Rencurel a behini e comzemp er zizun all, ha Ian Vadezour Viannay, person Ars.

Pii nao a lavar aliez n'en deus c'hoant ebet brasoc'h evit an hini da rei d'ar gristenien cals a zifennerien en env. « Ra c'hallent, emezhan, mont ganen dirag tron an Aotrou Doue pa vezo deut an dervez din da vont di. »

Ar bloas a zeu, 1867 a vezo burzudus etouez bloaveziou ar Pap Pii nao. Da viz even, eun niver bras a Eskibien hag a gristenien vad a vezo e Rom, evit celebri, en iliz Sant Per, an deiz ha bloas eus a verzerinti prins an Ebestel, ar c'henta Pap, hag evit guellet canoniza ha discleria eurus meur a zen santel.

En Itali, an dispac'herien a ra ato freuz muia ma c'hellont. Kement hini a ra eur vad bennag a so en ho hent. Ar re en em ro da guelen ar vugale ha da rei dezho eun descadurez christen ne blijont tam d'an dispac'herien-ze, hag ober a reont dezho goassa ma c'hellont. Dalc'h mad e tigouez e Rom freret pe breudeur eus ar scolachou christen laket gantho er mæz eus ho ziez. Eus a dri di varnugent o doa en Itali, ugent so serret, hag an tri all a vije serret ive panefe perc'hennou an tiez-ze a vir. An tiez o veza dezho, ec'h ellont lacat enho an nep a gueront.

E Oria, er c'harter hanvet Pouil, en Itali, n'eus ken hano nemet eus a zantelez eun intanvez paour, oajet a nao bloaz ha tregont. Ar vaouez-ze so he hano Palma Mattarelli. Douguen a ra mercou ar bassion en he daouarn, en he zreid, en he c'hostez hag en dro d'he fenn. Caer e deus bet cuzet epad dec vloaz, tud ar

e'harter so deut da anaout ar burzudou-ze. Medecinet casset da zellet outhi o deus anzavet n'o doa ar skiant hag ar vouezieguez netra da velet eno. Ar brud a guementse so deut bete Rom, ha coms a rer cals eus a draou lavaret ganthi divarben ar pezh a dle c'hoarvout er bloa-ma.

Eun dra gaer eo gullet ato an dud iaouanc a ia da Rom d'en em lacaet en arme ar Pap. Eur blijadur eo ho gullet er guer-ze devot evel menec'h o vont eus an eil iliz d'eben. E Sant-Per dreist e veler bandennadon anezho. An Tad santel en em gaf gantho avechou; neuze e chom a za, e ro dezho he vennos hag e lavar dezho ato eur goms vad bennag.

Er sizun dremenet ez ea adarre eus ar Beljic pemp ha c'huoc'h uguent en eur vandeb, ha ker bras eo an niver eus an dud iaouanc-ze ma zeus poan o caout plas d'ho loja e Rom er c'hazerniou.

Ar re a ia da arme ar Pap a ra al le da veza fidel da Bii nao ha d'ar re a vezo Pabet var he lerc'h; da veza christenien catolic, da viret n'o devezo morse perz ebet etouez enebourien an iliz santel, pe seurt bennag e vent; ha da vervel kentoc'h evit dilezel an hini ma en em lekeont en he zervichi.

Setu ama eur pennad lizer scrifet gant eur missioner eus an Americ d'he guenvroiz eus ar Beljic, hag a ziskuez ar boan hag ivez ar blijadur en deveus avechou ar missioner etouez an dud c'houez.

Daou vloas anter oun bet person e kar Dal. Gallet em eus sevel eno eun ti scol, eur presbital, eur sacristiri; dressa an iliz, prena eur vered, ha kementse eb lezel eur guennec dle. Doue a-roe he vennoz d'am labour; creski a rea an niver eus ar gristenien, ha dont a reant d'ar zervich divin. Brema em aoun e creiz an dud gouez, er mission hanvet *Reserv*, antecant leo dioc'h Dal. Ama n'em eus na ti, na chapel, na scol, na netra. Pep tra a vanc.

Gouscoude em eus leac'h avoalc'h da veza iaouen, ha ker contant oun ha ma c'heller beza en draonien-ma a zaelou. Oh! ma c'houfe hor beleien iaouanc eus ar Beljic peguement a levenez en deus ar missioner, e-teufent ama a vandennou. Mont a rafent dreist kement so var ho hent evit dont da rei ar bara a vuez da eneon hag ho deus naoun ha sec'het d'ar virionez. Dissul diveza em eus lavaret an oferen e lochen eun den gouez. Eno pep tra a voa paour; ornament ebet; eun daol evit aoter. Mes an dud gouez a lavare ar chapeled en ho iez hag a gane canticou. Kementse oll a lakea an daelou da zont em daoulagad hag e lavaren ouzhin va unan: e guirionez, eurussoc'h oun evit Personet ar Beljic o cana an oferen en ho ilizou ker caer hag e creiz eur c'han ken dudius.

An dud gouez paour-ma so bet c'hoas missionerien en ho zouez; mes dilezet e voant abaoe ar vrezel zo bet en ho zouez e 1856. Ar mission a voue distrujet oll neuze. Lod anezho gouscoude a zalc'he ato d'en em

zestum bep sul evit lavaret ar pedennou. Unan eus ar Pennou a brezegue. Roet o deus din ar c'hloc'hig gant pehini an tad Cherouz, ho diveza missioner, ho galve d'ar zervich divin. Pebez feiz, pebez courach da zerc'hel mad evelse epad deg vloas ma int bet dilezet? Nan, an Aotrou Doue ne alle ket lezel pelloc'h an dud vad-ze ep belec.

An Aotrou'n Escop so eat en derveziou-ma da rei ar gouzoumen (ar gonfirmation) er parrezion hanvet ama varlerc'h:

- 13 Meurs. — Coray. — Da Goray e tle dont bugale Leuhan ha re Tregourez.
- 14 — Spezet.
- 15 — Sant-Hernin. — Motreff.
- 16 — Keraes. — Plouguer, Plounevezel, Kergloff.
- 17 — Poullaouen.
- 18 — Ursulinezet Keraes.
- 19 — Cleden-Poher. — Landeleau.
- 20 — Plounevez-ar-Faou. — Ar C'hloastr-Pleyben.
- 21 — Castelnevez. — Sant-Goazec, Laz, Santhoz.

An Aotrou Morvan, bet hanvet person er Forest Foueznant, so hanvet person e Pluguffan.

An Aotrou Guillerme, vikel er C'hloastr-Pleyben, so hanvet person er Forest Foueznant.

An Aotrou Floc'h so hanvet vikel e Cast.

An Aotrou Madec, beleg e Dirinon, so maro er sizun dremenet. G. M.

AR FALS DOCTORET HAG HO LAVARIOU.

(XXIV).

(EIL PENNAD).

Goab a ve gret ac'hanon; ret eo ober evel ar re all.

Ia pa reont mad. Evelze pa velot oc'h amezeyer oc'h ober ann aluzen d'ar paour, oc'h ober vad d'ho nesa, o vont aliez d'a goves, bep sul d'ann oferen ha d'ar gousperou, o tec'het d'euz ann droug hag o poania d'ober ar mad; neuze gret eveltho.

Mæz mar gullet anezho o laerez, oc'h ober gaou oc'h ho nesa, o labourat d'ar zul, o vesvi, ho tispenn ho nesa, na rit ket eveltho.

Lavarit ar virionez: ma velfach eun all oc'h en em dol var he ben er mor, o tol he arc'hant dre ar prenest er mez, o visca zoken he zillad var ann du-eremp; ne raffac'h ket eveltho. Oh nann, nann, ne ket collet va fenn ganeen c'hoas; ha coulscoude, pa velit anezhan o vont a enep lezen Doue, ho laza he ene dre ar pec'het, o coll ar barados, oc'h en em dol var he benn en ifern e lavarit: ret eo ober eveltho. Mæs buez ann ene a dal cals muyoch evit hini ar c'horf; madou ar bed all a dal cals muyoc'h

an hini a oa carget d'euz ar scol e oa; mad, va mignon, emezhan en heur voasca var dorn ar c'hristen yaouanek, c'houizo eun den a galon hag a benn; kendalc'het hag e teuoc'h d'a veza un dra bennac eun deiz; goudeze, epad m'a chommas er scol-ze den na lavaras netra dezhan, pell ac'hano ne oa nicun hag a vije ker meulet ha ker caret.

Bezit mad, carantezus, madelezus e klever ann holl; c'hoarzit gant ar re-all d'euz an traou a heller c'hoarzin anezho eb pec'hi, heb dale den n'a lavaro netra deoc'h evit gullet ac'hano c'h oc'h heulia ho relijion.

Eun den yaouank, eur c'hristen mad dreist a rancas mont d'a zoudard. En derveziou kenta he genvredeur a ree goab anezhan, abalamour m'a g'elent o lavaret he bedennou, oc'h ober sin ar groas, o vont d'ann oferen ha da govez; a bep seurt a veze gret anezhan. Eun devez e c'houic'hias conje d'ho gervel holl en dro dezhan, e pignas var eur scaon hag e lavaras dezho: Caer ho po ober goab ac'hanon, ne reoc'h ket din chench; an autrou Doue zo guelloc'h evidoc'h, ne ket gour? Ma, me zo guelloc'h ganeen plijout dezhan evit deoc'h, iit d'a gousket, ma ne ket mad an dra-ze evidoc'h; ha pa vec'h holl aze em enep, me ne rin ket eur gamet adren. Ar re all a zirollas da c'hoarsin ha da lavaret mad a res. Hag abaoe den n'en d'eus lavaret netra dezhan.

Eun droat all eun den divar ar mez a oa en em gavet da zibri he bred gant eun nebeut bourc'hichen en eun ty e ker. Ar sadorn a oa; goulen a ras eur banne souben ar rous hag eun alumen viou. Eun daou pe dri deus ar vouc'hichen a en em lacas da vuse'hoarzin; unan anezho divesoc'h evit ar re all, a lavaras d'ezhan: C'houi eta paeron na zebrit ket a gie? Nann, autrou, ha c'houi a zreb? Ia va c'homper; goaz a-ze deoc'h autrou. C'houi a vers oc'h ene evit eun tam kic; dimme e tal muioe'h va hini. Ar re all a zirollas da c'hoarzin. Neuze e savas ar c'hoars etonez ar re all; unan anezho zoken a lavaras dezhan en eur zistrei outhan: mad a rit, emezhan, o terc'het mad d'ho lezen, ha me ive a fell d'in ober eveldoc'h; me ive zo kristen.

N'ho pezet aoun ebet rac eur gomz, eur zel, eur c'hoarzaden. Losket da vont d'an ifern ar re o d'eus c'hoant d'a vont, mæz c'houi saveteit oc'h ene. Losket da c'hoarzin ann neb a garo, divezatoc'h e c'hoar-zoc'h dezho ive d'ho tro. Y. P.

Ia, ia, kea da gerc'hat ar foen pe guir an aillounet-ze... Laka starna, da vont d'ar prat bras da genta, a goude... Per n'oa ken evit parlant; he boaniou e serr e zroug a drec'haz he ners, kuez a reaz evel e sem-pladurez. Ouz he velet er stad-ze, Jakez a lavaras da

YVONIC TIMAD.
(TREDE PENNAD).

Ia, ia, kea da gerc'hat ar foen pe guir an aillounet-ze... Laka starna, da vont d'ar prat bras da genta, a goude... Per n'oa ken evit parlant; he boaniou e serr e zroug a drec'haz he ners, kuez a reaz evel e sem-pladurez. Ouz he velet er stad-ze, Jakez a lavaras da

Ia, ia, kea da gerc'hat ar foen pe guir an aillounet-ze... Laka starna, da vont d'ar prat bras da genta, a goude... Per n'oa ken evit parlant; he boaniou e serr e zroug a drec'haz he ners, kuez a reaz evel e sem-pladurez. Ouz he velet er stad-ze, Jakez a lavaras da

Petra fell d'id-de e ve ann hunvre-ze? Da adori a raimp ni var ann douar, da vamm, da vreudeur ha me? gouarizi he vreudeur a greske, mes he dad a envore a zevri var ann traou-ze hep lavaret gher.

Eun devez ma edo he vreudeur o tiouall ann tropellou e Sichem, Israël a lavaraz da Joseph : Da vreudeur a zo o tiouall ann denved, e peuriou Sichem, c'hoant am euz ez afez beteg enn-ho. Joseph a respontaz : Pa gherrot, va zad. — Kea eta, eme Jakob, ha guel ha mad eo ar bed gant da vreudeur ha gant al loened, ha digas kelou d'in euz ar pez a rear eno. Jozeph a guitaz eta traounien Hebron, evit mont da Zichem.

Eur goaz o veza he gavet o redek dre ar mesiou, a c'houennaz digant-han petra a glaske. Va breudeur a glaskann, eme Joseph, livirit d'in peleac'h emaint o tiouall ann tropellou. Ann den-ze a respontaz d'ezhan : Eat int kuit ac'han, hag ho c'hlevet am euz o lavarout : Deomp etreze Dothain. Jozeph a zalc'baz da vont varlerc'h he vreudeur, hag ho c'havaz e Dothain.

Ar re-ma o veza he velet euz a bell, araog mac'h arruaz beteg enn-ho, a reaz ho zonz d'hel laza. Hag e lavarent etre-z-ho : Setu arru ann hunvreer; deomp, lazomp-hen, ha taolomp-hen er puns kos-se, ha ni lavaro : Eul loen fero en deuz hen taghet; ha neuze e vezo guelet da betra eo talvezet d'ezhan he hunvreou.

Ruben, o klevout ar c'homzou-ze, a glaskaz he denna euz a dre ho daouarn, hag a lavaraz : Na lamit ket he vuez digant-han, ha na skuillit ket he c'hoad; taoliteha kentoc'h er punz-hont a zo e kreiz ar gouelec'h, ha dalc'hit ho taouarn divlam a c'hoad ho preur. Komz a rea evel-se, var ar zonz emedo d'hen tenna ac'hano ha d'he gas endro d'he dad.

Kerkent eta mac'h arruaz gant he vreudeur, e lamjont digant-han he zaë marellet, pehini a ziskenne d'ezhan beteg he zeulou, hag hen taoljont enn eur puns koz, ha ne oa mui dour enn-han.

Hag o veza azezet da zibri ho boed, e veljont bechourien o vont d'ann Ejipt, ho c'hanvalet sammet a varc'hadourez da verza er vro binvidik-se.

Judas a lavaraz neuze d'he vreudeur : Petra dalvezo d'comp-ni beza-lazet hor breur, ha beza kuzet he varo? guelloc'h eo he verza d'ann Ismaelited-ze, ha delc'her hon daouarn dinam, rak hor breur hag hor goad eo. Assanti a rejont d'ar pez a lavare.

Pa zeuaz eta ar varc'hadourien Madianited da dremen, he vreudeur hen tennaz euz ar puns, hag a verzaz anezhan d'ann Ismaelited ughent pezh arc'hant. Hag ar-re-man her c'hassaz gant-ho d'ann Ejipt.

Ruben ne oa ket var al leac'h pa oe great ar marc'had. Mont a reaz d'ar puns, ab var he zonz, ha ne gavaz mui ar c'hrouadur enn-han. Reghi a reaz he zillad gant he c'hlac'har, hag o tont da gavout he vreudeur e lavaraz : Ne velann mui ar c'hrouadur, na petra deuin-me de veza! — Mec'haz e leverjont d'ezhan petra o devoa great, ha n'ho doa mui ken preder

nemet da c'houezout penaoz rei da anaout d'ho zad ne velje mui he vap Joseph.

Souba a rejont saë ho breur e goad eur men-gaor ho devoa lazet, hag e lekejont eun den d'he c'has d'ho zad, ha da lavarout d'ezhan : Kavet hon euz ar zaë-man, guelit ha saë ho map ef-hi, pe ne d-eo ket?

Ann tad o veza hec'h anavezet, a lavaraz : Saë va map eo, sious! eul loen fero en deuz he zebret, eul loen en deuz taghet Jozeph! reghi a reaz he zillad, eur gouriz reun a viskaz, hag e pad pell amzer e ouelaz d'he vap ker.

He holl vugale all en em zastumaz endro d'ezhan da glask dousaat he c'hlac'har, mes hen ne fellaz d'ezhan kemerout frealzidighez ebed, hag a lavaraz d'ezo : En eur ouela e tiskennin em bez da gavout va map. Hag e kendalc'he da skuilla daelou.

Hoghen, an Ismaelited a verzaz Jozeph enn Ejipt da Butiphar, den a garg e ti ar roue Pharaon, ha kabitan he zoudarded.

— — —

GUERZ JOZEPH.

Ton : *Sant Isidor, 28, pe Santez Jenovefa, 29.*

Ne oann nemet pevarzek vloaz,
Koulz lavaret, krouadur c'hoaz,
Pa'z iz laouen, a-berz va zad,
Da glask, var vez, breudeur divad.

E Sichem, er peuriou glaz,
E tioualtemp tropellou braz;
Me oa, ec'hiz unan d'am oad,
Lent ha dizroug, evel danvad.

E kichen ann teir palmezen,
N'oa nemet-ho var ar blenen,
E pedenn, p'am oa bet ann eur
D'en em gavout gant va breudeur.

Ha setu hi o tont var-n-oun,
Ha d'am zeuler enn eur puns doun;
D'en em zifenn n'em boa nemet
Va daëlou ha va dinamded.

Prest da vervel gant rann-galon,
E oenn tennet euz va frizon,
Da veza guerzet evel sklav
Da dremenourien dianav.

Da varc'hadourien Arabed
Ughent diner e oean guerzet.
Va breudeur a gounte an aour,
Ha me ouele d'am zadik paour.
Me ouele, beuzet em glac'har,
D'am zad ha d'am breudeur digar. H.

Eur c'harok etre sant Per ha Simon ar zorser

Ann holl a oar piw eo sant Per; neubetoc'h a anav

Simon hanvet ar zorser, abalamour d'ann traou bras meurbet a re gant sikour an drouc-speret. Deut da Rom, goude bout nac'het ar guir fe, e c'honeaz eno kalz a dud d'he relijion dre ar bursudo a re dirag ar bobl.

Sant Per a aruaz, eunn tamik en he c'houde, er memez kor out prezeg Aviel Jesus-Christ. Hep pell data e savas etre d'he ho daou. Simon a brezege he Aviel he unan, bet a oa divez aoualc'h evit laret d'ann unan he oa doue, ha darn hen kredi, pa eo gant an impalaer euz a Rom, enn amser-ze Neron, a lazaz sevel d'han eur statu gant ar c'honcho man : « O Simon Doue santel. Sant Per karget abeurz Jesus-Christ, he vestr, da laret ar virione ha da zigant ho daoulagad d'ann holl, hen diskuliaz evel eur gaouiad d'ann impalaer ha d'he rouantelez. Simon Jozeph anavezet he falsentez hag he c'henvier, a gredaz sponto sant Per ha sant Paul a oa er c'hourz ze ive er Rom, hag a c'houlenas ma vije bet test Neron euz eur c'harok etre d'he. An hani en dije gret ar muia a vuezdou a vije bet ann trec'h ha belek ar relijion vad, oguilera vije bet ar gaouiad ha beleg eur religion all.

Sant Per ha sant Paul ho doa digaset ar vuez da galz a dud varo, enn hano Jesus-Christ, elec'h Simon ne helle ket ober kemend-all. Unan eus ar re savet a varo da vev a oa Patrokl, eunn a vevelien ann impalaer.

Ann dud diraziet, o velet ne oa Simon nemet eur gaouiad hag eur laer, a glaske hen lazo a dolio mein.

Neron a oa en sonj d'hen teuler da zibri d'ar loenet goez Barnet e oa da goll he vuez pa zeuaz ann hardiegeuz d'ann da lavarout d'ann impalaer : « Tri devez c'hoaz, Neron, ha dirag ar bobl e veliet ac'hano o pignall en envou.

— Ha c'hui glev! eme Neron d'ann daou abostol : mar gra pezh a lavar!

— E vevimp ar maro, eme ann ebestel. Mez selaouet d'ho tro, Cesar : « A benn tri dervez e veliet justic Doue. » E pad an amser-ze an daou abostol ne zec'hantont da bedi. Goud a rent penaus ho doa da c'houlen gant Satan a behini Simon a oa ar mevel, goud a rent penaus ann den a n'han he-unan a zo neubet a dra.

Ben ann drivez deiz ar gueur a Rom a bez kaer a oa var ann dachen vraz hanvet ar Forum, o c'hortoz ar c'harok.

Ben eo an de gortocet gant kement a c'hast. Tostad a va Simon gant eur guiskamant a lugerne gant ar zeiz, ann aour hag ann arc'hant. Plego a ra he benn izel izel tostik beteg ann douar pa en em gavaz dirag Neron. He daou enebour, Per ha Paul, a oa eno e kichen ann impalaer. Raktal ma ho guelaz e teuzaz goal livet, e crenaz euz he holl izeli. Pignall a ra koulskoude war lein ar C'hapitol, ober a ra eur zell war ar penno a oa didan he dreid, en em c'hleusto a ra d'ann diaoul, ha kerkent eunn tarz

gurun a grozaz a uz ho fenn. Herve guelet ez oa bet selaouet gant Lusifer. Er memez anaser ez oa clevet eur griadek; chomet eo ann holl souezet. Ar zorser en deuz en em deulet evel da nijal, e guiz eur spalter o kemer he lanz diwar eunn doen; ann avel hen doug, troidellat a ra n'eur bignall evel ar moguet o vont d'en em goll gant ar c'hounalz.

« Simon a zo doue, Simon a zo doue, a lavare ar bobl gant levezet!

Per! eme sant Paul, e za da guemer ann tec'h! Satan hen casso da lec'h all ha pa vo et kuit, Rom a gredo ennan!

Neuze sant Per, dirag an holl, a zav he daou zorn etrezek ann env, hag a gomz ken uhel ken a oe clevet war dachen ar Forum gant neb a oa eno : « Aotrou Jesus-Christ, ann Doue bev am euz guelet o vervel evit ann holl, a zo zavet a varo da vev, a zo pignet enn env, a belec'h e teuset da varn ar re vev hag a re varo, diskoilit breman ho kalloud d'ann dud-man! Ha c'hui, aled Satan, pere a zoug Simon, en em dennet ha leset 'han. Kenkeut ar zorser pehani a valee evel ar lapouzet enn aer a eilpennaz ha dont da gouezel ouz treid ar C'hapitol elec'h ma vruzunaz he benn dirag ann impalaer hag ar Romanet. »

Ne tal ket d'ann den en em lakat ouz kenvroc'h evit-han. Piou a zo krenv evel Doue!!!

J. M. M.

EAL MAD AC EAL FALL.

(EIL PENNAD.)

Mad tre, va mignoun kleis, a lavaraz Hodal,
Te zo, kercouls ha me eur c'hristenik dizall,
Ha ne da ket nemeur, da vis na da ivin
Da glask dour benniguet e guinou eur picin,
Te vo paëron... Souden e velchont eur c'haro
O kerzet buhan ha buhan dre doues pin ha dero;
Araok ar chass e zea ker skan ha ken liger
Hac eun dube spountet gant trous fals eur meder.
O velet al loenik, ar c'hount a chensas liou...
Dispenn a ra he varc'h gant fouet ha gant kentrou,
Ac an oll var e lerc'h a nij vel an avel,
Mes sious! daou a goues, a goues prest da vervel,
Bah! bah! list anezo, eme'r c'hount didrues,
Ne ket evit daou zen e collimp hon derves.
Mad eo, couezit, ruillit betec puns an ifern,
Livirit da Zatan rosta mad oc'h eskern,
A lacat a gostes evit ar c'hount Hodal,
Braoc' kef-tan en deus en he gueur capital.
Ar c'haro, pa voue skuis, a glaskas eur parc ed;
Eun den coz d'ann daoulin, ac e zivrec'h croachet:
Tud chentil, emezan, nan, nan, ne deoc'h biken
Da goll labour eur bloas ha kement a c'houezen...

d'an devezour ! Red eo d'an dud kez-ze mont eleac'h ez int galvet gant al labour, eleac'h e cavyont gounidegues. El Leon ar re zo mevelien pe devezourien n'ho deus ket kniteed ; rag enho ho deus labour hag ez int dalc'het pad ar bloas ; hoguen enho ive e labourer e guis-all. Ne ma ket ar bro dindan peuri evel e Kerne ; an douar panes a vez palaret, ha ne rer ket al labour-ze eb tud ; goude-ze e renker ho c'houenna aliez hed an han ; rag evel a leveront : nao c'houen, nao panezen. Al lin, an idou a vez c'houennet ive. An tiec n'all ket ober kement-ze a labour he-unan ; ha red eo dezan rei da c'hounid da veur-a-hini, rag dont a ra ive an east, a zo teir guech founussoc'h el Leon evit ne zeo e Kerne, pe guir e lekeer muic'h hag e reer guelloc'h ; beac'h zo ta adarre er marc-ze.

Evelse, an oll a gao labour var ar meaz el Leon tog ar bloas, ha chomet ez eus enho ive trevoalc'h a vrea-c'hiou evit ober ar gounidegues pe labour an tiegues e doare.

TH. DE P.

LEVR AL LABOURER. II

III.

Ar c'hoajou.

- 695 *P'en-De* kresket ho koue, goioet ho parkou, Ha ma tispieg ar fao tro var dro ho brankou, Paotr ar zaoud azezet enn disheol, da greitez A zon gand ar vombard eur ganaouen nevez. Evit respont outhan ann holl evned a gan,
- 700 Hag ar c'hoad a zason gant mouesiou kaer unvan. Vit meuli ho C'hrouer, kentre ma tarz an dez E kanont eur zonik gant hast ha levenez. Ha kent ma teu ann noz he kanont eur vech c'hoaz Evit trugarekat ann Doue ho c'hrouaz !
- 705 Mes pebez mouez hetuz, na pebez melodi ? P'ho klevann, eostik-noz, pa glevann ho mouez c'hui ? Holl al labouset all a gemer ho faouez, N'euz eta nemed hoc'h hag a gan noz ha dez. Pep-unan anezho na oar nemed eur zon :
- 710 C'hui a hell chench a vouez, a ganaouen, a don. Brema ho kan a zo eur c'han a levenez, Hag eunn neubend goude leun a dristidiguez, Eostik, eun ho puez, evel enn hon hini, Ha c'hui a gav ivez anken ha melkoni ?
- 715 Pa ho klevan da noz kludet var eur vezen, Trist ha leun a c'hlac'har o laret ho sonen ; Me gred'oc'h euz, eostik, kollet ho kenseurtez, Hag em'oc'h oc'h ober kanvou d'ho parez kez ; Pe kentoc'h o ouela var hoc'h ennedigou
- 720 A zo bet hanter-noaz tennet euz ho neizou. Mes pa zavit ho mouez ken flour e kreiz ar c'hoad, Me gred ez'oc'h laouen, e kanit hoc'h eur-vad. Na freuzit ket eta, bugale, he neizik ; A c'hui, hemolc'hidi, espernit ann eostik,
- 725 Marteze eun nosvez losket gant eun dersien,

Enn eur c'hortoz ann deiz, c'hui glevo he zonen, Trida 'rai ho kaloun, ho trong 'a zistano, Ha pell dioc'h ho kouele ann enoe a dec'ho. Pelleit ouz ho koajou ar sparfel, ar barget, Da dostat ouz ho ti c'hui tezo an evned. 730 Aliez o krial euz goeled he c'hleuzen Ema tost ann arne a lavar ar gaouen, Ann drask a lavar d'ehoc'h e tosta avel gre, Ar voualc'h a ziougan bleun ann amzer-neve.

N'ankouait ket ann derv, pa hadit ho koajou, 735 Ann dero a zo mad da ober arerieu ; Da rei d'ehoc'h treustou kre evit harpa ho ti, Hag ar c'hoad a zo red evit ober listri ; Epad an nozveziou e kreiz kaloun ar goan, Gouezen ebet n'hello guelloc'h dere'hel ann tan. 740 Hadit meur a faven e mesk ho terv ivez, Evit dindan ho skeud kavout freskadurez, Eur faven he unan kresket enn ho parkou, A zebant d'ehoc'h eur c'hoad gant he fennad brankou ; Nag ar glao o koueza stank euz a lein ann ee 745 Nag ann dour o redek, nag holl nerz ann arne Nag ann avel goalern, netra n'hell he diskar, Ken doun ma plant he lost e caloun an douar. Hadit ivez kistin enn ho koajou nevez ;

Ar gistinen a zo ar vella euz ar gouez : 750 He frouezen a zo c'huek hag epad nerz ar gouan, Ho pugale ha c'hui da noz e tal an tan, Gant sist dous evel mel, ha kisten paredet, C'hui a gollo ar zouch eus ho poaniou kalet. Mes ouspen ma 'z-eo c'huek, dous ha mad he frouezen Morse na gavot koad gouel 'vit ar gistinen Na da blencha ho ti, na d'ober anezou, Nag ivez ober glaou evit ar govellou. Enn divez, c'hui po sonch da blanta'n evlec'hen, Hag ar vezen koad-kroaz a zav bet'er gouabren. 760

C'hui eta, va broiz a zivar ar mezou, Lezit ar vourc'hizien da hada ho c'hoajou, Ho c'hoajou pin tener ; 'vel ho tadou kenta, Hadit kistin ha fao hag ann derv kaleta. Ar gouez-ze zo boazet ouz douar Breiz-Izel ; 765 Hi ho deuz griziuou doun, a zav ho fenn uhel, A zalc'h ouz an arne, rag tra na reont van A ro d'ehoc'h binvijou, ha koad da ober tan.

M. D. ha K. Le Galigny 57.
 Hano ar Zent evit ar Sizun-ma.

- DILLUN 9 EBREL. — Annoniasion ar Verc'hez gloriou Vari.
- DIMEURS 10. — Sant Francez a Baul.
- DIMERC'HER 11. — Sant Leon, pap ha doctor eus an Iliz.
- DIZIOU 12. — Sant Izidor, escop ha doctor eus an Iliz.
- DIRGUENER 13. — Sant Hermenejild, merzer.
- DISSADORN 14. — Sant Visant Ferrier.

... sul goude Pasc. Sul ar Pastor
 ... d'ar izuevien :
 ... ar pastor mad. Ar pastor mad a ro he vuez
 ... an devezour, (pe an hini a zioual an
 ... an hini ne deo ket ar guir bastor,
 ... dezhan, kerkent ha ma vel ar bleiz
 ... hag a dec'h kuit ; hag ar bleiz
 ... hag a laca ar freuz er vanden oll.
 ... abalamour ne deo
 ... ket perc'hen d'an denvet.
 ... hag anaout a ran va denvet,
 ... Ho anaout a ran evel mac'h
 ... hag evel mac'h anavezán va zad,
 ...
 ... denvet all ha ne maint ket er
 ... digas, hag e silaouint
 ... denvet,
 ... SANE IAN X. 11. G. M.

... d'an oll, d'ar
 ... baour ha
 ... e chom dou-
 ... speret an dud.

... an dud-ze etre
 ... a brenas
 ... Ne voue ket cavyet gous-
 ... Eur vanden micherourien
 ... diavaez. Pemp
 ... Ma vije bet c'hoant
 ... Evel
 ... gant

... an ti a voa laket e
 ... da vont da
 ... zont da breja
 ... a
 ... Epad ma edo eur van-
 ... map an
 ... ha ne voa ken map
 ... Setu
 ... d'an
 ... Eur vanden
 ... hag

... hag ar vam pere a voa bet dalc'h
 ... a bag ar c'hlen-
 ... An Aotrou
 ... da di an estren, da
 ... ket c'hoaz pe du ez
 ... e teu avechou an
 ... ha plijadurezou an
 ... oll madou ha

Eun dra vad etouez kementse. An Aotrou X.... en deus gallet cofez, ha petra biennag ar boan c'houzoug a vire outhan da goms, en deus bet ners avoalc'h evit kemeret eur bluen ha scrifa d'he bried oc'h he fidi da rei an darnvuia eus ho madou d'ar beorien. An den-ze eta so maro evel eur c'hristen, hag en doa sonjou mad var he varo.

Mes setu ama ha ne ket ker mad. An Aotrou X.... so maro iaouanc, hag a zo c'hoaz beo he dad hag he vam. Mad, piou a grette ? Nicun anezho ne deo deut var dro ho map na var dro ho mere'h caer ! An aoun da c'hounit ar c'hlenvet ha da rancout dispartia dioc'h ho madou bras, en deus serret ho c'halon, hag o deus lezet ho map da vervel ep lacat troad en he di ! Guelit petra deu an den da veza pa stag he galon oc'h an danvez ! Daou zen, coz, ha dija eun troad dezho er bez, a zilez ho map gant aoun da goll unan bennag eus an nebeut derveziou o deus c'hoas da veva !

Eur voereb d'an Aotrou X.... so bet guelloc'h en he guenver ; a so deut da guemeret sourci anezhan epad he glenvet. Ha perag eo bet ar voereb-ze guelloc'h evit an tad hag ar vam ? Perag ? Abalamour ma zeo christenez vad. Rag caer a vezo, ne deus nemet ar guir relijion hag a elfe lacat an den da ober vad d'he nessa, da viana pa ve meneg da lacat he vuez pe he iec'hed he-unan var var. G. M.

KELEIER.

An Aotrou Robic, person Loc-Maria Kemper, so hanvet person e Daoulaz.

Al lez-varn (Cour d'Assises) a zigor e Kemper ar 16 a viz ebrel 1866. E penn al lez-varn e vezo an Aotrou Beaudouin, alier e lez-varn Roazon. En he guenver e vezo an Aotronez Revault, an hini so e penn al lez-varn civil e Kemper, ha Faugeyroux, barner er memes lez-varn.

HANOIOU AR JUREET evit al lez-varn (Cour d'Assises), a dle digueri e Kemper ar 16 a Ebrel 1866.

- An Aotronez**
- Remond Caradec, eus a Grozon ;
- Yvon Rouzauld, eus a Lanhouarne ;
- Felix-Lois-Renan Vigniboul, eus a Logonna-Daoulas ;
- Emil Dieudonne, eus a Borspoder ;
- Per Herri, eus a Blourin ;
- August Kerneiz, eus a Vrest ;
- Herri ar Barzic, eus a Lanhouarne ;
- Emil Pelliet, eus a Grozon ;
- Paul Forsantz, eus a Guernouez ;
- Charles Batard, eus a Blougastel-Sant-Germen ;
- Ian-Vari-Beneat Tanguy, eus a Bont-Aven ;
- Marc Traonouez, eus a Landerne ;
- Victor Reveiller, eus a Vipavas ;
- Edouard-Mari ar Guenn, eus a Vrest ;
- Maze ar Gall, eus a Blougastel-Daoulas ;

zo red evit canoniza cals saent er bloaz a zeu, hag evit rei diguemer d'an Eskibien a ielo neuze da Rom.

Eur brotestantez iaouane hag a lignez huel eus a Studgard a so en em c'hreat catolikez er sizunveziou-ma, tost da Rom, en iliz Galloro. Eno, dirag eun imach d'ar Verc'hez, eo e devoa recevet ar c'henta gras, ar c'henta sclerijen pehini e deus great dezhi anaout ar virionez.

Paris. — Abaoue ar c'henta a vis guenver, e Lyon e saver *diner Sant Per*, er memes tra evel ma saver guenneien *Breuriezh ar Feiz*. E Paris eo fountet ive brema ar memes doare da zavel diner Sant Per. En iliz Itron Varia ar Victoriou eo fontetar vreuriezh-ze.

E fin mis east e thie diblas eus a Varseil eul lestr evit mont da gas pelerinet d'an douar santel. Mes evel ma ema ar c'holera er broiou-ze, cals eus ar re a dlle mont da Jeruzalem a les ho beach da ober ac'han d'ar bloaz a zeu, hag e levereur n'eus ket a belerinet avoalc'h evit ma c'helle al lestr mont d'ho c'has.

Amien. — An 21 a viz east eo bet canet, en iliz Prouzel, ar zervich deiz ha bloaz evit ene an Aotrou Lamoriciere. An Aotrou'n Escop a Amien a voa deut he unan d'ar zervich-ze. Bez' e voa oll dud ar c'harter ha re all deut a bell evit unani ho fedennou evit an difennour calonec-ze d'hon Tad Santel ar Pap.

Chin. — Lavaret a rer ez eus lazec, e Coree, daou Escop ha seis beleg catholic. Evelse er broiou-ze, pa vez didrouz eur c'harter, e rer ato en eur c'harter all bennag ar brezel d'ar guir relijion ha d'ar vissonnerien. An droug-speret ne jom morse da eana.

ARRAS. — Ilis an Itron Varia, e Boulogne-var-Vor, so bet consecrè en derveziou-ma. An iliz-ze so da rempredet gant ar belerinet.

Setu ama penaus e savaz eur pelerinach eno. Tud Boulogne a velas eun dervez o tostac'ho c'h ho fors-mor eul lestr ha ne voa na martolot na rouenv enha. Dont a rea he unan caer, goustadec; an houliou mor epken her pouleze. Caout a rejor enha skeuden (imach) ar Verc'hez, e coat, ar mabic Jesus ganthi var he breac'h cleiz. An imach-ze a voue destumet ha douguet da eur chapel e gorre kær, hag eno e voue enoret, ha tud Boulogne a recevas cals a c'hrasou o pedi dirag an imach-ze da vam Doue.

Ar brud eus ar burzudou-ze a ieas dre bevar c'horn Frans, hag a bep leac'h e teuas tud di da c'houlen eur c'hras bennag oc'h ar Verc'hez Vari. Ar rouanet a Frans a enoras ive an Itron-Varia-Boulogne, hag a anzavas beza dleour dezhi eus a c'hrasou bras.

Boulogne so eur guæ var bord ar mor dirag Brozaos. Evelse, ouспен an Eskibien a Frans a voa eat di evit ar solanite ma comzomp anezhi, e voa eno ive tri Escop deut eus an tu all d'ar mor.

Ar chapel goz a voa coezet pell a voa, ha tud ar c'harter o devoa eur vall vras da velet sevel eno eun

ilis nevez. Savet ez eus brema eun ilis caer. Evelse ive pebez levenez evit oll dud ar vro-ze!

AVIGNON. — En escopi Avignon ez eus savet ivez eun iliz en honor d'ar Verc'hez. An ilis guenta eno a voa bet savet, a leverer, gant Santez Martha, c'hoar da Vari-Madalen. Ar Verc'hez so enoret eno abaoe m'eo deut sclerijen ar feiz e Frans. Ar chapel-ze a voue sautret er bloaz 1793, ha ne voa distroet adarre da zervichout d'ar zervich divin nemet er bloas 1858.

PERIGUEUX. — En escopi Perigieux, en ilis Cadouin, ema al liser a zervichas da sebelia, pe mar kirit, da liena hor Zalver Jesus-Christ. An Aotrou'n Escop Dabert a so falvezet dezhan lacat enori ar relig santel-ze. Scrifet en deus eul liser caer eleac'h ma tiskuez ez eo e guirionez al liser-ze an hini so bet var dro corf hor Zalver. Al liser-ze a voue digasset da ilis Cadouin gant ar Fransizien, pere a ieas guechall d'an Douar-Santel da vrezelecet evit bez Jesus-Christ hag evit chasual an dud divadez euz ar vro-ze. Eno e caffont al liser-ze, ha cals burzudou so bet c'hoarvezet gant ar re o deus touchet outhi.

TOULOUZ. — Da c'houel ar Verc'hez, da anter-east, ez eus guelet e parrez Sant-Jory, ar pez ne veler ket alies. Eur beleg iaouane a gane he oferen nevez, hag ar beleg iaouane-ze en deus pemp breur beleien evel d'han. Unan anezho a voa eat e compagnunez Jesus, hag a so maro. Ar pevar all so beo, hag ho fevar e servichent ho breur iaouane oc'h an aoter. G. M.

Bez' ez eus tud hag a so ker stag ho c'haron oc'h an danvez, tud ken ingravet, uzulierien ker boaz da zacha gantho, da scrabat, da vernia, da espern, ma ne ellont sonjal e tra all ebet nemet en ho arc'hant; hag hi dare da vervel, n'int ket gwest da zigas eur sonch all en ho speret. Maro, barn, Doue, ene, silvidiguez, baradoz, ifern, eternite; an traou-ze oll ne dint netra evitho. Ma ve eun dra bennag hag a alfe ho laouenaat var ho zremenvan, ma ve eun dra bennag hag a alfe scanvaat an anken o deus o tiscregui eus ho danvez, eo ma c'helfent c'hoaz espern eun dra bennag divar goust mizou ar maro.

Ar c'hazetennou a goms en derveziou-ma eus eun uzulier evelse, eur potr coz ha n'en doa great epad he vuez nemet mac'homi danvez, ep sellet cals dre be da e teuent. Coeza a ra clan, hag ez a toc'hor ep dale. En despet dezhan, pe guentoc'h, ep gouzout dezhan e clasker eur medesin var he dro, hag ar medesin a lavar freaz n'en deus ket an den clan ouспен eun heur da veva. Ar potr coz evithan da veza diners ha toc'hor en doa gouscoude he anaoudeguez vad. Clevet en doa barnediguez ar medesin. Eur zonch a deu en he speret. Pe seurt sonch, a leverot-hu? ar zonch da c'houlen eur beleg? da c'houlen he zacamanchou? da lavaret d'he dud distaol d'he berchen eun tam madou bennag deut gant

an hent fall? Oh! ne maoc'h ket tost. Ar zonch a voa deut d'an uzulier oa houma. He varo a voa hir, hag e vouie e vije trouc'het he varo dezha goude he varo ma na vije ket trouc'het araog. A hent all e vouie ive e kemer hirroc'h eur barier evit kempen eur c'horf maro, evit na guemer evit kempen em den beo. Setu hen ta o lavaret da unan eus ar re a voa var he dro: it da guerc'hat din ar barier!

Ar barier a zeu, hag ar potr coz a c'houlen diganta:

— Peguement a ia ganeoc'h evit troc'ha he varo da eun den beo?

— Daou venneg, eme ar barier.

— Hag evit troc'ha da eur c'horf maro?

— Nebenta a roer din eo deg guennec.

— Mad, eme an uzulier, troc'hit va baro din dioc'htu, hag hastit afo.

Ar barier a voa scanv a zorn, ha petra bennag ne voa ket eun dra æz ober he varo da eun den toc'hor, ne voue ket gouscoude pell evit he guempen. Pa voa eat en he dro, ar potr coz, hag hen beac'h dezhan o caout he alan, en devoue c'hoas evelato ners avoalc'h evit lavaret:

Mad... eis... guennec... ato... espernet... eo!

Ar re-ze oue he gomzou diveza; ha pemp minuten goude e voa maro! Ne ket eun tremenvan skuierus e voa henez? Bez' e vije eno peadra da c'hoarzin, ma c'halje beza leac'h da c'hoarzin o velet traou ken trist-ze. Diskuez a ra kementse penaus mar deo guir evit an darn vuia e varver evel ma vez bevet, ez eo guir dreist oll evit an dud-ze o deus great ho Doue eus a vadou an douar. G. M.

Ar fals doctoret hag ho lavarion.

Setu ama eun doctor all: hema avad a ra poan d'inn he velet etouez ar re a goms a enep ar relijion; rac hema a zo unan eus an dud-se a renc gounit ho bara dioc'h ar c'hoezen eus ho zal, hag a ve ken eaz dezho mont d'ar baradoz, mar carlent lacaat da dalvout evit kement-se al labour tenn o deus da ober bemdez en ho stat. Mes nann: dallet gant kentelliou saos, pe touellet dre ar scuieriou fall a vel dirac he zaulagad, ar paour-keaz labourer-se a deu da goll ar priz hag ar mirit eus he hoan, en eur vressa a zindan he dreid unan eus ar brassa gourc'hemenou a Zoue, an hini a-ra deomp eul lezen da zantifia ar zul. Ha ne ket zoken avoalc'h evithan bressa al lezen-se a zindan he dreid; c'hoant en deffe ouспен da lavaret n'euz dronc ebet e kement-se, hag evit difenn eun hevelep gaou, e clasc an digareziou troidellus-ma: « d'ar zul e renker beva evel d'an deisiou all; n'e ket o vont d'an oferen ha d'ar gousperou eo e c'hounezinn bara d'am greg ha d'am bugale. »

Va mignoun, a respountfenn dioc'htu da eun doctor evelse, ne ouzoc'h ket petra liviret. D'ar zul, eme c'houi, e renker beva evel d'an deisiou all. Ia, guir eo,

keñt ha ma fell da Zoue; aveichou coulsgoude e renker ive mervel da zul kercouls ha d'an deisiou all, ha mar marvit en eur ober goab eus a c'houe hemennou Doue, n'e ma ket brao ar stal ganeoc'h; n'e ket me a garfe beza en ho roched. Da zul e renker beva evel d'an deisiou all, ha var an digarez-se o peuz c'hoant da lavaret eo ret ive labourat da zul evel d'an deisiou all. Paour-keaz doctor ma'z oc'h! anad eo o peuz ezom c'hoaz da vont d'ar scol; anad eo o peuz ezom c'hoaz hag ezom bras da brena skiant hag eun tam mad a skiant. Rac me lavar d'ehoc'h, hag an oll dud a skiant hag a c'houisiguez vad a lavaro evelton, ne vevoc'h ket pell da zul kennebeut na d'an deisiou all, mar kendalc'hit da labourat ato, bemdez-bemdez, da zul evel d'an deisiou all. Noc'h ket creñ avoalc'h evit kement-se, na c'houi, na den all ebet. Ne helfac'h ket padout pell o kendalc'her da labourat evelse eb kemeret eur veich an amzer eno devez bennac a ehan: ho corf a deuffe da zemplaat, oll ouz oc'h ijili a iaffe da netra a nebeut a nebeut; dout a rafac'h abars nemeur da goll ar iec'het, hag erfin ar voez. Histor ar bed a zo leun a desteniou hag a ziscouez selear ar virionez eus ar pez a lavaran.

Setu perac, e kement bro zo var an douar, an dud a skiant o deuz credet hag a gred ato, ez eo red da guement hini a renc gounit he vara dioc'h ar c'hoezen eus he dal, ne lavaran ket ebken discuzia dioc'h he labour epad an noz dre eur c'housket c'houec, mes ouспен kemeret eun devez a repos beñnac eur veich an amzer; hag an devez-se a repos, hervez an dud a skiant a zo bet hag a zo c'hoaz hirio e kement corf zo er bed, ne hell ket beza casset en tu all da eur zizon, pe en tu all da c'huec'h devez labour great dioc'htu eb ehana: nerz an den, ken-nebeut na nerz al loanet, ne duffe ket padout, emezho, da labourat evelse epad ouспен eur zizon, pe ouспен c'huec'h devez dioc'htu. An drama zo bet ana-vezet gant an oll epad an dispac'h pe ar revolution vras a vezas ar Frans oll en daelou hag er goad er bloaz 1793. Neuze, doctor, ez oa o ren hor bro, evel a ouzoc'h, tud diseiz eus ar re c'hoassa zo bet biscoas. An dud-se, goude beza pilet ar c'hroazion, dismantret an aoteriou, serret an ilizou; goude beza casset an arche-rien en dro evit clasc ar veleien vad hag ho zeuler er prizoun pe ho lacaat d'ar maro; an dud-se, evit carza ar vro, evel ma lavarent, eus a guement a helje digass da zonch eus a Zoue pe eus ar relijion, a zougas eul lezen dre behinec'houe hemennet d'an oll Fransizien labourat da zul evel d'an deisiou all.

Coulsgoude, evel ma ouient ne hell ket an den kende-her da labourat epad pell amzer dioc'htu eb ober gaou eus he iec'het, e lakejont eun devez a repos bep dec devez eus ar mis, hag an devez-se a repos a oue galvet gantho decadi. Mes kerken eus a guement corf zo e Frans e savas clemmou a enep eun hevelep lezen. N'e ma ket en hor galloud, a lavare an oll labourerien ha micherourien, n'e ma ket en hor galloud kendalc'her da labourat evelse epad nao devez dioc'htu. Kement-se, a lavare an dud divar ar meaz, a dremen ive galloud al

loanet. Hor c'hezek, emezho, hag hon ejennet, pa vezont bet stagnen ous ar c'harr, pe stag ous an alar'epad c'huec'h devez dioc'htu, a ziscouez aoualc'h, dre ho gourrisiadennou pe ho blejadennou truezus, eo deuet ar mare da rei dezho eun devez a repos. Ar re a ioa o ren ar vro, o clevev ar c'hlemmou-se a deue a bep leac'h betec enno, a lakeas eun anter-devez ehan e creis an *decad*, da lavaret eo, e creis ar zibun a zec devez. Mes al labourerien hag ar vicherourien ne glemjont ket ne-beutoc'h evit kement-se, hag abars nemeur e oue red ho lezel en ho roll da labourat dioc'h ar zibun goz, ha da viret repos ar zul evel ma reant aziaraoc. Setu aze, doctor, penaoz ar skiant vad, kelennet ha sclerijennet dre ar c'hentelliou a gav var ar poent-ma ebars histor ar bed, a vere deomp sclear eo red da guement hini a renc gounit he vara dioc'h ar c'houezen eus he dal, kemeret eun devez a repos bennac eur veich an amzer, da viana eun devez var zais, pe eun devez ar zibun. Evelse ar skiant vad pe ar *rezoun* ebken, (ne fell ket d'inn c'hoaz coms d'ehoc'h a relijion, an dra-se a deui divezatoc'h), ar skiant vad pe ar *rezoun* ebken eo a lavar ne *vevoc'h ket pell da zul ken-nebeut na d'an deisiou all*, mar kendalc'hit da labourat ato, *bemdez bemdez*, d'ar zul evel d'an deiziou all.

Mes, a respountoc'h d'inn marteze, « ne lavaran ket d'ehoc'h e labourfenn ato, bemdez-bemdez; me guemer ive aveichou eun devez a repos bennac » — Ah! ia, da lun, ha n'e ket, han? Eno eo! me ouie ervad; o c'hortoz an dra-se edon. Mes selaouit: divezatoc'h ni gomzo hirroc'h eus an dra-se, ni velo petra c'hounezit o kemeret evelse ho tevez a repos da lun, eleac'h her c'hemeret da zul. Evit brema n'em euz nemet eun dra da c'houlou diganeoc'h var guement-se, an dra-ma ebken, sellit: penaos eta e hellit-hu beva da lun eb labourat, ma ne bellit ket ben ober da zul? Bremaic o poa c'hoant da lavaret eo red labourat da zul evit beva da zul; perac eta n'e ket red er memes tra labourat da lun evit beva da lun? Perac ar c'hemm a lakiit e kenver ar poent-ma etre ar zul hag al lun?... Ac'hanta, doctor, e pelec'h ema ho teod?... Eur guerie respount, mar plij, d'ar goulou an euz great d'ehoc'h... Coulsgoude mar gra re a boan d'ehoc'h va c'hievit o coms evelse, comzomp a draon all, mar kirit; n'e ket o clasc ober poan d'ehoc'h emaoun, c'hoant em oa ebken da ziscouez d'ehoc'h ne gomzac'h ket hervez ar skiant vad pa lavarac'h eo red labourat da zul evit beva da zul: her guelev o peuz, ar skiant vad a zesc deomp ar c'hountrol.

Guelomp brema, mar kirit, petra zesc deomp var guement-se ar relijion. Ah! ar relijion! Selaouit, va mignoun; me anavez ac'hanoc'h eun tamic; me zo sur c'houi ne garfac'h ket tremen evit eun den ha n'en deuz tam relijion ebet, evit eun den ha ne gred ket zoken e Doue. Etre c'houi ha me ama e hellit lavaret ar virionez var eun: livirit eta d'inn aze, an dorn var ho cous-tians, ha c'houi a garfe tremen evit eun den evelse? — Nann zur, a respountoc'h d'inn dioc'htu. — Mad! va mignoun paour, a respountinn d'ehoc'h d'am zro, o la-

bourat da zul ec'h en em gomportit coulsgoude evel eun den ha n'en deuz tam relijion ebet, evel eun den ha ne gred ket zoken e Doue. Ia, doctor, evel eun den ha n'en deuz tam relijion ebet, evel eun den ha ne gred ket zoken e Doue. Souezet oc'h eus a guement-se? Netra eassoc'h coulsgoude da laaat sclear dirac ho taoulagad.

G^e MORVAN,
Person Plujenn.

BUEZ AR PLAC'H DEVOT ARMELA

(*Trede pennad*).

Armela e deoue an eur da ziskuil he c'halon da eur relijius santel a urs Carmes, boazet da veled sclear en eneou ha d'ho ren var an hent mad. Goneled a reas eta, ar pez en doa c'hoant Doue da ober euz an ene-man, ha ne zinae'kas ket out-hi he sclerijen evid he c'hass en hent ar santalez. Adalec neuze betec he maro, Armell ne reas netra eus he fenn e-unan, rag, emezhi, nep piou benac ne ra netra araoc beza kemered kusuil, a c'hell beva dineac'h ha disouris.

Sounjal a rea ato e poaniou hor Salver; ha dre m'a c'houie ne oa netra nemed he garantez evid-hi, en doa he lakeat d'ar maro var ar groas, ne oua poan nag anken ebet, na garje beza bet da c'houn-sao evid discouez d'ez-han he anaoudeguez-vad. Ar sounj enz ar pec'het, a lakea he daelou da redek a hed an noz; mez divezatoc'h m'a teuas ar memes daelou da redek, ne oua evid ho lacad da skuil nemed an ners euz he c'harantez evit Doue.

Varlerc'h an daelou carantezus-se, e teuas e spered Armell goual-ioulou scrijus pe tentasion bras. Etre m'a edo eun deiz oc'h ober bresel er guis-se da unan euz ar goual-ioulou-se, e credas beza dilezet gand Doue; mez hor Salver dre he vadelez a guendale'has cousgoude e calon he serviceurez eur c'hoant vras da jomm bep red stag euz he dever ha da gaout ar brassa caz out ar pec'het. Goulou a rea alies kusuil digand he c'hoassour, hag e c'heuille pen-da-ben he aliou mad, n'eus fors pegument e vije cousted d'ez-hi senti. Lavared a vije great d'ez-hi tostaat alies euz ar gommunion, petra benac ne gave pelloc'h en he c'halon nemod sec'hor evit kement-se.

Ne gave mui tam levenez en oberou a drugarez, da lavared eo o communia, o pidi pe o cana eur c'hantie caer benac. Mez he c'hoassour dre m'a z-edo eun den guic'hek e pep tra, a velas ervad ez-oa red he lacad da zibri muioe'h ha da labourad nebeutoc'h, hag evit-se e pedas ar serviceurez-all a ioa bet var an hent da vont da leanez da guemered evez anez-hi. Erfin goude c'huec'h pe seiz miz brezel, ar barr ar neu-se a dremenas, ha Doue a lekeas a nevez da grogu en ene he serviceurez an tan euz he garantez. Mez piou a c'helle lavared gand pebez aked ne glaske-hi ket an hini a garrie gand kement a dencridiguez? He c'halon a ioa devot gand eun tan hag a zeue euz an en-

kement a zo crouet a roe d'ez-hi da veled dourn Doue e pep leac'h: hoguen pa ziskenne en-hi he-unan, e vele ervad ne c'helle ket mont d'avid Doue etre m'a chomje he c'horf assames gand he ene. Kement a gassoni a guemere neuse euz he buez, m'a carje pelloc'h gueled ar maro o tond evid he c'hass da rouantelez an env. Gouzout a rea ervad n'ez-euz doare ebet guelloc'h da dostat out Doue na da blijout d'ez-han, egued en em rei d'ar beden; setu perac en em lekeas da bidi a c'hinou hag a galon gand mui a ners eguet biscoas.

Kement a boan a lekeas da glask ar Fried-Divin, m'a cavas anez-han. Doue a roas d'ez-hi da anaout ne d'eo ket en traou diaveas e tleer her c'hilask: goueranti a reas d'ez-hi ez-oa pardounet he fec'hejou; rei a reas guened ha puretez d'he ene gand ar pris euz he c'hoad; he c'hreat a eure gand an ners euz he c'hassou; he fellad a reas euz kement he dalc'he stak euz an traou crouet, euz ar pez he jasse d'an drouk: he lacad a reas c'hoas da n'em zizoher euz pep carantez, nemed euz carantez Doue. Ober a reas digumer euz he ene, en eur rei d'ez-hi da anaout e rea he choumadur pe he zemeurans e creiz he c'halon.

Ar spered a iostas ar c'horf; hag ar plac'h iaouanc santel-man, a gouezas prest clavy. He c'hlevet a badas tost da c'huec'h miz. Doue dre garantez evid-hi a roas d'ez-hi leac'h da gaout muioe'h a zellid pe a virid, o lezel da ienad ar garantez e deoua evid-hi he mestrez. An itroun-man a sounjas d'ez-hi ne oua ken caos d'he c'hlevet nemed he feneantis, ha dre-se evit beza pare ne doa nemed en em rei c'hovek d'al labour. Ouspense, ne gave ket mad gouede he serviceurez oc'h en em rei kement d'an devoision. Aon a guemeras n'a zeuje he empen da zivoueda, rag, cals tud, hag en ho zouez tud vertuzus, a lavaras d'ez-hi lacad he flac'h da labourad muioe'h, pe e teuas he spered da drei. Evid distrei eun evelep goalen euz he zi, an itroun a n'em lekeas da ober buez d'he flac'h, d'he lacad da ober al labouriou rusta; ne leze mui Armell da vont d'an oferen var ar sizun, mez ebken da sul ha da c'honel: ober a rea goab euz he devoision dreist-muzul, hag alies e claske an tu da ober d'ezhi mez var guementse. Ar vuez-se a badas tri bloas. En eur guer, evit gouzout pegument a boan e deuz bet Armell da c'hounsao, n'euz nemed sillaou ar pez a lavar he mestrez anez-hi: « M'ar d'eo Armell eur plac'h santel, ez eo eun nebeud dleouez d'in-me a guement-se. »

Armell desket dre ar sclerijen a gave en he c'halon, ha dre ar pez a gleve len er c'henta hag en drede levr a Imitation Jesus-Christ eleac'h m'a coseer euz an doare da c'hounsao-gand pasiantet hag eb en em glem, a vije ato laouen oc'h ober all labouriou diessa, n'euz fors peguen garo e vije avijou ar poaniou a dremene dre he izili; ha dre m'a saute c'hoas ar vez o picad he c'halon pa vije great goab anez-hi dirag an dud diaveas, e rea brezel d'ar vez-se, o lacad he levenez da vont e leac'h m'a vije ar muia tud evit caout muioe'h da c'hounsao. He c'hoassour cousgoude a gavas he foaniou re gris, hag a lavaras d'ez-hi e c'helle, eb dispiljou da Zoue,

mont er meas euz an ti-se. Mez hi a respontas d'ez-ha gand cals a ners: « Penaos, va zad Confessor, lavarad a rit d'in pellad euz ar c'hroassiou a zigass Doue d'in da zouguen? Nan, biken ne rin kement-se, nemed goure'hemen a rafec'h d'in ben ober. »

He c'horf cousgoude a ioa deus spontus da veled. He mam vad o veled he merc'h ken castis ha ken drouk-lived he fedas, an daelou en he daoulagad, da zistrei d'argger. Mez Armell he dic'blahare hag he c'honforte, en eur lavared d'ez-hi en em gave brao-bras en ti-se, ar pez a ioa guir, pa gave eno an tu da vaga he c'halon euz ar c'hoant e deoa da ziskuez d'a Zoue he c'harantez dre he foaniou.

T. B.

POTR AR C'HROUER.

Satan, ep mar ebet, eo an hini en deus digoret da guenta he c'hinou euzus da leskeur leou douet, hag he vrassa plijadur, ma c'helle da viana caout plijadur, eo clevev an dud o toui hag o jarneal. Eun tad christen, e vit miret oc'h he vugale da guemeret ar voazant fallze a lavare dezho an histor-ma:

Anavezet em eus, emezhan, eun den hanvet Jorj Teillard, hag a voa eun touer Doue eus ar re voassa. N'oa ket guest da lavaret diou goms, ep loskeur eur jarne bennag. Pa deue eun dra bennag da hegal outhan, e toue beteg ober aoun d'ar re her c'hlevet. Tud ar c'harter o doa he lezhanvet an touer, ha petra bennag ma scribe an darn vuia o clevev he gomzou, ez oa gouscoude hiniennou hag a iea avechou da ober an heg outhan evit he lacat da zibuna litanion an arme.

Eun dervez ma edo er c'hoat o troc'ha keunev, e scoas he vouc'hal var eur mean, hag e voue torret. Neuze va den en em laca da doui evel eun drouk speret. Ne voue ket petra da ober gand he goumar. Henvel oa oc'h eun den eat en egar. Divar greiz ma edo o counnari, e cleo eur c'hoazaden a dost dezhan. Ep trei da zellit: S... C... emezhan, te a c'hoars c'hoaz?

Neuze gouscoude e sae he zoulagad, hag e vel eun den enhe za, eur c'hrouer gantha en he zorn, evel pa vije o vout da garga ed. Guisket oa en eun doare iskis. Var he benn ez oa eun toc du hag eur bluenn rouz outhan, he rodeden a ioa e liou an tan hag he vragou a ioa du pod. He zrem a ioa eur scrij da velet, treud evel eun ancou, he c'hinou faoutet beteg he zionscouarn, he fri kement hag eur zouc'h, ha camet he veg evel hini eur perroket.

Larcoc'h e velas eun den all ha ne voa ket cals braoc'h potr, eur bern sae'hadou leun ha laset. en he guichen, hag e talle digor eur zac'h anter garguet evit lacat ar pez a zestume potr ar c'hrouer.

O velet daou zen stalamadet evelse, hag a voa eno ep ma c'houie, an touer a grogas eun tamic aoun enha, hag en eur izelaat he vouez, e lavaras:

— Asa, gouzout a allet...

— Piou omp ha petra reomp ama, ha ne ket ta, eme

botr ar c'hrouer ? hag hen dirol da c'hoarzin ; hag eur c'hoarzaden a loscas ken hir ha ker skiltrus, ma tregar-nas oll ar c'hoat gantha.

An dalc'her sac'h ne lavare guer, hag an touer ne grede ket lavaret ive. Stracal a rea he zent evel pa vije dare gant ar riou.

Mes potr ar c'hrouer a c'hoarze ato.

— Ahan ! emezhan, va c'hamarad, c'hoant oc'h eus da c'houzout piou omp. Losc ato evel a reas bremaic. Ne c'heus ket izom da veza nec'het ganeomp-ni.

An touer en devoa c'hoant da loskel eur jarne ben-nag. Al leoudouet a deue var beg he deot, mes ne grede ket coms.

— Sell-ta, eme adarre potr ar c'hrouer, petra, ne le-verez guer ? Ken dilavar out dent hag eur pesc ? An dra-ze ne ket mad gant da anaoudeien.

— Anaoudeien ? Ker guir ha ma zeus eun ifern, biscoas n'em eus na da velet, na da anavezet, ha ne ouzoun ket pe seurt labour ar foeltr a rez aze, eme an touer. Evel a velit, an touer a gomanse mont droug enha, hag ar goms a deue dezhan ive.

— Bah, eme botr ar c'hrouer, potret evelomp-ni hag a dal an eil keit hag eguile, en em anavez ep beza en em velet morse. Mes lezomp an dra-ze. Goulen a rez perag emamp ama ? — Ni a ia ato eleac'h ma cavomp labour da ober, ha dre an amzer-ma ne ket labour a vanc deomp. An discar amzer a voa neuze. An avel a c'houeze hag a hije ar guez.

— O testum mez emao'h-ta, eme'n touer, peautramant kistin ?

Potr ar c'hrouer a zirollas adarre da c'hoarzin, hag an dalc'her sac'h a grigne he ivinou evel eun den coun-naret.

An touer a zonzas neuze e voant marteze o clase ober eun dro bennag dezhan evel a voa bet great avechou ; mont a reas droug enha da vad, hag en em lakeas adarre da bec'hi evel eun den daonet.

Potr ar c'hrouer en em lakeas da labourat neuze, hag ep dale e voue carguet ar zac'h, laset ha taolet var gorre ar zier leun.

An touer a dasas, hag an daou all a eanas hag a bacas ho divreac'h da c'hortoz adarre eur sourrat all. Mes gulet a reat var ho min eur musc'hoars iud, hag a lakea an touer da egari.

— Asa, emezhan, lavaret a reot din, abars ar fin, pe seurt labour an diaoul a rit aze ?

— Gouzout a fell dit-ta ?

— Ia, ha ma na livirit ket, me ia da illigat ho coss-teziou deoc'h gant ar benvec-ma. Hag hen o kemeret troad he vouc'hal, hag oc'h he zavel azioc'h he benn evel pa vije o vont da skei.

Potr ar c'hrouer ne reas nemet ober eur zao d'he ziouscoaz.

— Gulet a rez-te ar zier-ze, emezhan ?

— Ia, ha gonde.

— Bez'on eus du-ma eur milier bennag a zac'hadou evelse ; hag e pep sac'hat ez eus siz pe eiz croueriat.

— Croueriatou petra ?

— Petra ! Ne velez ket ?

— Nan sur.

— Da leou douet, den diot. Destum a reomp anezho abenn ma teui Eguile da rei da gont dit.

— Hag ar zac'hadou so aze ganeoc'h brema ?

— Petra, ne c'heus-te ket ho c'harguet abaoe momp deut ama ? Mont a reomp d'ho c'has etouez ar zac'hadou all.

Potr ar c'hrouer a zirollas adarre da c'hoarzin. Mes an touer en doa clevet avoalc'h en dro-ze. Eur vouedinel a ioa en he ziouscouarn ; crena a rea he izili ; eur c'huezen ien a zivere-dioc'h he dal. Sevel a reaz he zorn hag e reas sin ar groas.

Kerkent an daou zroug speret a ieaz en ho zro, ha Jorj Teillard ne velas mui netra. Mes abaoe n'en deus ket bet a c'hoant toui, ha n'eus ket clevet eur goal gomz o tont eus he c'hinou.

An tad a gonte an histor-ma d'he vugale, a lavare dezho goude :

Na douit ket eta, ha na c'hoarzit ket pa glesot tud o toui. An hini a c'hoars pa gleo leoudouet a ra evel an droug speret pehini so he blijadur clevet an dud o pec'hi hag oc'h en em zaoni. Ar re so boas da doui a rafe vad dezho ive pa loskont ho c'homzou milliguet, sellet en dro dezho, ha gant daoulagad ar feiz e velfent ive an droug speret gant he grouer o testum ho leoudouet, hag oc'h ho lacat er zac'h evit ho c'haout eun deis da ziskuez d'ar barner bras. G. M.

Mano ar Zent evit ar Sizun-ma.

DILLUN 17 Guengolo. — Mercou ar pemp gouli received gant Sant Francez.

DIMEURS 18. — Sant Joseph Cupertino.

DIMERC'HER 19. — Sant Janvier hag he gompagnunnez, merzerien.

(*Hirio, dirguener ha dissadorn, cotuerou, iun ha vijel*).

DIZIOU 20. — Sant Eustach hag he gompagnunnez, merzerien.

DIRGUENER 21. — Sant Vaze, Abostol.

DISSADORN 22. — Sant Thomas-ar-Guernevez, Escop.

DISSUL 23. — Trivac'hvet sul goude Pantecost.

An Aviel hirio :

Jesus o veza pignet en eur vag, a dreuzas laguen Jenezareth, hag a deuas d'he gear.

Eno e voue digasset d'ezhan eun den seizet, asten-net var eur guele, ha Jesus o velet ho feiz a lavaras d'an den seizet : Va map, o pet fizians, ho pec'hejou so pardonet deoc'h.

Ha setu lod eus ar scribet o lavaret outho ho unan : an den-ze a goms a enep Doue. Hoguen Jesus o velet petra zontent, a lavaras dezho : Perag e sav goal son-jou en ho calonou ? Petra so aessa da lavaret, pe, pardonet eo deoc'h ho pec'hejou ; pe, savit ha baleit ? Hoguen evit ma vouessot en deus Map an Den ar c'hal-

out ama var an douar da bardoni ar pec'hejou, e lavaras neuze d'an den seizet : Savit, douguet ho kuele hag it d'ho ti.

Kerkent an den seizet a zavas hag a ieas d'he di.

O velet-ze kement a ioa eno o devoue aoun hag a veulas Doue da veza roet eun hevelep gallont d'an dud. (SANT VAZE. IX. 1.) G. M.

KELEIER.

An Aotrou'n Escop a dle consacri, en derveziou-ma, peder iliz nevez : Kernilis, Plouigneau, Scrignac ha Bolazec.

An Aotrou Rivoal, person Plouvian, so maro er sizunveziou tremenet.

An Aotrou Bot, nevez beleguet, so hanvet vikel en Trehou ;

An Aotrou Borgne, nevez beleguet, so hanvet vikel e Mahalon ;

An Aotrou Lozac'h, vikel e Pont-n'Abat, so hanvet vikel e Lanmeur ;

An Aotrou Jaffres, vikel e Lanmeur, so hanvet vikel e Pont-n'Abat ;

An Aotrou Guena, vikel e Loperec, so hanvet vikel e Plouider ;

An Aotrou Allain, vikel e Mellac, so hanvet vikel e Loperec ;

An Aotrou Bras, nevez beleguet, so hanvet vikel e Poullaouen ;

An Aotrou Kerloc'h, nevez beleguet, so hanvet vikel e Mellac ;

An Aotrou Yvenat, vikel e Sant-Vaze-Kemper, so hanvet vikel en Itron-Varia-Garmez-Brest ;

An Aotrou Labrousse, vikel e Lesneven, so hanvet vikel e Sant-Vaze-Kemper ;

An Aotrou Simon, vikel en Itron-Varia-Garmez Brest, so hanvet beleg ar scolach (*lycée*) e Brest ;

An Aotrou Poudoulec, vikel e Plouguier, so hanvet vikel e Ploneour-Sant-Germen ;

An Aotrou Herri, bet vikel e Cast, so hanvet vikel e Plouguier.

Ar Micherour truezus.

Var ar meaz ne veleur ket cas tud varo d'an douar, ep ma ve eun nebeut tud varlerc'h ar c'horf. Ma n'en deus ket an hini maro a guarent, an amezien, unan bennag eus an anaoudeguez, eus ar c'harter, a deuio ato da renta an dever diveza-ze d'ar re a ia eus ar bed-ma. Mes er c'heriou braz e veler avechou cas eur c'horf maro d'ar veret ep ma ve den oc'h heuilla ar c'har a zoug ar c'horf maro-ze. Evelse e kear X... eur micherour o tistrei dioc'h he labour eur pardaesvez, a gavas var he hent car ar re varo o vont de gas d'ar veret eur c'horf ha ne voa oc'h he heul nemet eur buguel pevar pe bemp bloaz. Ar potric a iea d'ar pilpazig

varlerc'h ar c'har en eur vouela ; ha bep en amzer e tave evit cas d'he c'hinou ha crignat eun tam creunn seac'h a voa gantha en he zorn ; ha neuze e vouele adarre. Ar micherour a guemas truez oc'h ar buguel paour ; a dennaz he dog hag en em lakeas en he guichen evit heuilla ar c'horf bete'r bez. Pa voue lakel ar c'horf en douar, e troaz oc'h ar potric hag e c'houlenas outhan :

— Piou so lakeat aze, va buguel ?

— Va mam, emezhan, hag en em lakeas da frota he zaoulagad ha da vouela.

An tam creunn a goezas eus he zorn.

— Ha da dad, pelec'h ema-hen ?

— N'em eus tad ebet, eme ar potric kez.

— Ha brema, pelec'h ezi ?

— Ne ouzon dare.

Ar micherour a jomas da zonzjal, nec'het. Gonde beza soujet eur pennadic, e crogaz e dorn ar minoric paour, en eur lavaret : Deus, va buguel. Goaz aze, emezhan outhan heunan. Eleac'h ma zeus bara da bevar, ec'h ell beza ive bara da bemp. Ar voue hizez a grio marteze ; mes deus atao, va faotric, ha diroufen da zivesker mar guellez ; rag eur pennad brao a vale on eus da ober araog digouezout gant hor zouben. Hag e guirionez, bez'o devoa da zistrei da guer, ha goudeze ker oll da dreuzi.

Bale mad a rejont eur pennad ep lavaret guer. Ar potric bihan a scoe en douar stanca ma c'helle. Mes pa voant eat tost, ar micherour a iea goustatoc'h. N'oa ket hir ar peuri en he di, hag he c'hreg pehini e devoa avoalc'h da ober o vaga he bugale he unan, ne dlle ket beza re laouen o velet cas eur guinou-all dezhi da stanca.

Ar micherour en doa ta aoun da gaout eun diguener fall, hag he aoun a grescas c'hoas pa voa digouezet en ti. O sevel en deleziou evit pignat er zolierig ma chome enhi, e clevas he c'hreg o tisput oc'h unan bennag. Perc'hen an ti oa, deut da c'houlen an termen a vankent dezhan ha n'oa ket paet c'hoas.

Pa velas he fried ha pa ziskuezas dezhi ar gavaden en doa great, ez eas goasoc'h goas droug enhi. En em lacat a reas da ziscarga varnezhan he fennad droug, da vouela, d'en em glem, d'en em jala kement, ma en devoue poan vras ar micherour o lavaret penaus en doa c'avet ar buguel.

— Mad, mad, emezhan, ma na fell ket dit he zerc'hel, me ia d'he gas en dro d'ar veret eleac'h m'am eus he gavet. Hag hen o sevel ar potric var he vreae'h, hag o vont kuit gantha. Mes ar c'hreg pehini a ica buanoc'h cals da grial evit da ober pe da zerc'hel droug, a redas var he lere'h hag a ziframas ar buguel digantha.

— Ia, ia, emezhi en eur grial, brema ezi d'hen lacat en toul gant he vam ! ha ne ket-ta ? Sell, mar kerez touet din ne laki morse da dreit en eun davarn, me hen dalc'ho.

Ar micherour mad a reas al le a c'houlenne he c'hreg, ha perc'hen an ti pehini a voa chomet eno

bale'h he c'hinou o velet an tamic abaden-ze etre an daou bried, a voue tenereat he galon o velet madelez an daou zen kez-ze pere o doa beac'h o caout bara ha ne varc'hatent ket gouscoude evit kemeret truez oc'h eur buguel c'hoas paouroc'h evitho hag en em garga anezhan. Dont a reas da gaout ar minoric paour; he guemeret a reas etre he zivrec'h hag e pocas dezhan.

— Me emezhan, a fell din caout va lod er pezh a rit evit ar potric-ma. Da guenta e lezan ganeoc'h ar pezh a dleit din, evit ma vezo deut mad ar baguel en ho ti. Neuze en em gargan da viret na vanco netra dezhan. Eur map am eus brassoc'hig evit hema, hag e tigasina da hema an dillad hag an oll draou o devezo servichet d'am map.

En eur vont kuit ar perc'hen a roas he ziscarg d'he verour, ha pa voue digouezet en he di, e lakeas cass bara, kig, guin ha kement a voa red da ober eur fest evit diguemeret ar potric, hag ac'houdevez en devoue ar brassa madelez evit an daou bried-ze en doa gullet o kemeret en ho zi eur buguel ep sonjal zoken e kement a vije red dezho da zioueret evit he veva.

G. M.

Perag eo trec'h an dud vevn d'an dud a Hou.

Bez' ez eus tud var an douar hag a so guenn ho c'hrochen, lod all so du, lod all zo ruz pe dem-ruz. Perag ar c'hem-ze etre liou an dud? Setu ama petra lavarar var guementse en eur c'harter eus an Indez.

Pa deuas, emezho, ar speret-bras (Doue), da groui ar bed, e reas tri den guenn evel an ere'h. Ho c'has a reas da guichen eul leun pe eur poull dour, hag e lavarar dezho mont d'en em voalc'hi enha. Unan anezho a zentas dioc'htu hag a deuas er meaz eus an dour guennoc'h c'hoaz evit na voa diaraog. An eil a arguilas eun nebeut, gouscoude en em daolaz ive en dour. Mes an dour a voa bet glabouset gant ar c'henta, ne voa mui ker scler na ken neat, hag hema o tont er meaz a voa he grochen e liou ar c'huevr pe an arem. An trede a ias ive en dour goudeze; mes an dour a voa eat du ha tenval, hag hema a deuas ac'hano da morian.

Neuze ar speret-bras a zigasas dirag an tri den tri zac'h great gant croc'hen guez; hag ar zier a voa leun ha laset ho zri. Lavaret a reas dezho kemeret pep a zac'h, hag evel ma en devoa truez oc'h an den du, e lavarar dezhan choas da guenta. An den du a grogaz en tri zac'h an eil goude eguile, hag a guemerar evit he lod ar zac'h a gavas pounera. An den ruz a choazas da eil, hag a guemerar ive ar pounera eus an daou zac'hat a jome, hag evelse ar scanva a chomas gant an den guenn.

Pa voue digoret ar zier, sac'h an den du a voa leun a baliou, mirri, creier..., pep seurt ostillou evit labourat an douar. Sac'h an den ruz a voa enha iguennou, rouejou, fuzillou, contilli, clezeier..., pep seurt ostillou evit pesketa, chasseal, ober brezel. E sac'h an den guenn ez oa liou, plun ha paper.

Setu penaus e voue dibabet he lod da bephini: d'an

den du al labourou a gorf, al labourou tenn ha poanuis; d'an den ruz, buez eur baleant; d'an den guenn, al labourou speret. Ha setu perag an dud vevn so trec'h d'ar re all; setu perag ez int guelloc'h ha speredoc'h evit ar re all.

G. M.

Eun tad a voa en em lakeat da c'hourdrouz he vap, hag a lavare dezhan: « Brema ez eus bugale ha n'o deus doujans ebet evit ho zad nag ho mam. Morse n'em bije credet coms oc'h va zad evel ma comzez-te ouzin me!

— Pe seurt tad o poa-hu neuze-ta? eme ar map.

— Pe seurt tad? Mec'hieg so ac'hanout; guelloc'h mil guez evit da hini-te!

An Aotrou X... a dremene eur vech dre eur pont nevez eleac'h ma ranket paea; evit eun den, sammet pe ep samm, eur guennec; evit tremen var guein eul loen; eur guenneg ive, evit eur c'har pe eur c'harroz, c'huec'h guennec. X... n'en doa ket a c'hoant da baea c'huec'h guennec, ha gouscoude e voa red dezhan treuzi ar pont gant he gar. Penaus eta da ober? X... en deus speret hag ijin, ha setu ama petra reas. Distaga a ra he benn kezeg dioc'h ar c'har, ha neuze e cas he unan he gar en tu all d'ar pont, ha goude e tistro da guerc'hat he varc'h. O cas he gar he unan ne bae nemet evel eun den sammet pe eun den oc'h ober he labour, da lavaret eo, eur guennec. O tont goudeze da guerc'hat he varc'h hag o vont var he guein dre ar pont ne bae nemet ive eur guennec bep tro, da lavaret eo tri guennec en oll; tri guennec all a jome gantha! tri guennec espernet! Ia, mes ar re o deus ar marc'had eus ar guir var ar pont a vouezas pe seurt tro en doa great hag a felle dezho ober dehan paea an tri guennec all. X... kentoc'h evit rei an tri guennec-se, so bet guelloc'h gantha cas an afer dirag al lez-varn. Eur procezh a so evit kementse hag a bad daou vloaso ha ne ket echu c'hoas. X... en deus implijet abaoue, e paper timbr epken, muioc'h evit na vije bet red dezhan da baea epad he vuez oll, ha pa en divije bevet coz, ha pa vije bet red dezhan tremen meur a vech bemdez dre ar pont.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 8 <i>Guengolo.</i>	PONT-NABAT — 6 <i>guengolo.</i>
<i>Priz ar c'hant liour.</i>	<i>Priz an hectolitr.</i>
Guinis... 43 lur, 44 c.	Guinis... 49 lur, 73 c.
Segal... 8 lur, 02 c.	Segal... 40 lur, 35 c.
Eiz... 8 lur, 08 c.	Eiz... 9 lur, » c.
Ed-du... 6 lur, 39 c.	Ed-du... 9 lur, 20 c.
Kerc'h... 7 lur, 64 c.	Kerc'h... 6 lur, 67 c.
Avalou-douar 3 lur, 50 c.	Avalou-douar 3 lur, 90 c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand AR. DE KERANGAL, Moulet an Escopti.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezouneec.

Eun Abonnament d'ar Gazeten a goust:

- Evit eur bloas..... DAOU SCOUET.
 - Evit c'huec'h miz..... EUR SCOUET.
 - Evit tri miz..... C'HUEC'H REAL.
 - Eur gazeten ebken..... DAOU VENNEC.
- Ar baemant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Belec e Kemper.
Ar paeamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN ebken. An abonament a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 22 Guengolo 1866.

Etouez ar gounidou en deus var an douar an den a vir mad lezen Doue, a ren eur vuez e guirionez christen, a ra he c'halloud evit ober ar vad, e c'haller lacad ar brud vad en deuz etouez an dud. An den vertuzus, evit guir, ne glasc ket ar brud mad-ze, hueloc'h e sao he zonz; peur-liessa zoken e clasc tremen dianavezet; c'hoant en defe ne ve hano ebet anezhan e touez an dud, mes Doue a laca he anaout, rei a ra dezhan ar pezh ne c'houlent ket, ha kementse evit skuer. Evelse ar roue Salomon guech all ne c'houlente nemet ar furnez, ha Doue a roe dezhan var ar marc'had madou ha pinvidiguezou. Evelse an den vertuzus ne glasc beza anavezet nemet gant Doue, ha Doue a ra ma zeo anavezet gant an dud. Mar deo nebeut anavezet en he vuez, ar pezh a zigouez avechou, da viana goude e varo e vezo hano anezhan, e vezo comzet eus ar vad en deus great hag eus ar skuer vad en deus roet. Ar vertuz a les var he lerc'h eur c'huez mad hag a zo santet zoken gant an dud difeiz. Pe guen dizoue bennag e ve eun den, ha pa ve zoken enebour bras d'ar relijion ne all ket miret oc'h ar brud mad-ze a les an den vertuzus var he lerc'h.

Doue he unan a deu avechou da ziscleria santelez he zervicherien dre ar burzudou a ra en ho hano. An ilis ho laca var an aoteriou hag a ordren d'he oll bugale ho enori. Evit ar re ne allont ket sevel ken huel-ze, da viana ar zonz anezho a jom e speret tud ho c'harter. Coms a rer anezho; ho meuleudi a so-e guinou an oll; daelou ar beorien hag an dud reuzeudic o deus sicouret, a bad pell goude ma zint eat ac'hann. Piou a elfe hirio miret oc'h tud ar broioz-ze eleac'h m'eo bet ar c'holera, da goms gant meuleudi eus ar re o deus roet ho buez oc'h ho zervicha epad ar c'hlenvet? Piou a elfe miret oc'h tud eur c'harter da zerc'her sonj ha da goms alies eus a eun-den a so tremenet en ho zouez en eur ober ar vad? Sant Per a rentas guech all ar vuez da eur plac'h mad, pinvidic ha trugarezus, ha kementse evit sec'ha daelou

he amezien pere a ziscoueze dezhan, lod eur pezh dillad, lod all eun dra all bennag bet digant ar vaouez vertuzus da behini e vouelent. Varlerc'h pephini eus ar gristenien vad e chom ive eun dra bennag evelse. Gullet e vez ive peorien, tud izomeg a bep seurt, o tiskoez hag o tisccleria ar madoberou eus an dud vad en deus Doue galvet eus ar bed-ma.

Hoguen setu eno petra laca an dud difeiz da gounnar. Anezho, eur vech ma zint maro, n'eus couls lavaret hano ebet mui. Lavaret e ve ez afent en douar abez. Marteze e kichen ar bez, araog ma vez taollet douar da c'holo ho archeb, unan bennag eus ho c'henseurt a lavaro eur guer bennag evit ho meuli, ne ket da veza great cals vad epad ho buez, mes da veza gouezet beva ep Doue hag ep relijion, ha goudeze, netra ebet ken. Mar chom varlerc'h an den vertuzus eur c'huez mad hag a den an oll davethan, e c'heller lavaret e chom varlerc'h an den difeiz eur flear hag a bella an oll diouthan. Lavaret a elfet zoken e ve c'hoant d'ho ancounac'haat ar c'henta ar guella.

ROM. — E Rom ne gomzet en dervezioù tremenet nemet eus a Escop nevez Marseil pehini, evel ma on doa he lavaret kentoc'h, a so bet sacret gant ar Pap he-unan. Pell bras so, lod a lavar seis cant vloas, Escop ebet a Frans n'en doa bet an eno-ze.

Goudeze, Pii nao en deus roet da zibri en he di d'an Escop nevez, da Gannad ar Frans ha da eun nebeut Ofiserien vras, hag a zo azezet ive he unan gantho ous taol. Kementse en deus lakeat an oll souezet ha great plijadur d'an oll. Rag ar Pap a iea eno a enep ar c'hiz pehini a c'houlent ne zebro morse den oc'h ar memes taol gantha.

Varlerc'h ar pred, ar Pap en deus roet d'an ofiserien ar frouez a voa var an daol, en eur lavaret dezho: « Cassit an dra-ze d'ho pugale vihan. Red eo o defe ive an tanva eus a lein ar Pap. Ar vugaligouze a ve ankeniet ma n'o defe ket ive ho lod. » An

ofiserien, coz lod anezho ha griz ho baro, a deue puil an dælou en ho daoulagad o poket da zorn Pii Nao.

E Velletri ez eus bet eur retred evit ar zoudardet iaouanc ha calonec a so eat d'au Itali evit difen hon Tad Santel ar Pap. An oll zoudardet so eno o deus heuillet ar retred-ze.

« Goude ar retred, ar zouavet so e Velletry, eiz cant so anezho, a so bet oll, ar zac'h oc'h ho c'hein, hag ar fuzil var ho breac'h, oc'h ober al le, var levr an Aviel, da vervel ha da veza-sebeliet gant ar pillennon eus hor pavillon kentoc'h eguet he zilezel morse. Eur bopl tud a voa en dro d'argathedral hag a voa souezet oll oc'h hor guelet oc'h ober al le-ze. Evidompni a voa fougue enhomp oc'h hen ober. Lavaret e vije e voamp eur vanden eus an dud-ze a iea guech all da vrezolecaat evit an Douar Santel hag a rea al le da vervel evit Doue hag ar Relijion. Goudeze omp eat da gas hor pavillon da gastel Villety. N'em oa ket guelet c'hoas hor pavillon. Ne ket skeduz anezhan; mes ar guir hag al lealdet so gantha, hag ez eo ato eun enor he heuilla. Evelse ive hen heuillin hag hen difennin keit da ma vezo halan em c'hreiz. » Setu petra lavar eur zouav.

Ervez ar gazetenn eus a Douloz, d'an nos varlerc'h ar stourmad vras a voa bet e Gondino, e voa cala a dud varo hag a dud mac'haniet var dachen ar vrezel. Eur beleg, person en eur barrez a dost, hag a voa bet devet ha distrujet he di er pardaesvez-ze, a iea hag a zeue dre an dachen, o rei sicourou ar relijion d'ar re ne voant ket c'hoas maro. Clevet a ra eur zoudard iaouanc oc'h en em glem, o crial e creis eur poullad goad, o c'houlenn eur banne dour. Ar beleg a voa gantha eur goulourdren, ha dour enhi. Redek a ra da gaout ar soudart, hag e ro d'ezhan da eva. E keit ha ma voa o kemeret sourei eus an den-ze, unan eus ar zoudardet a voa laket d'ober goard var an dachen, a grias outhan: piou zo? Hag evel na responte ket, e loscsez eun tenn varnezhag hag hen treuzas gant eur voulet. Ar beleg keaz a goezas maro var an den iaouanc da behini e roe dour ha pehini a varvas ive nebeut goude. Ar zoudart, o tenna varnezhag, en doa he guemeret evit unan eus al laeron-ze a ia da noz d'an tachennoù brezel da c'huilla ha da zivisca ar re varo.

Antronoz, pa zejot da lacat ar re varo en douar, e voe cavet corf ar beleg. Ar zoudardet a reas eur bez evithan he unan, hag a lakeas eun nebeut mein hag eur groazig var he vez evit diskuez ho anaoudeguez vad d'an hini en doa collet he vuez o renta ser-vich d'ezho.

ALLEMAGN. — Eus ar guær a Vullhouz e scrifer da eur gazetenn eus ar guær a Sans:

Deac'h oan digouezet en Alsas, e kær Mulhous, eleac'h ne gomzer nemeur nemet an allemand, ha ne veler

nemet protestantet, iuzevien ha tud estren a bep carter eus ar bed. Brema ez eus eun nebeut bloavezeziou e voa nebeut a gatoliket er guær-ze, mes an niver anezho a so cresket kement, ma zeo brema eur blijadur beza eno, dreist oll da zul.

Evelse, hirio, azalec pemp heur dioc'h ar mintin bete creis-deiz, ne ket bet canet an oferennou a anter-heur da anter-heur, ha bep oferenn e velet anter-cant, cant, ha bete daou c'hant den o tostaat oc'h an daol santel. Ha ne deo ket kementse eun dra gaer da velet evit eur galon gristen? Ama pephini a heuil he relijion ep aoun na mez. Ar gristenien-ma so stard en ho lezen.

Da eiz heur anter e caner eun oferenn bred evit an Allemantet, ha da zeg heur anter e caner eun all evit ar Franczien. D'an diou oferenn-ze an iliz a vez kel leun a dud ma n'eus ket a blas da drei enhi. Gant pebez evez e silaouont ar predicator! Ne veler den o finval, ne glevour ket an distera trouz.

Brema ez eus triugent vloas, e Mulhous ne voa nemet protestantet. N'oa nemet antercant christen catholic. Pa voe digasset di eur beleg catholic, er bloas 1803, oll dud kær a zave ho discoaz hag a rea goap anezhan. Eun tamic sal a voe laket da chapel hag a voa c'hoaz re vras. Hirio an-antercant catholic a so savet beteg an niver a seis mil ha daou-ugent, da lavaret eo, oll dud kær kouls lavaret. Eleac'h ar chapel vian ez eus eun iliz eus ar re vrasa hag eus ar re gaera, gant eur person ha deg vikel. C'hoas kementse ne voa ket avoalc'h, hag ar miziou divezama ez eus savet eur barrez all gant eur person ha tri vikel. Setu penaus e sao ar c'hreunen sezo da vezen. Ar protestantet a so nebeut anezho, ha ne dileont ket beza pell da zistrei ive d'ar guir Ilis, da viana mar ho barner dioc'h ar pezh am eus guelet gantho. Evelse, deac'h edo ar sadorn hag e vouen pedet da leina e ti unan eus er pennou anezho. Eur vanden vad a protestantet a voa eno. Mad, oll e rejont vijel. Ne ouzon ket hag ar gatoliked a vir ato kercoals lezennoù an Ilis.

Eur vanden seurezet griz a so diblaset eus a Vontreal evit mont da jom etouez an dud gouez var ribl ster Mak-Kensi. Araog digouezout eleac'h ma zeont o deus c'huec'h cant leo da ober, var droat peur liessa, en eur c'hos car bennag avechou, ma cavont, ha kemense dre ar goueziri, a d'erus ar spern hag an drez, dre garteriou eleac'h ne deus hent ebet. Pa zigouezint e cavint evit ti eur c'hoz lochennig savet gant taualc'h, evit guelet crec'hin loenet gouez, evit magadurez eun tam pesket bennag, hag evit goulou an heol a dennint eus ar memes pesket-ze.

Araog diblas e c'hellont lavaret kenavezo d'ho zud ha d'ho bro, rag evit distrei ac'hano, ne ellont ket sonjal e rafent. Unan eus ho brassa labourou eno a vezo mont var dro an dud gouez clan. Hennez a vezo eun ober a drugarez hag a die lacat ho benniguen. Etouez ar goue-

zidi-ze e vez alies terzienou ha goal glenvejou-all pere a ra distruch. Varlene, epad pemp miz oa bet sammet an drederen eus a dud ar vro gant an derzien velen.

Ar seurezet-ze pere a ia di evel missionerien o deus sonch da ober eno meur a vad all. Rei a raint repu d'ar re goz pere a vez dilezet pa na ellont mui mont da heul ar re all da chassal ha da besketa. Repu a roint c'hoas da vugaligou pere so eno c'hoas mil guech goassoc'h ho doare evit na deo ama hini ar vinoret reuzeudica. Ho zével a raint, ho c'helen, deski dezo al lezen gristen, hag ho boaza da labourat. Miret a raint evelse oc'h ar vugaligou-ze na varvint gant an dienez, hag ho lacaint e tro da zeski divezatoc'h d'ho zud al lezen gristen, ha da zicour gonit ar vro da Zoue pa vezint deut en oad da vont gant ar re vras d'ar chasse pe d'ar besketerez.

Er Russi, ervez ar gazetenn l'Union, e c'houlenner ive seurezet eus a Frans evit sevel re all dioutho eus ar vro. Izom so anezho da entent oc'h an dud clan, rag ar c'hollera so eno ive en eur c'harter bennag. Rag an dud a iliz, er broiou-ze er meaz eus ar guir relijion, so tud dimezet, ha n'int nemeur e poan da vont da zourcial eus an dud clan. Var var e vent da zigas ar c'hlenvet d'ho graguez ha d'ho bugale. Impalaerez ar Russi a garfe eta caout seurezet ac'hann. Laket e deus cas dezhi ho reglen. Ha setu ama eur goms e deus lavaret hag a ziskuez penaus e rener an dud er broiou-se sebeliet e tenvalijen an errol. Goude beza lennet ar reglen, evel na vele enhi hano a bunion ebet. « Mes, emezhi, pet taol guialen a roer d'ar re a vanc? »

Er vro-ze eleac'h ne gasser an dud nemet a daoliou scourjez hag a daoliou baz, an impalaerez a grede ne allet ren an dud e nep leac'h nemet evelse. Er meaz eus ar guir iliz ez eo diaz compren ec'h alfet ober he zeve ha ren eur vuez tenn ha calet a volentez vad ha dre garantez evit Doue.

POLONN. — Evit diskuez penaus eo goalgasset er vro-ze ar gristenien catholic gant ar Russianet, setu ama eur guær bennag divarben an Aotrou Felinski, arc'hescop Varsovi.

Pa voe hanvet an Aotrou Felinski da arc'hescop e Varsovi, e c'hellas coms oc'h impalaer ar Russi pehini a otreas dezhan scrifa dezhan he unan pa vije eun dra vras bennag pe pa en em gaffe nec'het.

Digouezet e Varsovi, e voe diguemeret mad gant ar Jeneral Luders. Evit kenderc'hel ar peoc'h, e viras na vije canet canaouennou hag a zisplije d'ar Russianet. Kementse a zisplijas da dud ar vro hag a lakeas droug-prezeg anezhan. Lavaret a reat e voa a unan gant mac'homerien ar vro. Kementse a voa gaou, hag an arc'hescop a zalc'he mad oc'h ar Russianet.

Ar Jeneral Luders a c'houlennas digantha petra raje evit digueri an ilizou. — Diou ilis so bet saotret, eme an arc'hescop, hag a rancan da gonsacri a nevez. Ar re all ne vezo great nemet lavaret enbo pedennou an daou ugent heur evit ho digueri.

Kementse a lakeas ar Jeneral e counnar. Ne allit ket ober an dra-ze, emezhan; n'ho lezin ket d'hen ober; rag evelse e ve anzaio eo ar zoudardet o deus saotret an diou iliz-ze, ar pezh ne ell ket beza.

— Pa'z eo meneg eus ar relijion, eme an Arc'hescop, eo me epken a so barner, hag a dle gouzout petra am eus da ober. Ne allit ket terri lezennoù an iliz! An diou iliz-ze so bet saotret, hag a zo red ho c'honsacri a nevez.

Setu gant pebez fermder e kendalc'ho an Aotrou Felinski guirioù an iliz. An dud a deuas buan da anaout kementse, hag a neuze o devoue respet bras evithan, dreist oll pa deuas an dispac'h a enep ar Polonn.

An arc'hescop a scrifas gant ar brassa respet d'an impalaer evit he bedi da viret na vije scuillet kement a c'hoad. Gouzout a reas e tenne dre eno an arneù var he guein, mes hen ne c'houlenn ket guell eguet mervel evit he zenvet. O veza douguet evel abalamour ma voa bet condaonet eur beleg pehini n'en doa great son nemet rei ho sacramentou da dud dare da vervel var dachen ar vrezel, e voe laket er prizon ha casset goude da Sant-Petersbourg evit beza barnet.

Setu ama ar c'homzou diveza a voe etre an impalaer hag hen:

Mar kirit, eme an impalaer, ez eot en dro da Varsovi. Mes araog e rankit pellaat diouzoc'h ho c'h hureou. Ho callout a so red deoc'h da ober da lacat an oll da veza sentuz ouzin, ha da zerc'hel mad din. Setu ar pezh so red deoc'h da ober evit miret na ziscarguin va c'hounnar varnoc'h. Nazonjit mui erpezh o poa c'hoant da ober, er pezh o poa c'hoant da ziskuez hag abalamour da bere e tliac'h beza casset pell so d'ar Siberi.

Mar deo an dra-ze a fell deoc'h, eme an Arc'hescop, ma na ellan ket gouarn ar gristenien so fiziñ enon ervez lezennoù Doue hag an iliz, eo guell ganen e sevenlac'h ar gourdrozou a rit din hag em c'hasiac'h d'ar Siberi evit va lezel da vont en dro d'am arc'hescopi.

— Mad, kenavezo ta, eme an impalaer.

Goude an Aotrou Felinski so bet harluet ha dalc'het er prizon e kær Jeroslaw var ar ster Volga, hag ema ato eno. Lamet eus digantha kement en doa, beteg he galir hag ar mean sac'var behini e lavare bemdez an oferenn santel. A bep seurt cridenn a rer dezhan o clase he lacat da herella er feiz ha da ober ar pezh a c'houlenner digantha. Da lavaret eo, da c'houlenn he zenvet ervez froudennou an impalaer ha ne ket ervez lezennoù an iliz. G. M.

BUEZ AR PLAC'H DEVOT ARMELA.

(Pevare pennad).

Goude beza bet, e pad keid amzer, poaniou ker eris da c'housaon, he mestrez o veza var ar meas evit tremen an aon, a grogas c'hoant gant hi da vont d'ar n'em voualc'hi, hag a falvezas d'ez hi cass Armell d'he heul. O veza erruet e kichen an dour, an itroun a velas he servicheurez daoulined, he daouarn croajet hag he daou

lagad saved var zu an env. He gourdrus a reas hervez he c'hustum en eur lavared d'ez hi : « Ac'hanta, pen-aveled ! petra a rez-te adarre ? » Armell diuned, evel euz a eur c'housk-c'houek, a lavaras d'he mestrez gand calz a zouster : « sounjal a ran, emez-hi, en eur sellad euz ar ster-man, e gouaz-red Cedron, a dremenas hor Salver eun tachadic araoç mervel. Kerkent he diou chot a deuas da veza ruz-glaou, hag he daoulagad a leucas eur mor a zaelou. An daelou-se a douchas an itroun, hag a reas d'ez-hi anaout ar pez a ioa dija anavezit gand an holl, da lavared eo furnez ha santelez he servicheurez. Douster, habasdet ha sentidiguez Armell, a oue pelloc'h anavezit evid ar pez m'a ouant ; hag an itroun a velas erfad ne deoua ket evit matez eur ber a spered, evel m'a sounje d'ez-hi. Goulen a reas pardonn digand Armell da veza bet ken dall en he henver, hag e pedas anez-hi da ancounac'hâd ar boan e deoa great d'ez-hi. Dont a reas ive da gaout kement a joa hag a garantez evid he flac'h, m'a he lezas a-c'houde-vech da heuil grassou Doue hag e lekeas anez-hi e penn he zieguez. Armell, euz he c'hostez, a lavaras d'he mestrez ne doa pardonn ebed da c'houlenn digand he servicheurez, hag e oa he c'harentez ar vrassa evid he mestrez goude hini Doue. C'hui, emez-hi, oc'h euz va sicouret da gaout ar guir vuez, en eur rei d'in eur groas benac da zouguen ; ho cared a ran evel eur vam, ha m'a c'helfen rei d'heoc'h ar goad euz va gouazied, her roffen a galon-vad.

Er mare-se ar verc'h-ena euz an ti a oue demezet da eun dijentil a chomme en eur c'hastel var ar meas e kichen *Gouened*. Ar c'hreg iaouanc o rancout mont da heul he fried di, a bedas he mam da rei d'ez-hi Armell evit lacad evez euz he zi. An itroun goz he roas, petra benac gand calz a boan ; mez Armell a glevas ar c'healou-se gand calz a levnevez, rag m'a zea pell euz he zud a vije bepred o clask he lacad da zemezi. Mez epad an daou vloas kenta Armell a renas eur vuez melconius meurbed ; Doue a lamas digant-hi guir vagadurez he ene o tivouered anez-hi euz ar blijadur a gave guechall o pidi : he c'halon a gouezas adarre er sec'hor. Cousgoude Doue a lezas ebken ganthi an aon da derri he lezen dre eur pec'het benac. Coueza a reas neuse en tentasionou ar re vrassa, ha penifide ar sounj euz ar voue e deoa great da chom bepred guerc'hez, hag ar sicour a zigasse d'ez-hi ar verc'hez, e vije couezet e meur a zisurj. Lacad a c'hellomp c'hoas e touez ar pez he c'hendalc'has e gras Doue, ar c'hustum hag ar pleg e deoa kemered da chom eb ober netra araoç beza goulnned ali he c'honfessour.

Unan enz he brassa poaniou oa dre m'a ne c'helle ket caout eur c'honfessour evit gouarn he ene ; hag ar veleien m'a zea davit-ho da govez ne ouient ket petra lavare. O veza bet casset da dremen eun deiz benag da Bloermel, e zeas da gaout ar relijius a ioa bet guechall carguet euz he c'houstians. Diskuil a reas d'ez-han oll boaniou he ene, hag e c'houlennas digant-han, a mad e vije d'ez-hi chom e Ploermel evit heuil adarre he aliou mad. Ar relijius a velas sclear ar pez en doa c'hoant Doue da ober euz ar servicheurez-man ; lavarat a reas d'ez-hi

e vije treac'h d'an drouk-spered er brezel a reas d'ez-hi, ha dre-se Doue a c'houlenn digand-hi, distrei kenta m'a c'helje da di he mestrez iaouanc. Armell a sentas gand calz a boan ; mez ar sentidiguez caer-se, a zigoras evit-hi an hent euz a eur vuez gwelloc'h.

Eun nebeud dervechou araoç m'a roas Doue d'ez-hi ar c'bras vras-se, Armell a oue touelled muioc'h egued biscoas gand sonjezonou scrijus a eneb ar burentez. Beuzet en he daelou, o veled peguen nebeud e zea araoç er santelez, e za da hirvoudi e creiz eur prajad ieod. En em strincâ a reas eno d'an douar a stog he c'horf : he daelou a deu neuse da reddeg evel diou feunteun digueri a ra he c'halon d'a Zoue, lavared a ra d'ez-han an oll boaniou euz he ene, hag her ped da lemel anez-hi euz a vuez ar bed-man, kent evid he lezel da goueza er pec'het marvel. Var an heur ar chadennou a oue bruzunet : kement a reas poan d'ez-hi a belleas : en em gaout a reas neuse diliamet a bep costez : dont a reas da veza maro evid an oll draou crouet, evit kemer ar penn euz a eur vuez a dlue rei oll de c'brouer eviziken.

Adalec ar burzud caer-se gread en he c'henver, Armell a c'hounzas calz er santelez ; carantez Doue a deuas da n'em guemered anez-hi e pep tra ; Jesus a n'em ziskuezas d'ez-hi en eun doare aned, ha goude he beza laked da vervel evid an oll draou crouet, e lekeas ive anez-hi da vervel evit-hi he-nnan, evit m'a c'helje lavaret gand Sant Paul : « Beva a ran, mez n'eo ket me a vev, Jesus-Christ eo a vev en-hon. »

Eun nebeud amzer goude, dre m'a n'em gave ato sempl abalamour d'an derjen e doa bet, hag abalamour d'an ners euz a dan ar garantez divin he deve, e zeas, dre ali an tadou Jesuisted, da gouent an *Ursulinezet* er gar a *Vened*. Lakeat e oue eno da guenta evit beza porjerez d'an dud a deue euz an diaveas : mez he ners o veza deut d'ez-hi nebeud-a-nebeud, e oue laket da zizervicha ar vugale a ioa er scôl. Al leanezed a anaie mad he santelez, hag a n'em gave evurus da gaout en ho c'houent eun evelep servicheurez. Mez Armell o veled he ners deut d'ez-hi, a guemeras euz eun ti e leac'h m'a vije great kement a stad anez-hi. Eun eontr d'ez-hi, rilijius euz a urs S. Dominic o veza deut d'he gueled, a lavaras d'ez-hi a ranke mont er meas euz ar gouent-se, m'a deoa c'hoant da heuil ioul Doue he galve da zouguen eur groas, ha tam en oll da ren eur vuez dibreder. He c'honfessour a gave mad an ali-se hag ouspen-se, an itroun m'a oua bet en he servich kentoc'h a ioa prest da goueza, hag a ziskueze caout calz a c'hoant de c'haout adarre en he zi. Armell evit plega da Zoue a zistroas adarre eta da di he mestrez, hag a joumas en-han a c'houde vech. T. B.

CAYENN.

Lizer ann Tad Bailly da eun Tad all e Franz.

Daou pe tri miz zo, an Tad Jardinier a skrive d'in. Kasset oun bet da zerc'hel lec'h eunn tad all en

he barez. — Ann tad-ze, o veza kollet gant-han he iec'hed, a zo bet galvet da Gayenn. Ezom braz en doa da ziskuiza eur pennadik-amzer. Ne oa ket mui evit herzel ouz kement en doa da ober enn he barrez. — Mont a riz di e kompagnunez eun den a vrezel (gendarme). Hema, evit-han da veza brezeliad, a oa eunn den leal ha kristen mad, mar boa biskoaz. — Araok mont d'ar barrez ma oan galvet d'ezhi, e liviriz d'am hincher : Aotrou keaz, eul leo ac'han am euz da welout eur c'hoz morian ; skrivet eo d'in eo chommet klanv. Hag ouz-penn, lavarout a reur n'en deuz great communion e-bed epad he vuez. Ne fell ket d'ezhan ober anezhi, rak, emez-han, n'en em gav ket dellezek pe dign euz a eur c'hraz ker braz. — Ha piou eo eta hennez, eme va hincher ? Sylvestr a reur anezhan. — Sylvestr ! Hoghen n'euz den gwelloc'h evit-han. — Morse n'eo bet etre daouarn ann dud a vrezel (les gendarmes) Ama, deomp eta da welout ar morian mad-ze. Setu ni enn hent. Baleda a reomp war ribl ar mor. — Eunn heur goude e tigouezomp enn he di. Saludi a reomp ann holl, he c'hreg, he vugale hag he servicherien, rak bez'en doa tud enn he servich. E pelec'h eta eme ann den klanv, a c'houlennomp ? — Ema du-hont d'al lae, a respont ar c'hreg. — Pignat a reomp er gambr, hag eno e kavomp hon koz morian. Bez'en doa bleo gwen ha rodellek war he benn. Eur baro hanter-gwen a oa ouc'h he helghez. — Gourvezet e oa gand he zillad war eur gwele kempennet brao. Pa ziguezomp enn ti, he c'hreg hag he vugale ho deuz eur joa vraz o welout ac'hanomp. — Sylvestr, a liviriz d'ezhan : digasset am euz d'ho pizita eunn den en deuz va holl fisisanz, hag euz a behini e rann kalz a stad. — Mad, mad, Tad keaz. Hag e trugarek ac'hanomp enn eur astenn he zivrec'h hag enn eur blega he benn. — Sellout a ree ouz-omp adalec ar penn beteg ann treid. Plijadur vraz en doa o welout ann den a vrezel. Hema, oc'h erruout enn he ghichen a stardaz dezhan ann dour. — Goulen a reomp penaoz a rea ; abaoue pegheid amzer e oa klanv ; pe seurt louzou a ghemere evit gwellaat ? — Siouaz ! he glenved brassa ha danjerussa e oa beza oajet a bemzek vloaz ha tri-ughent. — Goude-ze e teuomp da gomz euz ar ghenta communion ne oa ket bet c'hoaz great. — Ar morian a respontaz enn he c'hallek trefocet (en son patois) : *Mo pa pouvè* : me ne hellan ket. — *Mo pas digne*. Me ne veritan ket. *Mo pas assez savant*. Me n'oun ket desket a-woalc'h. Guir eo, a liviriz d'ezhan ; n'oc'h ket dellezek pe dign euz eunn hevelep graz, na hini all e-bed ken nebeut, hoghen Doue he-nnan a c'hourc'hemenn d'e-hoc'h reseo he goff sakr, ha c'hoi hoc'h euz ezomm euz ar sakramant-ze. Desket oc'h a-walc'h evit ober eur gommunion vad. — Sylvestr hanter-gouezet a respont : *Mo pas dire non*. Me ne lavarann ket ne rinn ket anezhi. Se ne oa ket a-walc'h evidomp. Ni a garfe klevout ar gher-man euz he c'hinou : la, ober a rinn va c'henta communion. Ar morian keaz a chomme aheurtet enn he venosiou. Eunn aoun faoz ha re vraz a vire out-han da reseo he Zoue. — Neuze ta hon den a vrezel a zeu d'hon sikour dre gom-

ziou nerzus ha deread-meurbed. — Penaoz, Tad Sylvestr, eme ar brezeliad, te anavezann abaoue dek vloaz zo, te, n'eo bet morse tamallet gant den, te, n'eo bet morse etre daouarn ann dud a vrezel (les gendarmes), te, n'eo bet morse kasset dirag ar barer, te, a zo bet badezet evel-d-omp, te, Sylvestr, a iafe da vervel hep beza great da ghenta communion, eun den leal evel-d'oud ? Tra, tra, ne vezo ket se. P'eo gwir, ann Tad a lavar d'id ec'h hellez ober da ghenta communion, gra-hi. Sent ouz ann Tad ha dioc'h-tu. Selaou Sylvestr, ar *sentidiguez* me soudard, ne anavezann netra ken. Ar morian, o veza tenereat he galoun gand ar c'homziou kaer ha kristenn-ze, a respont d'he dro : *Mo pas dire non*, me ne refusann ket. *Mo voule, quand le père voule*. Ober a rinn anezhi pa fell kement-se d'ann Tad. Joa vraz neuze evit ann holl, ha dreist pep tra, evid he c'hreg hag he vugale. O veza bet kelennet, katekizet, koesseet, Sylvestr a reaz he ghenta communion gant devosion ha joa vraz enn he galoun. Oh ! va Zad, emez-han, great am euz va c'henta communion, hoghen esperout a rann ne vezo ket an diveza. Keit ha ma vevin, e tostainn aliez ouzann daol zakr. Abarz kuitaat e oa red d'e-omp eva ha dibri eunn dra bennak. Poan ho devije bet o welout ac'hanomp o refus ar pez a gbinighent. A hent all ne oant ket paour ; bez'ho doa peadra da vev. Evelato Doue a ra d'e-omp tanvaat meur-a-weach eun nebeut frealzidiguez pe konsolation evit hon kennerza enn hon labouriou ken rust ha ken tenn.

Recevit, va Zad, etc. BAILLY, S. J.

Le Belair, 57.

M. D.

MARINA.

Tost da gær Clermont, en eur barrez var ar mæz, e veve brema ez eus eur pennad amzer, eun itron goz, hanvet an Itron Valnoar pehini a voa providans ar vro. Ne dea morse da vale na vije oc'h he heul eur plac'h iaouanc hanvet Marina, he matez a gampr, pe guentoc'h he mignonez. Hi e devoa lakeat an itron da zistrei oc'h Doue ; rag an itron-ze, bet savet couls lavaret ep relijion, ne rene nemeur eur vuez christen pa guemeras Marina en he zervich.

Tud Marina a voa labourerien baour, mes christenien vad. Abred e collas he zad hag he man, ha neuze e voue kemeret e couent Ursulinezet Clermont, eleac'h ma recevas eun descadurez hag eur gueleannadurez eus ar re vella.

Dont a reas ar mare dezhi da zistrei ac'han d'ar gær, hag evel ne devoa ket a beadra, e voue red dezhi mont da zervicha. An Itron Valnoar, pehini a jome en eur maner a döst, he goulnnas evit he flac'h a gampr. Ar verc'h keaz a voue eur pennad oc'h arguil. An itron ne voa ket æz beza en he zervich, hag ar brud e devoa da veza digar e kenver ar re a voa dindani. A hent all bez' ez oa en ti calz mitizien ha ne roent nemeur a scuer vad er c'harter. Marina gouscude a as-

tra, memez o lavarout va breuriel en or vont hag en or tont eus ar presbital d'an iliz. Ma jom ar bed evelse ganeen, na hellin ket gouniz ar baradoz; re a vin bet eürus var an douar; hoguen Doue na laosko ket heb kroaz he servicher. Kenavo, skriva a rin did c'hoaz ar sizun ma zeu. *** A. M.

Hano ar Zent evit ar Sizun-ma.

DILLUN 24. — An Itron-Varia-a-Drugarez.
 DIMEURS 25. — Sant Herri, impalaer.
 DIMERC'HER 26. — Santez Martha, guerc'hez.
 DIZIQU 27. — Sant Com ha Sant Damien, merzerien.
 DIRGUENER. — Sant Venceslas, merzer.
 DISSADORN 29. — Sant Mikeal, arc'hel.
 DISSUL 30. — Naontecvet goude Pantecost. — Sant Jerom, doctor eus an Ilis.

An Aviel hirio :

Jesus a lavaras d'he ziskibien : C'hui eo c'hoalen an douar. Mar coll ar c'hoalen he nerz, gant petra e vezo sallet? Ne deo mui mad nemet da deleur er meaz, ha da veza bresset gant treid an dud.

C'hui eo sclerijen ar bed. Eur guær savet var eur menez ne all ket beza cuzet. Ne elumer ket eur c'houlaouen evit he lacat dindan ar boezel; mes he lacat ar rer var eur c'hantolor evit rei sclerijen da guement so en ti.

Ra skedo evelse ho sclerijen dirag an oll dud, evit ma velint hoc'h oberou mad, ha ma rentint gloar d'ho tad pehini so en env.

Na zonzit ket e venn dent da zistruja all lezen pe ar brofeted; n'oun ket deut d'ho distruja, mes d'ho seveni. Rag hen lavaret a ran deoc'h e guirionez, an env hag an douar a dremeno kentoc'h evit na dremeno eur poent pe eul lizeren eus al lezen ep beza sevenet. An hini eta a dorro unan eus an distera gourc'hennou-ze hag a zesco d'an dud ho zerri, a vezo an diveza e Rouantelez an Env (*ne dai ket d'an env*), an hini avad ho miro hag a zesco ho miret, a vezo braz e Rouantelez an Env. (Sant Vaze V. 13.) G. M.

KELEIER.

An Aotrou Briz, person Henvic, so maro an derveziou tremenet.

An Aotrou Poullaouec, vikel e Briec, so maro an trizeg a vis guengolo.

Gazeten ar Meziou a guendalc'h da lavaret en em glemer e cals a lec'hiou eus ar glaocier. An ed guenn so destumet fall e meur a leac'h; an ed du so poan oc'h he zestum. An avalou douar a vrein. Ar beterrabaz a so braz, mes dourog, hag evelse ne roint ket kement a vagadurez. E costez ar Sao-Heol da Frans n'eus ket bet a eost avoale'h, hag e vezo red

prena ed. Er c'harteriou all n'eus ket bet ken nebeut a eost mad couls lavaret e nep leac'h. Gouscoude ar vellaen a voa deut var an ed er marc'hajou so chomet a za. Mes esperout a eller ne fallai ket varnezhan.

Ar c'huac'h a viz here e tigoro eur retred brezonnec, evit ar merc'hed, e Lesneven hag e Kemper.

Ar pevare a viz guengolo eo bet benniget ar c'henta mean eus an iliz nevez a zaver e Santez-Anna-Venet. An Aotrou Arc'hescop Roazon, pedet gant an Aotrou Becel, Escop Guenet, so deut da vinniguen ar mean kenta-ze. Bez 'ez oa eno beleien ha christenien fidel aleis deut evit ar solanite-ze. Evit beza n'oa ket benniget c'hoas ar mean kenta, al labourou a voa digor eno pell a voa. Ar mogueriou, a leverer, so dija lod anezho savet huel.

Ar besketerien sardinet o deus great er bloa-ma eun eost pui. Pell braz a voa n'oa ket bet kemeret eun niver ker braz eus ar peskedigou-ze. Douarnenez ha Conc-kerne o doa laket eis cant peder ha pevar-uguent hag da besketa sardinet. Epad mis gouere o deus kemeret tremen cant dec milion. Abenn fin miz eost ez oa kement anezho, ma na verzet nemet eis real ar milier, ar pez n'oa ket bet gullet dec vloas a voa. Evitho da veza marc'had mad, ez eus guerzet evit seis cant seis mil c'huac'h cant eiz ha daou-uguent lur a zardinet.

Daou goueriat a voa en dez-all o sina var ar memes caier. Unan anezho a voa hanvet Predour hag eguile Brenner. Predour a zinas da guenta hag evel ne deo ket cre cre var ar scrifa, e lakeas he hano evelen, *Predour*. Brenner o velet-se a lavaras dezhan : Perag ne c'heus-te ket laket pred guin eleac'h predour? Me zo guelloc'h ganen caout guin d'am fred evit our. Ha te, eme ar Predour, perag ne lakes-te ket Bleuder eleac'h Brenner? Me so guelloc'h ganen caout bara great gant bleut evit bara great gant brenn. G. M.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 15 Guengolo.		PONT'NABAT — 15 guengolo.	
<i>Priz ar c'hant tiour.</i>		<i>Priz an hectolitr.</i>	
Guinis....	43 lur, 38 c.	Guinis....	20 lur, 04 c.
Segal.....	8 lur, 10 c.	Segal.....	11 lur, 52 c.
Eiz.....	7 lur, 64 c.	Eiz.....	9 lur, 59 c.
Ed-du....	6 lur, 32 c.	Ed-du....	9 lur, 35 c.
Kerc'h....	8 lur, 39 c.	Kerc'h....	7 lur, 88 c.
Avalou-douar	4 lur, 00 c.	Avalou-douar	4 lur, 07 c.

Ar Gerant : AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gant AR. DE KERANGAL, Mouler an Escopti.

FEIZ HA BREIZ

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA, DIGASSET BEP SUL Da guement Christen a goms ar brezouneec.

Eun Abonnament d'ar Gazeten à goust :

Evit eur bloas..... DAOU SCOUET.
 Evit c'huac'h miz..... EUR SCOUET.
 Evit tri miz..... C'HUEG'H REAL.
 Eur gazeten ebken..... DAOU VENNEG.

Ar baecament a lle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat ar gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Belec e Kemper.
 Ar paecamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN ebken. An' abonnament a guement er d' an Aotrou SALAUN librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 29 Guengolo 1866.

Processionou, pelerinachou, pardonou, setu ar pez a blij d'ar gristenien catolic, mes ne blijont ket d'an dud dizoue, d'an dud difeiz; miret a reont outho da gousket. Beteg e Paris ez eus tud hag a ia ive e pelerinach! E Paris? Ma vije c'hoaz e Breiz e vije eleac'h ma zeo an dud ken dizesc ha ker pell varlerc'h ar re all! Mes e Paris, eleac'h ma zeus kement a sclerijen, eleac'h ma zeus kement a dud goueziec, a zoctoret evit kelen hag alia ar re n'o deus ket a zescadurez! Piou a grette eun dra evelse nemet gullet en dese?

Mad, bez'ez eus. E Paris e caver ive tud hag a ia vandennou da bardona evel ma zafe tud divar ar meaz eus a vouelet Breiz-Izel. Unan eus ar scrifagnerien ep relijion en deus gullet gant he zaoulagad he unan, ha n'en deus ket gallet miret da lavaret : « Piou en divije sonjet en eun dra evelse? Mes ne allan ket doneti; gullet em eus va unan. Mont a ra bep bloaz ac'hann bandennou tud e pelerinach da Sant-Cloud evit enori ar zant-ze! » Ar pez hen laca souezet eo ez afe pep hini eus an dud-ze gand an dillad a gar, ha ne lacafent ket oll pep a zae venn evit diskuez ez int inosanted.

Daoust ha ne ve ket couls mont e pelerinach da eul leac'h a zevotion evel ma zeo mont da eun davarn bennag da vesvi? Daoust ha ne ket couls beza oc'h heul eur procession evel beza etouez ar bandennou tud discramailze a veler e kar hag avechou var ar meaz oc'h ober freuz, trouz ha safar, o lacat an dizurz e pep leac'h? Daoust ha ne ket couls mont da zilaou comzou Doue, evel mont d'an ebatou pe d'al lec'hiou-ze e pere ne veler ha ne glever nemet traou control d'ar feiz ha d'an honestiz? Daoust ha tud kar couls ha tud divar ar meaz n'o deus ket izom eus a veur a dra, ha ne ve ket mad dezho pedi mignonet an Aotrou Doue d'ho sicour?

Guir eo kement a ia e pelerinach, kement a ia da bardona, ne grescont ket ho zantelez o vont. Evelse ar scrifagner a gri a enep pardonerien Sant-Cloud, a lavar

penaus, var al lestr tan h'oc'hasse hag ho digasse, fod a gane kanaouennou santel, lod all e gane soufon tud. Goal uzach a eller da ober eus an traou gwella. Evit gullet eo guir kementse, he ve nemet sonjallere a goms a enep ar relijion. Doue en deus roet spere ha skiant da lod anezho, hag e lakeont ar spere hag ar skiant-ze da ober brezel dezhan has d'he ilis. Ne dleer ket eta beza souezet ma veler kement tud hag a iud ar memez leac'h. Er pardonou var d'ho Paris couls hag e leac'h all, e vez daou eun dud. Eur rum a ia eun monez da bardona, da bedi da c'houlen eun ebras bennag, hag ar re ma ep mar eo a glever o cana mediantou an Aotrou Doue; eur rum all a ia evit gullet ha beza gullet, da glasc ebat ha plijadur, hag ar re ma pere ne garont nemet ar bed hag he c'hiziu fall, ne dleont ive medli nemet ar bed hag he ebatou. Hoguen petra bennag ma za tud difeiz, tud direot d'al lec'hiou-ze a belerinach hag a bardon, evit lacat an dizurz enho, mar guellent, kementse ne viro ket oc'h ar guir gristenien da enori ha da bedi ar zant, da ziskuez dezho ho izomou; kementse ne viro ket oc'h ar zant, mignonet an Aotrou Doue, da zignemeret ar re a ia d'ho fedi, da silaou ho mouez ha da rei dezho ho goulen.

Rom. — Goude beza discleriet da guirion daou vuzud great gant an den eurus Paul ar groaz, an hini en deus savet urs tadou ar bassion, hon Tad Santel ar Pap en deus comzet evelen :

« Ar Relijion catolic ne deo ket brec'haign evel ar fals relijionou. Ar fals relijionou a deu eus a zrougiez an dud, ha ne oufent douguen nemet droug. Mes ar relijion catolic a zeu digant Doue, ha kement a ra Doue a zoug frouez a vuez, eus ar vuez a bado ato.

Paul ar Groas a so eur froueze evelse, cutaillet nevez zo e liors an ilis. Gouzout a rit peguement a vad en deus great etouez an dud dre ar zantelez eus he vuez ha dre he labourou abostolic. Gouzout a rit penaus en deus savet eun urs a leanet evit kenderc'hel da zicour an nessa, da

zistruja ar pec'h et ha da skigna ar ventus e pep leac'h, ha da ober evelse vad d'an iliz ha d'an oll.

Mar gra ar c'houenchou kement a vad d'an iliz ha d'an oll, penaus e tigouez ma en em zaver en ho enep ha ma zeus c'hoant d'ho distruja ? Ah ! Meur a abeg so eus arguementse. Setu ama tri etouez ar re all.

Da guenta, en hon amzer ez oar difeiz avoalc'h, (ha kementse so bet lavaret din va unan,) evit falvezout ma ve renet an dud gant lezennou dizoue, ha dre-ze ep ober fors eus a relijion ebet, hag o rei cabest da oll dechou fall an den. An dud difeiz a egar a enep ar c'houenchou hag an oll dud a ilis, abalamour ma prezegont, ha dre gomz ha dre skuer, eul lezen a bep hent control da guementse. Ne die ket beza souez ma ve brezel etre bugale al lezen dizoue, ha bugale lezen Jesus-Christ.

D'an eil, an dud difeiz ne maint e peoc'h na gantho ho unan, na gant ar re all, na gant Doue, eleac'h al leonet ne ket epken a so e peoc'h ho unan, mes c'hoas he rei a reont d'ar re all, ha labourat a reont da lacat ar peoc'h-ze beteg etre an enebourien. Evelse an dud difeiz ne allont ket gouzaon o defe ar re all eur vad ha ne ellont ket da gaout ho unan, hag o deus cassoni outho, hag ho goal gassont muia ma ellont.

D'an tredo, epad ma teu an dud difeiz da vac'homi ar bopl, da aloubi he vadou, d'he deleur en dienez, da lamet digantha zoken magadurez he ene pe da deleur contam er vagadurez-ze, ar venec'h hag an dud a iliz a ro d'an oll bara ho ene dre gomzou Doue, dre ar zacamanchou, dre ho skuer vad, hag ive bara ar c'horf dre ho aluzennou. Penaus e c'halle fals vignonet an dud gouzaon ho mignonet guirion ?

An heskin a zo bras, mes dalc'hit mad a enep an dud difeiz, hennez eo ho lod. Pedit Doue da bardoni da enebourien an ilis ha d'ho lacat da ober pinijen. Diskuezit dirag daoulagad an oll ez oc'h christenienn, evit ma reot mez dre ho skuer d'an dud dizoue. Ra deui an Tad, ar Map hag ar Speret-Santel d'ho penniguen oll ha da venniguen ive hon enebourien. »

FRANS. — E Frans, eme ar gazetenn *l'Événement*, ez eus c'huec'h ha pevar-uguent etre arc'heskeb hag eskeb ; cant nao ha pevar-uguent vikel-vras : pevar mil pemp cant seiteg person canton. Bez'ez eus naonteg ha tri-uguent mil pemp cant pevar ha pevar-uguent beleg, ha cant eis mil cant naonteg manac'h pe relijius.

ARRAS. — Setu ama eun darvoud digouezet en eur gueric vian en escopti Arras, hag a ziskuez ne les ket ato an Aotrou Doue ober goap eus ar sacramanchou ep diskuez sclerijen d'an nep her gra.

Dere'hent gouel anter-eost, eun toullad micherourien a voa destumet en eun davarn. Unan anezho, eur peza a ugent real gantha en he zorn, a lavaras da eur c'hamarad : « Sell ! mar kerez, me da gomunio ! » — Gra-ta, eme eguile, hag hen da zigueri he c'hinou. Ar peza arc'hant so laket var he deod, ha

lonket ker buan. Mes ar peza arc'hant a jomaz en he c'houzoug. Caer en devoa tourloncat, ne alle ket ober dezhan disken. Daou pe dri den a vicher a glaskas tenna ar peza ugent real, ne rejont nemet he lacat da vont donnoc'h ha startoc'h e gouzoug an den reuzedic. Hema neuze a gomansas da grena o sonjal er peza en doa great. He alan a elle da gaout c'hoas, mes ne elle lonca nemet dour. — « Doue en deus va scoet, emezhan, hag ep mar e rankin mervel. » Mont a ra da gaout person he barrez, hag e covesa gant an oll mercou eus eur guir gueuz. Ar vedecinet a felle dezho kemeret ho benviachou evit tenna ar peza arc'hant. Mes kementse a voa diars bras da ober. An den keaz a voue alieta da lonca eur verennat eol da zibri. Hen ober a reas, petra bennag m'en doa donjer oc'h hen eva, hag an eol a zachas ar peza a ugent real gantha d'an traon. Pa voa tennet a boan, ar micherour keaz a drugareka Doue ; ha meur a vech en deus touet ne ankounac'haje biken ar guentel en deus bet.

Hon Tad Santel ar Pap en deus laket cass eus he bers medalenneu aour hag arc'hant, var bere eo kizellet he skeuden pe he imac'h d'ar *seurezet a charite* a so bet var dro an dud clan gant ar c'hobera er guer a Amien.

Eur gazetenn eus a guer Toulouz o c'omseus al lezen a c'houre'hemen d'an hostizien chom ep rei da eva, ha serra ho zi epad an ofis divin, a lavar penaus en eur c'harter bennag en Alemagn en em guemerer en eun doare ijinus meurbet evit kementse. Eur *bourg-mestr*, pe eur gouarner, en deus douguet eur *reglamant* d'he behini e lavar e c'hellb ar re a vezo roet d'ezho da eva epad an ofis divin, mont kuit ep paea ar peza o devezo kemeret. Goaz aze d'an hostiz. Dezhan eo da lacat evez ma n'en deus ket a c'hoant da rei he evach evit netra.

Ar relijion catolic, eme eur scrifagner brudet, a ra evel ar mor bras ; gounit a ra dioc'h eun tu ar peza a goll dioc'h eun tu all. Ne deus netra guiroc'h evit an dra-ze. Mar da ar feiz var ziminu en unan bennag eus ar broiou catolic, ez a ive var grese e cala a vroion all. An had divin eus an Aviel, taolet en douar gant ar visionerien en oll garteriou eus ar bed, a veler e pep leac'h o tiouan, o c'haza, o touguen pennou ha greun mad. Etouez an dud gouez, etouez ar brotestantet, etouez ar bobliou eus ar sao heol pere so bet en em zistagnet dioc'h ar guir iliz, e veler cala o tistreï, o tiguéri ho daoulagad d'ar virionez.

Evelse e touez ar Bulgared, e tu ar sao-heol, e veler tud ar c'harter oc'h en em drei oc'h an ilis catolic. Ar visionerien o doa labouret eno. Mes ar peza en deus great marteze muia vad er vro, eo eur manac'h eus ho zouez, eur manac'h eus eur fals relijion. Ar manac'h-ze a zo desket mad, da viana evit ar vro-ze, hag evel ma en deus eur speret eun, eo deut da anaout e voa c'arguet

a c'heier ar guelennadurez a roer er relijion ma edo enhi, hag e ma ar virionez en iliz catolic. En em lakeat eo bet da ober ar brezel d'ar guier a gave en he fals credennou. Ec'h ellit cridi ez euz bet hiskinet outhan, hag en deus bet cala da c'houzaon, mes kementse n'en deus ket miret outhan da lacat meur a hini eus he guenvroiz da zigueri ho daoulagad. E guirionez ar fals relijionou, o veza savet ha fontet var ar gaou, a goll ato o veza studiet. An hini ho studio gant eur speret eun ha gant c'hoant da zizelei ar virionez ne oufe ket mancout da drei keid dezho.

E Brozaos ive ar feiz catolic a c'hounit bemdez. Brema ez eus menec da zevel e Londrez eun iliz cathedral nevez, evit dere'hel sonch eus ar c'hardinal Wiseman. Ar re vras, ar re binvidig en em gleo evit sevel arc'hant da ober an iliz-ze, hag e leverer ez eus savet a vrema tremen pemp cant mil lur.

Er broiou a bell, en ezeiou, e pep c'harter ana-vezet, e skign ive ar feiz. Ne deus nemet lemm liziri ar visionerien evit guelet kementse. Ar guir iliz a so ato leun a vuez, ha caer a ve stourm outhi, en em skign ato hag e toug ato frouez. G. M.

HISTOR ZANTEL.

(Daou-ughentved pennad).

Jakob a vennig Ephraïm ha Manasse.

Eur pennad goude ma en doa Jozeph lavaret da Jakob ne vankje ket da gas he gorf d'ar bez emedo enn-han he dud-koz, e teujeur da lavarout d'ezhan e oa klanv he dad. Jozeph, o kemerout he zaou vap, Manasse hag Ephraïm, a ieaz raktal d'he velout.

Lavaret e oe d'ann hini koz : Setu ho map Jozeph deut d'ho kuelout. Jakob, o tastum he holl ners, a zavaz enn he goazez var he vele, hag a lavaraz da Jozeph pa oe deut en he ghichen : Ann Doue holl-c'halloudek en em ziskouezaz d'in e Luza pehini a zo e douar Kanaan, hag en deus benniget ac'hanoun, en eul lavarout : Me rei d'id kreski hag eleiza, me lakai da zevel ac'hanoud eun niver braz a voblou ; me rei d'id ann douar-ma, hag he berc'hen e vezi da viken, te ha da lignez en da c'houde. Evelse ann daou vap a zo ganet d'id enn Ejipt, abars ma teuz daved-oud, a vezo bugale d'in ; Ephraïm ha Manasse a vezo lakeat e renk va mipien evel Ruben, Simeon hag ar re all. Ar vugale all as pezo enn he goude a vezo d'id, ha ne vezint nemet bugale-vihan d'in. Rak pa zistroenn euz ar Mezopotamia, Rachel, ho mamm, a varvaz hed ann hent, e douar Kanaan ; d'ann nevez-amzer e c'hoarvezaz kement-se, pa arruenn var zouar Ephrata ; hag e likiiz anezhi er bez var vord hent Ephrata, pehini a c'halver ivez Bethleem. N'em euz bet anezhi nemet daou vap, Benjamin ha c'houi, hag evel ma'z oc'h ar map henan, e kemerann ho taou vap Manasse hag Ephraïm evit bugale d'in ;

evit ma vezo krevoc'h lignez Rachel e touez ligneziou va bugale all.

Hag o velout eno, evit eun amc'houlou, Manasse hag Ephraïm, e lavaraz da Jozeph : Pion eo ar re-ze ?

Jozeph a respontaz : Va Mipien int, ar vugale en deus roet Doue d'in er vro-ma !

Digassit-ho d'in, eme Jakob, ma roinn va bennoz d'ezho. Pa oant deut enn he ghichen, en eur boket d'ezho, hag oc'h ho briata, e lavaraz da Jozeph : Bet am-euz digant Doue ar blijadur d'ar kuelout a harz mervel, ha setu er Doue d'in e hoaz oc'h-penn ar c'hras da velout bugale ac'hanoud.

Jozeph o veza ho zennet a-dre divreac'h he dad, a adoraz, stouet beteg ann douar.

O veza lakeat neuze Ephraïm en tu deud d'ezhan, ha dre-ze en tu kleiz d'he dad ; ha Manasse en tu kleiz d'ezhan, hag evelse en tu deud d'he dad, e reaz d'ezho ho daou tostaat ouz ho zad-koz. He ma oc'h astenn he zourn deou, e'f lekeaz var benn Ephraïm ar liziri, euz ann daou vreur, hag he zourn kleiz var benn Manasse ar c'hossa enn eur lakaat he zivrec'h e kroaz.

Ha Jakob a vennighe ar vugale, o lavarout : Ann Doue dirak pehini ho deuz kerzet va zadou Abraham hag Izaak, ann Doue pehini en deuz va maghet a daleg va iaouankiz bete hirio ; ann Doue pehini en deuz va miret a bep drouk, ra vennigo ar vugale-ma. Ra zou ghint va hano-me, hag him va zadou Abraham hag Izaak ! Ra zavo anezho eun niver braz a dud var ann douar !

Joseph, o velout en devoa he dad lakeat he zourn deou var benn Ephraïm, a oe nec'het, hag o kreghe e dourn he dad e klaskaz he zevel divar benn Ephraïm, hag he gas var benn Manasse. Hag e lavaraz d'he dad : Ne ket er c'hiz-ze, va zad, rak he-ma eo ar map henan, likiit eta ho tourn deou va he benn.

Jakob, o terc'hel mad ato, a lavaraz : Her gouzout a rann, va map, her gouzout a rann, hema (da lavarout eo Manasse a vezo, evit guir tad da veur a ghañfad tud ; he vouenn a iello hepred var gresk, mes he vreur iaouanka a vezo brasoc'h eget-han, euz he lignez e savz broadou en ho fez.

Hag e lavaraz da Jozeph he vap : Mont a rann da vervel ; Doue a vezo gas-ehoc'h holl, hag ho kas a ra en dro da zouar ho tud koz. Estre ghet al loden a zigouezo d'id em heritach viz-a-viz d'as preneur me ho d'id ar peza am euz gounezet va-unan var ann Amor-rheed, gant va c'hleze ha gant va gouarnec'h.

HA AN.

Guelet hoc'h euz, gant plijadur, Manasse hag Ephraïm, Jozeph hag he zaou grouadur an deud. Daoulinet dirag ho zad-koz, ha da d'ad. Da zighemerout he vennoz ! Bennoz eur vamm, bennoz eun tad.

Var benn bugale emzivad,
A vo sevenet gant Doue;
Goulennit-hi, o bugale!

H.

Ar fals doctoret hag ho lavarion.

Da guenta, o labourat da zul ec'h en em gompertit evel eun den ha n'en deuz tam relijion ebet. N'oc'h ket, da guenta, eus a relijion ar gristenien-gatholic; rac ar relijion catholic a lavar deomp: *ar zuliou santel a viri, e servich Doue, oc'h he veuli*, ha c'houi a dremen ar zul o labourat.

N'oc'h ket kennebeut eus a relijion ar brotestantet. Ah! ar brotestantet a vir ar repos eus ar zul gant eun aket hag a dleffe ober mez d'ar gristenien-gatholic. It da ober eun dro da Vro-Zaoz pehini a zo eur vro protestant; poaniit da erruout a benn ar zadorn da noz e Loundrez, arguear-benn eus ar rouantelez-se, unan eus ar brassa keariou zo er bed. Nag a drouz a glevoc'h eno gant ar benviachou a bere ec'h en em zervicher en tiez-labour a bep seurt a zo ker stanc er guear-se, trouz ar rojou o trei, trouz ar veguin o c'houeza an tan, trouz ar morzollou bras o coueza var an tomm, etc. ! Nag a drouz a glevoc'h ive gant an dud o vont hag o tont ebars er stalliou marc'hadourez, gant ar re all a zo o clasc guerza pe brena ebars er ruiou pe var ar plasennou! Mes gortozit eur pennad: sounet eo dec heur, unnec heur, unnec heur-outer.... Setu an taol kenta a anternoz! Selaout brema: trouz ebet mui ne glevoc'h nag en tiez-labour, nag er stalliou marc'hadourez, na gant ar varc'hadourien a vez o verza traou var ar ruiou pe var ar plasennou. Ar rojou ne droont mui; an tan a zo mouguet er gofellou; an oll benviachou a zo lakeat a gostez, an oll stalliou a zo serret, ha den ebet mui ne labour. Peb tra a zo sioul brema ken en tiez-labour; ken en tiez marc'hadourez, hag a jomo sioul evelse ac'hann d'al lun vintin. Perac? Ah! perac? Abalamour m'eo deuet ar zul, devez an Aotrou Doue. Setu aze, doctor, penaoz e vez miret repos ar zul gant ar brotestantet; c'houi ne rit ket evelldho; rac-se n'oc'h ket kennebeut eus ho relijion.

N'oc'h ket ive eus a relijion ar Iusevien. Relijion ar iusevien a ioa ken stris e kenver ar poent-ma, ma tiffenne zoken aoza pe darevi bouet, hag ober eur c'hart-leo hent d'an deiz a repos, pehini oa neuze ar zadorn, a zindan boan da veza labezet pe lazet a daoliou mein. Heul a rit al lezen-se, doctor? Ne rit ket; rac-se n'oc'h ket ive eus a relijion ar iusevien.

N'oc'h ket c'hoaz kennebeut eus a relijion ar fals prophet Mahomet. Rac ar relijion-se a c'houre'hemen, a zindan boan da veza punisset er fesoun ar grevussa, ober gouel da vener. Hen ober a rit? Ma n'her grit ket, n'oc'h ket c'hoaz kennebeut eus a relijion Mahomet.

N'oc'h ket erfin eus a relijion ar baianet. An oll boblou paian, ken ar re a zo bet gueich all var an douar ken ar re a zo c'hoaz brema, a zo bet hag a zo ato

aketus da gonsacri eun devez bennac eus ar zizun evit henori ho doueu faos; eb counta ar goueliou all a viront c'hoaz epad ar bloaz. Ia, baleit e kement bro makeroc'h, it betec an dud gouez a zo o chom er c'hoajou hag a vev kent eguis loanet eguet eguis tud, e peb leac'h e cavoc'h ar c'hiz da gonsacri eun devez bennac euz ar zizun d'ar beden ha d'an oberou all a relijion. Ha c'houi n'her grit ket; rac mar paouezit da labourat da lun pe da eun devez all bennac eus ar zizun, n'e ket evit henori Doue eo e kemerit ar repos-se; evit petra-ta? Divezatoc'h m'hen lavaro d'ehoc'h. N'oc'h ket eta erfin kennebeut eus a relijion ar baianet.

Evelse, da guenta, o labourat da zul ec'h en em gompertit evel eun den ha n'en deuz tam relijion ebet; rac etouez kement pobl en deuz bet hag en deuz c'hoaz eun tam relijion bennac, emä bet ato hag emä c'hoaz ar c'hiz da baouez da labourat eun devez bennac eus ar zizun, ha da gonsacri an devez-se d'ar beden ha d'an oberou all a relijion. Ha c'houi n'her grit ket. Hag ar pez a lavaran d'ehoc'h divar benn ar zul, a hellan da lavaret ive divar benn an oll goueliou-bers pe an oll goueliou mirapl eus ar bloaz; etouez an oll boblou eus an douar o deuz bet hag o deuz ato eun tam relijion bennac, eo bet ive a bep amzer hag emä c'hoaz ar c'hiz da viret meur a c'houel epad ar bloaz, ouspen an devez a repos a virer bep sizun.

D'an eil, doctor, o labourat da zul evel ma rit, ec'h en em gompertit eguis eun den ha ne gred ket zoken e Doue. Mar credit ez euz eun Doue pehini en deus ho crouet, da behini oc'h dleour eus ar vuez, nebeuta tra o peuz da ober en he guenver eo discouez d'ezhan oc'h anaoudeguez vad. Mes penaoz discouez d'ezhan oc'h anaoudeguez vad? Da guenta, o sevel eur veich ar amzer ho speret hag ho caloun varzu ennan evit he adori hag he drugarecaat. Kement-se coulsgoude n'e ket aoualc'h. Mar credit e guirionez ez euz eun Doue pehini a guendalc'h ac'hanoc'h e buez hag e iec'het, eun Doue da behini oc'h dleour eus a guement devez a dremenit var an douar, an anaoudeguez vad a c'houlou ive ma roffac'h d'an Doue-se eur pennad bennac eus oc'h amzer, an anaoudeguez vad a c'houlou ive ma teuffac'h da gonsacri, da zervich an Doue-se, unan bennac eus an devezion a ro d'ehoc'h ar c'hras da dremen er bed-ma. Petra lavarfac'h eus eur buguel ha n'en deffe tam amzer ebet da rei d'he dad ha d'he vam, eus eur buguel ha ne falvesfe d'ezhan coll devez na pennad-devez ebet evit rei d'he dad ha d'he vam eur merc bennac a garantez, a respet, a anaoudeguez vad? Lavaret a raffac'h, me zo sur, ez eo ar buguel-se eur c'hrouadur cris ha digaloun. Hoguen, petra eo ar garantez hag an anaoudeguez vad a die ar vugale d'ho zad ha d'ho mam e scoaz ar garantez hag an anaoudeguez vad a dleomp oll da Zoue? Pe seurt hano rei dec'houi eta, c'houi pehini n'o peuz tam amzer ebet da gonsacri d'an Doue-se pehini en deuz ho crouet hag a ro d'ehoc'h peb devez eus ho puez? N'e ket ebken eur c'hrouadur cris ha digaloun eo ez oc'h, mes henvel oc'h e guirionez ous eun den ha ne gred ket zoken e

Doue. Penaoz! Doue eo a guendalc'h ac'hanoc'h e buez hag e iec'het; da Zoue eo oc'h dleour eus a guement devez a dremenit var an douar; ha c'houi n'o peuz tam amzer ebet da gonsacri d'an Doue-se! C'houi ne fell ket d'ehoc'h implija eun devez ar zizun ebken evit discouez d'an Doue-se ho carantez hag oc'h anaoudeguez vad! Mes, m'her goulou ouzoc'h, petra ouffe da ober goassoc'h an nep n'en deffe tam feiz ebet, an nep ne gredfe ket zoken e Doue? O labourat da zul eta, ec'h en em gompertit e guirionez evel eun den ha ne gred ket zoken e Doue.

Ouspense, mar credit ez euz eun Doue pehini en deuz ho crouet, c'houi ha kement tra a zo, e tleit ive credi dre eno ez eo an Doue-se mestr da ober d'ehoc'h ha d'an dud oll ar gourc'hemenou a blijo ganthan. Hoguen, doctor, Doue en deuz great d'ehoc'h ha d'an dud oll eur goure'hemen stris da gonsacri d'he zervich eun devez eus ar zizun, en eur baouez da labourat hed an devez-se. Doue, emä ar scritur-sacr, o veza crouet e c'houec'h devez an env hag an douar ha kement tra zo enno, a reposs d'ar seisvet devez; hag e memor eus ar reposs-se e vennigas ar seisvet devez, hag e reas anezhan eun deiz santel. Setu ama penaoz e reas Doue eur gourc'hemen stris da baouez da labourat en devez-se, ebars el lezen a roas gneich all dre scrid d'ar bobl a Israël var menez Sinai, lezen pehini n'e ket bet torret abaoue, mes pehini, er c'hontrol, a zo bet embannet a nevez evit ar bed oll, gant hor Zalver Jesus-Christ, guir Vab-Doue en em c'hreat den evit hor zavetei. Selaout eta, doctor, ar gourc'hemen a ra Doue d'ehoc'h ha d'an dud oll divar benn an deiz a repos: « *Ho pet sonch da zantifa an deiz a repos. Epad c'houec'h devez e reoc'h kement seurt labour o pezo da ober; mes d'ar seisvet devez emä deiz an Aotrou, ho Toue. En devez-se ne reoc'h tam labour ebet, na c'houi, nag ho mab, nag ho merc'h, nag ho servicher, nag ho servicheres, nag ho loan, nag an divroad a zo o chom en ho ti; rac an Aotrou Doue en deuz crouet e c'houec'h devez an env, an douar, ar mor, ha kement tra zo enno, hag a zo reposs d'ar seisvet devez; setu perac en deuz benniguet an devez-se, ha great anezhan eun deiz santel.* » O vont a enep eur c'houre'hemen ker sclear, petra rit adarre, doctor? Ober a rit ar memes tra evel pa ne gredfac'h ket e Doue. Penaoz! Doue a c'houre'hemen d'ehoc'h sanctifa an deiz a repos, ha n'her grit ket; Doue a zifen ouzoc'h labourat en deiz-se, hag e labourit evelato: a dra zur, ne gredit ket e Doue, pe ne gredit ket e ve Doue ho mestr; da viana eun den ha ne gredfe ket e Doue ne ouffe ket ober goassoc'h. Ha setu aze penaoz, d'an eil, o labourat da zul ec'h en em gompertit eguis eun den ha ne gred ket zoken e Doue.

GABRIEL MORVAN,

Person Pluguën.

Lizeron eur Boelec iaouank d'he zaou Vreur

(Eil lizer: D'HE VREUR IAOUANK.)

Va bennoz da va zad ha da va mam evit an arc'hant o deuz digasset din. Prenet em euz ganto eur marc'h da foar Loumerzer, da lavaret eo em euz roët ar garg d'en ober da dad eur boelec euz va mignonet pehini en deuz prenet din eur marc'h guel-brun, he dneid hag he dal merket e guen; he hano zo e gallec *L'impéride* pe e brezounek an hini *dizaouin*. Deac'h pa oan oc'h erruout er presbital, dizro da velout tud klan em euz anavezet er porz daou varc'h euz va farrez. Ha me da lamout divar va hini, hag en or redek mont da bokat d'an daou voelec pere zo denet aman evit guellet ho zud. Abaoue n'en em guitaomp nemet pa renker mont d'an dever, mont a reomp assemblez da bourmen hag e peb leac'h. Gouzout a rez peguement a dleomp prijout kalonou ker mad, beleyen ker karantezuz. Ah! ma vjemp oll ken vret evel en hor bugaleic'h a fevrez-te! Kourac'h nenz ket pell mui da c'headal, tostaat a ra miz guengolo. Yann-Mari en em gavo er guer er memez mare. Ni lavaro hon daou hon offeren guenta er barrez ***. Peguen kaer vo deomp an devez-ze; ret eo lavaret penaoz ar bobl euz a Vreiz a oar renta enor d'he veleyen. Kenavo en devez-ze ***.

A. M.

MARINA.

(Eil pennad.)

— Ti ar gounnar! emä ar gueguinerez oc'h en em deleur var eur gador er gambr ma edo Marina, panele m'am eus c'hoant da zestum eun dra bennag!
— Petra so digouezet ganeoc'h-ta? emä Marina.
— Digouezet ganen? Petra ken nemet ma zoun torret gant al labour, anter varo gant ar skuider? Ne rancan-me ket bep mintin pourchas ken aliès a bred evel a zen a zo en ti? Eul lein d'an itron, eun all d'ar gouarnier, eun all d'ar floc'h, eun all d'ar potr marchosi, eun all d'ar vestrez-plac'h. — Ha pehini a renc caout he gueusteuren? O va Doue, ma ne ket eun drubuil?
— Evit gane-me ne viot ket nec'het, emä ar vjnorez, me a zebro ar pez a root din.
— Oh, an dra-ze ne ell ket beza. C'hui oc'h eus an huela carg en ti goude ar gouarnier, ar guinet coz-ze pehini, ep mar, a vezo draillet ha poazet ne vezo ket pell en tan eternal; rag-ze eo dlet ober deoc'h ive dioc'h ho tiviz.

— Lavaret a ran deoc'h ne ran fors petra. Ar gueguinerez a rea plijadur dezhi clevet e divije eul lein nebeutoc'h da oza. Pa voa eat an droug anezhi, Marina a lavaraz dezhi he zicourje pa e devije eun tam amzer bennag, hag he fedas da zont ganthi da zul d'an oferan, rag, ken nebeut hag ar vitizien all, ne lakea nemeur troad ebet en iliz. Ar gueguinerez a lavaraz ez aje gant ma vije great lod eus he labour dezhi.

beuz, n'eus ket cavet eun aval douar taguet. Pa zeo bet labouret an daou barc-ze a c'houdevez, er parc kenta e savet var c'horre prenvat guenn a gantchou; e parc an teul beuz ne gavet ket unan.

Hema so eun ali evit an dud divar ar meaz, ar re anezho so prenvat erguisse en ho douarou. Ar re o deus beuz var dro ho zieguez, hag e cala a gueriou ez eus, a alfe gulet ha guir eo ar pez a vercan ama.

Kement-ma so tennet eus a gazeten ar vistri scol.

TAD AN EZEN. — An tad Romanet so eul labourer douar, eun tamic jardiner. Lezhanvet eo *Tad an Ezen*, petra bennag n'en deus nemet eun azen gant pehini e cas he varc'hadourez e kar. Ar barner a beoc'h en doa he gondaonet da baea deg lur abalamour m'en doa trouc'het scourrou guez ha ne ket dezhan oant. Tri dervez goude, ar *gard-champetr* en doa he baket a dremen adarre dre he liors, hag an tad Romanet en em laca d'he vounta, d'he c'hourdrous gant he vaz ha da gana pouil dezhan.

Ha setu tad an Ezen adarre dirag ar barner.

An Tad Romanet. Ia, bez'edon em liors, da lavaret eo, nan, va greg eo a ioa; me a ioa em pors, da lavaret eo, nan, var drezou va dor eo edon. Clevet a ran va greg o vignaonal evel eun azen; teleur a ran va daoulagad var va liors, hag e velan an aotrou aze, eun tam houarn guenn oc'h he vreaç'h, dent em liors dre eur goasc.

Ar gard-champetr. Al liors n'eus nemet eur c'hars varnezhan, en tu dioc'h an hent, hag e leac'h all n'eus kae ebet. Ha c'hoaz ar c'hars so muioc'h a doullou enhi evit a scourrou.

— *An Tad Romanet.* Petra-ta; bez'ez eus berniou ezen hag a deu da lacat ho fri ebars. Ma carfac'h dont da ober proces-verbal d'ar re-ze ive!

Ar Barner. Gard-champetr, eat oc'h el liors dre ar c'hars?

Ar gard-champetr. Ia, dre eun toul. O veza gulet a bell an Itron Romanet o terri blenchou guez en eur parc daouanter ha ne ket dezhi eo, oun eat dre an hent berra evit he laca var an tom.

An Tad Romanet. Ar parc-ze zo da eur c'henderv din, hag oun en em glevet gantha evit c'huennat he vez ha terri ar scourrou seac'h da ober tan. Kindirvi ne ket ezen int, hag a ell en em glevet, emichans, evel ma carint, ep m'en defe izom ar *gard-champetr* da lacat he fri er voase.

Ar Barner! Coms a ellac'h oc'h ar *gard-champetr* ep he c'hourdrous na cana pouil dezhan.

An Tad Romanet. Diotoc'h evit eun azen e ve red da eun den beza-ta neuze, ma ne elle ket kemeret eun tam buaneguez! Petra, gulet a ran eun den o tont em liors dre eur voase, ep gouzout pe en deus guir da zont pe n'en deus ket, ha me, perc'hen, em zra, me sitoian eus ar barrez, ne allan ket lavaret dezhan ar pez a deu em penn? An aotrou ne voar lavaret ken nemet: proces-verbal! Proces-verbal! Mil toussec, christienien ne ket ezen int, hag a ell coms an eil oc'h eguile!

Epad ma prezegue an tad Romanet evelse, he c'hreg a voa eno ive hag her c'hourache dre sin ha dre goms. « Mad eo avad, va den, emezhi, evelse eo! » Mes eur min divalo a reas pa glevas condaoni he goaz da c'huec'h devez prizon ha da baea c'hoas ar scourrou guez hag ar mizou. Ezen oll n'int ken, eme an tad Romanet en eur vont kuit.

G. M.

N'eus ket pell, en eur foar, eur marc'hadour kezeg en doa prenet eur marc'h, unan eus ar re vreaova a voa var an dachen. Ar marc'h ne gouste dezhan nemet cant scoet. Mont a ra d'en em fougueal da eur mignon dezhan eus an taol caer en doa great. Hema a deu da velet ar marc'h. Goude beza sellet outhan tu ha tu, e lavaras d'eguile: Ne gouste nemet cant scoet ar marc'h-ma dit? Nan, eme ar prener.

— Mad, tizet sur out neuze; al loen-ma a ranç caout eur si bennag. Pemp cant lur a dal da nebeuta.

Ar marc'h a voa en he benn eur vrid, pe eur vestign gaer evel a vez e penn ar c'hezeg a briz, gant eun doare bonet da c'holo an dioussouarn. Mignon an hini en doa prenet ar marc'h a lakeas tenna ar vestign hag ar bonet-ze. Ar marc'h n'en doa nemet eur scouarn. Ar prener a jale hag a doue; mes al lezen pehini a verc eun nebeut siou evit pere ec'h aller cass eur penn-kezeg d'ar guær, n'e deus ket merket ar si-ze.

Kementse a ziskuez eo guir ar pez a leverer alies; en eur verzidiguez e voar ato hirroc'h ar guærzer evit ar prener; mes diskuez a ra ive peguen divorc'het e ra an dud dislealdet er foariou hag en em dromplont an eil eguile evel pa n'o defe na Doue, na feiz.

G. M.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 22 <i>Guengolo.</i> <i>Priz ar c'hant tiour.</i> Guinis.... 42 lur, 36 c. Segal..... 8 lur, 44 c. Eiz..... 7 lur, 64 c. Ed-du.... 7 lur, 05 c. Kerc'h.... 7 lur, 88 c. Avalou-douar 3 lur, 50 c.	PONT'NABAT — 20 <i>guengolo.</i> <i>Priz an hectolitr.</i> Guinis.... 20 lur, 04 c. Segal..... 40 lur, 79 c. Eiz..... 9 lur, 73 c. Ed-du.... 40 lur, 24 c. Kerc'h.... 8 lur, 00 c. Avalou-douar 3 lur, 74 c.
MONTROULEZ. — 15 <i>gueng.</i> <i>Priz an hectolitr.</i> Guinis.... 20 lur, 18 c. Segal..... 43 lur, 42 c. Eiz..... 40 lur, 67 c. Ed-du.... 44 lur, 93 c. Kerc'h.... 7 lur, 97 c. Avalou-douar 7 lur, 00 c.	BREST. — 17 <i>guengolo.</i> <i>Priz an hectolitr.</i> Guinis.... 24 lur, 99 c. Segal..... 46 lur, 72 c. Eiz..... 40 lur, 73 c. Ed-du.... 9 lur, 45 c. Kerc'h.... 9 lur, 05 c. Avalou-douar 5 lur, 60 c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand AR. DE KERANGAL, Moulder an Escopti.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA.

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezounee.

Eun Abonnament d'ar Gazeten à goust:

Evit eur bloas.....	DAOU SCOUET.
Evit c'huec'h miz.....	EUR SCOUET.
Evit tri miz.....	C'HUEC'H REAL.
Eur gazeten ebken.....	DAOU VENNEC.

Ar baemant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Belec e Kemper.

Ar paeamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN ebken. An abonamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 6 Here 1866.

Unan eus an doctorët vraz-ze a fell dezho ober scol d'an oll hag a gaf dezho int laket var an douar evit sclerijenna ar bed azalec ar Sao-Heol beteg ar C'huz-Heol. en em gavas n'eus ket pell souezet ha nec'het meurbet. Lennet pe desket en doa me n'ouzoun ket penaus e voa bet guez all eur profet hanvet Jonas, lonket gant eur balen ha dislonket goudeze gant ar memes balen e beo var an aod. An doctor ne alle ket credi kementse, hag evelse, pa na voa ket an dra-ze dioc'h he veno, ar scritur sac' pehini hen lavar deomp, ne gomze ket mad ha dereat.

E guirionez, ar Scritur Sac' a lavar penaus Doue a c'houre'hemennas da Jonas mont d'ar guær a Niniv da ziscleria da dud ar guær vras-ze e vije destruget kar a-benn daouguent dervez. Jonas en devoue aoun o vont da gas eur c'helou evelse da dud ar guær-ze, hag eleac'h senti oc'h an Aotrou Doue ha mont da Niniv, e savas en eul lestr evit mont da eur guær-all. Mes pa voa eat al lestr er mor bras, e savas eun avel hag eur bar amzer scrijus, hag ar vartolodet a velas ervad ez ea ho lestr da goll. Tenna a rejont d'ar zort evit gouzout piou a voa penn-abeg d'ar bar amzer-ze a voa coezet varnezho. Ar zort a goezas var Jonas. Ar Profed a lavaras dezho neuze ne voa savet el lestr nemet evit tec'het araog an Aotrou Doue, ha n'o devoa nemet he deleur er mor hag e souplaje an avel. Jonas a voue eta taolet er mor; mes Doue pehini a falle dezhan e chomje e buez evit ober ar pez en doa gourc'hemennet dezhan, a zigasas eur balen pehini hen loncas kerkent ha ma voue taolet en dour hag hen disloncas tri devez goude leun a vuez var an aod.

Eur pesk o lonca eun den e beo, an dra-ze ne blij ket d'an doctor. Marteze e vije bet guelloc'h gantha gulet an den o lonca ar pesk braz-ze en eur c'hinaouat. Mes e vidomp-ni christienien, ni a voar ervad penaus da Zoue an eil ne vije ket bet diassoc'h evit eguile. Ni n'omp ket nec'hetoc'h gant ar burzud-ze evit gant cant ha cant

all a zo bet digouezet hag a zigouez c'hoas zoken en hon amzer. Ni a voar ervad penaus ma selle da Zoue lacat Jonas da zenti outhan; hag he gontraign da ober ar pez en doa gourc'hemennet dezhan, e c'helle choas an avel evit miret outhan da dreuzi ar mor, evel ma c'helle choaz eur pesk pe eun dra bennag all evit miret outhan da goll he vuez en dour. Ni a voar penaus Doue ara ar pez a blij gantha hag en doare ma plij gantha, ha n'en doa ket a izom, ma carje, na pesc na netra all evit digas beo he brofet d'an douar. Mes pa zeo falvezet dezhan en em zervichout eus eur balen evit kementse, petra en deus an den da lavaret? Ha diet e voa d'an oll c'halloudeg dont da c'houlen he ali?

Rom. — E Rom, guinivelez an Verc'hez Vari so gouel bers. Oll gouelioù ar Verc'hez a so eur respet ar brassa evitho er guær-ze. Ar re baoura ne vancont morse da ziskuez ho c'harantez evit mam Doue en eur lacat goulou var elum en ho fre necher. En tachennou a so cals tud var ho zro; ar vugale a zao aoteriouguou, ha da noz an oll scolaerien a deu dirag an aoteriouguou-ze da lavaret litanioù an Itron Varia Loret.

E Rom ez eus paourentez, pe da viana aoun zo na ve. Pe guer mad bennag ma zeo an oll gristenien catholic da rei diner Sant Per, ar Pap goussoude, ne ell ket sicour he zujidi paour kement ha ma carfe. Gouscoude eo leun a fizians, ha ne deo bet morse iac'hooc'h. Evihan ne deo ket eat var ar meas da dremen an han, evel ma voa boas kent, n'en deus ket collet he ners. Lavaret a rafet zoken e ve creoc'h brema. An arc'hant en divije dispignet o vont var ar meaz en deus lakeat da rei bara d'ar re baour ha da rei sicour d'an Eskibien harluet eus ho escoptioun.

E miz kerzu e leverer e vezo great tri gardinal nevez; an aotrou Chigi cannad ar Pap e Pariz; an aotrou Ferrari, unan a vinistret ar Pap; an aotrou Berardi, arc'hescop Nicee; an aotrou Berardi so brema o sicour ar c'hardinal Antonelli, hag e creder e vezo ministr en he leac'h pa vezo great cardinal. Lavaret a re ive eo an aotrou

Alexandr Franchi eo a dle beza cannad e Frans eleac'h an aotrou Chigi.

Toulouz. — Caout a rer eur feiz beo ha skueriou eus ar re vella avechou e tud e pere e c'hortozer nebenta ho c'haout. Er guer a Douloz scourezet vian ar beorien n' o doa ket a chapel evit ar vugale-zall a here e kemeront sourci. Dre aluzen, dre zicour an dud vad e teujont abenn da zevel unan. Mes n'oa ket avoalc'h. Rag ar chapel savet, e voa c'hoas goulou, ne voa nag arc'hantiri, nag arre-beuri, na lienach na netra ebet eus ar pez zo red da gaout evit lavaret an oferen. An aotrou'n Escob a roaz eur c'halir, eun itron binvidic a roaz eur ciboar. Mes kementse a voa c'hoas nebeut. Mes gortozit, setu eun deiz eun ofiser a reng huel, eur c'holonel o tont da gaout ar seurezet. An den ze so leun a galon hag a feiz, eur guir soudart gall, a ra oberou a drugarez evit eua dioc'h labourou ar vrezel, unan eus an dud-ze pere goude beza stourmet eur pennad eus ho buez oc'h enebourien ar vro, a dremen eur pennad all o vrezelecac oc'h an droug.

Ar c'holonel a bedaz ar c'hoarezet da lacat dezhan dre serit hano an traou a vanke dezho var dro ho chapel. Al listen-ze a voa hir, gouscoude e voue roet dezhan evel ma c'hoantea. Setu an ofiser gant an tam paper-ze o vont da gwestal a zor e zor en tiez pinvidic, er c'houen-chou, e kement leac'h ma vouie e voa eneou mad. Piou en divije credet lavaret ne roje ket da eur c'heseur evelse, da eun ofiser bras guenn dija he benn ha griz he voustachou, druilladon greun alaouret var he ziouscoaz hag eur c'hleze oc'h he gostez? An oll a roaz eun dra bennag. Ep dale e voa destumet ar pez a voa izom, hag hirio e c'haller lavaret an oferen er chapel.

Leun a rer en *Ecleo Fourvier* :

Leanezet ar C'halonou Sacr a Jesus hag a Vari, pe leanezet Picpus, o deus nevez collet ho federvet superiolez jeneral, an Itron Aymar de la Chevalerie, eus eul lignez huel eus ar Poetou. Nizez oa d'ar guenta superiolez-jeneral. Bez' ez oa unan eus ar merc'hed cre-ze a here e comz ar Scritur; eur vaouez calonec ha madelezus, nerzus evel eur goas pa veze eun dra bennag da c'houzaon, unan eus an dud-ze a ziskuez Doue a amzer da amzer pa en devez da seveni eur mennoz bennag a garantez hag a drugarez. Evelse n'em eus ket izom da lavaret o deus an oll keuz dezhi.

O comz eus al leanezet-ze, ne allan ket miret da lavaret eur guer divar benn eur pezig douar, eur c'hornic tro a zo en ho liors pe en ho jardin, e Paris. Ar c'hornic douar-ze ne dleer ket da ancounac'haat. Eno eo bet lakat en douar, er bloas 1794, corfou ar re ziveza zo bet lakat gant Robespier, epad ar c'huec'h sizun-diveza ma eo bet o rea ar spourou (*la Terreur*). Er c'hornic douar-ze, ha n'en deus ket ouспен tregont troatad etre hed ha lec'hed, ez eus taolet mesc e mesc trizec cant corf, corfou ar re a voue lakat d'ar maro e kichen cloued an tron. Taolet evelse eno a vandennou epad c'huec'h sizun, morse n'oa bet gallet ho anaout na dispartia an

eil dioc'h eguile. Gouscoude cals anezho a zougue ar c'haera hanoioù a voa e Frans.

Tud ar re anezho a voa a lignez huel, a zo bet falvezet dezho e vije lakat ho c'horfou e kichen re ho zud lakat epad an dispac'h. Evelse e kichen ar c'horniadig douar-ze ez eus savet eun tamc beret eleac'h ma veler beziou an dud a lignez huel-ze.

Epad ar c'huec'h sizun-ze ma comzomp anezho, ar c'hilloin a grenas tud a bep reng, a bep oad, a bep stad, goazet ha merc'hed; noblans, beleien, menec'h, leanezet, micherourien, mitizien, tud a vrezel, tud a lezen, tud a bluen, marc'hadourien, medicinet; tadou ha mamou gant ho bugale potred ha merc'hed, braz ha bihan; mistri gant ho zervicherien, oll en devezion diveza-ze eus ar spouron e vouent lakat d'ar maro ep kem ebet ha taolet ho c'horfou en eun toul el liors ma comzomp anezhan.

En despet d'an oll dispac'h ha d'an aoun o devoa an oll, eun Itron, an Itron Hohenzollern, e devoue ners calou avoalc'h evit heuilla he breur bete chafot cloued an tron, evessaat pelec'h oa taolet he gorf e mesc ar c'horfou all, ha mont goudeze da c'houlen an otre evit prena an tam douar-ze. Hi a lakeas sevel eur voguer en dro d'an toul-ze hag a viras evelse na voue bresset ha saotret corfou an trizec cant-ze a alfet da henvel merzerien.

Ep ad an amzer-ze an Itron Aymer hag he mere'h a voa er prizon er guer a Boatie. Ar verc'h iaouanc a reaz eno he zouch da guitat ar bed mar chamje e buez. Robespier a goezas, hag eun niver braz eus ar re a voa o c'hortoz ar maro, a voue saveteet. An demazel Aymer a iecz en urs leanezet ar C'halonou Sacr a Jesus hag a Vari hag a voue ar guenta superiolez-jeneral. Hi, hag he nizez pehini a so maro en derveziou-ma, so beziet e touez an dud-ze bet lakat e 1794.

N'eus ket pell eur c'hreg paour e devoa eur veach hir da ober. Eun contr dezhi a voa maro, hag e lie caout eul loden eus he heritach. Izom avoalc'h e doa a guementse; gouscoude ne grede ket en em lacat en hent. He buguel a voa clan, hag evel ma voa intanvez ne doa den da guemeret sourci eus ar c'hrouadur ker keit ha ma vije oc'h ober he vro. He amezeien en em guinnigas da zioual ar buguel, hag ar vam, goude beza arguillet eun nebeut, a iecz en hent.

Ep ad eun nebeut derveziou ar c'hrouadur a jomas er memes stad, mes dont a reas da voassaat dezhan kement, ma her c'hredjot maro. Unan eus an amezeguezet a guempennas ar c'havel e chapel venn, a lakeas bleunioù en dro dezhan, hag en eur vouela e c'hourvezas ar buguel kez enha. Dress antronoz e lie ar vam distrei. Penaus rei dezhi ar c'helou-ze? Petra diie beza he dizesper! Braz e voue e guirionez he anken pa zigouezas o velet an oll o vouela. Va buguel! Emezhi en eur grenn strasaillet oll. Ep lavaret guer e voue diskuezet dezhi ar c'havel goloet gant lian guenn hag eur c'houlaouen var elum en he guichen.

Ar vam baour a loseaz eur griaden scrijus hag en em strincas etrezeg ar c'havel. Mes dalc'het e voue, hag e chomas eno mantret da vouela. Abenn eur pennad oa evel pa vije moredet. An amezeien en em dennas kuit.

Mes hi n'oa ket cousket. Pa vel n'eus nemet-hi he unan ez a da gaout ar c'havel. Chom a ra eur pennad ep sevel al lian. C'hoant e deus da zellet oc'h bizach he bugnel, hag aoun oc'h hen ober. Barz ar fin gouscoude ne ell ket miret. Sevel a ra al liser, ha petra vel?... he map beo, eur fleuren gantha en he zorn, hag o lavaret dezhi: Dal, va mam; te a so bet pell avad!

Me ho les da zonzal pebez levezet evit ar vam! Tost oa bet dezhi coeza gant he anken, tostoc'h oue dezhi c'hoas brema coeza gant he joa. C'hoarzin ha gouela a rea, ha neuze e poke hag e poke c'hoas d'he buguel. Antronoz, pa deuas an amezeguezet, he c'haffont he c'hrouadur heo ganthi var he barlen.

Ar buguel-ze a voa bet fall gant an derzien-gouk, mes ar vam a lavar hag a lavar ere eo eur burzud en deus great Doue en he c'henver. G. M.

HISTOR ZANTEL.

(Kenta pennad ha daou-ughent).

DIUGANOÙ JAKOB, HAG HE VARO.

Jakob, o c'houzout e tostee he heur ziveza, a c'halvaz he vugale, hag a lavaraz d'ezho: En em zastumit holl endro d'iu, evit ma tiskleriinn d'ehoc'h ann traou a dle c'hoarvezout gan-ehoc'h enn amzer da zont. En em zastumit holl endro d'in, ha selaouit, bugale Jakob, selaouit Israël ho tad.

Ruben, va map hena, te oa va nerz ha va skoazel, hag out bet ann hini kenta oc'h ober ran-galoun d'in. D'id-de oa al loden vrassa euz va danvez; d'id-de oa da zere'hef ar stur. Bet oud den lik, ne greski ket. Ne riket a vrud. (Hag e guirionez, breuriez Ruben neket bet hiskoaz kre ann traou ganthi, guirioù ar map hena a dremenaz e breuriez Judaz. Pet rum-dud a zo goaz euz a zizurjou eun tad bet den lik)!

Simeon ha Levi, guir vreudeur da ober drouk, ann draitourez e deuz great ac'hanoc'h brezelidi garo. Ho pet sonj euz ar ghear a Zichem distrujet gan-ehoc'h enn ho kounnar. Laza a rejoc'h a-dreuz hag a-hed ann dud divlam gant ar re gabluz; biken na roinn va grat da eun hevelep venjan. Enor ho c'hoar ho poa da venji, mes nann gant kement a gruelled. Eun devez e viot dispartiet ann eil dioc'h e ghile, hag unan ac'hanoc'h a vezo skignet tu-ma tu-hont etouez bugale Israël. (Pa oe rannet ann douar santel etre ann daouzek breuriez, hini Levi n'e devoe karter ebet en he bez; roet e oe d'ezhi tamm tu-ma, tamm tu-hont, en hevelep fesour ma en em gavaz evel dismantret e mesk ar breuriezou all, evel ma en devoa he c'hef dismantret ar sichimided. Gant ar muzul a vuzulut e vezo muzulet d'ehoc'h).

Judaz, da vrendeur az meulo; da zotroun a vezo var benn da enebourien, bugale da dad a stoua d'ann douar dira-z-oud. Goualen ar roue ne vezo ket lamet digant Judaz na prins ar bobl euz he vouenn, ken na zeu ann hini a dle beza digasset, hag hennez a vezo gortoz ann holl boblou. (Eur sklerijen vuznduz a sko e spered Jakob; guelout a ra ar Messi o tiskenn dioc'h ar mapse d'ezhan, ha na hall mui pennekaat he estlam).

Judaz a zo eul leon iaouanc; savet oud, va map, da breiza; gourvezet ec'h euz exit diskaiza, evel ma ra eul leon hag-eul leonez. Piou hen dihuno? (Ar c'houzouze a ziougan brezel Jezuz-Krist enep ann drouk-spered, hag he c'hounidou).

Staga a rai he azen iaotank ouz ar vinienn; ouz ar vinienn, o va map, e stago he azeue. Goalc'h a rai he zaë ebarz ar gwinn hag he vantel e goad ar rezin. (Ar c'houzouze a verk passion ha maou Dou Zavior, ha nerz he zaka-marehou da netad-hou eno).

D'he vugale all e lavar dre rent ar pez a c'hoarvezout gant he lignez. Arruet gant Jozeph, e komzaz evel henn:

Jozeph, breusenglaz-dorr, krouadur hepred o tisker, ha brao meurbed da velet. Chadennou he zivrac'h a zo bet torret gant holl c'halloud Doue Jakob, hag eo deuet euz he brizou, messaer ha skoazel Israël. Doue da dad a vezo da zikour, hag ann Holl-c'halloudet az kargo a vennisioù; bennisioù ann euv dioc'h an neac'h, bennisioù doureier ann douar dioc'h ann traon, bennisioù ar vamm hag ar vugale, ken a zeu ann hini a zo c'hoant ann torghennou eternel.

Goude ar bennisioù-ze roet d'he vugale, Jakob a lavaraz d'ezho: Emaoun o vont da gavout va fob, besiet ac'hanoun gant va zud-koz, er gavarn a ziou gampr a zo e douar Kanaan. Abraham he frenaz digant Ephron ann Hethead, gant ar park enn he bez, evit ober he vez enn-hi. Eno eo bet besiet he-unan, gant Sara he bried; eno eo besiet Izaak, gant Rebekah he c'hek; eno ema ivez Lia enn he faouez-van. Goude ar gourc'hennenn-ze, e krouazaz he dreid var he vele hag e tremenaz. Bez' en devoa neuze seiz vloaz ha seiz ughent.

—————

Tom ar vossen. 12.

Ha guellet hoc'h eus-hu hiskoaz
Var he dremen-van eur zant braz?
It da di Jakob e spered,
Hag ann dra gaer-ze a velfet.

Var ar c'helou euz he glenved,
He zaouzek map zo direder
Da gaout he vennoz diveza,
Daoulinet int endro d'ezha.

Mipien Jakob, eme ann tad,
Selaouit, ha selaouit mad,
Komz a rann d'ehoc'h a berz Doue;
Va bennoz ho pezo goude.

Da bep-unan e tiskleriaz

Ann drouk, ar mad tonket d'he raç.
Ha pep-unan a bleg he benn,
Da ghemeret he blanedén.

Goude beza roet urz d'ezho
Da gas, hep mank, he gorf d'he vro,
He dreid kroazet var he vele,
E ro da Zoue he ene.

Na kaer eo mervel evel-se,
E kreiz eur c'hele'h a vugale,
O prometi d'ho mamm, d'ho zad
E vint ivez kristenien vad!

H.

Ar fals doctoret hag ho lavarion.

Mes, a livirit c'hoaz, n'e ket o vont d'an offeren ha d'ar gousperou eo e c'hounezinn bara d'am greg ha d'am bugale. — Ah! nann; guelloc'h her greoc'h marteze oc'h ober gouel da lun; ia, oc'h ober gouel da lun eo e tastumoc'h peadra da argoulaoui ho pugale, peadra zoken da brena leve! O tremen al lun en hostaliri, eleac'h tremen ar zul en ilis, oc'h surroc'h da lacaat ho creg hag ho pugale da veva en ho eaz epad ar rest eus ar zizun! Serrit ho kinou en han' Doue, ha chomit peoc'h, c'houi pehini a lavar: n'e ket o vont d'an offeren ha d'ar gousperou eo e c'hounezinn bara d'am greg ha d'am bugale. Anavezet oc'h gant an oll pell zo, c'houi hag ho seurt. Nann, c'houi hag ho seurt ne c'hounezit nemeur a vara d'ho creg ha d'ho pugale; ar c'hountrol eo a rit siouas! Ia, c'houi hag ho seurt pere a labour da zul, pere ne d'it na d'an offeren na d'ar gousperou, an darn-vuia ac'hanoc'h a zispigu en hostaliri, d'ar zul dabardaéz, pe da lun, kement guennec o peuz gounezet epad ar zizun. Ho creg hag ho pugale a zo er gear o c'hlaouri, o tua gant an naoun, n'euz fors; n'o deuz ket eun tam dillad a zoare en dro d'ezho, n'euz fors; dizec'ha a reont var ho zreid gant ho glac'har hag ho anken, n'euz fors: pa vezer bet o labourat da zul, eo red mad ober gouel da lun; pa ne vezer ket bet en ilis da zul, eo red mad tremen al lun en hostaliri. Setu aze, doctor, penaoz e c'hounezit bara d'ho creg ha d'ho pugale, c'houi hag ho seurt: pell dioc'h ho maga, ho lezit da zua gant an naoun; pell dioc'h ho guisca, ho lezit en noaz; pell dioc'h pourveï d'ho oll ezomou, ho lezit en dienez a bep tra; eürus c'hoaz ar c'hreg hag ar vugale baour-se ma n'int ket goal-gasset ha zoken bazatet ganeoc'h, pa erruit er gear anter-vezo hag ouспен d'ar zul pe d'al lun da noz, ha ma ne heller ket guelet goude var ho c'horf brondret ar mercou eus ho crisper hag eus ho iudaserez direiz! Hag an dra-se a zo beza pried? Hag an dra-se a zo beza tad? Nann: n'e ket zoken beza den, petra lavaran? N'e ket zoken beza loan eo. Ia, dec'houi ha d'ho seurt pere en em gompört evelse, ne livirinn ket ebken: n'e ket cristenien oc'h, n'e ket tud oc'h; mes lavaret a rinn ouспен: n'e ket chatal, n'e ket loanet oc'h zoken; ia, diskennet oc'h

izelloc'h eguet ar chatal, izelloc'h eguet al loanet mut; rac ar re-ma da viana o deuz ato soursi euz ho re vihankeit ha n'hellont ket en em bourchass ho-unan, ha c'houi n'o peuz soursi ebet eus ho pugale....

Mes lezomp an dra-se a gostez: re a boan a ra an dra-se d'ar galoun. N'e ket, eme c'houi, o vont d'an offeren ha d'ar gousperou eo e c'hounezinn bara d'am greg ha d'am pugale. Ha me a lavar d'ehoc'h, er c'hountrol: caër o pezo labourat, ma ne ro ket Doue he vennoz d'ho labour, ne c'hounezoc'h ket a vara d'ho creg ha d'ho pugale. Selaouit, doctor: pe c'houi zo tiec, coueriat; pe c'houi zo den a vicher, o labourat var an houarn, ar c'hoat, al ler, pe var eun dra all bennac; hoguen, n'euz fors petra oc'h, ezom o peuz ato eus a vennoz hag eus a zicour an Aotrou Doue, evit guellout, dre ho labour, gounit bara d'ho creg ha d'ho bugale.

Da guenta, mar d'oc'h tiec pe coueriat, ha c'houi zonec'h d'ehoc'h eo aoualc'h gouzout an doare da labourat an douar evel ma'z eo dleet, ha teilat ho parkeier eguis ma renker evit caout eun eost mad? Allas! nann, va mignoun keaz, kementse n'e ket aoualc'h. Nann, evit caout eun eost mad, n'e ket aoualc'h d'ehoc'h beza eun tiec eus ar re c'housieca; n'e ket aoualc'h d'ehoc'h caout benviachou nevez, benviachou eus ar re vella, evit arat, evit hada, evit c'hounennat, evit medi, evit dorna: ezom o peuz c'hoaz eus a gals a draou all, hag an traou all-se a bere o peuz ezom n'e maint ket en ho calloud, mes e galloud an Aotrou Doue ebken. Ezom o peuz, da guenta, ma vezo ar peder amzer eus ar bloaz aketus da zont an eil varlerc'h eben. Lakeomp e teuffe an anv dioc'htu goude ar goan, petra deuffe da veza an ed o peffe gounezet? An ed-se a veac'h hadet, pe diouanet, a deuffe da zec'ha en eun taol, ha setu ho poan hag ho labour collet, hag eost ebet evidoc'h er bloaz-se. Lakeomp c'hoaz e teuffe ar goan var he guis e mare mis even pe mis gouere, gant erc'h pe cazarc'h teo evel e mis guenver pe e mis c'hoevver, pe gant corventennou avel-foll evel e mis meurs; petra deuffe c'hoaz da veza oc'h ed dija savet huel, dija diodet, dija bouedet mad marteze? Pilet, stoket, pladet oll e ve oc'h an douar, eleac'h ma teuffe buhan da vreina, hag eost ebet n'o peffe ket adarre. Hoguen, doctor, daoust ha c'houi a zo mestr var ar peder amzer eus ar bloaz? Daoust ha c'houi eo ho laca da vont en dro? Daoust ha ganeoc'h-c'houi eo ema alc'huez ar grignoliou a zo aze varlaez, azioc'h hor pennou, eleac'h m'ema an erc'h hag ar c'hazarc'h a verniou? Daoust ha c'houi a zo carguet da brenna pe da zibrenna var an avel-foll hag ar c'horventennou? Ouspenn-se, doctor, o peuz ezom, d'an eil, ma talc'ho mad peb amzer eus ar bloaz da rei d'ehoc'h ar pez a dle da rei, evel ma'z eo, an nevez amzer, ar gliz eus an env ha deisiou clouar, hag an anv, heol tom hag amzer seac'h. Anez ar gliz eus an env e mis maë, ar pez o pezo hadet epad ar goan, pe e mis meurs hag e mis ebrel, ne boulez ket, ne zavo da netra. Anez an deisiou clouar a vis maë hag a vis even, oc'h ed ne guemero ket a voueden. Anez an heol tom a vis gouere, ne zarevo ket; hag anez

an amzer zeac'h a vis eost ne helloc'h ket hec'h dastum, pe, mar guellit her medi, e teui da vraguezi, ha mar guellit hec'h dorna en eur fesoun bennac, ne helloc'h ket her c'hraza; hag evelse, n'euz fors penaoz, ne roio ket d'ehoc'h a beadra da vaga ho creg hag ho pugale.

Hoguen, m'her goulén ouzoc'h adarre, daoust ha c'houi a zo mestr var ar gliz eus an env? Daoust hag en ho calloud ema digass deisiou clouar, e mis maë hag e mis even? Daoust ha c'houi a hell, pa guerit, ober d'an heol scuill var an douar gor ha tomder? Daoust ha c'houi a hell, pa o peuz c'hoant, lacaat an amzer da veza seac'h e mis eost? Setu aze eta cals traou ha n'e maint ket en ho calloud, hag a bere o peuz ezom couls-goude, mar d'oc'h tiec pe coueriat, evit beza e stad da c'hounit bara d'ho creg ha d'ho pugale.

Brema, mar d'oc'h den a vicher, n'e ket aoualc'h d'ehoc'h kennebeut gouzout mad ho micher, ha caout ijinn da labourat, evit guellout gounit bara d'ho creg ha d'ho pugale; ezom o peuz c'hoaz ive a gals traou all da bere n'oc'h ket mestr. Evelse, da guenta, o peuz ezom a iec'het: daoust ha c'houi a zo mestr d'ar iec'het? Daoust ha c'houi a zo mestr da lavaret d'ar c'hlenvet: tec'h diouziun! pe da lavaret d'ar iec'het: chom ganen? Nann, doctor, Doue ebken a zo mestr var ar iec'het ha var ar c'hlenvet. Ezom o peuz c'hoaz, d'an eil, ma chomo mad ganeoc'h ar benviachou pe an ostillou a bere ee'h en em zervichit en ho micher. Daoust hag en ho calloud ema miret ous an ostillou-se da derri, pe da vancont en eur fesoun bennac? Ha mar torrout, pe mar tistressont evelse aliez, ez ai oc'h oll liardigou da lacaat ho dressa, pe da brepa re nevez: penaoz e helloc'h-c'houi-neuze gounit bara d'ho creg ha d'ho pugale? Mes marteze c'houi a labour dre nerz an tan, pe, evit lavaret guell, dre nerz an ezen eus an dour bervet en eur gaoter. Lakeomp eta emaoe'h o labourat evelse; neuze e hell erruout ganeoc'h cals goassoc'h abaden c'hoaz.

Daoust ha c'houi a zo mestr da gass an tan ato evel ma fell d'ehoc'h? Daoust hag en ho calloud ema lavaret ato d'an tan: betec ama e teui, ha n'ez hi ket larcoc'h? Mar teu eta an tan-se, c'houezet dindau ar gaoter, da ziroll eun devez bennac, ha da veza eun tan-goal scrijus; mar teu ar gaoter-se re c'horet dre an tan, da derri en eun taol, ha da strinca a dammou, da betra e servicho d'ehoc'h en deiz-se oc'h oll ijinn? Petra helloc'h da ober en deiz-se evit gounit bara d'ho creg ha d'ho pugale? Daoust ha ne vioc'h ket eürus c'hoaz ma ne vezit ket paket e creis an abaden-se, devet gant an tan, pe glazet gant unan bennac eus an tammou strinket eus ar gaoter? Setu aze penaoz, mar d'oc'h den a vicher, n'e ket aoualc'h d'ehoc'h kennebeut caout ijinn da labourat evit guellout gounit bara d'ho creg ha d'ho pugale. Ezom o peuz c'hoaz evit kementse a eleiz a draou all pere a zo e galloud an Aotrou Doue ebken, pe da viana ezom o peuz c'hoaz evit kementse da veza diouallet dioc'h cals traou a bere Doue ebken a hell ho tivoal.

Evelse eta, doctor, pe c'houi zo tiec, coueriat; pe c'houi zo den a vicher, ezom o peuz ato eus a zicour,

pe eus a vennoz an Aotrou Doue evit guellout, dre al labour eus ho stat, gounit bara d'ho creg ha d'ho pugale. Hoguen, penaoz e tennoc'h varnoc'h ar vennoz-se a Zoue a behini o peuz ezom? Penaoz oc'h obtenoc'h digant Doue ar zicour-se a zo red d'ehoc'h da gaout? N'e ket a dra zur oc'h ober goab anezhan eo, hag o vressa a zindan ho treid he c'houre hemennou ha re an Ilis, mes er c'hountrol o veza aketus d'he hedi, ha da gonsacri d'he zervich an deisiou a zo merket evit-se pe ganthan he-unan, pe gant hor mam santel an Ilis. Selaouit petra lavar d'ehoc'h an Aotrou Doue he-unan var guement-ma: « *Ma ne virit ket va deisiou, emezhan, « me gasso an dienez da doull ho tor; caër o pezo hada, « netra ne zastumoc'h; an env a deui da veza evidoc'h « evel keur, hag an douar evel houarn; ar zec'hor a « zevo oc'h ed en he za, pe ar c'hazarc'h hec'h discaro; « ar c'hlenvejou, ar vosen, an naouneque, a gouezo « varnoc'h; an tan a grogo en ho tiez, hag a lac'ho e « ludu kement o pezo dastumet.* » Evel a velit eta, evit guellout gounit bara d'ho creg ha d'ho pugale, kenta tra o peuz da ober eo beza aketus da viret ar zulion hag ar goueliou all eus ar bloaz, ha da vont en deisiou-se d'an offeren ha d'ar gousperou. N'e ket me eo hec'h lavar d'ehoc'h, mes an Aotrou Doue he-unan; brema, ma ne gredit ket an Aotrou Doue he-unan, goaz a ze evidoc'h!

Beza ez euz c'hoaz hiniennou hag a labour da zul ha da c'houl var digarez m'eo guelloc'h labourat eguet beza mezo en deisiou-se. D'ar re-se n'em euz ken respont da ober nemet hema: me anavez eun dra hag a zo guelloc'h c'hoaz; pe seurt-ta? Chom eb ober nag an eil nag eguile, da lavaret eo, chom eb labourat ha chom eb beza mezo en deisiou-se. Ha kementse n'e ket ebken guelloc'h eo ez eo, mes beza ez eo zoken eun dra red. Rac ar re a labour da zul ha da c'houl-bers ne d'ant ket d'ar baradoz kennebeut nag ar vesvierien: eun dra ken red eo eta chom eb labourat da zul ha da c'houl-bers, evel ma'z eo chom eb beza mezo en deisiou-se. Ha setu perac arabat eo lavaret: eo guelloc'h labourat eguet beza mezo da zul. An eil hag eguile a zo eun dra fall, pe guir eo difennet; hoguen, eus a zaou dra hag a zo fall o daou, ne heller ket lavaret gant guirionez ez euz unan hag a zo guelloc'h eguet eguile, p'e guir n'euz nicun anezho hag a ve mad.

GABRIEL MORVAN,
Person Pluguën.

BUEZ AR PLAC'H DEVOT ARMELA.

(C'huec'hvet pennad).

Ne glaskin ket lavared d'heoc'h an doare m'a parlante ene ar plac'h-man gand Doue; mez c'hoant am enz da ober eun daolen euz he vertusiu, evid ho lacad da veza talvoudec d'an dud a zougans Doue.

Ha da guenta, guelomp he feiz, paz'eo guir ar feiz eo ar mean diazez eus an oll vertusiu. Hoguen feiz Armell a ioa ken bras, m'a sounje dezhi ne grede netra, rag

guedet a rea gand daoulagad ar feiz an oll misteriou a ro an iliz d'eomp da gredi. Dre guement se e c'hoarvezas, ne c'houlenne mui ar maro, evel guechal, abalamour m'a vela brema ato Doue dirac-hi, ha dre-se ne c'helle mui c'hoantad eun dra hag a ioa dija e tre he daouarn. Coungoude countant edo da veva ha countant da vervel gand m'a vije ato gand Doue hag hi gand-han. Scrived en doa en he c'halon ar c'homzou kenta euz ar *bater*; ; ha ne heane da sounjal peguen evurus en em gave da c'helloud guervel Doue he zad. Ober a rea en he guever e guis da eur c'hrouadur mad, en dez evit tad eun den pinvidic ha carguet a vadelez evid he vugale. Lavared a rea eta da Zoue he levnez, he foaniou, he iec'hed, he c'hlenved, he aon hag he fisians, he naon hag he sec'hed. Ar fisians-se e Doue a ioa ken bras, m'a ne dez biscoas destumet netra evid an amzer da zont. Evid oll tensor, ne deoa nemed providans eun Doue carguet a vadelez. Ne c'houlenne netra nemed digand-han, ha Doue en euz roet d'ez-hi, couls lavared ato, var an heur ar pez a c'houlenne.

Comzet hon euz dija var meuleudiguez ar garantez divin e calon ar servicheurez santel-man. Dont a rea d'ez-hi avechou kement a c'hoant da lavared d'an oll pegument Doue a so bras, galloudus, carantezus ha mad, m'a dije mil boan o tevel. Lavared a rea, m'en dije Doue he lezet, e vije eat, evel eur plac'h collet gant-hi he skiant-vad, dre ruiou kær, en eur grial pegument Jesus a so mad, ha pegument e teomp her c'hared en tu-all d'an oll traou crouet.

Ne rea netra nemed evit Doue. He spered hag he evor a vije ato gant-han; Morse ne golle ar guel anez-han hag an traou diaveaz a deu aliez da drei spered ar re all euz ar pez a reont pe a glevont, ne rea d'ez-hi morse coll ar sounch euz a Zoue. Den ne c'helle gouzout peguen bras e vije he glac'har, pa sounje ez oa tud a negarient ket anez-han pe a zoue da derri unan benac euz he lezennou dre ar pec'hed. En em rei a rea neuze da Zoue, en eur zont d'her pedi a galon vad, m'a plijche gant-han rei d'ez-hi cals poaniou da c'hounsao evit biannad an niver euz a bec'hejou ar re all; hag ober a rea kement-se dreist-oll er mareou-se euz ar bloas m'a kustum an dud redet d'an ebatou hag en em rei d'an disurjou. Doue dre m'a roe ato d'ez-hi he goulenn, a ziskueze d'ez-hi he vadelez en eur zigass d'ez-hi poaniou ar re vrassa. Evit diskuez peguen caer ez-oe ene Armell dirac Doue, n'euz nemed lavared ez-oe aotret d'ez-hi gand ar beleg a c'houarne he c'houstians, ober ar vœu da ober ato penda-ben ar pez a c'houlenje Doue digant-hi, ha memes da ober bep pred ar pez a vije evit brassa enor ha brassa gloar he c'hrouer.

Lavared a rea aliez m'a n'em divije ket Doue caret kement a ma ra an eneou, biken ar sounj euz a eur garantez all ne vije deut en he spered. Mez dre m'a ne c'helle cared Doue leun avouallac'h eb kared ive kement a so ker d'ez-han, e carrie ive he nessa, hag e divije mil guech roet he buez evit savetei eun ene. Pec'hejou ar re all he melconie; pedi a rea evit goulenn trugarez

evid-ho. Ar c'holl euz a eun ene e lake clanv gand ar c'heuz e deoa d'ez-hi. Ar pez a reas d'ez-hi ar muia anken o cleved unan euz he breudeur ha daou eontr d'ez-hi a ioa en em roet d'an droûk, oua gueded he goad en em saved a eneb Doue. Pedi a reas m'a falveje da Zoue ho distrei divar an hent fall, hag he goulenn a oue roet d'ez-hi. Dre ma ne c'helle ket abalamour d'he stat izel a servicheurez, labourad avouallac'h evit silvidiguez an eneou, e pede an oll dud euz he anaoudeguez d'he sicour. Ober a rea ar pez a ioa en he galloud, evit lacad rei missionou er parrecheou divar ar meaz. Rei a rea euz an neubeut a arc'hand a c'houneze evit beva ha guisca ar visionnerrien, ha dre-ze, ervez promessa Jesus-Christ he-unan, e deoa perz e merit an oll labourerien abostolig-se. Ouspen-ze e sicour ar visionnerrien da ober ar vad, dre he skuer, dre ar guelellanduz a roe d'he anaoudeguez da derri ar chadenrou ho dalc'he stag euz ar pec'hed. Ober a rea c'hoas ouspen; dre ma c'hanaveze pere edo dissurjou peb cordennad douar, e lavare d'ar visionnerrien var betra poueza ar muia en ho sermoniou. T. B.

MARINA.

(Trede pennad).

An Itron Valnoar a recevas goal gueleier; he danvez a iea en eun taol da netra. Dont a reas da veza cals diassoc'h beza var he zro. Ne gouske mui, hag he iec'hed a iea ive da fall. Marina a guendalc'he d'he zervicha gant ar memes calon evel diaraog. Eun truez bras e devoa oc'h he mestrez oc'h he guelet anter glan, crignet gant ar boan speret, hag e c'houzanve ep en em glem he oll barradou buaneguez. Gouzout a rea penaus eun den ha n'en deus ket a relijion, pa en em gaf ankeniet, a so cals truezusoc'h c'hoaz he stad evit eur guir gristen pehini a ell ato en em laouenaat e Doue.

Marina a rea he gallout evit gounit ene an itron. Eun nosvez ma falveze dezhi e vije lennet eun dra bennag dezhi evit laouenaat he speret, ar vatez a redas d'he c'hamprig hag a zigasas ganthi Buez ar Zaent. Al levr-se ne voa ket dioc'h doare ar vestrez, hag e reas lenn dezhi en eul levr eus a scridou Volter. Rag, emezhi, scridou ar goal hotr-ze o deus va laket da c'hoarzin meur a vech pa voan eurussoc'h evit brema.

- Ne ket eul levr evelse eo a glascjen d'am laouenaat ma vijen ankeniet, eme Varina.
- Pe seurt levr-ta, eme an itron?
- Levr an Imitation.
- An Imitation? Ni velo divezatoc'h.

Marina a bedas neuze he mestrez d'he lezel ep ober dezhi lenn levriou Volter; rag clevet em eus, emezhi, ez eus enho traou control d'ar relijion. An itron a lavaras dezhi serra al levr, ha Marina a lamas da zorn he mestrez evit he zrugarecat.

Vertuz ha dousder he matez iaouanc a deuas a nebet-dou da c'houit kement calon an itron, ma he c'hared evel pa vije bet merc'h dezi. Bez' e devoa enhi ar brassa

fizians. Pa zea unan bennag eus he mitizien kuit, e roe urs d'ar gouarnet da glasc dezhi re all hag o divije relijion; rag emezhi, guelet a rit-hu pe guer mad eo Marina ouzin?

Hounnez, eme ar gouarnet, a ve guest da ober eur c'hristen mad ac'hanon va unan, ha zoken en desped da Volter.

Etrebant danvez an itron a iea en ho zro, hag ep dale ne jomas couls lavaret netra ganthi. Neuze e voue guelet pegument oc'h aller fizout e mitizien ep relijion. Pep hini a ieas en he avel, hag a lezas eno ho mestrez deut da veza paour. Ne jomas nemet Marina pehini he zerviche gant muioc'h a evez evit biscoaz. An itron a voue red dezhi dilezel he maner ha mont da jom en eun toul camp. Neuze e lavaras d'he matez iaouanc e c'halle ive en em glasc.

Marina en'em lakeas da vouela. Ha displijet em eus-me deoc'h itron, emezhi?

— Displijet? oh n'oc'h eus ket, pell dioc'h eno. Ne ket ho cas kuit eo a ran. Mes lavaret a rencan deoc'h n'em eus mui a beadra da rei deoc'h commanant, hag e rafen displeadet oc'h ho tere'hel ep gallout ho paea goudeze.

- Mes, eme Varina, piou ho servicho neuze?
- Petra fell deoc'h, pa n'am eus mui netra.
- Oh, itron, me labouro evidoc'h hag evidon.
- C'hui a so eun æl, eme an itron o lamet da vriata he matez. Peleac'h oc'h eus-hu desket beza ker mad-ze?
- Ar relijion a heuillan guella ma ellan eo en desc din.

An itron a dolaz en tan cals levriou e doa, scrifet gant tud difeiz, en eur lavaret n'o doa great nemet drong dezhi, hag e felle dezhi heuilla iviziken ar relijion a rea da eur plac'h paour beza ker madelezes. Neuze e c'houennas levr an Imitation ne felle ket dezhi da guemeret eun nebeut araog.

O Ienn al levr-ze e tistroaz a grenn oc'h an Aotrou Doue, hag e teuz ep dale da veza eur skuer ar guella evit oll dud ar barrez. Ar Broidians pehini e devoa he amprout pell amzer evit he brassa mad, a deuas da zistoler dezi an danvez a voa bet lamet diganthi. Mervel a reas eur c'har dezhi, den pinvidic braz. Ne voa nemethi a heritourien, ha dre eno e devoe etre he daouarn muioc'h a vadou evit n'e devoa bet biscoas. Prena a reaz ar maner a voa bet red dezhi da verza kentoc'h; Marina a guemeraz da verc'h, hag e reaz eun testamant evit lezel ganthi he oll danvez pa deuje Doue d'he guervel.

Evithi da veza deut pinvidic adarre, e talc'has mad da Zoue ha d'ar relijion oc'h pehini oa distroet, hag he buez a voue ato buez eur gristenez dispar. Iviziken he oll madou a voa evit ar beorien, an oberou a drugarez a guemere an darn-vuia eus he amzer, ha pa jome dirag dor an iliz evit rei gant larguentez he aluzennou d'an dud izomec, ar beorien a lavare d'an diavezidi a voa souezet o velet pe guer mad ha pe guer carantezuz oa: Hounnez eo an itron Valnoar, mam ar beorien,

hag hounnez iaouanc, an æl-ze he ren dre argazel eo Marina skuer ar plac'h et a gampr. G. M.

Hano ar Zaent evit ar Sizun-ma.

- DILLUN 8 HERE. — Santez Berned, intanvez.
- DIMEURS 9. — Sant Deniz hag he gompagnunet, merzerien.
- DIMERC'HER 10. — Sant Francez Borgia.
- DIZIΟΥ 11. — Sant Corneli ha S. Ciprian, merzerien.
- DIRGUENER 12. — Sant Lid, pap ha merzer.
- DISSADORN 13. — Sant Edouard, roue a Vrozaoz.
- DISSUL 14. — Kenta sul varnuguent goude Pantecost. Gouel en enor d'ar Verc'hez evel Mam Doue.

An Aviel hario :

Pa zistroe Mari ha Joseph eus a Jeruzalem eleac'h ma voant eat evit goueliou Pasc, Jesus a jomaz e kar ep ma c'houie he guerent. Sounjal a rea dezho edo e compagnunet ar re a voa eat gantho, hag e valejont epad an deiz. Neuze en em lakejont d'he glasc etouez ho c'herent hag ho anaoudeien. Hag evel n'her c'havent ket, e tistrojont da Jeruzalem d'he glasc. Hag abenn tri devez her c'hafjont en templ, azezet e creiz an doctoret, oc'h ho zilaou hag oc'h ober goulennoù outho. Ha kement hini her c'hleve, a voa souezet o velet ar furnez eus he respontchou.

Mari ha Joseph a voue ive souezet oc'h he velet; hag he vam a lavaras dezhan: va map, perag oc'h eus-hu great evelse deomp? Setu edomp oc'h ho clasc, ho tad ha me, ankeniet bras.

Jesus a lavaras dezho: petra oa deoc'h va c'hlasc? Ha ne vouiac'h-hu ket e voa red din beza eleac'h ma zed d'am zad?

Hoguen ne gomprenjont ket ar pez a lavare dezho. Diblas a reas gantho da zont da Nazareth, hag oa sentuz outho. He vam avad a zalc'he en he c'halon sounch mad eus an traou-ze oll.

Ha Jesus a greske e furnez, en bad hag e gras dirag Doue ha dirag an dud. (SANT LUCAS II. 43.) G. M.

KELEIER.

An Aotrou Pouliquen, person Lanarvily, so hanvet person en Henvic.

Dillun, eisvet dervez a viz here, e vezo eun eclips heol da bemp heur nemet cart dioc'h an noz.

An Aotrou Cruice, Escop coz Marseil, so hanvet chaloni a Sant-Denis, e renc an Eskibien.

Chenchamanchou etouez beleien Escopi Sant-Bried.

An Aotrou Bouget, person Sant-Agathon, so hanvet person Tregastel;

An Aotrou Peron, vikel e Gias-Guengamp, so hanvet vikel e Lohuec;

An Aotrou Gourhant, vikel e Trebrivant, so hanvet vikel e Mousterus ;
 An Aotrou Gelard, bet vikel e Tregrom, so hanvet vikel e Treguer ;
 An Aotrou Gibert, oc'h ober scol e Guengamp, so hanvet vikel e Trebrivant ;
 An Aotrou Herviou, vikel e Plouha, so hanvet person e Sant-Agathon.

Eur Fear Kissier.

Betec henn em boa clevet prezec euz foariou kezek, foariou saout, foariou asenet, foariou denved, foariou ierr, foariou leueou ; cleved em euz soken prezec divar-benn foar ar plù e Plouescat ha foar ar grac'het e Kiperelle. Mes biscoas va dionscouarn n'ho doa cleved meneg an disterra, a foariou kissier ; ha consgoude setu aman ar pez a so gouerantet din beza erruet n'euz kel pell en Escopti Gouenet.

N'euz mar ebed, eun deiz marc'had en eur guèrik-vian, eur marc'hadour lunedou diskennet er vro eun tachadic a ioa, a zispacas he stal e corn eur ru dre leac'h m'a tlie cals tud tremen. Meur a zèn kurius a dosta euz ar stal, a laca memes eur maread lunedou var ho fri, evit gouzout a mad e zoant, darn-all evit gouzout a gant eur re lunedou an holl a c'helle len eb anaveout nag A na B nag eb beza bet morse er scol ; mes nikun na bren netra. Cousgoude an heol a gomans isellâd ; pep-unan a guemer dija pen-an-hent da zistrei d'ar gear.

Ar marc'hadour lunedou neuse leun a gounnar, ha raouiet-oll o crial a hed an deiz evit guèrel an dud da dostad euz he stal, hag oc'h ober meuleudi he lunedeier, a dremen eur sounjezon dispar avouallac'h en he ben. Cregui a ra en eun tam taboulin a ioa ganthan, skei a ra varnez-hi guella m'a c'hell, ha sctu prest eur vodennad tud goassoc'h egued biscoas en dro d'ez-han. Neuse pa velas digor ho guinou gand an holl, evit cleved ar pez a yea da lavared, e parlantas er guis-man : « sel-laouit, emez-han, hag e cleffot ar c'healou mad am euz da rei d'heoc'h. Me so diskennet er gear-man dre urs an Aotrou Prefet a Alger, da rei d'an holl da c'houzoud, e year da brena eun niver bras a guissier evid ho c'hass d'ar vro-se ; rag en *Aljerr* tro-var-dro, (marthez o peuz her c'bleved) an eost hag al lugumachou-all, a so revinet gant al logod hag ar razet, dre m'en euz ket a guissier avouallac'h da ober d'ez-ho brezel. — Goulen a refet, marthez, diganen peguement a lekein e pep cas. Hogueu lakad a rin en-han deuz ma vezo : Eun targas a bain euz a eur scouet da drivac'h real ; eur gazes, gant ma vô lem he lagad, a c'hell mont e ser eun nao pe dek real. — Peur e kemerin ar c'hissier a vezo digasset d'in ? dilon guenta, ha pa ve glao.... Roit, mar plij, kement-man da anaout d'hoc'h amezeien. — Ha kerkent eun taol ramplan plan, ramplan-plan var an daboulin evid echui an dervez.

Ar c'healou-man a ieas buannoc'h egued an avel e meas a gear. En eur zistrei euz ar marc'had, pepunan

ne parlante ne med euz he guissier. Me, eme unan am euz em zi pevar c'has, ha gant unan e rin brao va c'hoari, me, eme eun all, a starno va c'harr hag a ielo d'ar paresiou pella da brena. Ar pez a oue lavared a oue great, n'a den na gollas he amzer er sizun-se. Labouriou an douar a oue lezed a gostez evit mont a zor da zor da glask kissier, evel ma veler ar billaouerrien o vont a di, da di da glask stoup pe truillou. An holl o deuz mall hag hast da veled al lun oc'h erruout, hag erruout a ra a la fin. Ne veler neuse o vont gant an hent d'ar marc'had nemed sammou kissier. Dek heur a so sonet ! dija var dachen ar marc'had ez-euz diskennet euspen tri-c'hant sac'hat kissier, hag a bep tu ne veler nemed sac'hadou all o tont. Dek-heur anter ! eunnek-heur... ! neo ket ebken an dachen varc'had, mes ar ruiou-holl a so goleet a sac'hadou anevaled.

Hag ar marc'hadour bras a Alger ? e pe leac'h ez-man. Caer so sellad, meneg ebed anez-han. Couer en euz dija nec'hamant. Cousgoude an amzer a deu da denvallâd ; ar gurun a gommans crosal, ha prest eur mor dour a deu da bigossad an toennou ha da vele'hi ruiou kaer. Ar c'hissier keas, a sounj d'ez-ho, em eur o vont d'ho beuzi, bag a zeu en eur viaoual da leuskel eur musik gouest da rei ar vuez da eur marc'h maro aboue eur miz.

Abars ar fin an dud keis a deu da c'houzout ez euz great goab an-ez-ho. Coeza ra neuse ho meud en ho dourn, hag evit beza, da viana, disam da vont d'ar gear, e reont an eus da c'hoarzin, petra benag nez-euz nemed melconi ha mez en ho c'halon ; digueri a reont ive ho zier hag e leuscont ho frisounnerrien da redèc. Ar c'hissa den so var an douar, n'euz biscoas goueled kementall. Ar c'hissier en eur guemered au teac'h a rea picol lamjou a gleis hag a ziou, darn a dremene e tre divesker an dud evit caout eun hent berroc'h : darn all a guerze en tiez evid en em guzet, a lamme var ar gouer hag ar boutaillou en hostaleurion, en eur seleja goueren en tu-man, boutail en tu-hont. En eur guer ne gleved a bep-tu dre gear nemed ar c'hri-fors, savet gant an anevaled-mud-se. — An darn vuia anez-ho, dre m'a ouant casset dall d'ar marc'had, da lavared eo e sier coulmet clos, no deus ket cavet an hent da vont d'ar gear, hag a so joumet aboue dre eno. Setu perac ar sabat a reont bep-noz, a vir, var a levereur, euz an holl da gousket.

B. T.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 22 Guengolo.	PONTNABAT — 27 guengolo.
<i>Priz ar c'hant liour.</i>	<i>Priz an hectolitr.</i>
Guinis.... 13 lur, 67 c.	Guinis.... 20 lur, 54 c.
Segal..... 8 lur, 43 c.	Segal.... 41 lur, 52 c.
Eiz..... 7 lur, 64 c.	Eiz..... 40 lur, 32 c.
Ed-du.... 7 lur, 24 c.	Ed-du.... 40 lur, 06 c.
Kerc'h.... 8 lur, 49 c.	Kerc'h.... 8 lur, 75 c.
Avalou-douar 3 lur, 50 c.	Avalou-douar 3 lur, 90 c.

Ar Gerant : AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand AR. DE KERANGAL, Moulter an Escopti.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a gomz ar brezouneec.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten a goust :

Evit eur bloas.....	DAOU SCOUET.
Evit c'huec'h miz.....	EUR SCOUET.
Evit tri miz.....	C'HUEC'H REAL.
Eur gazeten ebken.....	DAOU VENNEG.

Ar bacamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORYAN, Belec e Kemper.

Ar pacamanhou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 13 Here 1866.

An trivac'h eus ar mis tremenet ez eus bet eur solanite vraz e Castel-Paol, evit lacat el leac'h preparet evit ho diguemeret, eskern an Aotrou Lamarche, di-veza escop a Leon. An Aotrou Lamarche, evel ma on eus he lavaret brema ez eus teir sizun bennag, a voa bet beziet e Londrez brema ez eus triquent vloaz, ha brema ez eo digasset da Gastel. An Aotrou'n Escop a Guemper so eat di evit ar solanite-ze. Goude an ofis, an Aotrou'n Escop so pignet er gador evit coms d'ar re a voa oc'h he zelaou divar benn ar pez a rea dezho beza en em zestumet eno.

« Ne denan ket, eme an Aotrou'n Escop, da ober eur veuleudi a ganv eus an Aotrou Lamarche ; dont a ran epken da lavaret deoc'h eur guer a skuer vad bennag divar benn ar sonch e deus hon digasset ama. Ar pez a ra ma zeo eun escop bras hag huel e guirionez, ar pez a ra d'ar relijion renta enor dezhan, ne deo ket ar pez a gaver caer dirag daoulagad an dud. Ar Speret-Santel, er Scritur Sacr, a zesc deomp kementse. An Escop (ar Pontif), a so bras, emezhan, dre ma plije he vuez da Zoue. Cavet eo bet oa eun den just. Bet eo anterour etre Doue hag an dud en dervezioù a goler. Laket en deus miret lezen Doue, ha Doue a zo falvezet dezhan e vije sonch anezhan e touez ar rumou tud a deue var he lerc'h. » Ar mercou-ze roet gant ar Speret-Santel a gaver selear e buez an Aotrou Lamarche, en oberou great gantha hag a bere e tale'her sonch, ha beteg-en enorieu a rentomp dezhan hirio.

Ama an Aotrou'n Escop a Guemper hag a Leon en deuz lavaret eur guer bennag eus a vuez an Aotrou Lamarche epad ma zeo bet escop.

« En dervezioù a arneu, en amzeriou a zispac'h, he vouez a vouie unani an oll, ha bete tud ha ne voant nag eus ar memes bro, nag eus ar memes relijion. Lacat a rea ober ar burzudou-ze a drugarez hag a vadelez pere

o deus laket scrifa he han e lizerenn, aour etouez ar re so bet red dezho kuitat ho bro, hag arabat eo eridi, n'o defe ket ar skueriou caer-ze roet da Vro-Zaos gant ar veleien catolic, arabat eo eridi n'o defe ket dougue a fronez, n'o defe ket roet ar virionez da anaout. Abaque an amzer-ze eo commaset tud an enezen-ze, bet ket all sebeliet e tenvalijen an errol ; da zistrei oc'h Doue, da zistrei d'ar guir iliz. An Aotrou Lamarche en deus bet eul loden vras eus ar vad-ze, great e Bro-Zaoz, eleac'h ma zeo bet sicouret gant cals a re all, dreist oll gant an Aotrou Mintier, escop Treguer, ha gant an Aotrou Carron.

« An Aotrou Lamarche so bet eta burzodus dre an aket, an dreveil en deus kemeret evit ober vad d'ar re all ; dre ar stad dister ma en em blije enha, dre an an-counac'h anezhan he unan. Cousgoude ne rajemp ket he veuleudi, dreist oll n'he grajemp ket eur ar gadorma a virionez, ma cefjemp en he vuez eur skuer a zislealdet, a zizentidiguez e kenver an iliz santel apostolic, e kenver hon Tad Santel ar Pap. »

Ama an Aotrou'n Escop a gomz eus ar respont a roas an Aotrou Lamarche pa voue pedet, eun nebeut amzeraoag an Unvaniez (le Concordat) da rei an iliz eus a escopti Leon etre daouarn vikel Jesus-Christ.

« Ne ket testenieu a vanc, eme an Aotrou'n Escop Serjant, e buez an Aotrou Lamarche, evit diskuez peguement oa fidel, peguement oa douguet evit cadore Sant Per. Ha sevel a ra han euz da rei iliz he reglennou nevez d'an iliz, ar pez a c'houirdrouze, en he amzer, en em skigna azalet Pennker Frans beteg an escoption pella ? An Aotrou Lamarche a zalc'h stard a enep an nevezentiu-ze. « Nan, a lavare Escop Leon, ne c'houzavin ket e ve torret, em escopti, al liamou diveza-ze, al liamou caer-ze pere hon dalc'h stag oc'h an iliz a Rom. » Ha meneg a so eus al le-ze goulennet gant an dispac'h oc'h ar veleien ? Escop Leon a ia en harlu, hag al liziri caer scrifet gantha eus a Londrez d'ar veleien ha d'an dud fidel eus he escopti a ziskuez,

en eun doare ar sclerra, he garantez hag he respet evit cador Sant Per hag evit an hini so azezet varnezhi. Credi a reas, ep mar, ec'h alle neuze silaou ar c'hoant e devoa he galon da jom stag oc'h an ilis-ma dre eun nvaniez ha ne felle ket dezhan da derri; mes o pidi ar veleien o doa he heuillet en eur vro estren da zenti oc'h ar bastoret lakeat gant ar Pap en ho fenn, e roas sclear da anaout petra zonje ha pere e voue ar mennoziou eus he galon beteg he huanad diveza.

« Beleien ha christenien fidel eus an escopti-ma, dalc'hit eta en ho speret ar zonzj, eur zonzh divlam ha didach, eus an escop bras-ze. Eur eus eo an iliz-ma da zerc'hel brema diabarz enhi ar peza jom anezhan. »

Ar re a lenno kement-ma a velo ervad ne verecomp ama nemet eul lodennic eus a gomzou an Aotrou'n Escop pehini en deus prezeguet epad tri c'hart'heur, hag a so bet silaouet gant an evesdet ar brassa.

Bez' ez oa, en ilis Castel, evit ar zervich-ze meur a hini eus a anaoudeguez an Aotrou'n Escop Lamarche, ha zoken eus he guarent. Eun nizez vian dezhan, an Itron contez Keruzoret, eo e deus laket digas, eus an douar estren da ilis Leon, ar peza jom eus he eontr coz. Carguet e doa eus a guementse an Aotrou Mahe, beleg eus an escopti-ma hag o chom brema e Kemper; mes pehini a voa, a bell zo, beleg an arme a vor e Bro-Zaoz, hag a anaie mad ar vro-ze.

An dud difeiz a so ato eun dra bennag oc'h ho diaza. Ato tra pe dra a stourm outho. Ato ho zroad o steki en eur mean pe en eur c'hrizien bennag. Oll trubuilhou ar bed a ve lavaret a goesse varnezho. Ar peza ra ho glac'har er sizun-ma eo guelet dispign kement a arc'hant o sevel ilizou nevez. E Paris e saver ilizou nevez; e kement corn, e kement escopti so e Frans, e kær ha var ar mæz e saver ilizou nevez. E Breiz-Izel e saver ilizou nevez. Ia, e Breiz-Izel, ha ne ket eno zoken eo e saver an nebenta. Ama e tispigner antercant mil scoet, haont cant mil scoet, en eul leac'h all, tri c'hant mil scoet hag ouспен. Nag a arc'hant l ha ne vije ket gallet ober anezhan eun implic'h guelloc'h evit na rer oc'h he lacat da zavel ilizou? Setu ar peza c'houlou an dud ep relijion; rag an dud-ma, ho pet sonch, so tud vad ha truezus, hag o dese c'hoant e ve great gant an danvez an dispign an talvoudeca evit mad an oll.

Neuze ta, a leverot-hu, e false dezho e ve roet an arc'hant-ze d'ar beorien? Nan, an dud ep relijion n'int nemeur troet oc'h ar beorien: guelloc'h dispigna gaf dezho a eller da ober gant arc'hant. Petra-ta? Sevel hospitalion evit diguemeret ar re glan ha rei dezho al louzeier a here o deus izom? Nan, an dud ep relijion o deus-re a aoun rag ar c'hlenvet. Carout a rafent ne gl'fent morse hano nag a gl'fent nag a dud-clan. Guelloc'h implij c'hoas evit an dra-ze a eller da ober gant an danvez, ha setu ama penaus.

Ha ne alfet ket, gant an arc'hant-se, sevel tiez a ebat (theatrou) eleac'h ma c'helfe an dud caout ho flijadur, da viana ar re anezho o deus peadra da baea mont en

tiez-ze? Ha pa ve dispignet evit sevel eun ti evelse kement hag a ve red evit sevel deg pe zaouzec iliz, an arc'hant-se a ve ato dispignet mad. An dud ep relijion ne druezint ket var ar re a ro arc'hant da zavel an tiez a ebat-ze. Ne lavarint ket dezho e raffent guelloc'h o rei d'ar beorien.

Hoguen an dud-ze ne ouzont ket e caf ar guir gristen he ebat en iliz; ez eo eno e vella d'he galon; ez eo eno e tanva plijadurezou mil guez c'huec'oc'h evit ar re a gaf an dud difeiz en ho ziez a ebat. Ar c'hristen a voar ez eo an iliz ti he Zoue, ti he dad, ha dre-ze he di he unan. Eno e caf peadra da laouenaat he ene pa vez en d'ristridiguez. Eno e caf an diskuiz dioc'h he dreveil hag he labourou. Eno eo e scanva ar beac'h eus ar poaniou en deus da c'houzaon var an douar.

Hag ouспен ne ket ar re a ro arc'hant da zavel ilizou nevez eo a chom ep rei d'ar paour. Ne ve nemet goulou oc'h ar beorien ho unan piou a zo guella outho, pe ar re a ro peadra da zavel ilizou nevez, pe ar re a fell dezho e ve laket ho arc'hant da zavel tiez a ebat? Daoust hag er parrezion-ze eleac'h ma zeus savet ilizou nevez pe d'isset re goz eo bet guelet ar beorien dilezet, eo bet guelet oa tristoc'h ho stad evit na deo e leac'h all?

O rei zoken arc'hant da zavel eun iliz, e roer d'ar paour, rag an iliz zo d'ar paour couls ha d'ar pinvidic. Ar paour a gaf eno ive ti he Zoue hag he dad kerkouls hag ar pinvidic. Ha ma teufe he baourentez da viret outhan da ellout caout eun doen evit he zise'h'lavi, en iliz en deus ato guir da vont, ha dor an ilis ne vezo ket serret muioch outhan evit oc'h pinvidica den so er barrez.

ITALI. — En Itali e rer ato brezel d'ar relijion ha d'he beleien. Setu ama eul lizer scrifet divar benn an Aotrou Villani, professor e clouardi Nocera. Eur mignon dezhan eo a scrif.

« Edon o vont da Falern, var dro c'huez'heur dioc'h ar mintin, pa zigouezas ganen, e kichen Vietri, eur jadennad hir a brizonerien, hag eur beleg e penn ar jaden. Va mignon Villani oa. Divera a re a c'houez diouthan. Dronglivet oa, skuiz maro, he zaouarn liamet, hag e valee e touez eur vanden grimalet. Pa her guelis e teuas druz au daelou em daoulagad, hag e falvezas din mont d'he gaout. Eun archer a griaz ouzin: Kea gant da hent, beleg! Red mad e voue din mont gant va hent bete Falern. Eno e clevis e tlient beza casset da Napl, hag ac'hano e vije great dezho mont dioc'htu da Gagliari ha da Gen eleac'h ma tlient chom. En esper guelet c'hoas va mignon hag ober eur vad bennag dezhan e kemeris dioc'htu an hent houarn evit mont da Napl, hag e tigouezis dress pa edo ar brizonerien o treuzi kær evit mont d'ar prison. Ar rederien ruiou a iea var ho lerc'h hag a gane pouil dezho. « Setu aze, emezho, beleg eur vanden laeron bennag! Ra vo great dezho oll evelse! » Va mignon Villani a iea didrous, pleguet he benn gantha, mes beac'h en doa o vale. Eur vaouez a veliz o poket da vanch he zoudanen, hag o lavaret eur beden en eur vont kuit.

Pa zeas ar jaden er prison e voue red chom eun nebent a za, rag ingroez a voa. Neuze ec'h ellis mont bete va mignon. Va anaout a reas, hag e lavaras din, mes beac'h en doa o coms: « Kemerit sourci eus va mindredigou. » Eur c'hoar en deus ha ne deo nemet deg vloaz hag eur breur hane deo nemet pevar bloaz, ha n'o doa nemethan da rei ti ha bara dezho. A veac'h en doa bet amzer da lavaret ar goms-ze din, ma voue bountet er prison evel ar re all.

Rom. — Ar zoudardet lakeat gant Bro-C'hall e servich ar Pap a zo digouezet ar pemzeg a vengolo e Civita-Vecchia, hag hirio e maint e Rom eleac'h ma zeus great dezho eun diguemer ar c'haera. Ho iec'het a zo cre. Lavaret a rer ez eus relijion vad en ho zouez. Cals eus an ofiserien hag eus ar soudardet so falvezet dezho tostet oc'h ar zacramanchou, araog diblas, an deis ma kuiteant Antib.

En Itali ez eus maro, a nevez so, daou eus an dispac'herien en em zavet a enep vikel Jesus-Christ. An daou zen-ma a voa a lignez huel. O velet ar maro tost dezho, eo falvezet dezho distrei oc'h Doue ha beza pardonet gant an ilis. Goulennet o deus eta pardon digant an iliz, digant Doue ha digant an dud, eus an dispac'h o devoa great hag eus ar goal skuer o devoa roet. Lavaret o deus d'ho c'herent dioual da ober evelldho, ha caout ar vadelez da bidi ha da lacat pidi evit ma plijo gant Doue beza trugarezus e kenver ho ene.

Evelse, eme ar gazeten *Le Monde*, an dispac'h gant he oll gownnar, ne all ket dont abenn da zise'hrizien na feiz eus a galonou tud an Itali. E Veron, ar re a ioa digasset di goude beza bet goullet e Custozza, o deus roet d'an tadou a Gompagnenez Jesus ha da veleien kær, testeniu ar re gaera eus ho feiz hag eus ho c'harantez evit an ilis santel. Ar zoudardet-ze a zougue oll couls lavaret ar scapular, pe o devoa en ho c'herc'hen eur groas pe unan a vedalennou ar Verc'hez. Kerkent ha ma vezent taolet var eur guele, an dud goulet-ze kenta tra a reant oa goulou eur beleg, ha ne felle dezho e teuje ar medecin var ho zro nemet goude. Mar teue eun den difeiz bennag da glasc ho distrei dioc'h Doue ha da goms dezho a draou all, e veze guelet an dud keiz-ze, dare da vervel, o sevel en ho c'houazez, o rei ho mallos d'an dispac'h a goll ho bro guer, o c'houlou cre beza lezet da vervel evel christenien, o pidi Doue da rei he vennoz da Rom ha da asten he drugarez var an Itali.

Pebez kenteliou, eme eun Tad jesuist, roet gant soudardet keiz, gant tud paour divar ar meaz, d'an dispac'herien counnaret-se pere a gred n'eus den evitho, hag e tle ar bed oll plega dezho!

Caout a rer ato bep en amzer bugale vad, bugale hag a ra enor d'ho zud dre ho honestiz ha dre ar boan a guemeront evit diskuez dezho ho c'harantez, zoken goude ho maro.

E kær Dijon, eur marc'hadour braz en em gavas er berrentez. Al lez varn a zisclerias e voa red dezhan ober

an dilez eus ar peza jome gantha etre daouarn ar re ma voa dileour dezho, hag ar re-ma, goude ranna, n'o devoe nemet eul lodennic eus ar peza dlient da gaout.

Gouscoude an oll a estime ar marc'hadour. Den n'her blame. Oll hen anaie evit eun den mad hag honest. Oll e c'houlent penaus, mar doa eut ar stal da stalc'h gantha, ar penn abeg a guementse a voa he c'hreg pehini ne devoa ket a zescadurez hag a veze tromplet aliez o prena hag o verza.

Map ar marc'hadour o velet ne jome netra gantha, a ieas da Paris, hag en em lakeas e servich eur marc'hadour eus ar guær-ze. He vestr o velet en doa skiant hag e voa aketus d'al labour, hen lekeas e penn eun ti endevoa e kær Amien. Sonch an den jaouanc e voa paea oll dle he dad. Var bonez poania, espern, dioueret, e lezas he gomananchou epad pemzeg vloaz etre daouarn he vestr. Abenn ar pemzeg vloaz e c'houlennas ar peza voa dleet dezhan.

He gomananchou gant al leze divarnezho a zave da bemp mil lur varnugent. Roet ouent dezhan, ha neuze ar map mad-ma a baeas kement hini ma voa he dad dileour dezho. Rei a reas dezho zoken al leze a deue dezho divar an arc'hant a dlle dezho ar marc'hadour.

An tad, pehini a gavet divlam zoken pa dlle, brema pa zeo paet he zle, a c'houlou eus al lezvarn ma rento dezhan abenn he renou mad, ha setu petra ro tro deomp da goms eus a vadelez hag a ners-calou ar map-ze pehini a verit a dra sur e rafé an oll he veuleudi.

Guelet a reomp ama ivez penaus eun tad christen eun tad a zoujaus Doue, eun tad hag a zao mad he vugale, mar diguez ganthan dre eun darvoud bennag coeze en dienez, Doue a deo d'hen die'haou aliez o rei dezhan bugale pere a deo da laouenaat he goms ha da ober dezhan ancounac'haat ar poaniou hag an anken en deus bet da c'houzaon. Rag petra bennag he lavar netra var guementse ar pennad scrif a behini em eus tenet kement-ma, n'em eus douet ebet na doa ar map ma em eus comzet anezhan, bet savet gant eun tad christen, n'em eus douet ebet na doa christen mad he-unan.

En eur gazeten evit an dud a vor e lennomp ar pennad-ma: « Vardro fin ar bloas 1703, enez Groa pe Groac'h, en escopti Guened, a voue tost dezhi beza kemeret gant ar Zaozon. An amiral Boke a denas, gant eur vanden listri, ha seis mil soudard, da glasc he c'homeret dre nerz. Nebent a dud a voa en enez, ha dreist oll nebent a voazet. Ne vije ket bet dix d'ar Zaozon beza mistri. Person an enez, dre eun taol ijin, a viras outho da zouara.

Evel na voa neuze cabiten ebet eno, ar person a reas d'an dud pignat var guern an enez merc'hed ha gozet, merc'hed coz ha p'ac'het jaouanc. Ho lacat a reas a reng, evel cavaliri; hag evel n'oa ket avoalc'h a guezeg, ho lakeas da zavel var guern ejennet ha var guern saout. Ar merc'hed, pep a vaz hir gantho var ho scoaz, bonedou ruz var ho fenn ha corfou sae ruz endro dezho a vije kemeret a bell evit guir varc'heien.

An amiral saoz ho c'hemeras evit guir soudardet, ha ne gredas ket disken he dud er bagou bihan evit ho c'has d'an douar. Mont a rejont kuit ep ober droug d'an enez.

Pa vouezas kementse, ar Roue a Frans Lois Pevarzec, a roas da berson enez Groa pemp cant lur er bloaz hed he vuez, hag a c'hourc'hemennas, pa na vije ket a ofiserien en enez, ma vije ar person cabiten var an oll soudardet a vije enhi.

G. M.

AR ZUL.

Bretoned, ma c'henvroiz ker, c'hoant em beuz da lavaret d'eoc'h eun dra bennag war ar zùl, anvet deiz an Aotrou Doue. Anvet eo evel-se, abalamour Doue en devez miret an deis-se evit-ha, evid beza servichet, d'an deis-se, gan an dud, he vugale, en eur feson (1) spesial.

Beteg-hen ar Vretoned a zo bet kre da viret mad ar zùl, da zantifia an deis-se ec'hiz ma eo dlêet. Mes aon em beuz ne teuffent ive da lauskaat war ar poent-ze, o velet kemment a skueryou fall evel ma velont. Pautred Bro-c'hall a zeu brema stank en on touez gad an êchou houarn : hogen, (2) autred Bro-C'hall, eun darn vraz anezo, n'o devez nemeur a respet evit ar zùl ha ne vironent nemeur an deiz santel-ze.

Evid ho krevaat eta, ma c'henvroiz ker, a eneb ar goall skuer roet d'eoc'h gad an dud difeiz ha dizoue, e zaan mar plij gad an Aotrou Doue, da barlant d'eoc'h euz ar zùl, en eun neubend pennadou skrid, da gomz d'eoc'h euz an dever striz a zo evidom oll da viret, da zantifia an deiz benniget-se evel ma eo merket d'eom gan Doue he-unan, er skritur zakr, ha gan or Mam zantel an Iliz katolik. Feiz ha Breiz a gaso d'eoc'h ma c'hentelyou, disterig enho ho-unan, mes euz eur galon e teuint ag a garfe ober vad d'eoc'h.

Evid guir, deja ez euz bet komzet d'eoc'h, er gazetenn vian, euz a zeiz ar Aotrou Doue; mes an eil na vir ket egile : morse ne ouffet lavaret re a draou mad war an deiz braz ha santel-ze.

Arañg mont pelloc'h, klevit ha skrift don ar viryonez-ma en ho spered ag en ho kalon : mar talc'hit mad, Bretoned, ma c'henvroiz ker, mar talc'hit mad d'ar zùl, c'hui a zalc'ho mad d'ho feiz, d'ar relijion zantel katolik, ag a jommo eunan euz ar c'henta poblou euz ar bed kristen, evel ma ez oc'h bet beteg-hen. Mes mar teuit, o kemmer skuer war bautred al laeou pe Bro-C'hall ha zoken war darn euz a geriz Breiz-lzel, gan anken ha mez hen lavaran, mar teuit da lezel ar zùl da goueza en ho touez, da lavared eo, ma en em lakeit, evel an dud dizoue, da labourat da zùl ha da jom eb mont d'an ofisou, ar feiz a zo soudan maro en

(1) Prononsit an *s* atao kaled, ec'hiz ma vez *g*, ha morse ec'hiz *z*. Ne lakain ket *s* evid *z*, na *z* evid *s*.

(2) Prononsit ar *g* dirag *e*, *i* ec'hiz ma prononsit anezhi dirag *a*, *o*, *u*. Ne lakain morse *g* evit talout *j*.

ho touez, ar Relijion gatolik a gouez ag ar Vretoned a zistro ardarre da bayaned evel ma voa guechall ho zudou koz. Ar pec'hejou, an dizurzou, ar fallagriezou a beb sort, pere a zizhenore ar bayaned, a zeu kerkent d'en em skigna en on touez, da veuzi or bro gaer Breiz-lzel, bet guechall ken kristen.

Komzom eta euz ar zùl ha na heanom da gomz euz aneza kent na vezo an oll gristenyen a Vreiz-lzel, pere a lenn pe a glev lenn *Feiz ha Breiz*, desket mad war gemment a zell ouz an deiz santel-ze ag evelse armet mad a eneb ar goall skuer, kent n'o devezo ho spered ag ho c'halon leun a respet, a istim ag a garantez evid deiz an Aotrou Doue ag ho holontez troet a-zevri da viret aneza mad, o lezel a gostez al labourou difennet, o vont eb mank d'an ofisou santel ag o klevout anezo gan guir devoision.

Ha te, kazetenn vian, divoanet er gær-benn euz an Eskopti, e harz treid on Eskop mad ha karet, en eun douaren vad, er goare a beb avel fall, te a yalo beb sùl da gas komzennou dister an difeiz euz a vugale Breiz-lzel d'he vreudeur muia karet. Te a lavaro d'ezo penauz Doue, euz a lein an Nenvou, a zalc'h bepred he zaoulagad paret war-n-ezo ag a vel mad ar stad evel an dispri a reont euz he c'hourc'hemennou. Te a lavaro d'ezo penauz, oc'h ho miret, e reont plijadur d'ho C'hrouer, d'ar guella euz an oll dadou, e tennont war-n-ezo, er bed-ma, he vennozyou, he c'hrasou, he vadoberou a bep sort, ag e c'hounezont he varadoz, e-lec'h oc'h ho zorri, e poanyont aneza ag hen forsont d'ho skoi euz he voalennou ag er bed-ma ag er bed-all.

Y.-K. KERZALE, beleg ar Zalet.

Annaik hag ar Soudard koz.

Eur soudard bleo gwenn, nemet koz dillad fall var he dro, a oe dalc'het eun eunn taol gant eur bar klenved. N'oa mui evit mont pelloc'h enn he hent hag e rankaz mont da gousket e galatrez eunn ti a ioa harp aze; ti eur c'here paour e oa.

Annaik, merc'h ar c'here paour, a iea bemdez da welet anezhan hag a roe d'ezhan eur gwennek pe zaou pa veze.

Eunn deiz ar soudard koz a lavaraz d'ezhi : klevet em euz, va merc'hik, ez oa da dad hep danvez e-bed; lavar d'in eta a beleac'h e teu ann arc'hant-man did? Gwell e ve gan-en, jarnigoa, mervel gant ann naoun eget kaout eur pez arc'hant mar teufe da zavel rebech em c'haloun. — Arabad kaout aoun, eme Annaik, va arc'hant a zo leal, a c'hallit kredi. Diwar sav ar skol, bemdez ez ann da zastum sivi dre ar c'hoat da zigas anezho d'ann aotrou persoun, den mad-meurbed. Ac'hano e teu va arc'hant, na petra ta! Va zad a oar kement-se hag ebat eo gant-han gwelet ac'hanoun oc'h ober evel-se. Aliez e lavar d'in : kalz a dud a zo berr ar peuri gant-ho enn tu all d'e-omp, rak-se ned-eo ket arabad e rafemp vad dezho muia ma c'hallomp.

Ar soudard koz, dre zec'hi he zaelou, a lavaraz d'ar merc'hik : Annaik, bennoz Doue gan-ez; Doue r'hen talvezo d'id ha d'as tud ivez.

Rei d'ar paour aluzenn aliez
Ne ziverrez biskoaz an danvez.

A. TROUDE.

Tennet euz a Vignoun ar vugale.

BUEZ AR PLAC'H DEVOT ARMELA.

(Eizvet pennad).

Ar sclerijen a deue d'ez-hi euz an env, he lake da veza talvoudec braz d'ar re all. Alies e lenne ar pez a dremen en eneo, hag alies ive e cleve en he ene he-unan comzou dizanavezet d'ez-hi. Kemense a c'hoarveze gant-hi p'an divije c'hoant Doue d'he c'hass da gaout tud var ar poent da ober eun dra bennag ne vije ket mad da ober. Kement hini, couls lavared, hen divije an eur da barlant gant-hi, a gave en he c'homzou eur frealzidiguez pe eur gonsolasion vras evid an ene. En he c'homsou c'hoas, ervez m'a c'houzont aneb o deuz comzed ganthi, e caved sclerijen evid an unan hag evid ar re all. He c'homzou o doa kement a ners, m'a tiveient ar sperejou ar muia sammet. Beza e doa dreist oll eun ners burzodus evit distaga an eneo euz a draou an douar hag ho douguen d'an env. Ho lacad a rea da gaout eur fisians vras en drugarez a Zoue. Evel-se ar sperejou encrejus carguet gant re a aon rak barnediguz an Aotrou Doue a gave en he c'homzou eul louzou evit parea ho oll foanniou. Ne roimp nemed eun exempl : Eun den a ligned hiel euz ar gær a Vened, goude beza bet cals madou, a deuas d'ez-han coll he oll danvez. Kement e voue margaloned dre ar c'holl-se, m'a couzas claon bras : dont a reas da veza ken toc'hor, ma ne roe dezhan ar vidisined nemed peder-heur var n'uguent da veza. Dont a reas neuse en-han he-unan, hag o teleur he zaoulagad var ar vuez fall hen doa renet etre m'edo pinvidic, e teu da grena dirag barnidiguez an Aotrou Doue prest da zisplega varn'han, eun disesper ar vrassa a n'em zile nebeud-a nebeud en he ene. He zaoulagad a ioa, couls lavared prennet gant tevalijen ar maro. Mez, oh! burzud! ober a ra clask da zont d'he veled ar servicheurez santel Armela. Diguemened e oue kement-man d'ez-hi epad an noz : Mez dre ma ne rea morse netra eb kuzul he mistri ha dre ar re man a ioa cousket er mare-se, e teuas da veza nec'het bras. Abars ar fin e clevez en he c'halon eur vouez hag a lavare d'ez-hi mont araok evid ober an ober-se a drugarez. Mont a reas da di an den claon hen doa nevez bed he sacramanchou diveza. Evel ma he guelas, an den clàn a ezeteas d'ezhan. Laouennad a reas evel eun all en he leac'h; he spered a habaskeas. Ober a reas d'a Armela azeza e kichen he vele, hag e lavaraz d'ez-hi ar pez a bike he galon. Goude beza her sillaouet piz, Armela, a lavaraz d'ez-han lacad he fisians ar vrassa e Doue. An den claon a n'em gavas var an heur diboannied a spered, hag a lavaraz d'ez-hi e varvje breman laouen bras! « Nan,

« emez-hi, d'an den claon, ne varved ket, evid an « dro-man; sevel a reffet euz he klenved. » Setu ar pez a c'hoarvezas; ar c'hanvour a bareas, hag a vezas c'hoas eun tachad mad goude. Armela ne doa morse cozeet gand an dijentil se araok he klenved; ne reas ket muioc'h da c'houde. petra bennag ma en em gavas gant-han meur a veac'h; ha pa c'houlenet digant-hi perac e rea kement-se, e lavare : « Pa deu Doue d'hor « guervel, e rencomp plega; Mez a hent all e (comp en « em zerc'hel kuzet, hag ne zere ket d'eur servicheurez « e guis dime, mont da gomz euz tud a ligned ken huel « evel an Aotrou-se. »

He fedennou a zistroe alies divar an hent fall, ar bec'herrien ar muia caledet. Eun den iaouanc, a ligned hiel, a rea cals poan spered d'he dud dre he oual-vuez. Ar rema er pedas meur a veac'h da jench buez; mez o veled ho c'homzou o veza ato vean, e casjont anezhan e meas ho'zi. An den iaouanc neuse a n'em roas d'an drouk goassoc'h eguet biscoas. Mont a reas da chom da eun ti en deoa, hag eno e rene ar vuez ar falla ken dre he bec'hejou ken dre ar skuer fall a roe d'an holl. Eur vouereb d'ezhan, itroun leun a vertus hag a santelez, a erbedas anezhan da Zoue. Eun deiz e teuas en he spered eur c'hoant vras da bedi Armela da ober eur gommunion bennac evid distrei an den iaouanc-se eus he zisurjou. He fedi a reas c'hoas da vont evit-han e pechirindet pe e pelerinach da Itroun Varia ar Mene. An iliz-se a so e kær Guened. A veac'h Armela e doa great eun navet evid ar pec'heur bras-man, m'a teu d'ez-han mont dre zarvoud e Abbati Sant Meen, gouerned gand missionnerien Sant Lazar. Aveli ar map-prodic ez oar o lenn en oferen, a zigoras he zaoulagad var he stad truezus. He galon a oue ken glac'hared, m'a c'houlenas comz gand unan eus an tadou missionnerien, evit covez he bec'hejou. Tremen a reas eno eun nebeud d'evicheuret, hag e kemeras an herder stard da chenj buez. Er memes amzer, dre Aotrou Doue, ar plac'h e doa bet pers en he bec'hejou a gouzas claon bras, ha mervel a reas memes, goude beza bet couscoude an eur da vellec'hi he ene euz ar fank e deoa he sclabezet.

Carantez Armela a vije goueled oc'h ober vad ouспен d'an eneo; he diskuil a rea c'hoas var ar c'horf. Ne dall ket ar boan parlant euz he c'harantez e kever he mistri hag he mestrezed, nag e kever ho bugale pa vijent clanv. Ober a reas d'ez-ho guella m'a c'helle. Unan euz ar vugale dreist-oll, en eur c'hlenved hir a reas, a vugas he habascdet pen-da-ben. He dever oa beza mad e kever an dud-se; mez he madelez dreist-vuzul a reas d'ez-hi mont cals en tu-all d'ar pez a ioa red dez-hi da ober. Rag, n'eo ket ebken d'he mistri e roe da anaout he c'harantez, mez ive d'an dud estren, dreist oll d'an dud claon ha d'ar beorrien mezus.

Brezel etre eur Manac'h hag ar c'hoant
cousket.

En eur gouent chartreuzet ez oa, brema ez eus eur pennad amzer, eul lean pe eur manac'h hag a gouske

ker c'houek, hag en devoa eur c'housket ker pounner, ma ne alle ket sevel d'ar mare ma voa gourc'hemennet hen ober dre an urs. E tiez ar chartreuzet e saver da unneg heur noz da lavaret an ofis. Hogueu ar manac'h ma ne gleve morse an heur, hag en em gawe ato divezad.

Mar d'oa eur goal gousker, oa ive eun den dornet mad, eun den ijinus meurbet. Ep beza studiet nemeur ar skianchou, e savas da veza eun izinier eus ar re guenta. Ober a reas eun horolach, hag enhi eur strakel, pe mar kirit, eun *dihun-mintin* hag a rea eun trouz garo ha skiltrus, guest da lacat an dent da scrignal. D'an taol a unneg heur, ar strakel a rea eun abaden, hag ar manac'h a voue dihunet eur guechou bennag.

Mes abenn eun nebeut derveziou ne rea mui van evit ar strakel, hag e-couske evel kent. Neuze e lakeas oc'h he horolach eur goucou, eur voualc'h, hag eun daboulin pere a rea oll eun talabao guest da lacat re varo da zével. Mad, kementse ne zihunas ar manac'h nemet adarre eun dervez bennag. Ne voue ket pell na voa adarre boazet dioc'h ar safar-ze. Unneg heur a zone, ar strakel a skrigne, ar goucou a gane, ar voualc'h a sute, an taboulin a groze, hag... ar manac'h a roc'he, hag... an diaoul a c'hoarze o velet ar c'housket o rei ato lam d'ar manac'h.

Ar manac'h gouscoude a lavare outhan he unan : « Ne da ket mad an traoù evelse. Me renco guelet piou a vezo trec'h. » Setu hen oc'h ijina ober eun aer pe eur zarpant pehiui, pa scoe unneg heur, a astenne he fenn bete scouarn ar c'housker, en eur c'huitellat, hag o lavaret dezhan : sao-ta ! sao-ta buhan !

En dro-ma ar manac'h a veze dihunet crenn bep tro, ha cridi a rea e voa iviziken ar gounit gantha. Mes anaout a reas neuze ive ne voa ket epken cousker, e voa ive diegus. Evithan da veza dihunet, ne zave ket trum avoalc'h. Chom a rea evel da c'hoari oc'h ar c'housket, da zigueri eul lagad, da asten eur vrac'h, eur c'har ; en eur guer, guelet a rea edo an diegui hag ar c'housket a unan ho daou o stourm outhan ; hag evit beza trec'h et unan, n'oa ket dare dezhan c'hoas samma ar maout oc'h he guein.

Nec'hetoc'h evit biscoaz, en em lakeas adarre da ijihat eun dra bennag. Staga a ra eur planken teo ha pounner a zioc'h ar penn izela eus he vele. Ar plankenze, dalc'het var bouez eur gorden a ioa ar penn anezhi stag oc'h an horolach, a goeze var zivesker ar c'housker abenn deg taol momeder goude ma vije bet an aer oc'h ober he c'huitelladen e kichen scouarn ar manac'h.

Mad ez eas ar stal eun derveziou bennag ; ar manac'h a veze var zao d'an taol. Mes cridi a rafac'h ? Abenn eun nebeut e veze guelet aliez o chilgamat pa deue eus he doul cambr ; cribel he zivesker ribinset ha bronduet, ha biziet he dreit gloazet ; ar planken a voa coezet varnezho. Lavaret a rer zoken e devoa avechou an diegui nerz avoalc'h evit he lacat da gamma he zivesker ha d'ho zacha gantha evit miret na goesche ar planken varnezho.

Neuze ar manac'h a lavaras adarre : n'eus ket da varc'hata ; treac'h e rencan beza. Lacat a ra eur gorden oc'h he horolach. Eur penn eus ar gorden-ze a droe var eun ael, hag ar manac'h a scoulme ar penn all bemnoz oc'h he vrac'h en eur en em lacat en he vele. Pa zone unneg heur, an ael a droe, ar gorden a zache, hag araog ma yeze sonet an taol diveza eus an heur, e veze ar c'housker disclapet var leuren ar gambr.

Setu e pe gont edo ar manac'h gant ar c'housket pa deuas ar maro dezhan. Pa voa dare da vervel, e lavaras laouen : « Mont a ran brema da zihuna evit mad ! » Hag e guirionez, credabl eo en devezo bet Doue truez outhan o velet pegument a boan en doa kemeret evit trec'h ar c'hoant cousket hag an diegui.

(Tennet eus a scridou Lois VEUILLOT.) G. M.

Lizerou eur Boelec iaouank d'he zaou Vreur.

Trede lizer : D'AR MEMEZ HINI.

O derveziou kaer meurbet e pere e meuz lavaret va offeren guenta em farrez. Pegument a lid a zo bet gret din ha da va c'henvreur Iann-Mari. Kement a joa em euz da veza boelec, ma n'em gavan eüruz meurbet. Dissul em euz bet an eur da brezeg var ar beleguiac'h. N'em euz ket bet ezom da studia kals evit-se. N'em boa netra da ober nemet diskuez dirag an oll ar pez a zo em c'haloun ; ha pa n'em mije ket gouet prezeg em mije gouezet atao parlant kaer ha froez var ar poent-ze.

Goulen a rez diganeen penaoz a implijan va amzer, ne-hellan ket atao chom da studia rag ez oun galvet da vont da velout tud clan var ar meaz. Ha setu neuze diranket va stall. Bemdez a zavan da bemp heur, nemet beza emefe an offeren guenta da lavarout ; neuze a renkan sevel kentoc'h. Mar gellan en ober, lenn a ran ar skritur sakr, diouz ar mintin hervez ma hermet din ar covessionou. Rag er barrez-man euz kalz a dud o kovez bemdez ; hag euz bet lavaret din ne oa chomet nemet tri heb ober ho fask ar bloaz-man. Evelse, va breur, aman e renker sonjal da santifa an dud, rag evit ho c'honvertissa neuz ket ezom. Peguen santel na dlean me ket eta beza va unan evit beza gouest goude da zantifa ar re all.

C'hoant ar zantelez a gavan em c'haloun ha see'het braz em euz euz silvidigues an eneou. Goude kresde, pa ve possubl ezan da velet ar veleyen euz ar barreziou var dro. Rag ne gavan netra evit laouennaat va c'haloun ha va speret evel kompagnunez va c'henvreudeur. Labourat a ran kals pa joman er guer ; kals sourci a guemeran pa dlean ober eur brezeguen bennag d'ar bobl ; hag a zeskan ivez al latin da zaou baotrik euz ar barrez. C'hoant em euz da ober d'ar re all kaout ar memez eürusdet ganeen. Doue ra vezo meulet gant an oll ha ganeomp-ni dreist oll *** A. M.

Pevare lizer : D'HE VREUR HENA.

Cetu tremenet goueliou Nédélec ; cetu an deveziou e-kever pere em boa recevet an urzou a abostoler hag a avieler ; hag epad pere e lakan va foan evit trugarekaat Doue euz graçou ker braz ha ker precius. Ar sizun tremenet oun bet dihunet da hanter-noz evit mont da velout eun den clan ; noz-du oa, glao a ree, hag em euz kollet va hent ; ar pez en deuz gret din beza eun heur muioc'h dindan ar glao. Peurvuia ez euz kals tud klan d'an diskar amzer. An dud koz a gouez evel an deliou melenet euz ar guë. Ar goan kriz a zigass gantan ar c'hlenvejou. Bem euz bet an eur da zigass an Aotrou Doue d'an dud klan, hag em euz guelet eur respet hag eun doujans braz evit sakramant an aoter. Gant pebez hast a zaoulin var an henchou an dud divar ar meaz, dirag ar mestr mad pehini a zisken divar he dron evit dont en ty plouz da gonsoli he grouadur ankenniet. ***

P. S. — Eur bloavez mad a reketan did euz a greiz va c'halon, d'ar Frans ha da ta soudardet. Sonch am euz penaoz pa oan buguel em euz bet c'hoant braz da velout eur speret eüruz bennag evit goulen digantan tri zra evit va c'halannat : da guenta, ar c'hras da veza boelec, d'an eil eur vuhez hir hag eüruz da va zad ha da va mam ; d'an drede ar baradoz evit an oll dud. Allaz re a c'houlennen ! Ha n'em euz ket bet morse an eur-vad da velout speret ebet, na mad, na fail, nag oel, na teuz, na lutin. Koulskoude eun dra m'euz bet euz an tri reket-ze : me a zo boelec dre c'hras Doue ; hag a ellan lavarout gant guirionez : va c'haloun a zo kontant, ne glaskan ket ar pez a velan var an douar, ne c'hoantean nemet eur maro mad hag ar c'hras da servicha an Aotrou Doue er stad santel-man. Ha peguen eüruz en em gavan da veza da Zoue, da veza he zen, he vinistr ! O Jesus, o va muia karet ! ! *** A. M.

Hano ar Zent evit ar Sizun-ma.

DILLUN, 15 here. — Santez Thereza, guere'hez.
DIMEURS, 16. — Sant Conogan, escop.
DIMERC'HER, 17. — Santez Hedwije, intanvez.
DIZIQU, 18. — Sant Lucas, avieler.
DIRGUENER, 19. Sant Per Alcantara.
DISSADORN, 20. — Sant Ian Canti.
DISSUL, 21. — Eil sul varnugent goude Pantecost.
Purete ar Verc'hez glorius Vari.

Aiel ar zut :

Ar Pharizianet en em glevas etrezho evit clase an dro da gaout abeg e Jesus en he gomzou. Cass a rejont eta d'he gaout ho diskibien ha diskibien Herodez evit lavaret dezhan : Mestr, gouzout a reomp ez oc'h guirion, hag e teskit e guirionez hent Doue, ep sellet oc'h den, ep sellet petra eo ar re ma comzit outho ; lavarit deomp eta petra sonjit eus a guement-ma ; ha mad eo deomp ni paea ar guir da Cezar, pe chom ep he baea ? Jesus oc'h anaout ho drouguiez, a lavaras dezho :

ipocritet, perage claskit va amprou ? Diskuezit din ar pez arc'hant a roer evit ar guir. Diskuez a rejont dezhan eun diner.

Jesus a c'houlennas outho : skeuden piou so azellig ar gueriu so scrifet tro var dro ? — Skeuden Cezar eo, emend-hi. Jesus a lavaras dezho neuze : Rentit eta da Cezar ar pez a zo da Cezar, ha da Zoue ar pez a zo da Zoue. (SANT VAZE. XXII, 15.) G. M.

KELEIER.

An 20 a viz here, Retred brezoneg evit ar merc'hed, e Kemperle.

An Aotrou Gueguen, beleg e Castel, so maro en derveziou tremenet.

Divezad en em gavan evit rei hanoioù ar Jureet. Eiz dez kentoc'h em oa ho scrifet. Gonscoude evel ma zeus lod hag ho goulen, e lakan ama ho hano.

Hanoioù ar Jureet a so hanvet da zont d'al Lez-Varn da Guemper ar 15 a viz here 1866.

- An Aotronez ;
- Lois-Stefan Grandseignes-d'Hautrives, eus a Bont'nAbat ;
- Jul-Visant Bazin, eus a Landerne ;
- Hiacint Lemoine, eus a Guertouan ;
- Charles-Mari Morio, eus a Bloudalmeze ;
- Herri Cathelineau, eus a Scaer ;
- Ernest Bourban, eus e Vrest ;
- Alfons Bagot, eus a Roscoff ;
- Marcel Brousmithe, eus a Vrest ;
- Eozen Coat, eus a Vontroulez ;
- Joseph-Renan Gueguen, eus ar C'hastel Nevez ;
- Per-Lois Tinevez, eus a Lesneven ;
- Lois Couturier, eus a Gastel-Paol ;
- Paul Philip, eus an Enez-Vaz ;
- Charles-Kerguziau de Kervasdoue, eus a Loc-Maria ;
- Per Plassart, eus a Vertien ;
- Mauris Grandjean, eus a Landerne ;
- Sebastian More, eus a Rosnoen ;
- Lois-Charles Allain, eus a Bont'nAbat ;
- Paul-Armand Mauffras du Chatelier, eus a Bont'nAbat ;
- Francez ar Boul'h, eus a Serignac ;
- Napoleon Lescop, eus a Lesneven ;
- Ian-Vadezour Charles Kerliezec-Royou, eus a Sant-Evarzec ;
- Visant Lemoine, eus a Guerbaes ;
- Lois-Jul Halleguen, eus a Vrest ;
- Lois ar Bihan, eus a Vrest ;
- Clauda-Theodor Kermarrec, eus a Roscanvel ;
- Ferdinand-Alexis Brichet, eus a Vrest ;
- Emil Dubois, eus a Lambezellec ;
- Ian-Vadezour Jouanne, eus a Vrest ;
- Lois-Olier-Mari Coue, eus a Landerne ;
- Bertele Kerros, eus a Vrest ;

Alphons Bourhis, eus a Hospital-Camfrout ; Lois ar Mat, eus a Scignac ; Paul de Parscau, eus a Garantec ; Hippolit Mace, eus a Castel-Paul ; Faustin Rigollet, eus a Gonc-Leon ;

Evit derc'hel leac'h ar re a vancfe : An Aotronez Arsen Affichard, Paul-Emil Rojare, Justin Allard, ha Ian-Guillou Bolloré, ho fevar eus a Guemper.

CASTELLIN.— Hirio a leverer, eo digor al labourou hed ha hed var an hent houarn etre Castellin ha Landerne. Var ar pevar bez labour caer so da ober er pennad hent-ze, tri so a vrema savet mad. An doug-hent (viaduc), pe ar pont a rer var ster Castellin, a vezo savet he volziou oll abenn fin ar bloa-ma. An doug-hent-ze en deus mil unneg ha triuguent troatad hed, ha cant antercant troatad huedet. Lavaret a eller ar memes tra eus an doug-hent pe bont savet var an Doufin hag en deus a hed c'huec'h cant c'huec'h ha triuguent troatad, hag a huedet c'huec'h ugent troatad. An toul en douar great dindan Neiz-vran en deus daouzec cant deg ha pevar-ugent troatad, hag a zo bolzet oll hed-ha-hed. Doug-hent pe bont Daoulaz, en devezo ive mil unneg ha triuguent troatad hed ha pevarzec troatad ha cant a huedet. Var henez ez eus c'hoas cals labourou da ober, mes esper a zo e vezint echu abenn anter ar bloaz a zeu.

Cridi a rer eta e vezo gallet beachi dre ar pennad hent-ze abenn fin ar bloas 1867. G. M.

Ar glaeier a so bet e mis guengolo o deus great cals distruch e meur a garter e Frans. Ar steriou bras so bet savet ken huel an dour enho ma ne alle mui ar bagou mont dreizho ep beza var var da veza beuzet. Cals douarou so bet goloet gant an dour beuz. An hentchou houarn so bet freuzet e lec'hiennou, hag ar c'hirri tan so bet red dezho chom ep ober ho zervich. An hentchou all so bet ive caniet ha freuzet e meur a leac'h. Er c'heriou a so a dost d'ar steriou ez eus bet tiez carguet a zour, hag hiniennou zoken zo bet discaret. N'em eus ket izom da lavaret ez eus bet ive pontchou torret gant an dour. Ne leverer ket gouscoude e ve digouezet goaleuriou bras nag o defe collet tud ho buez. Mes an dour beuz a jom pell, ar glaeier a zalc'h ato, ha cals tud so nec'het. Guelet a rer dre eno eo chenchet an amzeriou, rag ar mare-ma eus ar bloaz eo peurvuia mare an dour ber. Pa vez bet sec'hor ha tomder epad an han evel ma zoar boas da gaout, eo e miz here en em gaf an douar da veza sec'ha, hag an eienennou da veza berra.

Gazeten ar Meziou a lavar : Esper a ioa e vije digollet an edou abred pere a voa tano, dre an edou diveza pere a ellet esperout a vije mad. Mes ar goal amzer, ar glaeier a vir na eller ho destum. An ed du a deu da vra-guezi, da guillida. An avalou douar a vrein. Ar rejin, pere a voa caer, ne roint ket kement ha ma sonjet ; ne zarevont ket avoalc'h.

Ar frouez e griziou, evel ar heterabaz, panez, etc, so

mad ha cals anezho. Avalou guez so ive a verniou hag e vezo chist aleiz.

Ar bouet chatal a vezo cre. Antieien a dilese eta en em deleur da zével loenet. Dre eno ec'h allint en em denna. Rag al loenet ne falla ket varnezho, pell dioc'h eno. N'eus ket ken nebeut a loenet avoalc'h e Frans dioc'h an izom zo. Cals a so ha ne gredont ket kementse. Bez' ez eus zoken carteriou pell dioc'h ar c'hæriou braz ha dioc'h an hentchou houarn eleac'h ma zeo diaz en em zizoker eus ar chatal, eleac'h ma zeo diaz caout guers dezho, ha neuze an tieien a lavar n'o deus ket muioc'h a c'hounit dioc'h al loenet evit dioc'h an ed. Guelet a dilefent gouscoude ez a an diazant-ze kuit dre ma c'hoessa e pep leac'h cass ha digass loenet ha mare'ha-dourez eus an cil carter d'eguile.

Ar frouez e griziou a vezo poan oc'h ho zenna hag oc'h ho destum seac'h avoalc'h evit ma chomint mad. Evit an avalou douar eo ar memes tra. Ne jomint ket mad ma na ve ket deut piz anezho an dour glao a allont da veza efet.

Lavaret a reomp adarre ar pez on eus bet lavaret c'hoas kentoc'h, penaus ar pez a ve guella da ober, ma na ve ket a heol hag a zec'hor avoalc'h evit ho zec'ha, e ve ho zouba e læz raz, da lavaret eo, e raz distrempet ken tano ha læz.

Ar c'hoalen so ive mad evit miret an oll boujou chatal. Cridi a reomp penaus ma ve soubet e dour sall, mes sall braz, ar panez, irvin, carotez, heterabaz, etc, dre ma vent tennet, e ve miret outho da vreina, hag al loenet n'ho deprent nemet guelloc'h aze.

An ed so eat var gueraat epad ar sizun dremenet e Frans, e Bro-Zaoz, en Alemagn hag e Beljic. Nemet ar Russi hag ar Pologn o defe cals ed da zioueret, ar pez ne ouzeur ket, an ed ne oute ket mankout da jom ker. Kementse so tennet eus a Gazeten ar Meziou. Hognen er c'harter-ma n'en em glemer ket eus ar guinis du. Clevet ez eus tud eus al leac'h ma c'hader muia ed da er vro-ma, o lavaret oa mad, hag evit beza n'oa ket bet a amzer gaer, n'oa ket gouscoude destumet fall.

Ar c'hazetennoù diveza a lavar e kendalc'h an doureier beuz, hag e reont cals droug e lec'hiennou. Guelet ez eus corfou maro tud ha chatal o ruilla gant dour ar steriou dirollet. En eur guer, braz eo ar guallou great gant an douriou dirollet. G. M.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 6 Here.	PONT'NABAT — 4 Here.
Priz ar c'hant tiour.	Priz an hectolit.
Guinis.... 13 lur, 38 c.	Guinis.... 19 lur, 89 c.
Segal..... 8 lur, 77 c.	Segal.... 12 lur, 13 c.
Eiz..... 7 lur, 64 c.	Eiz..... 10 lur, 03 c.
Ed-du.... 6 lur, 69 c.	Ed-du.... 10 lur, 49 c.
Kerc'h.... 8 lur, 60 c.	Kerc'h.... 9 lur, 00 c.
Avalou-douar 3 lur, 50 c.	Avalou-douar 3 lur, 90 c.

Ar Gerant : AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand AR. DE KERANGAL, Mouler an Escopti.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezoune.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten à goust :

Evit eur bloas.....	DAOU SCOUET.
Evit c'huec'h miz.....	EUR SCOUET.
Evit tri miz.....	C'HUEC'H REAL.
Eur gazeten ebken.....	DAOU VENNEG.

Ar bacamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Belec e Kemper.

Ar paeamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, libret, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 20 Here 1866.

Bez'ez eus, evel ma on eus he lavaret avechou, scri-fagnerien difeiz ha dizoue pere ne allont ket gozaon ar re a heul mad ar relijion, ar re a ra ho gallout evit servicha mad an Aotrou Doue. Ar c'houdenhou dreist oll so en ho goulou. Setu ama, ervez ar gazeten *Le Monde*, eul loden eus ar pez a ra poan dezho.

Guelet ar re so carguet gant Doue da c'houarn an Iliz, da ziskuez d'ar gristenien hent an Env, an dra-ze a laca anezho e counnar.

Guelet leanezet, eleac'h dimezi ha sevel bugale dezho ho unan, oc'h en em lacat da zével bugale da re all, bugale dilezet, minoredigou paour, oc'h ho diorren, ho c'helen, ho maga hag ho guisca, kementse a ra dezho poan-galon vras.

Guelet c'hoarezet Sant Visant a Baul o kuitat ho zud evit mont er c'hlandiez (en hospitaliou) da guemeret soursi eus a dud clan ha ne anavezont ket, tud estren mac'haniel ha n'o deus den da zigueri dor dezho, soudardet gouliet pe lezet eun ezel bennag ganthio var dachen ar vrezel, kementse a ra donjer dezho hag ho laca da vreugueudi.

Guelet c'hoarezet vian ar beorien o rei ti da dud coz ha ne ellont mui na clasc na gounit, o vont ho unan da glasc evit an dud keiz-ze ; hag o kemeret anezho soursi evel pa vent ho bugale, an dra-ze a ra dezho strefial ha disvlevi ien.

Guelet menac'h, evel an Drapistet, o vont da chom etouez ar gueziri evit labourat douarou ous pere ne grede den tostaat ; ho guelet o tifonta, o tizec'ha an douarou-ze a bere an ezen fall a laz meur a hini anezho, hag oc'h ober douar mad, o lacat eost mad da zével eleac'h ne voa nemet brug ha laguinier ; ho guelet guisket disteroch evit ar re baoura var ar meaz ; ho guelet gouscoude o rei diguemer d'ann oll, o vaga hag o loja an oll dremenidi, an dra-ze a laca ar goentr da gregui er scri-fagnerien difeiz.

Guelet an Tadou a Gompagnonez Jesus, pe an Tadou eus eun urz-all benag, o tilezel ho bro, ho c'herent, ho mignonet, evit mont er broiou a bell da gas sclerijen ar feiz da dud gouez, da zeski dezho anaout Doue ha ren eur vnez christen : guelet an tadou-ze ho tremen ho buez o vont eus an eil keraden d'eben, alies red dezho en em guzet, dalc'h mad e danjer da veza lakat d'ar maro, ha kementse gant ar c'hoant epken da zavetei eun ene bennag, an dra-ze a ro an derzien velen d'ar scri-fagnerien dizoue.

Guelet bugale Sant Beneat oc'h en em sebellia en ho c'houdenhou evit studia, evit lacat var baper ha miret na dai da goll al levriou hag an oberiou a speret great gant hon tud coz, evit savetei scrijou a taffe da goll anez, rag tud ar bed n'o deus ket a amzer da ober al labourouze, ha re boaniuz ho c'hafont ; kementse a ro ar scri-fagnerien difeiz.

Guelet bugale Sant Dominic o lacat ho oll nerz hag ho oll gouezieguez da ober ar brezel d'ar fals credennou a doler hirio etouez an dud, etouez ar iaouankiz evit ho douguen da garet ar bed ha da veza ep lezen ebet, etouez ar re en ho guella oad, evit ho lacat da ober ho Doue eus an danvez ; etouez ar re goz evit ho lacat da ziskan er bez ep Doue na relijion ; ho guelet o poania da zistruja ar fals credennou-ze ha da lacat an oll da viret lezen Doue, kementse a ro an droug-izili d'ar scri-fagnerien difeiz.

Guelet e creiz ar bed, eleac'h ma zeus kement a zispac'h, tiez o sevel evit diguemeret an eneo gouliet, bruzunet dindan ar beac'h eus eun anken bennag, evit diguemeret ar re ne fell ket dezho caret ar bed, hag o deus c'hoant da zilezel oll draou an douar, an dra-ze a ra poan c'houzoug d'ar scri-fagnerien difeiz, a venn ho monga.

Meur a dra so eta oc'h ober poan d'an dud dizoue-ze. Ne deus merket ama nemet eul lodennig anezho. Mes avoalc'h a so merket evit diskuez ne ket prest an dud keiz-ze c'hoaz da veza laouen.

Rom. — Eur diguemer ar c'haera so bet great d'ar zoudardet so eat eus a Fraus da Rom. An Tad Santel ar Pap a leverer so contant braz anezho. Bep en amzer her c'hlever o lavaret : « Va gallaouet vad, va gallaouet ker ! » Evit ar pred bouet so bet roet dezho, e lavare da vestr he di : Lakit evez da lacat rei eus ar guella guin d'ar Franczien !

Dijon. — Unan eus an nao missioner, merzeriet e Coree, hag a bere on eus comzet, a voa eus a guer Dijon. An Aotrou Bretennieres a reat anezhan. Lignez huel, danvez braz, speret tem, descadurez caer, calon vad, netra ne vanke dezhan eus ar pez a blij d'ar bet. Mes petra oa ar bed evit eur galon evel he hini ? Gounit eneoù da Zoue, an traoù all, evel Sant Paul, a gawe dezhan ne voant nemet teil ha bouillen. Eunn deiz e cleo mouez an Aotrou Doue oc'h he c'hervel, hag a neuze n'en devoe mui nemet eur c'hoant, beza beleg. He guerent a voa christenien vad ; ne glascjont ket miret outhan da heilla mouez an Aotrou Doue, hag ez efont ho unan d'he gas da glouardi Sant Sulpis, er bloaz 1859.

Ar c'hloareg iaouanc a dremenaz eno daou vloaz, hag an oll a anaie ar vadelez eus he galon. Er bloaz 1861 ez eas da glouardi ar missionou diaveaz bro, ha goude ma voa bet great beleg er bloaz 1864, e voue casset d'ar C'horee da brezeg ar feiz. Kement-ma a voa e miz Mae. Araog daou vloaz goude, e mis Meurs, e c'houzanve ar maro evit Jesus-Christ.

An Aotrou Bretennieres, merzeriet e Coree, n'en deus nemet eur breur, hag ar breur-ze so e Rom eleac'h ma za da receo ar velegniach.

Lyon. — An Aotrou Dubuis, escop Galveston, a lavare he oferen dillan diveza, araog diblas evit mont adarre d'he vission d'an Texas. D'an oferen-ze pehini so bet lavaret e chapel Itron Varia Fourvier, parrez an Aotrou'n Escop Dubuis, e voa deut ar visionerien iaouanc a dle mont gantha d'he Escopti. Diguemennet en doa dezho en em gaout eno abenn an deiz-ze. Lacat a reant eno he beach dindan scoazel Rouanez an Euv. Eunn niver braz a dud a voa deut d'an oferen-ze, hag an darn-vuia anezho o deus communit.

E guirionez, petra zo caeroc'h, petra a elfe guelloc'h teneraat ar c'halonou, evit gueleit tud iaouanc, lod anezho a liguez huel, o kuitat pep tra evit mont d'ar broiou estren etouez tud gouez, da c'houzaon a bep seurt poaniou, en divoer a bep tra, o vervel gant an naoun, avechou goat gasset ha laket d'ar maro, epad ma clascont gounit eun ene bennag da Jesus-Christ !

Missionou. — Eur c'hristen eus a rann-vro Su-Tchuen, e Chin, en deus roet eur skuer a ners-calou hag a eller da lacat e kemm gant kement o deus gouzanvet ar verzerien ar re vrudeta eus an iliz. Ar c'hristen-ze, hanvet Yank, a voa bet barnet da zouguen evit hepret ar skeul-c'houzoug (la cangue). Ar re a lena liziri Breuriez ar Feiz a voar petra eo ar skeul-c'houzoug.

Bez' ez eo daou dam coat pe daou bost stag an ail oc'h eguile gant diou vaz evel eur c'hravaz pe eur brancardou. Etre an diou vaz e tremener ar penn, hag an daou bost a ziskan var an diou scoas. Avechou eo henvel oc'h eur golo taol a ve great eun toull er c'hreiz anezhan evit tremen ar penn. Mar sonjer penaus ar skeul-c'houzoug a bouez avechou bete pevar ugent, bete cant lur, penaus an hini so laket ar skeul-ze dezhan ne all ket sevel he zaoarn d'he c'hinou, ne all ket sellet oc'h an douar, ne all ket gourvez... e c'heller gouzout eun dra bennag pebez merzerinti eo douguen ar skeul-c'houzoug-ze.

Yank eta a voa condaonet da zouguen ar skeul-c'houzoug beteg he varo, ha da jom e kicheu dor kear, stag var bouez eur chaden evel eur c'hi. Evit ober aoun d'ar gristenien all, e voa scrifet, e lizerennou braz, a zioc'h he benn, e voa barnet da c'houzaon ar boan-ze, abalamour ma voa en em lakeat e relijion Jesus. N'en doa nemet eur guer da lavaret, nac'h Jesus, evit ma vije torret he jaden ha lamet digantha he skeul-c'houzoug. Mad, ar guer-ze n'en deus ket he lavaret. Epad pemp bloaz ha triugent en deus gouzanvet ar boan scrijus-ze. Epad pemp bloaz ha triugent en deus gouzanvet evit hano Jesus ; kendalc'het en deus en despet da guement a lavaret dezhan o clase he lacat da nac'h he Zoue. Epad pemp bloaz ha triugent n'en deus bet evit magadurez nemet ar pez a elle he vreudeur christenien da zigas dezhan ha da baska dezhan dreist he skeul-c'houzoug. Maro eo dindan ar beac'h pouner-ze ; maro presius dirag Doue. E pelec'h caout netra caeroc'h e buez ar verzerien ? G. M.

HISTOR ZANTEL.

(Eil bennad ha daou-ughent).

Enterramant Jakob. — Maro Jozeph.

Euz ar bed 2274. — Araog Jezuz-Krist 1730.

Jozeph o velout e oa maro he dad, en em daolaz var he zremm, en eur ouela, hag en eur boket d'ezhan.

Rei a reaz urz d'ar vedisined da valzami he dad gant louzeier c'houez-vad. Ar pez a badaz daou-ughent devez ; rak ar c'hiz a oa da lakaat ann hed-amzer-ze da valzami ar c'horvou maro. Hag ann holl Ejipt a zougaz kanv da Jakob epad dek devez ha tri-ughent.

Pa oe tremenet amzer ar c'hav, Jozeph a gomzaz ouz offiserien Pharaon evel-henn : Ma em euz kavet trugarez dira-z-oc'h, livirit da Pharaon ar c'homzou-ma euz va ferz : Va zad en deuz great d'in touet d'ezhan, o lavarout : Setu-me o vont da vervel, va besia a reot ebarz er bez am euz kleuzet evid-oun, e douar Kanaan. — Prins, mont a rinn eta, besia a rinn va zad, hag e tistroinn raktal.

Pharaon a respontaz d'ezhan : It ha besiiit ho tad, hervez al he hoc'h euz great d'ezhan.

Pa bignaz da vro Kanaan gant korf he dad, ar re

gosa evez offiserien palez Pharaon hag an dud enorusa euz ann Ejipt a ieaz gant-han. Holl dud he di, hag he vreudeur a ieaz ivez, ne choumaz e douar Jessen nemet ar vugale vihan hag ann tropellou.

Mont a reaz c'hoaz d'he heul kalz kirri ha marc'heien, ar pez a reaz eul lod-tud ha na oa ket bihan.

Arruout a rejont en eur c'harter hanvet leur Atad en tu-all d'ar Jourden, hag eno e tremenjont seiz devez oc'h ober lidou ar besiad, gant calz a zaelou hag a ouelvan.

Tud douar Kanaan, o velet kement-se, a lavaraz : Eur c'hav braz a zo gant ann Ejiptianed. Setu perak eo hanvet al leac'h-ze Kanv ann Ejipt. Goude al lidou-ze, e eo lekeat ar c'horf er gavarn a ziou gampr prenet gant Abraham, e traounien Mambre, da ober anezhi he vez hag hini tud he di. Jozeph a zistroaz neuze d'ann Ejipt gant he vreudeur, hag ann holl Ejiptianed a oa deuet d'he heul. (Enori a rear ann dud honest epad ho buez, ha muioc'h c'hoaz goude ho maro).

Goude maro ho zad, breudeur Jozeph ho devoa aoun, hag a lavare etre-z-ho : Brema Jozeph a helfe kaout sonj euz ar goall daol en deuz gouzanvet, ha daskori d'eomp ann holl zrouk hon euz great d'ezhan. Hag e kasjont tud da lavarout d'ezhan : Ho tad abarz mervel en deuz gourc'hennet d'eomp lavarout d'ehoc'h euz he berz : Ho pedi a rann da ankounac'haat torfed ho preudeur, ho fec'hed hag ho droughiez zu en ho kenver. Ha ni hon-unan, ni ho ped da bardouni ar fallagriez-se da servicherien Doue ho tad.

Jozeph, o klevout ar c'homzou-ze, a ouelaz.

He vreudeur a zeuz neuze d'he gavout, ha stouet beteg ann douar d'he adori, e leverjomp d'ezhan : Ho servicherien omp. Hag hen a respontaz d'ezho : N'ho pezit ket aoun ; hag hellout a reomp-ni enebi ouc'h ioul Doue ? C'houi hoc'h euz bet c'hoant da ober drouk d'in ; mes Doue en deuz chenchet ann drouk-ze e mad ; evit ma huellaat evel m'her guelit hirio ; evit ho savetei ha meur a vohl gan-ehoc'h. N'ho pezit ket aoun, me ho mago c'houi hag ho pugale vihan. Ho c'honforti a reaz er c'hiz-se, o komz out-ho gant douter ha teneridighez. (En doare-ze e teu ar zent d'en em venji).

Jozeph a choumaz enn Ejipt gant he dud, beteg ann oad a zek vloaz ha kant. Guelout a reaz bugale Ephraim he vap beteg ann driven rum ; ha bugale Makir, map Manasse, a zeuz er bed evel var varlen ho zad-kun.

Goude ann trao-ze holl, o velout e tosteo fin he he vuez, Jozeph a lavaraz d'he vreudeur : Goude va maro, Doue a zeui d'ho kuelout ; hag a rei d'ehoc'h pignat diouc'h ar vro-ma d'ann hini en deuz touet e roje da Abraham, da Izaak ha da Jakob. Touit d'in e kassot neuze gan-ehoc'h va eskern diouc'h ar vro-ma.

Goude beza great d'ezho touet, ha lavaret d'ezho : Doue a zeui d'ho kuelout, kassit va eskern euz ar vro-ma, e varvaz oajet a zek vloaz ha kant.

He gorf a oe balzamet, ha lekeat enn eun arched, da c'hortoz ann amzer diouganet gant-han d'he vreudeur.

Tom. 28.

Glac'haré oun, bugaligou,
Maro Jozeph !... pebez kelou !
Ho mignoun braz, ho kelenner,
Ho tiverramant hag ho skouer.

Habask eo bet enn he boaniou,
Vuel e kreiz ann enoriou,
Doujuz d'he dad, d'ann holl seder,
Dre ma skeudenne hon Zalver.

Jakob, Jozeph, haniou karet,
Gant Doue oc'h dispartiet,
Gant Doue oc'h bet adarre,
Lekeat kevret, korf hag ene.

Euruz neb a varv enn he vro !
Bara bro bell a zo c'houero.
Euruz nep zo besiet divlamm
E kichen he dad hag he vamm !

N. B. — HISTOR ZANTEL de Feiz ha Breiz, reserveye.

HENRY.

AR ZUL.

Ar zùl a zo anvet deiz an Aotrou Doue. Mes, an oll deizyou euz ar zizhun ha n'ez int-hi ket d'eza ?

Eo zùr, an oll deizyou euz ar zizhun a zo da Zoue. En eo en devez he greet ho zeiz, ag ho zeiz ez int d'eza.

Doue en devez krouet pep tra, an nenn gan kemment a zo enha : eled, baradoz ha traoù all, an oabl gan kemment a velom enha : heol, loar, stered, kouabr, — an douar gan kemment a zo war-n-eza : tud, anevaled, guez, plant, — ar mor, gan an oll besked ha penvidgezou all a zo enha. Hogen oll o veza bet krouet gan Doue, oll ez int deza. Ar zeiz devez euz ar zizhun a zo ivez greet gant-ha, ho zeiz evel-se ez int d'eza.

Perag eta ec'h anver ar zùl deiz an Aotrou Doue, ec'hiz ma vez an deiz-se deza muioc'h egued an deizyou all ?

Abalamour Doue, o veza roet ar c'houec'h devez all euz ar zizhun d'an dud evid ober ho labourou ordinal, evid poanya da bourvezi da ezomou ar vuez-ma, en devez miret ar zùl evit-ha he-nnan, ag e fall d'eza e vez heoret ha servichet d'an deiz-se, gan an dud, he vugale, en eur feson spesial. Evid guir e tleomp henori, karet ha servicha an Aotrou Doue bemdez ag e pep pred euz an deiz, n'ed om krouet ha lakeat gan-t-ha er bed nemed evid-se, koulskonde ar zùl a zo eun devez dibabet ha biniget evid henori ha servicha ar C'hrouer, ar C'hrouer epken, ag en eun doare guelloc'h, parfetoc'h. Lavaret a ran

en eun doare parfetoc'h : Epad ar zizhun, o veza ma e m'om stag attao ouz on labourou, daoubleget attao war zu an douar, or spered ag or c'halon n'ed int ket evid en em roi mad a-voalc'h da zonjal en or C'hrouer, d'he veuli ha d'he zervicha. Mez da zùl n'or heuz netra da ober nemet se, nemet sonjal e Doue ha renta d'eza on oll deveyout, ag ivez soursial ouz on ene ha pourvezi d'he ezommou. Ahendall, pa zervichom Doue, e pourvezom, er memez amzer, da ezommou on ene.

Ar zùl ag en a zo het a viskoaz *deiz an Autrou Doue*, an deiz konsakret da honori ha da zervicha aneza en eur feson spesial ?

N'ed eo ket. En amzer goz, da lavared eo, adaleg ar penn kenta euz ar bed beteg Jezus-Krist ar zadorn eo a voa *deiz an Autrou Doue*. Evelse, ar boblou euz an amzer goz, evel ar Iuzeyen, a vire ar zadorn, a ree euz an deiz-se ho deiz santel. Ar Iuzeyen a hiryo zoken, ar re anezo ha n'o devez ket en em c'hreat kristenyen, a zalc'h bepred da viret, da zantifia ar zadorn.

Perâg e voa guechall ar zadorn *deiz an Autrou Doue* ?

Setu ama ar rezon pe an abeg a gemment-se : Doue en devoa krouet ar bed e c'houec'h devez. D'ar zùl e kommansaz ha d'ar guener ec'h achuaz. Ar zadorn a zeuaz, ha Doue, o veza ma en devoa achuet he bez labour (krouideguez ar bed), a gemmèraz he renoz, d'an deiz-se, eme ar Skritur zakr. Binniga a reaz ar zadorn ag e santifiaz aneza. Gourc'hemenñ a reaz d'an dud, en amzeryou kenta-ze, ober evelt-ha, labourat epad ar c'houec'h devez kenta euz ar zizhun ag heana d'ar zadorn, lezel ho c'horf da zis-kuiza, d'an deiz-se, ha tremen aneza o servicha ho C'hrouer.

Setu ama komzou ar Skritur he-unan war ar zeizved devez : « An nenv ag an douar, » eme Moizez e « leor Geneliez ar bed, gan an oll draou kaer a zo « enho, a voa eta peur-c'hreet *er c'houec'h devez kenta*. « Ia, Doue en devoa peur-achuet he bez labour (krouideguez ar bed), pa zeuaz ar zeizved devez, ag ec'h « heanaz d'ar zeizved devez, e reaz ec'hiz kemmer he « renoz euz an oll labourou en devoa greet. Binniga « a euren ar zeizved devez ag e santifiaz aneza, *d. l. e.*, « e reaz ag e tiskleryaz aneza eun devez santel, eun « devez sacr, greet epken evid honori ha servicha ar « C'hrouer, ha ne ket evid ober afferyou ar bed-ma, « abalamour he-unan en devoa kemmeret he renoz « d'an deiz-se. »

Evid guir, Doue ne voa ket skuiz ha n'en devoa ket ezom da gemmeret he renoz. Mes ober a reaz evel-se evit roi skuier d'an dud. Dre enno e lavare d'ezho : « Ma bugale, me ho Krouer ag ho Tad, em « beuz labourer epad c'houec'h devez evit sevel ha « kempenn ho lojeiz, evit pourvezi d'oc'h ezommou « evid ar vuez-ma, ha d'ar zeizved devez em beuz « kemmeret ma renoz ha santifiet ar zeizved deve-se.

« Grit evel-d-on; labourit mad epad ar c'houec'h devez
« kenta euz ar zizhun, ha pa denio ar zeizved devez
« heaniz, kemmerit ho renoz, lezit a gostez ho labourou
« ordinal, ha santifiet ar zeizved deve-se, o tremen
« aneza e ma zervich en eur feson spesial. Mar grit
« evel-se, me ho pinnigo. Mar grit ar c'hontrol
« kouezo war-n-oc'h ma goallennou. »

Y.-K. KERZALE, beleg ar Zalet.

(An dilec'h eur vechall.)

BUEZ AR PLAC'H DEVOT ARMELA.

(Navet pennad.)

Evel hon euz he lavared, he c'harantez evid ar beorrien a ioa bras. Mont a reas alies d'ho gueled, ha pa dije touchet he gober, e roe d'ez-ho arc'hant, e prene d'ez-ho ar pez o divije izom. Pa vije goulonteret he ialc'h, e zea da glask aluzennou evit-ho. Cleved e vije alies o lavared e carje beza het netra da ober, evid gneloud mont bemdez euz a zor da zor da ggestal evid he bredeur, keas izommec. Lavared a reas zoken alies da Zoue, gand eur galon entaned dre ar garantez evid ar beorrien : « Me gred, o va Doue, eo brassoc'h ar garantez em euz evid « ar beorrien egued an hini am euz evid h'oc'h. » Beza ez-eur eur micherour paour e kichen Gouened, scoet gand eur gonall glenved : Eun euz edo he veled. He c'hreg zoken na grede ket tostad outhan. Goloet edo a c'houliou a dalec ar pen betec an treid, debret gand an astu hag ar vreinadurez, astennet var eun dourniad coloen eur solier, hag avechou tagued gand an desper. Armela o veza cleved pez leac'h edo, a c'houennas digand he c'hoñfessour ha digand he mestrez mont dhe veled evid rei d'ez-han s'icour. Lezed e oue da vont : diez bras eo lavared gand pebez carantez ha pebez ners en em lekeas da evesad euz an den reuzeudic-ze. Ne dre mene dervez ebet-vez ea d'her goueled, ha bemdez ive e velc'he hag e louzaoue d'ez-han he c'houliou, daoust d'ar c'houez fall a leuskent. Lacad a reas c'hoas d'ez-han ar vuez essoc'h da zouten dre an aluzennou a gasse d'ez-han, ha dre ar garantez a Zoue a skuille en he galon. En eur zont euz an ti-se, e leac'h ma cave kement a dalvoud deguez dirag Doue, he c'halon hag he drem a vije ken antanet, ma c'hellet he c'hemer evid eur pez tan. He c'homzou a vije ker cargued a garantez, a druez evid aneb a so er boan, a levnez evid ar re o deuz cals da c'housao, pa deu ar poaniou-se da viza saouret gand ar garantez a Zoue, ma crede aneb he c'heve, cleved ar garantez memez o fonz euz he guinou.

He c'harantez e kenver he enebourrien a ioa bras meurbed, hag ar c'hoant da ober vad d'ez-ho a vije avechou ken calonec, ma teue en he c'housians n'ed nec'hamanchou bian. Diskuil a reas an nec'hamanchou-se d'he c'hoñfessour, hag heman a lekeas ar peoc'h euz he ene var guement-se, en eur oueranti d'ez-hi ne zisplijer morse da Zoue, oc'heuil guella ma c'helleur ar

gourc'hemenou roet d'eomp da viret : Lavared a reas c'hoas e c'hellomp labourad evid lacad hor buez da zont da veza santel, evel m'as-z-eo santel buez hon tad a so en env. An tad carantezus-se a ro ar sclerijen eus an heol d'ar re vad couls a da re fall, d'aneb o deus caz outhan couls a d'aneb her c'har. Kemer a reas evid eur vadelez a Zoue caout peadra da c'houzao pe beza goapeet. Mar bibe creded fall varnez-hi, hag a vije avechou euz a bers an dud fallagr, e cave c'hoas an tu da veuli he c'hrouer, dishenvel bras var guement-se euz eur maread tud santel a sonje d'an dud, hag a veleur o stoua pa deu eun dra bennag da stourm outho. Perac kement-se? an diaveaz euz ho santelez ne d'eo ket fountet mad.

Armela o veza couet clan, e voue galved eur midisin da zont d'he c'haout. An den-man o veled an hini glan ker ruz, a souijas ez oa het eun disurj bennag en he buez. Petra benag ar greden-se a c'holoe a vez buez Armela, Cousgoude ar midisin a barlantas euz he nec'hamant d'he mestrez ha dhe mestrez ; Lavared a reas ne voua ket mad martese he goada. Ar midisin se a reas he zever. Mez fasia a reas a gals. Great e oue d'ez-han anaout petra oa he glanvourez, hag e teuas mez d'ez-han.

Confessour Armela, evit rei d'an ene caer-man an tu da zastum danvez evit rouantelez an env, a reas an eus da gredi an drouk a lavared anez-hi. Parlant a reas outhi rust, evel pa vije het eur plac'h fall dindan diaveaz ar santelez. Armela o veza dent da c'houzoud ar pez a ziscreded var he buez, a deuas da guemer kement-se evel ma kemerer ar vrassa levnez a c'helfe dont d'eomp. Trugarec'ad a eure he c'hoñfessour da veza he c'hemered evid eur pez fall. Goule e veule he midisin da veza he zaolet en dismegans, ha ken alies gouech m'her gouele, e falvez d'z-hi en em strinca d'he dreid evid hen trugarec'ad euz ar vad e doa het diganthan. Mez, credi a c'helleur, ne deuas ket eb brezel nag eb poan, da c'hellout beza laouen o velet dua he hano gand ar vez. Ar vuaneguez euz he c'haracter a roas peadra da zibuna d'he doster, betec ma teuas Doue da vouga en-hi kement a deue euz ar c'hik, evit he lacad holl da veva dre he garantez.

Oc'h anaout he santelez hag he spered, he mestrez a lezaz ganthi ar garg da c'houarn an ti, hag ar garg da guemerred evez euz he bugale hag euz ar servicherrien all. Ar renk hucl-se roet d'ez-hi n'he lakeas ket cousgoude da zont da veza na grons na dichek. Pell ac'hano, he doujans pe he humilite a veled ato o para e pep tra. Plega a reas a galon vad d'ar re all, nemed meneg a vije a eun dra bennag hag a zisplisje d'a Zoue. Pa vije goulent digant-hi he ali, her roe eb kuzet netra. Mez ma ne vije ket kavet mad he ali, e tave, hag e c'heuille hini ar re all. Ar pez ne vije ket mad d'ar servicherrien all da ober, hi her grea ; ar boued a zisplisje d'ez-hi, hi hen debre gand levnez. Pa vije o comz euz unan benag, e veled en he c'herc'hen eun doster hag eun doujans ar vrassa, rag ma crede d'ez-hi ne dleic caout an enor da barlant out den : an doster hag an doujans-se a vije c'hoas brassoc'h, pa n'em gave dirac eur belec pe eul

leanez benag ; ha ma vije couseet dirac-hi divar traou ar rilijion, ne lavare guer, evel pa ne oñije netra var guement-se, petra benag mas-z-oa desket bras. Evit dere he he vertus kused ha pellad diout-hi istim an dud, e claske ato eul leac'h a gostez evit parlant euz afferiou he c'housians d'aneb a ioa carguet dhe ren. Eun tjin ar gaer e doa evit kuzet d'an oll ar grassou a roe Doue d'ez-hi. Antan a zeve he c'halon euz a garantez he Salver, he lake avechou da gaout fallaennou ; Mez nikun nemet-hi ha Doue ne anaie ar penn caos euz he c'hlenved. T. B.

Lizerou eur Belec iaouank d'he Zouñ Vreur.

Pempet lizer : DA RENAN. — 1844.

Mal eo ganeen, Renan ker, kass did ar c'helou penaoz oun galvet d'an Adoration e parrez Yann-Mari, Edouard ha Joseph en em gavo ive enon, Pebez eur vad Ibez mignonet, labourat kenret evit Doue ha goude beza labouret da c'huezen an tall evit silvidiguz an eneo, en em gavout dioc'h an noz eun heurik bennag, ha kozeal neuze kalon ha kalon. Bem euz renket lezel aze va lizer evit mont da velout eun den toc'hor braz ; goude ar goession em euz renket dont da guere hat dez an Aotrou Doue.

Ne oan ket erruet mad er presbytial, pa m'euz renket mont adarre da velout daou zen all dre eur glao puill. M'em euz guelet em bugaleach er barrez *** eur belec o vont da velet tud klan, er memez devez e pevar c'horn ar barrez-ze. Cetu kloc'h an iliz o lavaret din em euz eur badiziant da ober, kenavo-ta, breur guer ***. A. M.

An daou zorn bras.

Eur paotric a zistroe eus ar c'hoat, var he chouc eur beac'h keuneud hag a lakea he ziveskerigou da neza dindanha.

Ar potric-ze a voa he hano Colaie, hag en doa unneg vloaz.

Skuiz oa ; naoun en devoa, ha beradou daelou kement ha piz a ruille eus he zaoulagad var he zivoz.

Ne ket gouscoude an naoun nag ar skuider eo a lakea he daelou da redek. Ar zonc'heus he dad oa, he dad a voa maro en nevez amzer diaraog. Ar pez a reas dezhan gouela, oa dre ma sonje e c'affe an ti goullou, rag he vam a ranke mont ive d'he dervez da c'hounit he zam bara.

E guirionez an ti a voa goullou ha ker paour, ma leze var vam anezhan dialc'hoaz pa zea d'he labour. Laer ebet ne gafje enha netra dioc'h he zoare.

Pa voa eat Colaie en ti, e tolas eun diou pe deir bozad keunent munut en oalet, hag e reas eun tamic tan da doma he izili. Neuze o velet ar moguet o sevel, ec'h huanade dre n'en devoa tam da zibri, ha ne vele ket e

vije en ti an distera begad bouet. Neuze en em lakeas da zonzal outhan he unan :

Ne allan ket chom hirroc'h evelen ; rag setu me o tont da veza braz ha cre. Doue en deus bet ar vadelez da rei din divrec'h mad ha guest da labourat, ha va mam a ia falloc'h falla bemdez. Beta vrema hi e deus labourat evidon ; iviziken eo me a dle labourat evithi. Pa vezin den avoalc'h ne devezo izom da labourat tam ; n'e devezo nemet chom ama e kichen an tan, ha pourchas bouet evidomp hon daou, ha ne vezo ket red-din chom ep tam evel hirio.

Colaïc a voa mad da labourat, ha ne c'hine ket evit implija ar peziec en devoa a ners.

Souden e clevas al loket o sevel ; hag e teuas he vam en ti. Goude beza poket d'he map ha roet dezhan eul loden eus an tam bara du ha seac'h e devoa bet d'he c'hoan, e c'hazezas en eur vouela. Skuiz oa ken ne bade ket, hag evit he labour ne devoa bet nemet ar c'hinaouat vara-ze. Ar paotr a lavaraz dezhi. Va mam, me'm eus great va zonzh da vont da redek ar bed da glasc labour, evit na vezo mui red deoc'h va beva. Mes ar vam a zirollas neuze da vouela.

— Va mam, eme Colaïc, poanias eo, mes red eo gouscoude, rag anez e varvimp gant an naoun. Pa na vezo nemed oc'h, e c'hounezot ho pouet æz avoalc'h ; ha me, pa na vezo nemed houn, a lacai va gouel dioc'h va avel, hag a rai va zamm dioc'h va zorchon ; ha neuze me a gresco, dont a rai ners din ; destum a rin peadra, ha neuze e tistroin d'ho caout pa vlot coz, e kemerin d'am zro soursi ac'hanoc'h, ha n'o pezo mui izom da ober netra.

Mam Colaïc a voa mantret he c'halon. Gouscoude e vele ervad e lavare guir ar potric, hag e voa red dezhi dispartia diouthan evit he lezel da vont da c'hounit he vara.

Antronoz an heol a voa gae ha skedus dioc'h ar mintin. Colaïc a glascas he voutou hag a lakeas colo fresc enho, rag peurlieasa e veze diarc'hen. Ar vam a glascas dezhan he zillad da zul pere ne voant nemeur guelloc'h evit he zillad pemdez. Taconet oll oant ; gouscoude pa voant laket var he dro, ha pa voa ar potric kempennet evelse, e voa coant avoalc'h.

Dibri a rejont neuze ar pez a jome eus an tam bara du dent gant ar vam an derc'hent. Mes nag ar vam nag ar map ne gredent sellet an' eil ouz eguile. Ho daou e claskent cuzet an daelou a zirede eus ho daoulagad.

Oh ! c'honi bugale, pere a so bet great ato stad ac'hanoc'h gant ho tud, ha ne ket bet red deoc'h morse ho c'huitaat, sonjit pebez rann-galon e voa evit ar potric kez lavaret kenavezo d'he vam ha mont kuit diouthi ? Ar c'himiad-ze a voa tenn evitho ho daou.

Colaïc a lavaraz gouscoude : mad, va mam, red eo din mont kuit. An amzer so caer, an heol so gae, an hent so brao.

— He vam a dolas varnezhan neuze eur zell truezus. He glac'har hag he anken a zirollas neuze kement, ma

ne elle mui nemet hirvoudi ha goela. He divroc'h a jome sounnet en dro d'he map oc'h he vriata ; mangout a venne he c'halon dezhi.

Ar potrig a eanas da vouela evit coms laouen oc'h he vam. Kemeret a reas neuze he dog, he benn baz hag he vissac'h, hag e tiblases.

Mes he vam a loscaz eur griaden ; mont a reas eun nebeut var he lerc'h. Gouscoude o c'houzout ervad e voa red dispartia, hen lezas da vont, mes chom a reas da zellet outhan keit ha ma c'helle he velet. Pa voa eat a guze tistroas d'he zi en eur vouela doureg, hag ar potrig dioc'h he gostez, goude beza sellet meur a vech var he lerc'h, a vouele druz ive a vont gant he bent.

(Eur vech all e livirin peleac'h ez eas Colaïc.) G. M.

AN TAD DIZOUE.

E buez Sant Jozaphat e lenner penaus tad ar prins-ze, pehini a voa paien, evit miret na vije comzet d'he vap eus ar guir Doue nag eus al lezen gristen, hen dalc'he en eun doare bennag dindan an alc'hoez, hag en doa difennet oc'h an oll na gomschent dezhan a relijion e guiz ebet. Piou a grette e ve cavet hirio var an douar, ha zoken en hor bro, tadou henvel oc'h tad Sant Jozaphat ? Mad, caout a rer gouscoude.

Brema ez eus vardro daouzeg vloaz, eun Aotrou o chom a dost da Bariz, a deuas da gaout eur vestrez-scol eus ar gear-ze. Clevet en doa oa an dimezel-ze eur vestrez-scol dispar.

— Dimezel, emezhan, c'hoant am eus da zigas va merc'h d'ar scol davedoc'h.

— Mad, eme ar vestrez-scol, digassit-hi. Gouzout a rit peguement a goust da bep buguel ?

— Oh ! evit an dra-ze, me ne zellan ket oc'h ar pez a gousto, hirroc'h a bain zoken evit na c'houlennit, mar kirit. Mes eun dra am bese da c'houlenn evit va merc'h, eun dra da behini e talc'han cals. Mestrezet-scol zo ha ne ket falvezet dezho kemeret va merc'h abalamour da-ze.

— Hag an dra-ze, petra eo ?

— Va merc'h so trizeg vloas. Ne deo bet morse er meaz eus va zi. Morse an hano a Zoue ne deo bet lavaret dirazhi e guiz ebet ; ne voar hano ebet nag a veleien nag a ilizou. Morse ne deus clevet eur beden na gulet den o pidi. Goude ma em eus poaniet kement evit miret oc'h va merc'h da gaout anaoudeguez ebet a relijion, ec'h ellit cridi ervad ne fell ket din e ve comzet dezhi a gatekiz, e ve hano dirazhi da vont da gofez, da ober he basc. An traou-ze, a gredan-me, ne dint mad nemet da goll speret ha calon ar vugale. Ha kemeret a ellit-hu va merc'h evelse ?

Ar vestrez-scol a voa chomet mantret o clevet an tad-ze o comz evel ma rea.

— Aotrou, emezhi, me zo christenez. Mes, ha pa na lavarje ket din va c'houstians ne allan ket kemeret eur buguel em zi var arzaouiou evelse, e lavaran deoc'h ne

affen ket miret oc'h ho merc'h da glevet ama hano a Zoue hag a relijion. Ar merc'hedigou all so ama a zesk ar c'hatekiz, a lavar ho fedennou, a ia d'an iliz. Ne affen ket miret outho da goms d'ho merc'h eus al lezen gristen. Hag ouспен, ho merc'h so badezet ; hano Doue so scrifet en he c'halon. Ne deus nemet en em gaout eun tamic er sclerijen, da lavaret eo, gant bugale-gristen, evit ma teufe dezhi ar c'hoant da anaout he Doue.

— Evelse-ta, eme an tad, ne recevot ket va merc'h ?

— Nan, a dra zur, rag ha pa elfen miret outhi da glevet comz a Zoue, n'em he ket ar galon da lezel em c'hichen eur buguel ep rei dezhan da anaout da nebeuta hano an hini en deus he grouet. Lavaret a ran deoc'h zoken ne dal ket ar boan deoc'h mont da gaout mestrez-scol all ebet, rac nicun ne guemero ho merc'h mar goulennit eun dra evelse digantho.

An tad a ieas kuit en eur hija he ziouscoaz, hag en eur c'hrosmolat a enep kement hini o deus relijion ; rag, emezhan, ne ouzont ket petra fell dezho.

Ha brema, petra eo deut da veza ar plac'hig-ze pehini, brema ez eus daouzeg vloas, ne vouie ket zoken an hano a Zoue ? Petra zervich d'an den clasc ober lezen da Zoue ? Petra zervich dezhan lacat he ijin hag he evesdet da glasc beza trec'h d'he grouer ? Piou a ello miret oc'h Doue da denna eun ene davethan pa en deus c'hoant ? Ar plac'hig-ze e deus hirio pemp bloas varnuguent, hag a zo.... leanez a urs Carmez !

Ha penaus eo digoezet eun dra evelse ? Oh ! Doue ne vez ket nec'het evit ober he volonteze en despet d'an dud, pa blij gantha.

Ar plac'hig keaz-ze a ioa eun dervez oc'h ober stam e kichen he frenest. He zad n'edo ket en ti. Eur marc'hadour levriou a deu da dremen. Bez' e voa gantha en he baner levriou fall ha levriou mad ; levriou hag a zo gantho eur c'houez gouest da lacat eur c'hristen da stanca he fri pa ve var bed eur c'hart leo dioutho ; hag ive levriou eus ar re vella.

Ar marc'hadour a jomaz a za dirazhi.

— Prenit eul levr brao bennag diganen, va dimezel, emezhan.

Ar brizonierez a astennaz he dorn evit cregui en eul levr. Lavaret a ran *prizonierez* ; rag he zad, o veza n'en doa cavet mestrez-scol ebet d'he c'hemeret evit he c'hellen evel ma felle dezhan, a voa en em c'hreat he unan he mest-scol, ha n'he leze ket da vont er meaz euz an ti.

Ne oute den peguement a boan a guemeraz an tad diseiz-ze evit miret outhi na velje ha na glefche netra hag a alje digas en he speret eur zonzh bennag a relijion. Ne ket ken æz-ze lacat levriou etre daouarn eur c'hrouadur ep ma cafe enho hano a Zoue, a lezen gristen, pe a draou-all evelse. An tad a boanias gouscoude kement, ma crede ervad e teuje abenn eus ar pez en doa sonjet.

Evit diskuez deoc'h peguement a boan a guemere ; scrifet en doa gant he zorn eun histor a Vro-C'hall hed ha hed. E guirionez penaus lacat etre he daouarn eul

levr eleac'h ma casse, er penn kenta, ar rouanez Santez Clotilda, hag ar roue Clôvis oc'h en em ober cristen var dachen vrezel Tolbiac ?

Eus an histor zantel, eus a histor an iliz, e c'hellit cridi, ne zescas netra d'he vere'h. Pa veze hano eus a histor ar broiou paien, ne voa ket draz dezhan lavaret dezhi ne voa doueou ar baienet nemet rimadellou. Ha setu penaus an tad dall-ze a guemere cant gueth mui a boan evit sevel he vere'h ep relijion, evit na vije bet red dezhan da guemeret evit ober anezhi eur gristenez vad.

Ar vere'h eta, evel ma on eus he lavaret diaraog, a astennaz he dorn da gregui en eul levr. Ama en devoa izom he æl mad da ren he dorn. Rag credabl eo mar coeze var eul levr mad, al levr-ze a zigorie dezhi he daoulagad, a zeseje dezhi ar pez a guzet outhi ; eleac'h mar coeze var eul levr fall, ne raje nemet c'eski an den-valijen eus he speret, ha marteze telan ar veginadutez en he c'halon.

(An memorant eur vech all.)

Hano ar Zent evit ar Sizun-ma.

DILLUN, 22 HERE, — Sant Callist, pap ha merzer.

DIMEURS, 23. — Gouel hon Redemptor, hon Dasprener.

DIMERC'HER, 24. — Sant Raphael, arc'hael.

DIZIOU, 25. — Sant Gueznou, escop.

DIRGUENER, 26. — Sant Alor, escop.

DISSADORN, 27. — Sant Magloar, escop.

DISSUL, 28. — Trede varnuguent goude Pantecost, sant Simon ha sant Jud, ebetel.

An Aviel hirio.

Jesus a lavaraz d'he ziskibien : Ar pez a c'houe he-mennan deoc'h, eo en em garet an eil eguile. Mar en deus ar bed cassoni ouzoc'h, gouezit en deus bet cassoni ouzin-me da guenta. Ma vijac'h bet eus ar bed, ar bed en divije caret ar pez a vije dezhan ; mes dre ne doc'h ket eus ar bed, ha ma em eus ho libabet hag ho tennet eus ar bed, setu perag en deus ar bed droug ouzoc'h.

Ha pet sonch eus ar pez am eus lavaret deoc'h : Ne ket brassoc'h ar servicher evit he vestr. Mar o deus va iskinet-me, hoc'h iskinint ive ; mar o deus miret va c'homzou, e virint ive ho re. Mes kement droug a raint deoc'h, he grait abalamour d'am hano, dre ne anavezont ket an hini en deus va digasset. Ma na vijen ket deut, ha m'a n'am bije ket comzet outho, n'o divije ket a bec'het : mes brema n'o deus netra d'ho didamal. An hini am c'hassa, a gassa ive va zad. Ma n'am bije ket great en ho zouez burzudou ha n'int bet great gant den, n'o divije ket a bec'het ; mes brema o deus ho gulet, hag evelato em c'hasseont, me ha va zad.

Kementse a so evit digas da vir ar pez so scrifet en ho lezen ; penaus o deus va c'hasseat eb abeg ebet.

SANT IAN. XV. 18. G. M.

KELEIER.

An Aotrou Ruellou, vikel e Plouenan, so hanvet person e Lanarvily;

An Aotrou Pennamenn so hanvet vikel e Plouegat-Guerand;

An Aotrou Gall, vikel e Plouegat-Guerand, so hanvet vikel e Brieç;

An Aotrou Yvenat, vikel e Sant-Marc, so hanvet vikel e Plouguer.

An dourion beuz o deus great cals distruch e meur a leac'h. Gouscoude brema eo en em dennet an dour kuit, hag an encrez a zo eat en he dro. Mes an douarou so bet goloet so chomet varnezho grouan ha livach, tiez so discaret, guez so torret ha tennet eus an douar. Tud ar c'harteriou-ze a vezo pell amzer voaz eus ar voalen-ze a so deut d'ho skei.

An amzer vras o deut, hag an edou divezad a zo save-teet. Ar c'hazetennou ne gomzont nemet eus an aradegou hag eus ar prizioù roet d'al labourerien ha d'al loenet. Evel ma zeo an traou-ze ar memes tra couls lavaret e pep leac'h, hag evel ma o deus an oll guele an aradegou-ze, ne rafen, oc'h ho merca ama, nemet lavaret d'al lenner ar pez en deus guele he unan.

E canton ar C'hastel-Nevez ez eus digouezet n'eus ket pell eun dro ar vrasa gant ar chasserien pe hemolc'hidi evit coms brezonnec coz. An dro-ze a gaven ken iskis ma n'he c'hreden ket, evidon d'he beza lennet var meur a gazeten c'hallec. Mes brema ne ellan mui doueti na deo guir, hag ez an d'he merca ive evit ar re a lenn *Feiz ha Breiz*.

E canton ar C'hastelnevez eta, e coajou Laz, e voa eur chasse braz, eur chasse bleiz. Ar chasseourien divar dro a voa en em zestumet, ha kercent e commansaz an dervez. Ep dale ar chas en em laca da chilpat; eur bleiz a voa en ho raog. Al loen-kez ne voue ket hir he abaden; treuzet gant diou pe deir boulet, e coezas souden maro mic.

Ar bleiz discaret a voa eur vleizez, eur vam douetus hag e devoa bugale, ha zoken bugale bras dija. Rag a veac'h o doa lazet ar vleizez, setu ar chas o sevel eur c'hrenn vleiz, eur map red ha ma vije deut tosta ma c'helle evit guele he vam o vervel. Beac'h adarre ta var ar chasseourien. Evel ma credent oll penaus ar vleizez maro a jomje d'ho guedal, e redjont oll varlerc'h ar bleiz beo, hag e lakejont ho freiz var eun tamig moguer e costez an hent.

Lavaret a rer, ar bleiz
Pa vez maro a vez reiz;

Mes ama ar chasseourien a voa en em dromplet. Pa deujont da glasc ho vleizez varo, ne gafchont nemet he flas. Mes, a leverot-hu, n'oa ket maro neuze ive-ta? Eo avad, maro mic. Hag oa eat kuit evelato? Ia, eat oa, mes gortozit, n'oa ket eat kuit he unan. Cavet e doa sicour da vont, ha setu ama penaus.

Eur marc'hadour guin o tremen dre eno, a velaz ar

vleizez eno astennet var an tamig moguer. Cridi a ra ez eo eur bleiz maro gant eun taol goad. Hag e guirionez, beuzet oa al loen en he c'hoad. Samma ra al loen maro hag hen tol en he gar evit he gas gantha. O sonjal oupen e roer eur prim d'ar re a hag eur bleiz, e za d'ar C'hastelnevez da ziskuez he breiz d'ar pennou kenta eus ar gear-ze evit ho lacat da rei dezhan ar prim en doa gounezet. Rag, emezhan, poan en doa bet o tont he unan a benn eus al loen gouez-ze gant he fuzil ha gant he gontellassen. He fuzil hag e gontellassen a voa paked mad en he gar, ha zoken, he fuzil, emezhan, a voa eur fuzil var spillen, eus ar re o deus great kement a zistruch er brezel diveza. Credet e voue. Mont a reat da rei dezhan ar prim. Mes ar gard-champetr pehini a voue e voa chasse en deiz-ze e coajou Laz, en devoa eun tam disfi-zians; ha neuze c'hoant en doa ive da velet unan eus ar fuzillou-ze a so kement a vrud anezho. Setu hen ho tis-paca ar fuzil. Ha petra gaf? Eur gorzen houarn guenn evit tenna guin! Ar pez a voue goassa eo ar chasseourien a zigouezas ive ep dale, hag a gavas ho vleizez stagu-e lost car ar marc'hadour guin. Hema, a ellit cridi, a voue great hu varnezhan, hag a ieas kuit lostog. Mes tost oa bet dezhan ober he daol. G. M.

N'oa mar ebet, e kar X... e voa eur vanden marc'hadouezet o verza pesket var an dachen. An dra-ma a voa eur mintinvez deiz ar foar, ha pesked a ioa var ar stalioù a bep seurt. Setu eun den o tont da varc'hata eul leguestr, da lavaret eo, unan eus ar pesket-ze a c'halver ive kemenerien-vor, a so rust ha calet ho zae evel croguen, hag o deus kizellou evel guencie pe cizail eur c'hemener.

Ar pesket-ze a ve c'hoant da gaout fresc, ha zoken, kement ha ma c'haller, e buez.

An den-ma-ta, o vare'hata eul leguestr, a lavare n'oa ket beo, hag evit guele, e lakeas he voaskel pe he guizel var lost eur c'hi a voa oc'h he heul. Ar pesk a grogas stard, hag ar c'hi kuit mar gouie gant al leguestr oc'h he lost. Va den a redaz ive buan varlerc'h he gui, ha merc'hed ar pesked a lavare: — N'her paco ket! — Oh eo! — Ne rai ket! Ep dale, den, ki ha pese a ioa eat ne vouiet ket pelec'h, hag abaoue n'eus elevet hano ebet anezho.

Ar re a anavez guizioù ar guerzerezet pesket, a ell sonjal pebez litanioù a voue distaguete eno pa deuas ar merc'hed-ze da velet oa eun dro louarn a voa tennet dezho. G. M.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 15 Here.		PONT'NABAT — 11 Here.	
Priz ar c'hant liour.		Priz ar c'hant liour.	
Guinis.	43 lur, 49 c.	Guinis.	43 lur, 44 c.
Segal.	8 lur, 05 c.	Segal.	9 lur, 07 c.
Eiz.	7 lur, 64 c.	Eiz.	8 lur, 88 c.
Ed-du.	5 lur, 93 c.	Ed-du.	7 lur, 29 c.
Kerc'h.	8 lur, 79 c.	Kerc'h.	8 lur, 88 c.
Avalou-douar	3 lur, 25 c.	Avalou-douar	3 lur, 25 c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gant AR. DE KERANGAL, Moulter an Escopit.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezounee.

Eun Abonnament d'ar Gazeten à goust:

Evit eur bloas	DAOU SCOUET.
Evit c'huic'h miz	EUR SCOUET.
Evit tri miz	C'HUEC'H REAL.
Eur gazeten ebken	DAOU VENNEG.

Ar baecament a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Belec e Kemper.
Ar paecamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN ebken. An abonamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 27 Here 1866.

Brema e clever dalc'h mad coms a vuzudou, a viradou digouezet ama hag ahont. Lavaret a ve great e falte da Zoue digueri ho daoulagad da eun nebeut tud difeiz a zo pere a lavar n'eus ket a vuzudou, ne deo an traou-ze ma comzer anezho etouez an dud nemet rimadellou. O comz evelse, an dud difeiz-ze a ra evel ar re a zer ho daoulagad pa deu an heol da bara, evit lavaret ne ket deiz, n'eus ket a sclerijen. Oc'h ober ar burzudou-ze dirazho, Doue a ra ma zeo red dezho anzaou ar virionez, pe tremen evit tud dall mar ho nac'hont.

Fallont a ra dezhan c'hoaz enori ha lacat enori he zervicherien fidel, ar re o deus tremenet ho buez en eur stad dister, disprijet gant ar bed, avechou iskinet ha casseat bete gant ar re ma reant vad dezho.

Evelse er zizun-ma e comzer eus ar burzudou great e kenver ar re o deus pedet servicherez Doue, Mac'harit-Mari Alacok. Mac'harit-Mari so bet discleriet euruz, hag ar burzudou a ra Doue dreizhi abaoue a lakai he c'hanoniza ep dale.

Comz a rer eus a eun den hag'a voa devot bras d'ar galon sacr a Jesus. Casset oue bete dor ar maro gant an derzien dom. Dilezet oa gant ar vedesinet; edo en he agoni. Tostaat a rer oc'h he vuzellou eun nebeut poultren eus a gorf ar plac'h eurus. Dioc'h-tu e tigor he zaoulagad, e teu he anaoudeguez dezhan, e c'hell comz oc'h ar re a voa var he dro; hag antronoz e rea he labour evel pa na vije ket bet clan.

E kar Autun, eur plac'hig iaouanc, leanez eus ar zacamant, a voa abaoue daou vloaz anter dalc'het gant eur c'hlenvet e boeden he liven guen. He douguen a ranket eus he guele d'he c'hadour, hag eus he c'hadour d'he guele. Ober a rejot eun navet evit goulenn ar pare evithi, hag e voue lavaret dezhi kemeret perz en navet-ze.

D'an navet dervez, goude m'e devoa communiet, epad ma trugarekea he Zalver, setu hi en eun taol o lavaret, souezet oll: piou zo aze? piou zo oc'h va zavel eus va c'ha-

dor? Me lavar deoc'h ez eus unan bennag oc'h va zavel! Ha kercent e savaz he unan, iac'h evel discoaz. En deiz-ze zoken e voue laket da borcherez er gouent, hag abaoue e ra ar garg-ze couls ha micun.

Ar plac'h eurus Germana Couzin, a behini on eus comzet meur a vech, a ra ive burzudou, pe da viana Doue a ra e kenver ar re he led. Unan eus ar re vrasa a anavez eo an distro oc'h Doue eus a dud, eur barrez eleac'h ma zoa cals dizurziou, ha dreist oll, an eil rum a voa e cassoni hag e brezel oc'h eguil. Ar c'hassoniou-ze a bade abaoue meur a vloaz, ha n'oa ket a zoare e teuje an dud-ze d'en em unan. N'oa nag iliz na presbital. Brema ez eus tri bloaz, person ar barrez a zontas mont da vez Germana da c'houlenn ar zicour eus he ledennou evit tud he barrez. Bet en deus he c'houlenn. Brema ez eus eno eun iliz nevez cazi echuet. Cals traou all a vanke c'hoaz hag a so deut ive da heul. Tud ar barrez en em gleo evit ar mad, hag ar person a lavar huet ez eo eno eur burzud bet digant Doue dre bedennou he zervicherez.

Doue a ro d'an dud peadra da zontal. He voaligner a sco var ar bed, var an Europ dreist oll. Ar goaligner-ze a bere unan ebken a voa gueeh all avoate, h'evit teleur an encrez en eur vro oll, evit lacat da grenat tud meur a garter, ar goaligner-ze a deu brema, ec'h eller lavaret a vanden, gueeh an eil varlerc'h eben, gueeh meur a hini var eun dro, da ober distruch el loden-ma eus ar bed.

Setu ar c'holera, abaoue pell amzer, ne guita ket ar vro. Mont a ra eus a du ar c'hreisdeiz da du an anternoz, eus ar sao heol d'ar c'huz heol, hag e sco ato eun tu bennag.

Ar vrezel zo deut ive da ober distruch ha da zamma, en eun nebeut dervezioù, eun niver braz a dud.

Eur goal glenvet so coezet var ar chatal, hag en deus lazet, hag a laz ato loenet ep niver, e Brozaos, en Ale-magn, hag e meur a vro all.

Bandennou killeien-raden, henvel oc'h coumoul o

nijal dre'n ear, a so diskennet, dreist-oll en Algeri, da lonca ha da zistruja oll vadou an douar, kement en em gave var ho hent.

Ha setu brema an doureier beuz o tont da zismantri pep tra en douarou plean hag en traoniennou pe er stankennou, o tistruja keriadou abez, o lezel en noaz ha dibourvez a bep tra tiadou tud a gantchou. En eul loden eus ar Savoia, a hed ster vraz al Loer ha meur a ster all, an dourioù dirollet o deus goloet an douarou a bep tu, ha petra jom var ho lere'h nemet grouan ha livach, guez ha tiez discaret?

Guech all pa deue breac'h an Aotrou Doue da bounneraat, pa zigoueze eur voalen bennag evelse, an oll a rede d'an ilizou da c'houlouen trugarez oc'h an Env. Ma ne allet ket ato pellaat ar voalen, da viana e tesket he gouzaon gant feiz, hag e reat evelse vad d'an ene ma na reat ket d'ar c'horf.

Hirio ne ouzeur nemeur pidi. Pephini a fell dezhan lavaret he bez divarbenn ar goaligner hor sco. Goulen a rer digant ar vouezieguez ho fellaat. Mes siouas! ar gouzieguez, skiant an den so berr da zonal beza treac'h da voaligner an Env. Ar vouezieguez a so mad pa vez hano da lacat etre daouarn an dud benviachou gant pere e c'hellont en em laza a'assoc'h ha buanoc'h, mes diners en em gaf pa vez izom da zistrei ar birou a zorn Doue. Ar beden a dal neuze hirroc'h evithi.

Ar goaligner-ze a sco hirio var ar vro a so kenteliou a ro deomp providans Doue. Diskuez a reont deomp on eus izom da c'houlouen trugarez, on eus izom da zistrei oc'h hor C'hrouer ha da viret guelloc'h he lezen.

G. M.

Rom. — Ar pevare a viz here, deis gouel Sant Fransez Assis, ar Pap, goude beza clevet ali ar gardinalet hag ar re en doa galvet evit an afer-ze, en deus discleriet e c'hallet, ep aoun, cas var araog ar prosez evit canoniza an daou zen eurus Paul ar Groas ha Leonard a Bors Mauris. Laket en deus lenn an daou scrit roet gantha evit kementse. Roet en deus c'hoaz scrijou evit tud santel all a so hano ive da ganoniza, evit discleria eo guir burzudou great gantho.

Ar zoudardet eat eus a Frans da Rom, a so digouezet iac'h, hag a so great eun diguemer ar c'haera dezho, evel ma on eus hen lavaret er sizun dremenet. D'ar pevar varnuguent a vengolo, vardro pemp heur dioc'h ar pardaez, ar zoudardet a voa en em renket var unan a blasennou kaer, hag hon Tad Santel ar Pap so eat da rei dezho ar venediction abostolic. Ar zoudardet o doa c'hoanteat kementse, ha Pii Nao en deus roet dezho ho goulouen. Goude beza ho benniguet, en deus lezet an ofiserien da zont da boket d'he dreit. Ar c'hommandant a lavare d'ar Pap ho hanoioù, hag ar Pap a lavare eur guer mad bennag da bephini anezho, hag a roe ive da bephini anezho eur vedalen.

Deis gouel Sant Fransez, pehini a voa en em c'hreat paour evit Doue, ar Pap en deus roet eul lein d'ar beorien. Evelse, e creiz he baourentez he unan, Pii

Nao ne ancounac'ha ket an dud izomec, pere a so dreist ar re all memrou Jesus-Christ. El lein-ze ne vez diguemeret nemet peorien.

Marseil. — An Aotrou'n Escop Plas, nevez digouezet e kerbenn he escopti, so bet eat da velet ar re glan en hospitaliou, rag ar c'holera so er guær-ze. Oc'h ober he dro dre ar zaliou, e tigouezaz gant guele eun den clan, dare da vervel, mes pehini en doa c'hoas gouscoude he anaoudeguez. An den-ze en doa bet he zacramanchou, mes n'oa ket bet couzemennet, hag e pedaz an escop da rei dezhan ar gouzemen. An Aotrou'n escop a roas buan dezhan he c'houlouen, ha setu penaus en deus an Aotrou Plas commanset ober he garg a escop.

Auch. — Er guær-ze, evit Pasc ar vugale, ez eus guelet eun dra hag en deus great plijadur d'an oll. Ar jeneral *** en devoa eur verc'h oc'h ober he Fasc kenta. Mont a reas da gaout an Aotrou Person evit gouzout digantha pehini oa ar verc'h paoura a dlie recco he Doue er memes dervez gant he verc'h. Ar jeneral en em gargas da visca ar verc'h paour-ze, ha deiz ar gommunion e reas he c'has hag he c'herc'hat eus an iliz e carroz e kichen he verc'h he unan. Ar plac'hig paour-ze a dremenaz an deiz oll e ti ar jeneral pehini a voa bet en iliz keit hag ar vugale.

Ar c'holera a ra ato distruch e meur a leac'h. E Beljic e talc'h ato da skei eun niver braz a dud. Bez'ez eus dreist oll eno eur barrez eleac'h ma en deus sammel cals, hag eleac'h ma o deus an dud kemeret kement a aoun razhan, ma tilezont ho c'herent tosta zoken kerkent ha ma crog ar c'hlenvet enho. Ne gred mui den mont var dro an dud clan nemet person ar barrez, ar medesin, hag ar c'hoarezet so eno oc'h ober scol, evelse emaint ive nos deiz e tal gueleou ar re glan. N'eus nemetho evit cas d'an douar ar re a varf. Eur c'halvez zo hag a gred c'hoaz ober archedou, mes pa en devez great an arched, hen laca var an hent, ha neuze ar beleg hag ar medesin her c'hemer ac'hano, a laca an hini maro enha, hag her c'has d'ar vered var eur c'hraz. Ar beleg hag ar medesin a zoug evelse ar c'horf maro en eur lavaret pedennou an anaoun.

Eun dervez gouscoude e tigouezas sicour gantho. Eun aotrou braz nevez deut da chom en eur maner en deus er c'barter-ze, en em gavas da dremen pa edont evelse o touguen eur c'horf maro d'an douar. Kerkent e reas d'ar beleg discregni hag en em lakeas en he leac'h. An Aotrou mad-ze eo an Aotrou Merod, n'eus ket pell ministr hon tad santel ar Pap. An Aotrou Merod ne ean da redek da velet tud clan ha da gas aluzennou e kement leac'h ma zeus izom.

Kementse a zigas da zonc'ha eus eur mansoner a Bariz a voa o labourat e Viterb pa grogas ar c'holera eno. En em lacat a reas da zervicha ar re glan, hag ez ea ive nos deiz da renta dezho an oll sicourou a elle. N'eus ket pell e velaz o tont er c'halatrez ma ema o chom enhi, an

Aotrou Merod carguet gant hon tad santel ar Pap da zigas dezhan eus he hers croas sant Sylvestr. G. M.

HISTOR ZANTEL,

TENNET DIVAR LEVR'ANN EXOD (4).

(Pennad kenta).

Bugale Jakob sklaved en Egipt.

Setu ama hanoioù bugale Israël pere a zeuz d'ann Egipt gant Jakob, galvet gant ho breur Jozeph; pep hini anezho a zeuz gant tud he di.

Ruben, Simeon, Levi, Judas, Issakar, Zabulon. — Benjamm. — Dan ha Nephtali. — Gad hag Aser.

Ann holl dud-se eta, euz a vouenn Jakob, a oa dek ha tri-ugent anezho. Jozeph a oa dija o chom en Egipt, hag en devoa daou vab, Manasse hag Ephraim.

Bugale Israël a greskaz, eme ar skritur, evel ma vrous ar c'hoat, evel ma tihad ar pesked er mor; ha tri-ugent vloas goude maro Jozeph, e karghent dija ann Egipt, hag ho galloud a zeue braz. Ar c'hresk dispar-ze, eme Zant Aogustin, a oa eur c'hras a roe Doue d'he bopl, hag a verke ar c'hresk burzudusoc'h c'hoaz a dlie c'hoarvezout e iliz Jezuz-Krist pa zeuje ar gristenien d'en em skigna dre ar bed. Sulvui e vijent lazet hag hiskinet gant prinsed ann douar, sulvui e kreske ann niver anezho. Goad ar verzerien a oa eun had kristenien.

E keid-se e savaz var ann Egipt eur roue nevez, ha na rea stad ebed euz madoberou Jozeph, nag euz he dud. Hag e lavaraz d'he bobl: setu bugale Israël deuet da veza eur bobl braz, ha krévoe'h eo evid-omp-ni. Deuit, goaskomp hen mar d-omp fur, gant aoun n'e greskfe muioc'h c'hoaz; ha mar savfe brezel en hon enep, n'en em lakafe a-unan gant hon enebourien, ha goude beza trec'het ac'hanomp, ne d-afe kuit euz ar vro.

Lakaat a reaz eta var-n-ezho mistri-labour d'ho goaska dindan re veac'h. Al labourou diessa hag ar re ziveza a vije d'ezho; ober brikennou, meska pri-raz, darbari d'ar vassounien. Hag e savjont da Pharaon kerioù kré da ziuall he denzorioù, Phitom ha Ramesses. Mes sulvui e voasket var-n-ezo, sulvui e vodenent hag e kreskent. Hag ann Ejiptianed ho doa laz out-ho, hag ho zrubulie muia ma hellent, oc'h ober c'hoaz goab anezho.

Hoghen ar roue, o velet ne c'houneze nétra gant he labourou, a c'halvaz d'he gavout amieghezad ann hebreed, hag a lavaraz d'ezho: pa'z eot da voulioudi ar gagez hebre, mar bez eur map, lazit-hen; mar d-eo eur verc'h, mirit-hi.

Mes ann amieghezad ho doe aoun rag ann Aotrou-

(1) E brezounek: *Levr ann Teac'h*, dre ma tesk d'eomp e pe zoare, leac'haz ar bobl a Israël euz ann Egipt evit dont d'ann Douar-Santel.

Doue ha na rejont ket ar pez a oa goude hemeunet d'ezho gant ar roue. Mirout a rejont ar baotred. Ar roue ho galvaz da zont d'he gavout hag a lavaraz d'ezho: Pa pe zonz emaoc'h-ha oc'h ober ar pez a rit, oc'h esperne evelse ar baotred?

Hi a respontaz: Ann Hebrezed n'int ket evel gagez ann Egipt; goulioudi a reont ho-unan hag abanz ma ec'h arruomp enn ho c'hichen, eo bet ar c'hrouadur. Ne ouient ket e oa pec'hed lavaret eur gaou, memes evit mirout ouz eun dronk. Ha d're'n abeg ma ho doa bet doujanz Doue, Doue a reaz vad d'ezho, hag a zavaz huel ho zi dre binvidighezou hag eul lignez etruz.

Pobl Doue a greske ato, hag a zeue galloudek meur-bed. Pharaon eta a c'houe hemennaz ma vije taolet ebarz er ster kement paotr a vije ganet d'ann Hebreed, ar merc'hed hepken a vije miret. Petra dal da furnez ann dud klask enebi oc'h furnez Doue? Pa fell da Zoue savetei he vignoned ha kas da benn he venesioù, ne ket finessaon ann dud fall a vire, he velet a ramp hed ann histor vuzuduz hon euz da gouma. H.

BUEZ AR PLAC'H DEVOT ARMELA.

Armela, o veza deut a benn da ober nebend a gagez euz an istim a read anez-hi couls hag euz ar ventou d'ha roet d'ez-hi, a denaz ive da gaout dismegant evit an oll draou diaveaz. He c'halon distag a bep tra, a gave eul levnezh vraz oc'h en em gaout en dibourve, rag ma c'helle guell a-ze rei he oll c'harantez da Zoue. Evid-se e pedaz he c'honfessour d'he lezel da rei kement a c'houe neze d'ar beorien. Lavaret e voe d'ez-hi ne roje ne med an dederen euz he c'hommandant bep bloaz, hag ober a eure er giz-se, betec ar bloaz 1651. Mez neuze e zeaz da servicha evit netra. Euspenn an dederen-ze, e roe c'hoaz d'ar beorien kement liard ac'hella da zestun. Kement a carie an dud ezommec vraz, ma dije c'hoaz, bep tro ma ho gouete da n'em simead ho zveid evit e nori en ho fersonaj hor Salver beniguet. Er bloaz 1656, goude beza goulenet meur a vech digant he c'honfessour, e reaz ar van da veza re simpl evit guelloud labourat, hag e pedaz he mestrez da glask eus servicherezh all. Evit lacad he mestrez da blega, e c'houlennaz beza dale'hed en ti evid he boued ebken. An Itron a asantaz gant-hi, hag Armela a n'em gavaz euzuz da vev eb caout netra etre he daouarn. Mez pevar bloaz da c'houde, e reaz c'hoaz caeroc'h. An deiz diweza a vij guenver euz ar bloaz 1655, e reaz veu a-baourentez dre ali he c'honfessour, e parlouer couent an ursulinezed, dirag an Tad Lesseau, person scolach ar Jesuisted. Euspenn an Tad-ze a rene neuze ar scolach e leac'h ar guir Superior, ez oa eno c'hoaz superioez ar gouend ha diou Leanez-all. Setu aman comsou Armela:

« En hano an Drinded adorabl, hag en hano hor Salver Jesus-Christ, va guir garantez, e ran veu da zervichel ar vrasa paourentez: en em ziober a ran euz a guement tra zo bet var va hano bete vieman. Ne gu-

« merin iviziken, nemed ar pezh a roffet d'in, Mam su-
« perioez (en eur drei dioc'h out-hi) dre aluzen en
« hano Jesus-Christ. » Ar Superioez a lavaraz d'ez-hi
e kemere he vœu en hano Jesus-Christ, hag e roe d'ez-
hi dre garantez evit Doue, an dillad e doa digasset gant-
hi. Lavared a reaz c'hoaz d'a Armela kemer he boued
hag he dilliad evel eun aluzen great d'ez-hi en hano hor
Salver Jesus-Christ.

Tud ar bed o deuz poan o velet peguen caer eo dirag
Doue eur baourentez ken braz. Jesus-Christ, an Ebestel
hag an holl zent o deuz cared ar baourentez. Calon an
dên, distag euz madou ar bed-man, a gav essoc'h a-ze
an hent a gass d'an Env.

Araok ober ar vœu-ze eta ar plac'h santel man, a
c'houlennas adare ali he c'honfessour, rag ne rea mor-
se netra euz he fen he-unan ! Ganed ez-oa gand eur sen-
tidiguez vraz ; hag adalec he bugaleac'h en eun sante
dougnet d'a senti eb goulenn perag. Sulvui e zea en oad,
sulvui e vele peguen dangeruz eo heuil ar pen an-unan ;
ha sulvui he ene a ioa deut da veza caer dirag Doue dre
he santelez, sulvui e vele peguen talvoudec ez-oa d'ez-
hi ober e pep-tra ar pezh a vije merket d'ez-hi e kenver
he devosionou, he finijennou hag he foanniou. Ken en-
crezuz en em gave var guement-man, m'a ne roje morse
d'ez-hi he-unan eun taol disiplin en tu-all d'ar pezh a vije
merket, peguen braz benag e vije he c'hoant d'a n'em
gastiza. En dervechou m'a ne c'helle ket communia dre
urs he c'honfessour, ne dije biken communiet hag e vije
deut eun eal e-unan d'he c'hommunia. Petrabenag he
c'hoant da ziguemer Jesus en he c'halon a ioa braz meur-
bed. Ne oa ket nebeutoc'h sentuz e kenver he mistri ;
rag biken ne raje an distera tra eb ho lavar. Dre vertuz
ar sentidiguez vraz-ze, Armela a lakeaz da zont da veza
talvoudeg d'ez-hi evit rouantelez an Env, an oberou dis-
terra euz he buez.

Evit guelad peguen caer ha peguen santel ez oa buez
ar servicheurez-man n'euz nemed sellad euz ar pec'he-
jou bian a rea ar muia poan d'he spered : eur goms pli-
jaduruz lavared evit c'hoarzin : eun disterra en dije
distroet he spered euz Doue : Eur banne dour pe eur
c'hinaouad vara kemered goude eul labour denn ; ar
c'hoant da lavared eur goms rust d'he mest iaouanc,
deut da veza egazuz dre eur c'hlenved en doa, ha c'hoaz
evid he vad : beza great eul loden euz falla dillad he
mestrez goz, maro er bloaz 1656, roet d'ez-hi, e leac'h
beza guedet ma vije great al loden-ze d'ez-hi gand re-
all : Beza cavet mad ez-oa roet d'ez-hi evit douguen
caon d'an itron-ze, eun habid saved a vezer mad. Beza
en em glemmed, ha c'hoaz gand eul lealded vraz, hag
eur vech ebken en he buez, dre ma ne vije ket roet
d'ez-hi eun dra ezommed-braz : beza laked en he spe-
red n'ez-ec ket eun devosion, hini eur plac'h a ziskuez
beza santel petra benag he buez ne deo ket direbec'h
avouallac'h : Setu pec'hejou brassa Armela, setu ar
pezh he deuz he laked da skuil kemend a zaelou c'houero,
ha da ober pinijennou ken rust ha ken caled.

Ne oua ket avouallac'h evithi ar poaniou hag ar

c'hlenvejou a vije digasset d'ez-hi gand Doue ; kared
rea kement ar poaniou-ze, ma dije clasked re-all calz
brassoc'h, penefe he c'honfessour a deue aliez d'he diar-
ben, oc'h ober d'ez-hi en em voderi. He finijennou ne
vijent anavezad nemed gand he c'honfessour ha Doue
ebken. Eur hoan ar vrassa a guemere evit kuzad ar goad
a lake da redez euz he c'horf an taoliou disiplin pe
scourjerez.

Doue a lezaz gant-hi eun enebour da vrezellecad : an
enebour-ze a voa an tech da glask he zezant var meur-
a-dra, ha tam en oll direfuz var he boued. Treac'h e
voue ato d'an enebour bilimuz-ze. Morse ne deuz bet
leac'h da gaouet netra da n'em rebech var gement-se. E
kenver he bouet, ne sonje tam en-hi-he-unan nemed
goude beza roed ar pep guella d'ar re-all. An holl a gave
sonezus ec'helje beva gand ken-nebeud a vagadurez ha
c'hoaz ken fall. Petrabenag ma vije bepred treac'h d'he
zech e teue cousgoude aliez da leuskel daelou dre ma
ne c'helle ket her mouga, ha dre ma ranke bep mare o-
ber d'ez-hi brezel. En divez Doue a vrurunaz ar Phi-
listin, n'hen doa lezed en eun douar a garie kement,
nemed evit rei tro d'he servicheurez santel da c'hounit
kement a gurunennou hag a victoriou dre he ners pa-
duz er brezel.

He ene caer ha santel, laked pinvidic dre guement a
vurzudou a roe d'he diaveaz eun dra benag henvel euz
traou an Env. Kement ze a rea ma vije clasked ha caret
gand an holl. He doare ken dous henvel euz hini an e-
lez a zave var zu Doue an holl sperejou ha calonou he
guele. Ker sioull e vije ato, ma-ne gozee morse eb izom,
ha c'hoaz e ber gomzou. Kement ne parlante ket a
Zoue azisplije d'ez-hi, ha ne ouie ket penauz enecou crou-
et gand Doue, a helle sonjal e netra all ebed nemed en-
han. Da c'houde, pa deue d'ez-hi kleved parlant divar
benn traou vean, ne rea van ebed d'har c'homzou, hag
e lakea he spered da drei oc'h Doue. Ne rea van en oll
euz an traou ne zellent ket outhi, ne guemere ket an
disterra plijadur o cleved an nesventionou. Doue, he ga-
rantez hag he vadelez, setu var betra e carrie cleved
parlant, pe parlant hi he-unan. T. B.

AR ZUL.

Lavaret em beuz d'eoc'h, ma mignoned ker, er
gentel diarang, penauz gwechall goz ar zadorn eo a
voa deiz an Autrou Doue, ha kemment-se a zo bet
padet pevar mil bloaz, beteg Jesus-Krist. Abaoue
Jesus-Krist, ar sul eo a zo deut da veza deiz an Au-
trou Doue.

Piou en deuz greet ar jenchamant-ze, taulet ar
zadorn a gostez ha lakeet ar zul en he tech da zeiz
santel?

An Ebestel ho-unan, nebeud goude ma voe pignet
or Zalver Jesus-Krist ebarz en Nenv.

Ag euz ho fenn ho-unan eo a rezont ar jenchamant-ze?
Nan. Ar Spered-Santel he-unan a inspiraz d'ezo hen

ober, a lakeaz en ho spered tanler ar zadorn a gostez
ag ho dougaz da gemmer ar zul en he tech da zeiz
santel.

Perag? Perag ar zul kentoc'h egued eun deiz-all?

Abalamour da zaou dra dreist pep-tra : 1° Abala-
mour da zul eo e savaz Jesus-Krist euz ar bez leun
a vuez (d'ar Zul Fask) ; 2° abalamour da zul (da
zul ar Pantekost) eo e tiskennaz ar Spered-Santel war
an diskibien all, pere en em gave gan-t-ho er Gam-
blid, da lavared eo, er zul vraz e peini Jesus-Kris-
ten devoa greet ar pask gant he Ebestel, araüg kom-
mans he basion (Kamblid a zo greet euz a ziou gomz,
euz ar gomz kampr pe kamp, ag euz ar gomz lid,
lidou. Lid, lidou a ziniñf seremoni, seremoniou).

Or Zalver eta a resusitaz da zul, pe ec'hiz ma la-
vare an tadou koz, a zazore'haz da zul. Hogen, re-
zurreksion pe dazore'hidigez or Zalver eo ar brasa
euz he oll vurzudou, an ini en deuz lakeet ar ziel
war he oll vurzudou all, war gemment en deuz greet
ha lavaret en he vuez. An diskenn euz ar Spered-
Santel war an Ebestel ha war an diskibien all, a zo
ivez eunan euz ar brasa grasou e deuz resevet an Iliz
euz an Nenv. Setu perag eo fallet da Zoue e vize
lakeet ar zul, e peini deiz e voa greet ar burzud-ze
ha resevet ar c'hras-ze, e vize lakeet ar zul, a lava-
ran, da zeiz santel, evid ma c'halze ar gristenyen
dre enno kaout muioc'h a amzer da zonzal en daou
vister bras-se euz ar Relijion, dele'her gwelloc'h sonj
euz anezo ag ho honori muioc'h dre ho azistans en
ofisou.

Setu ama petra a lennom en eul lizer a scifaz Sant
Barnabaz d'ar gristenyen euz he amzer. — Sant Bar-
nabaz a voa diskib d'an Ebestel, ag a heulaz an abos-
tol Sant Paul en he veachou abostolig evid he zikour
da brezeg an Aviel. — « Tremen a reom ar zul, »
emez-ha, « en eul levenez santel, her miret ag her
» santifia a reom gan joa, o veza ma eo an deiz e
« peini eo savet Jesus leun a vuez euz a douez ar
« re varo. »

Ha ni ive, ma c'henvroiz ker, greom ec'hiz or breu-
deur kristen euz an amzer goz, ec'hiz an dud fidel
euz a amzer an Ebestel, tremenom ar zul en eul
levenez santel ag her zantifion mad. Room d'or c'horf
eun tam hean, lezom aneza da ziskuiza, da zul (la-
houret a-woale'h en deuz epad ar c'houec'h devez all
euz ar zizun), ha tremenom an deiz santel gan on
Tad peini a zo en Nenv, en he zervich. Ia, pa zeu
ar zul, savom or c'hein, daoubleget epad ar zizun,
ha kemmerom buan penn an ent da vont da di Doue,
d'on iliz parrez. Na glevit-hu ket mouez ar c'hloc'h
oc'h ho kelver? Deom da renta d'hor C'hrouer ha
d'on Tad karantezuz on deveryou a vugale vad. Deom
d'he di binniget da adori aneza, d'hen honori, d'her
meuli, da gana gan ar beleg he gantikou santel. Deom
da zelaou komz euz aneza ag euz ar gwiryonezou euz
he Aviel, er gador-brezeg. Epad ar zizhun n'or beuz
nemeur klevet parlant nemed euz a draou ar bed-ma.

Ha ne dle ket beza mall gan-eom gwelc'et ar zul o
fout, evid ma klevim parlant euz on Tad peini a zo
en Nenv, euz he garantez evid-om, euz ar baradoz,
or guir bro, da beini euz om galvet oll da vont, goude
ar maro?

Deom da drugarekaat aneza euz an oll grassou, euz
an oll vadoberou, ken evid or c'horf, ken evid on ene,
pere or beuz resevet digan-t-ha epad ar zizhun. N'ed
om netra nemed dreiz-ha ; ne ouffem netra eb d'ha.
Piou ac'hannom a zo goest da ober eur c'hreunenn
ed, eur c'heotennig? Mar tebrom bara, piou hen pour-
vez d'eom? Ma or beuz dour ha traou all da efa, ma
or beuz eur c'hrez, euz tam dillad bennag da droi
en dro d'eom, piou a ro d'eom kemment-se? Piou
a fournis d'eom an danvez da ober anezo? Piou a
laka eost da zont en hor parkeyer, frouez e gwez or
jardinou ag or gwerjezou, ruskenn war ar ganabenn
ha war al lineun, geot en or prajeyer evid maga on
anevaled? Piou a laka ar c'heotennig puret ha disva-
let gan ar veoc'h, d'en em droi e leaz en he divron.
A ! na dall eo an den, peini na web ket en traou-ze
oll dorn karantezuz an Autrou Doue o pouvezi d'on
ezommou ! Na yen, na digar ha dinatur, n'ed eo ket
neuze he galon e kenver an Tad-ze, ker mad ha ken
din da veza karet, meulet ha trugarekaet ! O ! ma c'henv-
vroiz ker, na vezom ket euz a niyer an dud dall ha
digar-ze. Gwelom ag anavezom madoberou an Au-
trou Doue en or c'henvr, meulom ha trugarekom
aneza bemdez, mes da zul ispisjal, o vont d'an ofi-
sou, e-pelec'h ec'h allim en em eunani gan or Zalver
Jesus-Krist, evid meuli ha trugarekaat gan-t-ha ha dreiz-
ha, ag evel-se en eur feson parfotoc'h, he Dad eter-
nel, or C'hrouer ag or Madoberour.

Y. K. KENZALE, Beleg an Zalet.
(Eur pennad all eur wechall.)

An daou zorn bras.
(EUL PENNAD.)

Setu eta Colait en hent. An ezen vintin a ioa fresc
hag a zigasse da gaout ar fri c'huez mad ar bleuniou.
An alc'houeder a zave en eur gana hag en eur grial oc'h
Per digueri dezhi, hag evel ne zigore ket e tiskenne
d'an douar en eur bec'hi. An amzer vraz ha fresc-ze a
zidanaz eun nebeut peñ ar potnic. Eana a reas da
vouela, mes he galon en he greiz a biolamamas o hoz
eur pennad mad. Gousec'he he d'istidiguez a iea kuit
dre ma pellea dioc'h ti he vam. He spered en em astenne
var an amzer da zont, hag e vele pep tra caer enha.
Sonjal a rea pebez dudi e vije evit he galon distret dre
ar memes douarou, ar memes prajeyer a dreuz brema,
ha kementse pa en divije destimtet peadra da veza
dizoursi, he vam hag hen.

Var guementse e teuas levenez en he galon, hag en
em lakeas da vousecan en eur vont gant an hent evit

diskuez dezhan he unan n'en doa ket aoun hag oa eur potr courachus.

Emberr, pa edo o treuzi eun draonien goloet a vleu-nion hag a louzou c'huez mad, setu hen o velet a dreuz ar venoien ma kerze dreizhi, eur goumoullen louet ha moguedus. Euz ar goumoullen e teue eur pez crabanou, daou zorn bras, bras divent, hag en em astenne eno digor var al leton. Colaie a voue souezet meurbet; gouscoude n'en devoe ket a aoun. O veza chomet a za, e clevaz eur vouez hag a gave dezhan a deue eus ar goumoullen :

« Colaie, eme ar vouez-ze, n'as pe ket aoun; me anavez da zonzou ha a so deut d'as sicour. Dalc'h mad da garet al labour ha da veza aketus, ni as tifenno. Den n'hor guelo nemedot da unan, ha bevech ma pezo izom, ni en em gavo evit renta servich dit. Bale-ta dienez; digor eo an hent dirazout evel ma zeo digor dirag kement hini o deuz ijin. »

— Bennos Doue, daouarn mad, eme Golaie en eur denna he dog. Me gred e claskit va mad, rag re vian oun evit ma clasfac'h ober droug din, ha bete vrema em eus gulet ato ar re vras ha galloudus o tifen ar re vian ha diners. — An daou zorn a ieas en ho zro, ha Colaie en em lakeas adarre da vale.

Ar burzud-ze a laoueneas kement ar potric mad, ma lame ha ma tanse en eur vont. Morse, e creiz he c'hoariou n'en doa bet kement a blijadur, n'oa bet he galon ker scanv.

Etre daou an deiz a iea ebioù, ha Colaie a valee gous-tatoc'h. Ar skuisder a grogue en he zivesker. Gourvez a reas var al leton, he zaoulagad savet gantha da zellet ous an Env, hag e vele, o tremen a zioc'h he benn, ar c'houmoul griz pouzlet gant an avel dindan an oabl glaz.

Epad ma edo evelse oc'h ober he ean, e cave dezhan clevet eun trouz henvel oc'h ar gurun o crozal. Silaou a ra piz, hag e vel ema an trouz-ze tost dezhan, ha ne ket eus an euv eo e teu. Sevel a ra da vont etrezeg ma clev an trouz. Digouezout a ra var ribl eur ster pe eur frount; eun dour braz hag a eonenne gant an tiz a voa varnezhan.

Penaus treuzi ar ster-ze? Peleac'h caout pont pe eun dra bennag evit mont en tu-all? He galon a fazias da Golaie. Azeza a reas eno da zellet oc'h an dour, skuis maro hag an daelou en he zaoulagad. Kerkeht setu unan eus an daou zorn braz o tont, o cregni enha goustadic, hag oc'h he lacat ep poan ebet en tu all d'ar ster.

— Ho trugarecat, va dorn mad, eme ar potric; mes an dorn n'her guele mui. Mes gouscoude oa deut al laouenidiguez dezhan adarre, rag gulet a rea e teue e guirionez an daouarn bras d'he zicour pa en deveze izom.

Ep dale e tiguezas gant eur c'hoat bras. Ar c'hoat-ze a voa enha guez huel, ha keuneut ker stang, hag ar scourrou griet en eun doare ne alle den tremen dreizho. Colaie a felle dezha evelato mont var araog. Esper en doa da gaout sicour mar bize red. Troc'ha a ra eur vaz

teo, hag en em laca da skei a ziou hag a gleiz var ar scourrou evit ober guenoden. Epad ma ze evelse guella ma c'helle, e clev eur iudaden c'houez ha scrijus a dost dezhan. Chom a ra crenn a za en eur grena gant he aoun. O sellet etouez ar c'heuneut e velas eur picol bleiz o tont eun dezhan.

Me ho les da zonzal pebez spont evit ar potric kez pa velas al loen criz-ze, discrognet he zent gantha, hag he zaoulagad ruz evel daou guet tan! Sonjal a rea dezhan oa great gantha, hag ec'h erbede he ene paour oc'h an Aotrou Doue, pa velaz an daou zorn braz o tont euz a douez ar guez. Unan anezho en em lakeas etre ar bleiz hag hen, hag eguile a grogas evel eur voaskel el loen fero hag her mougas.

Colaie en em dolas neuze d'an daoulin da drugarecat Doue a greiz he galon; rag gouzout a rea ervad edo Doue adren an daouarn-ze, eo Doue ho digasse dezhan. P'en doa great he beden, an daou zorn ne voant mui eno. Dare gant ar skuisder, e sonjas chom eno da dremen an noz, hag e tigoraz ar bissac'hig eleac'h m'e doa he vam laket dezhan ar pezig e doa gallet caout a vouet. Rag kement a draou burzuduz a voa digoezet gantha en deiz-ze, n'en doa ket c'hoas sonjet dibri tam. G. M.

AN TAD DIFEIZ.

(EIL PENNAD).

Ar verc'h a dolaz he dorn var eul levric, eur golo alaouret varnezhan, hanvet: *Testament nevez hor Zalver Jesus-Christ*. En em lacat a reas da drei eun nebeut follennou, hag e vele merket e commansamant ar pennadou. *Guinivelez Jesus... An tri Roue a zao-heol... Jesus o tec'het en Ejipt... Bugale Bethlem laket d'armaro... Jesus o tistrei eus an Ejipt...*

— Oh! emezhi, nag a draou caer! pe seurt levr eo hema?

— Ar Scritur Sacr eo, eme ar marc'hadour, hag eul levr ar c'haera evel a velit.

Ar plac'h iaouanc a brenas al levr, hag her paeas ker. Ar marc'hadour a ieas kuit laouen; caout a rea dezhan en doa great eun taol caer. Mes ar verc'h e devoa great c'hoas caeroc'h taol.

Epad meur a zervez, ne dennas ket he daoulagad divar al levr, mes e euz eo hel lenne, rag eun dra bennag a lavare dezhi ne dlie ket plijout al levr-ze d'he zad. Toma a rea he c'halon o lenn an Aviel. Dreist oll e prezeguen hor Zalver var ar menez e cave guirionezou ha ne doa clevet morse hano anezho gant he zad, hag e chome aliez pennadou mad da zonzal er pezh e devoa lennet.

Ar parabolennou a blije cals dezhi; mes pa zigouezas gant histor ar C'halvar he c'halon a voue ken tenereat ma scaillas eur mor a zaelou. Tremen a reas evelse meur a zervez hag ive meur a nosvez, rag en noz e teue ar zonc' eus an traou-ze, nevez evithi, da garga he ene.

An tad a deuas erfin da anaout e tremene eun dra bennag a nevez e speret he verc'h. Eun dervez, goude beza chomet eur maread da zellet outhi, e lavaras dezhi:

Marc'harit, emezhan, me n'hes cavan ket brema henvel oc'h kent, n'hes kuellan mui o c'hoarzin laouen evel diaraog; avechou zoken e c'huanadez o sellet ouzin. Eun dra bennag a dremen enhout ha ne ellan ket gouzout petra eo.

Ar verc'h a jomas enn nebeut ep lavaret guer. Abenn eur pennad e lavaras, mes en eur grena eun nebeut: — Va zad, ha sonch oc'h eus-hu eus ar pardaez vez-ze ma edomp hon daou el liors o sellet oc'h ar stered?

— Meur a vech eo bet digouezet an dra-ze ganeomp. — Ia, mes en nosvez-ze an oabl a ioa ker glaz, ar stered a ioa ker gae, ker skedus! An env a ioa ker caer azioc'h hor penn!

— Mad, ha goude?

— N'oc'h eus-hu ket a zonc' e c'houlennis diganeoc'h ha ne voa ket unan bennag dreist ar stered hag en doa great an oll draou caer-ze hag a zalc'hé anezho pephini en he reng, hag ho lakea da vale ha da drei ep steki an eil oc'h eguile, hag e leverjoc'h din eo an natur eo a rea an traou-ze evel ma rea d'ar guesot ha d'ar guez sevel var an douar. Kementse ne blije ket avoalc'h d'am speret, mes hirio me voar piou, me voar eo Doue en deus great, en deus crouet an traou-ze oll.

— O clevet he verc'h oc'h henvel an Aotrou Doue, ar pezh en doa poaniet kement da guzet outhi, an tad a voue sebezet hag a ieas droug enha.

— Pion, emezhan, en deus desket deoc'h an hano-ze?

— Den ebet. En eul levr em eus hen desket.

— Hag al levr-ze peleac'h ema?

— Setu-hen aze, mes en hano Doue, n'hen lamit ket diganen, rag re a vad en deus great din.

— Ha piou en deus roet al levr-ze deoc'h?

— Den, n'en deus he roet din, he brenet em eus digant eur marc'hadour a dremene eun dervez ebioù d'am frenest.

Eur marc'hadour? éme an tad. Daoust ha guir e veza e ra Doue goap eus a zonzou an dud? Mad, emezhan d'he verc'h, petra ac'h eus te desket el levr-ze? G. M.

Hano ar Zant evit ar Sizun-ma.

DILLUN, 29 here. — Santez Ursula hag he c'hompagnonezet, merzerezet.

DIMEURS, 30. — Eus an deiz.

DIMERC'HER, 31. — Iun an oll zant.

DIZIOU, quenta Du. — Gouel an oll zant.

DIRGUENER, 2. — Gouel an anaoun.

DISSADORN, 3. — Sant Guinal, abat.

DISSUL, 4. — Pevare varnuguent goude Pantecost. Gouel ar Relegou. *An Aviel hirio:*

Jesus a lavaras d'he ziskibien: Me hen lavar deoc'h, va mignonet, n'o pet ket aoun rag ar re a laz ar c'horf, ha n'o deus ket a c'hallout da ober droug ebet goude.

Hoguen me a ziskuezo deoc'h rag piou e tleit caout aoun: ho pet aoun rag an hini pephini, goude laza ar c'horf, en deus ar c'hallout da deleur en infern. hemez eo, a lavaran deoc'h c'hoaz, eo a tleit da zouja.

Ha ne ket guir e roer pemp filip evit daou ziner, ha gouscoude Doue ne ancounac'h aieun anezho? Bleo ho penn zoken a so contet oll. N'o pet ket aoun eta, hirroc'h a dalit evit eur vanden filipet.

Lavaret a ran deoc'h: Kement hini am anzavo dirag an dud, map an den ive hen anzavo dirag alez Doue.

(SANT LUCAS. XII. 4.) G. M.

KELEIER.

An Aotrou Sez nec, vikel e Cathedral Kemper, so hanvet beleg scolach Sant-Jorj, e Brest.

An Aotrou Jaouen, vikel e Primelin, so hanvet vikel e Cathedral Kemper.

An Aotrou Dreo, bet vikel en Trehou, so hanvet vikel e Primelin.

Setu ama an niver eus ar jureet, e departamant Finister, evit ar bloas 1867:

Arrondissement Kemper en deus naonteg ha pevar-ugent;

Arrondissement Castellin, c'huec'h ha pevar-ugent;

Arrondissement Kemperle, nao ha tregont;

Arrondissement Montroulez, seiteg ha cant;

Arrondissement Brest, cant nao hag antercant;

Etre ar pemp arrondissement, pemp cant.

An Aotrou Cruice, bet escop e Marseil, a so maro en derveziou tremenet.

Ervez Cazeten ar Meziou, an ed n'en deus ket chenchet a briz er sizun-ma. Nebeut a glasc so bet, nemet var an edou da hada pere a verzer mad.

DOUREIER-BEUZ.

Unan eus ar re zo bet o cas sicour d'an dud paket gant an dour beuz a hed ster al Loer, a gomz evelen eus ar pezh en deus gulet:

Pa edomp o tistaga hor bag evit mont a hed ar ster, ouspen daou c'hant den divar ar meaz pere a voa var ar riz, hor pede, an daelou en ho daoulagad, da dremen dre ho c'heriou. Ar re-ze a voa deut, dre urs ho mistri, da zigas ho chatal da Orlean, hag abaoue tri dervez n'o devoa bet kelou ebet eus ho zud, eus ho graguez nag eus ho bugale. An oll bagou so o cas sicour, hag an dud keiz-ze ne ellont ket caout eur vag d'ho c'has d'ar guer. Chom a reont eno da zellet oc'h an dour pephini ne ouzer ket peur ho lezo c'hoas da vont etrezeg ho zud.

Ni a ia erfin dreist ar c'harziou. Mont a reomp dre douez an tiez var hent Sandillon. Ne velomp nemet toennou an tiez ha beg ar guez huel. An dud keiz pere n'o deus ket gallet tec'het, a zo en em dennet en astlach huella eus ho zi. Comz a reomp oc'h lod anezho.

— Ac'hann da be vare oc'h eus-hu bara avoalc'h?

- Ac'hann da vare'hoas da noz.
- C'hoaz oc'h eus c'hoant da gaout ?
- N'on eus ket izom brema.
- Pét den oc'h aze ?
- Pemp omp.
- N'eus ket a dud clan ?
- Daou a ioa ; mes eat int gant eur vag all.

Larcoc'h e clevomp tennou fuzil. Mont a reomp dreist eur voguer anter ziscaret da gaout eun ti. Eno ez oa tri den ha n'o doa tam bara. Teleur a reont deomp eur gorden, hag e stagomp eur bara outhi, hag hi her sach gantho.

Neuze e cavomp eun den var eun doare bag great gantha gant tamou coat stagnet an eil oc'h eguile Hema a voa abaoue tri dervez chomet he unan en eun ti. Lavaret a rejomp dezhan dont en hor bag. Respont a reas deomp n'en doa ket a naoun, hag e crede ez aje d'an douar var he damou coat.

A veac'h on doa tremenet hema, ma cavomp eun all var eur voguer ; en he za edo ha couls lavaret en noaz.

— Petra rit-hu aze ?

— Ne ellan na mont na dont. C'hoant am boa da vont hed ar voguer-ma d'ar verouri. Mes ama eo coezet ar voguer, ha me ne ouzon ket neun. An den-ze a voa var ar voguer-ze abaoue trivac'h heur. He gas a eljomp da zolier he di pehini ne voa beuzet nemet an traon anezhan.

E prenest eur c'hoz ti anter dizolo'e velomp eur vaouez coz pehini en em laca da grial ouzomp. N'eus nemet traou distrujet, traou discaret en dro dezhi. Ar vaouez kez a vouele. — Petra fell deoc'h a leverjomp dezhi ? Bara oc'h eus-hu ? Fallout a ra deoc'h dont ganeomp ?

— Ne ket emezhi, savetei va melons eo am boa c'hoant, n'eus chomet ganen nemetho. Tri dervez zo em eus ho zavet ama, ha brema ez eont da fall.

Kuitat a reomp ar vaouez-ze evit mont da gaout eun ti en he bart he unan e creiz an douarou. An ti-ze a voa en eun izelen. Dre ma touseamp outhan ne gavemp ket ar gouelet gant eur berchen a bemzec troatad. Tud an ti a astenne hag a hije lien guenn evit hor guervel, hag a grie : bara ! bara ! Ni zo ancounac'heat ama !

— Abaoue peur ?

— Abaoue deac'h vintin.

Eur bara so stagnet oc'h beg eur berchen da rei dezho, mes ar berchen n'oa ket hir avoalc'h. Unan ac'hannomp a voue tost dezhan beza beuzet o clasc tostet re. Eur c'hrenn baotr a deuas evit kerc'hat ar bara, mes coeza a reaz ive en dour. Abouez beg ar berchen e voue savet er meaz, hag e c'hellas cas ar bara gantha. Guelet a rejomp an dud keiz o lamet var an tam bara-ze. Dare oant gant an naoun. An tad a lavaras deomp : Deut d'hor c'here'hat pa deuot en dro, rag an ti a hij hag a goezo ep mar.

Setu aze ar pez am eus guelet. Dioc'h kementse ec'h allit barn petra so tremenet e leac'h all.

Pa em eus comanset da gomz eus an dour beuz, ez

an da lacat ama eur pennad lizer scrifet gant eul labourer douar o chom e kichen ar ster Sologn da eur mignon dezhan, bet guechall he amezeg, hag eat brema da jom da guichen ster al Loer eleac'h ma zeus guelloc'h ha pinvidioc'h carter. An den-ze a voa beuzet he zanzez, mes n'edo ket er guær pa zigouezas an dour beuz. Setu ama petra lavar al labourer douar-ze :

« Va mignon, clevet em eus petra so digouezet a hed ster al Loer. Ho merouri vrao so goloet gant an dour, hag anter distrujet. Ho perniou foen ha colo so eat gant an dour ; hoc'h ed dornet so casset da drempa douarou re all ; ho saout so beuzet ; oll eo eat ho tanvez da goll nemet ho kezeg hag ho tenved. Ho tud zoken so bet tost dezho chom da veuzi ; n'o doa ket kemeret an teac'h abred avoalc'h.

« Kementse a zigas da zonch din eus ar pez am oa guelet er bloaz 1856. Neuze e velis ster al Loer, ha crena a ran c'hoas pa zonjan. Daou droatad varnugent oa savet a zioc'h ar riz, da lavaret eo, hueloc'h evit hon ti-ni.

« Er mintin-ma e comzemp a guementse, an amezeg Clauda ha me. Clauda a lavare, brema ez eus c'huoc'h vloas, pa zejoc'h ac'hann, e reac'h goap eus ar Sologn, hag ac'hannomp-ni pere ne labouromp ama nemet tamic douar ama, tamic douar ahont. Lavaret a reac'h e voa kementse beza ato e kernebeudic.

« Gouzout a rit ez eus muioc'h da fizout e kernebeudic eguet en ho merouriou pinvidic. Ama on-eus avechou re a zour, morse avad ne vez beuzet ar vro. Clauda so savet eun ozac'h mad, hen eo en deus va allet da scrifa deoc'h ha d'ho pidi da zont ama ken na ellot mont adarre da chom d'ho tieguez. Me am eus labour da rei deoc'h ha d'ho tud. Douar brug am eus da drei, hag a roi labour d'ho kezeg. Ho kezeg a gavo ive creier. Hor c'hezeg-ni a lojo er meaz. Boaz int dioc'h kementse, hag an dra-ze ne rai ket a zroug dezho. Evit ho tud, ni a lojo daou ha daou, hag e vezo gueleou avoalc'h, hag oll e viot diguemeret mad. N'on eus, evel a ouzoc'h nemet bara du ha kistin ; mes beva a rer gantho, pa na vez ket guelloc'h.

« Mar plij deoc'h ar pez a guinnigan deoc'h, deut kenta ma c'hellot. Emaomp oc'h ho cortoz, hag ho liguemeret a raimp a greis calon. » G. M.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 20 Here.		PONTNABAT — 18 Here.	
Priz ar c'hant tiour.		Priz ar c'hant tiour.	
Guinis.	43 lur, 66 c.	Guinis.	42 lur, 92 c.
Segal.	9 lur, 48 c.	Segal.	8 lur, 54 c.
Eiz.	0 lur, 00 c.	Eiz.	9 lur, 00 c.
Ed-du.	6 lur, 25 c.	Ed-du.	6 lur, 77 c.
Kerc'h.	9 lur, 12 c.	Kerc'h.	9 lur, 00 c.
Avalou-douar 3	lur, 25 c.	Avalou-douar 3	lur, 00 c.

Ar Gerant : AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand Ar. DE KERANGAL, Moulter an Bacop.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezoune.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten a goust :

- Evit eur bloas DAOU SCOUET.
- Evit c'huoc'h miz EUR SCOUET.
- Evit tri miz C'HUOC'H REAL.
- Eur gazeten ebken DAOU VENNEC.

Ar baecamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Belec e Kemper.

Ar paeamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAN, ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou SALAN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 3 Du 1866.

Evit ar re a vev en dizurs, a ren eur vuez direol, ne fell ket dezho suja da lezen ebet, ar feiz a zo eur beac'h pouner, eur beac'h a behini e clascont dalc'h mad en em zizamma. Poania a reont guella ma c'hellont da vouga ar feiz en ho c'halon. Ober a reont evel an aer ha labouset a zo, pere pa o devez aoun, a guz ho fenn hag a gred emaint neuze ere dre na velont ket ar pez a ra aoun dezho. Ar re a vev en dizurs a glasc ive serra ho daoulagad ha stanca ho diouscouarn evit na velint ha na glevint ket ar gourdrouzou a ra ar relijion dezho.

Evit en em zalla, e clascont teleur var ar relijion, var an iliz he unan, ar blam eus a guement dizurs so er bed. Ni a gred penaus an darn vuia eus an dizurzion so var an douar a deu eus an nebeut a feiz, eus ar fals credennou so skignet etouez an dud. Guelet a reomp an iliz oc'h en em zavel, o vrezelecaat en dra c'hell a enep an dizurzion hag ar fals credennou-ze. Mad evelato an dud difeiz a lavaro deoc'h eo an iliz, ar relijion a so penn-cauz eus an oll droug. Ha perag ? Abalamour zoken ma reont ar brezel dezhan ; abalamour ma zint dall ha ne anavezont ket mad an droug ma stourmont outhan.

Evelse lakeomp eun tiec hag en deus hadet greun mad en he barc. Epad an noz e teu he enebour hag a had draog e touez an ed mad. An draog a zao hag a voug an ed. An tieg a c'hoenn guella ma c'hell ; mes caer en deus, an draog a ra cals droug d'an ed, hag an eost so tano. Pion a dleer tamal ? Ervez an dud difeiz e tleer tamal an tiec dre n'en deus ket miret oc'h an draog da ober droug d'an ed mad.

Lakeomp c'hoaz eun den hag a ziscoesse an hent da veachourien. Lavaret a ra dezho : it gant an hent a zion, rag mar dit gant an hent a gleiz, ez eot d'en em goll, hag e coezet en eul laguen eleac'h ma viot beuzet. Ar veachourien a ra goap eus an hentcher, a ia gant an

hent a gleiz, hag ep dalc'e clevet lavaret ez int en em gollot. Pion da damal c'hoas ? An hentcher-ta, eme an dud difeiz ; perag n'en deus ket laket ar veachourien da zenti outhan ?

Evelse a c'hoarve en iliz santel. An iliz so eur parc eleac'h ma en deus an tad a famill hadet greun mad. Ne deus enhi nemet guirionez. Kement a c'hourc'hemen deomp da gridi a so gur. Mes dont a ra an enebour epad an noz da hada draog, da lavaret eo, fals-credennou er parc-ze. Ar re a labour aberz an iliz, a boagn da zisc'hrizienna an draog, ar fals credennou-ze, mes ne ellont ket miret outho da ober droug ; ne allont ket miret na da meur a denn ed da goll ; ne allont ket miret na deo disteroch an eost evit na vije bet panefe an draog-ze.

En iliz, ar feiz a so evel eur c'houlouen hag a ziskuez d'an oll an hent ma tleont kerzet dreizhan. Lavaret a ra d'ar veachourien : it a zion, credit ar pez a lavaran deoc'h ; heuillet al lezen a roan deoc'h hag e viot salvet. Mes mar dit a gleiz ; ma na gredit ket va c'homzou ; ma na virit ket va gourc'hemennou, ez eot da goll.

Hoguen mar greomp fae var ar pez a lavar deomp an iliz, ma na heuilomp ket an hent a ziskuez deomp, ha ne deo ket red beza diskiant evit dont d'he zamal mar deomp da goll goudeze ? G. M.

Rom. — Eur c'hiz eo hag a so bet heuillet hed ar veach, e kement leac'h ma zeus en eur guichen menezec'h a urs Sant Fransez ha menezec'h a urs Sant Dominic, Jeneral urs Sant Dominic eo a ra ar pardon e couent Sant Fransez, deiz gouel ar zant. Setu ar pez so bet great adarre ar bloa-ma e Rom deiz gouel Sant Fransez, ar pevar a viz here. Evel a ouzomp, Sant Fransez ha Sant Dominic a ioa er memes amzer var an douar, hag an daou urs savet gantho hag o deus rentet kement a zelvich d'an iliz, a voue ive

savet er memes bloaveziou. Ac'hano an unvaniez caerze etre an daou urs pere so bet digasset gant Doue evit izomou ar gristeniacl en amzer-ze.

Var guementse e livirin penaus brema ema adarre e Paris mantel Sapt Fransez, mantel an den santel paour, Jesus-Christ, mes ker pinvidig evit an eny. A viscoaz ar releg-ze a enoret en iliz Menec'h Sant-Fransez. D'an dispac'h, eun den a zoujans Doue a efflas he zavel hag he miret. Abaoue oa bet eat a zorn e zorn beteg escopti Evreux e peleac'h edo brema da ziveza. Escop Evreux a lakeas varlene he rei d'an Tadou Cabucinet a Paris.

Ar memor eus an deiz ma c'hounezas ar gristenien ar victor var an durket, var vor, e Lepant, ar seiz a viz here 1571, a so ive eun deis solanel braz e Rom. An Turc-Braz a gollas eno ospen daon c'hant lestr ha tregont mil den. Evit derc'hel sonch a guementse eus bet savet e Rom eun iliz hag a zo enli meur a bavillon kemeret var an Durket. Er bloaz 1860, unan eus ar guitionou-ze a voa e Loret. Ar Jeneral Lamoricier her c'hemeraz hag her c'hassas da Bi Nao evit miret na vije saotret gant ar Piemont's.

An nao varnuguent a viz guengolo diveza, an Aotrou Dubuis, Escop Galveston, en Texas, so en em lestreet e Brest var al lestr-beach l'Europe, evit mont d'he vission. Mont a ra d'he heul, e c'heller lavaret, eur rejmant missionerien. Mont a ra gantha missionerien goz, missionerien nevez; beleien, abadet, lod dindan an urziou, lod all a veac'h soudanennet, Tadou a gompagnunez Jesus hag eus a urziou all, breudeur pe freect, leanezet ha c'hoarezet pe seurezet a veur a urs, hag ive mistri scol. Mont a ra gantha missionerien eus a Frans, eus an Irland, eus ar Pologn, eus an Alemagn. Re hir e ve ho henvel oll. Bez'ez euz anezho pevar beleg missionerien goz (unan anezho en deus tremenet pevarzeg vloaz er mission-ze); pevar beleg all missionerien nevez; pevarzeg cloarec etre ar re a zo dindan an urziou hag ar re nemaint ket; pevar dad a gompagnunez Jesus, tri dad eus a eun urs all; pemzeg etre leanezet ha c'hoarezet pe seurezet, ha daou vestr scol; ar peza ra c'huac'h ha daouguent evit an oll. Setu eno eur vanden vad a labourerien so vont da fabourat e parc an tad a famill. Esperout a eller e cavint ep dale frouez da gutuil en Escopti Galveston. G. M.

An doureier beuz a here on eus comzet hag o deus rentet kement a dud neuzeudic, o deus roet tro d'an dud vad da ober oberou a drugarez hag a so plijadur o comz anezho. Evelse, e Tour, an Aotrou Arc'hescop en doa great digueri d'an oll he arc'hescopti hag ar c'hloerdiez pe ar seminariou. Ouspent tri c'hant den so bet deut da c'houlenn repu outhan, hag oll int bet repuet. Oll int bet dignemeret, ep kem ebet, bete zoken ar re n'o doa ket bet a zrong, mes a voa tec'het eus ho ziez gant an aoun.

Cals eus an dud-ze a zo eno ato, ha ne vanc netra dezho. Beteg loenet an dud divar ar meaz a so bet repuet gant an Aotrou Arc'hescop. Evelse ive an oll so carguet a anaoudeguez vad en he andret.

Er memes ker a Dour, eur soudart iaouane so bet beuzet o cas sicour d'an dud paket gant an doureier droillet. Evit diskuez ho istim evit ar soudart-ze, an ofisierien vras hag ar pennou kenta eus a guer a so bet en he enterramant. Ar zoudart-ze a zougue eur scapular, ar peza ne dle facat sousezet den ebet, rag dibaot e ve caout eun den hag a lacafe he vuez var var evit sicour he nessa ep ma ve christen mad.

Ar peza am eus lavaret divarbenn Arc'hescop Tour, a elfen da lavaret ive divarbenn Escop Orlean. Er memes tra ar peza on eus lavaret eus ar zoudart-ze a allet da lavaret ive eus eun niver braz a re all, pere, ma n'o deus ket collet ho buez o sicour ar re all, so da viana en em laket e danjer d'he c'holl. Ar prez a laca an dud, e pep carter, da rei ho aluzen evit ar re so great droug dezho gant an dour beuz, a ziskuez ez eus c'hoas carantez e calonou ar Fransizien.

Pologn. — E Pologn, ar Russianet a ra ato brezel d'ar Relijion catolic, hag evel a ra ato an dispac'herien, en em guemeront brema oc'h ar c'hroaziou. Difennet eo sevel croaz ebet var an hentchou ep beza goulennet ha bet an totre d'hen ober. Ha c'hoas, pa roer an otre da zavel eur groas bennag' evelse, ar groas, ar grucifi a dle beza en eun doare dishevel dioc'h croaziou ar gatoliked. Skeuden hor Zalver a dle beza e liou, ha ne ket e meur pe e coat evel ma zoar boaz d'he gulet. Ne dle beza var ar groaz skeuden na sant nag æl; ne dle beza lizeren ebet ken nehent, da lavaret eo e tleer caout croaziou noaz. Evit skeudennou ar zaent (pe imachou) savet var an hentchou pe e leac'h all, n'ho gouzanver e guiz ebet. Ar c'hroaziou eoz a dle beza discaret pe autramant lakel en doare am eus merket bremaic. G. M.

HISTOR ZANTEL,

TENNET DIVAR LEVR ANN EXOD.

Moizes saveteet gant merc'h Pharaon.

Euz ar bed, 2435. — Arak Jezuz-Crist, 1574.

Eun den euz a lignez Levi, hanvet Amram, al zemezaz da eur vaouez euz he gherentiez, hanvet Jokabel. Hou-ma a c'hanaz eur map. Hag o velout ez oa eur c'hrouadar kaer, e kazaz anezhan epad tri miz. O veza na helle mui he zerc'het kuzet, e kome-

raz eur baner broenn, he goloaz gant eur guisk bitum ha peg, e lekeaz ar c'hrouadar ebarz, hag he lezaz etouez ar c'hors var vord ar ster. C'hoar ar c'hrouadur en em zalc'he a-bell, evit guletou petra a c'hoarveche gant-han.

Hoghen d'ar mare-ze, merc'h Pharaon a ziskonnaz d'en em velc'hi er ster. Hag he mazeded a gherze var ribl ar ster. Ar brinsez, o veza gulet an doare kavel etouez ar raouz pe ann helesti, a gasaz unan euz he flac'hed d'he gherc'had. O veza he digoret, hag o ve'out eur buguel enn-han, e lavaraz: Unan euz a vugale ann Hebreu eo he-ma.

C'hoar ar c'hrouadur, o tostaat, a lavaraz d'ezhi: Ha c'hoant ho pe ez alcenn da glask d'hoc'h eur vaouez hebreadez hag a helle maga ar c'hrouadur bihan? Hag hi a lavaraz: Kea. — Ar verc'hik a redaz hag a c'halvaz he mamm.

Ha merc'h Pharaon a lavaraz d'ezhi: Kemerit, emezhi, ar c'hrouadur-ma, ha maghit-hen d'an, ha me roio d'hoc'h ho pae. Ar vaouez a ghemeraz ar bitghel, her magaz, ha pa oe deuet braz, e roaz anezhan da verc'h Pharaon. Hou-ma her c'hemeraz da vap, hag hen hanyaz Moizes, o lavarout: An hanv-ze a roann d'ezhan, dre ma em euz he saveteet euz ann dour.

(Sellit penaoz e ra Doue goab euz ar rouaned brassa, pa en em roont da ober drouk-eleac'h ober vad, evel ma c'houlenn ho c'harg. Pharaon a felle d'ezhan distraja ar hobl a Israel, ha chetu-hen o vaga en he balez, hag o chourc'yevel map bihan d'ezhan ann hini a dle savetei ar hobl-ze, hag he denna a zindan he vestrouniez garo. Savetei a ra euz ar ster, dre zaouarn he verc'h, an hini a veuzo, dre urz Doue, e kreiz ar mor, ar re ghenta euz he izjidi. — Moizes saveteet euz an dour, evit beza salver ha tezennour he hobl, a zo eur skenden euz a Vap Doue saveteet dioc'h muntrez ar dinammed santel, evit beza Salver ha tezennour ann holl dud.

Moizes, e ti Pharaon, a oe savet evel eur prins. Deski a reaz holl skianchou hag holl furnez ann Ejiptianed, ha bez'ez da, hervez testeni ar Spered-Santed, galloudek enn he gomzou hag enn he oberiou. Bet e vije unan euz a hennou ann Ejipt, mes guell e oe gant-han beza trubuliet gant pobl Doue, eghet chom enn he blijadur e leac'h ma rene ar pec'hed.)

Pa oe deuet Moizes da zen, ez ea aliçs da gavout he vrendeur, d'ho c'honforti enn ho stad reuzedik. Eun devez e velaz eun Ejiptian o sket gant eun Hebreu en eun doare didruez. O veza sellet piz en dro d'ezhan, hag o velout ne oa den var al leac'h, e lazaz ann Ejiptian, hag her c'huzaz ebarz en treaz.

Antronoz o veza eat adarre var ar meaz, e velaz daou Hebreu ha kruz etrez-ho; hag e lavaraz d'ann hini a oa ar gaou gant-han: Perag e skott-hu gant he nessa? Hema a respontaz: Piou en deuz ho lekeat da brins ha da varner var-nomp-ni? Ha c'hoant hoc'h

eus hu d'ann lazamez evel ma lazjoc'h deac'h ann Ejiptian?

Moizes a ghemeraz abun, hag a lavaraz: Penaoz eo bet brudet ann tal-ze? Pharaon he tual a glevaz ar peza oa c'hoarvezet, hag a glaskaz lakeat Moizes d'ar maro. Mes Moizes a deo haz kuit ar hanv, hag a leaz da chom e douar Madian.

BUEZ AR PLAC'h DEVOT ARMELA.

He devozion e kenver Mam Doue, he lekeaz da vout e Breuniez ar Scapular. Beza eun doare eun dalc'ed chun all d'ar peza e c'heller da lavaret evit lestri gloan Man, hag evit seriva he devozion e calonou ar re ma veve gant-ho. He c'harantez evit he cal-gardien a roa ive braz meur bed. He fisians en he c'halloud a roa dre strimuzull dalc'h-mad e c'houlenn he sieout, en eun zont d'hen pedi da gared Doue evit-hi brema he gred ar c'houlked da zerc'het pennaed an c'harantez euz he c'houlenn Pa zigoteze d'ez-hi mont d'an iliz, o pede c'hoaz he cal-gardien hag elez mad an holl dud a vijerenti, da unan ho skinnchou santel gant he revid he sibour da veuli Doue. Pa salude eun den benag, ep an eal mad a roa en den-ze a salute. En eur gub lavaret a d'helleur he veve miret hi e compagnez ar elez e gred eun hini an dud. Santez Anna, Santez Madalen, an Ebestel, Sant Augustin, Sant Dominic, Sant Fransez, Santez Catec-a-Sienn, ha Santez Catec a Gen. Santez Thereza, Sant Thomaz d'Ackin ha Sant Armel he faron, setu ar zent a ghemere evit skuer, eun ar zent hag ar zentezed a helle da c'houlenn evit-hi sigant Doue ar vertuzennou ho d'ann savet dreist ar re all.

Santez Armel a roa ken brudet, mat euz c'hoant da veur-a-hini, caon he foltred. Pa lanta regont a guement man d'a eur pentuer, mez neman a lavaraz d'ez-hi he helle ober he foltred eb rei da e houzon d'ez-hi. Dre ma c'houlenn he rea morse netra nemed d'he gub he c'honfessoar, e petto anez-hi da ober eun d'ann hag a goustche cals d'he modesti. Ar verc'h c'hoant man mirerez stard d'ar veu e doue gant da zent ha offerato ar peza bliche gub-han a lavaraz gant-hi he c'honfessoar: Va zad confessor, ma cal d'he h' c'hoaz Doue glori-

iet, ez-hon countant da ober ar pezh a blijo gan-e-oc'h. Evel-se eo ec'heljet caout he foltred. Divar ar poltred kenta-ze e oue savet cals re-all, en eveleb doare e vije savet unan couls lavared e pep ti, ken braz edo ar respet a zouguet d'ar plac'h santel-man.

Evid ar memez respet, eul leanez euz a urs an Ursu-linezed, pedet stard gand superioze he c'houent, gand an Tad Huby, a gompagnuez Jesus, rilijuz santel braz, carguet da c'houarn he c'houstians, pedet c'hoaz gand an Tad Rigoleuc, ive a gompagnuez Jesus, ha confessor ar verc'h santel-man, a deuz er bloaz 1660, da lacad dre scrit buez caer ha burzuduz Armela. Evit senti aman evel e leac'h-all da vouez he c'honfessour, Armela a ziscuilliaz d'al leanez carguet da scriva he buez, an holl draou caer ha dudiuze e devoa bet digand Doue. Var kement-ze e lavare memez gand eur garantez entaned : « Carout a raffen e velle an oll draou-ze scrivet « gand va goad : me garfe e teuffe kemend berad goad « a zo em goazied ha kement ascorn a zo en-hon da drei « e ken aliez a deot, evid emban a vouez huel holl ma- « delez Doue evid-hon ; me garfe e ve roet ar vadelez- « ze da anaout d'an holl Elez, evit ma teuffent d'ham « sicour da veuli hor c'hrouer a hed an holl amzer. Oh ! « na me a varfe countant beuzed en eur môr a levenez, « ma c'houessen e ven evit rei tro da lacat cared ha « servicha va c'harantez !

Pemb bloaz bennag araoc he maro, er bloaz 1666, o veza o treuzi eur ru, deiz eisvetez gouel ar Sacramant, e tizas eur taol ru hag a dorraz d'ez-hi he gar. Digue-mer a reaz ar goal-rancont-ze evel eur vad digand Doue, hag hen trugarecât a reaz gand calz a anaoudeguez. Ne deuz tam da n'em jali na da n'em glem : gounzao a reaz ar boan criz-ze gand kement a zouster, ma lakeaz an holl da veza souezet braz. Chom a reaz eb guellout bale e pad pemzek miz hed-a-hed : d'ar sul ha da c'houel eb-ken e vije dougnet d'an iliz. Goude ar pemzek-miz-ze, e c'houlennaz digand Doue guellout bale var branellou, daoust ma kendalc'hije ato he foaniou. He goulenn a oue roet d'ez-hi. Tri bloaz goude, e c'houlennaz digand Doue dre zourn ar Verc'hez-gloriuze-Vari ma c'heije bale eb branellou, ha var an heur he goulenn a oue roet d'ez-hi ! Ar burzud-ze en deoue evit test parrez Aradon pen-da-ben. Beza edot e gouel ar sacramant. Hoguen ar prosession o veza eat er meaz, Armela a ie ive var-lerc'h guella ma c'helle en eur chilgammad var he branellou ; mez pa oue great an dro gand ar prosession an holl a oue sebezede-holl o velet ar plac'h santel-man o vale couls a den all ebet. Unan benag o veza goulennet diganthi ne doa ket cals a boan dre ma ne helle ket communia aliez epad he c'hlenved, e respontaz : « goun- « zao evid ar garantez a zo caeroc'h eguet beza evuruz « dre ar garantez ; » lavared a reaz c'hoaz ; « Oh ! ma « Doue a c'hoar en em rei e peb mare hag e peb bro d'ar « galon ne glask nemed-han. » Da eun all hag a lavare d'ez-hi tost-da-vad, ar memez tra, e respontaz : « Cared « a ran bolontez Doue evel Doue he-unan. »

Er penn kenta a viz east 1671, e oue scoet gand eun

derjen garo ne roe d'ez-hi peoc'h na noz na deiz. Ar c'hlenved-ze a jommaz varn'hi epad eur miz. Merc'h an Aotrou e-ti piou edo o servicha, a ziscleriaz d'ez-hi he nec'hamand d'he gueled o vervel : « Nan, eme Armela, « ne varvin ket c'hoaz ; calz ar euz c'hoaz da c'houn, « zao abarz neuze, ar pezh a ro d'am c'halon eul leve- « nez vraz », hag e feat, an derjen a dorraz eun neu- heudic, rag ne deue ket ken aliez. Credi a reat ne vije ket fall chench ear d'a Armela, hag he c'hass a rejot, en deisiou diveza a viz guengolo, d'ar gær a Vened. Eus- pen an derjen a deue ato eur vech an amzer da ober he zro, e deoa c'hoaz cals poan er c'har a ioa bet torret, Tost goude, e rancaz chom en he gouele. O velad erfat neuze, ne zafche ket euz he barrad, e tiskuilliaz he stad d'he mestrez iaouanc, en eur lacad etre he daouarn pep tra a selle out gouarnamand an ti. Eun nebeud derve- chou goude, an derjen a vouassez : Eur boan hall, ar boan c'houzouc a grogaz ive en-hi en evelep doare he helle mui debri tam, nag eva nemed dre gals a ners. Gounzaon a rea kement-ze oll gand levenez, en eur bes- di ar re a deue d'he guelet da drugarecâd Doue evid-hi abalamour d'ar grassou a zigasse he betec. Eun Tad Je- suist, o veza lavaret d'ez-hi ne gave ket d'ez-han e varf- che c'hoaz, e respontas : « Doue ra vezo meuled, mui- « oc'h aze a amzer am bezo da jom er boan. » An der- jen-gousk a grogaz ive en-hi hag a lammaz tre he ners diganthi. T. B.

SCOLACH

Evit deski skiand al Labour-douar.

Ar Scolach-se a so dalc'het, e hon departamant, gand an Aotrou Loiz Kerjegu abaoe meur a vloavez-so, hag hen deuz roet dija d'an tiegeziou eun niver braz a dud iaouanc desket, pere ho deuz skignet dre ar vro ar ski- anchou ho deuz desket ho-unan, ha roet d'ho zad ha d'ho amezeien ar c'hoant da labourat an douaron er guiz an talvoudeca. An Aotrouez carget gand ar gouarnamant da redet ar Finister er bloa-ma, evit gout pehini eo ar Tiec-braz a dle caout ar pezh a hanver ar *Prim a zaou vil scoed* hag *an Tas arc'hant*, ho deuz guelet gand ho daonlagad, ez eo hirio calz guelloch labourer ha dalc'het an douarou egued ugent vloaz-ze. Perag ? Hep mar ebet abalamour ma cressk ar skiand etouez an tieien bihan ha braz, ma implijer penviou talvoudecoc'h, ma saver muioc'h a chatal pere a ro teil drusoc'h, ma rer pra- jeier nevez, ma tizourer an douarou re c'hleb ha ma tourer an douarou re sec'h.

Enor d'al labourerien douar ! ho micher eo ar c'henta- an talvoudeca, an enorapla euz an holl micherou. Labourer douar Breiz-izel, eun Escop santel hen deuz han lavaret : « Pa vezi deut da hallout dremen eun hosta- « liri hep en em vesvi, te vezo ar c'henta euz an dud. »

Scolach al labour-douar ne ma mui, eur bla- zoc'h Trevarez. An Aotrou Kerjegu en deuz savet eur scolach

nevez, eur c'hart-leo a Drevarez, e kichen bourg Sant- Yoazec, en eul leac'h aeriussoc'h hanvet *Kervoazec*. Rac-se scolach Trevarez a zo hirio hanvet *scolach-Ker- voazec*.

An Aotrou Kerjegu en deuz gant-han eur Belec santel ha desket ha pemp Mestr-scol pe *Professour*, hag evezi- di pe *Surveillanted*.

An Examen evit choas an daouzec scolaer nevez er bloa-ma er Scolach, a zo bet great, an 8 euz ar miz-ma (miz here), e Kervoazec. Interroget int bet gand an Aotrou Kerjegu dirac Consail an departamant savet evel-en :

An Aotrounez :

- Colon, evid ar Prefed ;
- Alexandr, evit an Escop ;
- Lacost, Conseiller general evit an departamant ;
- Pompry, idem.
- Oliv, Professour evit skiand ar labour-douar e Kem- per ;
- Soubigou, Tiec-braz e S.-Thegonnet.

Ar C'honseil-ze eo a choas an daouzec a virit ar muia beza kemeret.

Setu ama brema hanoiou an daouzec choazet :

- Olier An Treut, a Volazec ;
- François Grall, a Leuhan ;
- Emil-Alexandr Ar Goueff, a Guimerc'h ;
- Jean-Mari-Izidor Cornic, a Verrien ;
- Jean-Mari Brangolo, a Glear-Carnoët ;
- Jean-Mari Dagorn, a Lanneanou ;
- Yves Sezec, a Bloudiern ;
- Bertran Sinkin, a Vannalec ;
- Guillou an Derout, a Vannalec ;
- Per Fich, a Vannalec ;
- Jean-François Duigou, a Scaër ;
- Yves Morvan, a Leuhan ;

Ma teuffe unan bennag euz an daouzec-se da vancout e vezo kemeret euz ar pevar-al ma :

- François-Mari ar Bot, a Zirinon ;
- Jean-Louis Kco, a Vengad ;
- Jean Salaun, a Leuhan ;
- Joseph-Mari Brangolo a Glear-Carnoët.

N. B. — An daouzec scolaer nevez a renco beza e Kervoazec, d'an 3 a viz Du. AL.

FABLEN.

Dissul daou bardoner, n'ouzon a be barres, A gavas eun histren dianket var an tres, O daou e tiscoezont, e velont anezhi, Vit gout piou he debro e rancor procesi.

Bez' e redjont o daou etrezec an histren, Pephini a grede e vije he ferc'hon, Jakes a ioa dija pleguet d'he c'hemeret.

Pa oue gant Bastian var he benn discavot.

Hop ! eme Vastian, mad e gout da bini.

E dleet ar blijadur d'he c'haout da zijuni.

Ar c'henta he guelas, ennes eo he lonco,

He lonco e unan, eguile a zello.

— Mar deo kementse eo a raio gonid,

Neuse, potr Bastian, an histren me ket did.

Gout a rez ez on-me Jakezie ar sparfell,

Hanvet on evelse, dre ma velan ker peill.

— Mar de lem da lagat, me ne don ket picous,

Dimeurs em eus cavet eur spillen er bern piou.

Lacomp hon eus kercent an histren-ze guelet,

Mes kentoc'h o cana me am eus hi clevet.

Etretant Yan an Trend ganto a zigoezas,

An daou-ma ragdal da varner hen hanvas.

An Trend, sounn he gribel, a zigor an histren,

Hag o daou her guelont ous he lipat kempen.

Goude ma oue gantan ar c'hreguign peur grignet,

Da gaout peb a groguen oc'h emezan barnet.

Evel m'oc'h tud a dail e chomot er mizou,

Iit e peoc'h d'ar gær, deut d'am c'haout avechou.

Guelit ar pezh a goust herio o procesi,

Niverit peguement a jom gant pep hini.

Ar var gant Yan an Trend en he foz a jelo,

Ha ganoc'h da hirra nemet plun na lozo.

(LA FONTAINE, livre ix, fable 9.)

AN TAD DIFEIZ.

(TREDE PENNAD).

Mac'harit d'ar mare ma e devoa cavet al levr-ze da brena e devoa trivac'h vloas. Eur speret lem e doa ; dere'hel a rea sonch eus a guement a ioa bet desket dezhi, ha meur a vech e doa lakat nec'het he zad dre ar goulennoù a rea outhan. Aliez e deveze beac'h o c'ridi e vije gur an traou evel ma ho displeguet dezhi. Mes abaoe ma e devoa lennet an aviel, he speret a voa selereat, hag oa deut da gompren ar pezh he lakea nec'het bete neuze. Setu hi ta o lavaret d'he zad !

Abaoe ma em eus lennet al levr-ma, em eus sonjet cals hag oun deut da anaout ar penn abeg a gals traou he ne allen ket da gompren diagnet.

O studia an histor ganec'h, oan souezet o velet ar

fransizien goz, tud gouez, tud eriz, tud brein dre ho liguntez, tud dizoc'h e pep guiz o tont da veza tud vad, tud carantezus, tud lenn a ners calon, hag e clasken gouzout penaus oant bet chenchet evelse. Mes hirio ec'h ouzoun ervad o deus desket anaout Jesus-Christ hag he lezen a garantez. Hirio ne doun mui souezet, ha ne ket-ta, va zad, eo dre ar relijion-ze eo dint deut da vellaat ? An tad ne lavaras ket nan. Gouscoude en doa evel mez o velet he vere'h desketoc'h evithan.

Ar vere'h a lavaras c'hoaz : o lenn ganeoc'h histor ar vrezelidi-ze. A iea da vro sao-heol da ober brezet ; a guitea pep tra evit mont di da lacat ho buez, var var, ne allen ket gouzout petra a roe calon d'an dud-ze. Mes hirio pa em eus lennet, maro Jesus var ar groaz, o sonjal eo er vro-ze en deus gouzanvet hor Zalver, o sonjal e tougue ar vrezelidi-ze var ho scoaz daou damic mezer ruz laket e croaz, brema me voar avoalc'h perag ez eant di. Ha ne ket-ta, va zad, ez eant da vrezelcaat evit hor Zalver Jesus-Christ ?

Ec' heljent mont, eme an tad, mes petra ra-ze ?

— Eo Jesus guir Doue, hag an dud-se her c'hrede ; ne vijent ket eat di anez. Hag an dud hirio her c'hred ato, me voar mad. Ha sonch oc'h eus-hu, pa zeamp da vale dre Baris, e velemp tiez bras, pe me ne ouzen ket petra int, savet gant mein kizellet caer ha touriou huel varnezho ? Me am beze c'hoant da vont enbo ha n'em lezac'h morse. Mes evessaat a rean oc'h eun dra ; var ar re-ze oll e velen ar groas. Ar groaz eta a ren ato var ar bed. Em levr em eus lennet e lavare Jesus d'he Ebestel e chomje gantho bete fin ar bed. Da Ber en deus roet alc'hoeziou rouantelez an Env. Pa eo chomet croas Jesus var ar bed, hen eta so chomet ive ; Jesus eta so Doue. Alc'hueziou rouantelez an Env so eta ato etre daouarn Per, pe re all lakeat da zerc'hel leac'h dezhan. Ha ne ket-ta, va zad, ez eus ato unan bennag o tere'hel plas Sant Per ?

Ama an tad a blegue he bonn ep lavaret guer.

Mad, va zad, me a gred e Jesus-Christ, me a gred d'he oll gomzou am eus lennet el levr-ze. Ha neuze, me, abaoe ma emañ var an daou, so eur groazic oc'h va gouzoug. Va mam e devoa he staguët, hag araog mervel e devoa lavaret d'am maguerz dioual na vije guelet ar groaz-ze ganeoc'h. Me ne voutien ket petra oa ar groaz-ze, n'he c'hemeren nemet evit eur braoic. Mes hirio e c'houzon petra eo. Va mam a grede ive ta e Jesus-Christ.

An tad a zirede an daelou eus he zaoulagad dre voasc he viziet ; rag he zaouarn en doa laket da c'holo he vizach. Ar vere'h hen lakeas da lavaret ganthi ar *Bater* e devoa desket e levr an aviel, hag evit ar vech kenta e voue guelet eo ti-ze ar baden o sevel etrezeg an Env. — Ar vere'h-ze, evel am eus lavaret er penn kenta, so hirio leanez a us Carmez.

An daou zorn bras.

(TREDE PENNAD.)

Pa en devoa Colaïc debret he dam creunn seac'h, en

em lakeas da bourchaz he vele. Abaoe m'oa mouguet ar bleiz, e crede ne dlie mui caout aoun rag netra oc' c'hoat-ze. Destum a reas deliou seac'h, evit ober ganthi eur guele soupl da dremen an noz. Edo eta o sonjal cousket e camp ar stered, mes kerkent ha ma voa gouvezet, e velas an daou zorn bras oc'h en em asten aziouthan, hag oc'h ober eun dinel pe eun doempus re vraoa. Dridal a reaz he galon pa velas kementse, hag e cousecas neuze diencresoc'h eguet n'en doa great morse.

— Ho trugarecat, emezhan, daouarn bras, eus a guement vad a rit din. Mes, pa oc'h eus kement a c'hallout, ha ne alfac'h-hu ket, araog ma livirin va fedennou, rei din da anaout penaus a ra va mam, a ne deo ket re c'hlac'haret dre ma zoun eat kuit diouthi ? ha beze deus peadra da berri he naon ?

— Ho mam, eme eur vouez, a so glac'haret, rag calon eur vam ne ell ket beza dic'hac'h ar pa vez (dispartiet dioc'h he bugale. Mes ne deus ket a nec'h ; gouzout a ra e kemer Doue sourei ac'hanoc'h evel ma kemer eus an oll vugale vad. Bara e deus da zibri, rag labourat a ra. He daouarn so bet casset dezhi eus hon rouantelez-ni, eleac'h ne gaver morse a zaouarn didalvez. Couskit din ec'h evit ma tihunot abred varc'hoaz ha ma savot mintin da labourat.

Colaïc a lavaras he *Bater* hag a gousecas neuze e hdec. Antronoz edo mintin mad var zao, hag en em lakeas adarre en bent. Ne voue ket pell n'en doa treuzet ar c'hoat oll ; ha souden goude e velaz eur maner dirazhan.

— Ahont ez eus tud o chom emezhan outhan he unan ; ahont e cavin labour ha bouet.

Mont a ra beteg an or bors pehini a voa prennet ha moraillet. Eur morzol a voa oc'h an or, mes ar potig n'oa ket huel avoal evit tizout beteg enha. Kerkent unan eus an daouarn braz a deuaz hag a scoaz eun taol var an or ken na dregarnaz ar maner oll. Eur c'hrac'h coz a deuas da zigueri dezhan, hag a c'houlennas outhan dichec petra glaske ha perag en doa scoet ker cre-ze var an or. Ha map eur Roue out-te ma scoez ker calet-ze ?

— Eur buguel paour oun, eme golaïc, o clase bouet ha labour.

— Ha da ober petra out-te mad ?

— Da ober kement a blijjo ganeoc'h, rag c'hoant am eus da gaout labour.

— Mad, neuze, deuz en ti. Va mitizien so eat kuit abalamour n'oa ket a labour avoalc'h da ober. Me marteze a rei evel dho.

Colaïc n'en doa ket clevet c'hoaz ez aje mitizien eus a eun ti abalamour n'oa ket a labour avoalc'h da ober. En ti-ze ken nebeut ne ket al labour a vanke. Cals re a ioa zoken evit ar potric kez. Mes an daou zorn braz a deue d'he zicour bevech m'en em gave nec'het.

Ar c'hrac'h-ze a voa eur goal bez, ha Colaïc en doa aoun razhi. Ne jomas ket pell eno, hag ez eas da diell

labourer. Ama adarre an daou zorn braz a deue alies d'he zicour, hag evelse e rea avechou muioch a labour en he zervez evit deg den vad. O velet kementse, he vestr a deuas da gaout ar brassa istim evithan, hag eus he vevel her greaz he vap caer.

Neuze e teuas Colaïc da guere hat he vam gantha d'he verouri. Hag e rojont ho zoul ti da re all paourc'h evitho.

Ha brema, lenner, petra eo an daou zorn braz-ze a guemerit marteze evit eur rimadel ? An daou zorn braz-ze eo an ijin hag an aket pere a deui da zicour kement hini a ra uzac'h anezho. An hini en deus ijin hag hen laca da dalvout, a deui a benn a bep tra ; hag an hini so aketus da labourat ne vanc'o ket ken nebeut a vara dezhan ha pa n'en deffe ket zoken calz a ijin.

G. M.

Kanto ar Zant evit ar Sizun-ma.

- DILLON, 5 Du. — Sant Charles Borromeë, escop.
- DIMEURS, 6. — Sant Htud, abad.
- DIMERC'HER, 7. — Eas a eisvet an oll zant.
- DIZIQU, 8. — Eisvet an oll zant.
- DIRGUENER, 9. — Dedi iliz Sant Salver, e Rom.
- DISSADORN, 10. — Sant Andre Avelin.
- DISSUL, 11. — Pempet varnugent goude Pantecost. Gouel an Dedi eus an iliz.

An Aviel hirio :

Jesus o veza eat e Jericho, a dreuze kar, ha setu eun den hanvet Zachee, unan a bennou kenta ar publicanet, ha pinvidic braz, en doa c'hoant da velet Jesus evit gouzout piou oa, ha ne alle ket he velet gant an dud a ioa en dro dezhan, rag Zachee a ioa bihan.

Hag hen o redeg araog, hag o pignat en eur vezen scao-grac'h evit ma c'helje guelet Jesus, rag dre eno e llic tremen.

Ha pa voa deut Jesus beteg eno, e savaz he zaoulagad en eac'h, hag o velet Zachee, e lavaras dezhan : Zachee, diskennit buan, rag me a rene loja-hirio en ho ti.

Zachee a ziskennas lijer, hag hen diguemeraz laouen. An oll o velet kementse, a c'hrosmole, o lavaret ez ea Jesus da loja da di eur pec'her.

Zachee avad, en he za dirag an Aotrou, a lavaras dezhan : Aotrou, mont a ran da rei an anter eus va madou d'ar beorien, ha mar em eus great gaou oc'h unan bennag, e roin dezhan pevar c'hement am eus kemeret.

Jesus a lavaras neuze ; hirio eo saveteet an ti-ma, abalamour hema ive so map da Abraham. Rag map an den so deut da glasc ha da zavetei ar pez a voa collet.

SANT LUCAS. XIX. 1.

KELEIER. — *Ar c'hoar Sant Tugdual, en enez Sizun, e Douarnenez.*

*Setu ama hanout ar Vistri hag ar Vestrezet scol o deus bet prizioù er bloa-ma evit ober scol d'ar re vras. Ar rum brizioù kenta so roet d'ar scol hanvet *Société d'Emulation*, e Brest ; da Vistri ar Scol re Vras, e Recouvrans ; d'ar breur Coreb, e Kemper ; d'an Aotrou Uzel, e Brest ; d'an Aotrou Chapalan, e Coray.*

An eil rum brizioù so bet roet d'an Aotrouez Lazennec, e Braspartis.

Ar Braz, e Taule ; Demezel Allaire Dumez, e Conkerne ; Demezel Mari Stephan, er Paou ; Breur Juminien, e Brest ; Rohan, e Roscoff ; Tanguy, e Lambaol ; Follet, e Kerhaes ; Quere, e Audiern (Goaien).

C'hoar Sant Ian, e Douarnenez ; Quere, e Bothsorhel ; Paul, e Hantec ; Gloguen, e Eskabien ; Ar Briz, e Ploudalméze ; Turlucher, e Pleyben ; Priol, e Cledon ; Dimezel Battany, e Guilers ; Dimezel Souben, e Rospenden ; C'hoar Sant Tugdual, en enez Sizun ; C'hoar Mari Elizee, e Ploubarnalec ; C'hoar Mari Euphemie, e Plogoff ; C'hoar Mari ar Mable, Jesus, e Pouldreuzic ; C'hoar Mari ar Drugarez, e Plozevet ; Calven, e Plouenan.

Ar c'hoñ nevez a zaver e Moulroulez a zo c'oezet. Euris oar n'eus bet den lazec. Unan epen so g'ozec, torret he c'har. Kementse so eun taol a brovidans Doue, rag var dro ar c'hoñ-ze ez oa eur vander vad a labourerien.

Finesse eur Chant. — *Ar vuez a zo c'hoec, ha na tud na loenet n'o deus c'hoant d'he c'holl. Pa vezer gouddrouzet da goll ar vuez, al loenet mud, ar re zoken dibourvea a skiant a voar neaze ober trojou, guest da rei da gridi o d'he spret hag ijin. Pa zigouez da ens c'had, beza eur randon chas var he leac'h, eo eur gaer guelet pebez trojou a voat da ober, pebez piellamou, lammon treuz, lammon a goster, dont erenn var he c'hiz, mont ha dont evit lacat ar chas da goll he roudou. Mes gad ebet marteze ne reas morse finoc'h taol evit an hini ma zeamp da gomz anezhi.*

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezouec.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten à goust :

Evit eur bloas..... DAOU SGOUET.
 Evit c'huec'h miz..... EUR SGOUET.
 Evit tri miz..... C'HUEC'H REAL.
 Eur gazeten ebken..... DAOU YENNEC.

Ar goust a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Autrou MORVAN, Belec e Kemper.

Ar paeamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 10 Du 1866.

Eleac'h ma zeus eur fals relijion bennag o ren, ar speret a denvlijen pehini eo ar mestr eleac'h ne deo mui anavezet ar virionez, a laca ar re en deus touellet da ober traou guest da lacat an oll da c'hoarzin, ma ve da viana leac'h da c'hoarzin pa gomzer eus a dud keiz dallet gant tad ar gueier. An aviel a zesc deomp penaus deiz ar varn an aelez a zispartio an denvet dioc'h ar bouc'het, da lavaret eo ar re salvet dioc'h ar re gollet, o lacat ar re vad en tu deon hag ar re fall en tu cleis d'ar barner. Mad, eur rum zo eus an dud-ze eat er meaz eus arguir iliz, ha ne fell ket dezho gortoz an deiz diveza evit ober an disparti-ze. Hen ober a reont a vrema, ha kementse bevech ma en em assablont en ho chapel pe er zal a zervich dezho da chapel. En ho zouez pep den so sant pe bec'her. Tud a zo carguet da c'houlou oc'h pehini, dre ma tigouez, pezent pe bec'her eo, ha dioc'h ma lavar e vez casset a ziou pe a gleiz, da lavaret eo, er penn huella pe er penn izela eus ar chapel.

Evit caout eur skeuden a guementse, n'oc'h eus nemet sonjal e ve laket, en unan eus hon ilizou, ar c'hloc'her e kichen an or da vare an ofern, hag eno neuze, dre ma teui tud en iliz e c'houlou digant pehini :

— Hag eur zant oc'h-hu? Mar lavar ia, e vezo lavaret dezhan : it a ziou.

Oc'h eun all e c'houlou ; c'hui so eur bec'her? — ia — mad, it a gleiz. Ha neuze ar bec'herien baour lakeat evelse en tu cleiz pe er penn izela eus ar chapel, a ello, mar keront, huanada o velet eurusdet ar zant.

Mes, a leverot-hu, mar deo pep unan a rent testeni dezhan he unan, mar deo pep unan a ell lavaret mar car ez eo sant, ha mar car ez eo bec'her, ha n'en em gaf ket avechou unan bennag da vont a zeou pa vije dlet dezhan mont a gleiz, pe da vont a gleiz pa vije mad avoalc'h da vont a zeou?

Oh eo, me oar vad, cridi a ran e tle avechou mont eur bouc'h bennag etouez an denvet, ha zoken marteze

eun danvad bennag etouez ar bouc'het. Credabl eo ec'h en em gavo unan bennag ha ne grede ket lavaret ez eo sant, ha setu-hen casset e mesc ar bec'herien ; muioc'h c'hoas marteze ha n'o devezo ket a c'hoant da lavaret int pec'herien ; ha setu-hi casset e mesc ar zant. Credabl eo ive ne ket ato lem avoalc'h daoulagad ar c'hloc'her evit lenn en eneou, evit dispartia ar greun mad dioc'h an draog, ar re vad dioc'h ar re fall, hag evelse an disparti ne vezo ket ato eun ha leal. Petra fell dioc'h, pa glasc an dud en em emel eus ar pezh en deus dalc'het Doue evithan he unan, ne dleer ket beza souezet mar greont kemese fall. Doue epken a anavez mad stad ar c'halonou, a anavez mad petra so dlet da bep unan, ha setu perag en deus dalc'het evithan he unan ar varnediguez diveza, evit renta da bephini dioc'h m'en devezo great.

Ar scrifagnerien difeiz o deus poan o clevet comz a Zoue. Scrigna a reont ho dent pa leverer dezho eo Doue a ren kement a dremen er bed-ma. Evelse e clascont iskin oc'h an Eskibien abalamour ma e'houlenont pedennou ha sicour evit ar re so eat ho danvez gant an dour beuz ; abalamour ma leveront eo an dizurziou, ar pec'hejou, an torfejou eo a denn ar goaligner-ze eus an Env var an dud ; abalamour ma leveront ema ar goaligner-ze etre daouarn Doue evit skei an dud difeiz, ar re a dor he lezen, ha ma na eaner d'en em zével en he enep, he voaligner ne oufent nemet mont ato var bouneraat. Ne blij ket ken nebeut d'an dud dizoue e ve lavaret d'ar gristenien ez eo Doue trugarezus zoken pa sco, ha ne sco nemet evit ho lacat da zistrei outhan, da gaout keuz d'ho fec'het ha da bidi.

Ia, a lavar unan eus ar scrifagnerien-ze, mes ar pezh a lavar an Eskibien so anavezet pell-so. Ar pezh a lavaront o deus kemeret er scrijou great gant an Eskibien goude an dispac'h, (ar revolution), ar re-ma o devoa ho c'hemeret eus a scrijou an Eskeb'araog an dispac'h, hag ar re ziveza-ma o doa cavet kementse e scrijou an tadou eus an iliz.

condaonet ar scrifagner da baea dezhan he foen. — Ma ve red d'an oll brofeted so e Frans respont eus ho frofesiou, ez afent aliez dirag al lez-varn.

HENT HOUARN.

Da be heur e tiblas hag e tigouez ar c'hirri tan.

O VONT A GASTELLIN VARZU NAONET.

	kenta trein	eil trein.	trede trein.	1 ^e cl. a paar	2 ^e cl. a paar	3 ^e cl. a paar
Castellin...	6 h. m.	10 h. m.	4 20	» f. »	» f. »	» f. »
Kemper...	7 4	10 55	5 20	3 45	2 60	1 90
Kemperle...	8 34	12 14	6 41	8 50	6 40	4 70
Lorient...	9 12	1 2	7 24	10 75	8 05	5 90
Redon...	» »	4 22	» »	22 85	17 15	12 55
Savenec...	» »	5 28	» »	» »	» »	» »
Naonet...	» »	7 10	» »	31 90	23 95	17 55

O TONT EUS AN NAONET VARZU CASTELLIN.

	kenta trein.	eil trein.	trede tre
Naonet.....	» »	6 h. 20m.	» »
Savenec.....	» »	7 19	» »
Redon.....	» »	8 29	» »
Lorient.....	7 h. 40m.	12 6	5 48 n.
Kemperle.....	8 23	12 50	6 39
Kemper.....	9 41	2 2	8 3
Castellin.....	10 50	2 59	9 15

Eus a Vrest da Roazon, hag eus a Roazon da Vrest.

Eus a Vrest da Roazon.

	KENTA TREIN.	EIL TREIN.	TREDE TREIN.
Brest.....	7 h. » m.	creisdeiz.	4 h. 05 noz.
Montroulez...	8 50	4 h. 38 m.	7 »
St-Brieuc.....	11 40	4 50	» »
Roazon.....	2 55 noz.	8 »	» »

Eus a Roazon da Vrest.

	KENTA TREIN.	EIL TREIN.	TREDE TREIN.
Roazon.....	3 h. 55 m.	5 h. » m.	10 h. 50 m.
St.-Brieuc.....	7 07	8 05	4 44
Montroulez...	9 54	10 h. 50	5 27
Brest.....	11 40	12 45	7 20

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 27 Here.

Priz ar c'hant liour.
 Guinis... 13 lur, 70 c.
 Segal... 8 lur, 54 c.
 Eiz... 9 lur, 06 c.
 Ed-du... 7 lur, 07 c.
 Kerc'h... 8 lur, 82 c.
 Avalou-douar 3 lur, 25 c.

PONTNABAT — 25 Here.

Priz ar c'hant liour.
 Guinis... 13 lur, 75 c.
 Segal... 8 lur, 96 c.
 Eiz... 9 lur, 93 c.
 Ed-du... 7 lur, 96 c.
 Kerc'h... 9 lur, 38 c.
 Avalou-douar 3 lur, 00 c.

Ar Gerant : AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand Ar. DE KERANGAL, Mouler an Escopit.

Houma a voa savet gant eur vanden chasseourien, hag a voa var he lerc'h pevarzeg pe bemzeg ki o chilpat en dra c'hellent. Goude beza great meur a dro, eat ha deut, diroudet meur a vech ar chas, evel ma zoa eun hevelep banden anezho, unan bennag a gave adarre ar c'huez anezhi, hag e save adarre chilp ha safar goaz evit biscoas. Ar c'had a voa eat skuiz he divesker, ha gant aoun na golje erfin o redek, e sonjas oa deut ar mare dezhi da glasc ardou all.

Setu-hi, o tremen eun hent, o velet eun den o vlenia eun azen var bouez he gabestr. An azen-ze a voa var he guein daou valikin carguet a c'hedon, couniclet ha preziou-all maro, pere a gasset e kar da verza. Ar c'had ne jom ket da varc'hata. Guinta'ra en eul lam en unan ar malikinou etouez ar guedon maro, hag en em zouch eno guella ma c'hell. Souden e c'herru ive ar chas hag en em lakeont da chilpat en dro d'an azen. Perc'hen an azen pehini n'en doa ket guelet ar c'had veo o lamet en he valikin, a gred eo oc'h ar guedon maro'eo e c'harz ar chas, hag en em laca gant he fouet d'ho fellat dioc'h he azen. Ar chasseourien o devoue ar memes creden gant potr an azen, hag ep dale ar chas a voue great dezho mont ac'hano.

Ar c'had, epad an amzer-ze n'e doa ket lavaret eur guer, n'e doa ket finvet. Mes pa gredas ervad oa eat chas ha chasseourien pell, e tilamas d'an douar hag e redas kuit adarre ep lavaret na kenavo, nag ho trugarecat.

Eno neuze e voue eun abaden all. Potr an azen he guelaz o tilamet eus he valikin hag a voue sebezet ha strafuillet oll. Sonjal a rea dezhan edo he oll c'hedon maro o tont e buez hag o vont da dec'het digantha. En em lacat a reas da grial, ha da gonta al loenet maro a voa er zamm, hag evel ne vanke nicun, ne vouie petra da zonzal. Mes ar chasseourien pere o doa he glevet o crial, o veza deut en dro da velet petra voa, a vouezaz ervad oa ho gad eo e doa great an tam farserez-ze evit ober goap anezho.

Ar Zaozon o deus cavet eur c'hiz nevez da lacat tan var ho c'horn butun pe var ho segalennou. Brema ez eus eun telegraf electric, eun orjal en hag a ia eus ar vro-ma d'an Americ, eus an eil costez d'eguille eus ar bed. Ar Zaozon-ta, ar re binvidic, pa dro en ho fenn, a laca digas dezho eun eulfen dan eus an Americ evit entana ho butun. Kementse a goust pemp mil lur d'an hini a fell dezhan lacat digas dezhan eun eulfen dan, mes ive ar blijadur en deus da zevi he vutun gant tan deut eus ar c'hostez all eus ar bed. G. M.

En Irland, eul labourer douar en deus galvet dirag eur lez-varn eur scrifagner pehini, en eur lenn en astrou a zisclerie pe seurt amzer a dlie beza. Eur vech en doa discleriet e vije caer an amzer en deziou varlerc'h. Al labourer her c'hredaz, hag a lezas var ar prad he foen pehini a voa great avoalc'h. Dont a reas glao braz, hag ar foen a ieas gant an dour. Al labourer douar a c'houlou ma vezo

Perag, a lavar dezo eur gazeten gristen, perag ne zavit-hu ket hueloc'h? An tadon eus an Iliz o dea kemeret ar pezh a lavarent eus a serijou an Ebestel, hag an Ebestel ne reant nemet la'aret ar pezh zo en Aviel, e comzou Jesus-Christ he-unan.

Evelse clemou an dud difeiz a ziskuez selear ez eo an Iliz, ar guir relijion ato ar memes, ne jench morse, e tesc hirio ar pezh a zeske hor Zalver he-unan. An Aviel, couls hag an oll Eskibien abaoe, a zesc ato d'ar gristenien ez eo an dizurziou, ar pec'hejou eo a denn var an douar goaligner an Env, hag evit ho fellaat ez eo red d'ar pec'her distrei ous Doue, caout glac'har d'he bec'het, ober pinijen. Hag evit diskuez an unvaniez-ze eus ar c'henteliou a ro deomp an Iliz setu ama c'hoas caeroc'h.

Hon Tad Santel ar Pap, pa zeo bet meneg da ganoniza an daou zen curus Paul ar Groaz ha Leonard a Bors Mauris, en deus comzet evel Eskibien Frans. Setu ama eur guer bennag eus ar pezh en deus lavaret :

« Dereat oa dont er chapel ma, en eur c'horn eus ar vrassa iliz so er bed, er chapel-ma dediet d'ar Verc'hez didach, ha d'ar patriarch santel a Assiz; dereat oa dont ama da lenn an urs da ganoniza an daou zervicher fidel-ze da Vari, an daou vap-ze da Zant Fransez. Dereat oa c'hoas abalamour eo er chapel-ma e recevas Paul ar Groas ar veleguach hag e lavaras he oferen guenta.

« Brema zouden e c'houlennet ouzin va unan perag, en amzeriou reuzeudig ma vevomp enho, e fell da Zoue diskuez, en niver braz a dud eurus hag a Zant laket var an auteriu, ar skuier eus a dud pere ne deo ket bet avoalc'h dezho heuilla piz al lezen gristen, mes o deus bet calon avoalc'h evit heuilla an aliou parfet eus an Aviel, ha ne deo ket evit deskuez deomp penaus e c'hellomp cas diouzomp ar goaligner a bouez varnomp? N'ho c'hassimp nemet oc'h en em rei d'ar vertus, hag o tec'het dioc'h ar pec'het; rac, caer or bezo, er pec'het eo e cavimp ato ar penn abeg eus ar goaligner-ze. Guechall deg ene divlam a vije bet avoalc'h evit laçat espern eur guær cablus meurbet. Daoust hag hirio n'eus ket e Rom deg ene dibec'h, ugent, cant ha marteze ouспен? Ma ne ell ket an eneo mad-ze hirio distrei divarnomp ar goaligner hor sco, eo ma zeus cals kem etre an dud eus an amzeriou coz-ze ha ni. Neuze n'oa ket c'hoas deut Jesus-Christ var an douar, n'oa ket bet prezeguet an Aviel, n'oa ket bet trempet an douar gant goad hor Zalver.

« En em jala a reomp o velet ar goaligner hor sco, ha ne oufemp morse en em jala avoalc'h; mes en aner en em jalimp ken na lakimp doun en hor speret eo ar pec'het ho digas varnomp. Ep comz eus ar goal bedennou, leoudouet, sacrilachou, nag a dud a so stag oc'h traou ar bed-ma ha ne zavont morse ho daoulagad beteg ar groas! Evidompni da viana, en em droomp oc'h ar groas. Me vezo ar c'henta o stouet e troad ar groas-ma, o poket dezhi hag o c'houlenn trugarez.

Stag oc'h ar groas-ma, e velan guelloc'h ar virionez eus ar pezh a lavare an Ael da Dobi : Abalamour ma plijac'h da Zoue, oa red e teuje an dendance d'oc'h amprou.

« Eus a guichen ar groas-ma ho pennigan oll. Benniguen a ran ar guær-ma evit ma plijo gant Doue pel-laot diouthi ar goaleuriou so oc'h he gourdrouz; benniguen a ran an Itali evit na lamo ket Doue ar feiz diganthi; benniguen a ran ar bed oll catolic, hag e vennigan dreist oll ar bec'herien catolic, evit ma tistroit ous Doue a greis calon. »

Setu aze ta penaus e comz hirio an iliz, ha penaus e deuz comzet ato. Comzou Jesus-Christ ne dremenint morse.

Etouez ar re a gas sicour d'hon Tad Santel ar Pap, e comzer eus eun den iaouanc, eur scolaer, pehini o veza eus a dud pinvidic, en devoa etre he zaouarn deg mil lur hag a felle dezhan da rei d'an Tad Santel. Ar scolaer-ze en em gave nec'het braz, ervez ma hel lavare d'ar beleg en deus carguet da gas he arc'hant da Rom. C'hoant en doa da vont da Rom he-unan, evit gallout guelel Vikel Jesus-Christ. Mes n'en doa nemet an deg mil lur-ze, hag evit beachi e vije red dezhan dispign lod anezho. Hoguen ne felle ket dezhan boulc'ha an deg mil lur. Evit gallout cas ar zom abez, en deus pedet eun all d'he c'has. O clevet nec'hamant an den iaouanc-ze, hon Tad Santel en devezo scuillet eur berad d'elou bennag hag an dra-ze a dalvezo d'an den iaouanc hir-roc'h evit beach Rom.

Pii Nao, evithan da veza he-unan en izom, ne all ket miret da ranna ato ar pezh en deus gant kement hini en em gaf da gaout dienez. Pa en deus clevet hano eus an distruch great gant an douriu dirollet, en deus lakeat rei mil scoet evit sicour ar re so great droug dezho gant an dour beuz.

E Rom ne ma ket ar c'holera, petra bennag m'ema ar c'hlenvet e cals a vroiu-all, ha ma za tud di a bep bro da dremen ar goan. Cals a dud pinvidic hag a renc'huel a ia da Rom er bloa-ma evit ar goan; c'hoant o deus, ar gristenien vad-ze, da veza etro da renta servich d'ar Pap mar en defe izom.

Miz here eo ar miz ma eo boaz tud Rom da ziskuiza. Da zul, da lun ha da iaou e veler keriz o pourmen en dro da guær en diaveaz. An eil tiad tud a ia da breja d'eguile. Al leziou-barn, an tiez scol, an tiez digor d'an oll e mare all, a zo neuze serret. Ar Pap a ziskuize ive, mes setu ama penaus. Mont a ra bep iaou da vizita an ilizou hag ar c'hlandiez (an hospitaliou). Diziou diveza eo bet o velet ar re so scanveet ho speret, hag en deus tremenet ouспен eun heur o comz outho.

Eur missioner, diblasset eus a Vrest ar 25 a vis gouere evit mission Kansas, er Stajou-Unanet, a serif eus a guær Topeca :

« An escopti ma emañ enha so tost kement hag ar Frans, petra bennag ma zeus mil guech nebeutoc'h a

dud enha. Rannet eo e meur a loden. Al loden e pehini emañ a so en em dennet an dud anezhi er menezioù, casset er meaz eus ho zra gant ar brotestantet. Eno ez eont hag e tevont, dare gant an naoun, o rei ho mallos d'ar re o deus ho chasset. Oh! nag hi so truezus ho stad! nag e on eus izom da bidi evitho!

« E creiz ar gouelec'h bras-ze ez eus eun dinel hag eur groaz varnezhi. Hounnez eo an iliz. E kichen emañ tiic ar vissionerien. Ne domp er mission-ma nemet daou veleg ha pevar catekizer. E kær Topeca emañ hon iliz hag hon ti. Er guær-ze n'eus ket ouспен pevar pe bemp mil den, petra bennag ma zeus bro aleis dindanhi. Tad kær a zo gozig oll eus an Europ; evelse ive, hep en amzer, tud ar vro, ar C'hree'hin-Rus, a glase iskin outho; ne allont ket gouzaon an dud drouglivet, pe an dud venn.

« Oll bro ar C'hansas a so goloet gant ar peuriou, foenneier pe brajou hanvet *Pampas*. Eno e veler a vandennou kezeg hag ejennet gouez, chas ha kizier gouez ive; oll ez eont cleac'h ma keront. Tud ar vro, casset er meaz eus ho zra, a veler ive o vale dre ar c'harteriu gouez-ze, o clask eul leac'h da ellout chom enha.

An hini a evessa mad oc'h ar pezh a dremen er bed, a so red dezhan hirio anzaou ne deus nemet ar gristenien gatolic hag a ve mad da zicour ho breudeur izomec, hag o defe eur guir garantez evit ho nesssa. Evit guelel kementse ne ve nemet sellet oc'h Bro-zaoz, ar vro-ze pehini a fougueer kement e pep guiz. Eur serij, eun euz eo guelel ha clevet penaus emañ ar beorien er vro-ze. Ha gouscoude eno ive e saver cals arc'hant evit an dud izomec. Mes allas, aluzennou roet dre red, aluzennou ha n'int ket roet gant eun dorn carantezus, a vez ato ber. Eun den hag a rann aluzennou dre vicher, nevouezo morse tenna ar paonr a zienez evel ar c'hristen mad pehini a voar dioueret he unan evit sicour he vreur. Dioueret ar pezh a rafe vad dezhan he unan evit sicour ar re izomec; gouzaon he unan evit espern poan d'ar re all; en em lacat he unan e danjer evit sicour tud clan, kementse ne rer nemet evit Doue, hoguen penaus e catet kementse er meaz eus ar guir relijion?

Evelse en dez-all ez oa eur buguelic astennet en or, en eun doare porched dirag eur c'hlandi, o c'hortoz beza diguemeret eno. Mam ar buguel a ioa maro en deis-ze er c'hlandi, ha daou vreur dezhan a ioa maro eun derveziou bennag diaraog. An tad, rannet he galon gant kement a gollou, o velet ar c'hlenvet o cregui er paotricma, en devoa he zamet var he choug da gas d'ar c'hlandi. Ar medicin en doa roet urs d'he guemeret.

Mes an aotrou hag an itron so e penn ar c'hlandi ne felle ket dezho rei diguemer dezhan. Clasc a reant digareziou. Lavaret a reant oa guelloc'h he gas da eur c'hlandi all. Etre daou ar buguel a voassea dezhan; ien oa, hag ar re iac'h zoken a grene gant ar riou.

Unan bennag eus ar re a voa eno a lavaras da rener ar c'hlandi : Mes en hano Doue na jomit ket da dreinel-

lat. Ne velit-hu ket eo deut peursdu ar buguel, hag e varvo sur mar hen lezit aze pell.

Hoguen rener ar c'hlandi a arguile ato, hag ar buguel keaz a varvas abeo eun heur bennag goude. Petra rea kemertse d'ar rener? Eur c'hlanvour nebeutoc'h oa da zoursial anezhan. Goude e voue lavaret penaus rener ar c'hlandi a voa en em dromplet var stad ar c'hrouadur.

Setu ama c'hoaz eun dra all : Eun den a'ic'ha en dez-all a hed ar ster e kær Londrez en eur goz vague. Dont a ra eur sourrat avel hag a dro ar vag var he guinou. Ar paour kez den taolet en dour en em laca da glasc neun guella ma c'hell etrezeg ar bord. Cals tud a voa var ar c'hae, hag evel ma zeo ar Saozon claoustreerien eus ar reguenta, e savas claoustreou dioc'h tu,

— Gouzout a ra neun, a lavare lod.

— Ne voar ket, a lavare lod all.

— Claoustre e vezo beuzet!

— Claoustre, ne vezo ket!

Ha setu claoustreou laket, epad ma poanie an den kez o clasc savetei he vuez.

Eus ar c'hostez all d'ar ster, daou vartolod a lamaz en eur vag, hag a deuas beteg enha. Mes criet oue outho! N'hen tennit ket! N'hen tennit ket! Claoustreou zo! An daou vartolod a voue red dezho mont kuit ha lezel an den kez d'en em denna eus ar ster evel ma carje. Petra c'hoarvezas? An den paour a voue beuzet; mes claoustreou a voa bet divar he benn. Setu aze da viana eun taol saos, saos ebken, saos diguemesc. Ne gredan ket o defe christenien catolic eur galon ker criz-ze.

G. M.

HISTOR ZANTEL,

TENNET DIVAR LEVR ANN EXOD.

(Trede Pennad).

Moizes e bro Madian.

Moizes digouezet e bro Madian, a azezas da ober eun ehan e kichen eur puns. Hoghen Jethro pe Raguël, belek Madian en devoa seiz merc'h. Dont a rejont d'ar puns-ze da denna dour, hag o veza karghet ar c'hantou, e felle d'ezho doura loened ho zad. Mesaerien a zigouezaz, hag ho c'hasse kuit. Neuze Moizes a zavaz, a zifennaz ar merc'hed iaouanc, hag a zouraz ho denved.

Pa oant distroet da gavout Raguël ho zad, hema a lavaraz d'ezho : Perag oc'h-hu deut d'ar ghear kentoc'h eghet ned-oc'h boazet da zont. Hi a respontaz : Eur goz ijipsian en deuz hon delivret dioc'h ar yessaerien; oc'h penn-ze tennet en deuz dour gan-eomp, ha roet en deuz da eva d'hon denved. Ha Raguël da lavarout : Peleac'h emañ ann den-ze? Perag oc'h eus-hu lezet eno ann den-ze? It d'he glask evit ma roimp d'ezha da zibri. Var eun dighemer ker mad, Moizes a douz e choumche gant-han evit mad; hag e kemeraz da bried he verc'h Sephora. Hou ma a c'hanaz d'ezhan eur map, ha Moizes hen hanvaz Jersam, o lavarout : Tre-

meniad ouñ bet en eur vro estren. Eur map all en doe anezhi, hag ec'h hanvaz anezhan Eliezer, o lavarout: Doue va zad, va difennour, en deuz va zennet a dre daouarn Pharaon. Ar Batriarched a roe evelse d'ho bugale hanoiou hag a zigasse sonj euz a vadoberiou Doue enn ho c'henver.

Pell amzer goude kement-ma, roue ann Ejipt a varvaz, mes ann hini a zeuz var he lerc'h ne oa ket guelloc'h e kenver ann Hebreed. Bugale Israël, oc'h hirvoudi, en em glemme a vouez huel dre'n abek d'ho labourou. Ho c'hri a bignaz bete Doue, ha Doue, o kaout sonj euz ar ghevredighez en devoa great gant Abraham, Izaak ha Jakob, a zellaz out-ho, hag en em ghemeraz d'ho diboania.

BUEZ AR PLAC'H DEVOT ARMELA.

(daouzecvet pennad.)

Armela castizet dre guement a boaniou c'houero, a vele he ners o vont diganthi. Setu perac e reaz elask he c'honfessour, hag e covesseaz gand eur glac'har ar vrassa en eur leuskel, hervez he c'hustum eur mor a zaélou. D'an 20 a viz here, d'ar meur, tri dervez goude, e communiuz, antronoz e oue casset d'ez-hi adarre he Doue, hag he c'honfessour a roaz d'ez-hi an absolven euz he buez pen-da-ben. Er memez deiz, var mare cresteiz, e oue nouet, hag e pad ma edot o rei d'ez-hi ar sacramant diveza-ze, e clefjot anezhi, en despet d'ar sempladurez euz he mouez, oc'h ober an actou a dleer da lavared en heur diveza-ze. Eun nebeudic goude e zeaz en he fassion, hag he c'homz diveza a oue an hano santel a Jesus. Neuze e zeaz dilavar. He fassion a badaz teir nosvez ha daou zervez. Ar maro a dennaz he ene caer euz a vuez ar bed-man, d'ar sadorn 24 a viz here, 1671, etre cresteiz hag eun heur.

A veac'h e oue cleved e kær ar c'healou melconiu euz a varo Armela, ma redaz kement a dud a bep oad hag a bep stad d'an ti, ma ne c'hellet mui tostad euz ar c'horf santel. Pep unan a glasse tappout eun dra benag a vije bet en he zervich, hag e ber amzer he c'hoz-tammou dilliad a iez e diffram. He mestr a oue ken doaniet d'he maro, evel p'an dije collet ar guella euz he vugale. Gourc'hemen a reaz ober kement a zispag d'ez-hi, evel pa vije bet he verc'h. Ar c'horf a oue eta sebeliet ha laked en eur c'hœur peintet e guen : a bep tu d'ez-han pillerou goulou coar euz ar re gaera. Ne falvezaz ket d'ez-han lezel golei treid ar c'horf maro, evit ma heljet mont da bocad d'ez-ho en eur skuilla daélou. Holl dud he di a reaz evel-han, ha zoken calz tud estren. Ar chaloniou euz ar gathedral a c'houlennaz ar c'horf evid hen enterri divar ho dispign: an Aotrou person ne c'houlenne ket ken nebeut vell egued ober kement-ze. Mez he mestr var goulenn Armela, a roaz ar c'horf d'an ursulinez. An Tadou Jesuisted a c'houlennaz he c'halon, ha roet e voue d'ez-ho. Evit-ze e voue digored ar c'horf evit caout ar galon, da zeiz heur euz an noz. Ar galon a

lekejot en eun archedic plom. Ar vidissinet a dennas ive euz ar c'horf eur gostezen benag evid rei da dud a lignez huel ho doa ho goulennet. Anaveout a rejot neuze eur c'hlenved e doa en he liven-guëin, hag he doa laket da c'hounzao calz epad tregont vloaz da nebeuta eb me dije morse en em glemmet. Var he bisaj goude he maro e yeled eun ear ken dudiuz ma roe doujans d'an holl. An dud a sebeliaz hag ar vidissinet a ioa bet var dro ar c'horf, ne glesjot c'houez fall ebet ganthan daoust d'ar brein-crin hen tague pell-a-ioa. Ar pemp var n'uguent, ar c'horf a voue douguet da chapel an ursulinez. Ar peder barrez a gær a iez a bez d'an entermand. An aotrou Doue, person parrez Patern, dre ma n'em gave couent an ursulinez var he zouar, a ganaz oferen an entermand, hag an aotrou Gallois, chaloni, ha kure parrez Sant-Croix, e leac'h m'edo marvet Armela, a ganaz al *Libera*, hag a gassaz ar c'horf d'ar bez. Rei a reaz ive eur zermon evid ober meuleudi ar servicheurez-man da Zoue. Lakeat e oue en douar, diabarz ar c'hœur, e corn an aoter-vraz. Antronoz e oue caned evid-hi gand calz a lid eur servij-vraz e leac'h ma n'em gavaz eun niver braz a dud. Ar memez tra a c'hoarvezaz deiz an Eiz-vetez. Al leanezed a lekeaz eur mean-bez caer var ar c'horf, ha var ar mean-ze e rejont scriva ar c'homzou-man, roet d'ezho gand eun tad Jesuist :

« Aman e chom Armela Nicolas, guinidic a zivar ar
« meaz, servicheurez euz he stad, galvet peur-liessa
« Armela-vad: Doue a ziskulliaz d'ez-hi traou burzuduz,
« beva a reaz dre garantez. Mervel a reaz var an douar
« evit mont da veva en env, ar bevar var n'uguent a viz
« here 1671, oajet a dri-bloaz-ha-triugnent. Pedit evid-
« hi, ha kemerit skuer varnez-hi, en eur garet Doue
« evel me deuz-hi her c'haret.

« *Requiescat in pace. Amen.* »

Caera buez ! Caera maro ! a leverfet, eb mar ebet, lenner va mignou. Leac'h hoc'h euz da parlant er guize. Setu aze eur santez diskennet a lignez izel, merc'h da labourerrien douar, ganet e Breiz-izel, hag a zo brema kuruned en env dreist an dud a lignez huel, dreist an dud desket braz. Grit eta, ar pez he deuz great, hag hen ober a c'hellit, hag ho kurunen en env a vezo ive eun deis-da-zont ken luguernuz hag hini Armela. En deiz coulz hag en noz, en domder-bero euz an aon, coulz bag er frim euz ar goan, kendalc'hit en hent a ziskuez d'eoc'h ar servicheurez-man, hag ho silvidiguez a zo e savete !

T. B.

AR ZUL.

Ar zùl eo eta brema an deiz santel, deiz an Aotrou Doue, ha ne ket mui ar zadorn, ec'hiz gwechall. Lavaret or beuz gan piou, penauz ha perag eo bet grëet ar jenchamant-ze. E zeom brema da welet penauz e tleom miret ha santifia ar zùl.

Done he-unan, er skritur zakr, ag or Mam zantel an Iliz a verk d'eom petra or beuz da ober evit se.

Gwelom da guenta petra a lavar Doue d'eom diwar

benn an deiz santel. Setu ama war lerc'h he gomzou he-unan, ec'hiz ma ho lennom e leor an *Exod* pe an *Tec'h* euz an Ejipt, pennad XX, gwerzennoù 8, 9, 10 ag 11. Deja, ma em beuz sonj mad, o peuz lennet ar c'homzou-divin-ze e *Feiz ha Breiz*, mes n'ho lenner morse re aliez :

« Az pez sonj da zantifia deiz ar zabat, deiz ar
« *repoz* (1). »

Ne ankouait ket ez eo Doue he-unan a parlant evel-se euz ar bobl a Israël, diwar gern menez Sinai.

Remerkit ivez penauz ar ger *Sabat*, en hebreeg, a ziniñ *arzaou*, *hean*, *paouezvan*, *repoz*.

« Te a labourou epad c'houec'h devez, eme Doue, ag
« a raio kemment as pezo da ober a labour epad ar
« c'houec'h devez-se (2). »

« Mes d'ar zeizved devez e ma an deiz a hean, a *repoz*,
« konsakret d'an Aotrou da Zoue. D'an deis-se ne ri
« taöl labour ebed, na te, *ozac'h*, na da vab, na da verc'h,
« na da vevel pe da zervicher, na da vatez pe da zervi-
« cherez, na da loen : *marc'h*, *eujenn ag anevaled all*,
« nag an diavezyad pe an divroad en em gaffe en ho
« touez. (3). »

« Rag an Aotrou da Zoue en deuz grëet e c'houec'h
« devez an Nenv, an douar ag ar mor, gan kemment a
« zo en-ho, ag en deuz arzavet, *kemmeret he repoz* d'ar
« zeizved devez. Setu perag an Aotrou da Zoue en
« deuz binniget ar zeizved devez deiz euz he repoz, ha
« santifiet aneza, *greet aneza eun devez santel, eun devez*
« *sakr*. (4). »

Setu aze, ma mignoned, ar gourc'hemen, ger evid ger, ec'hiz ma hen roaz Doue he-unan gwechall d'ar bobl a Israël, diwar lein menez Sinai, euz a greiz an tan, al luc'hed ag ar gurun, ag ec'hiz ma her skrifaz he-unan war eun daölenñ voen.

Ag ar gourc'hemen-ze, ma mignoned, a zell ouz-om, ia, a zell ouz-om ivez. Rag, ne ankouait ket penauz an oll gourc'hemennoù, roet gan Doue gwechall d'ar bobl a Israel, ha pere n'ed int ket bet lammet, torret gan-t-ha abaoe, a zell ouz om evel ma sellent ouz an Israëlitid, ha ken dalc'het ez om da viret anezo evel m'edo an Israëlitid : rag beza ez om evel-t-ho bugale Doue. Hogen, ar gourc'hemen war an deiz santel, d. l. e. (da lavared eo) an difenn da labourat d'an deis-se, ag an urz da zantifia aneza, oc'h hen tremen e servich ar C'hrouer n'e int ket bet lammet. Jezus-Krist en deuz dalc'het ar gourc'hemen-ze ha lakeet aneza en he lezen, el lezen gristen. N'ez euz a jenchet nemed an deiz ag an doare da zantifia aneza.

Ar gourc'hemen eta war an deiz santel, ec'hiz ma

(1) *Memento ut diem sabbati sanctifices* (Exode, XX, 8).

(2) *Sex diebus operaberis, et facies omnia operatua* (Ibidem, 9).

(3) *Septimo autem die sabbatum Domini Dei tui est: non facies omne opus in eo, tu, et filius tuus et filia tua, servus tuus et ancilla tua, jumentum tuum, et advena qui est intra portas tuas* (Ibidem, 10)

(4) *Sex enim diebus fecit Dominus caelum et terram, et mare, et omnia quae in eis sunt, et requiescit in die septimo; idcirco benedixit Dominus diei sabbati, et sanctificavit eum.* (Ibidem, 11).

hen lennom e leor an *Exod*, a zell ouz-om ; ken dalc'het ez om da viret aneza evel m'edo an Israëlitid. Hogen, daou dra a gevom merket sklear er c'homzou euz an *Exod* :

1^o E tleom santifia deis an Aotrou Doue, o tremen aneza en he zervich : « Az pez sonj da zantifia deiz ar
« zabat, deiz ar repoz, » eme Doue.

2^o E tleom heana, lezel ol labourou a gostez ag evel-se or c'horf da ziskuiza, d'an deiz santel : « D'ar zeizved
« devez ne ri taöl labour ebed, » eme ar C'hrouer.

An drede gourc'hemen, me fell d'in lavaret ar gourc'hemen war zeiz an Aotrou Doue, a gever aneza troet evel-hen e katekiz Leon :

Ar zùlou santel a viri,
E servich Doue, oc'h he veuli.

E katekiz Treger... :

Ar zùlou santel a viri,
Evid Doue ma zervichi.

E katekiz Kerne... :

Miret a ri an oll zùlou,
Gan oevrou mad ha pedennou.

An tri goublad-ze, en deon, a ziniñ ar memes tra, petra bennag ma ez int troet en eur feson disenvel. Marteze e vize rentet gwelloc'h ar gourc'hemen euz ar skritur zakr, e vize merket sklerroc'h an daou dra ordrenet, ma vize lakeet evel-hen :

Da zùl lez da oll labourou,
Ha servich Doue da Aotrou.

Pe : Da zùl peb labour a fezi,
Ha Doue epken a zervichi.

Pe : Da zùl neb taul labour na ri,
Ha Doue epken a zervichi.

En tri goublad-ze, an hean euz al labourou, ordrenet dre ar c'homzou-ma : « ne ri taöl labour ebed, d'an
« deis-se (d'ar zeizved devez) : *non facies omne opus in eo*
« (*septimo die*), » a zo merket sklear, a zo rentet mad dre ar gwerzennoù-ma :

Da zùl lez da oll labourou,
Da zùl peb labour a fezi,
Da zùl neb taöl labour na ri.

Al lodenn all euz ar gourc'hemen : « Az pez sonj da
« zantifia deiz ar repoz (an deiz santel) : *Memento ut*
« *diem sabbati sanctifices*, » a zo ive rentet mad dre
bep ini euz an diou werzenn-ma :

Ha servich Doue da Aotrou,
Ha Doue epken a zervichi.

Y. K. KERZALE, beleg ar Zalet.

(Eur pennad all eur gwechall.)

An Tad-Koz hag he Verc'h-Vihan.

Eunn deiz, n'euz ket pell, en dra m'edoun o vale war ann hent braz tost da Landerne, neuze ec'h en em gavaz eunn den koz-koz, gant-han enn he vrec'h eur verc'hik koant war-dro daouzek vloaz ; Mac'hari-dik he hano.

— Enn hoc'h eaz, tad-koz, eme-z-hi ; ho tourn war va skoaz. Skuiz-maroc'h hirio, greomp eunn diskui-zik ama, setu peleac'h azeza. Abarz nemeur ama e vezimp erruet.

— N'eo ket gaou a levez, Mac'haridik, emé ann tad-koz o tenna he alan, ne vezo ket pell e vezimp erruet, Paneved te, va merc'hic, ne rafenn ket. Te eo a zo oc'h va harpa em c'hozni : te eo a zeu bemdez gan-en endra m'ema da dad gant he labour enn he bark ; te eo a zigas boed d'in pa vezann dalc'het war va gwele. Gant Doue e vezi paeet, Mac'haridik, rak karet a ra ar vugale ho deuz eur galoun vad hag a enor ar re goz.

Kerkent a ma oent gwelet, ann ozac'h a lavaraz d'e-zho : emomp o c'hortoz ac'hanoc'h ho taou, deomp da zibri hor pred-boed, mar kirit. — A galoun vad, eme ann tad-koz, deomp da zibri hor boed, rak ne d'ounn ket sinac'h, a drugarez Doue. Mac'haridik, d'euz da azeza em c'hichenn. Sell, va map, eme-z-han, enn eur drei ouz ann ozac'h, ar verc'hik-ma a dal va eal-mad ; rak dre-z-hi e vez torret nerz va foaniou ; koueza a rafenn bep kammed nemet hi harpe ac'hanoun. Pidi a rann Doue bemdez evit ma tistaolo war-n-ezhi ar mad e deuz great d'in.

Neuze ar re a ioa eno a lavaraz enn eur vouez : Tad-Koz, plijet gan-e-hoc'h pidi Doue evid-omp ivez, rak bennoz eunn den koz a ra vad atao.

Pa ho doe debret ho gwalc'h, Mac'haridik a falvezaz d'ezhi kas he zad-koz d'he gampric, enn tu all da borz ann ti. Mont a rejont eta ho daou breac'h ha breac'h, enn eur ziviza gwell pe well, ken eaz e oant.

Noz vad d'e-hoc'h, tad-koz, eme-z-hi ; hag e pokaz d'ezhan araok mont d'he gwele.

A. T.

(Tennet euz a *Vignoun ar Vugale*).

AR PURGATOR.

Deut eo miz Du. Ann deiz kenta ema gwel ann Holl Zent ; ann deiz war-lerc'h, gwel ann Anaoun. Ia, hor mamm zantel ann Iliz, goude beza enoret ar zent euz ar Baradoz, a zigas sonj d'e-omp euz ann eneou dalc'het er Purgator. Ann deiz-se ann holl veleien a dle lavarout ann overn hag ann offiçou oll evit berraat ho foaniou ha digheri d'ezho dor ar Baradoz. Ar gristenien vad ho-unan, dreist-holl, e Breiz-Izel, ne dremenont ket ar gwel-ze hep kaout sonj euz ho zud varo. Ar vugale a bed evit ho zad hag ho mamm eet d'ar bed-all. Ann tadou, ar mammou a bed evit ho bugale maro enn ho raok ; ann intanvez a bed evit he fried, ann ozac'h evid he c'hreg. Ar beorien a bed evid ar re ho deuz ho sikouret enn ho ezommou keit ha ma oant war ann douar.

Ann eneou euz ar Purgator, petra bennak n'hellont netra evit ho ho-unan, a hell kalz evid-omp-ni. Mar hon euz truez ouz ann eneou reuzeudik-se, pa vezint pignet er Baradoz, ne ankounac'haint ket ho mad-oberourien. Ni a varvo d'hon tro, ha marteze kentoc'h evit ne son-

jomp. Ah ! greomp eta œuvrou mad evid ann anaoun pedennou, communionou, aluzennou, overennou klevet pe lekeet lavarout.

Hep mar e-bed, mar d-omp bet karantezuz e kenvep ann eneou euz ar Purgator, ar re a zeuio enn hou goude ho devezo ivez truez ouz-omp. Ann eneou-santel a zo a-vreman euz er Baradoz : ann eneou euz ar Purgator ho devezo lod eunn deiz e eursted ar zent ha ni holl a zo c'hoaz war ann douar, mar karomp, ni a vezo goude hor maro gand ann eil hag eghile anezho e rouantelez ann envou.

Diwar-benn kement-se, hon euz kredet ober plijadur d'ar gristenien vad, o conta d'ezho ann histor so ama war-lerc'h. He c'havet hon euz skrivet e meur a gazeten.

Enn eur ghear vraz a Franç, enn tu euz ar c'hreis-teiz, en em gave eur ghemenez iaouank hag a oa devot meurbed. Gounid a rea gant he labour peadra d'en em wiska, d'en em loja ha da veva eno eunn doare deread hervez he c'hondition. Bez'e doa eunn devotion vraz evid ann eneou euz ar Purgator. Ne oa ket evid (en em virout) da skuilh daerou, pa sonje er poaniou euzeuz a c'houzantout er prizoun-ze a dan. Rak-se eta, goude beza pourvezet d'he ezommou pemdeziek, bep zizun kement a choummou euz-penn, ar plac'h-ze her roe evit prokuli sikour d'ann eneou euz ar Purgator. Keit ha ma viraz he iec'hed, ne zionere ket labour, rak ijinuz-braz a oa enn he micher. Mes, siouaz, choumm a ra klanv. Ne hell neuze gounid netra. Ann nebent arc'hant e doa espernet a oa dispignet e berr amzer. Red eo d'ezhi kemer war zistol. Goude beza bet klanv eur miz pe zaou, e teuz d'ezhi adarre cunn tamm iec'hed. Sevel a reaz euz he gwele. Hogher n'e doa mui enn he ialc'h nemed c'houec'h real. Enn eunn dienez ker braz, petra a reio-hi ? Mont a ra er meaz euz he c'hamb. Diskenn a ra war ar ru. C'houec'h real am euz c'hoaz, ha netra ken. Petra da ober, da beleac'h mont ? N'euz forz, eme-z-hi, ne gollinn ket kaloun. Mont a ra d'ann Iliz d'en em erbedi d'ann eneou euz ar Purgator. Keit ha ma pede enn Iliz, e welaz eur belek o vont d'ar sekreteri, hag hi war he lerc'h. Goulenn a reaz digant-han mar en doa lavaret he overn. N'am euz ket c'hoaz he lavaret, eme-z-han. Ha prometet hoc'h euz-hu anezhi ? N'am euz ket. Setu eta guerz hoc'h overn, hag e ro d'ezhan ar c'houec'h real. Livirit-hi, mar plij, evit ann ene a dle mont er-meaz ar c'henta euz ar Purgator. Hen ober a rinn, erre-ar-belek. Klevout a reaz ar plac'h iaouank ann overn-ze, communia a reaz enn-hi, hag oc'h unani he fedenn gant peden ar belek, e pedaz a galoun evit ann ene a dle sortial ar c'henta euz a dan ar Purgator. O veza trugareket Doue euz ann overn e deuz klevet hag ar gommunion e deuz great, ez eaz er meaz euz ann Iliz. Setu-hi eta war ar ru. Na oar da be tu mont nag oc'h picu kaout rekour.

Enn eunn taol eunn aotrou iaouank hag he gwisket ha kempennet kaer, en em gao dira-z-hi. Lavaret a ra d'ezhi : gouzout a rann e klaskit en em c'hopra. It eta er ru-vraz. Savit er ru-ze beteg ann numero pemzek, skrivet war-c'horre ann or. Antreit enn ti-ze ha gou-

jennit komz ouz ann itron. C'hoant e deuz da gas kuit he matez ha da ghemer eunn all. Setu eta hon plac'h iaouank o sevel er ru vraz. Digouezet dirag ann numero pemzek e sko war ann or. Eur vatez a zeu da zigheri, hag a lavar d'ezhi : Petra a fell d'e-hoc'h-hu ? komz ouz ann itron, eme-z-hi. Me ia oa c'houlenn mar ro konje d'e-hoc'h da bignat enn he c'hamb. Ann itron a c'houlenn piou eo ar plac'h-se ? N'ouzounn ket, eme ar vatez. Livirit d'ezhi dont em c'hamb. Pignat a ra di, sioul ha modest. Petra hoc'h eus-hu da lavaret d'in, ma merc'h ? Itron gher, me a zo o klask eur gondition, hag eunn aotrou iaouank aze war ar ru en deuz lavaret d'in ho poa ezomm euz eur vatez. Ann itron o klevout ar c'homziou-ze, a chom saouzanct. Penaoz, eme-z-hi, eunn aotrou iaouank aze war ar ru en deuz lavaret d'e-hoc'h e klaskenn-me eur vatez ? Ia, itron. Hag anavezout a rit anezhan ? Ne rann ket. Ann itron souezet muioc'h-mui, a lavar : petra signifi eta kement-ma holl ? Gwir eo ; resoltet e oamp da gas kuit va matez ann deziou-man ha da ghemerout eunn all ; mes n'am euz lavaret gher e-bed da zen war ghemment-se. Penaoz eta eo bet lavaret d'ar plac'h-man, aze war ar ru, gand eunn aotrou iaouank, am boa ezomm euz eur vatez ? Keit ha ma tivize evel-se ann itron out-hi he-unan, ar plac'h deuet enn he c'hamb, o sevel he daoulagad, a wel eunn daolen war behini e oa pintet skeuden pe portred mab ann itron, maro er brezel tri bloaz a oa, hag ar plac'h d'en em estlami ha da lavaret : setu aze ann aotrou am euz gwelet war ar ru, hag en deuz komzet ouz-in ! — Ar c'homziou-ze a laka ann itron enn eunn estlamm hag eur souez brassoc'h c'hoaz. Ne oar mui petra da sonjal na da lavarout war ghemment a wel hag a gleo.

Ar plac'h-man, eme-z-hi, d'ez-ni he-unan, a seblant beza eur plac'h fur ha devot. A hend all, Doue a selaou ar beden great gand eur galoun eunn ha dinam. Ouspenn c'hoaz, n'euz netra enn tu all da c'halloud ha da vadelez ann aotrou Doue. Ha n'en deuz-hen ket Doue aotreet d'am mab dont da zigas d'in ar c'helou kaer-man : e oa peur-great he binijen er Purgator hag e pigne d'ar Baradoz ! Neuze ann itron, oc'h en em zistrei oc'h ar plac'h kasset d'he c'hayout, a lavar dezhi : ma merc'h, deut d'am zi ; adalek warc'hoaz ho kemerinn em servich hag evit choumm gan-en keit ha ma veinn. M. D.

Le Délaijir 57.

Hano ar Zent evit ar Sizun-ma.

- DILLUN, 12 Du. — Sant Martin, pap ha merzer.
 DIMEURS, 13. — Sant Stanislas Kostka.
 DIMERC'HER, 14. — Sant Didas, a urs Sant Francez.
 DIZIOU, 15. — Santez Gertrud, guere'hez.
 DIRGUENER, 16. — Sant Melani, escop.
 DISSADORN, 17. — Sant Gregor Taumaturj, escop.
 DISSUL, 18. — C'huec'hvet sul varnugent goude pantecost, Eisvet an Dedi.

Aviel ar zol.

Jesus a lavaraz d'he ziskibien : Rouantelez an Enn so henvel oc'h eur c'hreuner. sezo ; eun den he c'hemer hag a ia d'he hada en he bare. Ar c'hreunen-ze eo ar biana eus an oll hajou ; mes pa en devez great he grese, eo brassoc'h eguet an oll louzeier, hag e teu da veza eur vezen, kement ma teu labouset an env da gluja, yar he scourrou.

Lavaret a reas dezho, c'hoaz, ar barabolen-ma ; henvel eo Rouantelez an Enn oc'h eun tam goell a guemer eur c'hreg hag a laca e tri muzulat bleut ken na vez goet oll an toaz. Jesus a lavaraz an traou-ze oll d'ar bobl e parabolenou, ha ne gomze ket outho ep lavaret dezho eur barabolen beannag.

Kementse a voa evit digas da vir coms ar profet pehini a lavare : Digueri a rin va guinou evit lavaret parabolenou, discuilla a rin an traou so bet euzet aboune commansamant ar bed.

SANT VAZE. XIII. 31. G.M.

KELEIER.

An Aotrou Peyron, nevez beleguet, so hanvet eil secretour euz an Escopti.

E foar an eac'h, e Montroulez, e voa, d'al lun, a leverer, antercant ouспен pevar mil benn-kezeg ; lavaret a rer ive eo bet mad ar foar.

E Marseil e leverer e tigouez ed aleis eus ar broiou all.

E Recouvrans e maer brema oc'h ober eun or nevez var guær.

Eun den iaouanc a c'houlenne labour e ti eur marc'hadour. Hema a lavaraz dezhan : Me garje ervad e c'häljen ho kemeret ; mes ar c'henverz a ia fall, ha n'em eus nemeur a labour da rei.

— Oh ! eme an den iaouanc, an nebenta ar guella, n'eus fors pe guen nebent a labour a root din, me vouezo ober va zreuz gantha !

E *Cazeten ar Meziou* e cavomp eur pennad lizer divar benn an avalou douar. Lacat a reomp ama eur guer bennag eus ar pez so e lizer-ze :

An avalou douar ne garont ket an dour, ne garont ket an douarou gleb, douroc, prielloc. Cals labourerien goueziec a so hag a gred penaus mar dens deut clenvet var an avalou douar, eo dre ma ho lakear alies e douarou gleb. Rag piou a laca evez e pe seurt douar lacat an avalou-ze ? Ha ne deo ket mad dezho an douar eleac'h ne eller ket caout traou all ?

An avalou douar ne vezont plantet nemet pell goude

ma vezont comanset da biguenna, da gorzena. An biguennou-ze a vez torret. Guir eo an avalou douar o deus kement a nerz, ma corzennont a nevez en douar; mes gouscoude an eil rum cors ne oufe morse beza ker cre hag ar rum guenta.

Evit kement had a daoler en douar, e tibaber ar greun guella, an had guella, ar pep dareva. Mes evit an avalou douar ne ket evelse a rer. Dibaba a rer ar pep falla, ar pep distera, ar re zo nebeuta dare. Ne ket c'hoaz avoalc'h, mont a rer bete drailla an avalou-ze, evitho da veza dister, ha lod zo zoken hag a lavar eo mad hada ar pluse pe ar c'hignachou! Ha souezet e tlefet beza ma za an avalou douar-ze da fall? Ma rafet evelse evit an ed pe evit an hajou all, piou a c'hortosfe caout east mad? An avalou douar so gouscoude eun had ive evel an hajou all.

Lavaret a rer penaus an avalou douar gounezet e miz ebrel pe en derveziou kenta a vae a zao ker buan hag ar re all, a vez cavet kerkent hag ar re all. Guir eo, sevel ha creski a reont buan. Pa deu eur mare eus ar bloaz, e sec'h ar c'hors varnezho evel var ar re all. Mes an avalou douar-ze, hag e vent bras, n'int ket hanv, n'int ket dare, leun int a zour, hag evel n'int ket dare avoalc'h ez eont var fallaat hag e clauvont.

Me a gaf din eta, eme an hini a scrif al lizer-ma, e tlefet planta an avalou douar abred; e miz guenver pe e miz c'huevrer da zivezata.

Me a gaf din e tlefet planta an avalou douar en ho fez, hag o lacat e douar seac'h, e douar hag a ve guelloc'h da rei segal evit da rei guiniz.

Me a gaf din e tlefet ober evit an avalou douar ar pez a rer evit an hajou all; da lavaret eo, dibaba da had ar re vella, ar re iac'ha, ar re zareva. Cridi a ran penaus ma rafet evelse, ar c'hlevet a iafe kuit nebeut ha nebeut divar an avalou douar. Meur a hini a anavez, dre an essa o deus gret, ar virionez eus ar pez a lavaran.

Lavaret a rer avechou, pa gomzer eus an dud ingravet, eus ar re a ra ho Doue eus an danvez: An den-ze a rofe he galon evit eun diner; ma velfe stag eun diner eun tu bennag, ez afe bete Paris var he lerc'h da velet hag hen a zistacfe. Hoguen setu ama diou vaouez, diou itron, ha ma vije roet prizion d'ar seurt tud-ze, a vije sur da gaout. Ar c'hazetennou a goms ar sizun-ma eus a varo an diou vaouez-ze pere e kenver beza piz, a ve diaz caout re all da vont en tu all dezho na zoken keit hag hi.

Unan anezho e deus bevet pemp bloaz varnuguent en eur solier eleac'h ma vije lavaret ne voa den o chom. Ne voa coulz lavaret tam arrebeuri. Ne rea morse a dan, goloet e veza ato a druillon. He zolier a voa eur c'hraou; ne zebre nemet eun tam creunn mastaret pe eun tam treunjou caol bennag a gave etouez an teil, etouez ar scubachou a daole an amezien er meaz eus ho ziez.

Eun devez ar borcherez oc'h he gulet o tont en

ti oc'h erella var he zreid, a guinnigas bouet dezhi, mes ne fellas ket dezhi kemeret; aoun e doa, me voar vad, n'e divije ranket he baea. Sevel a reas d'he zolier en heur horjellat, hag abaoe ne ket bet gulet beo. Abenn daou pe dri dervez ez ejeur da velet hag e voue cavet maro, ha pebez maro! Ar medecin galvet en deus discleriet oa maro defot bouet. Ar baourez truillenneg-ze e devoa antercant mil lur leve!

Setu ama eun all hag a so guest mad eus a honnez. En eun ti braz ha caer e Paris ez oa er bloaveziou diveza-ma eur borcherez hag a ioa, emezhi, paouroc'h evit Job. Bemdez he c'hlevet o clem, o lavaret pegument a zienez e devoa. Pedi a rea ar fermourien a voa en ti da rei dezhi ho c'hrevidiou da ober evit ma c'hounesje eur guennec bennag. En em guinnic a rea da ober an tamouigou labour donjerus n'ema ket an oll e poan d'ho ober. Goulen a rea ma vije taolet dezhi an tamou dillad fall ne voant mui mad dezho. Hi eo a douche al leveon eus an ti, rag emezhi, evidon da veza paour, perc'hen an ti en deus pep fizians enhou. Evel ma ema ar c'hiz evelse e meur a leac'h er c'herion bras da baea d'ar porcher pe d'ar borcherez, ar fermourien ne reant van a guementse.

Mes dont a reas ar maro d'ar borcherez paour, ha neuze e voue gouezet piou ha petra oa. An oll fermourien a jomas meurbet souezet pa glefchont penaus ar borcherez oa he unan perc'hen an ti! penaus oa d'ho mestrez, da berc'hen ho zi oa o doa roet ken alies an aluzen, tamou truillon, ha guenneien evel da eur glaskerez! Mad, hi a voa gouscoude perc'hen an ti, eun itron pinvidic bras pehini e devoa c'hoas cals leveon ouспен an ti-ze.

Gulet ez euz bet tud santel, ha gulet a rer ato tud a feiz o kuitat ho danvez hag oc'h en em renta paour evit servicha ar beorien. Mes ar re ma a ra kementse evit Doue, evit destum eun tenzor en env. Mes en em lacat er stad-se evit caout arc'hant, evit miret da zispign, en em renta evelse sclaf eus he zanvez, an dra-ze a ra euz da eur c'hristen. G. M.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 5 Du.		PONT'NABAT — 31 Here.	
Priz ar c'hant tiour.		Priz ar c'hant tiour.	
Guinis....	43 lur, 79 c.	Guinis....	43 lur, 90 c.
Segal.....	8 lur, 74 c.	Segal.....	9 lur, 48 c.
Eiz.....	« lur, « c.	Eiz.....	9 lur, 50 c.
Ed-du....	6 lur, 79 c.	Ed-du....	7 lur, 40 c.
Kerc'h....	9 lur, 46 c.	Kerc'h....	9 lur, 50 c.
Avalou-douar	3 lur, 50 c.	Avalou-douar	3 lur, 50 c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand Ar. DE KERANGAL, Moular an Escopit.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezouneec.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten à goust:

Evit eur bloas.....	DAOU SCOUET.
Evit c'huec'h miz.....	EUR SCOUET.
Evit tri miz.....	C'HUEC'H REAL.
Eur gazeten ebken.....	DAOU VENNEC.

Ar baecamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Autrou MERVAN, Belec e Kemper.

Ar paeamanehoù a dleer da adressi d'an Autrou SALAUN, ebken. An abonnamant a guement e ti an Autrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 17 Du 1866.

An Ilis santel, seul vui ma rer ar brezel dezhi, seul startoc'h e chom en he za; seul vui e sked hag e luguern he zantelez ha santelez he guir vugale. Jesus-Christ a jom ganti bete fin ar bed, ha doriou an ifern ne allint biken he zrec'hi. Hor Zalver he unan eo en deus he lavaret, ha kement christen so a voar penaus an env hag an douar a dremenno, mes comzou an Aviel ne dremenint ket. Evelse mar grer ar brezel dezhi en eul leac'h, mar deu tud eur c'harter d'en em zével en he enep, an Ilis en em skign neuze guelloc'h en eur c'harter all. Mar deu ar vugale a dost da zisprijout ho mam, ar vugale a bell a dosta evit en em deleur etre he divrec'h, en he c'herc'hen. Setu ar pez zo bet gulet dalc'h mad, hag a veler c'hoaz hirio muioc'h evit biscoaz. Gulet a reomp hirio en Itali ar brezel great d'an Ilis santel gant he vugale a dost, an Tad Santel, Vikel Jesus-Christ, trubuillet, ar Bastoret hiskinet hag harluet. Er sizun-ma e velomp adarre eur Vikel vraz eus a escopit Chiatti o vervel, ha ne deus ken abeg eus he varo nemet an trubuilhou en deus bet da c'houzaon. Clan oa pa voue croget ehan. Tennet e voue eus he vele ha casset d'ar prison eleac'h ma voue dalc'het eur miz. Goudeze e voue casset da eul leac'h all, mez ne lezet ket anezhan e frankiz. O velet he nerz o vont digantha, e c'houlennas meur a vech beza lezet da vont d'ar c'harter eleac'h ma voa ganet hag eleac'h ma c'hellet esperout e tistroje e iec'het. He beden ne voue ket silaouet, ha setu hen maro dindan ar beac'h eus ar poaniou hag an trubuilhou en deus gouzanvet.

Mes ive ar vugale a bell e velomp o tostaat. Ar guir relijion a ia var gresc eleac'h ma voa nebeut anavezet brema ez eus eur pennad amzer. Ar sperejou a zigor da ziguemeret ar virionez, hag ar c'halon a deu d'en em doma nebeut ha nebeut oc'h ho guir vam. E Brozaos ne glever ken hano nemet euz eun iliz catolic bennag nevez savet. Bemdez e comzer eus eun ilis

bennag evelse digoret d'ar guir lezen. An daou varnuguent a viz here, escop Birmingham en deus consacret gant solanite iliz nevez Sant-Gregor.

Eus a vouelet an Asi, eun escop missioner, an autrou Chauveau, vikel abostolic eus an Thibet, o voza clevet, e mis c'huevrer diveza, oa maro an autrou Lamoriciere, en deus scrivet eul lizer ar c'haera d'an itron he intanvez. El lizer-ze, goude beza lavaret pegument a boan a rea ar c'holl-ze dezhan, e velle penaus an naonteg eus ar miz e canje evit ar General, eur zervich eleac'h ma en em gache ar gristenien eus ar vro, ken eus ar Chih, ken eus an Thibet.

Evelse, evel ma on eus he lavaret diaraog, epad ma en em zao ar vugale a dost oc'h hor mam santel an Iliz, ar vugale a bell a dosta outhi, hag a gresc ho c'harantez hag ho zoursi evit hon Tad Santel ar Pap.

SANT-BRIEC.—Etouez ar re a so maro gant ar c'holera e ker Sant-Briec, ez eus unan, eur plac'h, hag a verit e ve comzet anezhi. Ar skuer vad e deus roet, ar galon vad e deus diskuezet, a laea an oll da ober he meuleudi. Ar plac'h-ze a rer Mari Jan Hillion anezhi. Eun ugent vloas bennag so e teuas da Sant-Briec da zervicha e ti eur c'higuer. Goude beza gouzanvet eno pell amzer aberz he mestr hag he mestrez pere n'en em glevet ket, e voue red dezhi kuitat, hag ez eas da C'hranvil, brema ez eus pemzég vloas.

Nebeut amzer goudeze, o veza clevet e voa he mestrez coz dilezet gant he fried, hi hag he vugale, hag e voa chomet clan d'ar gonele, e teuas eus a C'hranvil var droad ha diarc'hen. Kerkent ha ma voa digouezet, e varvaz he mestrez, hag hi a guemeraz ar garg da zervichout da vam d'ar vugale a chome var he lerc'h. Tri buguel a ioa, hag ho c'hemeraz ganthi, ho zavas, ho diorroas, ho c'helennas hag ho lakeas da zeski ho micher. En eur guer, bez' e voue evitho eur vam an den-ra. Ar vugale, red eo hon lavaret evit ho meuleudi, a so bet sen uz outhi hag o deus diskuezet dezhi ato ho anaoudeguet vad.

Espernet e deus d'ar vugale-ze ar pezig o doa aزانvez, ha laket c'hoas varnezh ar pezig a c'helle da gaout he unan dre he labour hag he foan. An oll a-anare ar garantez dispar-ze a ziskueze Mari-Jan Hillion evit ar re e doa kemeret evit he bugale.

Ar c'hossa eus ar vugale-ze a voa dimezet eun nebeut so, hag a grogaz ar c'hlenvet enha, hag a ias toc'hor. Mari-Jan a deuas var he dro e creis an noz. Kement a zoursi a guemeraz anezhan, ma pareas. Mes hi a glanz he unan. Daou pe dri-dervez goude e voue red dezhi chom var he guele; hag abenn tri dervez all e rente he ene da Zoue. He zad, den coz pevarugent vloas, o veza deut d'he guele eun nebeudic araog ma varve, a glanz er pardaez-ze, hag a varvaz ive antronoz. Doue epken a ell gouzout peguement a virit o deus tud vad evelse; tud paour hag a gaf en ho faourentez peadra da ober traou ha ne grette ket tud pinvidic en em garga anezho.

Ar guær a Valancien e deus bet n'eus ket pell, eun testi eus ar virionez-ma : Ne beder morse ar Verc'hez Vari en aner. Ar c'holera a voa bet er guær-ze, hag e cave d'an dud e voa eat kuit, pa zistroaz adarre goas-soc'h evit biscoas. An oll a voa strafuillet. Dont a reas da zonch dezho, en ho zraful, eus a Rouanez an Env. Sonch a deu dezho e deus Mari eur vech all save-teet kær dre eur burzud, hag eo abaoe consacret Valancien d'an Itron-Varia. Setu eta keriz o comans eun navet en enor d'ar Verc'hez. An navet-ze a echue d'ar zul pevarzeg a viz here; ha d'an deiz-ze cals tud a dosteas oc'h an Daol Santel, ha da bardaez e voue great eur procession etro kær. Douguet e voue imach ar Verc'hez. Diaz e ve niveri an dud a heuille ar brocession-ze, hag oll e pedent calonec, oll e pedent Mari da bellat dioutho ar voalen ho c'hastize.

Mari a silaouaz ho feden. Ar c'hlenvet a eanas, hag abaoe an dervez-ze ec'h eller lavaret ez eo eat en he dro. Ar re o deus nebeuta feiz a zo red mad dezho an-zao ez eus eno eur burzud. Abaoe ne deus bet taguet gant ar c'hlenvet, e kær Valancien, nemet unan ama, unan ahont, evel evit diskuez ema ato ar voalen eno, mes ema dorn Mari o viret outhi da skei.

NAONET. — Brema, a drugare Doue, e veler avoalc'h tud bet ganet ha maguet en errol, o tiguveri ho daoulagad d'ar virionez hag o tont d'en em lacat er guir iliz. An trivac'h a here, e Naonet, eun den coz, oajet a zeg vloaz ha triugent, en deus kuiteat ar fals religion e pehini en doa bevet bete neuze evit en em ober catholic. Badezet eo bet dirag he c'hreg hag he vugale deut da veza catholic en he raog ha pere, ep mar, o deus he lakeat da zistrei oc'h Doue ha diskuezet dezhan ar virionez o doa nevez anavezet ho unan. Eis dez goude, an den-ze en deus bet an heur da ober he basc kenta.

E Spagn, eun tiad tud abez, deg den, a dle dont ive d'ar guir iliz er sizunveziou-ma. An tiad tud-ze a voa

eus ar Suiz ha deut da chom da eur gueric vian a Spagn brema ez eus eun nebeut amzer. Eur beleg gall a so er guær-ze ha c'hoarezet Sant Visant a Baul eo o deus kelennet an dud-ze, hag ho lakeat da anaout ar gaou e pehini e vevent. An tiad tud-ze a ren hirio eur vuez ker santel, hag a vir oll lezen Doue kercouls hag ar vella eus ar gatoliket.

Er zizun-ma, eme *Gazeten ar Meziou*, an amzer a zo bet brao avoalc'h evit al labourou. Ar frouez e grizion a greder so destumet seac'h avoalc'h. E carteriou eo great ar c'hounideguez, mes e Breiz-Izel ne gredan ket e ve great c'hoaz e nemeur a lec'hiou.

An ed so diskennet eun tamic. An abeg eo ma casset brema re a ed d'ar marc'had. Bep bloas d'ar mare-ma e c'hoare evelse, dre ma vez ato cals hag a so red dezho guerza evit paea ho mistri. Er broiou all ne ket falleat vad an ed, hag e Frans ec'h eller cridi ar fallaez-ze ne bado ket ken nebeut.

Er broiou-ma an douriou dirillet o deus great cals distruch; hoguen er broiou eleac'h n'eus ket bet a zour beuz, ez eus deut goaligner all da skei an dud. E Haiti, eleac'h m'ema an Aotrou Testard arc'hescop, ar guær-benn so bet adarre anter destrujet. Peder magazin boultre a ioa e kær hag a so croguet an tan enho ho feder er memes amzer. Kær oll e deus great eur grenaden evel pa vije o vont da lamet kuit abez. An tiez oll a so bet hejet, orjillet evel pa vijet o vont d'ho strinea oll pell ac'hano. Ar guær so bruzunet oll, an toennou discaret, lod abez, lod a damou. N'eus ket chomet nemeur a diez ha n'o defe bet eun droug bennag. Nebeut a dud so lazet, mes cals a so gloazet.

Er C'hanada, en Americ, an tan goall en deus destrujet, luduet eur guær vras, kær Quebec, couls lavaret abez. Ne leverer ket cals a dra divar benn an tan goall-ze; gouscoude ar pezig a ouzeur a ziskuez avoalc'h peguen truezus eo stad tud ar guær-ze. Lavaret a rer ez eus devez daou vil pemp cant ti, hag ez eus trivac'h mil den var an douar noaz. E kær Quebec ez euz vardro antercant mil den, hag evelse tost d'an anter a so destrujet ho danvez gant an tan. Nag a zienez, nag a drisidiguez ne dle ket beza er guær reuzeudig-ze!

G. M.

Lizerou eur Bælec iaouank d'he zaou Vreur.

C'huac'hved lizer : D'AN OFFICIER.

Cetu hirio bloaz oun bet beleget; ah! gant pebez anaoudeguez-vad em euz trugareket Doue euz ar c'hras kaer-ze ar 26 a even. Petra a hellen-me lavarout var an dra-ze : *Quid retribuam?* Da zevezioù evel ar re-man e renkomp sonjal mad penaoz e valeomp en hent euz ar zantelez; Oh! ma Doue, pa sonjan e quement-se. Goulen evidoun ouz Doue ar c'hras d'o-

her he volonte santel ha da labourat kals evit he c'hoar. Aliez en em gavan evel e meaz ac'hano unan gant ar c'hoant am euz da ober vad d'an eneor; soulajet ez oun neuze pa vezan galvet e kichen guele eul labourer paour bennag, heb kasi den var he dro. Neuze en em gavan æz, hag a zigoran dezhan va c'halon heb aoun ebet; ha joa eo din gueleout peguement a blij d'an dud paour hag afflijet kement-se.

Kals plijadur em euz ive etouez ar vugale. Gand aotre va ferson em euz savet aman breuriez ar mahik Jesus : hag em euz ar gonsolation d'ho guelout o kemeret eun interest vraz evit silvidiguez ar vugale euz ar broiou pell. An aotrou Kure en deuz *Breueriez ar Feiz* da ren; ha sikouret omp hon daou euz eur façon souezuz gant ar seurezet-guen, pe guelloc'h gant al leanezet ar Speret-Santel.

Roet em euz prizou da vugale ar c'hatekiz. Ar seurezet a ziver deomp ouspenn ann anter euz al labour. Eun dudi eo beza bælec eleac'h m'en em gav seurezet ha freret d'ober skol. Ar c'hatekiz so desket mad d'ar vugale, hag ar veleyen n'ho deuz mui nemet esplika dezo ar pezig o deuz desket. Anavezont a ran euz he lagat ar buguel pehini zo er skol.

E leac'h ne deuz na seurezet na freret, ar bælec en em gav evel er broiou-pell etouez vugale kasi gouez. Allaz! bez ez euz parzeioù e leac'h ma renker receo evit ar pask bugale pere na ouezont ket ho c'hatekiz; ha goude pa int deuet braz na vezit ket souezet oc'h ho guelout mont var tu fall. Paour-kez tud morse no deuz ententet mad petra eo ar Religion.

Aman, trugarez Doue, ar vugale zo kasset oll da skol gant ho zad, paotret ha merc'het. Er barrez-man, koulskoude, neuz ket a freret, neuz nemet eur gouent seurezet-guen. Mes ar mestr-skolaer zo eun den a zoujaz Doue, pehini zo bet er seminer hag en doa sonj d'en em renta bælec. Ober a ra he skol gant eur sonci braz evit he skolaerien. *** A. M.

MISION PLEUVEIL (PLOMELIN).

En devez all, me gav d'in dillun diveza e oa, e oan o vont da leina d'a brespital P...., pa gavis var va hent eur c'har carget a ludu, ha gand ar c'har-ze eun den deut dija var an oad; triugent vloaz, pe var dro, a helle d'a gaout. D'eus he viscamant, e velis raedâl e oa d'eus Pleuveil. Ha me d'e gaout!

- Douer-ho pennigo, paeron coz.
- Benniget e viot, Otrou.
- Penaoz ema ar bed ganeoc'h?
- Yac'h, a drugare Doue.
- E fond d'eus Penmarc'h emaoe'h var a velan?
- Ia, Otrou, e kerc'het eun tamm ludu am boa prenet eno on bet.
- Hag emaoe'h o vont d'a Pleuveil?
- Ia, Otrou.

— Hag a nevez e Pleuveil?
 — Calz traou, Otrou.
 — Petra-ta?
 — Clevet o peuz, m'oaer fad, comz d'eus ar Mision zo bet ganeomp er miz tremenet?
 — Ac'hanta, petra livirit d'eus ho Mision? A ne ket gouir eo eun dra gaër, eur Mision?

— Eun dra gaër! eun dudi e oa beza en iliz Pleuveil epad ar pemzec devez ma ze padet ar Mision; me n'hon bet nemet enn eis devez diveza: mez, biscoaz, hag ez on koz dija, n'em beus guele na clevet traou ker caër; ha ne ket me ebken eo er lavar, mæz an holl, e parrez, Pleuveil, a lavar evel d'on; meur a vech em boa clevet comz d'eus ar mision, mæz biscoas n'a oan bet e gour. Me gave d'in eur Mision a dlie beza evel eun adoration; mæz eun adoration ne ken nemet eur skeud e kever eur Mision. Evel-ze ive, an Otrou Person en doa c'hoant pell a oa d'a rei deomp eur Mision. Cridi avoalc'h a raffan e oa ar zonz-se en he benn, abaoe ma zeo deut en hon touez. Da viana, meur a vech em beus clevet anezhan o preg d'eus an dra-ze; d'in va hunan, Otrou, en d'eus bet lavaret streget eur vech: ma, Fanch, calz poan am bo, ma ne hellan ket, eb dale rei eur Mision d'a barrez Pleuveil. Eur Person, hon d'eus, avad, Otrou d'eus ar re genta; eun den mad a gostez, hag a zalc'h herr varnomp gouscoude; con e rakker bale gantan. Pe d'a vare bennac ez ei diganeomp e voulimp d'ezhan. Pa oa gret he zonz gantan da rei ar Mision, pa oa en em glevet gant an Otrou n'Escop evit ar mare matie beza, neuze e pignas eur zulvez er gador breg, hag e lavaras: eur c'helou mad, kristenien, am beus d'a rei deoc'h eur Mision a vo ama, er bloa-ma, e mis edro (here) azaleg ar bevarzec betec an nao var-n-ugent; eur c'hras vras a ra an Otrou Doue deoc'h, poagnit da lacat ho calonou e doare d'he digemer; ha bevec'h ma cave he du, e teuc hano gantan d'eus ar Mision. An Otrou Lamark, Person Sant Caourantin, a oa carget gant an Otrou n'Escop d'a ren ar Mision; ha nao bælec all en doa clasket d'e zicour. Eur miz araoc'h ma tiguere ar Mision, e teuas d'a zigas deomp ar c'helou evurus. A c'houdeve, ne glevet, e Pleuveil, preg nemet eus ar Mision: d'ar bevarzec euz ar miz all, e tigoeo ar Mision, a lavaret e pep ty, hastomp afo ober al labour, evit ma c'hellimp mont holl.

Erfin d'ar zul, ar bevarzec d'eus mis edro (here) e tigoras. Otrou Person Sant Caourantin eo a bignas er gador d'an oferen bred. Anaout a rit an Otrou-ze; en eo, a gav d'in, a ves carget gant an Otrou n'Escop d'a ren an holl Misionou, couls lavaret a vez roet er vro. Caera preger! nemet ar seurt-se na heller d'a glevet; emnez ne ma ket an traou gantan d'a zonzal; n'hon ket, eur vech, e pelleac'h e cav kement all a draou caër da lavaret na penaoz ec'h hel erzel; evelse, emnez a flemme; me a anavez meur a hini e Pleuveil hag a zo izel an dour en ho daoulagad, hag o deus goelet dourec oc'h he glevet. An Otrou-ze a vo hano anezhan en hon touez ni epad pell amzer.

Evel am beus lavaret deoc'h dija, Otrou, me n'hon ket bet er zizun genta, mæz dioc'h am beus clevet, ar pez a oa gret ar zizun diveza a oa gret ive ar zizun genta. Caer dreist e oa beza en ilis Pleuveil epad an devezion santel-ze; en eur barados e oamp eno. Abaoue ar mintin betec an noz e vezemp en ilis; a veac'h ec'h hellemp caout amzer d'a zibri, ha gouscoude-hon deveze ato mal da glevet ar c'hloc'h. Hostizien Pleuveil a zo bet tano ho gounidegez epad an deveziou-ze, hag a viziken, da viana ac'han da bell amzer, e chomo moan ho yalc'h. Da viana ar veoieren o deus clevet avoallac'h, biscoas n'em beus clevet d'orbilad kement var ho chouk, hag ar veoierezet n'int ket bet espernet kennebeut; clevet ho deus ho *Fater noster* penn d'a benn. Aviziken e ranco beza divez ar goas a vo guelel mezo e Pleuveil, ha dive-soc'h c'hoas ar vaouez, ha dreist holl ar plac'h yaouank a dolo he zreid dreist treuzou eun *hostaliri*. Me vele em c'hichen meoierien hag a stoue ho fenn, hag an daelou a goeze penil eus ho daoulagad. Hag e guirionez, Otrou, en anzao a rancan, ar pez a zo e coll ac'hanomp ni tud divar ar mæz, eo an evach brein-ze a roer deomp. Ma carjemp tremen eur bod illo eb tenna d'ez-han hon tok, ni a vize, a gav d'in, tud a zoare.

— Setu ar pez a lavare an Otrou Escop zo maro, hag o peus bet anavezet marteze?

— Anavezet mad, Otrou, Doue er pardonno, graz d'ez-han da veza er barados. Kercouls, pep-hini en deus bet he damm; eno ne oa nemet destum, ar gouirionezou a goeze var hor penn puill evel ar glis e miz maë. Ne ket eur virionez ebken, mæz holl gouirionezou ar relijion zo bet displeget dirazomp ha displeget fraz; eno ne jomet ket d'a dorta, lavaret e veze deomp an traou evel ma maint, mæz atao gouscoude gant carantez.

N'hon ket hag een a zo gour, mæz clevet em beus lavaret, an Otrou n'Escop hon deus brema, eo en deus digaset ar misionou en hor bro?

— Kementse ne ket tre gour, Fanch, araoc ma oa deut an Otrou Serjant en hon touez, e veze misionou en hon Escopti, mæz abaoue ma ze deut, e vezont cals stancoc'h; een a ali cals ar Berzonet da rei misionou er parrezou.

— Neus forz, eun dra dreist a ra, ha pa n'en deffe gret nemet an dra-ze, epad ma vo Escop en hon touez e vo benniget, epad pell amzer, he hano en hor bro. Me ne ouzon ket cals tra, mæz ervez a soj d'in, Otrou, netra guelloc'h evit renevezi eur barrez evel eur mision; netra guelloc'h evit distrei ar bec'herien ous parrezou.

Ne gredan ket e ve stank ar bec'herien a helfe stourm ous eur mision heuliet mad, caletoc'h e rank beza eur galon evit dir, ma na deu ket eur mision a benn d'he bruzuna. Netra guelloc'h evit lacat urs en afferiou ar zilvidigez. En eur mision e ranker farchal betec e goelet ar zac'h, n'eus ket da lavaret nann. Netra guelloc'h evit sclerijenna ar speret, evit deski ho relijion d'an dud, evit deski d'ez-ho stanca ho guinou d'ar re ne

c'houlennont ket guell evit droug prezec divar benn ar feis, hag he mouga e calonou ar re all, digarez ma ze, maro en ho re.

— Hag ar seurt tud-se, Fanch, a gaver hirio stank avoallac'h?

— Re stank, sionas, zoken var ar mæz; caout ar reomp anez-ho, Otrou, er foariou, er marc'hajou, eun hostaliriou, hag aviziou en hon tiez. Ah! me garfe guelet unan bennac o tont da breg diraz-hon a enep ar relijion; me ne ve ket mui stagellet va zeod, me ne ven ket mui kell lent evel ma zon bet betec enn.

— Oh! oh! Fanch, cals traou caër e peus desket epad ar mision; guelet a raan ne peus ket collet d'ar amzer.

— Oh, Otrou, cals traou am belfe da lavaret deoc'h c'hoas d'eus mision Pleuveil; mæz beza zeus traou dreist-holl, a ne deint morse d'eus va speret, ha pa jomfen cant vloas var an douar.

— Guelomp?

— Setu ama, Otrou:

D'an eil zul deus ar mision, goude gousperou, o oamp caset er mæz an ilis ha lakeet var beder renk, diou renk a bep tu d'an hent bras; ar merc'het da guenta hag ar voazet var ho lerc'h. E creis, penn da benn, treus daou pe dri c'hant camet an eil deus eguile e oa ar c'hroaziou, ar banielou, patromou ar Verc'hez hag ar Sænt, renket caër ha douget gant tud ar barrez, hag ar velezen. Tri anez-ho a oa o cana *litanion* ar Verc'hez, unan er penn, eun all e creis hag eun all el lost; ha ni holl a gane varlere'h an hini a oa tosta deomp: *ora pro nobis*. Evel-se meuleudiou ar Verc'hez a rede, evel pa lavarfen eus an eil penn d'eguile d'eus ar *brocession*. Biscoas n'em boa guelet n'a clevet kement all, biscoas n'em boa guelet an dud ker sioul ha keun deol. Mont a rejomp evelse eun anter leo d'eus ar vourc'h, betec eur groas. Ar groas-se zo dres dirag ar glouet a zo var ar vali ledan a ia da vaner caër an Otrou Du Marhallac'h. Ar groas zo e creis eur frankizen vras, hag en dro d'ar frankizen-ze e zeus n'hon ket ped rencat gouez huel.

Eno e oa savet eun oter huel, guisket gant dantelez eus ar re gaëra. E creis an oter, var eur scabel gaër, e oa patrom ar Verc'hez, hag a bep tu dei, diou rencat goulou var elum, ha diou rencat podou leun a vleun d'eus ar re gaëra. An Otrou Du Marhallac'h en doa roët urs d'ober an oter-ze ha lavaret penaos he ober; hag ann demezellet De Carne, ho doa he guisket. Pa oamp destumet holl en dro d'an oter-ze, en dro d'ar Verc'hez, evel eun toullat bugale en dro d'ho mamm, an Otrou Lamark a bignas var ar bazen huella hag ac'hano e reas deomp eur brezegen gaër meurbet; biscoas n'em boa clevet anez-han o preg gant kement a ners hag a deneridigez. Ar re bella a gleve ker fres hag ar re dosta. Clevet e vije eul logoden e vale etouez an dud ker sioul e oant, ne glevet nemet an huanadou ha trous an daelou o coeza var an deliou; pa oa guelet dreist oll, an demezellet De Carne, gouislet e guen o pignat da lacat eur

gurunen gaër var benn ar Verc'hez, en hano ar barres holl, evit diskuez e kemeremp aniz-hi holl evit hor Rouanez, neuze ar c'halonou caleta a oa teneeret, ha pa lavaras an Otrou Lamark, eur baniel gantan en he zorn: setu ama baniel ho Rouanez, touet ec'h heuilloc'h anizi a viziken. An holl o doa c'hoant da lavaret a bouez ho fenn: ia, en touet a reomp; da viana er lavaret a rent holl a greis ho c'halon.

N'hon ket penaos e oa ar re all, Otrou, mæz evidonme a oa er mæz ac'hanon va unan gant al levez; me gaf d'in e oa diskennet neuze em c'halon eur veraden deus evrusdet ar barados. Goude ar brezegen e oa canet: Santez Mari Mamm Doue, etc.

An holl a gane, hag ar c'han-ze a dregerne dre ar c'hoajou, an douarou, ar menezio tro var dro, hag a lavare dre ma zee: Mari eo hor rouanez, hag ar c'hoajou, an douarou, ar menezio a lavare en ho ies, dre ho ecleo: Mari eo hor rouanez. Neuze ec'h en em renk-chomp a nevez hag he tistrojomp evel ma oamp eet o cana meuleudiou hor rouanez. Setu aze eun devez a ne dei morse ar zonz anez-han d'eus va speret.

D'ar zadorn varlerc'h e oa ar pes a hanver mision ar vugale viban.

Meur a vech an Otrou Lamark en doa pedet ac'hano d'a zigas d'ez-han ar vugale n'ho doa gret pask ebet. Silaouet e oa bet gant ar tadou ha dreist oll gant ar mammou, ha d'ar zadorn da ziu heur goude kreis-de, e oa eun toullat mad a vugale en dro d'ez-han; ne ouffen ket lavaret deoc'h, Otrou, dres petra zo tremenet, rac ne oan ket eno, mæz var dro pemp heur e tigouezas er guær va map bihan laouen evel an eol. Hag een o tont d'am c'haout:

— Tad coz, emez-han.

— Petra, va map?

— Sellit am beus-me bet, en eur ziskuez d'in eur *vetalen* vras.

— Eur vetalen a peus bet? Digant piou e peus bet ar vetalen-ze?

— Digant an Otrou Person.

An Otrou Person en deus goulennet diganeen: Hag hen zo eun Doue? Ha me am beus lavaret: ia. Goudeze en deus goulennet diganeen. Ha neus ket ouspen eun Doue? Ha me am beus lavaret: nan. Hag an Otrou Person en deus lavaret d'in: potr mad, sell, setu aze eur vetalen, abalamour ma c'houzot mad d'ha gatekis. Ha neuse, tad coz, eno e oa traou brao oc'h ar voger, tolennou: eur belec a oa e kichen, eur voal ganthan, hag a lavare deomp petra oant. Var unan e oa eur galon, hag e creis ar galon-ze e oa eun den ha kerniel dezhan, hag eur forc'h ouarn gantan en he zorn, hennez e oa an diaoul: hag a bep du dezhan e oa a bep seurt loenet, eur pen-oc'h a oa ive; al loenet-ze, tad coz, e oa ar pec'hejou; setu bugale, a lavare ar belec, penaos e vez oc'h ene pa ves er stad a bec'het marvel. Me tad coz na bec'hin ket mui, me n'em beus ket a c'hoant e teuffe an diaoul hag ar pemoc'h em c'halon. Setu aze eur vetalen hag e doa gret muyoc'h a blijadur d'ar c'hrouadur-ze, evit cant scouet

leve; setu aze eur gentel var ar pec'het marvel, ha ne dei morse d'eus he speret hag a dalvezo d'ez-han muyoc'h evit ar c'haëra-pregen.

D'ar zul diveza a oa benniget groaz ar mision. Setu c'hoaz, Otrou, eun dra gaër! Araoc an oferen bred e oa. Mont a rejomp deus an ilis holl e *procession* betec ar groaz ha pa or-boa en em renket en dro d'ezhi; Otrou Person Sant Caourantin a bignas var diri ar groaz hag a lavaras deomp ac'hano eun nebeut comzou hag a yas bete goelet hor c'halonou; me garge ho gouzout dindan evor. Sonj am beuz gouscoude d'euz eun draic bennac: Ar groas a oat o vont da vinnigen a oa eur groas coz, nevezet: « Ar groas-ma zo bet savet gant ho tud coz; lies a vec'h int bet o pedi e c'harz he zroad, bet o deus eviti respect ha carantez, he diouallet o deus a enep an dud difeiz, hag en dro dezhi ema brema ho elborfou kousket; o c'hortos ar varn diveza. Emaomp o vont da vinnigen aniz-hi a nevez, evit ma tigaso deoc'h a viziken, sonj deus ho mision ha d'ho vugale sonj deus feiz ho zadou; evit ma vo baniel Jezus-Christ, savet en ho touez, evit diskuel d'an holl e kemerit evit atao Jezus-Christ evit ho roue. Touit ama dirag an ee hag an douar, o po ato respect ha carantez evit ar groas-ma, e tioualloch anizhi a enep pep droug, hag e kemerit evit ho roue an hini zo bet staget outhi. Savit ho taouarn el lae, lavarit holl a vouez huel; Jezus-Christ eo va roue.

Ha rac dal, e-oe guelet pemzec cant dorn el lae, ha clevet pemzec cant christen o lavaret a vouez huel: Jezus-Christ eo hor roue, hag ar barres holl a lavare tro var dro dre he ecleo. Jezus-Christ eo hor roue. N'hon ket otrou, mæs me gave din e tie beza er mare ze eul laouenidigez vras etouez ar sænt hag an elez, me gave din clevet hon tud coz o lavaret deomp eus a c'horre an ee. Dalchit mad hor bugale ker, dalc'hit mad d'ar pes o peus touet. Rag al leze a oa gret a greis calon. Evidomme, otrou a verve var va izili. Goude e oa benniget ar groas, hag an oll a yas, pephini d'he dro, da voucha d'he zroad.

Antronoz, da seis heur anter d'eus ar mintin, e oamp holl adarre en ilis. Eno e oa canet eur *serpich* hag eun oferen, evit ar re a oa eet d'a anaon d'eus parras Pleuveil. Goude a oa gret *enterramant* an eskern. Pephini a gemeras eun he zorn en ascorn hag e rejomp e *procession* betec ar bez. Pe ger caer traou a lacas em speret ann ascorn-se, epad ma oa e tre ma daouarn. Setu a ze, a lavaren enn'hon va unan ar pez a deum da veza en deiz: eur bern eskern dizec'het, poultr ha ludu, setu a ze petra chommo ganeez d'eus a holl draou ar bed ma: eun toul en douar. Da biou a oa an ascorn ma? Marteze d'a unan bennag d'eus ma c'herent, marteze d'am zad pe da mamm, hag ene an hini oa an ascorn ma dezhan e pel-leac'h ema? Er barados? me garfe. En ifern? Doue va viro! er purgator? marteze; hag ac'hano e c'houlenn diganeez eur beden en hano Doue. Ha dre ma sonjen en traou-ze e voasken var va ascorn hag e voalc'hen anezhan gant va daelou. Araoc distrei d'an ilis, an Otrou Lamark a lavaras a vouez huel: ken a vo, kristenien, ken a vo....

er barados. Glac'haret e oamp araoc, ma neuze ec'h en em lekejomp holl da vouela. Nin, sellet, otrou, a garie ar veleyen ze, abalamour d'ar vad o doa gret d'hoñ eneu hag ar sonj ne veljemp mui anezho, marteze er bed ma, a ranne hor c'halonou. Erfin, goude beza scaillet eur banne dour benniget, evit ar vec'h diveza, var relegou hon tud, goude beza lavaret eur beden var ho beziou, goude beza bouchet d'a groaz ar mision, e tistrojomp d'ar guerc sioul, ar peoc'h en hor c'halon hag an daclou en hon daoulagad.

Pell a oa an daclou a zirede puil eus a zaoulagad. Fanch. Lezel a ris anez'han da vont gant he hent ha me a gemeras hent ar presbytal a oa dres dirazon. En eur vont, e sonjen en traou caër am boa cleve hag e lavaren enn hon va unan : hag ii zo caër treid ar re a breg an Aviel a beoc'h, ar re a breg ar gouir vadou, madou an ee ! *Quam speciosi pedes evangelizantium pacem, evangelizantium-bona !* Y. P.

BUEZ AN DEN EURUS IAN DISCALCEAT,

pe an divoutou, beleg.

An den santel Ian Discalceat, enoret meurbet e Kemper, a deuas er bed, en escopti Leon, vardro divez pe fin an trizevet cantvet. He guerent n'o doa nemeur a vadou, mes christenien vad oant ha tud a zoujans Doue. An hano a Ian a voue roet dezhan er vadiziant, ha goudeze, dre humilite, e felle dezhan beza ato galvet Iannic. Kerkent ha ma voue gwest da ober eun dra bennag, eur c'har dezhan, eur micherour goueziec, her c'hemeraz en he guichen evit labourat var ar memes micher gantha, ha Iannic a ioa aketus braz en he labour. Douguet oa ato evit al labourou a zelle oc'h Doue pe oc'h mad an dud. Evelse pa veze eur groas bennag da zavel var an hent-chou, pe eur pont bennag da ober var ar sterion, Iannic a labour varnezho gant muioc'h a brez hag a blijadur. Gounit a rea cals oc'h ober ar vicher-ze, ha gallet en divije beva en he æz er bed. Mes Doue her galve da eur stad all santeloc'h; senti a reaz oc'h mouez an env, hag e reaz he zouch d'en em lacat etouez an dud a iliz.

Arc'har-ze dezhan gant pehini e laboreu, a reas goab anezhan eus ar zouch-ze a voa deut dezhan, hag a viras outhan, muia ma ellaz, d'he heuilla. An tentator-ze a voue punisset; coll a reas he vadou, lor e teuas da veza, mervel a reas dindan an excumunuguen ha ne voue ket lakel he gorf en douar benniget. Hoguen Iannic caer en devoa bet ober goap anezhan, he iskin hag he c'hour-drouz, a zalc'has mad. Kuitat a reaz he vro hag ez eas da Roazon da labourat evit en em renta gwest da receo an urzou sacr. Dont a reas a benn eus ar peza a felle dezhan, hag e voue great beleg.

A neuze e renas eur vuez tenn ha calet meurbet. Iun a rea teir guech er zizon divar bara ha dour. He zillad a ioa paour, mes neat. Dalc'h mad e veze gullet var dro an dud clan evit pere en doa eur garantez vras; en eur guer, he vertuzion, he vuez santel a lakea souezet oll dud kaer.

He humilite, an dispriz a rea anezhan he unan, ar zourci a guemere d'en em guzet ne vijont ket oc'h escop Roazon da zont da anaout pebez den oa. Kement a reas dezhan dont d'he gaout, hag e roas dezhan eur barrez en he escopti. Ar beleg santel a reas he c'hallout evit na vije ket roet ar garg-ze dezhan, mes red mad ouc' dezhan senti oc'h urz an Escop.

Mont a reas d'he barrez hag e reas enhi eur vad vras dre he skuer ha dre ar zoursi a guemere eus he barresionis evel pa vije ho zad. Bez'e voue person er barrez-ze epad trizeg vloas, dindan tri escop a Roazon. Eozen, Jil, hag Alan. Pa zea ar eskiben-ze da ober tro ho escopti, ez ea var droad en ho-raog evit prezeg d'an dud hag ho lacat dre sacramant ar binijen, e stad da receo ar gouzoumen. (Confirmation). Ne dea morse nag e car, na var varc'h, mes ato var droad, ha diare'hen pe divoutou, hag e tale'has evelse epad he vuez. Setu perag'eo bet roet dezhan al lezhano *discalceat*, da lavaret eo diare'hen pe divoutou.

Eun den ker calet outhan he unan ha ken dizis-pign en divije gallet destum arc'hant ma vije bet roet oc'h an danvez. Mes en em lacat a rea e reng ar re zistera eus ar beorien. Dezho e crede oa dlet madou he iliz, hag e roe dezho kementa elle, oc'h en em ancounac'hat allies he unan.

Goude beza bet trizeg vloas person en he barrez, e savas gantha eur c'hoant bras da vont en urz sant Fransez. Oc'h anaout e teue ar zouch-ze digant Doue, ez eas da rei an diles eus he barrez etre daouarn he Escop, ha da c'houlou he otre evit mont en urz ma en em zante galvet da vont enha. An escop a deve an daclou en he zaoulagad o velet o rei he ziles eur beleg hag a rea kement a vad en he escopti. Ober a reas kement a ellaz evit distrei Ian dioc'h ar zouch-ze, hag evel ne elle gounit netra, e falvezas dezhan, da viana, evit diskuez he istim evithan, lacat he vreur da berson en he leac'h. Mes Ian pehini ne voa ket stag oc'h ar c'big hag ar goad, oc'h anaout n'oa ket he vreur eun den mad avoalc'h evit beza lakel e penn ar barrez a zileze, a bedas an escop da henvel eur person all. G. M.

(Eur pennad all eur wechall.)

Hano ar Zant evit ar Sizun-ma.

- DILLUN, 19. — Santez Elisabeth, intanvez.
 DIMEURS, 20. — Saint Felix Valoa.
 DIMERC'HER, 21. — Ar Verc'hez casset d'an templ.
 DIZIQU, 22. — Santez Cecilia, Guerc'hez ha Merzer.
 DIRGUENER, 23. — Sant Clemens, Pap ha Merzer.
 DISSADORN, 24. — Sant Ian ar Groas.
 DISSUL, 25. — Sul diveza goude ar Pantecost.

Aviel ar zul.

Jesus a lavaras d'he ziskibien : Pa velot an dismañt euzus a so bet discleriet gant ar profet Daniel, eat el leac'h santel (comprenet mad an nep a lenn an dra-ma); neuze ar re so er Judee a dlevezo tec'het etrezeg ar meneziou. An hini a vezo var an doen, ne dlevezo ken disken da

guerc'hat netra eus he di; nag an hini a vezo er parc, distrei da guerc'hat he zae d'ar guær. Goaz aze d'ar gra-guez douguerezet ha maguerezet en derveziou-ze. Hoguen pedit evit na zigouezo ket deoc'h teket er goan na da zadorn. Rag neuze e vezo eun drubuil vraz, euz ar seurt n'eus ket bet abaoue ar penn kenta eus ar bed bete vrema, ha ne vezo morse, ha ma na vije ket berreet an deverziou-ze, den ne vije saveteet, mes an derveziou-ze a vezo berreet abalamour d'ar re zalvet.

Neuze ma lavar unan bennag deoc'h : Ar C'hrist so ama, pe, ahont ema; ne gredit ket. Rag sevel a rai fals christou ha fals profetet; ober a raint burzudou braz ha traou souezus, gwest da douelli, ma c'beljet hen ober, ar re zalvet zoken. Setu hen lavaran deoc'h araog.

Ma leverer deoc'h eta : Er gueleac'h ema (ar C'hrist), na dit ket da velet; ema er c'horn-tro pella eus an ti; na gredit ket. Rag evel ma tispag eul luc'heden eus ar sao-heol, ha ma he gueler ractal er c'huz-heol, evelse e vezo donediguez map an den. E kement leac'h ma en em gavo ar c'horf, en em zestumo an ered.

Hoguen dioc'htu goude an deverziou-ze a drubuil, an heol a denvalai, al loar ne roio ket he sclerijen; ar stered a gouezo eus an Env, hag ar peza a so starta azioc'h nor penn a horjello, ha neuze e vezo gullet baniel (croas) Map an den en Env; ha kement rum dud so var an douar a hirvoudo, hag e velint Map an den o tont var goabr an Env, gant eur c'hallout hag eur veurdez vraz. Cas a rai he Aelz da zont gant ho zrompillou skiltruz, hag e testumint he dud dibabet euz ar pevar avel, euz an eil penn d'eguite euz an envou.

Deskit eun henvelidiguez tennet euz ar vezen fiez : Pa zeu he scourrou da c'hlaza, hag he deliou da zispaca, e c'huzoc'h ema tost an hanv. Evelse, pa velot an traou-ze, gouezit ervad ema tost Map an den, ema en or. E guirionez, hel lavaret a ran deoc'h; ar rum dud so brema ne vezo ket tremenet, na vezo digouezet an traou-ze oll. An Env hag an douar a dremenno, mes va c'homzou-me ne dremenint ket. (S. VAZE. XXIV. 15).

G. M.

KELEIER.

E Kemper ez eus maro daou pe dri den er sizun dremenet, ha ne ouzeur ket pe gant ar c'holera pe gant istr fall o doa debret hag o doa ho rentet clan. Kerkent, evel ma ema ato ar c'hiz evit an traou-ze, baleanted o vont eus a guær var ar meaz, a gas ar brud ez eus mervent braz e Kemper. Ar peza a zo guir eo n'eus bet morse e Kemper nebeutoc'h a vervent na nebeutoc'h a dud clan evit a zo brema.

Aliez e lavarer d'an dud divar ar meaz lacat evez da gaout piou ez aint da glasc louzou pa vezont clan pe gouliet. Bez'ez eus ato hinienou hag en em emel da louzaoui ep gouzout netra, ha caout a reont ato tud diot avoalc'h evit mont d'ho c'haout.

Setu ama eul louzaouer eus a Drefagat hag en em

emel da zressa izili torret. Eur c'hreg hag eur plac'hic a so bet nevez zo etre he zaouarn. Bez'o doa pep a c'har torret pe distresset. Ho diou int bet dresset pe louzaouet fall, hag ho diou e chomint mac'hanniet an nemorant eus ho buez.

Setu ama eul louzaouerez all eus a Sizun. En derveziou tremenet eo bet pen abeg da varo eur c'hreg iaouanc eus a Locmelard, eur c'hreg iaouanc douguerez, o veza en em emellet d'he goada ep gouzout penaus en em guemeret evit kementse. An dra-ze a ziskuez peguement e tlefet dioual da gaout piou mont pa vez izom medesin.

En derveziou tremenet ez eus bet, a leverer, e carterion a Frans, nasveziadou reo hag a voa ien evel e creiz ar goan braz. Dre unan eus an nozveziou aen-ze, e ker Lyon, eun den iaouanc guisket mad, o tremen dre ar ru dirag t'eur marc'hadour braz, a jomaz en he za, a alumas eul letern a voa gantha, hag en em lakeas da glasc eun dra bennag var an douar. O velet-ze, ar marc'hadour a guemeraz eul letern ive, a deuaz er meaz, hag a c'houlennaz oc'h an den iaouanc :

— Petra glaskit aze ?

— Eur peza a ugent lur.

Dioc'htu ar marc'hadour en em laza ive da zellet oc'h ar pave ha d'he zicour da glasc. Tremena rea tud dre eno, leteniou gantha, ha dre ma cleve petra voa, e choment ive da zicour glasc; abans nebeut oa bodet eno eur vanden vad. Ien braz oa, hag ar marc'hadour pehini a grogue dija ar gnenien onhan, a lavaras d'an den iaouanc :

— Souezet oun ne gafemp ket ar peza a ugent lur-ze, abaoue an amzer ma he c'hlascomp. E pelec'h e caf deoc'h eo coezet diganeoc'h ?

— Coezet ? eme an den iaouanc; n'eus coezet netra digane-me, mes izom am boa eus eur peza a ugent lur, hag e clasken unan ama. Var guement-se e zalkuit d'ar red, hag e les eno ar marc'hadour hag ar voure'hizien-all her sicoure, ho les eno gant ho leteniou da zellet an eil oc'h eguite, ruz ho fri ha scor-net ho hiziet gant ar riou.

Eur medecin a iea en dez all dioc'h ar mintin da velet ar re glan en eur c'hlandi, pe hospital, hag a c'houlennie digant unan eus ar mevelloù :

— Charlo, penaus a ra an hini clan so er guele n° 6 ?

— Fall, aotrou; teir bran en deus dislonket en nos-ma !

— Teir bran ? petra, collet ec'h eus da skiant ? pe seurt doare brini eo ar re-ze ?

— Me ne ouzon ket; n'em eus ket ho gullet. Bertel eo en deus lavaret din.

— Lavar da Ventel dont ama.

Bertel, pet bran en deus dislonket an den clan ?

— Diou; n'em eus lavaret nemet diou.

— Ho gullet ec'h eus ?

— N'em eus ket ; gant Christol eo em eus clevet.
 — Lavar din, Christol, pet bran en deus dislonket an hini clan ?
 — Unan epken, Aotrou ; n'em eus comzet nemet eus a unan, eur vran du pod.
 — Peleac'h ec'h eus he guelelet ?
 — N'em eus ket he guelelet, ar *Seur* eo a veille an den clan hag e deus lavaret din.
 Ar *Sœur* so galvet d'he zro :
 — Livirit din, va c'hoar, c'hui oc'h eus lavaret da Gristol en doa an hini clan dislonket brini ?
 — N'em eus ket tre, eme ar c'hoar en eur vuse'hoarzin. Lavaret am eus dezhan epken en doa an hini clan, epad an-noz, taolet traou ken da ha plun bran.
 Ar medecin hag ar *sœur* a reaz eun abaden c'hoarzin.
 Mes guelit nag a vrini n'o divije ket mevellou ar c'hlandi laket an den clan-ze da zislonca mar o divije bet amzer ! Dija oant eat da deir, hag ep dale e vije eat da deir doussen, hag aben an noz da gant. Setu aze penauz ez a ar c'haoziou, ha ar pez a dleer da gredi eus an darn vuia eus ar c'helachon a dremen evelse a c'hinou da c'hinou etouez an dud.

HENTCHOU HOUARN. — Eus a Vrest e tiblas bemdez eun trein da seiz heur dioc'h ar mintin, eun all da greisdeiz hag eun all da beder heur ha pemp minuten dioc'h an noz. E Brest e tigouez bemdez eun trein da greisteiz ha tri c'hart, eun all da seiz heur ugent minuten dioc'h an noz ; eun trede da unneg heur daou-ugent minuten dioc'h an noz.
 Eus a Gastellin e tiblas bemdez eun trein da c'huec'h heur dioc'h ar mintin, eun all da zeg heur dioc'h ar mintin hag eun all da beder heur ugent minuten dioc'h an noz. E Castellin e tigouez bemdez eun trein da zeg heur antercant minuten dioc'h ar mintin, eun all da deir heur nemet eur minut dioc'h an noz, hag eun all da nav heur ha kart dioc'h an noz.

Mad e ve marteze digas da zonch da lennerien ar gazetenn vrezonec penaus ar peziou arc'hant bihan, peziou a eis real, pevar real, deg guennec, ... ar re anezho so cossoc'h evit ar bloas 1854, ne vezint mui mad divar an deiz kenta a viz guenver. Ar re eta o deus etre ho daouarn eus ar peziou-ze, cossoc'h evit 1854, a ello, mar keront, en em zizober anezho araog ma vezo eanet d'ho c'hemeret.

Divarbenn an dour beuz, setu ama eun dra hag a ziskuez pe guer spontus eo an doureier dirolllet ha pe guer buan e loncont hag e tistrujont eur c'harter.

An Aotrou Baron Romeuf a voa en he vaner en eur blienen var ribl ster al Loer. C'huec'h heur oa dioc'h an noz, hag ez ea d'en em lacat oc'h taol evit leina pe coania. Eur mevel a deuaz er zal en eur grial : Aotrou Baron, red eo tec'het !

— Tec'het peleac'h ? tec'het rag petra ?

— Silaouit, ne glevit-hu ket ?
 Ar mevel a zigoraz eur prenest, hag e clevet an dour o tont evel ar gurun. Ar chosser pe ar c'hleuz savet a hed ar ster evit delc'her an dour a voa torret, hag an dour en em daole var ar blienen evel ar mor o tont abez. Al loenet mud a zante an danjer ha ne reant nemet bressa ha blejal. Ar chas a iude oc'h ar stag.
 — Buan, eme ar mevel, rag n'eus ket a amzer. An Aotrou a grogaz en eun lebeut aour a voa en armel en he guichen. An itron ne felle ket dezhi mont kuit ep kerc'hat he ferlez. Mes ne voue ket lezet. Croguet e voue enhi ha casset er meaz. Ar mitizien a ellas dre brez distaga ar chas hag al loenet all, ha lezel pehini da vont en he avel.
 A veac'h oant en em dennet eus ar maner, ma tigoueze an dour varnezhan. En eun taol an ti so goloet, discaret ha distrujet oll. Pa voa eat ar frount ebjou, pa voa en em dennet an dour dirolllet kuit, an Aotrou Romeuf hag he vitizien a zistroas. Eus ar maner hag he oll vadou ne jome nemet gouelet ar mogueriou. Setu aze petra eo an doureier braz-ze pa zirollont.

Er gazetenn l'Océan, e lennet, er sizun dremenet, eun ali roet gant eur miliner bras d'an tiekerien. Lavaret a ra ar miliner ma penaus ar guiniz, pa vez lezet da goeza var al leur ha crazet en he bouldren, ar bouldren-se a stag oc'h ar greun, ha caer a ve, ne eller ket he distaga piz avoalc'h. Ar pez a ra ma na vez ket goudeze ker guenn ar bleut evel ma vije anez ar bouldren-ze. Guiniz ar vro-ma, emezhan, so eus ar c'henta, hag a dlie rei bleut eus ar c'haera; mes ar bouldren-ze a vir na eller caout morse er c'harteriou-ma bleut eus ar c'henta.

Ar miliner-ma ta a lavar ne dlefet ket lezel ar greun guinis da goeza var al leur dre ma torner. Kementse a ve diaz avoalc'h d'ar re a zorn gant freillou ; mes evit ar re o deus dornerezet ne ve ket diaz dezho lacat liseriou da receo ar greun, hag he graza ive goudeze var liseriou.

An ali-ma, evel a veler, so divezadig evit ar bloa-ma; mes abenn ar bloaz a zeu e vezo da viana abred. G. M.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 10 Du.		PONT-NABAT — 8 Du.	
Priz ar c'hant liour.		Priz ar c'hant liour.	
Guinis . . .	43 lur, 30 c.	Guinis . . .	43 lur, 96 c.
Segal . . .	8 lur, 74 c.	Segal . . .	9 lur, 90 c.
Eiz	« lur, « c.	Eiz	9 lur, 38 c.
Ed-du . . .	7 lur, 38 c.	Ed-du . . .	8 lur, 33 c.
Kerc'h . . .	9 lur, 49 c.	Kerc'h . . .	9 lur, 88 c.
Avalou-douar	3 lur, 50 c.	Avalou-douar	3 lur, 25 c.

Ar Gerant : AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand AR. DE KERANGAL, Mouler an-Escopi.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezouneec.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten à goust :
 Evit eur bloas DAOU SCOUET.
 Evit c'huec'h miz EUR SCOUET.
 Evit tri miz C'HUEC'H REAL.
 Eur gazetenn ebken DAOU VENNEG.
 Ar bacamant a dle beza great araog caout ar gazetenn.

ALIOU.
 Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazetenn a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Belec e Kemper.
 Ar paeamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonnamant a guement er ti an Aotrou SALAUN librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 24 Du 1866.

Etre ar guir relijion hag ar fals relijionou ez eus ar memes kem evel etre ar garantez hag ar gassoni. Ar guir relijion, al lezen gristen oll so diazezet var ar garantez, evel ma zeo diazezet var ar gassoni kement fals relijion a so. Eur guir gristen, eur guir gatolic a gar an oll, a ra vad d'an oll, ha zoken d'he enebourien, ervez gourc'hemen Jesus-Christ. Eun den hag a so en eur fals relijion, eun den difeiz ha dizoue ne gar nemethan he unan, ne ra nemeur vad da zen nemet gounit a rafe oc'h hen ober, a gassa an holl, ha mar guell, en em zis-c'hraio anezho pa en em gavint var he hent. Kementse a veler selear avoalc'h e kement bro ma en em gaf an dud difeiz da veza mistri.

Ar guir relijion so diazezet var ar garantez p'eo guir hor Mestr divin en deus, dre garantez evidomp, gouzanvet kement a boaniou, gouzanvet eur maro ker criz, ha pedet var ar groaz evit ar re zoken hen lakea d'ar maro.

An dud difeiz ha dizoue o deus bet ive eur mestr a behini e c'heuilont ar c'henteliou ; eur mestr hag en deus desket dezho cassat kement so mad, kement so guir, cassat Doue, cassat ar guir relijion, cassat al lezen gristen hag ar re he heuil, cassat ar virionez e kement leac'h ma he c'haver. An den-ze n'hen hanvin ket ama; ne allan ket plega va biziët da scrifa he hano. An den-ze, eme eur scrifagner, so he boltred e mear a leac'h, ha ne deus nemet sellet outhan evit guellet eo merket doui ar seis'pec'het marvel e kement rid a so var he dal ha var he zrem oll. E pep corn e lenner ar gassoni. Ar gassoni a deu er meas dre gorniou he c'hinou ; ar gassoni so scrifet var he vuzellou tano, hag he zent discrognat a zigas da zonch eus a scrign dent ar re zaonet en ifern. Ha setu aze mestr an dud difeiz a so hirio.

Evelse ive e caseont kement a zigas sonch dezho eus a Zoue.

En dez all ez oa unan o tont varlerc'h eur c'horf maro

d'an iliz. Digouezet beteg an nor, e lavar d'an hini a voa da dosta dezhan : Me ne dan ket larcoc'h ; me ne dan ket er stal-ze !

Er stal-ze, den reuzedie ? Er stal-ze gouscoude oc'h bet badezet ; rag cridi a ran ez eus badiziant var ho penn. Di e falvezo deoc'h marteze e ve digasset ho corf goude ho maro. Ha ma na fell ket d'an iliz digoumeret ho corf dre ma viot maro evel eur c'hi, ho mignonet a rai trouz ha safar, ho mignonet a rai brezel d'an iliz-ze defot n'e devezo great eun digoumer mad goude ho maro deoc'h-hu pehini ne felle ket deoc'h lacat ho treid enhi epad ma voac'h beo ha iac'h.

Setu ama eun all oc'h ober he ganfant var eun dachen; en dro dezhan eur viscamant eus ar c'hiz nevesa, hag ive eus an iskissa a oufet da velet. Eur manac'h a zigouez da vont ebjou. Ar guel anezhan a reas donjer d'ar c'hanfart. Hag hen trei oc'h he amezien, en eur lavaret : « Asa, ha ne dlie ket al lezen da viana difen oc'h morzevelleien evelse d'en em ziskuez dirag an oll ! Ama ar c'hanfart a voue tizet. A dost dezhan e voa eun den hag a respontas : » Pe seurt diaz a ra ar manac'h-ze deoc'h ? Ma tlefe al lezen difen oc'h unan bennag da vont etouez ar re all eo ouzoc'h-hu a so eur vez ho cuelet evel ma emac'h. Ar manac'h-ze so eun den a zoare, mes c'hui a so henveloc'h oc'h eur marmouez evit oc'h eun den. Ar manac'h-se so guisket ervez he urs ; c'hui so guisket evel eur vascaraden, ha ne ket evel eun den hag en dese speret ha skiant ; eur c'huez a so ganeoc'h guest da lacat an oll da dec'het diouzoc'h ; ha setu perag ne ket red d'al lezen difen oc'h an dud da vont tost deoc'h. Ar manac'h-ze a ia a brez d'he labour pe d'he beden ; c'hui so avoalc'h ho kulet evit gouzout ervad ne labourit ket, ha mar doc'h deut ama, eo evit en eun ziskuez, ha ne ket evel domni pere ne deuomp d'an dachen-ma nemet evit eana eun nebeut goude ma vezomp en em skuizet o labourat. » Ar c'hanfart ne lavaraz guer hag a ieas kuit lostoc ; mes aleis a ganfardet a gafet evelse.

Er sizun dremenet n'on eus lavaret netra divar benn hon tad santel ar Pab; er sizun-ma ez comp d'en em zigoll var guementse. Pii nao en deus great teir brezeguen er derveziou-ma, unan divarbenn ar zaent en deus sonch da ganoniza, eun all divarbenn ar stad ma ema ar relijion en Itali, hag an drede divarbenn ar stad ma ema ar relijion e Pologn. Lacat a reomp ama eul lodennig eus an eil prezeguen, eleac'h ma tiskuez sclear ar pap hegalon a dad.

« E creiz ar bar amzer scrijus a zo brema, o sonjal n'on eus ken sicour nemet deoc'h ar beden, en em erbedomp oc'h hor breudeur an eskibien eus an oll bed christen, oc'h an oll veleien, oc'h oll bugale hor mam santel an iliz, oc'h ar re n'o deus morse eanet da ziskuez deomp ho c'harantez hag ho respet; goulen a reomp outho, muioc'h evit biscoaz, ma pedint Doue a greis calon evit ma vezo trec'het enebourien an iliz ha ma tistroint da vale en hent ar silvidiguez.

« Evit comz evel ma rea Sant Ian Chryzostom, ar beden so eun arm galloudus; lacat a ra an den e savete; eun tenzor eo, eul leac'h e pehini ne dleer caout aoun rag netra. Pedomp Doue, iunomp ha beillomp; destumomp oll nerz hon ene evit na gavo enebour hor silvidiguez digor ebet da vont enhi.

« Etouez kement a draou evel a stourm ouzomp, ar pez a scanva calz hor beac'h, ez eo ma c'hanavezomp penaus Doue, pa vanc an dud da zicour he iliz, a ra burzudou evit diskuez he oll c'hallout, ha deski d'an oll penaus dorion an ifern ne dleont morse, e nep amzer, dont abenn eus an iliz-ze pehini a vezo ato treac'h d'he enebourien, hag a jomo ato stard evel m'ema bete fin ar bed.

« Gouscoude poanuis eo ne alfet ket gouzout hag e a dle ar vro-ma pe ar vro hont derc'hel ato mad d'ar relijion ha d'ar feiz. Bez'ez eus carteriou e pere, guech all, e talc'het mad d'ar feiz ha d'al lezen gristen, ha pere, siouaz! a zo hirio distaguet dioc'h ar mean var behini eo savet an iliz, hag abaoue ma zint dispartiet evelse dioc'h an hini so roet ar gallout dezhan da great he vreu-deur, ar garg da gas da beuri an oant hag an denvet, e maint coezet en denvalijen, n'en em glevont tam entrezho, hag emaint e risel braz eus ho zilvidiguez.

« Evit ober hon dever, ne allomp ober ken nemet pidi, ha pidi stard, en hano Doue, ar rouanet ha kement hini a zo carguet a vroadou tud da gaout sonch ha da lacat don en ho speret ez eo eun dever evitho, hag eun dever striz, lacat da greski etouez an dud so dindan ho c'harg ar garantez hag ar respet evit ar relijion, ez eo eun dever evitho ober ho gallout evit miret na deui sclerijen ar feiz da vouga en ho bro.

« N'on eus douet ebet, hor breudeur ker, c'hui pere a guemer perz en hon labourou, c'hui pere so ken douguet evit ar relijion catolic; n'on eus douet ebet na deuot da unani ho pedennou calouneg gant hon re ha re an oll iliz. Pidi a raimp an tad a drugarez, dre veritou J. C. he vap hon Aotrou, da guemeret truez oc'h an Itali, oc'h an Europ, oc'h ar bed oll. Goulen a raimp

ma teui, dre he oll c'hallout, da bellaat an erroliou, an trubuliou, an nec'hamanchou, evit ma c'hello an ilis santel beva e peoc'h hag e frankiz, evit ma vezo lamet divar an oud ar goaleuriou a bouez varnezho, ha ma teuint oll, unanet er memes feiz, da vale en hent an env, o cridi e map Doue, hag o touguen frouez dre bep seurt oberou mad. »

En he brezeguen evit ar Pologn, hon tad santel a goms gant calz a nerz a enep an iskin a rer d'ar relijion catolic er rouantelez-ze. Lavaret a ra ec'h esper e teu dreist ar mare ar Russianet da zigueri ho daoulagad var guirion ar gatoliked, hag e ped ar gardinalet da bidi evel dhan evit kementse, evit ma teui an dud-ze da anaout eo ar relijion catolic eo a rent stard ar rouanteleziou, hag a ra da dud eur vro beva dizoursi hag euruz ama zoken var an douar.

« Ne eanomp ket, emezhan, hor breudeur, da hidi ha da aspidi, gant eur galon glac'haret, an Doue ker pinvidic e trugarez, ma plijo gantha ober eur zell a druez oc'h he heritach; ma tifenno, ma sicouro, ma c'harpo gant he vreae'h oll galloudec an ilis catolic hijet gant kement a varrou goal amzer, gourdrouzet ha goal gasset e ken aliez a zoare, evit ma cavo ar peoc'h a behini e deuz izom. »

Morse, a leverer, n'oa bet guelet bizach an tad santel ken trist ha ker garo evel ma voa goude beza great ar prezeguennou-ze, hen a behini an ear a so ato ken dous ha ken egarad!

CHIN. — Impalaer ar Chin en deus roet, nevez zo, ar groaz a enor da eur missioner, an tad Leboucq, a gompagnunez Jesus, An tad-ze en doa miret, er bloas tremenet, na vije lazec'ho oll dud eur guær. An dispac'herien o doa grounnet kær, hag ar re a zalc'he mad d'an Impalaer a grede n'o doa nemet ar maro da c'hortoz. An tad Leboucq en em lakeaz en ho fenn evel eur c'habiten soudardet, a reas dezho en em zifen, hag en em zifen a rejont ker mad, ma trec'hjont an dispac'herien ha ma rejont dezho kemeret an tec'h ha lezel kær ep ober droug dezhi. Abalamour da ze an Impalaer en deus roet d'an tad Leboucq eur stereden aour gant eur berlezen c'hlaz. Cridi a eller/penaoz ar missioner-ze da viana a vezo respetet e Chin.

VALANCIEN. — E kær Valancien ez eus eun devotron vraz evit Itron Varia-ar-Gorden-santel. O velet ze, c'hoarezet vian ar beorien o doa goulennet ha bet abenn gouel guivelez ar Verchez, eur vantel venn flourer da lacat da imach mam Doue.

Hoguen, enn derveziou tremenet, unan eus al leanezet a voue taguet gant ar c'hølera. Ar medecin a ziscleriaz e voa great ganthi. Guisket e doa oll vercou ar maro; gouscoude ne devoa ket collet he anaoudeguez.

Unan eus ar c'hoarezet a zonjas neuze e parefe marteze ma vije lakeat varnezhi mantel an Itron Varia. Kerc'het oue ar vantel, hag an hini glan, oc'h he gulet, a lavaraz gant eur vouez toc'horic: Setu aze al

louzou a vanc din. Laket oue ar vantel varnezhi, hag e lavare: Va Doue; mar fell deoc'h e labourfen c'hoaz evit ho cloar, contant oun d'hen ober, mar fell deoc'h e varfen... evel ma kerot.

Dioc'htu e vianeaz ar boan en he izili. Clask a rea lacat ar vantel da douch oc'h pep ezel, ha dre ma he zouche, ar boan a iea kuit. Goude m'oa bet ar vantel touch outhi oll, e lavaraz d'ar c'hoarezet a ioa var he zro: « Setu me pare, n'em eus mui a boan. » Kerkent e teuas he liou d'ezhi, d'he zal, d'he daoulagad, d'he daouarn pere a ioa cat moug gant ar c'hilenvet.

Abaoue, ar c'hoarezet o deus roet ouspen mil dam eus ar vantel burzuduz d'an dud a deu da c'houlenn an tamou-ze evit ho douguen evel eur scapuler.

AUTRICH. — Ar C'hardinal-Primat eus an Hongri, an aotrou Scitowski, so nevez maro. Enterret eo bet e kær Grann gant ar brassa solanite. Eun Arc'hes-cop en deus great an enterramant, ha pemp Escop all a voa oc'h he heul.

Lavaret a rer penaus, brema ez eus eur bloas ben-nag, eur vaouez divar ar meaz a zeuas da C'hrann da velet ar c'hardinal, hag a lavare e voa he vam. Great e voue dezhi kemeret eur zae seiz araog beza casset dirag ar prins eus an Iliz. Mes ar C'hardinal ne ana-vezas ket he vam dindan ar viscamant-se. Lezet e voue da guemeret he dillad divar ar meaz, ha neuze he map a lamas d'he briata, a reas d'ezhi ar c'haera dignemer hag e lakeas da azeza oc'h he daol er penn huella. G. M.

AR ZUL.

(PEMPVED PENNAD).

En difeza pennad em beuz lakeet dirag ho taou-lagad ar c'homzou euz a leor an Exod war an deiz santel, mes eb ho displika. E zeom brema d'ho displika. Evid gwir, sklear a-voalc'h ez int deja dreiz-ho ho-unan evid an neb a daolle evez mad enn-ho. Koulskoude, en esper ober d'eoc'h, ma mignonet, ho c'hompren gwelloc'h ag ho skrifas donnoc'h don en ho spered ag en ho kalon, e zan d'ho displika eun tamig.

Remerket or beuz deja ez euz daou dra er gourc'hemenn war ar zül, 1° difenn da labourat, d'an deis-se, 2° urz da zantiffia an deis-se, o tremen aneza e servich Doue.

Komzom da genta euz an difenn da labourat, da zül, ha goude ni a gomzo euz an doare pe ar feson da zantiffia an deiz binniget-se.

« Te a labouro epad c'houec'h devez, ag a raio « kemment az pezo da ober a labour epad ar c'houec'h « deve-se, » a lavare Doue gwechall d'ar bobl a Israël, ha dre ar bobl-ze d'eom-ni kristenyen.

Remerkom da genta, ma c'henvroiz ker, piou eo an ini a gomz evel-se.

Anini a gomz evel-se eo Krouer an Nenv ag an douar, Roue an oll rouaned, Roue an oll dud, ar Mestr braz euz ar bed oll. An ini a gomz evel-se en deuz pep gwir ha pep beli war-n-om, pep gwir da c'hourc'hemenn d'eom ar pez a gar, ha ni a zo on deves senti out-ha ober piz ha piz, war an heur ag a galon vad kemment a c'hourc'hemenn en d'eom. An ini a gomz evel-se a zo or Madoberour, on Tad, eun Tad ar gwella, peuni a gar ac'hannom, peuni a baco, a rekompanso ac'hannom gan largentez, ag er bed-ma ag er bed'all, mar d'om akketuz evel bugale vad, sentuz, respetuz, da viret erfad' he c'hourc'hemennou santel. Mes ne ankoueom ket ive penaoz an ini a gomz evel-se eo an ollgalloudec, peuni en deuz taolet an oll drouk-speredou ebarz en ifern, abalamour n'eo ket faller d'ezo senti out-ha, servich ag henori aneza, ha peuni on taolb ivez er memez lec'h a doumanchou eternal, mar greom foe war he gomzou, mar refuzom d'hen gloriffia, o viret he c'hourc'hemennou.

Hu Petra a lavar Doue d'eom dre ar c'homzou kenta-ze euz he c'hourc'hemenn war an deiz santel, war an deiz konsakret d'he servich? — Ma o'peuz taolet evez mad er c'homzou-ze, ma mignonet, e tleit beza remerket eun dra ha ne zonjec'h ket enn-ha martreze da genta, e tleit beza remerket, penaoz Doue a ra eur gourc'hemenn d'an dud, d'an oll dud, da labourat, pep ini ervez he c'hallout, en he vicher, en he stad a vuez, da labourat neket eun heurig pe zjou bemdez, neket eun devezig pe zaou er zizhun, mes epad c'houec'h devez euz ar zizhun. « Te a labouro epad c'houec'h devez, penvidig pe baour « ec' hix ma vezi, » eme ar c'hrouer: sex diebus operaberis.

O! pegement a dud a zo ag a zonj d'ezo n'eo ket greet evit-ho al lezen euz al labour? War digarez ma ho deuz ho zud dastumet d'ezo ha lezet gan-t-ho peadra da veva, eb rankout labourat, pe war digarez ma ho deuz plasou mad, pere a ro d'ezo gwenneven, founnez, pe int a labouro pe ne raint ket, e sonj d'ezo n'ho devez brema da ober nemed dibri ag efa, kemmer ho æz ag ho flijadur, foueta ar paveou ag an enchou, redeg ar c'haffeu ag an tavarnyou, c'hoari c'hartou, c'hoari billard ha c'hoariou all, pa ne reont ket c'hoaz goasoc'h c'hoariou, mont a di da di da fteppat, da c'hrac'hi evel ar c'hommerezed. O paotred dibreder, klevit kemment ma! Ha n'ouzoc'h-hu ket penaoz Doue he-unan en deuz labourer epad c'houec'h devez evit kroui ar bed-ma? Ha n'ouzoc'h-hu ket penaoz Jezus-Krist, Mab Doue, Salver ar bed, en deuz labourer, beteg an oad a dregont vloaz, gan ar vicher a galvez, evid gounid bara d'ezo ha d'he vam binniget? Goude ar maro a zant Jozeph ne voa nemet-ha evit pourvezi da ezomou an tiegezig paour a Nazareth. Ha Jezus a labourer da ober kirri, arajou ha traou all! Ha Jezus a yee da c'hounid he zevezou evel ar vecherouryen all! Koulskoude, or Salver, gan eur gomz, gan eun anter komz, en divize gallet trei ar pri e aour, ar vein e bara, an dour e gwir, evel ma reaz, eun deiz, e eureud Kana, dre garantez evit kerent an dud nevez dre drouz out-ho, evid lemmel diwar-n-ezo ar vez. — Ar gwir a voa deuet da vankout.

O lenn an Aviel, e remerkom penaoz Jezuz, peini a reaz aliez miraklou evit pourvezi da ezomou korporel he nesa, na reaz biskoaz an distera mirakl evit pourvezi d'he ezomou korporel he-unan, na kennebend da re he Vam Zantel. Gwelloc'h ha skveryusoc'h e kave gounid he dam bara dre al labour evel an dud ordinal. O ! na buez labouruz Jezus-Krist, beteg an oad a dregont vloaz, en astellouer a Nazareth, nag he vuez labourusoc'h c'hoaz epad an tri bloaz ma prezegaz he Aviel dre ar Judee, nag hi a gondaon uhel an oll dud didalvez, dic'hounez, dieguz, lezireg, al lochoreyen, laeron an amzer, an oll feneanted !

Klevit ar wiryonez-ma, c'hwil pere a gar tec'het muia ma c'hellit euz al labour : kavit d'im-me eun den, eunan epken, ag a vez deuet da veza eun dra benag a vad, da ober mad gan he vicher, en he stad a vuez, eb al labour. Ne gaffot ket eunan. Nan. Eun den ag en deuz nerz ha yec'hed, mes peini ne labour ket, a raio attao neubetoc'h eged eun den dinerz ha dic'halloud, mes peini a labour gwella ma c'hell. Eur skolaer a spered braz, mes peini ne studi ket, a jommo attao sotoc'h eged eur skolaer a spered bian, mes peini a studi. Ag evel-se euz an oll re-all.

Ia, mar fell d'eoc'h kaout eun dra benag, dont da veza eun dra benag a vad, ober eur vad benag en ho stad a vuez. labourit, poanyit. Labourit ag adit ho park, ag o' pezo eun dra benag enn-ha. Mar lezit aneza ouz an heol, ha mar chommit oc'h-unan da domheoli, bezit sur penaoz n'o'pezo ket a ed en ho park. Dreog, droug-louzu o'pezo, ha netra ken. Da lavared eo, visou a zavo en ho kalon ag ho kounez, d'ar pec'hejou en em roffot, setu aze petra a c'hoarvezo, ag erlin en em gollot evid an Eternite. « Al leziregez, eme ar Spered-Santel, « a zong da galz a bec'hejou, da galz a fallagriezou : « *Multam malitiam docuit otiositas.* »

Kemment-ma na zell ket ouz lenneryen *Feiz ha Breiz* : an dud didalvez na lennont ket *Feiz ha Breiz*, na netra vad ebet.

Y. K. KERZALE, beleg ar Zalet.

(Eur pennad all eur wechall.)

Lizerou eur Boelec iaouank d'he zaon Vreor.

Seisved lizer : D'AR MEMEZ HINI.

Lavaret em euz va offeren er mintin-man e chapel al leanezet santez Tereza, galvet e gallek *Car-mélites*. Gant pebez devotion em euz offerennet eno; hen explika ne ket e gallout an den. Sonjal a ren en em gaven ken tost da eneoù pere a vev var an douar euz buhez an alez er baradoz; hag em euz atao eur joa vraz o sonjal er vuhez all.

Karout a ran a greiz kalon an oll venec'h, an oll leanezet, ar re kloistret kouls hag ar re a vev e kreiz ar bed. Ne gavan ket brao klask sevel huelloc'h eur rum anezo, ha disprijout eur rum all.

Guelet em euz kals a dud impi pere o deuz kasoni euz ar venec'h hag al leanezet pere a dremen-ho amzer en oriesoun hag er beden; ha kals tud devot pere a ra fae var ar re a labour e kreiz ar bed. Sod int ha ber braz a speret; meur a veich em euz kavet tud goueziek oc'h ober fae varnomp, o sevel beteg an envou an tadou Jesuistet evel ma na vije ket plas e kaloun Jesus evit an oll veleyen vad n'euz forz pe hi a vev er c'houchou pe hi a vev er bed.

Ma ve digoret did dor ar baradoz gant da berson, va breur ker, ha mont a rafez evit he drugarekaat d'he izelaat e speret ar re all, abalamour na vev ket evel eur manac'h?

Tud diot! pere na velont ket anez ar veleyen a vev er bed, ar bed a iafe heb dale da goll. Ni, pere a labour er pareziou, ni a zo evel al labourer pehini a laca an douar land da zont douar a eost mad, ar poullou douar da brajeier mad; labourat a reomp d'ar c'huezen euz hon tal parkeier an iliz hor mam benniguet, hag ar venec'h a labour ar jardinou. Dont a rant ouспен d'hor sikour pa ve eur varadek vras dre eur vision bennag. Evidoun-me da guenta a gar va c'henvredeur ha goude em euz em c'halon eul lec'h tom mad evit karout gant eur garantez tener an tadou Jesuistet, an oll venec'h, an oll leanezet, an oll dud konsakret da servich va maestr divin. Avoalc'h eo evidoun gouzout penaoz eun ene a gar dreist oll hor Salver Jesus-Christ evit beza douguet d'he garout en eur faeoun special, neuz forz a be du e teu beteg ennoun.

Hor Salver en deuz lavaret : Ar bed ho kassao rag va c'hasset en deuz da guenta; bezomp laouen eta da veza disprijet gantan. Ni a oar labourat evit eur maestr guelloc'h evintan hag a brij an traoù d'ho guir dalloudeguez. Evelse a drugarekan Doue d'ann beza galvet da labourat parkeier an iliz hag e lavaran adarre ar pez em euz lavaret kant gueich : penaoz en em gavan euruz da veza vikel en eur barrez var ar meaz hag e Breiz-Izel.

Kals plijadur em euz bet o velet peguen caer oa chapel ar c'harmelitezet; ker devot ha ker sioul oa; eno oa aez pidi.

An hini en deuz henchet labour ar chapel a zo unap euz va mignonet gwella. Mad e vije bet etouez ar venec'h santel-ze pere o deuz gret guechall kement traoù burzuduz a veler c'hoaz gant laouenediguez ebarz an ilizou kaera.

Pa velan anezan o verka var ar paper en eur faeoun ker kaer ar portret euz ar pez en deuz c'hoant da lakaat ober, e teu sonch din euz an den iaouank-ze euz an Allemagn, pehini oc'h antreal en ty-labour ar pinter meulet Albert Durer, a verkaz var an dauleur eur c'hil ker kaer, ker round, ma c'honezaz en eur taol, kalon ar pinter bras, pehini a roaz dezan he verec'h da zimizi.

Va mignon na glask ket eur seurt fortun; eno set en deuz ar gwella loden, va c'henvreur eo ha va

breur dre ar galon. Na glask nag ar gloar, nag an enor; ma vije deuet kentoc'h er bed, e vije bet ive eun den meulet kaer. Petra dall ar gloar oll, ha ne ket guelloc'h deomp her c'haout divezatoc'h dirag Doue?

*** A. DE M.

Buez, Vertuziou ha Maro Sant Lorans Justiniani, Arc'heskop euz ar gear a Venis.

Sant Lorans a oa ginidik euz ar gear a Venis. Diskeon a rea euz a gerent pinvidik-bras. He dad hag he vamm, o veza tud a veve e doujans Doue, a gemeraz anezhan ar soursi ar brasa enn he vugaleaj. Sant Lorans, hag hen c'hoaz iaouank-flamm, en devoa eunn istim vras evid ar beden hag ar pratikou all a zevotion.

D'an oad a driouec'h vloaz, pa goumanse ar gwall-ioulou da sevel enn he galoun, hor Zalver en em ziskouezaz d'ezhan hag a zistagaz he galoun dioc'h kement a zo krouet. Adaleg ann amzer-ze, Sant Lorans ne c'hoantae nemed eunn dra. En em unani ouz Jezuz-Krist maro war ar groaz. Evit-ho da veza kristenien vad, he dad hag he vamm ho doa aoun na zeuje ho mab d'ho c'huitaat. Lavarout a reent : hon mab, o veza ken douget d'ann devoasion, a helpe mont enn eur gouent-bennak. Evid bien distrei dioc'h ar menos-se, e klaskent ann tu d'hen dimizi da eur plac'h iaouank, fur ha devot-meurbed. Mes hon den iaouank ne vezo ket gounezet dre ar promesaou ar re gaera. Evid en em startaat enn he venosiou mad, setu ama penaoz en em gemer : lakaat a ra dirag he zaoulagad, euz eunn-tu, ann holl vadou euz ar bed; eunn hano kaer, ar c'hargou huel, ann enoriou, ar pinvidigezou, ann ebatou, ar plijadurezou e pep doare; euz eunn tu all e laka dirag he zaoulagad ar beillou, ar iuniou, al laboriou, ann diouerou, ann dismegansou, ann naoun, ar zec'hed, ar baourentez, ann dilez anezhan he-unan evit plega hed he vuez dindan eunn tad priol, hag e lavar d'ezhan he-unan : Ac'hanta, eme-z-han. Petra ez ez-te da ober? Ha te a zo evit gouzanv ar poaniou-ze? Ha te a zo evit disprijout ar madou ze? O va Doue, krevait ac'hanoun, grit ma vezinn distag dioc'h pep tra, grit ma prizinn madou ar bed hervez ma talvezont, grit ma welinn enn-ho traoù hag a dremen, ha ma welinn ive e tremeninn gantho. Rak netra ne had war ann douar, kement a zo er bed ne d-eo nemet moged ha poan spered. — Oc'h en em zistrei neuze oc'h ar groaz, e lavar : O va Jezuz, o va Zalver, c'houi, ha c'houi hep-ken a zo va esperans; c'houi, ha c'houi hep-ken a vezo va zensor. Hep dale pelloc'h, oc'h ober fae euz a holl vadou ann douar, e tec'haz euz ti he dad hag ez eaz e kouent tadou Sant Beneat!

Eno Sant Lorans, pehini en doa bevet enn delisou hag enn abondanz e-barz ar bed, zo karget he galoun a joa o c'housanv ann dismeganz hag ar baourentez. Eunn eur erruout er gouent, hag hen gwan ha dinerz, en em roaz a-greiz he galoun d'al labouriou ha d'ann holl pinijennou rust gourc'hemennet enn urz. Ne gemere nemed ar boed a oa red evid en em wirout da vervel.

Morse ne eve hed ann deiz banne dour e-bed evit terri he zec'hed. Morse ne dostae ouz ann tan enn deiziou kriza euz ar goan. En em zerc'hel a rea enn he zao pe war he zaoulin epad ar pedennou hira, hep en em harpa e nep doare. Ar verzerien, eme-z-han, ho deuz gounezet ar Baradoz o skuilla ho goad, gounezomp-hi anezhan o kastiza hon korf. Enn he glenvejou e lavare d'ar vede-sined, pa vije red trouc'ha pe leski : n'ho pezet ket aoun, trouc'hil, loskit, evel ma plijo gan-e-boc'h. Doue a roio nerz ha kaloun d'in da c'housanv, evel ma en deuz roet d'ann tri den iaouank er fournez a Vablon. En em laouennaat a rea pa ziouere eunn dra-bennak, ker braz a oa he istim evid ar vertuz a baourentez!

Eunn devez, keit ha ma oa er-meaz euz ar gouent, eur peñ euz ann ti e lec'h ma oa ar bevansou, a zenaz da veza losket. Ann holl a oa saouzanet ha sponnet. Pa erruaz Sant Lorans enn ti, e levereur d'ezhan ar c'helou glac'haruz. Petra, eme-z-han, gand eunn ear joaz, hag hen a zo se eur gwall-daol? Ha n'ho euz-ni ket great vœu a baourentez? Ra vezo eta trugareket Doue pa ro d'e-omp ann tu da seveni ar vœu hon euz great. Ann hini a laka ann had da sevel ha da greski er parkeier, a roio bara d'he vugale. Bezomp hep-ken va breudeur, leun a fizians e Doue. Rag ar fizians e Doue, eme ann abostol Sant-Paol, ne chom ket hep he gopr.

Sant Lorans ne oa ket nebetoc'h douget d'ar vertuz a humilite pe a zisprijans anezhan he-unan. Er gear a Rom hag enn holl Italia e rank pep manac'h mont d'he dro da c'houlenn ann aluzen. Setu ama penaoz e ve great se. Mont a recur daou ha daou, pep hini anezho en deuz war he ziskoaz eur zac'h pe eur valeten e pere e ve leket kement a roer d'ezho. Pa dremenont dre eur ru, unan a ia a zor da zor enn eunn tu, hag egile a zor da zor enn tu all euz ar ru. Mont a reont da zor ar paour evel da zor ar pinvidik. Ann dud vad a selaou ho goulenn hag a ro d'ezho a galoun-vad. Mes aliez ive e lec'h reseo ann aluzen emint disprijet ha gwall-gaset. Sant Lorans a iea d'he dro die ar ruioù a Venis da glask ann aluzen, eur zac'h pe eur valeten war he ziskoaz, ha se enn eur gear e pehini e choume he dad, he vamm, he gerent, hag e pehini e oa anavezet gand ann holl. — Eunn devez, o veza o c'houlenn ann aluzen, eur valeten war he ziskoaz, ha gant-han eur breur-all, hema a lavaraz d'ezhan : Tad Lorans, ned-eomp ket du-hont war al leur-gear; eur strollad braz a dud a zo dastumet war-n-ezhi, hag ind a raio marteze goab ac'hanomp. Penaoz, va breur, eme Sant Lorans, ha n'ho euz-ni kuiteet ar bed nemet dre gomz? Kerzomp gant kourach, dougomp hon maleten evel eur groaz, ha gounezomp hirio war ar bed eur viktoar gloriuz.

Plijadur a gave, dreist pep tra, oc'h en om ziskouez e c'hiz eur paour ouz dor he dad, hag he vamm. Guelet e vije oc'h en em zerc'hel eno war drezou ann or hep mont ebarz ann ti, bete ma vije bet roet d'ezhan eunn tamm bara goulennet enn hano Doue. He vamm a save drouk enn-hi o welout he mab o vont evel-se a zor da zor da c'houlenn ann aluzen. He vamm eta, pa vele he mab

e tostaat onz ann ti, a c'hoare hemenne d'he mewellou karga he valeten enn eunn taol, mes Sant Loraus ne gemere nemed eunn tamm bara pe zaou hag a iea-kuit ; rag ar peza e'hoantae, e oa kaout fatig ha beza disprizet.

Tennet euz ar Bollandisted. M. D.
Le Sclazir 57. (Eur pennad all eur vech all).

BUEZ AN DEN EURUS IAN DISCALCEAT,

(EIL PENNAD.)

● veza bet bennoz he Escop, Ian a iez, er bloaz 1316, en urs S. Fransez, e couent Kemper, ervez ma credeur. O kemeret sae S. Fransez, e kemeraz ive he speret. Mar en doa caret ar baourentez aziaraog, en em roas dezhi eus he oll galon brema pa voa eun dever evithan. He viscamant a ioa ato eus ar re falla, ha pa c'houlenmet outhan perag kementse, e lavare penaus o veza an distera eus an oll, oa dlet dezan ive beza guisket ar falla. Taconat a rea he unan he zillad, ha seul divalao'h e veze he daconerez, seul vui e plijent dezhan.

Cals a zo, ha pa o devez evelse kemeret ar baourentez evit ho lod, a gred ne zell mui outho sicour ar beorien all. Ar breur Ian ne grede ket kementse. Evithan da veza paouroc'h evit nicun, he garantez a rea dezhan caout an dro da ober vad d'an dud reuzeudic, ha bepret e veze eur vanden tud izomeg en dro dezhan. Guelet eo bet o rei dezho beteg he vantel ha zoken he zae. Dreist oll pa veze diaz beva, pa greske an dienez, neuze ez ea da gaout ar re binvidic ; rei a rea dezho da anaout ker selear pe guen talvoudec eo an aluzen, pe guer striz eo ar gourc'hemen a ra deomp an Aviel d'he ober, ma c'halume en ho c'halon ar memes tan a garantez a voa en he hini.

Pis braz oa var he amzer ; ne golle ket eur momet. He zerveziou a ioa leun, ato e veze crog el labour pe er beden. Bemnoz e save pell araog ar re all, ha pa veze echu an ofis, en deveze poan oc'h en em denna eus ar c'hœur. Aliez e veze deut an deiz, hag e veze eno c'hoaz er beden. Kerkent ha m'en deveze lavaret he oferen, en em lakea er gador govez, pe ez ea da velet tud clan e kær. An nemorant eus an deiz, hag eul loden vad eus an noz a dremene o pidi. N'oa ket avoalc'h dezhan lavaret an ofiz gant he vreudeur, he lavaret a rea c'hoaz en he bart he unan gant ar brassa devotion hag ar brassa evesdet, hag ato e veze discabel epad ma hen lavare. Ousp-an ofis braz, e lavare ofiz ar Groaz, hini ar Speret Santel, salmou ar binijen ha cals salmou all, ofiz an anaoun, eun niver braz a litanioù, a himnou hag a ganticou en enor d'ar verc'hez Vari. Lavaret a rer e reas burzudou dre he bedennou, o para tud clan a gorf hag a speret, ha ne deo ket souez e ve bet silaouet peden eun den kel leun a feiz. Evel an den santel Job e voue goal gasset gant an droug speret en he gorf hag he ene. Avechou an enebour a glaske he lacat da zigaloni hag he deleur er glouarien ; avechou en em guemerezoken oc'h he gorf pehini a voa dija dinerzet dre he binijennou.

Scouet ar feiz, cleze ar speret, da lavaret eo comzon Doue, oa an armou-gant pere, evel hor Zalver guc'h all, e trec'he hag e pellea an droug-speret diouthan. Salmou David, pere a habaskea counnar ar roue Saül, a roe dezhan ive peadra da drec'hi an enebour. Avechou e lavare : « ô va Doue, pellait ar c'hleze dioc'h va ene, pellait dioc'h va ene ankeniet ar bleizi counnaret-ze. » Evit diskuez an disprij a rea eus he enebour, her galve alies ar c'hi. Avechou-all e lavare : « En em dennit diouzhin c'hui pere a ra displealdet, rag Doue en deus clevet mouez va daelon. » — Mes gant aoun na deuje he gorf da veza a unan gant an enebour, her c'hastize dre bep seurt pinijennou. Tremena a reas c'huezeg vloaz ep efa guin, nemet evit lavaret an oferen, hag eb dibri-kig, nemet gourc'hemenet e vije dezhan en he glen-vejou, ha panefe ma voa eun dever evithan senti, morse n'en divije efet guin na debret kig. He vevans a voa bara eiz ha fa pere a leze da loueda evit m'o divije nebeutoc'h a zaour. En he zour zoken e lakea eun dra c'hueroben-nag, evit digas da zouch dezhan eus ar vestl hag ar guinegr roet d'hor Zalver da efa var ar groas. Ne zebre nemet eur vech bemdez, nemet clan e vije var he vele. Iun a rea epad ar bloaz oll, nemet daou ugent devez, ha rannet en doa ar bloaz en eis corais pere a dremene gozig oll o veza divar bara ha dour, ha pephini eus an eis corais-ze a hade daou-ugent devez. G. M.

AN TAD DIFEIZ.

(PEVARE PENNAD.)

Leveromp brema penaus oa deut Mac'harit da veza couls lavaret christenez o lenn an aviel. An noz varlerc'h ma e devoa diskuezet al levr-ze d'he zad, ne allas cousket banne. An tad en devoa lavaret dirazhi, pa gomzas dezhan eus ar groaz laket en he c'herc'hen abers he mam : paour kez maouez, nag a boau am eus great dezhi. Kementse a ziskueze d'ar verc'h n'edo ket he zad æz o veza evel ma rea. Guelet a rea oa crignet he ene gant ar sonch-ze pehini a c'halver morc'hied.

Nec'het oa ive ganthi he unan. A dra sur, emezhi, ne maoun ket en hent mad ; ne ran ket ar peza a fell d'am Zalver a rafen. Sonch a deuas dezhi eus ar peza a doa lennet en Aviel, eus ar c'homzou a lavare J. C. d'he ebestel : Ar peza a liamot var an douar a vezo liamet en Env ; ar peza o pezo diliamet var an douar a vezo diliamet en envou. Ho fec'hejou a vezo pardonet d'ar re ma o pezo pardonet dezho. O sonjal er c'homzou-ze e teuz en he speret penaus evit ma c'hefje ar re a zalc'h leac'h an Ebestel liama ha diliama, e voa red dezho anaout ar pec'hejou : hag evelse anezhi he unan e teuas da anaout e voa red cofez ar pec'hejou evit caout ar pardon anezho, hag e lavare outhi he unan : Me ne gaf ket din em bief great cals a bec'hejou, gouscoude em eus faziet meur a vech. Penauz eta em bezo-me ar pardon eus va faziou ? Neuze e teuas ive en he zouch penaus, douetuz, eo en tiez braz-ze var bere ez eus eur groaz, hag e pere ne

felle ket d'he zad he lezel da vont, e casje ar re a elle he diliama, hag e vije desket dezhi petra e divije da ober evit kementse.

Setu hi antronos vintin, kerkent ha m'oa savet, o vont da gaout he zad. Hema a voa droug livet, he zaoulagad hag he zrem a verke ar skuisder, hag a ziscoeze avoalc'h n'en doa cousket tam epad an noz.

— N'oc'h ket iac'h, em eus aon, va zad, emezhi ?

— Noun ket iac'h ? nan sur. Mes te, va merc'h, ep he zonzal, ac'h eus va rentet clan.

— Me ?... ha penaus ?

— Eur vech all me lavaro an dra-ze dit. Gouez ervad gouscoude ec'h anaïen ar groaz aour as poa diskuezet din deac'h. Me eo am oa he roet d'as vam en amzer ma voamp eurusoc'h.

Mes abaoe eus tremenet cals traou. Lezomp an dra-ze.

Me gave din oas deut da c'houlenn eun dra bennag diganen ?

— Ia da, deut oun da c'houl ouzoc'h dont ganen da unan eus an tiez bras-ze consacret d'hor Salver J. C.

— Va merc'h, ma vije bet lavaret din brema ez eus daou zervez em bije da lezet da vont di, hag ouspen e vijen eat ganez va unan, biken n'em bije credet. Mes da groaz aour e deus va zrubillet oll. Mont a rin, ha peur ec'h eus c'hoant da vont ?

— Er pardaez-ma.

— Er pardaez-ma ? Goal vuan eo ; mes n'eus fors, mont a rin. Setu hi ta dioc'h an noz o vont ho daou etrezeg eun iliz. Da iliz Sant Roch eo ez ejont. Kement-ma a voa e mis Mae, hag an amzer a ioa brao. Var dro eiz heur anter e tigoesjont. An tad a zonje dezhan en eur vont ne gafjent den en iliz d'ar mare-ze. Ancounac'heat en doa, hag e verc'h ne alle ket gouzout, ez eo mis mae mis Mari, hag ez eo dres d'ar mare-ze eus an deiz eo en em zestum ar guir gristenien evit enori mam Doue. Souezet e vouent eta, ha Mac'harit dreist oll, pa zigorjont an or, o velet an iliz leun a dud, ha sclerroc'h evit e creiz an deiz, kement a c'houlou var elum a voa enhi. Ar verc'h ne ellas ket miret da jom eun nebeut a za sebezet hag evel strafuillet. Eun itron a voa o vont en ho raog, hag a zistroaz oc'h ar verc'h iaouane souezet. Souba a reas he bez er pinsin, hag e kinnigas dour ben-niguet dezhi gant eun ear eus ar brassa madelez, en eur soubla he fenn hag en eur vuse'hoarzin. Kementse a lakeas c'hoas nec'hetoc'h Mac'harit. Kemeret a reas an dour benniguet ; mes ne vouie ket petra da ober gantha. Siouas, biscoas n'oa bet desket dezhi ober sin ar groaz. G. M.

Hano ar Zent evit ar Sizun-ma.

DILLUN, 26. DU. — Sant Martin, escop.

DIMEURS, 27. — Dedi iliz Sant Per ha S. Paul e Rom.

DIMERC'HER, 28. — Santez Catell, guerc'hez ha merzerez.

DIZIQU, 29. — Sant Houardon, escop.
DIRGUENER, 30. — Sant Andre, abostol.
DISSADORN, 1. KERZU. — Sant Tugdual, escop.
DISSUL, 2. — Sul kenta eus an Asvênt.

An Aviel hirio :

Jesus a lavaras d'he ziskibien : Bez'e vezo sinou en heol, el loar hag er stered, ha var an douar an dud a vezo strafuillet dre ar spont a rai dezho ar mor-gant an trouz euz he vouagou. Dizec'ha a rai an dud var ho zereid gant ho aoun, o c'headal ar goallou a c'hourdronzo coeza var ar bed oll. Rag ar peza zo starta en envou a den da horjellat, ha neuze e velint map an den o tont var eur goabren, gant eur c'hallout hag eun neusdet vraz.

Hoguen pa velot an traou-ze o comans digouezout, troit ho penn ha savit hen etrezeg an env ; rag mont a rit da veza tennet a boan.

Jesus a lavaras dezho ar barabolen-ma : Sellit oc'h ar vezen fiez hag oc'h ar guez all ; pa velit an nevez o toht enho, ec'h ouzoc'h ervad ema tost an hanv. Evelse pa velot an traou-ze o comans digouezout, gouezet ervad ema tost Rouantelez Doue.

E guirionez, hen lavaret a ran deoc'h, ne vezo ket tremenet ar rum dud so brema, na vezo digouezet an traou-ze oll.

An env hag an douar a dremeno ; va c'homzou-me avad ne dremenint ket.

SANT LUCAS. XXI 25. G. M.

KELEIER.

An Aotrou Pelliet, bet professor e clouerd Kemper, ha goudeze beleg hospital Landerne, eat divezatoc'h da Haiti evel missioner da Escripti an Aotrou Testard, a so mado eun nebeut so. Gouzout a ran e tle beza poanuis ar c'he-lou-ma evit beleien an Escripti pere a garie oll an Aotrou Pelliet, mes her merca a ran evit ma pedint evithan.

Er Brovidans, e Kemper, e vezo tennet eul lotri an trede a vis kerzu.

Eus a di ar missionou diaveas bro ez eus diblasset adarre seis missioner nevez. Tri ha tregont so eat er bloa-ma eus an ti-ze d'ar missionou. — Eus a Vrest ez eus diblasset ive eis leanez a urs Sant Joseph da vont d'ar Stajou-Unanet.

Eus a gostez ar c'hreisdeiz e scrifer : ar goan a vezo cris bras. Perag ? Abalamour ma za labouset a vandenou etrezeg ar c'hreisdeiz da dremen ar goan evit tec'het dioc'h ar ienien. Ha ne deo ket labouset epken, mes tud a ia ive a gantchou da dremen ar goal amzer er c'heriou e tu an Itali. Divezatoc'h e vezo gouezet ha tri mad o deus bet an dud hag al labouset-ze.

Breuriezh ar Feiz e deus laket moull an daolen eus ar peza e deus savet epad ar bloaz 1865. Savet ez eus dre

ar bed oll christen pemp milion cant nao ha tregont lur. Er bloaz araog n'oa savet nemet pemp milion deg mil lur ha pevarugent. Bez' ez eus eta nao mil lur ha daouguent muioc'h.

E kær Amien, e chapel an Ursulinezet, diou brotestantiez iaoubanc a so distroet d'ar guir iliz er sizun dre-menet. Eur c'hoar hena d'an diou zimezel-ze a voa distroet ive d'ar guir relijion, er memes chapel, daou vloaz araog.

Teir leanez, eus a urs ar Conception Didach, so diblaset eus a Doulon, an nao a viz here, evit mont d'ar Senegal. An urs-ze e deus, abaoue meur a vloaz, tiez scol ha clandestie var aodchou an Afric, e tu ar C'huz-Heol.

Escop Naonet en deus gourc'hemennet ma vezo great bep bloaz iviziken, tri dervez pedennou en enor d'an dukez eurus Franseza Damboaz. Ar pedennou-ze a vezo great en iliz catedral, deiz he gouel, d'ar pemp a vis du, ha d'an-daou zeiz varlerc'h.

An Tad Gilbert, missioner abostolic e Kouy-Tcheou, e Chin, a so nevez maro. E mis c'huevrer 1865 oa diblaset eus a di ar missionou diaveas bro, evit mont d'ar mission-ze. A veac'h digouezet eo bet sammet gant ar vosen. N'eo bet nemet pevar devez clan. An Tad Gilbert a ioa het zouav en arme ar Pap araog beza missioner.

Gazeten ar Meziou a lavar : an douar gounezet a so brao, braoc'h marteze evit na ellet esperout e vije goude ar gleborou a so het. An dale digasset var al labourou gant ar glaeier, a so het digollet huan. Brema ez eus uguent vloaz e vijet het pell o clasc en em dizout goude beza het daleet evelse gant ar goal amzer. Kementse a ziskuez ec'h ouzeur guelloc'h hirio labourat, hag ez eus guelloc'h benviachou etre daouarn al labourerien.

E costez an anteroz d'an Alemagn, an ed a so couls lavaret er memes prizevel e Paris. Ar Zaozon a vandezho tri milion varnugent a boezelladou ed, hag er vro-ze, er bloa-ma, an ed destumet dre c'hlebor, a so fall. Poan vras so o viret outhan da vragezi pe da guillida. Hervez a leverer, er Stajou-Unanet hag er C'hanada an eost so het ken tano hag e Frans, ha ne dleer ket gortoz e ve digasset ed eus an Americ er vro-ma. Ne deus nemet ar Spagn hag an tu d'ar c'hreisdeiz eus ar Russi eleac'h ma ve ed da zioueret.

An ed n'en deus ket chenchet a briz er sizun-ma. Nebeut a viniz so guerzet; mes an dud ne loscont ket. An edou all a ia mad, hag ar re o deuz izom arc'hant a ell en em denna o verza traou all.

Unan eus ar rebechou a rer muia d'an dud divar ar meaz, eo lezel da vont da goll an anvoezen a deu eus ar

c'hreier, epad ma ve ken eaz he lacat da vont etouez an teil evit he vellat. Cals a zo hag a bren calz teil, hag a les da vont da goll e kichen ho zi ar pez a alfe ober dezho guelloc'h teil evit an hini a brenont. Rebech a rer dezho c'hoaz lezel teil, lousdoni re dost d'an tiez ha d'ar c'hreier, ar pez a zigas clenvejou var an dud ha var ar chatal.

N'eus ket pell ez eus maro en Americ eur vaouez oajet a zeg vloaz ha triugnent. Kementse ne deo ket eur burzud, rag calz a verc'het a ia d'an oad-ze ha zoken en tu all : Mes setu ama ar pez zo bet burzuduz e buez ar vaouez-ze. Antercant vloaz eo chomet ep lavaret guer, petra bennag n'e devoa ket collet ar prezeg. D'an oad a uguent vloaz e devoue eun tam displijadur, dre'n abeg m'oa bet re hir he zeod eur mare bennag, hag e reas neuze al le ne lavarje mui eur gomz an nemorant eus he buez. Dalc'het e deus mad d'he le, hag antercant vloaz e deus tremenet ep lavaret guer. Ne ouzon ket hag hi a gavo, ne gredan ket e cafe calz a verc'het da heuilla ar skuer e deus roet.

En dez-all, e Paris, eur potric nao pe zeg vloaz, en doa laket he zorn e godel eun den coz a voa en em gavet en he guichen, hag a zache ar mouchoer a voa er c'hodel-ze. Ne ellas ket ober he daol sioul avoalc'h. An den coz a zantas, hag a bacas dorn ar paotric en he c'hodel. Tizet evelse var an tom, ar potrig a ieas ruz ha nec'het e c'hellit cridi.

— Petra, marmouz, eme an den coz, ker iaouanc, hag en em lakez da laerez!

— Na rit ket a van, aotrou, eme ar paotrig, ne doan ket da vad.

— Ne doas ket da vad, penaus?

— Nan, ne rean nemet ober neuz; emañ c'hoaz o teski va micher abenn an Exposition!

Ali d'ar re a ielo er bloaz a zeu d'an Exposition vras da Paris. G. M.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 17 Du.		PONT'NABAT — 15 Du.	
Priz ar c'hant liour.		Priz ar c'hant liour.	
Guinis	14 lur, 03 c.	Guinis	14 lur, 96 c.
Segal	8 lur, 84 c.	Segal	10 lur, 10 c.
Eiz	8 lur, « c.	Eiz	9 lur, 50 c.
Ed-du	6 lur, 78 c.	Ed-du	7 lur, 70 c.
Kerc'h	9 lur, 74 c.	Kerc'h	9 lur, 88 c.
Avalou-douar	4 lur, 60 c.	Avalou-douar	3 lur, 25 c.

Ar Gerant : AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand AR. DE KERANGAL, Moulter an Escopi.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA, DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezoune.

Eun Abonnemant d'ar Gazeten a goust :

- Evit eur bloaz DAOU SCOUET.
- Evit c'huoc'h miz EUR SCOUET.
- Evit tri miz C'HUEC'H REAL.
- Eur gazeten ebken DAOU VENNEC.

Ar baemant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Bellec e Kemper.

Ar paeamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 1 Kerzu 1866.

Ar scrijou a enep ar feiz hag ar relijion a ra muioc'h a zroug d'an dud ho lenn evit na ra al laeron var an hentchou braz. Ar re ma ne lamont digant an den nemet he ialc'h, eun nebeut aour pe arc'hant; ar scri-fagnerien difeiz a lam digant ar c'hristen ar c'haera eus an tenzorion, ar feiz ha gras Doue. Al laeron ne lamont digant ar re a c'huillont nemet ar pez a ell renta ar vuez-ma æssoc'h; ar scrijou fall a lam digant an den ar pez a dle ober he eurusdet epad an eteroite.

Ne dleer ket eta beza souezet ma teu an iliz ken alies da zevel he mouez a enep ar scrijou difeiz a skigner etouez an dud. Evel eur vam vad e fell dezhi difen he bugale, ha miret na vezo taolet contam en ho speret hag en ho c'halon.

An dud difeiz, evit guir, a garfe ne deuse ket an iliz da grial evelse en ho enep. Mont a reont bete lavaret e vanc an iliz d'al lezen a garantez o comz en ho enep evel ma ra. Carout a rafent ne lavarfe den guer, hag e vent lezet sioul da zeski an droug d'an dud ervez ho guiz. Mes penaus e c'helfe eur vam guelet taga he bugale ep mont d'ho zicour na lavaret netra? Penaus e c'helfe eur messaer guelet ar bleiz o tistruja he zenvet ep ober van na crial da c'houlen sicour? Penaus e c'helfe eur guir gristen pehini a voar ez eo an oll dud he vreu-deur, ez int oll bugale da Zoue, e tleont oll en em garet var an douar ha stourm a enep an droug evit caout er bed-all an eurusdet so oc'h ho gortoz, penaus e c'halfen guelet ho fellaat dioc'h ho Doue ep sevel he vouez a enep ar re a glasc ho zrompla?

An iliz so en em zavet bepret, hag en em zavo ato a enep prezeguerien ar gaou. Morse ne deus eanet, ha marse ne eano da zevel he mouez evit kelen he bugale ha deski dezho en em zalc'her var evez a enep comzou fallagr ha troidellerez he enebourien. Caer o devezo an dud difeiz sevel huel ho mouez, an iliz a zavo ato hueloc'h he hini. Ganthi ema ar virionez, hag ar vi-

rionez-ze a vruzuno ato ar gaou. An hini so e penn an iliz, a so gourc'hemennet dezhan gant Jesus-Christ creaat he vreu-deur. Eus he berz e veler o vont, da guement corn so er bed, tud hag a guita madou, bro, kerent, evit mont da renta testi d'ar virionez, evit mont da skigna ar virionez-ze e kement leac'h ne deo ket anavezet.

Ha setu eno e guirionez petra eo ar garantez christen. Dilezel pep tra evit mont da ober vad d'an nessa; dilezel pep tra evit mont da zeski ar virionez d'ar re n'he anavezont ket, evit deski anaout ha caret Doue, deski hent an env d'ar re so sebeliet e skeud ar maro, mont da ober ar brezel d'ar gaou ha d'an errol, setu eno a dra zur ar guir garantez. G. M.

Spagn. Ervez eur gazeten a Spagn, en eur gouent a urs santez Clara ez eus eul leanez hag a so bet pareet dre vurzud. Abaoue c'huoc'h vloaz, casset gant eur goal glenvel, ne alle ober netra, ne alle ket zoken lavaret he ofis. Ne dremene miz ebet ep caout eur sourrat poan griz bennag hag he c'hasse beteg ar mouch. Ar vedecinet o doa great kement a ellent ep gallout dont abenn d'he farea. He foan a iea ato goasoc'h goaz, ha dalc'h mad e c'hortozet he guelet o vervel. Eis dez araog gouel he mam vad santez Clara, e devoue eur fallaen hag a zonjet oa an diveza. Leun a feiz, e lakea souezet an oll o lavaret cre e vije pareet gant he mam vad dez he gouel. He c'hoarezet o devoa eun dra bennag a esperans, mes gouscoude ne gredent ket re d'he c'homzou. Digouezout a reaz ar gouel. An hini glan a voa ker fall, ma ne doa ket gallet communia an derc'hent, ervez boazamant ar gouent. Dioc'h ar mintin, pa zeas al leanez d'ar c'hoer, e vouent souezet oc'h he guelet o tont, oc'h en em harpa dioc'h eun tu var scoaz unan eus ar c'hoarezet, ha dioc'h an tu all oc'h ar voguer. Unan eus al leanez a lavaras oc'h he guelet : Jesus ! pebez, follentez ! Mes an hini glan a zaoulinas, ha kerkent en em gavas pare. Ker mad eo pareet ma zeo hirio ar grea eus a oll leane-

zet ar gouent, ha ma c'hell, ep en em zieza, ober kement a labour ha diou eus ar re all.

Setu ama adarre eun taol burzudus hag a ziskuez ne les ket ato an Aotrou Doue ober goap eus ar zant. En eur barrez eus ar Belgic, ervez ar gazeten hanwet (La foi picarde), ar person en doa great eur procession eleac'h ma voue douguet skeuden (imach) Sant Roch, evit goulen na deuje ket ar c'holera da gregui er barrez. Evit ober goap eus ar person, eur vanden lamponet, etre pemzeg hag ugent a voa anezho, a reas eun doare sant gant colo, hag a iez ive da ober eun doare procession gantha; ker e coustas dezho. Abenn antronoz vintin oant maro oll; n'oa ket chomet unan anezho e buez. An oll so bet spouronet o velel an taol-ze, ha bez'ez eus peadra. Peur e sonjo da vad an dud difeiz ne rer ket, evel ma carer, goap a Zone hag eus he zant?

Lavaret on doa, er zizun-all, e tlie eun tiad protestantet eus a Spagn dont d'an iliz catolic. Deut int an 28 a viz here. Deg den so anezho, an tad, ar vam, hag eis buguel. Eur solanite vras so bet great evit kementse. Eun niver bras a dud so bet deut da zellet. Deg paeron ha deg mareonez a ioa dibabet etouez ar re guenta eus a guær. Eun oferen so bet canet, hag eur brezeguen so bet great.

Ne dleer ket beza souezet o velet an iliz oc'h ober evelse eur gouel evit diguemeret he denvet dianket pa zistroont davethi. Enr blijadur eo ato evithi gullet unan bennag eus he bugale o tont d'en em deleur etre he divreac'h. Kementse a ziskuez ema ato enhi speret Jesus-Krist pehini a lavar deomp en he Aviel e vezo muioc'h a laouenidiguez en Env var eur pec'her a zistro hag a ra pinijen, evit var naonteg ha pevar ugent den just.

Var ar more tigouez avechou penseou hag a so scrijus comz anezho. Setu ama eul lestr, eus an Americ, hanvet *Evening-Star*, hag en deus great pense. Bez'ez oa varnezhan tremen seis cant den, hag oll o deus collet ho buez nemet eun tri varnuguent bennag, pere so chomet beo evit gallout rei da anaout ar spont hag ar strafuil a voa bet var al lestr-ze.

Pa ziblasas an *Evening-Star* eus a guær New-lork, an amzer a ioa brao. An oll dremindi couls hag ar vartolodet a voa gae ha laouen. An daou zervez kenta e voue eun tamig avel, mes caer e chome. An trede devez e tirollaz an avel foll; eur barr avel eus ar re voassa. Da anternoz ar mor a ioa counnaret. Al lestr a voa stlapet ha distlapet evel eur blouzen. An dour a deue el lestr hag her c'hargue; houliou mor a deus hag a dorre ar rodou. Cregui a rea aoun en dud, dreist oll er merc'hed pere a c'houlenne dalc'h mad oc'h ar vordaidi petra a dlient da c'hortoz.

An avel a greske ato; ar mor a c'hoeze hag a lamme goasoc'h goaz. Ar c'houmoul a ioa ken teo ma cavet e vec'hient al lestr. Ar c'habiten a lavaras lacat an oll

merc'hed er c'hloz, ar peza grescas c'hoas cals ar spont. Vardro triuguent leo edot dioc'h an douar bras.

Vardro teir heur dioc'h ar mintin an avel a voa en he grea. Kement a zour a lame el lestr, ma voue mouguet an tan, hag al lestr en em gavas evelse ep rodou, ep stor; ep tan, hag evelse ne allet mui he ren. Ar pompon a voa frezet, hag ar c'habiten a lavaras d'an oll en em lacat da deleur dour er meaz, ne ket evit savetei al lestr, rag n'en doa mui a esper, mes evit miret outhan da vont ker buan d'ar gouelet.

Me ho les da zonjal pebez strafuil a voue neuze eno. An oll, braz ha bihan, goazed ha merc'hed en em lakeas da dumia dour, mes caer o doa, e teue muioc'h ebarz evit na daolent er meaz.

Etretant ar c'habiten a lakea disken ha distaga ar bagou bian. Dre ma ho distaguet, an avel hag an tarziou ho strinke oc'h al lestr braz. An oll gouscoude en em dole enho evel pa vijent counnaret, ha ne ziscroguent mui eur vech m'o deveze cavet crog. Pebez reuz a voue eno neuze! Pep hini a glaske en em zavetei. Eur c'hri a voa spontus. Al lestr a iea d'ar gouelet. Ar merc'hed, collet ho fenn gantho dre ho aoun, a dole ho dillad, hag en em stlape etouez an eonen a voa en dro d'al lestr.

Da c'huoc'h heur, al lestr a iead d'an traon, ha gantha an darn vuia eus an dud a voa enha. Ar mor en em zavaz evel eur menez, hag al lestr a voue lonket. Pebez taolen scrijus a voue eno neuze! Ar re o doa gallet chom var gorre'n dour, o cripat oc'h ar bagou bihan, oc'h tamou planch, oc'h pennadou guerniou, oc'h kement a voa chomet varlerc'h al lestr; hag an tamou pense, talet ha distalet gant an avel, o steki an eil oc'h eguile, hag unan bennag ato o tiscregui hag o vont d'ar gouelet!

Gouscoude diou vag vian a voa chomet ep beza brazunet, hag eul loden eus an dud keiz-ze o doa gallet en em stleja enho. En unan anezho n'oa nemet goazet; eur vaouez epken a voa en ho zouez. En eben ez oa goazet ha merc'hed tost kement ha kement. Oll e voant couls lavaret en noaz. Dalc'h mad an avel a vranselle ar bagou-ze, ho zaole var ho c'hostez, ha bevehc unan bennag a veze strincket er mor ha lonket gant an tarziou. En diou vag-ze gouscoude o deus saveteet unan bennag ho buez. Unan anezo a ellas mont d'an douar, hag ebara zigouezas gant eul lestr pehini a zaveteaz ar re a voa enhi.

Nag e a zo truezus clevet ar re so chomet e buez o comz eus ar boan, eus an encrez o deus bet, eus ar re o deus gullet o vervel dirag ho daoulagad! Ama e velent tud o crial, crog en eur pez coat bennag hag ho dalc'he var an dour; ahont e velent eun den o tont d'ho c'haout var neun, hag o savetei he vuez en ho zouez; pelloc'h e velent eur c'hreg pe eur plac'h iaouanc o cregui er vag ep gallout sevel enhi, ha goude beza dalc'het crog eur pennad mad, o vont d'ar gouelet, ep m'en divije mont anezo nerz avoalc'h evit he zicour da zavel er vag. Larcoc'h c'hoaz e velont daou zen an eil crog en eguile. Unan anezho a ro eun taol troad d'eguile evit en em denna diouthan, rag anez e voant collet ho daou. An oll a voa dare gant an naoun, ha muioc'h c'hoas gant ar

zec'het. En eur guer, red eo beza gullet traou evelse evit gallout comz anezho evel m'eo diet. G. M.

HISTOR ZANTEL,

TENNET DIVAR LEVR ANN EXOD.

(Pevar Pennad).

AR VODEN E TAN.

Moïzes a zionalle er penriou denved Jethro, he dadkaer, belek Madian. O veza kasset he dropel dour er gouelec'h (*enn desert*) e tigouezaz gant menez Doue, hanvet Horeb. Hag ann Aotrou-Doue en em ziskouezaz d'ezhan enn eur flamm tan a zave euz a greiz eur voden; hag e vele ann tan er voden, hag ar voden na zeve ket. Ha Moïzes a lavaras enn-han he-unan: Mont a rinn, ha gullet a rinn petra eo ar burzud braz-hont, perag na beur-zev ket ar voden.

Mes ann Aotrou Doue, o velout ez ea rag-éenn da zellet, a c'halvaz anezhan euz a greiz ar voden: Moïzes! Moïzes! He-ma a respontaz: Chetu-me ama.

Ha Doue da lavarout: Na dostaït ket ama; tennit ho poutou euz ho treid, rak al leac'h m'emoc'h enn-han, a zo eunn douar santel. Me eo Doue ho tad, Doue Abraham, Doue Izaak ha Doue Jakob. Moïzes a guzaz he fas, rak ne grede ket sellet oc'h Doue. Hag ann Aotrou Doue a lavaraz d'ezhan: gullet am euz trubuliou va bobl, ha klevet am euz ar c'hri a daol dre'n abek da grisderi ar re a zo e penn al labourou, hag ounn diskennet evit he denna a-dre daouarn ann Ejiptianed, hag he gas euz ar vro-ma enn eur vro vad ha frank, enn eur vro a red enn-hi al leaz hag ar mel. Deuit eta hag e kassin ac'hanoc'h da gavout Pharaon, evit ma tennot va bobl, bugale Israël euz ann Ejipt.

Moïzes a lavaraz da Zone: Piou oun-me da vont da gavout Pharaon ha da denna bugale Israël euz ann Ejipt?

Doue a respontaz d'ezhan: Me a vezo gan-ehoc'h, hag ar zin-ma ho pezo evit ma ouezor'h eo me eo am euz ho kasset: pa ho pezo tennet va bobl euz ann Ejipt, e reot eur zakrifis da Zone var ar menez-ma.

Moïzes a lavaras da Zone: mad, mont a rinn da gavout bugale Israël, hag e levirinn d'ezho: Doue ho tadou en deuz va digasset d'ho kavout. Ma lavaront d'in: Pe hano en deuz-hen? petra a livirinn-me d'ezho? Doue a lavaraz da Voizes: *Bez'ez oun ann-hini ez ounn*. Livirit da vugale Israël: *ann hini a zo en deuz va digasset d'ho kavout, ann Aotrou, Doue ho tadou, Doue Abraham, Doue Izaak, ha Doue Jakob; ann hanoze eo va hano da viker, ha dreiz-han e vezinn anavez gant ann dud a rum da rum hed ann holl amzeriou. It eta ha dastumit ar re goz en Israël, ha livirit d'ezho: Ann Aotrou, Doue ho tadou en deuz en em ziskouezet d'in, hag en deuz lavaret: Deuet ounn d'ho kuelout, ha gullet am euz ann holl draou a zo c'hoarvezet gan-eoc'h enn Ejipt; hag em euz lavaret e oa ret d'in ho*

tenna dioc'h trubuliou ann Ejipt hag ho kas endro da vro Kanaan, eleac'h ma red al leaz hag ar mel. Selaou a rann ho mouez; hag ez eot gant henaoured Israël bete roue ann Ejipt, hag e levetot d'ezhan: An Aotrou, Doue ann hebreed, en deuz nor galvet. Mont a dleomp tri dervez kerz ebars er gouelec'h, evit ober eur zakrifis d'ann Aotrou hon Doue. Mes gouzout a rann penaoz roue ann Ejipt n'ho lezo ket da vont kuit, nemet forset e ve gant eun dour nerzuz. Astenn a rinn eta va dour ha skei a rinn var ann Ejipt; meur a varzud a rinn enn ho c'hreiz, ha goudeze e lezo ac'hanoc'h da vont kuit. Ober a rinn ma kavo va bobl trugarez dirag ann Ejiptianed, hag pa z eot kuit, n'ez eot ket ho taouarn goullb, peb greg a c'houlenn digant he amezegbez ha digant he hostizez listri ar c'hant ha re aour, ha dillad deread evit al lid. Ho lakaat a reot var ghein ha paotred hag ho merc'hed, hag e tiboure hot ann Ejiptianed.

(Doue a ra guir-varn abred pe zivezad; ann Ejiptianed a oa deuet pinvidik gant labourou grevuz bugale Israël, ha bugale Israël na oant ket paet dioc'h ho foan. Pa z aint er meaz euz ann Ejipt, Doue a lakat ann Ejiptianed da bresta d'ezho dillad brao listri aoun hag arc'hant evit ober ho zakrifis; hag ann traou-ze a chomo gant-ho, evit ho dic'haout euz ho labourou).

Advision (*) ha Couzoumen e Sant-Gili ar Beskont.

Ne deo ket en Escripti Kempen epkene roer Missionou. En Escriptiou all a Vreiz-Izel estoer ive. Setu ama eur pennad scrit divarhenn eun Advision bet en eur barrez a Escripti Sant-Briec. Caret em bje lacat en he hed er gazeten ar pennad scrit caer so dirag va daoulagad; mes re hir eo, ha ne allan lacat nemet eul pennadic eus ar gomansamant, hag eur pennadig all eus ar fin. Hoguen ar pez a verkin ar zo avoalc'h evit diskuez ez eo ar Vretoned e pep leac'h douguet evit ar Religion, ez eo beo ar feiz en ho ene.

Setu ama ta eul loden eus ar pennad scrit-ze:

« Enn eur c'hornik a vro Trieger, eun parrouz Sant-Gili ar Beskont, a zo en em dastumet kalz tud ha kalz beleien detiz ar parrojo a diwar d'ho. Nag evit petra kement-se a dud enn Sant-Gili, enn d'ho-se, petra neve zo c'hoarveet er parrouz? Perak a zo'n kement ar c'hleier war vranskel, hag a veler an dud, ken kaer gwisket, o tisedek a bep tud da geout ar bouk dre ann hincho hag ar parkeier? Ec'h ar d'hen tarout d'ac'h, enn am iez, gwell ha m'ac'h heffin. Ato, enn de man a kle parroisianiz Sant-Gili kaout ann eur, gortel abbe pell zo, da weled kentan Pastor ann Escripti.

« Aboe m'ho deuz gouveet a kle dont enn ho zouez, a lenner war ho min pegement a c'hoant ho deuz da

(*) Advision, da lavaret eo, distro eus ar mission deiz ha bloaz varlerc'h ar mission.

diskoé hô c'halon vâd énn kénver hô Eskob énn eur ôber d'ehan ar gwellan digémer éc'h haloit. Mez ével gwir gristenien ma'c'h int, ann d'ud vâd man hô deûz gwélet skler pénôz na zô evurusted gwirion ébéd war ann douar éwit ann hini n'eo két hé galon net a béc'het, éwit ann hini n'é man két énn peuc'h gant hé Doué. Sétu éwit pétra hô deûz adalek abréd sélaouet mouéz hô Ferson bopréd kén leûn a bréder évit mâd hô iné. Rak ér barrouz man, ével, hép mar, dré oll énn Breiz-Izel, éc'h anavéer mouéz ar bélek éwid béan mouéz Doué hé unan.

« Hag éwit gwir, bemdé éman ô tennan madélézo ann Otro Doué war gément a zô énn drô d'ehan. Sellet outhan kentoc'h : kément dén, énn hé barrouz, a deû war ann douar a zô gret ganthan bugel da Doué dré ar vadiant ; hag adalek hé vugaléach kentan, ar c'hristen a zô ambrouget ganthan, dré ar zakramancho hag ann alio mâd, war ann hent da vont da di hé Dad péhini zô ébarz ann Env. Mar koll ar bugel kez hé roud, eur wééh bennâg, a vó kerc'het gant ar bélek, vel a héléd hé dorn, éwit héan laket adarré war ann hent mâd. Ha pa deûio wit pep hini ann heur da vont deûz ar vué-man d'hon gwir vrô, a zavo ar bélek eur wééh c'hoaz hé dorn éwit teûrel gant ann dour binniget hé diwéan bennôz war hon bé, énn eur larout gant kalz a garanté : « Doué d'hén pardono ! »

An hini en deus scrifet kement-ma, goude beza merket pe guen aketuz eo bet parressioniz Sant-Gily da zont d'an advision, oll goazet ha merc'hed, koz ha iaouanc, ha beteg ar vugale vian, etre daou rum. pevar dervez pep rum ; goude beza diskuezet pe guer courachuz int bet, noz ha mintin da zont d'an iliz, gant pebez evesdet o deus silaouet comzou Doué ; goude beza lavaret peguer caer diguemer o deus great d'ho Escop, an Aotrou David, Escop Sant-Briec, a echu he scrit evel :

« Pégen braz eo galloud eunn Eskob énn Iliz Jézuz-Krist ! Hé daouarn hép kén ac'h hell mont bétég ann Env éwit tennan ac'hané sakramant ha gras ar Spéret-Santel da nerzan ann d'ud, divroét war ann douar ; ha d'hô lakout dré zé da gérzout treûsek ar baradou hon gwir vrô. Goulenn a ra éta da diskenn war n'hé Spéret ar turnez éwit ma lakaint mado ar bed all arôk da vado ar béd man ; Spéret ann anoudégez hag ann ali mâd éwit ma klaskoint ha ma kavoint ann tu da vont d'ann Envo ; Spéret ann nerz éwit n'hallô nétra harz anhé d'ôber hô silvidigez ; Spéret ar skiant éwit ma wéloint skler ann hent hô c'haso da Doué ; Spéret ar galon vâd hag ann doujans énn kénver Doué éwit ma kavoint ezet ôber pep tra hervé hé c'houre'héménno, ha m'hô dévô aon da vankout a zentia outhan épâd ma voint war ann douar.

« Goudé ar bédén-zé, ann Eskob en em laka d'ôber gant ann ôleo, war dâl pep hini deûz hé vugalé, eur groaz hag a vó éwit hé, mar hé dougont ervâd, alc'houé dôr ann Envo. Enn keit-sé, ével épâd ann oféren én em unané ar bobl ganthan én eur ganan gwersio sante éwit pidin ar Spéret glân da diskenn én kalono ann oll.

Pa oa fin da rein sakramant ann ôleo, ann Otro'n Eskob a réaz eur zell dré oll war ann iliz, hag a rôaz kalz a veûléudi da barrouzianiz Sant-Gili éwit ann traou kaér hag ann urz vâd en dévoa gwélet énn pep lec'h. Mez ann Iliz, énn eur ôber mâd ar ré véo, n'ankoua két ar ré varo. Mont a eûré ann Eskob d'ôber trô ar véred éwit binnigan ébarz hô bé ar ré n'én doa két gallet binnigan énn bué ; hag éwit rein d'hé lôd deûz ar madélézo a oa deût da digas da barrouz Sant-Gili. Prést goudé a oé ambrouget adarré gand ar bobl d'ar presbitor énn pélec'h én em lékéaz ann d'ud vâd-sé da diskoé d'ehan hô anoudégez éwit ar boan én doa kémeret da dont d'hô gwélout, én eur ganan a névé flamm ar werz hô dévoa dezket énn hé hénor. Ann Otro'n Eskob hô zugarékéaz hag a gimiaz neuzé diout hé én eûr rein c'hoaz hé vennôz d'ann oll bobl daoulinet. Ac'hané ec'h éaz da vernan gant ar veleien hag ar penno kentan deûz ar barrouz da béré a laraz lies gér mâd ; ha pa oa fin, é pignaz adarré énn hé garrons énn eur vinnigan pep hini hag énn eur gas ganthan doujans ha karanté ann oll. — Epâd ann déis man eo kouéet madélézo Doué war barrouz Sant-Gili ével ar glao ; ma kresko énn douar binniget-sé freûz a zilvidigez da viken éwit ann oll : ha Doué da vó meûlet !

R.

AR ZUL.

(C'HOUEC'HVED PENNAD).

En difeza pennad or beuz-greet eur gasadenn war ann d'ud didalvez, war ar re ne labouront ket, greom er pennad-ma eur gasadenn war ar re a labour re, pétra benâg nag ar re-ma, nag ar re-all na lennont *Feiz ha Breiz*. Mes lenneryen *Feiz ha Breiz* a lavaro d'ezo.

Ha beza ez euz tud ag a labour re ? — Ia, beza ez euz.

Ar re a labour épâd ar c'houec'h devez kenta euz ar zizhun, ha pa deu ar zûl, a labour adarre, ar re-ze a labour re. Doué en deuz lavaret d'an dud : « C'hwia « labouro épâd c'houec'h devez (ha neket épâd seiz), « épâd ar c'houec'h devez kenta euz ar zizhun, ag a « raio kemment o pezo da ober a labour épâd ar « c'houec'h deve-se. Mes, d'ar zeizved devez, emé- « z-ha, e ma an deiz a hean, a repoz, deiz konsakret « d'an Aôtrou ho Toue. D'an deis-se ne labourot ket, « ne reot taôl labour ebed. »

Setu aze komzou Doué he-unan. — Ho lakeet em beuz deja dirâg ho taou-lagad. — Ar c'homzou-ze a zo sklear ; ne ouffent ket merka d'eom sklerroc'h 1° an urz a ro Doué d'an dud da labourat, da boanya épâd ar c'houec'h devez kenta euz ar zizhun, pep ini en he vicher ; 2° an difenn a ra out-ho da labourat d'an deiz en deuz miret evit-ha, evid he zervich, d. l. e. da zûl.

Ar re a labour eta da zûl, a labour re ; mont a reont a eneb an difenn en deuz greet Doué ouz an aod da labourat d'an deiz santel, pec'hi a reont ag ec'h oian-sont ho c'hrouer.

Pec'hi a reont ? — Ia, pec'hi a reont e gwiryonez. Petra eo pec'hi ? Pec'hi a zo mont a eneb holontez an Aôtrou Doué, pe oc'h ober ar pez a zifenn-én ouz-om, pe o chom eb ober ar pez a c'houre'hemen-én d'eom. Evel-se, pa lavar Doué d'eom, er Skritur zakr : « Karit ho krouer dreist an oll draou krouet, ag ho « nesa evel-d-oc'h oc'h-unan ; henorit ho tad ag ho « mam, » mar mankom da ober evel-se, d. l. e. mar karom eun dra benâg muioch eged or c'hrouer, ma ne garom ket on nesa evel-d-om on-u-nan, mar mankom da henori on tad ag or mam, e yeom a eneb holontez an Aôtrou Doué, e pec'hom. Pa lavar Doué d'eom, er memez Skritur zakr : « Ne laeri ket tra da nesa ; ne zrouk- « prezegi ket, » mar laerom ha mar droukprezegom, e yeom a eneb an difenn én deuz Doué greet ouz-om ag e pec'hom.

Eur buguel, pa vank da zenti ouz he dad, oc'h ober ar pez a zifenn he dad out-ha, pe o chom eb ober ar pez a ordren he dad d'eza, ha ne ra-én ket fall ? Ha ne bec'h-én ket a eneb he dad ? — Eo. — Ha-mâ, ar memez tra ez eo euz ac'hannom e kénver on Tad peini a zo en nenv. On Tad peini a zo en Nenv, en deuz difennet ouz-om labourat d'an deiz konsakret d'he zervich en eur feson special ; mar labourom eta d'an deis-se, e yeom a eneb he volontez, e torrom he c'houre'hemen ag e pec'hom.

Paegwir ez euz pec'hed o labourat da zûl, pedare pec'hed, pe seurt pec'hed a zo ? — Pec'hed a zizentediguez ouz Doué, pec'hed a zispriz evid he lezenn, pec'hed a laeronsi war ar c'hrouer, pec'hed a zaôtre-diguez pe a brofanasion euz an deiz santel, ha memez, pa zeller piz, sakrilach.

1° Beza ez euz pec'hed a zizentediguez. Doué, hen lavaret or beuz, en deuz difennet ouzom labourat d'he zeiz. Mar labourom eta d'an deis-se, e yeom a eneb he zifenn, e tizentom out-ha. Ober a reom ec'hiz on tad ag or mam genta, pere a zebraz, a eneb difenn an Aôtrou Doué, euz frouez gwezenn an anaoudegez euz an droug ag euz ar mad. Ar pec'hed-ze a goustaz ker d'ezo ha d'ho bugale war ho lerc'h. Al labourou a raim da zûl, a eneb difenn an Aôtrou Doué, a gousto ker d'eom ivez. N'ez euz ket par d'al labourou da zûl evit kas eun den da baour, ag evit tenna goallennou Doué war eur vro. Eur beleg santel braz, person Ars, peini e maer a vec'h e Rom da ganoniza, a lavare aliez d'an dud, pere a zeue a vandennadou da zelaou aneza : « Me, « eme-z-han, a anavez meur a sekred evit kas an den « da baour. Mes daou a zo dreist ar re-all, ha ne van- « kont morse ho zaôl : *laeres ha labourat da zûl.* »

Ia, ma mignon, mar o peuz c'hoant da vont da baour, da vont da glask ho tam abarz fin ho puez, laerit, laerit evid-oc'h oc'h-unan, pe evid ar re all, ec'hiz ma ra servicheyen, mitizyen a zo war ho mistri evid roi d'ar c'h'laskeryen. Pa lavar ho mistri d'ezo roi eur goffen-nad, int a ro diou, teir, ag an dra-ze evid beza deuet mad d'an druffenn goz, peini a voar ho meuli ha kaô-zeal d'ezo euz ar paôtr Per ag euz ar paôtr Jakez.

Ia, evid mont da baour, laerit, gad ho raffot ket a laeradennou braz. Dre laeradennou braz e tener a-wé-chou penvidig, evid eur pennad, mes neuze ez er sûr ivez da vont d'an ifern. Grit laeradennou bian, pere n'o taôlint ket e pûns an ifern, mes epken e flammou an purkator ; laerit pemp kweñneg war hem-ma, eur boutou koad war ar hôttaouez, eur rozeuz ag eur c'houchad spillou war ar merser bian, ha me a voar-ranto d'oc'h, gan person santel Ars, pénaôz e vezot abarz fin ho puez, paour a-voalc'h, paour evel Job, goude ma voe bet lammet he oll vadou digan-t-han.

Ar memez tra, labourit da zûl, ha c'hwia vezo paour ivez. Pa c'houneffot eunan da zûl, Doué a lammo digan-oc'h daou ha tri. Klevit ama. C'hwia o peuz aze e korn ho kraou eur veoc'hig vad. Talout a ra eun ugent skoed, marteze zoken eun tregont skoed benâg, mar ya mad war an anevaled. Ma l'ar veoc'h-se a ya da veza lammet digan-oc'h. — Pénaôz ha perâg ? — C'hwia a zo eur maread-so o labourat da zûl pennadou ! Gounezet o peuz marteze evel-se, dre ho labourou difennet eun ugent liour benâg. Mes Doué hô kwele ag en deuz lavaret ne golze ket gan-oc'h. Pa eo deuet ar poent d'eza d'en em baea, pétra en deuz greet ? Digas eun tam klénved d'ho peoc'h, ha setu hi maro. Gwelit brema pétra o peuz gounezet !

Pe marteze, e lec'h skoï ho peoc'h, pe ho march, pe oc'h eost, Doué a zigaso d'oc'h oc'h-unan eur pore klénved, peini ho talc'ho eun nebeud sizhunvezou war hô kwele. Epâd an devezyou-ze a boan c'hwia ne c'houneffot netra ; ne raffot nemed dispign. Ar medisîn marteze a vezo galvet da zont war ho tro, ag ar medisîn a yalo han-t-ha gwenneyen mâd evid he louzon ag he vizitou, eb beza greet d'oc'h marteze kalz a vad-râg, ma eo Doué eo a zo war ho tro o vrouda ac'hannoc'h evid ho labourou da zûl. Doué na lezo medisîn ebed d'ho para ; én ho pareo he unan, pa blijo gan-t-ha, pa en devezo goanet a-voalc'h ac'hannoc'h evid ar goap o peuz greet out-ha ag ouz he lezenn.

Nan, nan, ne c'houneffot netra dre ho labourou da zûl. Lavarit d'im-me, ha gwélet o peus-hu biskoaz eun den o tont d'ar gorre, o labourat da zûl ? Evid-on-mé n'em beuz c'hoaz gwélet nikun bétég-hen. Mar gwelfenn unan benâg, eur labourer sul benâg o veza mad ar bed gan-t-ha, em belle truez ouz an den kes-se. Lavaret a raffenn enn-on ma-unan : « Doué ne sco ket aneza « er bed-ma, lezel a ra aneza da gaout eun tam pljadur « benâg war ann douar evid an nebeud vad a c'halle « beza greet, o veza ma en devezo a-voalc'h da c'hou- « zant er bed all, ebarz en ifern ; rag, eb mar, ma ne « zeu ket a jenchamant enn-ha difezatoc'h, kollet e « vezo. »

Na yeom ket eta da glask ober troyou kam d'an Aôtrou Doué, o labourat da zûl, ha eneb he zifenn. Doué a zo lem he lagad ag a wel pell ; kre eo he vrec'h, ag e sko kaled, pa sko. Pétra a dal da eur bugel dister mont da glask ober an eg ouz hé dad ? Sentom ouz Doué, ag e vezim furroc'h. J.-K. KRZALE, Belec ar Zalet.

BUEZ AN DEN EURUS IAN DISCALCEAT,

(TREDE PENNAD.)

Setu ama eis-Corais Ian discalceat. Ar c'henta a gomanse da c'houel ar Rouanez hag a bade daounguent dervez. An eil oa Coraiz an iliz. An trede a c'halve Corais Moizes. Ar pevare a rea en enor d'an ebestel S. Per ha S. Paul. Ar pempet oa Coraiz ar verc'hez hag a gomanse daounguent dervez araog gouel anter-eost. Ar c'huec'hvet, en enor d'an xelez mad, a echue da vouel Mikeal. Ar seisvet a voa en enor d'an oll Zant. An diveza, pephini a voa Coraiz he urs, a bade azaleg gouel an anaon bete Nedelec.

Tri cilis en doa, unan great gant lian stoup, ar pez a c'halver ballin e Breiz, eun all great gant reun, hag eun trede great gant tonnen moc'h anter direunet, da lavaret eo, tonnen ha n'oa great nemet divega ar reun divarnezhi.

Evel ma zea ato divo'tou, ez ea meur a vech tachou en he dreid noas. N'ho lame ket, ha guelec'ho bet meur a vech he dreid gouliet ha dare da vreina gant an tachou pe an drein eat enho, ha red e veze d'ar re o devoa ar garg anezhan goure'hemen dezhan tenna an tachou-ze eus he dreid; anez en divije ho lezet da vreina ep en em glem na lavaret guer.

An astu a eller lavaret so eur voalen evit ar re so crignet gantha. Nebeut a dud so, ha zoken eus ar re zantela, hag a alfe gouzaon, ep en em glem, al loenedigou cassaus-ze pere a zebr eun den nebeut ha nebeut e beo. Ian discalceat ho gouzanve; ne laze morse hini, ha pa goueze unan bennag diouthan, hen destume evit he lacat adarre elec'h ma edo.

Led an dud dizoue eo, eme an abostol S. Paul, beza digar ha criz a galon; tod ar re a gar. Doue eo caout eur galon truezus. Evelse an oll vistri eus ar vuez spirituel o deus caret cals an donezon a zaelou. Evelse ive Ian discalceat a scuille daelou puil er beden, er gador gofez, ha pa roe Doue dezhan da anaout e tlie eur voalen bennag dont da skei an dud. O veza eun dervez o kemeret he bred gant he vreudeur, Doue a roas dezhan da anaout an droug a dlie ober d'ar vro ar vrezel a vije varlerc'h maro an Duc Ian trede; hag e scuillas kement a zaelou, ma c'hlibias an tam bara zeac'h a zebre, hag e talc'has da vouela kement an nemorant eus an deiz, ma vije lavaret e voa deut he zaoulagad da veza diou eiñen zour. Anaout a reas ive ha discleria e vije grounnet ha kemeret Kemper, hag e vije kernez goudeze, ha kementse araog m'en doa Charles Bleaz sonjet dont da gumeret ar guer-ze.

E guirionez, Kemper a voue kemeret dre vrezel er bloas 1344. Ar re o doa kemeret kar a voue kriz braz e kenver kærís, hag er bloaz 1346 e voa eur guernez vraz er vro. Neuze Ian discalceat, pephini en doa discleriet diaraog ar vrezel hag ar guernez-ze, evel n'en doa ket gallet miret oc'h ar guenta, a reaz kement a ioa en he c'hallout evit ma raje an eil nebeutoc'h a zistruch. Mont

a rea da gaout ar re binvidic, hag e comze outho gant kement a ners, ma ho lakea da ranna ho danvez gant ar beorien.

Doue a roas ive da anaout dezhan e teuje ar vosen da ober distruch e Kemper hag er c'harter tro var dro. An vosen-ze a zigouezas er bloas 1349. Ian a anavezias kementse bloas araog. Edo gant he vreudeur o lavaret gousperon er c'hœur deis gouel Sant Fransez. He vreudeur, oc'h he velet o vouela doureg, a c'houlennas digantha petra rea dezhan gouela evelse. Ne lavaras netra dezho neuze, nemet ez ea eur voalen all da goeza var guer, hag evit guir, en hanv varlerc'h e tenaz ar vosen hag a zammaz eun niver braz a dud.

Neuze an den eurus Ian Discalceat a guinnigas he vuez da Zoue evit ma vije espernet buez ar re all. Nog deiz e rede var dro ar re a grogue ar c'hlenvet enho. Rei a rea dezho ho zacamanchou hag an oll zicourou a bere o devoa izom evit ar c'horf couls hag evit an ene. Ho garantez hag he brez vardro an dud clan a voue recompanset dre eur maro mad. Clenvel a reas he unan hag e varvas gant ar memes clenvet. Echui a reas evelse, o soursial eus an dud clan, eur vuez tremenet oll er beden hag er binijen. Bez'en doa, pa varvas, var dro nao bloaz ha triugent.

G. M.

AN TAD DIFEIZ.

(PEMPET PENNAD.)

An itron e devoa roet dour benniguet da Vac'harit, oc'h he guelec'ho sebezet evelse, ep cas he dorn d'he zal, a c'houlennas diganthi:

— Va merc'h, ha clan oc'h-hu?

— N'oun ket, itron, eme ar verc'h iaouanc goustadic, mes reuzeudic oun meurbet, hag e tirollas da vouela.

Ne oufe den lavaret peguement a boan en devoa an tad o velet he verc'h o vouela evelse en iliz, peguement a vorc'het en devoa oc'h he guelec'ho evelse maleuruz hag evel estren eleac'h ma edo ar merc'het iaouanc eus he oad o cana a greiz ho c'halon. Cregui a reas e cazel he verc'h evit en em denna kuit ganthi. Mes Mac'harit a falvezas dezhi chom. Poan o devoue o caout plas, rag an iliz a voa leun chec. Edot neuze o cana: o Speret-Santell, diskennit, ha souden e veljont eur beleg o sevel er gador brezeg.

Biscoas Mac'harit ne devoa guelec'ho kement all. Cridi a ellit e tigore franc he daoulagad hag he diouscouarn, o velet kement a draou nevez evithi, o velet kement a dud hag a ziscoueze n'o devoa oll nannet eur galon hag eun ene.

Ar beleg, goude eur bedennig ver, a reas sin ar groaz hag a gomansaz he brezeguen. An oll a reas sin ar groaz var he lerc'h. Prezeg a reas var ar c'homzou-ma: afer ar silvidiguez eo afer pep unan.

« Va breudeur, emezhan, n'ou eus ken afer nemet hini hor silvidiguez, rag eno an oll gounit a so evidomp.

Pa vez hano eus an traou all, aliez, an anter eus an amzer an hini a labour ne zestum ket ar frouez eus he

boan. Al labourer douar a had, hag aliez eo eun all a ved hag a eost; pe mar guell midi hag eost, eo eun all a zebro ar pez en deus eostet.

Eun tad a dor he gorf o testum danvez evit bugale pere n'o deus aliez tam anaoudeguez vad ebet evithan.

An den goueziec a verra he vuez o studia skianchou pere ne zervichont dezhan da petra pa en deus ho fleustret.

An dud a vrezel a ia da rei ho buez var an dachen. Ar re a jom beo a eil marteze gounit eno eur merc a enor bennag; mes ar re o deus gounezet muia, da lavaret eo, ar re zo lazet var dachen ar vrezel, da betra e talfe dezho mercou a enor?

Hor salver he unan hen lavar: unan a had, hag eun all a zestun. Mes evit ar zilvidiguez, an hini a boagn, a vezo paet he boan dezhan; an hini a had, a zestumo: den all ebet ne eosto ar pez en devezo hadet. Ma c'hadit frouez a zilvidiguez, e testumot ar vuez eternal. En eur guer, mar grit oberou mad en ho puez, ho pezo cant guech muioch er vuez-ma, hag er vuez all, eun eurusdet hag a bado ato. Hoguen mar tleomp cutuil hor unan, hag evidomp hon unan, ar frouez ens ar pez or bezo great evit hor silvidiguez, penaus e c'hell beza kement a dud kel lezireg, ken diegus da labourat evit an afer-ze? »

Den ne oufe lavaret pebez sonjou a deuas neuze e calon Mac'harit; evit ar vech kenta e cleve comzou Doue o tisken eus ar gador a virionez. Eur bed nevez a zigore evithi. An trivac'h vloas ma e doa bevet bete neuze a gave dezhi a iea kuit evel eun ure, hag oa neuze epken e comanse beva.

Epad an amzer-ze, an tad a voa chomet ep finval, reud evel eur mean, pe eur pez coat. Lavaret e vije ne voa ket beo, panefe ma save avechou ar goad d'he dal, ar pez a ziskueze e voa c'hoas buez enhan. Echui oa miz Mari; an oll a voa eat er meaz euz an iliz, hag e chome eno ato evel pa vije sounnet.

He verc'h a iez erfin da gregui en he zorn, en eur lavaret goustadic: va zad, ar re all a ia kuit oll, ha ne daimpni ket ive?

Neuze e savaz en eul lam evel eun den o sevel euz he gouse, hag elavaras: eo, deomp, hag e c'horjelle o vale.

O tout ac'hano d'ho zi, an tad hag ar verc'h ne leverjont ket eur gomz an eil oc'h eguile, mes Mac'harit, pa voa savet en he c'hamprig, a dennaz he c'hroaz aour euz he c'herc'hen, hag en em daolas d'an daoulin da bidi.

Antronoz ma voant bet evelse en iliz, ar plac'h coz a voa en ti a deuas mintin mad da gambr Mac'harit. Ar vech kenta oa dezhi lacad he zreid er gambr-se, rag an tad en doa difennet grons outhi mont morse da gaout he verc'h na comz outhi.

— Demez, emezhi demezel guez!...

— Petra zo? petra ra deoc'h dont ama? gouzout a rit en deus va zad difennet...

— Gouzout a ran; mes ho tad so clan braz, hag eo falvezet din lavaret deoc'h. Redeg a ran da glasc eur medecin.

— Petra ievit? va zad clan? Mes ar plac'h coz a voa eat pell.

Mac'harit en em viscas buan, hag a redas da gaout he zad. Beac'h e devoue oc'h ho anaout, ken dizhevelebet oa e ber amzer. Eun dezien scrijuz a voa ganthi, he zaoulagad a voa skeulf, ha sutal a rea he halon.

— Va zad paour, eme Vac'harit tennet an oll da vonela, petra zo-ta digouezet ganoc'h?

— Va merc'h ker, eme an tad gant eur vuez hag a vije lavaret a deus eus a vouelet eur bez, ne greden ket em bije ranket da gutat ken abred. Mes ar mestr eo ar mestr, ha n'eus ket da lavaret naun dezhan. Hen eo en deus renet pep tra en despet din-me, ha dioc'h ma velan, te a vezo christenez ep dalc. Mes evidomp-me...

— Evidoc'h-hu, petra-ta va zad?

— Me; a vezo daonet sur douetus bras.

— Oh! va zad paour, ne lavarit ket an dra-ze, eme ar verc'h oc'h en em deleur d'an daoulin e kichen ar guele. Lakit ho fizians e croas Jesus-Christ; ha ne deo ket evit saveter an dud eo deut var an douar? ha n'en deus-hen ket roet ar c'hallout d'he Ebestel da zillama ar bec'herien?

— Ia, ar bec'herien o deuz keuz d'ho sec'hejou.

— Ha perag, c'hui, va zad, n'o pefe ket a gueuz d'ho pec'hejou.

— Perag?... perag?... Hag an tad reuzeudic a grene gant he nec'h. Na c'houlenn morse an dra-ze diganen, emezhan; muioch a boan a ra din c'hoaz evit an tan zo oc'h va devl. Evit caout ken e red disteleur... Ha me... Nan, nan... Va merc'h, guer ebet ken var guementse; ha pa dlefen beza strinket en tan gant satan n'em bezo ket a gueuz!

Mac'harit a jomaz eun nebeut saouzanet o clevet eun hevelep goal beden: he c'halon a lamme en he c'hreiz. Gouscoude e kemeras courach hag e lavaras d'he zad:

— Gouscoude e carit ac'hano me, ha va mam oc'h oc'h eus caret ive.

— Ia, lavaret mad a ellez, caret em eus da vam baour, ha te a garan muioch evit na ellez da zonzal.

— Mad, ha ne garfac'h ket en em gafemp adarre en eur guichen en Evr?

An den clan ne lavare guer, mes he zaoulagad a zalc'he digor franc da zellet oc'h he verc'h.

— Noc'h eus ket a zonz e lavare deac'h da noz, eme Vac'harit, an hini on doa clevet o prezeg, penaus n'ou eus ken afer nemet hini ar zilvidiguez? Noc'h eus-hu ket a zonz e lavare ar c'homzou-ma euz hor Zalver: petra zervich d'an den gounit ar bed oll; mar teu da goll he ene?

— Mes, buguel reuzeudic, eme an tad, ne ouzout ket petra a c'houlennet.

— Ne c'houlennan, va zad, nemet oc'h eur asdet eternal. Ne c'houlennan nemet na vezin ket dispartiet diouzoc'h evit ato.

— An hini clan en em lezas da goeza var he bevele

en eur dena eun lvanad. Eur stoum vraz a dremene en he speret. Abenn eur pennad e lavaraz :

— Ma vije eun all a roje din an ali-ze, biken n'em bije hen heuillet, hoguen pa zeo te eo a fell dit, va merc'h, eo red ha ma ve ive bolontez Doue ; red eo din senti ouzit.

Ar vere'h ne c'hortozas ket hirroc'h. Redeg a reaz ac'hano da glasc unan bennag hag en divije gallout da hardoni ar pec'hejou. Ne vouie ket c'hoaz petra eo eur beleg.

G. M.

Hano ar Zant evit ar Sizun-ma.

DILLUN 3 KERZU. — Sant Fransez-Xavier.

DIMEURS 4. — Sant Chrysolog, escop ha doctor eus an iliz.

DIMERC'HER 5. — Santez Bibiana, guerc'hez ha merzerez.

DIZIÖU 6. — Sant Nicolas, escop.

DIRGUENER 7. — Sant Ambroaz, escop ha doctor eus an iliz.

DISSADORN 8. — Ar Conception didach eus ar Verchez Vari.

DISSUL 9. — An eil sul eus an Asvent.

An Aviel hirio :

Sant Ian o veza clevet eus he brizon ar burzudou a rea Jesus-Christ, a gassas daou eus he ziskibien d'he gaout ha da c'houlen outhan : c'hui eo an hini a dle dont, (ar Messij) pe gortoz a dieomp eun all? Jesus a respontas dezho : it, ha disclerit da Ian ar pezo oc'h eus clevet ha gaelet. Ar re zall a vel, ar re gam a vale, ar re lor so pareet, ar re vouzar a gleo, ar re varo a zistro e buez, an aviel so prezeguet d'ar re baour, hag eurus an hini ne guemero ket a voal skouer divarnhon.

Pa voant eat kuit, Jesus en em lakeas da goms d'ar bopl divar benn Ian : da velet petra oc'h hu eat er goueleac'h? Eur gorzen hijet gant an aviel? Petra oc'h hu eat da velet? Eun den guisket flour? Mes ar re so guisket evelse a tom e tiez ar ronant.

Da velet petra oc'h hu eat eta? Eur profet? Ia, hen lavaret a ran deoc'h, muioc'h evit profet eo. Rag anezhan eo bet scrifet : setu me o cass va ar en ho raog evit pourchas an hent mat-leit kerzet dreizhan.

SANT VAZE XI. 2. G. M.

KELEIER.

An Aotrou Crenn, person e Sant-Rivoal, so hanvet person e Sant-Derien.

An Aotrou Pouliquen, person e Sant-Derien, so hanvet person e Sant-Rivoal.

An Aotrou Pavy, Escop a Alger, so nevez maro. Araog mervel, an aotrou'n Escop Pavy en deus lakeat

he vreur da gass eur merc eus he garantez d'he santel ar Pap dre an telegraf electric ha da c'houlen he venediction. Ar Pap en deus respontet dioc'h he venediction, hag e voa ankeniet braz eus ar c'hoaz dre ar maro eus a Escop Alger.

Comzet on eus kentoc'h evit brema eus a vevn nao missioner a Frans laket d'ar maro e Cones. Brema zonez e voa daou escop. Mes setu ama ar pezo digaset zete merzerinti unan anezho, an Aotrou'n escop Davely. Ar bourreo, goude beza scoet eun taol saluen he c'houzoug, a canas. N'oa ket lavaret d'ezhan pennment en divije, hag ez eas neuze da ober he benn gant pennon, o lezel ar merzer keaz da c'houzaon ponn hag eun agoni eus ar c'hriasa. Goude m'en doaguet ar varc'had, e teuas adarre da beurzibenna ar merzer.

Tad an Aotrou Develuy, pa glevas penaoz on merzer riet he vap, a zestumas tud he di evit cana an *Te Deum*. Antronoz e lakeas lavaret eun oferen, te guenn, evit trugarecat Doue, hag e tifennaz oc'h he gueront da guen caou d'ar merzer. Ar vam epken a zongo, eun eun nebeut derveziou, antercaon d'he map. An Aotrou Davely a voa eus a escopi Amien, hag evel a velon, an devoa evit tad ha mam christenien caloneg.

Eur bourc'his braz ha pinvidig a Vro Zaou on do laket sevel eur maner caer, hag eun chapel outhan gant ganterez ha coatach kizellet brao. Mes eun den a gaout danvez ne voa ket luan da zisoreg eus he arc'hant, ha ne bac ket he labourer. Pa voa eun chapel, e lavaraz da unan eus ar vasonerien sevel ar gador brezeg, ha lavaret a vouez huel eur goms bennag evit gaelet hag egleo oa ar chapel nevez. Ar merzer a zavaz er gador hag a gomzas evel en Aotrou, setu o labourat ama c'hu ec'h miz zo, ha m'ont eus ket he c'hoaz eur guenneg diganeoc'h peun epaet hu ac'ha-nomp? Avoalc'h, avoalc'h, eme ar zaou, eur vouez aet eus euz ar re guenna, hag ar chapel so egleo evit ar dlet da brezeguen avad ne blich ket din d'ezhan, ha ken avoalc'h ac'h eus lavaret!

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 21 Du.		PONT-NABAL. — 22 Du.	
Priz ar c'hant flour		Priz ar c'hant flour	
Guinis.	14 lur, 69 c.	Guinis.	14 lur, 69 c.
Segal.	8 lur, 99 c.	Segal.	8 lur, 99 c.
Eiz.	10 lur, 25 c.	Eiz.	10 lur, 25 c.
Ed-du.	6 lur, 63 c.	Ed-du.	6 lur, 63 c.
Kerc'h.	10 lur, 10 c.	Kerc'h.	10 lur, 10 c.
Avalou-douar 4 lur, 00 c.		Avalou-douar 3 lur, 00 c.	

Ar Gerant : AR DE KERAN.

Kemper, moulet gand AR. DE K'ANGAL, Moulet an Douar.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA.

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezoune.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten a gons :

Evit eur bloas DAOU SCOET.
 Evit c'hu ec'h miz EUR SCOET.
 Evit tri miz DE HUEC'HEAL.
 Eur gazeten ebken DAOU VENNEG.
 Ar bacamant a dle beza great araog caout ar gazetens.

KEMPER, 8 Kerzu 1866.

N'eus ket pell e lavaret penaus, evez an Aviel, alies eo unan a daol had en donar, hag eun all eo a zestum an eost. Ar maro a deu ken trum, ha buez an den so ker ber! An Aotrou Pavy, escop Alger, maro nevez zo evel ma on eus he lavaret, a zigasse, en he amzeriou divoza, sonch eus ar virionez ze d'ar veler a voa var he dro. C'hoant en divije bet, araog mervel, da velet o tont da benn meur a hini eus ar traou comasct gantha en escopi-ze eleac'h m'ema c'hoas pep tra couls lavaret o sevel.

Digouezout a ra ganen, emezhan, ar peza lavar ar barzia Rom, ober a rit neziou, labourer, mes ne ket d'vidoc'h eo, sachia a rit var an arat, ejennet, kezeg, mes ne ket evidoc'h eo, pe evit comz evel ar Sentur Sacri David a bourchas kement so red evit sevel eun templ da Zoue, mes ne ket lien eo tier savo, he vap Salomon eo. Mervez a denn pobl Doue eus an Ejipt, rei a ra dezhan al lezen, he gas a ra betek an douar prometet, mes ne ket lien eo her c'hasso tre ebars, Josue eo her gra.

Evelse a c'hoare peur hessa el bed-ma. Rouez eo gaelet an hini a zao eun ti nevez o foja pell enha, araog m'eo kempennet an ti ha lakeat er stad ma zeus c'hoant d'he gaout, en devez alies eur perc lien nevez. Eul labourer a zifont eur pezo douar, tenna a ra anezhan ar ven hag ar griziu he deilat a ra ken na deo deut da veza druz avoalc'h, mes alies, araog m'eo deut ar pezo douar-ze e tro da rei eost mad, ez eo eat etre daouarn eun all. Eun all a fell dezhan destum eur bern arc'hant, lavaret a ra outhan he unan : pa m'bezo kement ma ha kement ma, neuze ec'h eann, neuze e vezin content, hag en em lakin da vev em tez. Mes gaelet, ne vauke dezhan nemet eun nebeudig, eat oa da benn couls lavaret, mes ar maro a deu dres pa edo o sonjal eana, hag eo red lezel he arc'hant, ha c'hoas marteze ne voar ket gant piou hen lez.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazetenn a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Belec'e Kemper.
 Ar paemanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAON, ebken. An abonnamant a guemere e ti an Aotrou SALAON, Librer, ru Kereon, e Kemper.

Petra da zontal ta var guementse? Ne dlefe den sevel ti nevez, nag ober nicun eus al labourou-ze pere ne zervelint nemeur dezhan he unan? Nan, pell dioc'h eno. Mes kementse a ziskuez deomp penaus an hini ne zont nemet enha he unan, ne labour nemet evithan he unan, a so reuzedig, pe o guir eo dibaot bras e tenfe luopez eus he labour. Kementse a ziskuez d'ar c'hristen dreist oll ez eo reuzedig ma ha zao ket he zont hueloc'h evit douar ar bed-ma, ma ne labour ket evit gloar Doue hag evit mad he nessa. Carantez Doue, ha garantez an nessa a vezo ato ar c'henta goure heman roet d'an den, hag an hini a labour evit Doue, hag evit ober vad d'ar re all, he gollo morse he boan.

G. M.

Brema gant an hentchou houarn ez eo ken eas beacht, e rer hent ker buan, ma eme an oll o elasc mont da redeg bro. Kement a veachouren a veler o vont hag o tont gant ar c'hristian, ma ve lavaret penaus eun niver braz a dud h'o deus bro ebet mui, n'o deus ken bro nemet an hentchou ma tremenet d'reizho, pe a l'leac'hioù matiskennont enho da dremen eun heur bennag. Lavaret e ve nemdeus mui an den sonch ebet eus an ti ma o bet ganet enha, eus ar c'harten eleac'h m'eo deus tremenet he vugaleach, eus an amezeren hag eus an anaoudeien en deus bet en he vloaveziou kenta.

Goude e lavaret gaelet all. Goaz aze d'an hini so ganet e goall vro, hag d'he tistro ato. Caer en defe caout danvez, hentchou, kement a ell renta eurus eun den en eur vro estren, ato e vauco eun dra bennag dezhan ket ha na velo ket an ti an douar, an amezeguez en deuz darempredet en he iaouankiz. Ma deo christen mad, tour he ilis parrez, ar guel eus an his-ze eleac'h ma zeo bet badezet ha ma en deus great he basc kenta a lacat he galon da zridal, a rei dezhan eall levez ha ne gavo ket eleac'h all. Hamar en deus an c'ounac'heat Doue evel ma ra cals eus a re a vez dalc'h mad o redeg hentchou, evel ma tigouez gant cals a dud iaouane pere a vez sachet d'an droig gant goal gama-

radet eur vech ma o deus kuitet ho c'harter hag ho zud, ar guel epken eus he vro guenta so avoalc'hevit he zistret.

Setu petra c'hoarvezas brema eus eun nebeut bloa-vezioù gant eun den maouane eus ar c'harter ma.

E parrez X... ez oa eun tad hag eur vam labourerien donar hag o doa daou vuguel. Loiz ha Mari. An tad hag ar vam ne vouient ket lenn, mes christienien vad e voant. Ar beden a ilije dezho, hag alies e vezent guellet o lavaret ho chapelet. An daou vuguel, evel a ra peurlieassa ar vugale, a heuille ar skuer a velent, hag alies e vezent cavet ho daou, hag hi c'hoas biantig, o lavaret ho chapelet var ho daoulin e cornig eul liors. An tad hag ar vam a ioa mad d'ar paour, hag an daou vuguel n'o doa ket brassoc'h plijadur evit cas, d'an or, d'ar paour, an tam bara troc'het gant ar vam vad; ha pa o deveze bet eur guenneg bennag, alies hen roent ive d'ar breuer. Ean dervez dreist-oll ma voant lezet gant ho zud da vont da eur foar e kichen, e rojont da eur papur mac haniet oll en em gavas gautho, ar guenneien a voa roet dezho da vont d'ar foar-ze; hag evelse e voue red dezho cliom en dachen da zellet oc'h ar braigoù pe ar madigoù o divije bet c'hoant da brena. Ar zouch eus ar vad o doa great ho dic'haoue eus an divouer a reant, divouer liag a dileas, ep mar, plijout da Zoue.

An tad a deuz ar maro dezhan, hag ar vam en em gavas nec'het avoalc'he o seveli he hugale. Eun eontr o devoa en eur guet vraz hag a gasas gantha Loizevit he zorren liag e zesk. Ar vam e devoue poan o lezel he map da vont euz he zi, ha Mari pehini, a garie eals he breur, e devoue ive eun distridiguez vraz o, ispartia diouthan. Gouscoude evel ma zoa evit he vad, e voue lezet da vont. Ar breur hag ar c'hoar a brometaz e pedjont, e lavarent ar chapeled an eil evit regule.

An eontr a lakeaz he niz ar scolach. Eno Loiz a reas anaoudeguez gant camaradet dizuch ha difeiz, hag ep dale e tenas da ancouac'hat Doue. Dont a rea eur vech en amzer da velet he vam hag he c'hoar. Houma a voue souezet bras pa velas ne felle mui d'he breur lavaret ar chapeled ganthi evel diagent. Ar potr keas ne voue mui pidi. Mari a vouelas hag a bedas evit he breur. Eun dervez ma voa eat gantha da vale eur pen-nad dioc'h ar guar, e teuas eur goal van arnein varnezho. Glibiet e vouent bete n'ascorn. Ar vereh padur a grogaz an derzien enbi hag a varvas abenn eun nebeut derve-ziou. Loiz en devoue eur c'heus bras d'he c'hoar. Mes ne zontas ket distrei oc'h Doue. Mont a reaz en dro da gaout he eontr, hag e chomas ep dont da velet he vam ken na voa echuet he sindi.

Neuze gouscoude e istroas d'ar guar. Ar guel eus a dour he ilis parrez eus an ti eleac'h ma oa ganet eus a vez he c'hoar pehini en doa collet, a zigasas neuze da zouch dezhan eus a Zoue, hag eus ar plijadur a gave en he vugaleach o pidi. An daelou a deuas puil en he zaoula-gad. Mont a reas da velet person he barrez. Hema a voue avoalc'h oc'h piou en doa afer. Hen diguemeret

a reas mad, ep ober dezhan an distera rebech d'he mien doa dilezet he vuez christen.

Loiz ne voadet he galon az. Ne allas ket mui da lavaret d'ar beleg eur guer bennag divarban ar Relijon. Hema ne c'hontoze ken: « Va map, anaoude-araog comz ar Relijon, en em lacait aze d'he c'hoar, rag me a gaf din eo an dra-ze eo a fell d'he c'hoar. — Oll e me Loiz, n'em eus ket a c'hoant da velet ha pa m'ijie, ne doue ket prest.

— Ah! evit an dra-ze, me ho sicouro.

Loiz ne rebarbas ken. En em lacat a reas d'ar d'he lin, hag e cofeseaz he bec'hejou. Ar guel eus he vam ha pedennon he c'hoar o doa he zistret eus Doue.

Ne oufe den lavaret peguement a laouen diguez a reas e calon an den maouane a tistri eus ar presental. Hema a reas ker stard, ma voue ac'houdevez eur skuer a bep sent veruzioù. Ep dale e c'houlenas beza kemeret an eur c'houerdi (seminer) hag himo eze ezeur d'he c'hoar ar re vella, leun a garantez evit he nessa, eul anet gant ar c'hoant da c'houit eneou da Zoue. — G. All.

HARTI. — Tnd'kar Pors ar Pihins o d'he mien, ar zillveziou tremenet, d'an aotrou Testard ho ane hec'hoar, eur voalen a escop (pe mar kuit, eul h'zom) evit distrei dezhan ho c'harantez hag ho anaoudeguez vad. Hui vo den oant eat d'an ti da guinniguen dezhan ar voalen, hag unan a gomzas evel en hanol an oll.

Aotrou'n Arc'hescop. — Setu brema eun bloas abaoe ma an deus d'he taolet eur zell a drugarez var an vro ma, oc'h ho kout da zont da c'houarn hon ilis, ha da zavel en he zell ar Relijon anter zistrujet e Harti. Var guel hon tad Santel ar Pap oc'h eus kerkent kuitet ho procelec'h n'ar corloze marleze eur peng'he oc'h, ha dreist oll eus eo hag ez oc'h deut leun a garantez evit d'he c'hoar evit silviliguez hon eneou.

Eun dervez caer oufevidomp. Aotrou'n Arc'hescop an hui ma vellomp o tostaat oc'h an aod ma al lost ar tongue. An deiz-ze a vezo ato souch anezhan, ar vad a zride gant al levenez. — Oc'h ho kuelel oc'h enaou, ha ganeoc'h beleien, cloner, breudeur, e chomaz pere a deve da guemeret perz en ho labouron.

An Env a gave deomp a jea d'hon renta eunis, eun on eus ket bet kement a c'hoanteamp. Ar penad ket bet padet. Cals darvoujou so digonezet en hon rent. Bet oc'h eus ar c'hac'han, ha ni ive ganeoc'h da velet o vervel meur a hini eus ar veleien deut evit ho c'hoar.

C'hui, Aotrou'n Arc'hescop, oc'h eus he c'hoar, an hon oll boaniou. Benniguet ra vrot abalamont d'he Ra denio ar voalen a Escop ma pehini on eus an hon da guinniguen deoc'h, da veza eun heveze an unvaniez a so etre c'hui ha ni, eus ar garantez evit ia ato var gresc'etre ar pastor hag an denve.

An Aotrou Arc'hescop, o kemeret ar voalen, an daelou en he zaoulagad. Caloneg en deus d'he dezho:

Tomet eo meurbet va c'halon o velet an herrez nevez ma a garantez a velet d'he mien, eul a ran gallout lavaret em eus he c'hounezet. Kuitet em eus eur vro oüs pehini oan stag dre al liamou diessa da den. An disparti so bet tenn. Mes himo n'em eus keuz ebet d'ar bro goz. Abaoe an dervez ma en deus ar pap roetac'ha noc'h din evel eur famil'nevez; Doue a voar n'em eus bet ken souch nemet d'ho canet ha da ebet vad d'he c'hoar.

Souch lam eus euz an dervez ma digonezet var adbu ar vro ma, eus an diguemeret mad a velet d'he mien. Mar do ho calonou leun a esperans, va hini me petra bennag ma kemeret perz en ho levenez, me alle ket mui da greno souch en amzer da zont. Gouzont an eun ne vez ket fontet eun iliz ep daelou, guellet a reant e vije nanket stourm, hag e las ken an aotrou abred pelec'h e vije scoet ar c'hentaclion, e gouzont a rean e vije poaniou da c'houzont hag e clasken ghalet etouez ar veleien maouane an hennet, e pere a vije sammet da guenta. Sions! An oll darvoujouze so deut re abred, freuz, tan goall, brezel er vro, epad trivac'h miz, trivac'h eus va beleien maro dindan ho beat'h, kementse oll a ziskuez m'ou ket bet espennet.

Mar do bet rannet va c'halon gant an traou-ze, da viana va c'hounezet ha va fizians so ebet ganen. Mar d'oum ebet fenn, ar pez a c'houlenas ato oc'h Doue, eo dre ma c'hontoze o tout tania, da viana eul lodeñ eus ar pezo digonezet hag evelse he doue souezet gant n'ema.

Hoguen izom an eus da c'houzont euz eus an dro din hag a anavez va foaniou, hag a voar pe guen tenn eo varnont. Ho drugarecat a ran eus ar scoazel a roit din. Ato e contin va noc'h evel ma c'hellit ato eonta varnon. Al liamou amslag oc'h ilis Harti he lloñt ket beza torret. Ar voalen ma, herrez eus ho garantez hag eus hoc'h anaoudeguez vad, ha lavaret din petra oc'h eus guir da c'hontoze diganen; petra a dean hag a fell an da ober evidoc'h ket ha ma vezin e huez.

Neuze an oll ze eat d'an daoulin da receo benediction an Arc'hescop, ha da ballet d'ar voalen lakel gantha var he vez.

Er zizun ma an c'hazetennon a gomz eus eur plac'h maouane a so bet pareet die vuzud, e touchi outhi eun tam eus a zoudaden hon tad santel ar Pap. Ar plac'h-ze a voue scoet trum ha calet gant eun c'hlenvel hag he discaras dioc'h tu. Souch a reat oa ar c'holer a voa he c'hoar he c'has astennet ep gallout finval, hag he zaolas var eur guel eleac'h ma voue oupen eun heur ep caout he anaoudeguez.

Eur beleg a voue clasket biant, ha pa zigonezas ne voue nemeur pe varo pe vezoa. Var bouez oriallouthi, oc'h ellas he lacat da finval eun dra bennag. Buñ an em hastas da rei dezhi he reizioù guella ma c'helle. Ar plac'h-ze a voa devot braz. Benidez e commune, hag en dervez-ze ive e doa bet an heur da gommunia.

Gouscoude oa deut eun tamig laoskaen var ar glanvourez, hag e c'halle lavaret eur guer bennag, mes ken

zel, ma rannet lacat ar scoarn tost d'he guent evit he c'houe. He daoulagad a oa serret cloz, ha pevar dervez e theit ebet ep diguen. An poaniou a c'houzont a voa criz meurbet. Al louzeter ar re grea ne reant vad ebet ha ne zouleant tam he loan. Ar medesin en doa nebet a esperans.

Ar beleg a lavare dezhi: Kinniguit hoc'h oll boaniou da Zoue evit hon tad Santel ar Pap, evit an iliz, evit silviliguez an eneou. Goudeze e lavare d'he mien gant ar moc'hig halan a jome ganthi, ia, evit ar Pap, evit an iliz, evit an eneou. C'hoant braz e doa da receo he Doue, mes ne c'havet ket cre avoalc'h. Gouscoude, o veza roet eur vuzunen dezhi hag a ellas da loucao e voue digaset dezhi ar zaotant, hag ar beleg he c'houm- mas gant eun vuzunen epken eus eun host. Neuze e lavare en da hor Zalver roet ar memes all dezhi evel eur beleg; pidi gouzont evit ar Pap, evit an iliz, evit an eneou.

Kement hui he guel. Ha guel e voue gant aleisa dud, a lavare n'o divije ket d'he mien e c'haller gouzont poaniou ker garo ha beza gouscoude ker content, kel laouen.

Setu ama comzon hag a lavare dalc'h mad: ho polontez bezet great o va Doue. Na beva na mervel. Gouzont evit ar Pap, evit an iliz, evit an eneou. Goude eul ar bec'hejou, evit ar bec'herien. Pidi evit an iliz, evit ar Pap, cals-cals. O va Doue, ha c'hui zo mad! ha me zo renzendic. Nag e a zo mad beza var ar groas gant Jesus! Bolontez Doue kentoc'h evit ar barados! Kement a falvezo da Zoue! Evel ma falvezo da Zoue! Eneour gher, eur skuer ar c'haeraoa evit an oll.

Hoguen he neuz a tea diganthe hag he foaniou a zalc'he ato. Henvel oc'h oa oc'h eur c'houmanto evit oc'h eun den so c'hoas huez en ha. Crida a reat edo o vout da dremen. Neuze ar beleg a douchas outhi eun tam eus a eur zoudanen da Bi Nao, en eur lavaret dezhi caout leiz hag e vije pareet. Hag e guinniez kerkent e voue pare. Mont a rea ar boan, eus he zill dre, ma touchet an tam mezer presius-ze outho.

C'hoant e doa da zavel dioc'h tu, mes diners oa c'hoaz hag he mestrez ne felle ket dezhi e cuitaje he guel. Ne grede ket d'he daoulagad, ken nebeut hag ar medesin. Hoguen ar plac'h a c'houenne bonet, hag a lavare troaz, pare ouñ, pare ouñ! Pi Nao en deus va faret. Ahars nebeut e voue red he lezel da zavel eus he guel, hag hui eo e croc'h evit araog ma gozas clon.

Rou. — Mont a ra da Rou tud chentil eus an huolo goad eus a Vreiz, hag ive eus a leac'h all, mes dreist oll eus a Vreiz, evit renta servec'h d'hon Tad Santel ar Pap. An dud chentil-ze so eus a youenn an dud caloneg a bere an tadou, eoz o deus en ho raog ten- tet kement a zervic'h d'ho bro, ha d'ar Relijon. N'em eus ket izom da lavaret ez int ive ar guella christe- nien hag ar re a gar mui an Ilis santel.

Lavaret a rer en deus Pi Nao souch da rei ep dale

an tog a Gardinal da dri eus he gannadet, d'an Aotrou, Chigi, kannad e Paris; d'an Aotrou, Barili, kannad e Madrid, ha d'an Aotrou Perrieu, kannad e Lisbon.

Peden a leverer brema e Rom evit izomou an iliz hag ocl'h pehini en deus hon Tad Santel ar Pap staguet cant devez induljanson.

« O Jesus meurbet trugarezus, hor Mestr divin, c'hui pehini a voar ato diarbenn finessaou ar farizianet a glasc ho trahissa; lakit da vont e moguet mennoziou an dud fallagr ha kement hini, var zigarez ma zeo an dud dinerz a speret, a ra ho gallout dre ho c'homzou troidellus, evit stigma dezho ho lasou hag ho c'has da goll. Sclerait ho tiskibien dre ar sclerijen eus ho cras, evit na vezimp ket contamet dre finessaou an dud-ze pere ne dint fur nemet ervez ar bed, ha pere a skign e pep leac'h ho gueter evit hon lacat da goeza en erro! Roit deomp sclerijen ar feiz, evit ma c'hanavezimp lasou an dud dizoue, evit ma c'homimp stag ferm oc'h credennou an Iliz, evit ma pellamp diouzomp comzou ar c'haomadet. »

IRLAND. — Ervez eur gazetenn a Rom, n'eus ket par d'an d'antied en ho c'harantez hag en ho respet evit hon Tad Santel ar Pap. Kementse ne deo ket souez, rag seul vut ma zeo stag eur c'harter oc'h an Iliz catolic, seul vut ive e tie beza douguet evit ar penn eus an Iliz, evit vikel Jesus-Christ. Evelse en Irland e rer pedennou evit Pii Nao, sevel a rer d'ner Sant Pevi, scrifa a rer liziri da Rom, leun a de nerediguez e kenver ar Pap, ober a rei kement a ell bugale ar re yella da ober evit ho zad.

Eus eur Escopti epen, Escopti Limeric, ez eus casset da Rom, brema ez eus enn nebet amzer, vardo eis mil scoet, ar pez a zo eur zom vras meurbet evit eur vro pehini so ker paour, ha c'hoas ne deo eno nemet eul loden eus ar pez en deus roet an Escopti-ze, ne deo nemet ar pez o doa destumet en eun dervez epen, ha kentoc'h o doa casset c'hoas.

Escop Limeric o veza roet da c'houzout en doa c'hoant e teuje tud he escopti da bidi evit hon tad santel ar Pap ha da ober communionou evithan, ne oufe den lavaret peguement a brez a lakea an dud vad-ze da bidi, da dostat oc'h ar c'hadoriou c'olez ha goudeze oc'h an daol santel. Morse da base na d'ar jubile, na da vare all ebet, n'oa bet kement a brez da dostat oc'h ar sacra manhou. Escop Limeric he unan eo a lavar kementse, hag her scrife da Rom evit rei da anaout d'ar Pap peguement ez eo caret, peguement e sonjer enha en Irland, hag evit goulen he vennoz evithan he unan, evit lie veleien hag evit oll dud he Escopti.

TOUR. — Arc'heskop Tour, er mis tremenet, en deus benniguet eur skeuden (mach) d'ar verchez. Ar skeuden-ze so bras meurbet. Bez e deus tost da dregont troatad. Laket eo var heg eun dorguen eleac'h ma zoa gwechall eur c'hastel bras, Castel Rohan, Eno eo savet azioc'h ar vro oll, evel evit he benniguen hag he dioual.

Kementse a zo evit lacat ar c'harter-ze unni ocl' yuindindan, seozel Mam Doue.

AR ZUL

(SEIZVED PENNAD.)

« Doue en deuz kement a gaz, kement a euz an labourou gret d'an deiz santel, da zil, ma ho ket, pell ac'hann, ho milliga a ra; Doue a zo kement d'he zeiz, en deuz kement a c'hoant e he aneza gant ha ag e teuffem d'hen tremen en he zere d'hen santela evel-se ec'hiz ma eo dleet, ama gwechall, e lezenn Moizez, poan a varo a eneb an labourou difennet. Gwelit ha barnit oc'h ann hini da lakaat dirag ho taou lagad ar c'homzou-ze ar skituz ar, e pere e wellot mad kement em bann lavare, ama diaraog. — Mes, evid ma kompentez gret ar c'homzou-ze, gream eur remerk anaog. »

Doue a roaz he-unan da genta he zegigourc'hement d'ar bobl a Israel, a vouez uhel, diwar deiz Sinai, euz a greiz an tan, al luc'hed ag an gann. Ar bobl o klevout mouez Doue, an gurunrag an oll degarn all, o welet al luc'hed, an tan ag ar moged sportuz a c'holoe ar menez tre war dro o santou an douar a krena didan he dreid, beh wech ma savo Doue he vouez evit parlant out ha, ar bobl, na lavaran, a gemmer spont ag a graz da Voizez, « Ma zavet, war ar menez, « ha ra zeio Doue da harant euz oc'h epten ha de « ziskleria d'oc'h he volontezo evit-om. Ma menez « kement a lavaro Doue, d'om Mes, ma nozanto eo « mui da gomz ouz-om, on-unan, rag mevel a mui « oll, mar klevom c'hoaz he vouez. »

Moizez neuze a bignaz war ar menez ag a gomz daou-ugent devez enno gan Doue, pehini a noz d'oc'h he lezennou evid he bobl, ec'hiz ma ho c'havom e leor an Exoil, da benn an daou-ugent devez, abar lezel Moizez da vont kuit Doue a zeuz c'hoaz war drede gourc'hement ag a lavarazi d'he zere evel-hen:

« Parlanit ouz bugale Israel, ha lavant d'ez « Lakeit evez mad da viret ma zabat, an deiz a harant « rag beza ez eo eur zin, eun arvouez etre me ha « euz an eil rum tud d'egile. Beza ez eo evel eur « e pehini e teskaffot ez eo me an Aotrou, ez eo me an « Doue ho santela, ho santifi, « Ia, mirit ma zabat; e tie beza evid oc'h « santel. Piu benag a sklabezo, a zouillo aneza, a « skoet a varo. Piu benag a labouro d'an deiz « gollo he vuez ag a vezo lammet evel eur goall « euz a douez ar bobl. »

« C'hwi a labouro epad c'honoc'h devez mes « zeizved devez c'hwi a heano, ag a zantel ar « ze, o konsakri aneza d'an Aotrou ho Toue, « wech c'hoaz, piu benag a raio eun taol labour « deiz-se, a vezo skoet a varo. »

« Ia, ra zeio oll bugale Israel da viret mad an deiz « la hean, a baouezvan arat zeuit d'hen, i da d'hen « solaniza mad euz an eil rum d'egile. Eur marc had « greet eo etre-z-om da viken, etre me ha bugale « Israel; eun arvouez e vezo evid bepred euz ar ge « vredegez, euz an allians; greet etre-z-om. An Aotrou « ho Toue, en dens greet e c'honoc'h devez an Nerp ag « an douar gan kement a zo enn-ha, ag euz « heanet d'ar zeizved devez; setu perag e fall d'ez a « raflec'h evel-t-ha. »

Ag an Aotrou Doue a roaz neuze da Voizez diou daolenn vean, war bere en devoa skrifer he unan, gan he vizied he-unan, eme ar skritun, an deg gourc'hement ec'hiz ma ho lennom, e leor an Exoil, ar gourc'hement war an deiz santel evel an nao all, ha Moizez a ziskennaz gant ho diwar menez Sinai evid ho diskouez d'ar bobl.

Gream eur remerk berr he nag war ar c'homzou-ze ama diaraog, lavaret gan Doue da Voizez, ha dre Voizez d'ar bobl a Israel.

Remerkit da genta penaoz Doue a zeu beteg teir gwech en nebeud komzou-ze, war ar gourc'hement a ro d'an Israelited da viret an deiz santel, an deiz a hean, a renoz: « Lakeit evez mad eme-z-ha, da viret « ma zabat. Ia, mirit ma zabat. Ra zeio bugale Israel « da viret ar zabat. »

Ha n'ed eo ket se diskouez e tale'h mad d'he zevez, e tifenn mad ouz-om hen lemmel digant ha? Remerkit d'an eil penaoz Doue a zeu beteg teir gwech ivez war al lezenn a varo a zougaz a eneb saotterien pe profanato drien an deiz santel dre labourou difennet pe dre zizurzou: « Ma zabat, an deiz a renoz, eme-z-ha, « a zo eun deiz santel, piu benag a sklabezo, a zouillo « aneza dre zizurzou, a vezo skoet a varo; Piu benag « a labouro d'an deiz-se, a gollo he vuez ag a vezo « lammet evel eur goall skuer euz a douez ar bobl. « Piu benag a raio eun taol labour d'an deiz santel, « a varo. »

Ha n'ed eo ket se lavaret a vouez uhel d'an oll ar c'haz an euz Doue ouz al labourou greet da zil, ag ouz an dizurzou da bere en em ro tud a zo d'an deiz santel?

Al lezenn-ze a varo, douget gan Doue a eneb saotterien an deiz santel, ne zaleaz ket da veza sevenet. Epad ma edo c'hoaz ar bobl a Israel er gouelec'h e voe kavet eun den, da eun deiz sabat, to tastum keuneid. Ar re her c'havaz, a gasaz aneza dirag Moizez, Aron ag ar pennou all euz ar bobl evid ma hen barnent. Ar re ma hen lakeaz da genta er prizon, ha Moizez a yeaz neuze d'an tabernakl da c'houllenn digan Doue petra da ober euz an den-ze (rag ne vouie ket he-unan petra da ober out-ha). Doue a lavaraz da Voizez: « An den-ze a vezo lakeet d'ar maro, ag an oll bobl hen lazo a « daolhou mein er meaz euz ar c'hamp, euz ar c'hlostr. » Ag e voe greet evel-se.

Gwelit, ma mignoned, petra a reaz Doue he-unan, eun Doue koulskoude leun a vadelez, da eur paour kez den, evid beza dastumet eun tam keuneid da boaza he

voued d'an deiz santel. Brema, evid gwir, ne lakeer mui an dud d'ar maro evid beza labourer da zil, mes kementse so ma ho ket ez eol ker, braz pec'hed brema, evel ma voa neuze, ma n'ed eo brasoc'h labourer d'an deiz santel, ha ma na vezont ket tal labourerien zil, kastizet er bed ma ne vezint nemed goasoc'h a ze kastizet er bed all.

(LEOR AN INVEROU, XV, 35). O Aotrou Doue, « Y. K. KERZALE, Belec ar Zalec. (Eun pennad all eur wech all). »

Buez, Vertuzion ha Maro Sant Lorans Justiniani, Arc'heskop euz ar gear a Venis.

Ann dismegansou gouzanvet evit Doue, o veza ann doare ar gwella da veza humbl e gwirionez, sant Lorans ne glasse nemed ann tu da veza disprizet. En em istimout a rea ann diveza euz ann holl venec'h all. Ann humilite, emez-han, pe ann izelded a galoun a zo rouanez ann holl vertuziou all. — O veza bet savet d'ar garg a superiorer gonent, pe seurt usaj, a sonj d'e hoc'h a raj-hen euz he autorite pe he veli? pe seurt usaj? En em garga euz al laboriou muia poaniuz ha muia disprizet gand ar bed. Klevet e oa o komz he pehan euz humilite hor Zalver Jezuz-Krist hag humilite ar Werc'hez Vari he vamm. Nicun, eme-z-han, rei anavez pe gen bras tenzor eo ann humilite pe ann izelded a galoun, nemed ann hini a biao anezhi. Gouzout he d'omp netra, ha gouzout eo Doue pep tra, setu aze ar wizegez gwirion. Sant Lorans en em zisprize he-unan a greiz he galoun. Alies o sonjal en he bec hejou, se skuille daerou e leiz.

Sionaz, eme-z-han, petra leverinn-me pa vezo red mont dirag ar banner holl galloudek? Petra am euz-me great, pec'her ma zounn, liag ar helfe ober d'm kaout fizians? N'am euz nemed round dra da ober. En em stanka, enn eur wela ouz-treid ar greaz, he vadelez.

Hon tad santel ar Pab, Eujen pe vare enn hano, ocl'h anavezout santelez vras sant Lorans, a fellaz gronz d'ezhan, hel lakaat da escop. Hag heb lakaat a reaz, daoust d'ar c'hoant bras en doa hema da vev, paour ha dianavezet gand ann dud. Na braz eo oa bet eta neuze he estlamm hag he c'hlac'har! — O tad santel meurbet, a skriye d'ar Pab: Ann hini a oar pep tra a well ann dms-tidigez a wask ac'hanoun, a wel va daerou liag a glev va hiryoudou. E pe doare ne wellit ann ar garg-ze, kalz re bounner evit va diskoaz ker gwant. Mar hoc'h euz eunn tamm karantez bennag evid ann displeta euz ho pugale, mar hoc'h euz tuez ouz eur paour keaz goloet a c'houliou, ouz eur goustians karget a bec hejou ho pezet ar vadelez da boueza dirak Doue va abegou pe va motivet. Va ene a zo strafflet gand ar spout. Ne d'ounn ket evit dere hel pa sonjann e kement-se. Ar Pab ne reaz van e-bed euz a guement a lavare sant Lorans. Red e oa bet d'ezhan senti ouz an tad santel. Goude beza pedet ha skuillet kalz a zaerou, sant Lorans kennerzet gand gras Doue, en em roaz enn holl d'ann holl da seveni he garg

a eskop. Ar gear a Venis e pehini e oa meur a zizaz hag a wal skouer, en em gav troet war ann tu mad e-berr amzer. Ar veleien a c'heul exemplou ann aotrou'n Eskop. Pemzek kouent nevez a zo savet; kals muioc'h a zo kresket ha lakeet urz vad enn-ho.

Enn holl arc'heskopti n'euz mui hano nemed euz a vertuziou, a zantelez hag a largentez ann aotrou'n Eskop. Bemdez, dre'n abek da gement-se, e vije gwelet eul lod braz a dud ken tud paour, ken tud klanv, o tont da gaout ho Eskop pe kentoc'h ho zad evid en em erbedi d'he bedennou ha goulenn kazulioù mad ha sikour digant-han. Rei a rea am aluzen gant largentez. Eunn abostol, emez-z-han, ne dle dere'hel cont e-bed euz ar pez a ro. Pa ne oa ket evit rei d'ar beorien kement a c'hoantae, e kase kuit anezho gand eur gomz vad-bennak. Karet e oa meurbed gand ann holl. Gand he gomzou dous ha tener, gand eun ear a gunvelez e teue da c'hounid kalonou ann holl.

Enn he skridou e weleur pe ken reizet e oa he spered ha pe ken dinam he galoun. Ne ket hon sonj ama komz anezho holl, nag ho lakaat penn-da-benn dirag ann daoulagad; re hir labour e vije kement-se evid-omp. Ne gomzimp nemed euz ar pez en deuz skrivet diwar-benn ann devosion da galoun Jezus. Sant Lorans Justiniani en deuz hevet adaleg ar bloaz 1380 betek ar bloaz 1457.

Ann devosion da galoun Jezus ne d-eo ket eta eun devosion nevez enn iliz. Ar zent euz a bep amzer hag euz a bep bro a zo bet kals douget d'ann devosion-ze, hag ho deuz he skignet e-barz ar bed, ha dre ho c'homzou ha dre ho skridou. Sant Lorans he-unan a enore kalz kaloun sakr hor Zalver. Er galoun-ze e rea kement a rea. Er galoun-ze e lavar deomp klask konsolasion, nerz ha buez. Oh! nag-hen-ze mad chom er galoun-ze! Me, me-fell d'in ober tri zelt, unan enn he zaouarn, eunn all enn he c'houlou, eunn drede enn he galoun. Eno e fell d'in diskuiz, kousket, labourat, gouzanv, pedi hag ober pep tra. Eno e komzinn ouz he galoun, hag am bezo kement a c'hoantaion. Neuze e rinn evel ma ree Mari he vamm dous-meurbed. Euruz ar c'hleze en deuz digoret ar galoun-ze! Oh! ma vijenn bet enn da lec'h, biken n'am be vennet mont er-meaz! Lavarout am befe: Ama eo al lec'h euz va ehan, hema eo al lec'h am euz choazet evit chom enn-han da viken. O tud diskiant ha diskredik, perag e taleit d'en em unani gaud ho toue dre ar gouliou sakr-ze? O ene krouet hervez imaj ann aotrou Done, setu da bried divin a fell d'ezhan da vriata, ha ne fell ket d'id tostaat! Dre eur garantez divuzul, en deuz digoret he beultrin hag e fell d'ezhan rei d'id he galoun. En em-unan startoc'h start ouz an Done-ze ker braz ha ken huel. Te ez pezo neuze eur joa vraz. Da galoun a vezo neuze intanet, ha ne garfez ket mont er-meaz biken euz a houliou sakr hor Zalver. Siouaz, siouaz! petra a rin-me, pec'her m'a ounn? offanset am euz Done hag abuzet euz an holl grouadurien. Gouzout a rann petra rinn: mont a rinn e gouliou hor Zalver. Bepred hag e pep lec'h e chominn er gouliou divin-ze. Eno enebour e-bed n'helle va zrec'hi. O gouliou santel,

o lec'h dudiuz! Euz ar galoun-ze evel euz a eur vamm, dihesk e tired pep c'houekder.

E kaloun Jezus e kave sant Lorans eur peoc'h dous e-kreiz he laboriou a iea bemdez war gresk. Salver Jezus, a lavare, digoret d'in ho kaloun evit ma welin ho kload. O Jezus dous ha mad, va c'haloun a zo re galec, ma ne d-eo tenereet gand ho koad. Va c'haloun a zo re zievez, ma n'en em zestum enn ho hini. O mesaer mad, me eo am danvad dianket-ze hoc'h, euz klasket. Resevit-me enn ho kouliou, ha ra vezinn difennet dre veritou ho pasion! *Le Salver. M. D.*

BUEZ AN DEN EURUS IAN DISCALCEAT.

Ian discalceat en doa douguet pell amzer an habit a urs sant Fransez, ha miret ato ar reglen oll ep mancout morse en distera poent. An aket-ze, eme eur Pap bras, a oll beza kemeret evit eur burzud braz, hag a zo avoalc'h evit lacat canoniza unan a vugale Sant Fransez. Corf an den eurus a voue beziet, en iliz he gouent, e Kemper, en eur chapel tost da zor ar c'hœur, e tu an Aviel. Divezatoc'h e voue tennet eus he arched ha lakat en eun arched all caeroc'h ha miret er memes chapel. Divezatoc'h c'hoaz e voue lakat en eur chapel all en eun doare armelic great evithan. Hogueu couent Sant Fransez a voue guerzet d'an dispac'h vraz hag a zo hirio distrujet. Relegou Ian discalceat so bet collet calz anezho. Bez'ez eus gouscoude eul loden vad anezho en Ergue-Armel, a beleac'h an Aotrou'n Escop Graveran a zigasas gantha da Guemper, brema ez euz eun nebeudig bloaveziou, eun tam eus a graouen ar penn. An den eurus Ian discalceat a beder dreist oll evit caout an traou dianket. Kemperiz, hag oll dud ar c'harter o deuz eun devotion vraz evithan, ha calz a fizians enha; ha lavaret a rer e pare menr a zen clan en em erbed outhan:

Ar zent, renet gant speret J. C., evitho da vev di-hec'h, n'o deus ket credet ec'h aljent chom ep ober pini-jen. Gouzout a reant penaus diskibien eun Doue maro var ar groaz, a dlie douguen ho c'hroas var he lerc'h ha bale var he roudou. Lakat a reant dirag ho daoulagad ar c'homzou-ma eus a Sant Paul: « Mar bevit ervez ar c'hig, e varvot. » Hag ar re-ma: « Ma lakit ar c'hig da zuja d'ar speret, e vevot. »

Nag e a dle ho buez ober mez d'ar gristenien dieguz ha digalon pere ne fell ket dezho clevet hano a binijen, a ra eun Doue eus ho c'horf, hag a les ho ene da vont da goll evit an eternitel! Tud pere ne zontont nemet da ober stad eus ho c'horf ha da glasc ho zezamanchou var an douar. Aoun a dlefant da gaout na glefent eun deiz ar c'homzou scrijus-ma eus an Apocalips: Seul vui a blijadur en deus bet, seul vui a boan a root dezhan! G. M.

MUNUDIA.

Ar marvailhou-ma, bugale, n'int ket savet a nevez-ze; breman ez euz hanter-kant vloaz pe war-dro am

euz klevet anezho evit ar weach kenta. N'euz fors. n'int ket fall da glevet, evel a welot.

Guewchall-goz ez oa eur fagoder hag en doa seiz map. Ar map iaouank n'oa nemet seiz bloaz, Munudik a read anezhan dre ma'z oa bihan-bihan dreist ar vugale all. Ar merc'hed tro-war-dro a lavare ne oa ket tevoc'h evit ar biz meud pa zeuaz er bed. (Ne d-eo ket arabad, a gav d'in, teurel eunn draik ben-nag d'ann traon, rak ar merc'hed, eur c'halz anezho diana, a zo lemm ho zeod).

Ar fagoder hag ar fagoderez o veza ma'zoant paour Job, ho doa beac'h-beac'h o voga ho bugale; ar re-ze evelato n'ho d'oa ket damant d'ho c'horf, na petra'ta. Eunn dra all oa o tieza ann tad fagoder hag he hanter-tiegez: ar map iaouank a ioa sempl ann temps anezhan; didrouz e oa hag eunn tammik teval, hag ar fagoder a grede ez oa sempl a spered. N'oa ket, a c'hellit credi.

Ar paour kezik bihan, evit-han da veza furc'h evit he vreudeur, n'oa ket eurussoc'h a ze. Gwall gaset e oa bemdez gant ann holl ha tamallet aliez e gaou: pouner oa he veac'h-enkrez, ha ne d-eo ket souez ker iaouank ma'z oa. Hag evelato ne gavent abek e-bed enn-han nemet lavaret a-wechouicou d'ezhan: torch da fri, Munudik, pe Mimik evel a lavare ar vugale.

Lavar'ta, Katel, eme eunn amezeguez d'eunn amezeguez all, petra zenio da veza ann nao-ze, tad, mamm ha bugale, rak ann dud a lavar a bep tu ez eo kresket war ann traou?—Mervel a raint marteze gant ann naoun, ann dud keiz anezho!—N'oa ket gaou a lavare Katel, rak ar fagoder ne ouie a be du trei evit gounid ho boed; ma lekeas enn he benn pellaat evit-mad he vugale diout-han.

Eunn nozvez eta, pa oe eat ar vugale d'ho gwele, ar fagoder o veza tостeet oc'h ann oaled, a lavaras d'he c'hrek: Doue her goar, emez-z-han, mantret he galoun gant ar c'hlac'har, ne d'omp mui evit maga hor bugale pelloc'h amzer; kaer hon euz, ne d'omp mui.—Petra'ta vezo great, eme ar c'hrek?—Enn naoun na zeufent da vervel gant ann naoun dira-z-omp, me am euz lekeat em fenn kas anezho er c'hoat braz, war dro teir leo ac'hann, hag enn dra vezint o fagodi, ni a dec'ho didrouz hep gouzout d'ezho.—Penaoz, eme ar vamm, enn eur skuilla daelou, ha te grede ober eur seurt taol?

Kaer en doa, n'oa ket evit gounid war he hini goz: ni a zo paour glez, emez-z-hi, ni a zo ive tad ha mamm d'ezho.

Goude beza great he sonj gant-hi, ar fagoderez a oe trec'het, ha tad ha mamm a oe a-unan evit kas ho bugale d'ar c'hoat braz, gant aoun na zeufent da vervel gant ann naoun dira-z-ho.

N'euz fors pe hen a ioa bihan-bihan pe sempl a spered evel a lavare tud ann ti, Munudik n'oa ket pouner gleo; setu a zo gwir. Hiniennou zo-ken a lavare ez oa bet darbet d'ezhan mont da louarn. Ne ve ket souez, a gav d'in.

Petra reizet he-ma pa welaz he vamm o skuilla daelou stank? Kerzet sioulik war he varlochiou evel pa ve eur raz e ve ha mont da choucha eun eur pakadik dindan skabell he dad. Ne d-eo ket arabad, emez-z-han out-han he-unan, klask gouzout evit petra em va mamm o skuilla daelou: aman e klevint.

E kement-se n'eo ket lazia a reaz. *Ar Traou.*

Tennet euz a VIGNON AN VUGAL.

(Eur pennad all eur weach all ha ne vezo ket pell.)

D'an Aotrou MORVAN, renner ar gazetenn

Feiz ha Breiz.

Aotrou,

Ar pez em euz skrivet e-barz en ho gazetenn ar bloaz-man var bep an Histor-Vreiz, en deuz gret kalz a vad evit lakaat anavezout al leor-ze. C'hoant em euz e ve anavezout gant an oll Vretonet; evito em euz he skrivet ha diez braz e kavan beza kollet va amzer ha va fdan ma n'er velan etre daouarn ar baysantet. C'hoant em euz bet da ober vad d'am c'hienvroiz, da bere em euz konsakret va oll buhez. E guirionez ec'h hellan el lavarout, n'em euz bet biskoaz ken sonj, nemet mad an dud divar ar meaz.

Evit lakaat eta mui oc'h mui ar Vretonet da briza al leor Histor-Vreiz, em euz sonjet hini lakaat e brezonek eul lodennik euz lizirou pere a guendale han gant eur respet braz. Skrivet int bet din gant daou zen euz a here e rean kalz a stad.

An hini guenta, an Aotrou *Hersart de la Ville-marqué*, ker brudet dre he skridou hag he garantez evit hor bro, a skrive din divar-ben al leor kenta pehini, oa oll e brezonek hervez reolen Ar Gonidker: « Ne ouzoun ket, emezan, piou en deuz skrivet al leor *Histor-Breiz*, hogueu, da c'hortoz gouzout he hano, ec'h anavezan penaoz ez eo eul leor mad, talvoulec meurbet ha pehini en deuz gret din kalz plijadur da lenn. Perak-ta euz bet gret kement-all a fazi en or moula anezan? »

An hini all pehini en deuz skrivet din a zo maro breman; an Aotrou *Brignon de Lehen*, pehini zo bet kannad pe *député* e Paris hag a oa eun den euz ar re vella a heller da velot, eur c'hristen evel ar no euz an amzer guenta euz an iliz. Ha lizer a reas eur joa vraz din p'am boa e recevet, rag an oll no deuz ket anavezout ar sonj em euz bet en or skriva an histor-man; hogueu ben en deuz he mennet mad.

« Recevet em euz gant ho lizer al leor e peuz skrivet var histor hor bro: araog o trugarekaat em euz lennet anezan pen da ben. El lennet em euz gant eun aket vraz, (avec un vif intérêt); hag o meuli a ran a greiz kaloun da veza sonjet ober eul leor ker mad ha pehini a lakao ar re el lenno da denna kalz a vad anezan.

« Eun dra dalvoudek braz eo rei da c'hout d'ar re no anavezout ket c'hoaz ar goaloberou euz an dispac'h braz pe ar revolution. Er great o peuz, en or lakaat dirag daoulagat ar re a lenn ho leor torfejou an amzer truezuz-ze; en or skriva anezan o peuz gret eun dra

meulabl braz dirag Douehag o pezo d'ho kopri dive-
zatoe'h...
Cetu, e sonjan komzou pere a hell ober vad...
avoale h e ve mad eul leor, ret eo c'hoaz e ve anavezet
evit mad...
neubent a zeskaduez. Nes doalket ebken evit ar poz
a skriven ma unan e kemeran aket...
Aotrou, pegument a labouran evit ma vo prijat evel ma
dléer ho kazeten vihan, etc.

Hano ar Zent evit ar Sizun

- DILLUN, 10 KERZU. — Eus a eiset ar Conception
didach.
DIMEURS, 11. — Sant Damas, Pap.
DIMERC'HER, 12. — Sant Corintin, escop ha patrona
escopi Kemper.
DIZIEN, 13. — Santez Lucia, guere hez ha merzerez.
DIRGUEN, 14. — Eus a eiset sant Corintin.
DISSADORN, 15. — Eiset ar Conception didach.
DISSUL, 16. — Trede sul eus an Asvent.

An Aviel hirio

Ar Inzevien a gassas a Jeruzalem beleien ha levitet
da gaout Ian Vadezour evit goulen outhan : Pion oc'h
hu? hag ec' h'anzavas, ha ne hac'has ket; auzao a reas
ne ket hen oa Jesus-Christ.
Petra ta, emezho? hag Elias oc'h-hu? hag e lavaras
dezho : n'oun ket. Ha profet oc'h-hu? Hag e lavaras :
ne don ket.
Pion oc'h-hu ta, emezho? evit ma c'hellimp rei
respont d'ar reo deus hon digasset? Petra rit ac'ha-
noc'h hoc'h unan? Bez' ez'oun, emezhan, mouez an
hini a gri er goueleac'h : pourehassit, eunit he hent
d'an Aotrou, evel m'en deus lavaret ar profet Izai.
Ar re a ioa digasset da gaout Ian, a ioa a douez
ar farizianet.
C'hoaz e c'houlenjent outhan : perag eta e vadezit-
hu, ma na doc'h nag ar Christ, hag Elias, na profet?
Ian a lavaras dezho : Me a ro ar vadiziant a zour.
Hoguen en ho touez ez eus unan ha ne anavezit ket.
Hennez a die dont var va herc'h, hag a zo en tu all
din me; ne doun ket din da zivassa he voutou dezhan.
Kement ma a zigouzas e Bethani, en tu all d'ar ster
Jourden, eleac'h ma edo Ian o vadezit.

(S. JAN. I. 19) G. M.

KELEIER

- An Aotrou Forces so hanvet vikel e Landudec.
An Aotrou Rideller, vikel e Landudec, so hanvet
vikel e Plouzevet.
An Aotrou Lavis, vikel e Plouzevet, so hanvet vikel
e Plougastel-Daoulas.
Setu ama an niver a dud a so c'avet e pep hini eus ar
pemp arrondissement eus a departamant Finister er
bloas 1866. Lacat a ran e kichen, an niver a voa brema
ez eus pemp bloaz, hag ar pezo a zo muioe'h brema.

Table with 2 columns: Year (E 1866, E 1867) and various locations (Brest, Castellan, Montreulez, Kemper, Kemperle, En oll). Rows show population counts for each location and a total for the Finister department.

E Brozaoz, a leverer, ez eus ive brema douar brema
ha m'eur a hini o deus collet ho buez gant ar leverer...
Setu ar goan o tont hag an ere h' o comans...
douar! An ere h' a leverer, a so eun trempl hoguen...
obera va vad patden ken albed?
Ne velan ket e comse ar c'hazetennoil a ene h'
c'harterion all a Frans. Daoust ha Breiz-Izel ede...
er bloa ma an tanva kenta? Ar pezo so sur eo ez...
koezet erc'h e Kemper ar c'henta dervez a vis...
Ar pezo a ellan da lavaret eo e voa rennema en...
bete m'azens maro var ar reo eur vaouez...
deut d'ar mare had, ha ne greder ket e voa...
abeg eus he maro nemet ar reo.

Eur o helou am eus da rei d'ar reo a lard...
Ervez ar c'heleier istim a zo zozon evit...
ma so c'resket eals a nevez zo. Ha peuz? Beuz...
ar Zozon he l'entet erc'h e voa eus log...
vto ma hag ho re abalamou ama e laker...
ejennet da labourat, hag o deus eun nebeut...
araog ma ho laker er c'haou da lard, eleac'h e...
zaos ne laker ket an ejennet raouane da labourat...
lard dre ma savont? Hoguen ar c'hlenvel so...
vno ze var ar chatal en deus g'rao dezho anaout...
ha zoken guelloc'h he rejonne. D'ar...
guezeg a gred zoken ne deo dent an c'hlenvel...
ejennet dre eno nemet abalamou ma laker ho...
reabred. Red eo en deo Doueroet evit...
renta servich d'anden dre he labour anaout...
he guik. Eleac'h ma laker evel er vno ma...
da labourat araog ho larda, ar c'hlenvel...
great a zistruch varnezh.

Table titled 'PRIZ AN ED' showing prices for various locations (Kemper, Pont Navat, Guinis, Segal, Biz, Ed-du, Kerc'h, Avalou-douar) for different quantities (24 Du, 20 Du, 10 Du, 6 Du, 4 Du).

Ar Gerant : An DE KERANGAL, Moulersan...

FEIZ HA BREIZ, KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA, DIGASSET BEP SUL Da guement Christen a goms ar brezounee.

Table titled 'Eun Abonnamant d'ar Gazezenn a goust' showing subscription rates for different regions (DAOU SCOET, EUR SCOET, C'HEC'H REAL, DAOU VENEG).

KEMPER, 15 Kerzu 1866.

Ne deus marteze var an douar netra caeroc'h da
velet, netra hag a iafe dounoc'h e speret hag e calon an
oll, eguet eur c'risten mad o vervel. Evelse unan eus
an traou caera a gavomp er Scriptur Sacr ez eo Jacob
var guele ar maro, Jacob o rei he vennoz hag he guen-
telioù diveza d'he vugale, o lavaret da bephini anezho
petra die c'hoarvezout gantha ha gant he lignez. Maro
sant Joseph so c'hoas dudinnoc'h, Joseph a varf etre
divroc'h Jesus, ha Mari en he guichen. Dirag ar Bez,
eme eur scrifagner brudet, eo e tiskuez ar relijion gristen
pe guer caer eo. Mar o deus ar re goz guec'h all
sonjet da renta enor da ludu ar re varo, morse n'o doa
beleac'h ne zistroer morse. Ar relijion gristen epken
e deus sonjet e kementse.
Guelit eur c'risten mad en he amzer diveza. An
den-ze ne deo mui eus ar bed-ma; ne deo mui na
d'he vro, na d'an dud etouez pere en deus bevet; ne
sonch mui en amzer, an eternite epken a so en he spe-
ret. Eur beleg a so en he guichen hag a goms dezhan
eus ar vuez da zont, euz ar vuez-ze a die padout ato.
Dont a ra erfin ar moment diveza. Dor an iliz a so bet
digonet d'ar c'risten dre eur sacramant pa eo deut var
an douar, eur sacramant all a ia brema da zigneri dezhan
dor an eny. Ar relijion e deus luskellet he gavel pa eo
bet ganet, ha brema he dorn hen luskello adarre e
cavel ar maro. Ne ket gant dour eo her santetio brema
evel ma reas p'oa deut er bed, mes gant eol evel eur
beacher a ia en hent. An nouen a dor nebeut ha nebeut
an oll liamou hen dalc'h c'hoas stag oc'h an douar, hag
an ene en em denn goustadig eus ar c'horf. Ker sioul
eo, ma lavaret e cleo dija can an Elez. An Ael a beoc'h
a deu da zerra he zaoulagad oc'h sclerijen dister ar
bed-ma, ha d'ho digueri oc'h sclerijen skeduz an eter-
nite. Mervel a ra, ha ne deo ket bet clevet o tenna he
huanad diveza. Ker sioul, ken didrouz eo tremenet,

Ar scrijou a we c'hoant da lacat er gazezenn a dleer da
adresi oll d'an Aotrou Mervel Bellec Kemper.
Ar paeamanchoù a dleer da adresi d'an Aotrou SALAN,
ebken An abonnamant a guemerer er liam Aotrou SALAN
librer, ru Kereon, e Kemper.

ma sonch d'an oll, eur pennad mad, ne deo nemet
moredet. Setu penaus e varf ar c'risten mad.

Doue a zalc'h ato da ober burzudou, ha red eo en dele
c'hoant da ziskuez santelez he vikel var an douar, rag
setu ama adarre eur burzud henvel oc'h an hini ma
comzemp anezhan er sizun dremenet, eur glanvourez
pareet o totich oathi eun tam eus a zoudanen Pii Nao.
Eul leanez raouane a voa dalc'het gant eur c'hlenvel
ha ne barcer nemeur diouthan, eur c'hlenvel er mell
kein. Eat oa bete dor ar maro. Ar vedesinet ar re
vouezica o doa lavaret, great eo ganthi; ne zavo biken.
Mad, savet eo. Goulen a voa great evithi bennoz an tad
Santel eus a Rom, hag e c'horioze ar venediction-ze.
Evel ar c'hreg a gomz an Aviel anezhi hag a grede mad
e vije pare mar galle touch ouz Sae hor Zalver, houma a
espere ive, hag a lavare: « Pii Nao am lareo! He ael
mad a rei dezhan da anaout pegument a voan a c'hou-
zanvan, hag em bezo da guenta ar venediction so gou-
lennet digantha evit hor c'houent! » Eun tam eus a
zoudanen Pii Nao a voa roet dezhi, hag e talc'he crog
enlia, hag e poke dezhan gant ar brassa respet. Lavaret
a rea zoken pe da vare e pareje, hag e guirionez d'ar
mare ma e doa lavaret, e tigouzas benediction ar Pap
eus a Rom, ha kercent, en eun taol, ar glanvourez en
em gavas pare. Ar pevare dervez oa eus eun navel a voa
comanset evithi. Ar medesin en doa beac'h o cridi he
zaoulagad, rag great en doa kement a voa en he c'hallout
evit he farea, hag e lavare: Ne ket va louzeier-me eo o
deus ho pareet, va c'hoar; eun dra bennag all eo.
Brema ez eus tud hag a gri: Perag comz dalc'h-mad
a vuzudou? D'ar re-ma e c'hellimp lavaret: Perag e
plij gant an Aotrou Doue ober burzudou? Ha ne deo ket
evit ma vezint roet da anaout d'an dud? Ha ne deo ket
evit diskuez he oll-c'hallout d'ar re o deus nebeut a feiz?
Evit diforfla eun nebeut ar feiz en eneo eleac'h ma zec-
cousket?
Mes perag comz a vuzudou great gant ar Pap? Perag?

Kalz muioe'h c'hoaz hor befe da lavarout, mes red eo achui. Sant Lorans a zeue da vont enn he dri-uguent vloaz. D'ann oad-ze, kollet gant-han he nerz hag he rec'hed, e oa gwelet o veilla, iuni, labourat ha skriva evel diagent.

Eunn devez goude pred, e lavaraz : oh ! na me iafe kuit euz ar bed gant plijadur, mar karfe Doue va gervel ! koulskoude, o Jezuz dous ha mad, ne rit ket kement a c'hoantaan, mes ar peza zo talvoudeka d'am fobl. Doue a selaouaz he beden. Nebent dervezioù goude e teuz da choum gwall-glanv. Aozet eo d'ezhan eur gwele. O welout ar peza a reeur, e lavaraz : Penaoz eur gwele plum evid-oun-me ? Ne ket war eur gwele a blum en deuz teurvezet va Zalver gourveza, war eur c'hoad kalet ha digompez eo. Ha n'hoch euz-hu ket sonjeuz ar peza a lavare sant Martin : War al ludu ha war eur roched reunn e tle mervel ar c'hristen. Red e oa eta lakaat ann den santel war eur goz vatalazen. O welout hast hag aket he servicherien war he dro, hag ar remejou a aozent ; siouaz, eme-z-han, o c'huanadi : Perak kement a boan hag a zispign evid eur c'horf a vreinaurez ; endra ma tiouer peorien Jezuz-Krist, bara, dillad, lojiz ha koat da ober tan ? E berr e teuz da welout e oa tost he heur diveza. Va bugale, mont a rann da vervel, tostaat a ra ar pried, red eo mont d'he arbenn. O sevel he zaoulagad, e lavaraz : mont a rann, va Jezuz. Ar re a oa eunn dro d'ezhan, her gwele, gweach leun a fizians hag evel pa ve bet a-neuze er Baradoz, gweach karget a spount, o sonjal e barnedigezou ann aotrou Doue. Na c'houi a zo euzuz, a oa lavaret d'ezhan, eur gurunen gaer a zo prearet evid-hoc'h enn env ! O va bugale, ar gurunen-ze a zo evid ar re kalonek, ha n'eo ket evid ar re laosk evel-d-oun-me. Goude-ze, o veza leun a fizians, hag oc'h welout ann holl oc'h wela, perag ann daerou-ze, eme-z-han ? En em laouenait kentoc'h, ha ne welit ket. Roet eo d'ezhan he sakramanchou diveza. Ho reseo a reaz gand eur feiz hag eunn devosion vraz. Goude e komzaz diwar-benn ar maro mad hag euzuzted ar Baradoz. Her gwelout a rit, va bugale, ez ounn-me dare da vervel. Oh ! ra vezo trugareket Doue, p'eo gwir, n'euz hent all e-bet evit mont d'an env nemed ar maro ! Petra eo ar vuez ? Eur skeud hag a dremen timad. Jezuz-Krist a zo maro evid-omp ar c'henta, arabad e vije eta kaout aoun rag ar maro goude m'eo maro Jezuz-Krist he-unan. Ann danvad dianket ounn, a lavare c'hoaz ; distrei a rann etrezek va vator. Digorit d'in, o pastor mad ho kraou-denved. Ne d-oc'h ket evit refus da selaou mouez ann hini a c'halv ac'hanoc'h. Ne gredann ket, o Jezuz mad-meurbed, goulenn eul lec'h e-touez ar sperejou euz a wel ac'hanoc'h en env, koulskoude ho krouadurik-bihan a garfe kaout eul lodenik euz a euzuzted ho Zent er Barados. Oh ! na me vije euzuz, me vije mil gweach euzuz, mar teurvezit, o ma Jezuz, va lakaat dindan treid ann izela euz ar re salvet !

Neuze o tistrei ouz ar re a oa eunn dro d'ezhan, e lavaraz : Evid-hoc'h-hu, va bugale, mirit gourc'hemen-nou Doue ; enn-ho hag enn-ho hep-ken, e kavot peoc'h,

frankis, santelez ha buez. Sellit ouz-in. Her gwelout a rit, mont a rann da vervel. C'houi a varvo ho-unan eunn deiz. Nikun ne hello en em virout dioc'h ar maro. Petra vezo holl prederiou pe soursiou ar bed d'ar c'houlsmalz ai gand ann avel ann holl draou ma vec'h bet touellet gant-ho ? Petra vezo d'ehoc'h madou ann amzer, pa vezo ann amzer o vont da guza, evel ma ia da guza evid-oun-me ?

Goude-ze, o sevel he vreae'h, enn eur ober sin ar groaz, e roaz he venedikision d'ann holl, hag e tennaz he huanaden diveza. Evel-se e varv ar re a zo bet devot da galoun sakr hor Zalver. *M. D. W.*

Tennet euz ar Bollandisted. Le Belair.

EUR VEREURY NEVEZ BENNIGUET.

En dez all daou vignon coz, bet camaradet scol, unan eus a Dreguer ac eguile eus a Leon, en em gavas en er guichen en eur foar.

— Penos a rez-ta, Yan, eme an Tregueriad, o lamet da boket de vignon ? — A te, Viçant, eme al Leonard ? Nac en so pel abaoue nor beus ket en em velet ! — Ia, trivec'h pe naontec vloas so da nebenta, eme an Tregueriad.

Yan. — Na pebes egen caer a peus-te aze ! Petra, a prenet e peuz-te anezhan ; peotramant er savet e peuz-te ?

Viçant. — Ema so savet ganeme, ac a so a voen chatal an Aotrou de Champagny, a vaner Keranroux.

Yan. — Sel-ta, clevet em beus parlant eus an Aotrou-se ac eus he Itron. Ne anavezan nicun anezo ; mes a guir eo e caront calz'an dud divar ar meaz ; a penaos eleac'h ober ec'his fors tud chentil pere a ia d'ar c'heriou da guemeret o plijadur a da zispign ho danvez, e chomont ato en ho maner evid rei labour d'an dud paour ; evid deski d'an tieien labourat guel ho douaron a tenna profit eus ar mecanicou da ada, da zoura, da ventat, da zrailla boued chatal.... ac e savont eur vereury nevez pehini, var a levereur, a vezo caer meurbed ?

Viçant. — Ah, Yan ! me garche e vijes bed e Plouyan d'ar bevarzec a vis du diveza ; neuze e pige gwelet oll kement a c'houlennes ouzin. En dervez-se just eo bed benniguet ar vereury nevez a behini e peuz clevet coms. Estonc't e vefes o velet craou ar chatal, eun hent ouarn en he greiz ; o velet al lochenou da lakat an drevach, oll var vaout !.... Ba ! n'oun ket evid rei dit da entend peguement a draou caer a so gread eno. Deus eun dervez benac d'am c'hear, a me iel ganez d'o gwelet.

Yan. — Ac eo echu ar vereury nevez !

Viçant. — Ia, a benniguet eo bed d'ar bevarzec a vis du, evel ma lavaren dit dabord. En dervez-se oa gouel bras er maner. Calz tud a ioa, a beb renk, ac ouспен ugent beleg, etouez pere pevar chaloni.

Yan. — Na perac kement-se a veleyen ac a driomp evid benediction eun ty nevez ?

Viçant. — Cleo, Yan, ar famil-se e deus digasset ac a zalc'h eur frer a seurezet er barres. N'ouffes biken gouzout peguement a vad a ra ar scoliou-se ; mez ar veleyen er goar. — Eur breur d'an Itron a so cabiten e Rom, da beleac'h eo eat, evid netra ac e risk he vuez da zifen hon Tad Santel ar Pab ac ar Relijion. Me sonj ding, ar veleyen a daol evez ouz an traou-se oll ; a pa gavont leac'h ne vankont jamès da ziskuez ho c'harantez ac ho istim evid ar famillon ac an dud a ra evelse vad d'o farres a d'ar relijion ; evid rei courach d'ar re binvidik da ober muioe'h mui a vad deomp-ni ken etrezomp tud paour, artizanet a tud divar ar meaz.

Yan. — Lavar din-ta, Viçant, penaos e tremenas an traou.

Viçant. — Araoc benniga ar vereury nevez eur beleg chaloni (Aotrou Person Kemper oa, eme an dud) a brezegas divar an drez huella a zor an ty. An Aotrou-se avad ne ma ket da c'hout gantan. Ne voe ket pel o prezec ; mes dour en doa bet a veur a feuntent : mont a rea ken eun d'ar galon !

Yan. — Var betra e prezegas.

Viçant. — Var galz traou. Lavaret a reas penaos e venniguer an tyez evid pellat an droug-speret ac he valic divar kement den a tra a chom enno ; ac evid tenna benediction an env varnezo ; penaos an tiez a dle beza benniguet evid receo ar gristenien consacret da Zoue dre ar vadiant. Nicun, emezan, ne dlefe biken en ankouat.... ; ac e roe da sonjal da veur a hini al lec'h d'ober e vea culpa ! Goude-se e reketas peb seurt benediction var an Aotrou a var an Itron, pere a zo a lignes ar saent ; ac e coms eus an demezel Maria de la Fruglai, ho moereb, maro evel eur santez a nevez-so en eur gouent a Paris. Eur guer a lavaraz ive a veleyen ar barres, pere so daou veleg crim.

Va mignon Yan, re ir e ven o conta dit an oll draou caer eus an derves-se. Credabl er c'hastel e zoa lein d'an dud chentil. Evid er vereury e velet eur maread a dud divar ar meaz ous taol ; a goude lein e voe canet eur ganaouen neve pehini a res meur a vech sclakal an daouarn.

Yan. — Gouzout a rez ar ganaouen-se dindan evour ?

Viçant. — Nan avad. Mes cleo, marteze e ma ganen em godel. Cetu y ama :

Ton anavezet.

Eun dra bennac zo a nevez,
M'a z'eus ker bras kompagnuez
M'a z'eus hirio kement a drous
En dro da vaner Keranroux.

Tud chentil hac Itrounezet
En ho c'harrosiou arc'hantet,
A veler o tont a vanden,
Oll guisket kaer hac oll laouen.

Kalz merourien, tud a vicher,
A zired ive d'ar maner,
Ho dillad sul guisket gant-ho
Evel pa zafent d'eur frico !

Kaon pe levenez er maner
A zigass d'y tud ar c'harter,
Hac ar pinvidic hac ar paour
Ne zeuont da glask'aro hant nac aour.

Ar penn kaos eus ar jolori
Eo Roz-Menez ar vereury,
Ar vereury nevez savet
Hac a vo hirio binniguet.

E peb amzer, tud chentil Breiz,
Tud a galon ha tud a feiz,
Ho d'eus caret ar brezounec
An artizan hac an tyek.

Seblantout a ra d'in clevet
Oll Bloujannis o lavaret :
Henor d'an Aotrou Champagny !
Bennos Doue d'he vereury !

Bennos d'an Itron, d'an Aotrou,
A zispign ama ho madou,
A vev e kreis ho merourien,
Vit ho zicour hac ho c'helen !

Bennos da Rozen ar menez !
Ra vevo pell en hon touez !
Havou Saisy ha Champagny
A zo caret gant peb hini.

D'an abardae e voe eun tantad a joa, music a calz levenes ; a me sonj din pebhini en eur vont kuit a lavare ennan e-unan assambles gant ar ganaouen ac o sonjal e difennourien hon Tad Santel ar Pab :

Havou Saisy ha Champagny
A zo caret gant peb hini.

MUNUDIK.

Mar d-co plijout a ra d'e-hoc'h, bugale, ar marvailloù am euz lavaret diwar-benn Munudik, me lavaro re all ar weach-ma. Setu emoun gant-hi :

Great he gefridi gant-han, Munudik a iez da c'hourvez war he dammik gwele. Dihun e choumaz hed ann hosvez, a c'hellit kredi, rak ne ouie petra da ober.

Pell kent ma tarzaz goulou deiz, hor paotr bihan a zavaz euz he wele, hag hen mont d'an aot ha dastum eno eur c'hodellad meinigou gwenn. Goude-ze e tistroaz d'ar gear evel kent ha goude.

Ann tad, ar vamm hag ar vugale o veza eat enn hent, Munudik ne lavare ger nemet choim adre war-lerc'h ar re all ha teurel tu-ma tu-hont ar veinigou en doa dastumet war ann aot.

Pa oent en em gavet dre greiz ar c'hoat, goude kerzet peder heur amzer enn hentchou treuz n'oa den na ti enn-ho war hed diou leo dro, ar fagoder a reaz da drouc'ha keuneud : brema eo staga gant-hi a zevri beo, paotred, eme-z-han ; arabad kaout damant d'ho korf, rak ar bara a zeu da veza enk-du-ma ha ne d'omp ket evit dioueret boed, evel a ouzoc'h, nemet mervel a

rafemp gant ann moup. Dale hit mad ta, ibugale, ha beac'h war-n-hoc'h.

Hag ar re-ze a starda gant hi ha labourat a laz korf, lod ama, lod a hont, pep-hini hervez nerz he zivreoach.

Neuze ar fagoder hag ar fagoderez a dec' haz kuit dre hentchoù treuz ha gwall fall. Dibaoz oar d'ann aotrou Mear, evel a lavarere, tremen dre eno, paol gornek ne lavarann ket.

Pa welchont n'oa mui na tad na mamm war ho zro; ar vugale a zeuz da skuilla daelou ha da grial a boez penn. Allaz l ne dale netra d'ezho; nemet ann dason o trouzal, den ne lavare ger tro-war-dro. Setu eta ar vugale geiz ha skuilla daelou adarre ha krial ken na... (me lavar ken na strakle ho eskern).

Arabad fall galoni na kaout nee'h, eme hor bugel seiz bloaz; me n'ounn ket e chal gant ann hent, na petra ta, eme-z-han oc'h ober eunn tamnik he baotr; me n'ounn ket e chal, a drugarez Doue.

Neuze Mmudik a lavaraz d'he vrendeour, petra en doa klevet en ti ha petra en doa great evit kaout ann tu da zistrei d'ar gear; hag hi em hent dioc'h tu ker laouen ha tra ha gwelet ar veinigou gwenn a ioa bet taolet tu-ma tu-hont war ann hent gant ho breur.

Evel a welit brema n'oa ket gaou a lavare va zad-koz diwar-benn Mmudik a ioa bet darbet d'ezhan, eme-z-han, dont da louarn.

Pe mar ma gwir pe mar ma ket, ar map iabou ank oe den a valec'h evit distrei d'ar gear hep lazha war ann hent. Hag o veza ne gredent ket mont ebaz ar vugale a leaz da guzat er c'haon, em avis klevet ar pez a lavare ho zad hag ho mamm.

A. TROUDE.

Tennet euz a VIGNON AR VUGALE.

(Eur pennad all eur wech all hi ne vezo ket pell.)

AN TAD DIBREIZ.

(CHUEC'HVET PENNAD.)

Epad ma tiskenne Mac harit evit mont da glase eur beleg, ar medecin a bigheie cambr an den elan.

— Ah! e hui a so aze, doctor! Tostalt, hag evessait mad ouzin, guetomp... aze. — Ho torn var ho coustians, ha eridi a rithu e vezin pare? Evidon me a gred eo dent va dervez diveza, pe dost; hoguen e hui a voar an draze guelloc'h evidon-me.

Ar medecin a evessaz mad oc'h an den elan, a zellaz outhan tu ha tu, her moudicaz, a lakeaz he sounn da zilaou, ha goude m'en doa great kement a elle evit gouzout penauz ello he glavou, o savaz he benn, hag e lennet an nec'haunt var he dal.

— Ahanta, Doctor, petra livrit?

— Ar vuez, c'huivel, soavechou cneoc'h evit na zonjer.

— Oh, me ho ped, Doctor, na glaskit ket a droidel-kerz ganeme. C'hoant braz am euz, eun izom braz am eus da c'houzout pe me a bareo pe ne rin ket.

— N'omp ket boas da lavaret d'ann dud all zontomp anezho. Ne ve ket ato mad bent... Doue omp; m'ell en em drompla.

— Nan, Doctor, ne allit ket en em drompla... ma emañ me enha. Eur beleg dre ar voaz... en deus da velet tud elan, a anavesse va stad.

— Mad, pa fell deoc'h, ez an da zent... eus en hoc'h ken alies a gienvet bern va veit... ervad oc'h eus a wec'h peder heit... Mes, evel am eus lavaret deoc'h, m'ell heit... hag ez an da rei touzou deoc'h evit ho savet...

— Ho trugarecat, Doctor; m'ell ho tonn... Ar medecin a senfas ar pez a voa da ober... clan, hag a ieas kuit.

Petra dremenas neuze en ehe, tad Mac harit? ... e vije oa didroussoc'h ha dinc' hoc'h evit na... abaoe meur a vloaz... evit biscoas. Hag o c'hortoz an beleg... c'hortozen-ze, a voe lizians dezhan? Ne ket evit gozar...

Ar pez so sur eo, pa dosta ar manoir e leiz, ha zoken eus an dud o deus belet ep Doue da zigeul... daoulagad, ha da reeo neuze a galon vad... eus ar relijion.

Mont a ran da veza ama eun nebeut... gant eun den, ha nep doa nemet... diveza eur c'hlanvour.

— Epad ma coll ar c'haon he deus, ma za ar... anezhan evel pa lavarfen a dam o lam, ar spout a... a solenn, agnec'h nebont ha nebont. Ar zouch a... huoloc'h, he nonfont deus da veza... An ma e dosta oc'h an eridite bep mell ardon eus ne... he dalc'he stag, oc'h an douar. Ar secler a gresc... he zro, due ma za... moul he dalc'he en den... eus an eny dre ma ren em zastag... Guelloc'h e vont petra d'ann peza gufay... e deus nebeuton ha gneus dezhan... petra dal a leac'h ma za... a aoun o vont.

— Diveza sonch eun den o vervel, feo... nevez. Recevit var ho taoulin he volonte... guen dizoue hennag ma ve bet ep he... ho mallos dezhan neuze. Eur mome... mui henvel oc'h kent, tostoc'h edo da... Setu aze penaus e comz eus eur c'hlanvour... vervel eun den ha ne heulle nemet... Mes an traou-ze zo bet guelloc'h ken alies... d'an dud difeiz anzo ez a nebeut a dud... eun dra beñag e Doue.

LEVR AL LABOURER.

Al loened klanv gand ar vosen.

Meur a wech ar vosen a gouez war all... War ar moc'h, ann denved, ar zaoud...

Ar c'henved o krevaat, a' spout ar mesaer, 1350
Hag a ra koll kaloun sionaz, d'al labourer.

Eun dilost euz ann han e kreiz eur c'haouez pouver
Goude eur glao paduz neuze, holl ho gweler
Dioc'h ar heged dic'hoantet, oc'h arzao da beun,
Hag o krena mensbed enn ho holl izili.

— All leze faonank a varv harz ar prajou glasa,
Pe ouz he rastellik leun euz ar geot c'hueca,
Ann houe' h war he deilek ne ra nemed d'ele hal,
Hag ar paz hag ar c'houeriv a drouc'h gronz he anal.

Ar mare'h ne heit ket muiar geot euz ar prajou,
Heugi a ra ann dour a red euz all leinon;
Ann douar da zasson gand he dield a laka
Kollit en deuz he nerz, koueza ra nem' grenn,
Eunn ejenh oar staget dindan ar geo kalet.

Ar merer reuzidik, mantret gand ar glac'har,
Zistag ann ejenh all a ouel maro he bar,
Hag a lez ann arar plantet e kreiz ann ar.

Al loened klanv neuze da petra u ho deuz c'hoant:
Nag ann disheol freska euz ar c'hoajou douan,
Nag ar geot tenera euz ar prajou glasan,
Nag ann dour a ziskenn a zivar ar reic' hier,
Netra u hell ho zenna euz ho langiz pouver.

Ho daoulagad a ouel, ho sellou zo beuzet,
Ho senn bleg d'an douar, ho diskouarn zo kouezet,
Ho c'haon han a zo zec'h, ho bleg a zo savet,
War za emint breman, goude mint gouvezet.

Re aliez neuze, sionaz, eor mesaer
A c'hañv vit he loened eur fall briz-lozaouer,
Hag e veler dioc'h tu, daoust da he holl louzou,
E lec'h ho faret ho kriski ho drougou.

Hano ar Zient evit ar Sizun-mo.

- DILLUN 17 Kerzu. — Sant Judicael, roue a Vreiz-izel.
- DIMEZS 18. — Gortoz gollout ar Verc'hez Vari.
- DIMEZS HER 19. — Sant Euzeb, escop ha merzer. *Hirio, dirguener ha dissadorn emd cotierou Nedelec hag euz eun ha vijet.*
- DIZIQU 20. — Eus an deiz.
- DIZIQUER 21. — Sant Thomas, abostol.
- DISSADORN 22. — Eus an deiz.
- DISSO 23. — Revere sil eus an Asvent.

Ar pemzegtvet bloavez ens a ren an Impalaer Tiber Cesar, pa edo Pons-Pilat gouarnar a Judee, Herodes e penn Galilee, he vreur Filip e penn an Ituree ha bro an trachonitidel, ha Lysamas e penn carter Abilen.

Pa edo Annas ha Caiphas beleien vras, Doue a roas da glevet he vouez da Jan, map Zachari, er goueleac'h (pe en dezert).

Ha Jan a deuas da vale dre an oll vro a dost da ster

Jourden, en eur brezeg eur vadiziant a binjen evit caout pardon ens va pec'hejou.

Evel ma zeo scrifet el levr a zo comzou ar profet Isai enha: *C'levet a vezo muez an hini a gri er goueleac'h*. Pourchassit he hent d'an Aotrou; lakit eun ho vinojennou. An oll draoniennoù a vezo carguet, an oll roziou ha menezioù a vezo discaret, an hentchoù cam a vezo eunet, hag ar re zisplean a vezo pletet.

Ha kement den so a velo ar Zalver digasset gant Doue. **SANT LUCAS. III. 1. G. M.**

KELEIER.

An Aotrou'n Escop a Guemper en deus scrifet eul lizer da oll bersonet he Escopi evit lacat pidi evit hom Tad Santel ar Pap.

An tad Noury, eus a Gompagnonez Jesus, a so dent da Guemper da brezeg evit an Asvent er Cathedral.

Evez *Cazeten ar Meziou*, an ed so kereat eun nebeut cazi e pep carter a Frans. Bez ez eo gousconde en eul leac'h bennag laoskeat varnezhan; el lec'hioù ma zoa digasset re a ed er marc' hajou diveza.

Ar c'heleier; goms bep sizun eus a listri eat da goll, e lod ar dud so bet saveteet; lod all so eat d'ar gouelet tud ha madou. Comz a rer ive dalc'h mad a dangoall, alies laket gant bugale, avechon croguet ne ouzeur ket penaus; avechon ive tamallet da dud fallac'h. Evelse er sizun-ma e comzer eus eun tangoall e Plouenan, hag eus eun all e Laule, (hema so bet mouguet araog m'en doa bet amzer d'ober droug,) ha ne ket gant bugale e creder int bet laket.

E Pekin, kær benn Rouantelez Chin, ar vissionerien so brema o sevel eun iliz caer, eun iliz catedral. An iliz ze, savet e creis kær, a so cals huoloc'h ha doarec't braoc'h evit tiez ar sionaz, ha zoken evit paler an impalaer. Evelse ar penrou braz a gvar a voa eun nebeut droug contant a guementse. Eat int da gaout ar vissionerien da lavaret dezho e savent, re huel ho iliz. Hoguen an otrea voa roet dezho da zavel ho iliz pevar ugent troatad, ha p'oar eat da vuzula, ne deus savet nemet deg troatad ha tringuent. Red e vezo dezo ta, en desper d'ho goarisi, lezel ar vissionerien da echal ar pez o deus comanset.

En dezi all, eur missioner protestantel, pe unan eus an dud-ze a ra d'ar broioù all da skigna Biblou, ha da ober eur c'henvers bennag evit sevel eun nebeut lanvez, en em gavis da ober hent e kichen eur missioner catolic. En em glem a rea dre ma e rouneze ar vissionerien catolic cals eneoù da Zoue, hag hi, protestantel, den couls lavaret n'ho zilaoue. Perag eme ar missioner catolic, ne rit ket evel d'omp-ni? Da lavaret eo, perag e labourit-hu evidoc'h oc'h unan, eleac'h ni ne labouromp nemet evit gloar Doue ha silvidigrez an eneoù? Oh,

eme ar protestant, c'hui a lavar avoalc'h, mes c'hui a gas ganeoc'h ar bleun ha ne lezit ganeompni nemet an tronjou.

BELJIC. — E Beljic ez eus great eur pelerinach da eur Chapel dediet da vam Doue, evit lacat ar Pap hag an iliz dindan scoazel ar verc'hez Vari. Ar pelerinach-ze a voue great e procession; ar veleien hag ar groaz e penn. Ouspen daou vil den a voa eat evelse a vanden da c'houlen sicour evit an hini a c'halvomp hon tad, hag ive da drugarecat Doue da vez casset ar c'hlenvet eus ar vro. Ne meus ket izom da lavaret e rejont ho zro, mont ha dont, o cana himnou ha canaouennou santel.

Bez 'ez eus tud hag a ell coms dre ho c'hof (ventriloques e gallec), da lavaret eo ec'h ellont lacat da zevel euz ho c'hreiz eur vouez hag a glever, hag a ententer, ha kementse ep ma finfent na teod na muzel, hag ar pez so souezussa, e c'hellont devrez an nep a gueront, ha zoken tud maro pell so. Evelse avechou ar re o dens ar vouez-ze en em zervich anezhi evit trompla hag ober aoun d'ar re all, o rei dezho da gridi eo tud varo, pe an droug speret eo a gomz outho. Setu ama unan hag a zaveteas brao he vuez dre ar vouez-ze.

En Afric, soudardet Frans o deus aliez tamou stourm oc'h ar bedouinet, ha petra bennag ma ho zrec'hont peurlieussa, avechou gouscoude e vez paket hiniennou anezho. Eur zoudard a voue-ta paket en eur stourmat evelse. Ar vedouinet her c'hassas gantho da unan eus ho c'heriadennou. Laket evoue etre daouarn ar marabout, da lavaret eo, beleg ar fals-profet Mahomet. Mont a reat d'he lacat d'ar maro, ha roet oa d'ar merc'hed da laza.

Pa voa en em zestumet an dud-ze en dro d'ezhan, e cleffont eur vouez ere ha groz hag a lavare :

— En hano ar profet, na rit droug ebet d'ar zoudart gall-ze; list-hen da vont kuit.

An oll a gredaz oa ar marabout eo en doa comzet.

— Petra, emezho, ne fell ket deoc'h e ve lazec'h gall-ma?

— Nann, eme adarre ar vouez.

— Petra livirit? emezho o trei oc'h ar marabout.

— Me, eme ar marabout, n'em eus lavaret guer.

Neuze e voue clevet eur vouez creoc'h ha grosoc'h c'hoaz o lavaret : — Gaou a levezet !

Ar marabout keaz ne vouie mui petra rea. Liou ar maro en doa guisket, ha crena a rea evel eun delien, hag ar vouez a lavare ato : Lezit ar c'histenze da vont kuit !

Ar marabout a voue red dezhan discleria oa ar profet he unan eo a gomze, hag en eur grenna e tistag ar zoudart.

— Roit dezhan eur marc'h hag eun nebeut arc'hant da vont kuit, eme ar vouez.

Roet oue dezhan; an oll a voa en em laket d'an daoulin gant an aoun o devoa. Ar zoudart a ieas ac'hano

lijer gant ar marc'h hag an arc'hant a voa roet dezhan. Dre zicour ar vouez-ze, en doa great brao he daol.

Soudardet Prus o veza e carter Francfort, tud ar vro n'o doa nemeur a blijadur oc'h ho gulet. Diguemer fall a reat dezho en tiez ma vezent laket da loja enho. Eur jardiner dreist ar re all a ziscuezas eur min ken trene d'ar zoudart a voa casset d'he di; ma en devoa hema evel aoun. Pa zeas da zibri he bred, e lakeas he zabren en he guichen oc'h an daol; evit gallout cregui huan enhi, mar bije izom. Ar jardiner ne lavar guer; mes sevel a ra, hag e teu adarre gant eur pez forc'h houarn, hag he laca e kichen ar zabren.

Ar zoudart a ieas droug enha, hag a deuas ruz evel cribel eur c'hillog. Mes eguile a lavaras dezhan didortill :

— Me gave din dioc'h eur gontel eus ar vent-ze n'oa ket re vraz ar forc'h-ma da fourchetex; ha pa guerot c'hoari gant ho penveg, me c'hoario gant va hini.

Ar zoudart a habascas dezhan, hag a gasas he zabren en eur c'horn eus ar gueguin. G. M.

En eur guær vraz ez oa eun Aotrou pinvidic o chom en eun ti caer meurbet. Eno en divije bevet en he æz ma en divije gallet beza didrouz. Mes evit amezien en doa daou varichal, unan e pep penn eus he di. Ar re-ma mintin mad, ha bete pell an noz a rea eun trouz hag eur safar ker braz o skei var ho anneau, o skei var an tom, ma virent oc'h an Aotrou da gousket. Eun dervez setu hen o vont da gaout ar varichalet an eil goude eguile, hag e kinnigas eur zom vraz a arc'hant da behipi anezho ma carje mont ac'hano ha cas he c'hofel e leac'h all. An eil hag eguile eus an daou c'hof (marichal) a guemeraz an arc'hant hag a roaz he c'her da ziloja. An derveziou varlerc'h an houarn a stirlinke hag ar morzoliou a iea en dro evel diagent. An Aotrou, droug enha, a deuas da gaout unan anezho.

— Petra, ian, n'em eus-me ket roet deoc'h eun dornat brao a arc'hant evit cas ho cofel e leac'h all?

— Eo, Aotrou, ha great em eus ive ho lavar. Me a voa er penn all d'ho ti, ha Jakez a voa ama. Brema me zo deut ama ha Jakez so eat d'ar penn all. Eun troc'h on eus great evit senti ouzoc'h. G. M.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 8 Kerzu.		PONT'NABAT — 6 Kerzu.	
Priz ar c'hant tiour.		Priz ar c'hant tiour.	
Guinis.... 45 lur, 82 c.		Guinis.... 45 lur, 83 c.	
Segal.... 9 lur, 43 c.		Segal.... 9 lur, 38 c.	
Eiz..... « lur, « c.		Eiz..... 40 lur, 38 c.	
Ed-du... 7 lur, 26 c.		Ed-du... 7 lur, 76 c.	
Kerc'h... 9 lur, 78 c.		Kerc'h... 40 lur, 43 c.	
Avalou-douar 4 lur, 00 c.		Avalou-douar 3 lur, 75 c.	

Ar Gerant : AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand AR. DE KERANGAL, Mouler an Escopi.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA, DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezouneec.

Eun Abonnement d'ar Gazeten à goust :

Evit eur bloas.....	DAOU SCOUET.
Evit c'huac'h miz.....	EUR SCOUET.
Evit tri miz.....	C'HUAC'H BEAL.
Eur gazeten ebken.....	DAOU VENNEC.

Ar bacamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIQU.

Ar scrijrou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Belec e Kemper.

Ar paemanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN ebken. An abonamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 22 Kerzu 1866.

NEDELEC! guinivelez hor Zalver! Goude ma voa bet an dud pevar mil bloaz oc'h he c'hortoz, Jesus-Christ, Map Doue, en deus teurvezet ober he zonediguez var an douar, dont er bed evit hor savetei. Kerkent ha m'en doa pec'het hon tad kenta, Doue goude beza he gondaonet, a roas dezhan da anaout e vije dasprenet eun deiz, hag hirio e teu Jesus da seveni ar bromessa great da Adam.

Hoguen, a lavar lod, p'eo guir en doa Doue kemeret truez oc'h an den, ha great he zonc'h da zigas he vap evit he brene; perag n'en deus-hen ket her great kentoc'h? Perag lezel ar bed keit all da hirvoudi o c'hortoz he Zalver?

Lavaret a alfet d'an dud-ze, nec'het gant ar pez ne zell ket outho : hag izom en deuz an Aotrou Doue da lavaret deoc'h perag e ra an dra-ma, ha perag e ra an dra-hont? Ha red oa dezhan savetei an den? Ha ne alle ket he lezel d'en em goll evel ma en deus lezet an droug ælez pere n'o deus ive pec'het nemet eur vech hag a so collet evit biken? P'eo guir n'oa ket red dezhan hor savetei; p'eo guir eo dre drugarez epken eo deut d'hor prena, e c'helle ive, ep mar, dont d'hen ober pa garje.

Goudeze, ne ket ep abeg en deus Doue gortozet keit-ze. Fallout a rea dezhan rei eun nebeut da anaout d'ar bed pebez trugarez a rea dezhan o tont d'he zasprena. Epad pevar mil bloaz en doa bet amzer da anaout pe guer poaniuz eo beza e liamou an droug-speret, pe guen trist eo beza en denvalijen. Seul hirroc'h ma vezer o c'hortoz eur mad; seul vrasoc'h e cavomp ar vad-ze, ha seul c'huoc'h er c'havomp pa vez roet deomp. Evelse, epad ar pevar mil bloaz-ze nag a vall o doa an oll da velet ar Zalver a dlie dont? Nag a huanadou, nag a hirvoudou, nag a bedennou a deue eus a galon ar batriarched, ar brofeted, an oll dud vad eus an amizer goz, ha beteg eus a galon ar re ne anaient

ket ar guir Doue, evit goulen ma vije digasset dezho an hini a c'hortozent! Doue a felle dezhan rei amzer d'an dud da anaout pe guer reuzeudig oant, ha pegement a izom o doa euz eur Zalver. Ma vije deut Jesus-Christ var an douar dioc'htu goude pec'het hon tad kenta, penaus o divije an dud gouezet pebez dizeur eo bet evitho ar pec'het orijinel, ha pebez anaoudeguez vad a dleomp da vap Doue da veza deut d'hou dasprena?

Kementse so guir, a leverer mes perag map Doue o guir bed, so falvezet dezhan guenel en eur c'hraon ker paour, en eur stad ker poaniuz?

An dra-ze, evit guir, a dle lacat nec'het tud a zo pere ne gredont ket e ve na danvez na madou all nemet danvez ha madou an douar.

Hirio, eme eur scrifagner, ez eus eur rum dud ha ma lavarfac'h dezho ne dleont ket en em nec'hi kement o clasc destum danvez, ho kemerse evit eun den diskiant. Destum arc'hant mui ma vezo gallet; ne anaient zont ken. An dud-ze ne ouzont ken catelkiz nemet hema :

- Evit petra ema an den var an douar?
- Evit destum arc'hant.
- Petra eo an den?
- Eur benvec da zestum arc'hant.
- Petra eo eur buguel?
- Danvez eur benvec da zestum arc'hant.
- Piou eo an den hag a virit mui a istim?
- An hini en deus gouezet guella destum arc'hant.
- Piou eo an den eurussa?
- An hini en deus mui arc'hant.

Credi a ellit, ne dleit ket beza souezet e ve ar rum dud-ze nec'het o velet o c'henele e creiz ar baourentez an hini a dlie divezatoc'h prezeg dezho ha d'an oll ar virionez-ma : Euruz ar re baour! n'en em lakel ket e poan da zestum tenzoriou var an douar, e leac'h ma c'hellont mont gant al laer pe beza debret gant ar mergl; mes poaguit da zestum eun tenzor en env.

Hoguen evit ar guir gristenien pere a voar ervad o deus er bed-all da c'hortoz madou mil guech en tu all

da oll danvez ar bed-ma, evit ar re vian hag ar re baour, evit ar re binvidic zoken pere n'en em stagont ket oc'h ho madou hag a voar ranna gant an dud izomec, e vezo ato eul laouenidiguez gueleit ho Zalver o c'henel bian, o c'henel paour, o c'henel er boan, o vale evelse en ho raog dre an hent tenn ha stronsus dre behini e tleont kerzet ho unan. G. M.

Rom. — Setu ama eun dra hag a zo mad da c'houzout e Franç hag e Breiz-Izel. Hon Tad Santel ar Pab a ia a-wechou da ober baleadennou, evit diskuita, hag a zigouez d'ezhan, evel d'ar re-all, cavout eur belec a ve o cass an Aotrou Doue d'ar re glanv. Hoghen petra ra neuze ar Pab? Ober a ra ar pez eo bet gwelet oc'h ober, n'euz ket pell. Ar Pab a ioa bet o vale. Arru war blacen pe leur-gher iliz Sant Laurans, e cavaz vikel ar barres, ha war diou renk enn he raog cals tud-a-iliz, a gasse ar gommunion da eunn den clanv. Ar Pab a oa enn he garros, mes kercent ma welaz ar procession-ze, setu hen o tiskenn war ar ru. Heul a ra ar sacramant bete ti ha cambr ar c'hlanvour, a ioa ann dro-ma, ann Aotrou Marquiz Bargagli, gwech-all ministr e dugach Toscan, hag a zo brema o choum e Rom. Hervez ar ghiz mad ha santel er broiou christen, ha dreist-holl e Rom, eur bobl a dud a ioa oc'h heul ar sacramant, enn eur lavaret pedennou. Ar Pab, o veza enn ho zouez, ann hini clanv her gwel, hag oc'h he welout, eo teneeret he galoun; hen trugarekaat a ra mil ha mil gwech, ann daerou enn he zaoulagad. Ann Tad Santel a zo choumet war he zaoulin e-pad ar gommunion, hag en deuz goude lavaret d'ar Marquis eunn nebendic comziou leun a garantez hag a galoun.

Diou pe deir sizun araog e oa bet gwelet ar Pab o vont c'hoaz warlerc'h ar sacramant, mes e ti eur paour ann dro-ze, enn eunn ti euz ar re baoura a zo e Rom. Araok dont kuit ann Tad Santel a lavaraz eur gomz vad bennac d'ar c'hlanvour evit comforti he galoun hag a roaz d'ezhan eunn aluzen gaer.

(Tennet euz *Gazetenn LE MONDE*). Y.

En deveziou all, tud a reng huel bet e Palez ar Pap, a ziskenne ac'hano pa zigouezas gantho soudardet a Frans; unan bennac a c'houlennas digantho:

— Da beleac'h ez it-hu evelse?

— Da beleac'h, eme eur zoudart? da di hon tad santel-ta!

Ar zoudardet-ze a ioa gantho pep a skeaden pe imach eus a Bii Nao. Mont a reant ker brao ha tra da bidi ar Pap d'ho benniguen, ha da scrifa gant he zorn eur guer e traon ho imach.

Bez'ez eus e Frans aleis eus an imachou-ze var bere en deus an tad santel scrifet eur guer bennac tennet peur liessa eus an aviel.

Abaoue 1850, ouspen daou c'hant mil eus hor soudardet o deus gueleit Pii Nao, touchet oc'h he zillad, poket d'hezorn; ha mont a reont d'he balez evel da di ho zad.

An tad Villefort, eus a gompagnunez Jesus, a somaro ar c'huec'h varnuguent a vis du. Goude beza tremenet he vuez o clasc beva dianavezet, e les var he lerc'h ar sclerijen eus he vertuziou hag ar c'houez dudius eus he oberou mad.

An hini en deus scrifet ar c'helou, a ieas da gouent Jesus evit gueleit ar c'horf maro ha poket d'he zaouarn. Lavaret a reas d'ar porcher oa deut evit gueleit an tad Villefort.

— An tad Villefort? eme ar porcher, eme er barados.

— Gouzout a ran, mes c'hoant am eus da boket d'he zaouarn.

Neuze e voue lezet da vont er gouent, eleac'h ma cavas an tadou o pidi. Ar breur a voa boaz abaoue pell amzer da vont gant an tad pa zea da vale, a vouele doureg. An tadou a gompagnunez Jesus a ra eno eur c'holl bras. An oll e Rom her c'hemere evit eur zant.

En Itali, evel a ouzeur, ez eus e meur a garter bannennou laeron hag a stourm avechou oc'h ar zoudardet zoken. An daou varnuguent a vis du ez eus bet emgann etre eur vanden eus al laeron-ze ha soudardet ar Pap. Al laeron, na petra-ta, a voa e touez ar gouezeuri, var eun huelen, eleac'h ma voa ez dezho en em zifen, ha canna ar zoudardet. Ar re-ma a voue gouliet meur a hini, ha zoken lazet unan bennac anezho, rag cals oa bianoc'h ar vanden anezho evit hini al laeron. Gouscoude e teujont abenn d'ho diloja divar ho zorguen, hag ep dale e tigouezas eun nebeut zouavet da zicour ar zoudardet. Neuze ez ezor dezho gant ar vaionetez, hag e voue great ho afer en eur momet. Lod anezho a ellas tec'het etouez ar c'hoat.

Setu ama c'hoaz eur guer divar benn ar verzerien a Goree a bere on eus comzet diou pe deir guech.

Ar vourrierien n'oa ket bet avoalc'h dezho ho dibenna. Ar gristenien o doa gueleit ho c'horfou, a lavar e voa dizoloet ho eskern; Ar c'hroc'hen hag ar c'hig a ioa bet faoutet ha distagnet a beziou. Tra burzuduz ar c'horfou-ze a voue lezet ugent dervez dindan an amzer, evit ma vijent lonket gant ar chas ha gant ar brini. Mad, christenien ha paianet o deus her gueleit, loen ebet ne douchaz outho. Abenn an ugent dervez ne voa tam flear gantho, ha ker fresc oant evel pa vijent nevez maro. Doue so ato burzudus en he zaent.

GRENOBL. — En eur c'harter eus a escopti Grenobl, ez eus a nevez zo distroet cals protestantet d'ar guir iliz. Ar vugale a deu da veza ebestel evid digas ho zud var an hent mad, evit deski dezho ar virionez. Bez' em eus ama, eme an hini a verc kement-ma, daou vuguel hag a ra ho gallout evit ma lezo ho c'herent anezho da zont d'an ilis catholic. Marteze e vezo red dezho coll ho oll madou; credi a ran e lezint kentoc'h pep tra evit mancout da heul ar vouez a Zoue. A nevez zo ez eus distroet c'huezeg, ha pevar all so var ar mare da zistrei.

Eur verc'hig vian e deus great he fasc kenta er bloa-ma, e deus abaoue laket he zad da zont d'an ilis catholic. Eun dudi eo gueleit ar verc'hig-ze oc'h ober scol d'he zad, o teski dezhan he bedennou, hag oc'h he lacat e stad da ober he guenta communion. Bez'ez eus eur verc'h all hag a ra scol d'he mam ha d'he c'hoar. Eur potrig on eus ive hag a vez er c'hatekiz. Pa zigouez er guær e lavar dirag tud he di ar pez en deus desket, hag ar re all a zesc gantha. He vam hag he vreur en deus digasset da veza catoliket. Ar potrig-ze a lavar a vouez huel ar pedennou en he di hag a c'hounit evelse da Zoue he oll guerent.

JERUZALEM. — Varlerc'h an distruch great gant ar c'billeien raden, ez eus brema eunn dienez vras e Palestin. Au dud divar ar meaz a deu da Jeruzalem da glasc ho bouet. Ar c'houdenhou ha tiez ar visionerien, ken e kaer, ken er c'harter tro var dro, so leun a dud dare da vervel gant an naonn, hag eur scrij eo ho gueleit. Ar gatoliket, ato leun a garantez, a ra kement a ellont evit rei bara d'an dud keiz-ze. Ar Patriarch latin en deus lakeat eana da labourat var he gatedral evit gallout sicour muioc'h an dud reuzeudig. Ar visionerien, en ho labourou poanuis, a zivouer pep tra evit terri he naonn da unan bennac. C'hoarezet Sion, leun a fizians e Doue, o deus kemeret leun ho zi a verc'hedigou digasset dezho ac'hann hag alessont gant ar visionerien.

Russi. — Eur vech ma na vezer mui sclereat gant ar virionez, e teuer da veza, e c'heller ho lavaret, diskiant. Ne ouzeur mui nemet goal gas ar re a zalc'h c'hoas mad d'ar feiz. Lavaret on eus ouspen eur vech ez oa ar Russianed schismaticed, da lavaret eo, distagnet dioc'h ar guir feiz, dioc'h ar guir relijion, hag e reant goassa ma c'hellent d'ar gatoliked, dreist oll e douar Pologn, evit moug ar feiz en ho zouez pe ho distruja ho unan. Goasoc'h goaz e c'hiskinont ato ar gatoliked keiz. Ne deus evitho na carg nag enor, mes an oll guirion a laker var ho c'hein evit ho flastra. N'o lezer ket da brema douar hag o defe ac'hant d'hen ober. En eur guer, ober a rer kement a eller evit ho c'has da netra.

Ouspen so, cas a rer tud, evel pa lavarfen missionerien, evit ho gounit, ne ket d'ar virionez, mes d'ar gaou, ne ket da Zoue, mes d'an droug speret. Ho destum a rer, ha neuze e clasker ho zouelli o rei dezho da anaout peguement a c'hounessent ma carfent kemeret relijion impalaer ar Russi. Hag evit diskuez deoc'h pebez christenien ha pe guer guezieg eo ar visionerien vad-ze var ar relijion, setu aman petra leveront:

« Hon relijion-ni, catholiced, a zo guelloc'h evit hoc'h hini; hon iliz-ni so santeloc'h evit hoc'h iliz-hu. En hon iliz-ni em relegou Jesus-Christ. Oll eskern hor Zalver so digasset nevez zo eus a Jeruzalem da guær Mobilew, hag hon impalaer en deus prijat rei diguemer dezho, hag henvel eun iliz evit ho lacat. Ni on eus eta relegou

Jesus-Christ, ha c'hui n'oc'h eus ket...

Han! ne ket doctoret eo ar re-ze? N'em eus ket izom, credabl, da lavaret da n'icun eusa lennerien *Feiz ha Breiz* ez eo pignet Jesus-Christ en eun *corf hag'ene*, ha n'en d'eus ket lezet he relegou gant ar Russianed! N'em eus ket izom da lavaret o deus ar gatoliked guelloc'h evit relegou, eo chomet Jesus-Christ he unan gantho e sacramant an Aoter! Mes gueleit dallentez doctoret evelse o tistaga gueier ha ne vent ket gueit da lacat nec'het eur buguel? Gouscoude brassa gouela rer e Russi eo Pasc, Jesus-Christ savet a varo da vezo. Pa anavezont eo savet Jesus leun a vuez eus ar bez, e c'helfent gouzout ive n'en deus ket lezet he eskern en donar. Evel a lavaren huoloc'h, diskiant ez car pa vezer er meaz eus ar virionez.

Goude m'o deus ar visionerien-ze comzet da guenta dre gaer oc'h ar gatoliked a fell dozo da douelli, pa volont ne ellont ket ho gounit, evel ma c'heller peurliaessa, e chenchont soudan baz en daboulin. En em lacat a reont da c'hourdrouz, ha ma na zenter ket c'hoaz, e laker ar vaz hag ar scourjez da c'hoar. An ebestel eus ar c'his nevez-ze a vez ato soudardet oc'h ho heul evit bazata ar re ne allont ket da c'hounit. Goude beza goal gasset evelse tud eur gueriat, ez eont da eur gueriat all; mes distrei a reont adarre, hag ar vaz hag ar scourjez a ia adarre en dro. Ne jom var ho lere h' nemet goad, tud mac'haniet, hag avechou lazet. Eur scrij eo sonjal e kement a gristeri. Gueleit int bet en eur guær o tivisca beleien ha cristenien catholic en noaz, hag oc'h ober dezho ober tro kaer a daoliou hag baionetez. C'hoas ne gomzan ket ama eus a veur a dormant all scrijus ha mezus a lakeont lod anezho da c'honzaon. Bez' ez eus traou ken euzus ma ne aller ket comz anezho. G. M.

AR ZUL.

(EIZVED PENNAB).

Ar prophet Elizee a voa klaon gad ar c'hlenved ma varvaz gan-t-ha. Joas, roue Israël, a veaz d'he welet ag a lavaraz d'eza, en eur voela: « Ma zad, ma zad, « c'hwia a voa karr-brezel Israël, c'hwia a voa he vleitour! Piou on difenno brema a eneb ar Sirianed, on « enebouryen? »

« Ar Prophet a lavaraz d'ar Roue: Digont, emez- « ha, ar prenest euz ma c'hel war zu ar zap-heol, an « ini a zell ouz ar Siri, stennit ho koareg ha tennit war « an tu-ze. »

Ar Roue a zigoraz ar prenest ag a laoskaz eur bir pe eur zaez war zu ar Siri.

Elizee a lavaraz d'eza: « Tennit ha tennit c'hoaz. « Joas a laoskaz eun eil bir ag eun drede bir, ag a heanaz.

Ar prophet a lavaraz d'ar Roue gad eun tam vae, gad eun tam droug enn-ha: « Perag ez oc'h-hu heanet ker « buan? Mar karzec'h beza tennet peup kwech,

« c'houec'h kwech ha seiz kwech, oz pize trec'het ar
« Sirianed pemp, c'houec'h ha seiz kwech, oz pize ho
« mazaouet ha distrujet net. Mes brema, o veza n'oz
« peuz tennet nemed teir gwech, ne drec'hot anezo
« nemed teir gwech, ha n'ho distruchot ket. »

Me a gav d'in ma mignonned, gwelet e komzou ar
prophet eur gentel evid-om. Pa zeu eur goall bec'hed
benag da ober droug braz er vro, da c'hourdrouz or
c'holl, ha ne dleom-ni ket skoi war-n-eza da-vad, neket
eur wech, pe ziou, pe deir, mes dalc'h-mad ken a vezo
lammet euz on touez; ken a vezo distrujet net? Hogen,
ar pec'hed a eneb an drede gourc'hemenn a Zoue,
pec'hed ag a zeu muioc'h mui komz en on touez,
d. l. e. al labourou da zül, ar mank d'an ofisou ag an
dizurzou greet d'an deiz santel, ha n'ed eo-hen ket eur
goall bec'hed, eur pec'hed ag a laka an Nev da vuane-
kaat en on eneb, a denn war-n-om he voallennou ag a
daöl kalz a eneb ebarz en ifern?

Darc'hom eta da-vad war ar pec'hed-ze, ne ket diou
pe deir gwechig, an dra-ze na vez nemed hen krabisa,
ne ket gad eun taöl fouet pe zaou e vez lazet eun aneval
gouez; ia, en em glevom oll, kemment ho devez feiz
en ho c'halon, da ober eur brezel eb hean d'ar pec'hed
reuzendig-ze, ken a vezo distrujet mad en on touez.
Red eo d'eom laza aneza: rag, ma n'hen lazom ket,
hen on lazo, hen a lammo digan-eom ar feiz, ar reli-
jion zantel katolik.

« Ar relijion gatolik, » eme c'hwi marteze, « na yalo
« morse digan ar Vretonet. »

Ha perag ne yaffe-hi ket? Ma brasa c'hoant, evid
gwir, e vez gwelet ma c'henvroiz ker o chom stard be-
pred e feiz ho zadou koz. Mes, ec'h all c'hoarvezout
gan-t-ho ar pez a zo deja c'hoarvezet gan kalz re-all.
Pegement a boblou na welom-ni ket hiryo, pere a voa
gwechall katoliked, ag a zo brema er mæz euz an Iliz
santel katolik, ag a zo brema protestanted pe traou all!
Ha n'or beuz-ni ket breudeur bretoned e Brozaöz — on
fadou a zo deuet ac'hano. — er c'horn douar anvet
Broc'hall, pero a voa gwechall katoliked evel-d-om, ag
a zo koulskoude brema protestanted? Hogen, ar bla-
nedenn fall kouezet war ar re-ze, ha ne ell-hi ket ivez
koneza war-n-om? Eo, ma na zivoallom, ha dre ar zül
miret fall, didronet ha taölet a gostez pe koulz lavaret,
eo e c'hoarvezo kemment-se ar c'henta. Ia, lammom
euz or c'halon, ar respet a dleom da gaout evid deiz an
Aotrou Doue, ankounac'heom heb eun neubeud an ent
da vont da zül, d'an iliz parrez da glévout an ofisou
santel ha prezegennou or belezen, d'eom evel war ar
pemdez, evid an distera digarez, da labourat d'ar par-
keyer, da zastum on id, da leda or foen da graza, pe en
em lekeom en ent gad or c'hirri da gas he diegez da
hem-ma, eur c'harrad lann da hen-ont, louzaou, lugu-
mach da gariz da ober ho zoubenn ag ho frikaou, ha
c'hwi welo ne zaleo ket ar brotestantiach pe eur fals
relijion all benag evel-se d'en em skigna en on touez ha
da c'hounid or bro oll, e nemeur a amzer.

An dud a renk kaout eur relijion benag, mad pe fall.

Biskoaz n'ez euz gwelet poblig ebed, biskoaz zoken
n'ez euz gwelet keryadenn tud ebed, — Eur payan
spered ha desket braz, Cicero, hen remerke, bremañ
euz tric'houec'h kant vloaz, — eb kaout eur relijion be-
nag. Ma n'ho devez ket unan vad, unan deuet euz an
Nev, d. l. e. ar relijion zantel katolik, roet d'eom
or Zalver Jezuz Krist, n'ez euz nemed-hi a relijion vad
war an do uar, ho devezo unan fall, unan deuet euz an
ifern. Ia, Doue pe an diaoul a vezo attao mestr war an
dud. Pa gasont Doue kuit euz ho zouez ha d'he heul ar
relijion zantel roet d'ezö gan-t-ha, kerkent an diaoul
gemmer he blas ag a four war-n-ezo eur relijion greet
gan-t-ha ivez ha d'he c'hiz e kaoyou an ifern.

Ag eur wech c'hoaz, kemment-se a c'hoarvezo gad ar
Vretoned a Vreiz-Izel, mar lezont ar zül da goueza en
ho zouez.

Digasit en oc'h envor ar c'homzou euz ar skritur
zakr, pere a lakeenn dirag ho taou-lagad, e ma difeza
pennad: « Miri mad ma Zabat, ma deiz » a lavare Doue
d'ar bobl a Israël, « evid ma c'houffot eo me an Aotrou,
« an Doue ho santiffi: *Videte ut sabbatum meum custo-*
« *diatis.... ut sciatis quia ego Dominus qui sanctifico*
« *vos.* »

Komprenom mad ar c'homzou divin-ze. Ha ne zeu
ket Doue, dre ar c'homzou-ze, da lavaret d'ar bobl a
Israël penaöz, ma ne vir ket mad ar zabat, an deiz santel,
mar lez aneza da goueza en he douez, e teuio, hen pobl
a Israël, da zizanaout an Aotrou Doue, da goll evel-se
he feiz, he relijion, d'en em roi d'ar pec'hejou, d'an
dizurzou, d'en em daöler er baganiach evel ar boblou
a voa en dro d'eza, ha d'en em goll er giz-se ag evid ar
vuez-ma ag evid ar vuez da zont?

Ag an dra-ze a zo en em gavet gwir evid ar bobl a
Israël, meur a wech. Ervez ma vire an deiz santel, e
vize ivez kre pe dister he feiz, e vize mad pe fall he
vuezegez ag en em gave evuruz pe reuzendig. Pa leze ar
zabat da goueza, ec'h ankounac'hee er memez amzer
an Aotrou Doue, he Grouer, he Dad ag he vadoberour,
en em roe d'ar visou, djan dizurzou, en em daöle en
idolatriach, ha goallennou Doue nenze ne zalc'ent ket da
goueza war-n-eza. Pa zistroe ouz Doue ha pa en em
lakee adarre da viret mad ar zabat, dioc'htu e weller
an traou gan-t-ha, ha keit ha ma talc'he da viret an deiz
santel ec'hiz ma eo dleet, e talc'he ivez da vont mad
war ar poenchou all ha d'en em gavout evuruz.

Evel-se edo euz ar bobl a Israël, evel-se e vezo ac'hano
nom, mar greom evel-t-ha.

« Mes, » a lavaro marteze iniennou euz ma lenne-
ryen, ganet ag o chom e karteryou evuruz, « Perag
« kemment a spont? Perag krial kemment evid difenn
« ar zül? Ni na welom ket labourat, da zül, en or brol
« Ni na welom ket ar gristenyen o vankout, da zül,
« d'an ofisou, nemed klaon e vent!... »

Evuruz ez oc'h, a lavarin d'ezo, da veza ganet ha da
veva e karteryou kristen evel-se! Chommit ha marvit
enn-ho, mar gellit. Mes allaz! an oll douarennou euz a
Vreiz-Izel n'ed int ket envel ouz ho re. Me a anavez

eun den ag a wel euz he brenest, eb rankout sellet pell,
eun ti savet eur galz aneza da zül, eur voarem e pehini
en deuz gwelet eur vandenn dud o troc'hi lann da zül,
en he c'hichen eur voarem all e pehini en deuz gwelet
ivez enn den o troc'hi lann ag o kempenn he zouar da
lakaat segall marr, da unan euz ar c'haerra sulvezou euz
ar bloaz, eun tamig koad bian euz a behini en deuz
gwelet charea gwec' da zül, eur ster, eur rivyer gan
pehini e wel, peuruia beb sül, pa vez mad ar mare,
bagou ha listri all o vont da gas da Vontroulez trez,
merl, mein ha traou all, eun ent braz war behini e wel
roulla, kalz pe neubeud, beb sül, kirri o vont gan lou-
zaou pe lugumach da Vontroulez ha da lec'hyou all.
Setu aze ag en deuz gwelet pe a wel bepred euz he
brenest, ha ne lavaran ket tout. Ha mar zaffe er mæz
euz he di, war eun duchenn uheloc'h, pegement a
lec'hyou saotret, proffanet dre al labourou difennet da
zül, na welle-hen ket!

Ha n'eo ket tud euz a gær eo ar re en deuz gwelet ag
a wel evel-se o labourat, d'an deiz santel, mes tud
diwar ar mæz, pere a zoug c'hoaz an ano a gristenyen,
pere a ya c'hoaz d'an ilizou, da goves ha da gomunia
zoken a wechou.

Mes, mar yaffem e kær, d'an astellouerou, d'al labou-
radegou braz pe chanterou, war an enchou houarn, d'ar
porzyou môr, petra na weller-ni ket!

Sivoaz! nan, ar zül n'ed eo mui respetet nag e kær,
e kær dreist-oll, na war ar mæz er parezyou ispisial
pere a zo tost d'ar c'hæryou marc'had ag a zarempred
kalz ar re-ma. Kær a goll ar mæz. Ma ne wella an traou
gan-eom, ma ne zeu an deiz santel, deja anter didronet
en on touez, da gemmer ar renk a zalc'he gwechall e
Breiz-Izel, pa voa krevoc'h feiz ar Vretoned, e teuñom
da veza, eb dale re bell, preizou æz evid ar ministred
protestant, pere a welom aliez en on touez, pe en em
raffom pe mormoned, pe hailloned, pe eun dra all be-
nag evel-se. Kriom eta a eneb al laboureryen zül seiz
kwech all goude, mar d-eo red, ken a viffont fæzet, ha
ni on-unan skwiz oc'h hopal war-n-ezo.

Y.-K. KERZALE, Belec ar Zalet.

(Eur pennad all eur wech all).

OFEREN ANTER-NOZ.

Va mam, eme eur verc'hic iaouane, en eur zistrei a
oferen anter-noz, hag e doa mail da skei var ar c'hram-
pouez a ioa lavared d'ez-hi e divije d'he ascoan, va mam,
eur gouel caer eo eta gouel Nedelec?

— Ia, va merc'h eme ar vam, en eur bocad d'he
c'hrouadur, Nedelec eo caera gouel a zo var ar bloaz;
cleved he poa varlene da eontr beleg pa deuaz da ober
eun droiad d'ar gær epad miz east, cleved he poa anez-
han o lavared, pebez reus, pebez dispak avez great er
palez hag en noblans huel pa zeu en-ho eur c'hrouadur
benag da henel. Ar vombar, an drompil hag an delen
a guemer ho mouechou caera: leusked e vez fusennou

ken caer pe caeroc'h hag an hini a za bep bloaz da
allumi tantad Sant-Ian-ar-Biz ar c'hanoñion a vez lakeat
da grozal hag ar c'hleier da gellaza evit diskuez al leve-
nidigez. Eur dudi eo gueled al levedidigez-ze skrivet
var dal pep hunan. Da serr noz an holl brenester a zo
sclerijennet gand renkennadon goulo o tevi. Netra
bravoc'h da velad. Hogen, n'eo ket eur roue, nag eun
den a liguez huel a zo ganet, mez roue ar rouanez,
Mestr ar bed holl, ar Messias gueded aboue keit amzer,
Mab Doue en eur guir, diskennet en hon touez. Evel-se
en noz-man dre beyar c'horn ar bed e peder calonec
hag e caner gouerehou caer. Sao da zaoulagad; gueled
a rez-te e creiz bolz an env ar stered o luguern hag al
Loar o leviad ken gae a tra; gueled a rez-te he sclerijen
o para var an erc'h a zo duontu en hon raok? En heur
a vremen, kement christen a zo er bed a zo var sao:
o cleved mouez skiltuz ar c'hleier ar vngale ho deuz
lezed a gostez ho c'houk hag an dud eoz kemered ho
divesker a bemp bloaz var n'ugent evit ober ar pez hon
euz-nin great, mont d'an iliz da adori ar Mabie Jesus.
Kalz ho deuz bet hirroc'h ha diessoc'h hent da ober
evidom-ni: c'hoant a melle da lavared e teuffe levez
an env da n'em vesca gand joa an douar, hag e clever
c'hoaz a zioc'h d'hor pen mouez melodiuz an Elez o cana:
« Gloar da Zoue en huelded euz an envou ha peoc'h
« var an douar d'an dud a ioul-vad! »

— Abalamour da ze eta, ez euz allumet kement a
c'houlou caer en iliz ha caned gouerehou ken brao?!
Sellaouit eta; cleved a ran c'hoaz tud eruz aze varlere'h
o cana.

— An dud a zistro evel-domp-ni a oferen an anter-noz.
N'eo ketta eo brao; ha ne dout-te ket breman countant
da veza deut?...

— Penauz ec'h-hellit-tu goulen kement-ze digan-hen,
eme ar verc'h en eur ober eul lam ha cregui he brec'h
he mam en eur dridal. Oh! na me a vije bet drouk-
countant ouzoc'h, m'ho pije va lezet da goueked hag eat
eb-hon d'ar bouk evel varlene! guir eo, varlene edon
bianic hag eun draik fall; mez hirio...

— Gouerantet em boa dit he teujez gan-hen, eme ar
vam, en eur evessat hag he mantel viar a c'holoec mad
he diousoaz, hag en em gavan countant braz da veza
great ar pez am boa lavared ober, pa velab al hanout ken
evuruz ha pa c'heuz pedet Doue ken calonec. Goude holl
gouel Nedelec a zo gouel ar vngale muioc'h c'hoaz evit
gouel an dud vraz. Oh! pa edon enn elic evel-dit-te, ije
gaven deiz ebet ken caer ha gouel Nedelec. Ha c'hoant
a peuz hen lavaren dit, va merc'h? An douar a zo deut
em daoulagad p'am euz da veled o pidi ken c'hoantec
dirag craou ar mabic-bian, savet dirag aoter ar Verc'hez
ha peintet ker caer gand al leanezed. Oh! ia, mez me
a gar calz ar Mabie-Jesus ive: ma c'houessac'h pa eo
ken caer ha ken carantezuz er c'hraou, petra ne dile ket
beza er barados! N'eo ket eta, mammie, he tle beza
cant gouec'h caeroc'h ha carantezussoc'h hoaz en env?

— Ia, guir a levezet, va merc'hic kær, en eur starda
he dourn va boull-he-c'halon evel pa scoje re vuan,

rag credi selear a rea d'ez-hi beza clevet mouez eun eal.

— Mont a rent evel-se gand ho hent, eur c'hant pas benag araok ar vodennat tud a deue var ho lerc'h en eur gana gouerchou Santel. Kerkent, ar verc'h, en eur dremen eur groaz a jom cren en he sao, hag a ra eur jass var dourn he mam, en eur lavared : sell, emezi, en eur zont euz an iliz, em boa eun dra benag da c'houlou ouzoc'h, hag ho peuz va lakeat d'hen encounac'hat.

— Coze, va merc'h, mē da sellouo gant plijadur. Ahanta, pe seurt a peuz da c'houlou ouzin ? Ah ! caved eo gan-en, c'hoant an euz da c'houlou ouzoc'h, perag ar veleien a lavar teir oferen deiz Nedelec. An Aotrou Person goude beza oferenet da anter-noz, hen euz lavared ec'h oferenje adare da c'houlou deiz ha da zek-heur.

— Mad braz, va merc'h, joa a ra gan-en goueled e zout fur en iliz hag he sellouez piz ar pez a ve lavaret. Taol splē mad eta var ar pez ezan da lavaret d'id, rag marteze divezatoc'h, an Aotrou Person her goulenn digan-ez pa zigoro ar c'hatekis. N'euz mar ebed, gouech all ar veleien a lavare teir oferen d'ar goueliou braz evit rei muioc'h a lid d'ez-ho, hag evit ma vije essoc'h da bep-hunan caout oferen en deichou-ze : mez nebeud ha nebeud ar c'hustum caer-ze a zo eat kuit, hag hirio ar veleien ne leveront teir oferen nemed da c'houlou Nedelec. Gouzout a rez perak ?...

An Aotrou Person hen euz lavaret d'eomp perak, mez n'em euz ket dalc'het sonj : lavarit d'in adare, mar plich, mammic.

— Lavared e vez teir oferen deiz Nedelec, evit enori teir guinevez Jesus-Christ er barados, e Bethleem hag en ene christen. An oferen guenta hon euz clevet bremaic a zo evit enori guinevez ar Mabic-Jesus e Bethleem : lavared e vez da anter-noz, rag Jesus a voue ganed ive var dro an heur-ze : an eil oferen a vezo lavaret da c'houlou-deiz, a zo evid enori guinevez hor Salver en eneou christen a dle hirio communia : ar boneur-ze a pezo da vloaz, va merc'hic, ma plij gant Doue...

— Oh ! ia va mam, ha bep bloaz ive tre ma chommin var an douar... Caera dervez !... Ha mē meuz mall da veza great va fask kenta ! C'hoaz eun nebeudic misiou, ha da c'hoant a vezo torret. En-divez, an oferen-bred pe an oferen diveza, a vez lavared evit enori guinevez eternal Mab Doue, ganet euz he dad holl-galloudec, araok ma zoa na deisiou na bloavechou, na cantvechou, da lavared eo en eternite ; setu ar pez a lenne bremaic en da levric bian epad oferen anter-noz. An oferen-ze a gomans dre ar c'homzou-man : « Doue hen euz lavaret d'in, c'hui eo va Mab ; hirio em euz ho canet. »

— Mez, va mam, p'eo guir Jesus-Christ a zo mab d'an Tad Eternel, hen euz bet eta eur gomansamand ; perac eta e levereur, ez-eo henvel ouz he dad e pep tra, ez-eo ken coz hag hen ? Va zad ha ne d'eo ket crenfoc'h ha brassoc'h evidome ?

— Oh ! va c'hrouador, a respontaz ar vam en eur vousc'hoarzin, pe seurt a livirim-me dide ? Kement-ze a zo eur mister, ha ne dleomp ket cozeal e kenver Doue evel e kenver an dud. Gouzout a rez eo Jesus-Christ

Doe ha den assamez ; evel Doue ez-eo ar Verb Eternel. Mab unic d'he dad, hag hevel pen-da-ben outham. Kement hen euz he Dad, hēn en deus-han, nemed cous-goude beza tad, hag an Tad eternal ne d'eo hanvet tad, nemed abalamour m'hen euz a viscoaz ganed eur Mab, en evelep doare n'heller ket dispartia an eil euz eguile, na sonjal en unan eb sonjal en eguile. Ha setu perac Jesus-Christ evel Doue, n'en euz commansamand ebed. Mez evel den, ez eo bet ganet, en euz bevet, en euz gounzaved, ez eo marvet, en eur guir, ez euz erruet ganthan ar pez a c'hoarvez gand holl bugale Adam, rag m'hen euz kemered ho natur, da lavared eo ho sempladurez hag ho dicnez. Dishenvelidighez ebed etre mab Doue hag an den, nemed an hini lakeat en-homp gand ar pec'hed. Ha setu dizale daou-vil bloaz eo en em gavet var an douar ; evel den e n'euz bet eta eur gomansamand ; ar pez a ziskuez eo ken huel hag he dad evel Doue, mez izelloc'h evel dēn.

— Mez kement a lavarit aze, va mam, a zo goul tenval : biken n'hellin derhel sonj en traou-ze ; ne gredan ket kenebeud e c'houloufe an Aotrou Person. Kement-ze digan-hen : ma lavarfac'h d'in ebken histor guinevez Jesus-Christ... Gouzout a rit e sellouan ato gand levenez an histor gaer-ze.

— Mez a greiz va c'halon, va merc'h ; ha p'eo guir e caner ahont var hon lerc'h canticou Nedelec, greomp ive eun dra benag euz hon amzer : berroc'h e cavimp an hent, ha nebeutoc'h e santimp an ezen fresk euz ar beure. BODEUR.

Lizerou eur Boelec iaouank d'he zaou Vreur.

Naved lizer : DA RENAN.

Cetu goueliou pask : pa oan er seminer e voa er poent-ma ar vakansou ; nijal a reemp neuze ker gaē ha ker laouen evit dont d'hor parrezioù hag etonez hon tud da bourmen. Plijadur em euz c'hoaz o sonjal eno ; hogen n'em euz nec'h ebet d'ar vakansou : Eurussoc'h, en em gavan euz va frez labour ; ha koulskoude ret eo beza kreo ha yac'h evit herzel er gador koession en amzer fask. Aboan e kavomp an amzer da guemeret hor prejou. Ha pa n'em gaver e vezer ker skuiz, na heller debri kasi tam. Treutad a ra da vreur, Renan ker, hogen he galon a zo joaiuz mar ra vad d'he nessa evel m'en deuz c'hoant. Bet oun bet o kerc'hat an ofeau sakr e Kemper, hag em euz bet ar joa da velout kals euz ar veleyen a zo bet ganeen er seminer, rag ni oa kasi oll ar veleyen iaouanka, ar c'hureed diveza euz hor parrezioù. Mont a ran aliez en hent nemet epad an amzer fask. Pa ve ar mare ordinal ez an peb pemzek deiz da Blouvorn da velet N*** pehini zo potriner abaoue m'en deuz kuiteet X. e peleac'h a ree skoll deomp hon tri. Karout a ran a greiz kalon va mistri skoll. Sonch ec'h euz pegement e karen ar studi. Aboan e meze guisket va dillat, ma vezen crog em leor, ha me da zebri va zam bara en or lenn eul leor latin bennag. Na garen

nemeur ar c'hoari nemet eun heur bennag goude kreiste ha goude koan pa vezemp oll e kichen an tan en nozvechou goan gant hor c'herent. Ar pez a ra ar muia plijadur din oa selaou va zad o lenn deomp dioc'h an noz al leoriou skrivet gant ar guella skrivagnerien euz amzer Louis XIV hag euz ar amzer-man. Peguer kaer a ouie hon tad mad lenn deomp al leoriou-ze. Pegement a vadelez n'ho deuz ket bet evidomp-ni hor c'herent karantezuz ! ***

Degved lizer : D'AR MEMES HINI.

Hirio em euz amzer da gozeal eun tamik ganez ; ni a zo er mare an eost, hag epad an eost neuz ket kals a dud klan ; an dud divar ar meaz no deuz ket amzer da jom neuze en ho gueleou. Neuz den hirio var va zro ; eet ar re all da bourmen, beteg an aotrou person en despet d'he oad braz. Ha me a jom er guer ; va unan en em gavan em c'hampric dirag eul leor digor, ar skritur-sakr euz pehini oun kustum da vaga va speret ha va ene. Breman em euz amzer da studia ; ha ganez er c'hontrol e ma breman ar prez labour er maner abalamour d'an eost. Be em euz bet eur sonch vad pa meuz prenet leoriou, pa oan er seminer, gant an arc'hant e vije digasset d'in euz ar guer ; rag breman em euz beac'h avoalc'h pea va fansion d'am ferson ha kavout eur soutanen hag eur rumm boutou. Mont a ra oll ar pez am euz gant ar heorien, hag evit pea evit skolaerien ha kloarejen baour, pea skoll evit merc'hedigou paour e ty ar sœurez, rei prizou d'ar vugale ar c'hatekis ha me oar me ? bet oun bet beteg presta pemp kant lur eur veich evit sikour prena eun den iaouank kouezet d'ar sort, ha pehini oa necesser braz d'he dud. Hoguen nec'h em euz bet a guement-se abalamour d'ar boan braz em euz bet da bea an dle-ze. C'hoant em euz da vervel paour, heb eun diner var va hano, hogen na fell ket din kaout dle ebet gant aoun da ober gaou oc'h unan bennag. Gouzout a ran penaoz va breudeur no deuz ket a zonch da gavout netra var va lerc'h ; ha pa rafen dle e paefoc'h anezo ; hogen kassaat a ran an dle ; ha furoc'h e vezin hiviziken. Paēt em euz ar pemp kant lur ; mez beac'h zo bet oc'h ho fea. *** A. DE M.

MISSION KERNOUEZ.

KRISTENIEN a Ghernoues,
Unanomp hor mouezioù ;
Kanomp oll gant levenez
Da Zoue meuleudiu :
Pa zeo deuet d'hor ghervel
D'eur mission benighet ;
Derveziou kaer a santel
Re vuan oc'h tremenet !

Oh ! pegher mad eo beva
E skeud an auteriu !
Peghen dous eo studia
Va Doue, o lezenou !
Eur sizun ous o karet
A rent muioc'h laouen
Eghet dek vloas tremenet
E kreis ar bec'heurien.

Kerkent a ma c'houloue
An deiz varnomp bemdez,
Cloc'h hon Iliis hor galve
Gant e c'haea mouez ;
Hon tiez a choume gouillo,
Sioul hor parkeier
Ne sounent mui gant ekleo
Hor labourou pounner.

Ar heol o vont da guzet
Hor guele en Iliis,
C'hoas enni daoulinet,
Disourei, drant, diskuis :
Ne ket ebken gant bara
E vev etrus an den,
D'hon ene evit beva
Eo ret ar skol ghristen.

Tad Maner, Michel Nobletz
Sklerijen Breiz-Izel,
D'hon tud kos gant karantez
'Teskac'h an Aviel ;
Trida dle oc'h eneou
O velet o redek
Var o lerc'h, dre o roudou,
Beleyen kalounek.

Koumsou Doue ro sklerijen
D'ar sperejou dallet,
Rei o deus great souten
D'hor c'halou dinerzet,
Avichou' vel ar gurun
Kuezet varnot, pec'her,
Ne ket evit da vruzun...
Sao da ben, kred, esper.

Bemdes en e barkeier
Dirak krouer ar bed-mā
Penaus ve eul labourer
A ne gret-fe enna ?
Ne c'hell ada eur c'hreunen
Eb gortos heol a glao,
Penaus ne rofe kredeh
D'ar Mestr o digasso ?

Caloun an den so re vras
Evit beza karghet
Gant plijadurioù divlas
Gant ureou ar bed :
Kristen, da esperansou
Pa zout divroet aman
Dle mont betek an Envou,
Guir vro an den a boan.

Doe, gheuet dudius,
Ni fell deomp o karet ;
Ni fell deomp karet Jesus
Ag e vam benighet ;
O karet en hor joaiou,
O karet en anken,
O karet en oll stajou,
O karet da viken.

Kristenien a Ghernoues,
Choumomp oll unanet ;
Ra reno ar garantet
En hor parres bepret :
Tadou, mamou, bugale,
Mistri, servicherien,
En em garomp e Doue ;
Ennez an ti kristen.

Hor c'herent eus an Envou
A dle drida gant joa,
O velet an oll grassou
A guez er barres-mā ;
Ag an Anaouñ glac'haret
Diganeomp a c'houlou,
Ni o c'herent, mignounet,
Hor sicour, eur-beden.

Kenavezo, beleyen,
Ni ro deoc'h hor beanos ;
Ni a choumo da viken
Stard e feiz hon tud-c'js ;
Pa skoio var hon ene
Tauliou an drouk-speret,
Ni redo varzu Doue
Gant hor Pastor karet.
C. ha S.

Hano ar Zant evit ar Sizun-ma.

- DILLUN 24, KERZU. — Derc'hent pe iun Nedelec.
DIMEURS, 25. — Gouel Nedelec. Guinevez hor
Zalver Jesus-Christ.
DIMERC'HER, 26. — Sant Stefan, kenta-merzer.
DIZIOU, 27. — Sant Ian, abostol hag avieler.
DIRGUENER, 28. — Gouel an inosantet santel.
DISSADORN, 29. — Sant Thomas, escop ha merzer.
DISSUL, 30. — Ar sul en eusvet Nedelec.

An Aviel hirio :

Tad ha Mam Jesus a ioa souezet o clevet ar pez a lavaret anezhan. Ha Simeon ho bennigas, hag a lavarās da Vari he vam : Ar buguel-ze so deut evit coll hag evit savetei cals tud en Israel ; ha cals a enebo outhan ; hag oc'h ene oc'h unan a vezo treuzet gant eur c'hileze a gueuz, evit ma vezo dizoloet ar sonjou euzet eus a gals calonou.

Ar brofetez Anna, merc'h da Fanuel, eus a drihu Azer, a voa eno ive. Houma a voa coz bras. Bevet e doa seis vloas epken gant he fried, azaleg an deiz m'oa dimezet dezhan plac'h iaouanc. Hag oa chomet intanvez beteg an oad a bevar ugent vloas. Ne dea cazi morse eus an templ, eleac'h ma serviche Doue nos deiz dre ar iun hag ar beden.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezouneec.

O veza digouezet ive-ta d'ar memes heur, en em lakeas da veuli hon Aotrou J. C., hag e comze anezhan da guement hini a c'hortoze daspredediguez (Redemption) Israel.

Pa o devoa great kement a voa gourc'hemennet dre lezen-Doue, e tistrojont da C'halilee d'ho c'hær a Nazareth.

Hoguen ar buguel a greske hag a greea; leun oa a furnez, ha gras Doue a voa enha.

SANT LUCAS II. 33. G. M.

KELEIER.

An Aotrou Coquereau, an hini a voa e penn be-leien an dud a vor, Chaloni a Sant-Denis hag ive a Guemper, a so maro.

Hano zo da lacat da Escop en Aljer, da zalc'her leac'h an Aotrou Pavy, ar Prins Bonapart, beleg.

Ar c'hazetenou a gomz ato eus a gals a dud a reng huel pere a ia da Rom euz a bep corn a Frans, evit en em lacat e servich ar Pap.

Ar mammou na dlesent morse lezel kisier war wele eur c'hrouadur bian, na soken er gambr pe enn ti: anez ec'h hell c'hoarvezout ar pez a zo c'hoarvezet n'euz ket pell. Eur vamm e doa losket enn he c'hambr eur c'hrouadur daou viz, hag hen cousket mad; hi oa eat da brena eunn dra-bennag evit ann ti. Pa zenaz enn dro, ne oa direnket netra er gambr hag he faotr bian a oa evel m'e doa hen lezet; ar c'haz hepken a ioa war ar gwele, o poeza war beultrin ar c'hrouadur. Ar vamm hen cassaz kuit, hag o credi e oa he map bepred cousket, e sonjaz kemer anezhan enn he divrec'h. Hoghen ar c'hrouadur a ioa drougtivet ha gwen evel eun tamm coar. Kaer e doa hen sevel hag hen finva, na zigoraz mui he zaoulagad: maro oa! Moughet a oa bet gand ar c'haz o c'hwaska war he beultrin ken na helle mui caout he alan. Y.

Er sizun-ma, ervez cazeten ar Meziou, eo eat an ed var gueraat. Er zizunveziou all oa bet tost dezhan dont var he guiz. Cals ed a ioa er marc'hajou, hag ar re so o prena, ar re a ra kenverz ed, a felle dezho profita a guementse evit lacat ar priz da zisken. Guechall ne vanket morse d'ho zaol pa en em gave ed aleiz er marc'had evelse; rag an dud divar ar meaz ne anaient nemet ho c'hear vare'had, ne zontent ket er pez a dremene e leac'h all. Hirio e c'honzont penaus ne ket tud eul leac'h eo a dle ober lezen, ha penaus an ed a dle beza ker dre ar Frans oll, pe beza marc'had mad dre ar Frans oll ive. Hirio eo eas d'an oll gouzout penaus ez a var an ed e leac'h all, ha ne vezo ket guelet, mar kerer, an ed marc'had mad en eur c'harter, ha ker en eur c'harter all.

Bez'ez eus tud var an douar hag o deus eun ijin bur-zuduz evit espern ho arc'hant. Setu ama unan hag a alfe servichout da skuer var guementse. Er c'heriou hag er bourcou e veler var ar mogneriou azioc'h doriou an tiez, renkennadou lizerennou scrifet evit diskuez petra a verzer pe a gaver en tiez-ze, hag avechou zoken e caver eno peziou caer scrifet e lizerennou bras.

Eun dervez, o tremen dre C... eur beacher a gavaz eno eun anaoudeguez d'ezhan, an aotrou Z..., crog he dorn he vap, eur potric c'huec'h pe seiz vloaz, hag o tiskuez dezhan al lizerennou a voa azioc'h dor eun ti.

- Petra rit-hu aze-ta, eme ar beacher?
- Lavaret he guentel d'ar potric-ma-ta!
- Lavaret he guentel?
- Ia, ar potric-ma ne voar ket c'hoaz he lizerennou, ha pa zeo guir ema al lizerennou scrifet ama var an tiez, me ne ouzoun ket perag ez afen da zispign pemp pe c'huec'h guenneg evit prena eun A. B. C. d'am map.
- Pe seurt lenn a oufe ho map da zeski evit eun nebeudig gueriu a gafaze var ar mogneriou?
- Oh! er vered aze ez eus renkennadou mad da lenn var meur a hini eus ar beziou, ha zoken var lod anezho e cavo eur guer latin bennag.
- Ha setu penauz map an aotrou Z... a raio he studi oll, a zesco marteze zoken al latin ep m'en devezo bet izom he dad da brena levr ebet dezhan!

Jakez ar Ber a ioa ganet eur map dezhan er sizun all. Pa voue meneg da vadezi ar buguel, e voue goulennet digant an-tad pe hano a felle dezhan rei d'he vap.

- C'hoant am eus, eme Jakez, e ve roet d'ezhan hano he dad-coz.
- Ha pe hano en doa he dad-coz?
- He dad-coz a ioa haavet Speret.
- Roet e voue hano an-tad-coz d'ar buguel, ha setu penaus map Jakez a zo he hano hag he lezhano *Speret Ber*.

ALI. — Ar re o deus etre ho daouarn arc'hant Breuriez ar Feiz, so pedet d'ho digas da Guemper kenta ma c'hellint, rag ma zeo deut ar mare da renta ar c'hontchou. G. M.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 15 Kerzu.		PONT'NABAT — 15 Kerzu.	
Priz ar c'hant liour.		Priz ar c'hant liour.	
Guinis....	46 lur, 42 c.	Guinis....	46 lur, 04 c.
Segal.....	40 lur, 25 c.	Segal.....	40 lur, « c.
Eiz.....	8 lur, 32 c.	Eiz.....	40 lur, 38 c.
Ed-du....	7 lur, 52 c.	Ed-du....	6 lur, 98 c.
Kerc'h....	40 lur, 46 c.	Kerc'h....	40 lur, 38 c.
Avalou-douar	4 lur, 00 c.	Avalou-douar	3 lur, 75 c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand AR. DE KERANGAL, Moulter an Escopi.

Eun Abonnament d'ar Gazeten à goust:

Evit eur bloas.....	DAOU SCOUET.
Evit c'huec'h miz.....	EUR SCOUET.
Evit tri miz.....	C'HUEC'H REAL.
Eur gazeten ebken.....	DAOU VENNEG.

Ar baecamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Belec'e Kemper.

Ar paecamant a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonnamant a guementse e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 29 Kerzu 1866.

Ar bloas 1866 a ia da lavaret kenavezo. Mont a ra da zisken divar an tron evit lezel eur bloas all da ren en he leac'h. Evelse e tremen pep tra var an donar. An tremen-ma eus a eur bloas d'eun all a ro leac'h da galz a laouenidiguez etouez an oll, pe da viana couls lavaret an oll o deus mall da velet eur bloas nevez o tont. Kementse a ro tro da zonzal ne deo ket az gouzout petra fell d'an den, pe ne voar ket nemeur an den he unan petra fell dezhan.

C'hoant a zo ato da vont var araog. Ne de ket ar vugale epken hag ar re iaouane; mes c'hoaz an dud en ho guella oad ha zoken ar re goz a glever oc'h huanada etrezeg an amzer da zont, o deus mall da velet ar pez zo c'hoaz avechou pell dioutho.

Dioc'h eun tu all, pa zonzjer en amzer dremenet e caver ez eo eat re vuan ebjou; ar maro a gaver a dosta re vuan. Clevet a rer cals o keuzi d'ho iaouankiz, d'ho amzer dremenet, hag hi o c'houlouen gouscoude ma velint ar c'henta'r guella ar pez ne ket deut c'hoas beteg enho. Lavaret a eller o deus er memez amzer c'hoant da vont araog, ha c'hoant da jom a za pe zoken da zont en dro. Petra da zonzal a guementse?

Me gred ec'h eller lavaret ez euz e pephini ac'hanomp daou zen; unan hag a anavez avoalc'h ez eo traou ar bed-ma re zister, ne ellont morse leuni he galon; goude m'en deus bet ar pez a c'hoantea, goude m'eo digouezet beteg enha ar pez ma c'huanade var he lerc'h, e vel selear e vane ato eun dra bennag dezhan; hag evelse en deus ioul da vont ato var araog, da glasc ato ar pez a elfe he gontanti, da lavaret eo, da glasc Doue, ar mad dreist an oll madou, pehini epken a ello leuni he galon; eun all hag en deus c'hoant da gaout he voalc'h var an douar, ha ma n'en deus ket a feiz, ma na esper netra goude ar vuez-ma, ne all ket ep rann-galon guelet o vont ebjou dezhan, o tec'bet diouthan, an traou ma en doa laket he eurusdet enho; ha mar en deus feiz, ar

zonzh eus ar maro hag eus ar pez a vezo goude a den d'he strafuilla, ha ne eil ket, ep encrez, guelet o tostet an dervez-ze pehini a dle lamet digantha kement en deus caret, hag he deleur etre daouarn he varner.

Da lavaret eo, e daou c'her, eun ene mad a gaf re hir ar vuez-ma, hag ar pec'her he c'haf re vor.

Mes setu ni pell dioc'h ar bloas nevez hag he laouenidiguez. Distroomp eta ha leveromp adarre ez eo henez eun deiz laouen. Evit an oll? Aoun am bele da lazia oc'h he lavaret. Bez'ez eo eun deiz a laouenidiguez dreist oll evit an tadou coz hag ar vugale vian; evit an tadou coz pere a zrid ho c'haron hag a ve lavaret a iaouane o velet ho bugale vian evel eur gurunen en dro dezho; evit ar vugale vian pere a zrid ive ho c'haron pa o deus gallet caout eun tamic delou mad. Ar pez a ziskuez penaus ar muia laouenidiguez er bed-ma so evit ar re so nevez deut var an douar, hag ar re so deut tost ar mare dezho da vont ac'hann. Rag evit ar re all, ne gretten ket lavaret e ve ato ar bloas nevez eul levenez evitho.

Cals a ia da velet Per, da velet Paul. Ar c'hiz eo, ha mont a rer laouen a ziaveas, mes avechou ar galon e deus nebeut a berz el laouenidiguez-ze, ha meur a hini marteze a vije couls ha guelloc'h gantho chom er guar. Per ha Paul ive marteze a vije couls gantho caout nebeutoc'h a dud da zigumeret, ha marteze zoken e vije guelloc'h gantho ne daje den var ho zro.

Petra fell deoc'h? Evelse ema ar bed. Ama pa en deuz eun dra eun tu brao, en deuz ato ive eun tu divalo. Lod eus an dud goueziec a lavar penaus an delou mad ha guiziu all ar bloas nevez a deu deomp digant ar baienet. Me grette kentoc'h ne deu deomp digant ar baienet nemet ar pez zo a zizurs en deiz-ze; ar pez a so a vad enhan a dle dont deomp eus a hueloc'h. Abaoue ma zeo crouet ar bed, eo bet ar c'hiz, pa veze echu eur bloas da gomans eun all. Piou a alfe lavaret ne dea ket Abel ha Cain zoken da reketi bloavez mad da Adam ha da Eva? piou a alfe lavaret ne rea ket ar memes tra bugale

Noe d'ho zad? Marteze zoken eo da eun deis kenta ar bloaz eo e vanças Cam a respet d'he dad, hag e tennas he vallos varnezhan ha var he lignez!

Hoguen lezomp al lavariou-ze ha comzomp a zevri. Ar baiadet, p'eo guir em eus great meneg anezho, o devoa evit an deis kenta ar bloaz eun idol hag en doa diou zrem pe diou vizach, unan hag a voa skeuden an amzer dremenet, hag eben skeuden an amzer da zont. Eur c'hristen ive a dle teleur eul taol lagad var ar bloas so echu evit guelec penaus en deus he dremenet, ha var ar bloaz a zeu evit evessaat penaus e tle he dremen. Izom en deffe zoken eus eun trede drem pe bizach, me lavar e tlefe sonjal en amzer a vrema evit guelec e pe gont ema gant an Aotrou Doue.

En tiez marc'hadour e regler bep' bloaz ar c'hont-chou evit gouzout penaus ema ar bed gant ar c'henvers en ti. Eun tiec a dle ive evessaat bep bloas penaus ema an traou gantha, hag hen zo dindan he veac'h, hag hen so treac'h d'he veac'h, da lavaret eo hag hen so treac'h ar gounit d'an dispign en he di, hag hen a jom eun dra bennag etre he zouarn. Eur c'hristen ive a dle evessaat hag hen a zatum ive bep bloaz eun dra bennag aben he varo, ma na fell ket dezhan mont eun deiz, he zaouarn goullou, dirag he varner. G. M.

An Tad Santel ar Pap a ia, a leverer, da zavel pevar escopti nevez er Stajou-Unanet, en Americ. N'eus ket c'hoas pell ne voa nemet eun escopti er vro-ze, escopti Baltimor; ha brema e vezo eno daou escopti varnugnet. Guelec a rer ez a ar feiz var gresc er vro-ze.

Divar benn ar pedennou gourc'hemennet, er sizunveziou tremenet, gant an eskibien evit hon Tad santel ar Pap hag au Iliz, eur gazetenn a goms evelen:

Mouez an Eskibien so bet clevet dre ar bed oll christen. Evit senti oc'h ar vouez-ze an oll gristenien fidel so bet guelec o tont a brez d'an ilizou da bidi ha da huanadi. Biscoas gouel ar Conception Didach n'oa bet great gant kement a zevotion. En oll chapelou, kristenien a bep oad, goazet ha merc'hed, a dostea a vandennadou oc'h an daol santel. Chapelou Mam Doue ne allet ket finval enho kement a ingroez a ioa var ho vro. Pelerinet a velet o vont, ep distag ebet, etrezeg an ilizou eleac'h ma peder ar Verc'hez. Ar memes sonch a voa e speret an oll, ar memes c'hoant en oll galonou, ar memes esperans en oll eneou. Oll e credent e selaouje Doue ho fedennou, hag e raje kentoc'h burzudou evit lezel he Iliz santel ep he ziconr.

He lavaret a ellomp eta ep aoun da lavaret re; comzou an eskibien ha prez an oll gristenien fidel da zenti outho o deus diskuezet peguement a feiz so etouez an dud. Bez'ez eus martezé ha n'o devezo ket evessaat oc'h kementse. Ar pedennou hag ar re a bed ne reont nemeur a drouz, ha cals tud so pere so ken tregasset gant traou ar bed, ma zeo red ober

calz trouz en dro dezho araog ma velont ar pez a dremen.

Cridi a ellomp ne vezo ket bet great en aner kement a bedennou, ha ne vezo ket tromplet fizians ar gristenien. Doue pa vezo deut he heur a gomzo. Rei a rai da glevet ar strael eus he gorun pe ar vouez eus he drugarez, hag e tifenno he Iliz hag he Vikel pa blijo gantha.

ALJER. — En Aljeri ez eus maro pemp eus ar c'hoarezet (sœurs de charité) a voa eat di da guemeret sourei eus an dud clan gant ar c'holera. Taguet ho unan gant ar c'hlenvet e creiz ar skuider eus eur vicher kerpoanuis, Doue en deus ho galvet da eur vuez eurusoc'h. Setu penaus e ro ar merc'hed caloneg-ze ho buez evit ober vad d'ho nessa.

MARSEIL. — Eus a Varseil ez eus diblasat adarre tri missioner, tri gabucin, evit mont da brezeg an Aviel d'an Afric, e bro ar Gallazet. Unan eus an tri missioner so eus ar vro-ze, hag a voa deut e Frans da scolia bremaez eus tri bloas. Ne deo c'hoas nemet abostoler, hag he hano so breur Raphael. N'eus ket gortozet ma vije beleg evit he gas etouez he guenvroiz, eleac'h ma rento cals servich d'an daou vissonier all; cals e vezo cœssoch de zho beachi adreus ar broiou-ze pa vezo eur morian, eun den eus ar vro en ho banden.

Tud ar c'harteriou-ze ne garont nemeur tud ar vro-ma; dizfiziout a reont anezho ha zoken ho c'hassat, ha kementse abalamour ma o deus aoun razho. Pa velint ar breur Raphael pehini a so ens ho goad, o vont en dro d'ho c'haout desket mad, christen calonec, cre ha iac'h, o devezho cals muioc'h a fizians er vissonierien estren.

ALEMAGN. — Ar c'hazetennou a gomz eus a varo Dom Miguel bet Roue e Portugal. Maro eo evel eur guir gristen, en eur boket d'he grucifi. He varo so bet trum, ha n'en deus ket gallet receo he reiziou diveza; mes en derveziou araog oa tosteat oc'h ar sacramanchon, hag evelse ne ket sammet gant ar maro ep pouerchiaz ebet. Beteg an huanad diveza en deus diskuezet he feiz hag he fizians e Doue.

Scrifa a rer deomp eus a Sant-Briec, oc'h hor pidi da lacat er gazetenn ar pez zo ama varlerc'h.

Ar c'habreuz an Itron-Varia-a-Esperans.

Youl Pii IX.

Var ar mare da velet o tigouezout traou hag a dle lacat nec'het braz an oll eneou a zalc'h mad d'ar feiz, Pii Nao pehini en doa savet diraog Arc'habreuz Itron-Varia-a-Esperans, a scrife gant he zorn benniguet, var gaiserou ar Vreuzier: « Ouspenn ar pedennou a so savet verzu an Env bete vrema evit ar Frans hag an iliz santel, ra deui ar re so ho hano er Vreuzier-ma da bidi ha da aspidi muioc'h mui evit silvidiguez ha peoc'h ar

bed catolic. » Hag o rei ar skuer evel ma roe da anaout he c'hoant, Pii Nao, hag an oll gardinalet var he lerc'h, a lekeas ho hano er Vreuzier, evit diskuez an iout o deus da velet oll vugale an iliz, kement a so douguet dezhi, o kemeret perz en emgleo didrouz-ze a bedennou a rer d'an Itron-Varia-a-Esperans.

Eur sizunveziou bennag goude, Arc'habreuz an Itron-Varia-a-Esperans e devoa e Rom eul leac'h evit en em assambli. Pii Nao a felle dezhan kementse; hag hag ar c'hardinal Patrizzi, vikel ar Pap, a lakea moulla eur scrit a behini e tennomp ar pennad-ma:

« E pep amzer, an iliz santel catolic, hor mam, hag he bugale guer desket gantha a roas da Vari eun hano dous menbet, oc'h he guervel ho sperans: *Spes nostra, Salve*. Mes pa gresc an danger en draonien-ma a zaelon deut da veza tre eun dachen a vrezel; pa ranc an iliz hag he bugale stourm a zevri oc'h eun niver braz a enebourien gallouds, neuze e salud c'hoas gant muioc'h a fizians hag a garantez an *hini* so lakeat da anterouez etre he map divin ha ni, hag a so deut da veza evelse hor brassa esperans.

« Ne deo ket ep abeg eta eo falvezet, en derveziou-ma ken trubuilus, d'hon tad Santel ar Pap Pii Nao, pouza an oll gristenien da lacat muioc'h mui ho oll fizians e Mari, evit ma vezo an iliz treac'h, evel ma zeus kement a dud oc'h her goulen, evit ma en devezo ar bed catolic ar peoc'h ker c'hoanteet, evit ma tistroio ar bec'herien a galon ous Doue, evit ma c'herruo pepini, hag an oll, er silvidiguez eternal.

« Rag ze, goude beza aprouvet ha savet e Sant Briec, e Frans, eur Vreuzier devot a voa digoret eno dindan hano ha patroniach an Itron-Varia-a-Esperans, ar Pap he zave d'ar reng a Arc'habreuzier. »

Ho pidi a reomp da lacat hoc'h hano etouez an dibap soudardet-ze da vap Mari....

(Ama e voa merket petra voa gourc'hemennet ha pe seurt induljansou a voa roet en eur fonta ar Vreuzier e Rom.)

En derveziou varlerc'h, jeneral ar Gabucinet a lakea scrifa da ihs ar Gabucinet a Sant Briec eleac'h m'ema chapel hag aoter ar Vreuzier hag e pelec'h eo bet savet da guenta: « Ne ket mil ha mil, ues deg mil ha deg mil eo e scrifomp hanoiou var gaiserou an Arc'habreuzier. »

En hano Pii Nao eta, hag eus he bers, eo e scrifomp d'an oll gatoliket. Ra deuint d'en em unani gantha, da zigas deomp ho hanoiou, ha da rei eveldeomp ho guer da lavaret, noz ha mintin, eur beden d'an Itron-Varia-a-Esperans evit mad an iliz santel, evit silvidiguez ha peoc'h ar bed. *Salve Regina. Sub tuum*. Hag hen a aller pidi evit eun dra hueloc'h, noploc'h, hag a ve muioc'h a izom anezhan, hag ous pehini gouscoude e stourmer kement brema? Crogomp en arm, er benveg gant pehini e c'hellomp lacat an oll galloudeg da ziscuez ijin ha ners he vrea'h. Pedomp... pedomp ar verc'hez didach, pedomp an Itron-Varia-a-Esperans, hag oll gounnar an ifern a droio en he enep he unan, hag an dud fallagr a

goezo mez varnezho, hag al lealdet hag ar peoc'h a renou var an douar, hag ar bed a vezo saveteet!

Ra ielo ar c'halvaden-ma bete gouelet an oll galonou christen! Ra deni oll guir vugale an iliz da anaout peguement a c'hounessent ho unan dre an unvaniez-ze a bedennou!

Eun oferen a leverer bemdez, ervez *intention* ar vreudeur beo ha maro.

Bep sizun ec'h en em assambler, e peder ervez an izom, ec'h erbeder. etc.

Bep tri miz, servich evit ar vreudeur hag ar vadobourien eat da anaout. Bep bloaz e casset d'ar vreudeur, da heb banden a ugent pe ouspen, eun dra evit derc'hel sonch (*Souvenir*) hag eur scrit evit diskuez e pe stad ema ar Vreuzier. Indulgansou ep niver a zo; induljansou leun ha re all.

Ra deui eta an oll, beleien ha kristenien fidel, en hano Pii Nao, da skigna ar beden d'an Itron-Varia-a-Esperans.

An Aotrou Prudhomme Ghaloni, e Sant-Briec, so c'ant guet eus ar Vreuzier. G. M.

AR ZUL.

(NAVED PENNAD).

Lod ne labouront ket ho-unan, da zil, mes ober a reont d'ho zud labourat, ar pez a zo ker braz pec'hed.

Ia, beza ez euz ha ne labouront ket ho-unan, da zil, mes ober a reont d'ar re a zo didann-ho, d'ar re a zo en ho c'harg labourat, ag e sonj d'ezo, mar plij beza dibec'h bras dirag an Aotrou Doue, war digarez ne labouront ket ho-unan.

Mes klevit ama, c'hwi paotred a re a spered pe a re neubud, eunan a zaou, a lavarfen d'ezo, ma em beffe an honor da gomz out-ho, klevit ama: Ha n'ouzoc'h-hu ket ez eo ker braz pec'hed deoc'h lakaat ar re zo didann-oc'h, ho pugale, ho servicheryen ha re-all, da labourat da zil, evel ma vez d'eoc'h labourat oc'h-unan? An tad a gas he vugale da laerez, a bec'h kement evel ma yaffe da laerez he unan. Ar memez tra euz ar zil.

Ia, kemment taol labour a vezo greet, da zil, klevit se mad, c'hwi tadou, c'hwi ezac'h, c'hwi mistri, c'hwi antreprenourien ha re-all, kemment taol labour a vezo greet, da zil, dre oc'h urz, war ho kourc'hemenn, a zo en ho kont; c'hwi a responto ag a zougou ar boan euz anezo oll evel ma oz peffe ho greet oc'h-unan. Doue, en he c'houre'hemenn war an deiz santel, ha n'en deuz-hen ket lavaret d'eoc'h sklær penaöz e tifenn ouz-oc'h ha labourat oc'h-unan, d'he zeiz, ha lakaat da labourat ar re a zo didann-oc'h? Klevit he gomzou:

« Te a labouró, » eme Doue, « epad c'houec'h de-
« vez, ag a raio kemment az pezo da ober a labour epad
« ar c'houec'h devez-se. »

« Mes d'ar zeizved devez, » eme-z-ha, « e ma ar

« zabat, an deiz a hean, deiz an Aôtrou da Zoue. D'an deiz-se ne ri taôl labour ebed, na te, ozac'h, na da vab, na da verc'h, na da vevel, na da vatez, na da loen, nag an diavezyad pe an divroad en em gaffe « en da douez. »

Ar c'homzou-ze a zo sklær, neget-ta ? Koulskoude, setu ama eun tad ag a lavar : « Evid-on-me fad ne la- « bouran ket da zûl. A-wechou, evid gwir, e lakaan « ma faôtrez da ober tammou ; mes... »

Mes petra ? Ha ne glevit-hu ket mouez Doue o krial d'eoc'h : « Ne labouri ket da-unan, da zûl, te tad, na ne « lakai ket ivez da vugale da ober, nan, na da vab, na « da verc'h : (neque) filius tuus, (neque) filia tua ? »

Setu ama eun all, eun ozac'h mad, pehini en deuz didanu-ha mevelen ha mitizyen. Hem-ma ne labour ket ivez da zûl. War ar pemdez zoken ne gar nemeur hen ober : penvidig a-voalc'h eo evid allout tremen eb labourat re. Evel ma eo eun tad karantezuz, ne ra ket ivez d'he vugaligou labourat da zûl, na zoken re war ar pemdez. Mes n'ed eo ket ken tener ouz he zervicheryen na ken skrupuluz en ho c'hênver. Ar re-ma a vez greet d'ezo labourat mad war ar pemdez (n'en deuz ket tor e kemment-se), mes da zûl ivez e ra d'ezo aliez labourat war an distera digarez. Ama en deuz tor : rag Doue hen difenn out-ha ; krial a ra d'eza diwar lein menez Sinai : « Ne labouri ket d'an deiz em beuz miret evid-on, na « te da-unan, ozac'h, na da vugale, na kennebeud da « zervicheryen, nan, na da vevel, na da vatez : (neque) servus tuus, (neque) ancilla tua. »

Setu ama eun all o vont, da zûl, da gas eur c'harrad louzou (lugumach) da gæriz da ober ho zoubenn ag ho frikoyou. E ma var war he garr, astennet a ed he gorf, eur paôtr dizoursi euz aneza. Gwech e c'houiban, gwech e kan, ha pa zeu c'hoant kousket d'eza, en em ro da gousket. He varc'h, gouizyeg mad euz an ent, a ya attao, eb paouezi morse, eb troi nag a zeou, nag a gleiz. Ag euz a Rosko e vez ?

Eur c'hristen skrupuluz, o tremen, a zihun ma den, en eur lavaret : « Penaoz ! ma den mad, da zûl ! Da zûl « o vont gant ho karrad louzou e kær ! Gouzout a rit eo « difennet labourat da zûl ! »

« — Me ! me ne labouran ket da zûl ! Pedare labour « a raan-me ama em gourvez war ma c'harr, lavarit « d'in ? Me em boa greet ma c'harg dec'h d'abardaez. « Hiryo em beuz bet an oferenn vintin em parrez. En « distro euz ar bourg em beuz sternet ma marc'h en « eur zailladenn, ha setu me en ent. »

« Nan, me ne labouran morse da zûl. Va marc'h, ne « lavaran ket. Mes, ha difennet eo lakaat an anevaled « da labourat da zûl ? An anevaled n'ed int ket tud ; an « anevaled n'ho deuz ket badizyant war ho fenu ; an « anevaled ne yaffont ket d'ar baradoz. Evel-se, ne « welan ket perâg e vez pec'hed lakaat anezo da la- « bourat da zûl. »

Mes Doue a zav ivez he vouez ag a gri da ma den re speredeg ha re ziskrupul : « Nan, ne labouri ket da-

« unan da zûl, na ne lakai ket kennebeud da anevaled « da ober : (neque) jumentum tuum. Me an Aôtrou da « Zoue a ro d'it ar gourc'hemenn-ze : Ego Dominus. »

Setu ama eun all. Hem-ma, mar plij, a zo e karrôz. Saludi a raffom-ni aneza ? Evid pa dremen dre ruyou kær, e weler an oll o tenna ho zok d'eza ag o stouñ he teg an douar : arc'hant braz en deuz, a leverer. Ar pez a zo sûr, e penn eur mekanik kaer e ma. Beza en deuz bemdez o labourat gan-t-ha eur vandenn vad a dût, daou pe dri c'hant etre goazed ha merc'hed, ag ar mekanik a ya en dro sül-voel-pemdez. N'ez euz ket a amzer da goll. Ma den — Monsieur Arc'hanteg a reer aneza, — en deuz c'hoant da zont penvidig braz e neubeud a amzer, ag evel-se e fall d'eza lakaat piz an amzer da dalvout, ar zûlyou ag ar goueyou evel an devezyou pemdez. Pa en devezo dastumet arc'hant a-voalc'h, e ma e sonj prena danvez war ar mæz, eur maner braz benâg gan he verourion, e lezo neuze he mekanik gan eun all da ober he fortun evel-t-ha ag en em denno d'he vaner gan he vadam (itron) ag he zaou vugel.

— Daou vugel en deuz ? — N'en deuz nemed eunan evid c'hoaz, eur verc'hig, mes c'hoant en deuz ivez da gaout eur paôtr, ha neuze en devezo a-voalc'h. Seul vianoc'h e vezo ar vandenn, c'hwi gompren, seul vrasoc'h lodenn e tigouezo da hep ini.

Lavaret a reer koulskoude en amezêgez penaoz eo brao da Vonsieu Arc'hanteg dastum madou braz d'he vugale amzavet, epâd ma renk ar vro maga en hospitalyou ar re diamzavet : rag gwelet ez euz bet meur a blac'h o kuitaat he di ha ne vizont ket ho-unan o vont kuit.

C'hwi gompren penaoz Monsieur Arc'hanteg ne ya na da goves na d'an oferenn. Traou evel-se a zo evit-ha sorc'hennou groac'hed. Poan a ra d'eza zoken gwelet eur beleg dirâg he zaou-lagad, petra benâg ma voar kaôzeal deread out-ho, pa en deuz da ober gan-t-ho, evel pa voe badezet he verc'h vian. Badezet eo bet ivez ar gevez ! Mes penaoz e vezo-hi savet !

Monsieur Arc'hanteg eta a ra d'he labouridi labourat sül-voel-pemdez. En amzer genta lod anezo a vanke da vont d'ho labour da zûl (skrupuluz e voant c'hoaz ; bre-ma n'ed int mui). Anttonôz, pa erruent, e vize gullen-net digan-t-ho :

« Ac'hanta ! penn-mûl, e pe-lec'h e voaz-te chommet « dec'h ? »

« — Pe ! Aôtrou Arc'hanteg, dec'h e voa ar zûl ! « Dec'h em boa da vont d'an oferenn evel peb kristen « mad ! »

« — An oferenn ! Petra an dra-ze an oferenn ? Allo ! « penn-oc'h, ke d'ar gær da glask oferennou ar pez « a gari, mar kavez bara enno. Evid-on-me n'em beuz « ket ezom a vigoded war ma zro. Me ne c'hallan ket « lezel ma mekanik da heana evel-se. »

Ha setu e vize roet he gont d'ar paour kez den. Ar re-all, o welet se, a zalc'he sonj d'ar gentel.

Doue a gri ivez da Vonsieu Arc'hanteg ag a lavar

d'eza : « Lez gan-in ma devez. Lez an dud-ze, pere a zo « ma c'hrouaduryen ha ma bugale, araôg beza da zer- « vicheryen, lez anezo da zervicha ac'hannon d'an deiz « em beuz miret evid-on. Ne ri ket d'ezo labourat d'an « deiz-se. Me an Aôtrou da Zoue a ra d'it ar gourc'he- « menn-ze. »

Mes mouez Doue, daoust pegen galloudeg eo, ne ya ket beteg skouarn Monsieur Arc'hanteg. Monsieur Arc'hanteg ne glevo ar vouez vraz ha spontuz-se nemed goude he varo, er varn e devezo lec'h goude he dremen van ag er varn jeneral da fio ar bed ; mes eun tam re zivezad e vezo neuze ivez d'he c'hlevout.

Y. K. KERZALE, beleg ar Zalet.

(Eur pennad all eur vech all.)

NOZ NEDELEC.

(EIL PENNAD.)

Pa voue deut an amzer merket gand Doue evit guinevele ar Messias, an Impalaer August, o veza gourc'hemenned niveri an holl dud euz he stajou, ar Verc'hez Vari ha Sant-Joseph evit senti d'ar gourc'hemen-ze en em lakeaz en hent evit mont da gass ho hano. Erruet edont e Bethleem, kearic vian a veuriad pe vroad Juda. Eno e seojont var meur a zor evit gullen lojeiz : mez dre m'edont paour ne voue roet d'ez-ho digor e neb leac'h. Mont a rankjont eta da glask repu en eur c'hraou a gwejont anter zigor, e peleac'h Mari, var dro anter-noz a c'hanaz ar Mabic-Jesus. Mailleuri a eure he Mab gand eun nebeud trulioù hag hen lakeaz da c'hourvez var eun dournadic colo, e creiz etre daou aneval... Cleout a rez beza gued en da levr, ma merc'h, eun daolen hag a ziskuez ar burzud caer-man.

— Oh ! ia fat ! ken guir ha tra, eme ar verc'h, en eur groaja he daouarn, oh ! ia fat ! gueled em euz an daolen-ze ha poket em euz ive d'ez-hi calonec meur a vech... Va Doue ! eme ar botreziec paour en eur vouela, pe bez ma tie caout riou ar Mabic-Bian ! Erc'h a rea marteze ? Ma vije bet c'hoaz e pad eun nosvez dous euz an aon, hag al loar ken luguernuz ha ken sclear hag hirio ! — Petra fell d'id, va merc'h, Salver ar bed a ioa deut evit gouzaon ar baourentez, an dienez... En doare-ze eo falvezet ganthan hor prena. Falvezet eo bet c'hoaz ganthan beza hor skuer, evit deski d'eomp gouzaon a galon vad, ma fell d'eomp e ve binigued hor poanion.

— Mez evesait mad eta, mammic ! gourvezet, couls lavaret en noz var eun nebeud colo scournet ! Ar sonj-ze ebken am laca da grena gand ar riou ! — hag e feat ar verc'h a n'em strincez truffulliet-oll etre divrac'h ar vam.

Oh ! eme ar c'hrouadur en eur huanadi, ma vijen-mê bet eno, a mê am bije bet golet ar Mabic-Jesus, tommet anez-han gand va alan ha va focou !

— Setu, va merc'h, ar pez a dieomp da ober d'ar beorrien pa ho guelomp tagnet gand an naon pe ar ienien, er mare calet-man euz ar bloaz ; ag Jesus a zo

kuzet dindan trullioù ar paour, hag ousten-ze, ar vesserrien baour a deuas ive da guenta d'hen adori d'ar c'hraou. — N'eo ket eta, goude beza clevet ar Elez o cana en ear ar c'hantic caer-man : Gloria, hon eus clevet cana ken aliez a-veach ? Sellaouit eta, me gaf d'in ez-oar c'hoaz ouz her c'hana...

Hag e feat, eun nebeud mouechou caer en eur zont varlerc'h a lakea an ecleo euz traouen ar menez da ascana ar c'hantic caer-man.

Euz a balez caer an drinded
Mouez an eal 'zo diskennet ;
Hag an ecleo a aslavar
Da bep-hunan var an douar :
Jesus a zo ganed hirio,
Gloria in caelis Deo !!!...

Ia, va c'hrouadur ! n'eo ket 'ta eo duduz ! Ia, difuned e creiz an noz gand ar c'hian-ze diskennet euz an env, ar vesserrien tro-var-dro a redaz gand ast da adori eun Doue nevez ganed, eun Doue er boan hag er baourentez ho galve da guenta, hag ec'h ellez credi e plijaz mui d'ez-han peden ar bastored reuzeadic-ze, egued an aour hag ar perlez a zigassaz d'ez-han eun nebeut goude an tri Roue a vro Sao-Heol sclerijenned en ho beach gand eur stereden burzuduz. — Mez crena a rez, va merc'h, daoust a riou a peffe ?

— Oh ! an dra-ze n'eo netra, ha neuze, bremaic e c'herruimp er gær. Va Doue, na brava nosvez ! Oh ! pebez ez-hon countant ! Mez va levenez a vije bet c'hoaz brassoc'h m'am bije guelled evel hoc'h communia ha lacat Jesus da c'heneel em c'halon...

— Bab ! va merc'h, re galounec ec'h euz hen peded en liz evit na ve ket deut en da ene. Ia, hen diguemeret ec'h euz ive en da ene disouil : n'a peuzte ket great, e guiz m'am boa hen lavaret d'it, ar gommunion a spered pe a c'hoant ?

— Eb mar ebet ; mez an dra-ze n'eo ket ar memez tra, hag e c'houzon er vad ne vankfe netra d'am boneur, ma... Couscoude lezomp an dra-ze a gostez, rag ar sonj-ze a lacaffe va spered teval, hag hirio au holl a die beza laouen, n'eo ket 'ta, va mam ?

— Guir a levezet, va merc'h, kement zo var an douar hag en env a lavar d'eomp e renker hirio beza gaë ha laouen. Ar joa hag al levenez-ze a zo beniguet gand Doue. Ar brassa sent a zo bet en em roet d'ar joa-ze, ha cals anez-ho en ho fervor o deuz great beach Bethleem evid adori Jesus en he gavel, darn-all o deuz lakeat ho ijin evit sevel eur c'hraou henvel euz an hini ma c'hanaz Jesus en-han.

— A brepos, daoust hag hen, va mam, craou Bethleem a zo c'hoaz en he zaô. — Ia, va merc'h, craou Bethleem a so c'hoaz en he zao ; mez afat n'eo ket ker fall, ken dirapar na ken diguempen evel m'en c'havaz Mari ha Joseph. Eaz eo did credi e vije pell-ze counez en he boull ma ne vije ket bet taoled evêz mad anezhan. Ar c'hraou-ze a zo hirio e creiz eun iliz caer

saved en enor da c'hinivelez hor Salver. Disken a rear en-han dre eun delec'hou a c'houezec pazen, ha neuze e n'em guever en eun toul toet a venerez. Ar volz hag ar mogueriou a zo goloet gand marbr digasset di e prof gand ar gristenien ha kement a encoumad a za di bemdez ! Ar pave a zo great a varbr gnen, peintiet aman hag ahont gand mean-ialp ha diamanchou caër braz.... E creiz e velenur eur stereden arc'hant ha var ar stereden-ze e keveur scrived ar c'homzou-man dougued e latin hag a laca da reded d'elou kement den ho len :

« Aman tre eo ganet Jesus-Christ gand ar Verc'hez Vari. »

Oh ! va merc'h, aboue trivac'h cant vloaz ma z'eo ganed hor Salver piou a c'helfe niveri ar beachourien, ar birc'hirined, an dud Santel, ar rouanez, a zo bet o taoulina var ar pave ze, ho deuz poket d'ez-han gand teneridiguez en eur adori ar burzud braz erruet eno ! Lenned em euz, n'euz ket pell, an oll draou caër-ze en eul levr a roïn d'id hirio, evit ma veli da unan ar peza zo en-han.

Scrived eo gand eun escop santel, dougued gand he feiz d'ar c'hraou-ze, eleac'h m'ho deuz lezet prinset ha rouanez meur a desteni fuel euz ho c'harantez evid ar Mabic-Jesus. Ia, er c'hraou-ze e velenur diou lamb-hatregont o tevi noz-deiz, roet gand Impalaer an Autrich, republik Venis, roue ar Spagn, roue Napl hag en divez gand hon roue santel Lois XIII.

Nag-int'zo evuruz, va mam, an dud a c'hell mont da Vethleem ! Pe bez ma tle beza caer eno oferen an anter-noz !

— Ar boneur-ze, va merc'h, n'eo ket roet d'an holl : ha goude holl, pep unan a zo goest da vont di a spered, ha goueled er guiz-ze kement a dremen eno. Da lacad a rin ive da len var guement-man, e buez sant Fransez d'Assis, eun dra hag a raio plijadur did, me zo sur...

Oh ! lavaret d'in an dra-ze m'ar plij ! me m'euz kement a levnez o clevet ar peza ho deuz great ar sent !

— Mez a greiz va c'halon, va merc'h ; rag len a ri evel-ato an traou-ze gand eur blijadur nevez ; an traou a velenur en eul levr a zo cals bravoc'h : Sant Frances d'Assis hen doa eun devosion vraz e kenver mister guinivelez Jesus : bem noz e save d'anter-noz evid adori Jesus. Divezatoc'h dre ne gave ket he galon magadurez avouallac'h en devosion, e sounjaz caeroc'h : goulen a reaz digant an tad santel ar pab, Honorius III, m'a c'heljet da noz-nedellec cana an oferen e creiz eur c'hoad braz a ioa e kichen he gouent. He c'houlen a voue sellaouet : he venac'h hag hen neuze a n'em laca da sevel eur gabanen great gand scourou ha delliou. Ar gabanen-ze a voue savet e guiz eur c'hraou, hag en eur c'horn anez-han e lekejet eur rastel. Gouzel a voue ive laket var an douar evid hen lacad da veza henvelloc'hous craou Bethleem ; n'eo ket holl : digasset e voue ive en-han eun azen hag eun ejen. Er gabanen dister-ze eo e vije canet oferen anter-noz. Dont a reat a bell-bro d'an oferen-ze, hag epad an noz ne glevet o treuzi ar c'hoad

nemed mouez an dud devod o tond pe-o vont en eur gana canticon : Pidi a reat er gabanen-ze gand kement a feiz evel pa vije bet e craou Bethleem memez.

— Doue, pe bez ma tlie beza brao ! penauz ne ve ket santel ar galon entanet gand carantez an env pa n'em velenur dirag guinivelez ar mabic Jesus, en eur c'hraou doareet gand hini Bethleem, ha d'an heur ma c'hanaz Mari he Mab !

— Ahanta va merc'h, countant ez out deuz da veach ! Ha d'erc'hel a ri-ti sounj euz ar Pelguent ?

— Oh ! e pad va buez ! Daoust hag ancounac'had a helleur au traou-ze, dreist-holl pa zoar bet ken evuruz ? Bremaic he velfet, kid, pa c'herruffomp er gear, me a savo ive en ti eur c'hraouic-bian, evit lacad en han ar Mabic-Jesus a zo dindan ar veren vraz var mantel ar siminal. Ha neuze he zaïmp bemdez dira-z-han d'ober hor peden, n'eo ket'ta ? An dra-ze a ra vad d'ar galon, sounjal ez-oar ken tost da Jesus, ha cousket, couls lavaret, scoaz-oc'h-scoaz ganthan. Ar vam ne respontaz netra, mez rei a eure eur pok carantezuz d'he merc'h. Edont erruet, Trouz an alc'houez o trei e potail pe e dorzel an ôr a lekeaz ar c'hilloc da verca teir-heur, en eur zont da leusket teir canad hir ha skiltruz. An vam ep dale a c'houez eun tam tan, ha glask he zebrez hag he fillig evit toïma ar c'brampouez. Goude an ascoan eur bedennic ver, ha kercent mam ha merc'h da gousket, Mez ar vam ne c'hellaz ket prenna eul lagad gand ar verc'h oc'h uvreal. Caera gouel... caera nosyez. Mari, Joseph... Craou Bethleem... C'hoaz c'huec'h miz !... Jesus trugarezuz !... Aze em c'halon...

BODEUR.

MUNUDIK.

Ar marvailhou-ma war ar gredann, n'int ket fall da glevet, bugale. Mar d-eo gwir a lavarann, ne vezo ket arabad, a gav d'in, lavaret re all divar-benn munudik hag he vreudeur. Selaouit eta.

Breman a vad eo distroi war va c'hiz da glevet doare an hini koz hag he hanter-tiegez. Ar fagoder hag ar fagoder ne oant ket c'hoaz distroet mad d'ar gear, pa zeuz eur mevel a ioa eun dek skoed gant-han enn he zourn, gant gourc'hennenn evit ho c'has d'ezho. A berz Aotrou ar maner e teue ann arc'hant-ze da baea labour ar fagoder. Kaera devez evit unan ! Edont o vervel gant ann naoun, an dud keiz anezho.

Ar fagoder neuze a lavaraz d'he hini goz mont da gerc'hat kik maout da ober ear fritadenn ha traou all ; ha pa ho doe debret ho gwalc'h, ar fagoder a lavaraz d'ar fagoder : Peleac'h ema hor bugale brema ? Doue her goar. Gant na vezint ket taget gant al loened kriz. Te eo, Biel, a zo kiriek ; te as pezo keuz ha nec'h, e-me-z-hi.

— Hag ann hini goz ha lavaret dek pe zaouzek kweach dioc'h-tu ; Te as pezo keuz, te as pezo nec'h.

— O veza eat drouk enn-han, ar fagoder a lavaraz :

daoust hag ar c'homzou-ma a vezo da gomzou diveza, ravodez ; tao evit ar gwella ; peoc'h d'in pe da ler a zamanto. — Ta, ta, ta, eme ar fagoder, kaer as pezo, te as pezo nec'h, te as pezo keuz, m'hen tou. Nag euz e venn me brema mar karfe Doue...

N'oa ket a veac'h lavaret mad ar c'homzou-ma, hag ar vugale ha mont er-meaz euz ar c'hraou, ha dao dao war ann or : Setu ni ama, setu ni ama eme-z-ho en eur vouez. Ker laouen hag ann heol, ar vamm enn eur red a zigor ann or hag a bok d'ezho o lavaret : Skuiz maro oc'h, va buhale geiz, hag eur c'hofad a naoun hoc'h euz. Deut da ziskuiza e-kichen ann tan da c'hortoz ho poed. Fank-ki oud penn-dre-benn, Pipi keaz, deuz ama d'en em walc'hi. — (He-ma ar Pipi-ma oa ar map kosa, hag ar fagoder a gare anezhan dreist ar re all dre ma'z oa bleo ruz evel-t-hi).

Ar vugale a azezaz oc'h taol hag a zebraz ho boed hep ober neusiou na digaresiou ; ar re-ze ne oue ket rankout pidi anezho da zibri ho zamm boed, a c'hellit kredi. Lavaret a rejont penn dre benn ar peza ho doa great evit dont da zistrei d'ar gear. Eaz oa tad ha mamm o velet ho bugale en ho zouez, hag ho sonj oa beza furoc'h divar-vrema.

Ebad a-walc'h eo d'ann dud, a lavare va zad-koz, beza laouen hag euz ; pa vez red mervel gant ann naoun ez eo eur c'hoari all.

Eunn dervez bennag goude-ze, pa oe eat ann dek skoed da netra, ar fagoder a lekeaz enn he benn pellaat adarre he vugale diout-han. Kuzul a rejont eta etre-z-ho ho daou da gas ann dra-ze da benn, hag ho sonj oe kas ho bugale pell-braz dioc'h ann ti, pelloc'h evit ar weach kenta : warc'hoaz vintin, eme ar fagoder, e vezo great ann taol.

Petra en doa great Munudik en dro-ma c'hoaz : rei skouarn, klevet ha sevel mintin mad euz he wele da vont d'ann aot ; c'houi oar d'ober petra.

Pet diaoul, eme-z-han, eun eur sacha war an or ha sacha adarre ; me laka ez eo bet alc'houezet. Hag hen mont d'he wele da c'hortoz mont enn hent. — Paket oa bet hor paotrik en taol-ma ; paket e vezo adarre evel a welimp bremaik. Ne d-eo ket souez e feiz, ker iaot-ank ma'z oa.

Munudik ne ouie petra da ober, pa zigouezaz d'ezhan ober boulouigou bihan gant he damm bara, hag hen enn hent war-lerc'h ar re all ha teurel war an douar tuma tu-hont he voulouigou minvik bara.

(C'hoant ann den ha c'hoant Doue n'int ket eur c'he-ment ; me a oar ann dra-ze ha c'houi her gwelo breman).

Tennet euz a *Vignoun ar Vugale*.

A. TROUDE.

(Eur pennad all eur wech all).

Hano ar Zent evit ar Sizun-ma.

DILLUN 31 Kerzu. — Sant Sylvestr, Pap.

DIMEURS 1^a Guenver. — Ar Circoncision, pe an emvod.

- DIMERC'HER 2. — Eïsvet Sant Stefan.

DIZIOT 3. — Eïsvet Sant Ian aviel.

DIRGUENER 4. — Eïsvet an Innosantet.

DISSADORN 5. — Derc'hent pe vijel gouel ar Rouanez.

DISSUL 6. — Gouel ar Rouanez.

An Aviel hirio.

Pa voue ganet Jesus e Bethleem Juda, en amzer ar Roue Herodez, setu *Rouanez* o tont eus a vro-sao-heol da Jeruzalem, hag o c'houlen : Peleac'h ema roue ar Juzevien, an hini so nevez ganet ? Rag gullet on eus he stereden e bro-sao-heol, hag omp deut d'he azeuli.

Hoguen ar Roue Herodez o clevet kementse, a voue strafuillet, ha kaer Jeruzalem oll eveldhan. Destum a reas oll brinset ar veleien ha scribet ar bobl, hag e c'houlennas digantho peleac'h e tlie ar C'hris' gullet. Lavaret a rejont oa e Bethleem Juda ; rag eur Profet en doa scrifet kement-ma : « Ha c'hui, Bethleem, douar Juda, n'oc'h ket an distera eus a guenta kerioù Juda ; rag ac'hanoc'h e teui ar Penn a dle ren va fobl a Israel.

Neuze Herodez a c'halvas an tri Roue e euz, hag a c'houlennas pis digantho pe da vare o doa gullet ar stereden. Ho c'has a reas da Bethleem en eur lavaret dezho : it, hag en em guelaouit mad divar benn ar bugel-ze ; ha pa o pezo he gavet, digassit din ar c'helou, evit ma zin ive va unan d'he azeuli.

Pa o devoa clevet kementse gant ar Roue, ez ejont en hent ; ha kercent ar stereden o doa gullet e bro-sao-heol a deuas da vont en ho raog ; ha pa voa digouezet azioc'h al leac'h ma edo ar bugel, e chomaz a za. Hoguen ar gullet eus ar stereden a roas dezho eul laouenidiguez ar vrassa.

Mont a rejont en ti, hag e c'ajont ar bugel gant Mari he vam, hag o stouet d'an douar, hen azeuljont, (hen adojont). Neuze e tigorjont ho zenzorioù hag e kinnigjont dezhan ho frezantchou, aour, ezanz ha mirr. Hag o veza bet kelennet dre ho c'house na dajent mui var dro Herodez, ez ejont en dro d'ho c'harter dre eun hent all.

SANT VAZE II. 4.

G. M.

KELEIER.

Au aotrou Rous, beleg bet en enez Bourbon, so hanvet vikel e Sant Marc.

Dissadorn tremenet eo bet roet an urzioù e Klou-erdi (seminer-bras) Kemper.

Setu ama hanoioù ar re so bet beleguet :

An aotrou Poullaouec, eus a Bloumoguier ;

An aotrou Faudeuil, eus a Voueznou ;

An aotrou Duclos, guinidic eus a escopi Sant-Briec, brema e Ploudalmeze ;

An aotrou Jacob, eus a Borspoder ;

An aotrou Barazer, eus a Lanmeur ;

An aotrou Morvan, eus a Vontrolez.

TAOLEN

AR RETREJOU EVIT AR BLOAS 1867.

E KEMPER.

Retred brezoneg evit ar voazet, an 23 a vis meurs.
Kenta retred brezoneg evit ar merc'hed, ar 4 a vis mae.
Eil retred brezoneg evit ar merc'hed, an 12 a viz here.

E KEMPERLE.

Retred brezoneg evit ar voazet, ar 4 a vis mae.
Retred galleg evit ar merc'hed, ar 6 a vis gouere.
Kenta retred brezoneg evit ar merc'hed, an 9 a vis meurs.
Eil retred brezoneg evit ar merc'hed, ar 15 a viz even.
Trede retred brezoneg evit ar merc'hed, ar 17 a viz here.

E LESNEVEN.

Kenta retred brezoneg evit ar voazet an 9 a vis meurs.
Eil retred brezoneg evit ar voazet, ar 15 a viz even.
Retred galleg evit ar merc'hed, ar 4 a viz eost
Kenta retred brezoneg evit ar merc'hed, a 4 a vis mae.
Eil retred brezoneg evit ar merc'hed, ar 6 a viz gouere.
Trede retred brezoneg evit ar merc'hed, an 12 a viz here.

Hanoioù ar Veleien maro epad ar bloaz 1866.

Table listing names and dates of deaths, such as Guillou-Mari Gueguen, avieler, eus a Blouzeniel, 23 bloas.

Paul Pelliet, person Sant-Marc, en arc'hes-copti Porz-ar-Prins. 40.
Tangny Gueguen, bet vikel e Gleder. 76.

Al lez-vern (Cour d'assises) a zigoro e Kemper ar 7 a vis guener, evit an tri miz diveza eus ar bloas tremenet. An aotrou Grolleau-Villegueury, alier e lez-vern Roazon so hanvet evit beza e penn al lez-vern-ze.

Setu ama hanoioù ar Jureet.
An Aotronez :
Lois Gorvan, eus a Guemper.
Ian-Lois Blanchard, eus a Verrien.
August-Mari Crenn, eus a Landerne.
Guillou-Fransez-August Rihouay, eus a Vontroulez.
Victor-Mari Creac'hquerault, eus a Sant-Seo.
Stefan-Ian Guillou, eus a Gonkerne.
Guillou-Ian Labellec, eus a Verleskin.
Eozen-Mari Gourves, eus ar Merzer.
Nicolas Brozec, eus a Gleder.
Anton Jestin, eus a Blourin.
Per-Ian Daniel, eus a Blouneour.
Adolf-Lois-Emmanuel Ar Flo, eus a Blouian.
Cyprian Hersart de la Villemarqué, eus a Nizon.
Eujen Ar Gall, eus a Boullaouen.
Ian-Vadezour-Amedee Lottin, eus a Vrest.
Philip-Mari Gelebart, eus a Vrest.
Per Briquin, eus a Locquirec.
Eujen-Ian-Vadezour Mari Delecluse, eus a Vontroulez.
Ian-Vari Buors, eus a Blougoulm.
August Pitet, eus a Vontroulez.
Alan Falhun, eus a Blouneour-Trez.
Charles-Ian-Vadezour Bianchet, eus a Landerne.
Paul de la Boexière, eus a Gastel-Paul.
Alan Ar Sant, eus a Vielan.
Durand Peschoud, eus a Vipavas.
Ian-Per Delecluze-Trovedal, eus a Audiern (Goaien).
Ar Motheux, eus a Vrest.
Paul Fave, eus a Gleder.
Guillou Allan, eus Guerrien.
Efflam Thomaz, eus a Gastel-Paul.
Hippolit Masson, eus a Lanildut.
Christof Coquil, eus a Vielan.
Charles Briant, eus a Vontroulez.
Fransez Gnillermou, eus a Blouvien.
Ian-Vari Herry, eus a Blouneour-Menez.
Paul-Joseph Morel, eus a Gonkerne.

Evit dere'hel leac'h d'ar re a vankfe :
An Aotronez Herry Ponthier de Chamaillard, Be-neat Pannetier, Lois Vache ha Ian-Victor-Alfons Moreau; ho levar eus a Guemper.

PRIZ AN ERD.

Table with two columns: KEMPER - 22 Kerzu and PONTNABAT - 20 Kerzu. Lists prices for various goods like Guinis, Segal, Eiz, Ed-du, Kerc'h, and Avalou-douar.

Ar Gerant : AR. DE KERANGAL.
Kemper, moulet gand AR. DE KERANGAL, Moulet an Escopi.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezonec.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten a goust :

Table listing subscription rates: Evit eur bloas... DAOU SCOUET. Evit c'huoc'h miz... EUR SCOUET. Evit tri miz... C'HUEC'H REAL. Eur gazeten ebken... DAOU VENNEC.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Bel. Ar paeamanchou a dleer da adressi ebken. An abonnamant a guement er e-t librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 5 Guener 1867.

E carter ebet marteze var an douar ne vez great gouel Nedelec caeroc'h evit e Breiz-Izel, e bro Arvor. E Rom epken, ervez ar c'heleier, her solanizer gozie evel er vro-ma. Ar Vretonet ne deo ket avoalc'h dezo gouzout e ra hor Zalver he zonediguez var an douar. Fallout a ra dezho he velet. Ac'hano ar c'hraonic-ze a zaver e pep iliz; hag evit renta ar c'hraonic-ze caera ma c'heller, pehini a laca da dalvout kement en deus a speret hag a ijin. Ne deo ket da rei braoentez d'ar c'hraou eo e poanier, rag gouzout a rer ez eo e creiz ar brassa paourentez eo ganet J. C., mes evit rei da velet kement ha ma c'heller, da zaoulagad ar c'horf zoken, kement a zesc deomp an Aviel eus a c'binivelez map Doue.

Eun den ha ne anavesse ket ar relijion a ve avoalc'h dezhan mont da zellet oc'h unan eus ar c'hreier-ze evit anaout e tle eun Doue beza diskennet etouez an dud. Deski a rafe anezhan he unan histor ar c'binivelez. Ar buguel-ze gourvezet var eun nebeut plouz en eur manjouer, daou loen en he guichen, an c'elez-ze en ear, ar bastored-se o tostaat oc'h ar c'hraou, a rose dezhan da c'houzout e tle beza eno eur mister bras. Evelse ive ar vugaligou a voar abred ez eo map Doue en em c'hreat den evitho; abred ec'h anavezont ar mabic Jesus; ha goulen a alfet digant an dud faeüs-se pere, evitho da veza christenien, a gaf re zister ar c'hraou-ze ha cala re all eus a lidou an iliz, goulen a alfet digantho penauz en em guemerfent guelloc'h evit deski d'ho bugale mister an Incarnation.

E Rom ive e rer, evel e Breiz, eur c'hraou d'ar c'binivelez. Lacat a rer ive skeudennou enha, hag he guempen a rer evel ma rer er vro-ma. E pep ti zoken couls lavaret e caver eur c'hraou d'ar mabic Jesus savet gant ar vugale, hag eur buguel ne gafe ket dezhan e ve mad he c'binivelez, ma n'en defe ket da lacat enhi Mari ha Joseph, c'elez, pastoret, eun danvad bennag hag ive eun ejen hag eun azen. Hag epad mis guener, pe guer paour bennag e ve

tud eun ti e vez dalc'het eur c'houlouen pe eur c'hleuzeur var elam dirag ar mabic Jesus.

Bez'ez eus e Rom, d'ar mare-ma, eur foar hanvet foar Sant Eustach, eleac'h na veler nemet staliou marc'hadourien o verza skeudennou ha kement so red evit sevel ha kempen eur c'hraou evit ar c'binivelez. Kementse a so, e Rom couls hag er c'harter-ma, eul merc anat eus a feiz ar bobl.

N'eus ket pell, eur scrifagner a verke en doa guelet en derveziou diaraog eun tavarnier o treina he c'hreg var boez he bleo evit he zeleur er puñs da veuzi. A drugare Doue e tigouezas tud ha ne ellas ket ober he daol. Petra eo d'an den-ze, a c'houlennaz unan bennag, mont da ober traou evelse? Me ia d'hen lavaret deoc'h, eme unan eus an amezeien. An den-ze a so nevez eat da davarnier. Araog n'oa ket dizuch tam ebet. Mes abaone e lenn eur gazeten fall a guemer en he di. O lenn scrijou a enep ar feiz, e les ar relijion a gostez; hag en em ro d'ar vesventi. Hirio en deus evet eun tamig re: he c'hreg so en em laket d'he scandalat, ha setu perag ez ea d'he laza.

Ar pez a lavar ar scrifagner divar benn an tavarnier-ze a alfet lavaret divar benn meur a hini. Ar scrijou fall, ar scrijou a enep ar relijion, a laca ato ar re ho lenn da goll ar feiz nebeut a nebeut. Dilezel a rear an devertiou, ober a rer goap eus a guement so mad, ha goudeze e coezer divorc'het er brassa crimou.

Ne deo ket ar scrijou a gomz eun hag eun a enep Doue hag he lezen, a enep an iliz hag ar relijion, a enep ar vertuz hag an dud vad, ne ket ar scrijou-ze so muia da ziousal outho; ne ket ar re-ze eo a ra peurvuia muia droug. Nebeut a feiz en devezo c'hoaz eul lenner, en devezo euz o velet ober meulendi an droug hag ar pec'het, ha tamal ar vad hag ar zantelez.

Mes bez'eus scrijou all hag a ra meulendi ar relijion; mes c'hoant o deffe da ober eun dibap etouez ar guirionezou a dleomp da gridi, hag etouez ar gourc'hennou

a dleomp da viret. C'hoant o deus da gridi epken ar pez a blij dezho ha da viret ar pez a blij dezho eus a lezen Doue. En eur lavaret ez eo mad ar religion o defe c'hoant d'en em lacat gouezieoc'h evit an iliz, ha da ziskuez petra dle da c'houlen digant he bugale hag eus a betra e tlefe ho dizama; ha setu eno ar scrijout a ra muia droug. O veuli evelse ar religion dalc'h mad e lakeont ar re ne anavezont ket ho fallagriez d'ho lenn ep disfizians, ha da suna a nebeudou ar c'hontam a ro ar maro d'ho ene.

C'hoaryout a ra gant ar scrijou-ze evel gant al laeron, ne ket al laeron a ia da daga an dud var an hent braz eo so muia da zouja. An hini so anavezet evit laer a ziou-aller outhan; mes aoun a dleer da gaout muioc'h rag al laeron-ze pere a ia da vale troad ha troad ganeoc'h, a goms brao ouzoc'h, a guemerfac'h buan avoalc'h evit mignonet ep ho anaout, ha pere ho c'huillo ha marteze ho lazo pa viot nebeuta o sonjal. Ar scrijou fall ive a lam avechon buez an ene digant ar re ho lenn, alies dre ar pez a gaver a gaera enbo.

An eiz a viz kerzu, deis gouel ar Conception Didach, hon tad santel ar Pap en deus pedet an oll eskibien eus ar bed kristen da zont da Rom er bloaz a zeu abenn gouel an ebistel Sant Per ha Sant Paul, evit solariza an trivac'h cantvet dezha bloaz abaoe merzerinti an daou abostol, hag ive evit guele canoniza eur zant bennag. Setu ama eul loden eus al lizer scrifet gant eur c'hardinal-prefet en hano ar Pap evit kemense:

« Etouez kement a aferiou dies en deus ar Pap da ziluta, unan eus ar re a blij muia d'he galon, eo canoniza sant ha lacat renta lidon an iliz d'ar re o deus great vad hag enor d'ar religion gristen. Evelse ta, ma na deu ket ar goad amzerion so brema da viret outha, ar pez a el-lomp da esperont digant ar vadelez hag an oll c'hallout a Zoue. Pii Nao en deus sonch da ganoniza d'an 29 a viz even 1867, an dud eurus.

Josaphat, ar hescop Polok, merzer; Per d'Arbus, chaloni a urs Sant Augustin, merzer; an nao Merzer a Gorkum; Paul ar Groas, confessor; Leonard a Bors Mauris, confessor; Mari Franseza ar nemp gouli, guere bez; Germana Cousin, guere bez.

Ar pap en deus eta gourc'hemennet d'ar prefet c'arguet a guementse, scrifa d'an oll eskibien eus ar bed kristen ha lavaret dezho e rajent plijadur dezhan o vont da Rom d'ar mare-ze. Eul laouenidiguez vraz e vezo evit calon an Tad santel guele he vreudenn destumet en dro dezhan, o pidi gantha ar zant nevez-ze, hag o c'houlen dreizho ar peoc'h a behnie deus izom an iliz santel.

Mar deo morse dereat mont da enori beziou sant Per ha Sant Paul, tadou ha mistri ar vironez, a beleac'h e sao eur sclerijen hag a sclerra an eheou, eo a dra zur en amzer ma rer ar gouel-ze pehini, ervez ar pap bras Sant Gregor, a virit beza solarizet gand ar brassa lid dre ar bed oll; mes dreist oll e Rom, santeleat dre varo ha merzerinti an daou abostol.

Ar c'hazetenpon a gomz euz eur plac'h iaouanc, d'he pe dui bloas varniguent eur vatez, e doa lakaet he c'hanter evit mont da Paris da zervicha, haga se ber-lazet er sizun tremenet gant eul den fall a glasko lakaet he enor diganthi. Setu aze petra zigouez gant ar plac'h iaouanc a ia diwar ar meaz er c'herrou bras. Kevra e laka kement dezho l. Ar yuez var ar meaz so, ket poanous, ma sonch dezho e vezint eat d'ar barados pa vezint eat e kear l, hag e tigouez gantho alies beza taoler er vout-len dre ar goad skuerion o deus eno dirag ho daoulagad. Coll a reont alies ho devotion, ha goude ar feiz ho enor hag ho ene. Ha mar deo ar feiz cre avoalc'h en ho c'haldon evit miret outho d'ep em rei d'ar peoc'h, e collont alies ho buez. Ar plac'h ma comzomp anezha iaouanc sur ha devot. Kement he anate a rea he maud groll. An dervez ma voue lazet zoken, ha pehini oa an eiz a viz kerzu, deis gouel ar Conception didach, a voantostant oc'h ar sacramanchou. Kentoc'h evit pec'h eo bet groll ganthi gouzaon eur maro criz, hag oc'h eller eudi e vad o coll he buez, e deus savet he ene. Mes petra gallet eus ar plac'h digou iaouanc-ze a veler o vont e kear hag o defe feiz avoalc'h, hag o defe calon gre avoalc'h evit scuilla ho goad kentoc'h eguet coza ep pechiet, kentoc'h eguet ofansi Doue? Pet, ma em em gallet he eno danjer evelse, hag o defe ners avoalc'h evit trec'h an droug speret hag he likizien?

An eus ket pell on eus comz teus a bense eil he henvet an Evening-Star, e pehini, var d'he lizer, e deus euspon a voa el lestr, seis pe eis varniguent epken a zo chomet e buez. E l'iver ar re n'ont ket beuzet, e zeus c'hoec'h c'hoar, c'hoas iaouanc, leus a urs. Itron ezha Galon sac'r. N'oant nemet c'hoec'h, hag ho c'hoec'h hant chomet beo.

Var guementse, e aer ar ve lavaret o deus bet an teil muioc'h a chans evit egulet e ve dies goue coe e hom ep anaout d'ar ar Brovidans l Perag eo hat savotret ar re-ze kentoc'h evit cals a ne all creoc'h e vido, hag a voue cals guelloc'h petra da ober pa zigouez mission evelse? Abalamour, a leverer, ma kemerec'h de-beutoc'h a brez evit ar re all da glasc en em deleat var ar bagou bihan. Ha perag e kemerent hi nebeudoc'h a brez? Ha ne deo ket abalamour ma en em daolent. De-divreac'h an Aotrou Doue, ma o devoa nebeudoc'h a aoun rag ar maro, ma voant contantoc'h evit ar re all d'he rei ho buez, mar boa kementse bolontez Doue? Ha ne deo ket abalamour ma pedent? Ah! ar beden a ro an den d'an den, hag a laca Doue da zont da zigouez ar pap ker-gall. An darn vuia eus ar re a voa var al lestr ze a groll a vouele, a grapise ama hag ahont o clase, savet he buez, hag ho frez a rea dezho caout ar maro, ha beza lonket gant ar mor eals kentoc'h. Ar c'hoec'h e bous ma, a jome sioul ha didrouz, hag a bede, o c'hoec'h gant fizians sicour aberz an anv. Hag ho esperans ne ket bet tromplet. Tud ar c'harter eleac'h n'o deus eul d'ouara var eur vaguig vian, goude tremen d'he vuez ha teir nosvez var ar mor counnaret, ep sicour na tam da

zibri; an dud-ze a grede ker stard en doa Doue great eur burzud e kenver ar c'hoec'h c'hoar ma ma rentent dezho a bep seurt renonou. G. M.

MARI EUR MISSIONNER.

Eun dervez, en eur ghear euz a Frans ha n'e ket red he henvel, eun itroun, hag hi iaouanc c'hoaz hag e du guisket, a ioa daoulinet ebars treid he c'hoec'h, he fenn ganthi etre he daouarn hag he divoc'h drouc-hivet, glet gant an daelou a zirede euz he daoulagad. Ohom a reas pell da bedi evelse: ar pez a dremenans neuze en c'haldon, Doue ebken he goar, Doue hag an Bal a gassas betec he droun an ezans euz he feden. Erfin e savas he fenn euz a dre he daouarn, hag en eur deleur var imach he Doue maro var ar groaz eur zell a garantez hag a esperans, e lavaras: va Doue, va Jesus, n'em euz mui ken crouadur nemet han l. Neuz e savas en he za e sec has he daelou hag ez eas er meaz euz he zi. Eur veich var ar ru, ez reas rac eun da di an Aotroun Escop euz ar ghear-se. A voa he devoa digoret an or ha lavaret he hano, ma voue casset da eur gambric vian, e leac'h m'edo an Aotroun Escop o lenn pe o sciua. Erruet eno, tec'h en em strincas ractal d'an daoulin ebars treid an Escop. Mes hema a lavaras dezhi ker buhan, gant eur vouez liag a verke selear oa teneat he galon: savit, savit, va mere h! Gouzout a ran evit petra oc'h deuet, joa amieuz euz ho cuelet, couls goude n'oa ket red deoc'h beza kemeret ar boan-ze, rag ar pez a zell ouz ho mab a zo dija eun dra c'brete em speret.

Aotrou Escop, hema fell dezhan mont kuit, mont kuit dioc'h he vam, evit beza missionner, evit mont d'ar broiou pell, etouez ar boblou gouez, da glask ar maro!

Mañ gheaz, her gouzout a ran; mes ne d'ao ket. M'em euz ezom a veleien vad em escopti, hag hen, me zo sur, a vezo unan euz ar re vella. Dre he zanvez, dre ar renc a zalc'h er bed, dre he zescadurez ha dreist oll, dre he zantelez, e c'hell ober cals vad, ha rei d'inn eur zicour vras. Ha c'hoi, va mere h, n'o peuz mui nemet han var an douar. Ar re a gariac'h a zo eat d'an Env d'ho c'hoerz. N'e ket just ez affe diganeoc'h, heb ma c'hellac'h mui he velet var an douar, an hini a dle beza er bed ma ho confort hag ho cloar, an hini n'euz mui nemet han evit harpa ho cozni hag ober plijadur d'e hoc'h. Ouspenn zo, ma d'eo tud eb religion eo en deuz c'hoant da c'hoant da Zoue, e Frans, siouas! e cavo tud avoalc'h euz ar seurt-se.

Oh! Aotrou Escop, hen a lavaro d'ehoc'h eo galvet gant Doue, hen a lavaro d'ehoc'h penaoz ama eo an eneou a vane d'ar veleien, e leac'h a front eo ar veleien a vane d'an eneou, hen a lavaro d'ehoc'h...

Hen a lavaro d'inn ar pez a garo, va mere h, mes evidon-me a zalc'ho mad d'ar pez am euz lakeat em speret: n'en em nec'hit ket eta ha bezit eb aoun ebet.

Great eo beuz dija ho lod evit Doue: daoust hag ho mab hema n'e ket maro er missionnou a zianveaz bro, sammet gant eur c'henvet poanuz? Ha n'oa bet ken caoz dezhan da baka ar c'henvet-se, nemet he garantez evit he nessa. Mem hefe ket ar galon da lezel an hini a jom ganeoc'h d'ho kuitat evel he vrent. Ha mar o peuz c'hoant evit lakaat eassoc'h a-ze ho speret, da gaout eur bromessa euz va ferz, me no d'ehoc'h ama va gher a Escop e tale hinn mad da ober ar pez m'edo deuet da c'houlen diganen.

Petra! Aotrou Escop, beza o paffe ar vadelez da rei ho ker e rooc'h d'inn ar c'hras a reketan?

Ia, va mere h; ha ma n'e ket va gher avoalc'h c'hoaz evidoc'h, prest oun ouspen da lakaat va le var gorre.

Ho trugarekaat, Aotrou Escop, ho trugarekaat cant ha cant mil gueic'h! Ho ker a zo eun dra zacr: mont a ran eta ractal da scriva d'am mab, evit lavaret dezhan e c'hell, pa garo, ober he bourchass evit beza missionner; rac setu aze ar c'hras m'edo deuet da c'houlen diganeoc'h.

II.

Abenn bloaz goude ez oa eun dra bennac a nevez e seminer ar missionnou a zianveaz bro e Paris. Ar chapel a ioa kempennet ha fichet evel evit ar gouellou bras. Ar glouer iaouanc euz an ti a boanie da renca peh tra evit ar ceremoni gaer a dient da gaout. Mont ha dont a reant dre an deleziou, scany ho zreid ha laouen ho fenn, couls goude e reant ho labour sioul ha didrouz meurhet, nemet e clevet aveichou eur gomz bennac, lavaret gous-tadic, evel ar re-ma:

Gouzout a rit da beseurt mission ez a?

Ia, di ar Su-Tchuen.

Nag hen zo eurus! Just d'ar mare m'eo c'hoezet adarre tan ar persecution!

C'hoi lavar l mont a ra e plas an Aotrou Comay.

Glaoustric abars bloaz ama e vezo ive trouc bet he c'houzoc dezhan.

Alh! c'hoi zo jalous?

Pe a dra zo mechains; evit nebeutoc'h eghet an dra-ze e vezer jalous.

Rejantet ar seminer, pere a zo missionnerien goz, a vous c'hoarze o clevet ar glouer iaouanc o comz evelse; hiniennou anezho a huanade e goueled ho c'haldon.

An dud iaouanc ma eme unan, a zo eurus! Lava- ret em euz tremenet daouzec vloaz er memes mis- sion hag eo chomet va buez ganen! Goude tout, n'em a euz ket a zrouc outho, ar vugale gheiz; red mad eo da unan bennac caout ar chans vella.

Couls goude an hini a rea evelse avi d'ar re all n'edo ket en ho zouez. En em denbet oa en eur gambr a zo en he fart he unan, en eil astach, er penn all d'ar pon- dalez, hag eno, daoulinet ebars treid eur gruc'h, e pede caloune. Ar gambr-se, ne oulet ket caout eun all henvel outho: clevet a reer eno eur c'hoec'h vad hag en deuz doare da zont euz ar bed all. Tro var dro, a zindan

giter, ez enz traou estlamuz da velet. Hed-a-hed ar mogheriou ez euz eur dra bennac henvel ouz eur skeul, pe eur gloued hir, great gant enn den ha ne c'houie ket caer he vicher : a' istribill ouz ar mogheriou-ze ez euz taolennou spontuz. En eun tu euz ar gambr e veler pennou-marô hag eskern dizec het ; en eun tu all emabeniachou ar vourrevien : eno e veler chadennou, ket-dinn, ha dillad lenn a c'hoad. Ar groaz a zalc he ar belec iaouanc etre he zaouarn hag a starde ouz he vuzellou, a ioa ive goad outhi, hag en taolennou, stag ouz ar mogheriou, liou ar goad oa ive al liou stanka. En unan euz an taolennou-ze e velet eun den, liammet he zaouarn adren he ghein hag hen var bennou he zaoulin, etre daou vourreo a ioa oc'h he vonga en eur voaska var he c'houzou ; hag ar re-ma, evit creski he boan hag he angouni, a laoskas anezhan abeun teir gueich da ghemeret he alan adarre p'edo o vont da leusker he huanaden diveza ; hag evelse ar merzer ne c'hellas goumit ar maro nemet goude beza bet distroet e buez abenn teir gueich, an dud all a velet eno tro var dro a ioa eun euz hag eun donjer selliet outho. Var eun daolen all oa merket eun den o c'hortoz taol ar maro, cleze ledan ar bourreo savet a' istribill azoc'h he benn. Var eun all c'hoaz e velet eun den all, hag hen iaouanc flamm, staghet ouz eur peul ha coundaonet da velet trouc ha er veo cant tamm euz he ghig. Ar zoudardet, carget da ober ar vicher-ze a ghigherien, her grea en eur lesou dizaman-toc'h eghet ma vijent bet o tispenn eul loan. Epad ma veze unan anezho o trouc ha he damm, eun all a zec he gant he vuzellou ar goad a ioa ouz drem he gouitel.

Ar gambi-se oa an hini a zo galvet e seminer ar missionou a zianvezz-brô, *cambr ar verzerien*. Ar skeul pe ar gloued hir-ze a zo en he za ouz ar vogher, oa ar c'hang a ioa bet doughet noz-deiz gant enn Escop merzer, ar groaz-se oa an hini a ioa gant-han, an hini a starde oc'h he vuzellou ha var boull he galonn p'edoo vont da vervel evit ar feiz ; ar mercou ruz-du a velet var ar groaz oa ar strinkachou euz he c'hoad. Ar pennou-marô-ze a ioa pennou tud hag o devoa bevet en ti bennighet-ze n'oa ket c'hoas pell, ponnou tud a bere ar re a ioa brema o chom en hano devoa clevet ar vouez ha santet ar galoun o lammet, ne oa c'hoaz nemet eun nebeudic amzer abaoue m'o devoa kimiadet dioc'h ho c'henvreudeur evit mont d'ar broiou pell e leac'h m'o devoa roët ho buez evit Jesus-Krist ha scuillet ho goad evit silvidighez an eneou. Ar c'herdinn hag an dillad-se lenn a c'hoad oa ar c'herdinn gant pere oant liammet hag an dillad a ioa gantho p'edont o vont d'ar maro, hag ar belec iaouanc a ioa eno he unan caer : he galoun a zride gant ar ioa o velet relegou santel an hini ma zca da zalc her he blas. N'en devoa ken ioul nemet da gherzet var he roudou, ha prest oa da scuill he c'hoad evit eneou ar vourrevien a ioa ouz he c'hortoz : a galoun-vad e kinnighe he vuez da Zoue evit ho zilvidighez.

Epad an amzer-ze al labouset a gane laouen ebars er jardin ; an heol, dija prest da guzet, a zigasse c'hoaz er gambr eur sclerijen dous ha sioul ; hag er meaz ar bleun

hag ar bokedon a roë evit ar veich diveza abeun ar gloza ho c'houez vad d'an ezennic fescoc'ez ar daez.

GABRIEL MORVAN

Personnages

(Eur pennad all eur wech all)

AN TAD DIFEIZ

Mac'harit, evel a lavaremp en dez all, a voa nede da glasc eur beleg d'he zad. Hogen ken da c'hoat he bet bete neuze, ker rouez oa dezhi beza bet lozet da vont er meaz euz an ti, ma na anaie tam riuon Paris, na nijou eus a c'hiziou ar guet vraz-ze. Eleac'h den c'hol da vale dre guichen an tiez, ez ead dre goad ar ru, ha meur a vech e voue date dezhi beza lasad gant an c'hivri hag ar c'harroziou a dende la benn e zhi. En eul leac'h e tenaz eur marc'h carros ken tere dezhi ma edo he benn azouithi, ha ma zead he benn pa depas eun den da asten he zorn da gregin en he breac'h ha d'he zacha en eun taol da gostez ar ru.

An den en doa evelse he zaveteet a voa gantho eur zae zo hag eur tuban ruz outhan, hag eun tog ledan var he benn. Bez e c'helle tadit var d'ho ar ruzant vloaz. Eur beleg oa, mes ar verc'h paout he voue ket petra oa eur beleg, na penauz ez int guisket, ma anare ket eur zoudanen.

— Va merc'h, emezhan, em eus aon e hui so nevez deut da Paris. Ne ouzoc'h hu ket e flect d'ere hol tost d'an tiez pa vezer var droat anez c'haer var var da veza bresset.

— Oh ! aotrou, me so pell so e Paris. Gue come anavezan ket ar guiziou, ha neuze, ken nec het eun...

— Ia da, lavaret e ve e veac'h o clasc eun dra bennag ?

— Bez emañ ive. Clasc a ran unan eus an tiez braz-ze a so eur groas varnezho. O vale dre guet em eus guilet unan bennag eus an tiez-ze, ha deac'h zo ken oan bet en unan.

Ar beleg ne voue petra da donjal eus ar mag'h iaouanc, pe hi a ioa mad he fenn pe hi a taolennoc'h he spret.

— Ha perag, emezhan, e claskit-hu unan eus an tiez braz-ze ?

— Evit clasc unan eus a ebstel Jesus-Christ, da zont da gaout va zad a zo goal glan, evit na vourro ket ep caout ar pardon eus he bec'hejou. Ar beleg a iea souezetoc'h souezeta. Gouscoude e lavaras dezhi :

— Mad, va merc'h, me so unan eus an ebstel-ze a glaskit. Va c'hassit da gaout ho tad.

— Oh ! eme Mac'harit, laouen braz oc'h he gloued, Done, en deus bet truez ouzin, hag en deus ho digaset var va hent.

Neuze e troaz en dro hag en em lakeas da vourrevien. Ar beleg a iea var he lerc'h ep lavaret gant hoguen beac'h en doa o vont d'he hent. Goude dez

balec a hed eur pennad ru bennag, ar verc'h a jontas en he za dirag eun ti dister avoale h, hag a lavaras goustadic, ama col. — Em momet goude, edo an aotrou H. A. e kichen guel an den clan.

Aben eun heur goude, ar beleg mad a guitea he glanvour. An daelou a ioa en he zaoulagad. Pa velas Mac'harit a voa oc'h he c'hortos nec het bras, e crogaz en he daou zorn, hag e lavaras dezhi :

— Va merc'h kez, en em zinec hit, ho tad so e doarg vad. Clevet em eus gantha ar pez zo digouezet ganoc'h. Va laket en deus da scuilla daelou, ha brema e c'houzon petra rea din ho caout iskiz, e hui hag ho comzou. Ho tad ket en deus c'hoant da gomz ouzoc'h ; bezit ere ha caloneg. Trec'het oc'h eus dija meur a dra a stourme onzoc'h, hag evelse oc'h esperan, evit ar pez a jom deoc'h da ober, e viot prest da ober bolontez. Done, Ho tad en deus da lavaret deoc'h ar pez ne allan me ket da ober, mes man'o pefe ket a nerz avoale h evit ober ar pez a c'houlenno diganoc'h, ne ancounac'ha ket ar beleg en deus laket Doue hirio var hoc'h hent. Setu ama va han'o hag al leac'h ma emañ o chom. Hag e roas dezhi he garten. It, va merc'h, da gaout ho tad, ha va ho pennigo Doue evel ma ho pennigan va unan. Me a zistroi ep dale.

Mac'harit a jome a za, evel scoet gant ar respet e devoa evit an den-ze pehini a vele ervad a ioa e guirionez digasset abers Doue ; hoguen ar beleg en em dennas var guementse, hag hi a ias da gaout he zad.

Mac'harit a gavas he zad guelloc'h evit na zonie, he anaoudeguz lenn a voa gantha, hag he vouez a voa conts lavaret ker sclear ha kent. An diveza seleuren oa a daole ar c'houlounen araog mouga.

— Azez aze, va merc'h emezhan. Da guenta ro din eul loiad louzou... Mad... Brema silaou ac'hanon.

An tad a gontas neuze d'he verc'h ar pez a ioa digouezet gantha en he vuez. Pa zemezas, hen hag he bried a voa pinvidic hag eurus. Mes hen dre he zizuziou a deuzas he oll danvez. Red e voue dezho mont da eur vro estren evit euzet ho meaz. Eno e veijont c'hoas eur pennad gant an nemoranchou a voa chomet gantho eus ho madou dispignet. Ep dale n'o doa mui netra, n'o doa mui eun tam bara. Ar verc'h ne doa c'hoaz neuze nemet daou vloaz anter. Neuze an tad a fallas dezhan en em laza. Mont a reas er meaz eus an ti evit ober he daol. O veza ead eun nebeut dioc'h ker var an hent braz, e digouezet gantha eur c'harros caer ; hag an droug-speret a c'hoëzaz en he scuarn ar zouch da denna var an di-jentil a voa er c'harros-ze ha d'he laza eleac'h en em laza he unan. Hen ober ober a reas, hag e cavaz er c'harros-ze eur pacad braz a baperiou hanvet *billejou-banc*. Ober a ellas he daol ep beza guilet gant den, ha setu hen pinvidic a larre en eur momet.

Tremen a reas an noz ne voue ket he unan nemeur pelec'h ; ha ne zistroas d'he di nemet var dro goulou deiz. He bried pehini a voa christenez vad, a voa cho-

met da hidi epad an noz, kement a nec'h e devoa o clasc gouzout pelec'h oa ead. Pa her guelas deut en ti, ar goad oc'h he zilfad, hag ar pacad billejou-banc en he zorn, e velaz ervad petra voa tremenet. Ker scoet, ker mantret e voue, ma na ellas ket lavaret eur guer. Mont a reas adarre d'en em deleur e tued he c'hruell, hag eno e losc'az eur griaden, hag e coezazia slog, he c'horf d'an douar, lien a lamas ganthi evit e sevel, mes maro-mic oa ; he c'halon a voa ran et.

Neuze e teuas gant he verc'h da Paris, hag en em lakeas da vevañ en he eaz gant ar madou-ze en doa laeret. Neuze ive e kemeras eaz oc'h ar relijion pehini a voa evithan eur baret didreuz a rebeche dezhan dalc'h mad he dorfet. Ar guet epken eus eur beleg hen lakea e counnar. Evit ancounac'ha mui oc'h mui he relijion eo en em lakeas da zavel he verc'h evel ma on eus lavaret, ep coms morse dezhi a Zoue hag a relijion ebet.

Hoguen d'veza dre c'hras Doue, bet ar c'hras da gofez, en doa, dre zaouarn ar beleg, distalet d'ho ferc'hen ar pez en doa laeret. Ha brema e leze he verc'h var an douar. Setu perag e c'houlenne pardon digant ar verc'h-ze pehini a garie kement ma voa bet tost dezhan lezel he ene da vont da goll kentoc'h evit he zeleur er baourentez.

An den clan en devoe beac'h o lavaret an traou-ze oll d'he verc'h. Honna, oc'h ellit cridi, a voa laouen o sonjal e silvidighez he zad, hag e doa fizians ne vije ket diezet gant Doue. Souden e digouzas adarre ar beleg evit rei dezhan he sacramanchou diveza. Ho receo a reas ha kerkent, en eur lavaret ar beden-ma : Santez Mari, mam da Zoue, pedit evidomp, pec'heien, brema hag en heur ar maro, e tennas he alasad diveza.

Ar beleg en doa roët he sacramanchou d'an tad, en em gargas da guelen ar verc'h. Mac'harit ne voue ket pell evit deski azaout ha caret Doue, ha prest e voue ladezet. Hirio, etouez leanezet carmez, e ra enor da verc'h Santez Thereza. G. M.

MUNUDIA

Brema, bugale, me greu ne viot ker evit miret oc'h ho taelou da redeck, rac ar paour kozik Munudik a zo o vont da goueza etre skiffou eur rouñil kriz. P'en em gavchont dre greiz ar c'hoat, ann tad hag ar vamm a iez kuit var zigarez eur gefridi-bennag, hag ar vugale a choumaz eno ho unan penn hep kristen ebet war ho zro. Dibreded oa Munudik evelato, o veza ma krede e vize eaz d'ezhan distrei hep fazia d'ar gear. Hou-ma zo eunn anken ! ne oe cavet war ann hent na kreñn bara na minvik, na boufougou kennebeut : debret oant bet gant al laboused. E-tro ann noz digor, e savaz eur bar avel ha glao puill war c'horre (n'eo ket avel laosk e oa, a c'hallit kredi). Ar gwez kaset ha d'gaset a bep tu a rea trouz braz hag eur spount oa klevad ann dra-ze.

Petra da ober, o va Doue, petra da ober hep goudor na tra, eme Vunudik, enn eur skei taoliou troad gant ann douar. Hag hen mont tost eno ha pignat oc'h eur wezenn ha gwelet eur sklerijenn pell-pell diout-han; hag hen d'ann traon dioc'h-tu.

Kerzet a rejont etrezek ar sklerijenn, hag o veza en em gavet e korn pella ar c'hoat, e oe gwelet eunn ti; ha dao dao war ann or o c'houlenn digor. — Piou a zo aze, eme eur c'hrek koz. — Bugale a zo en em gollet diouz ho zad dre greiz ar c'hoat; bugale diank hag a c'houlenn digor hed ann nosvez a zeu, a lavaraz Munudik. — Va bugale geiz, eme an hini goz, Doue r'ho miro dioc'h drouk! Ne ouzoc'h ket eta ez oc'h deut rag-eeun da di eur rounfl a zo boaz da zibri ar vugale, kik, eskern hag all. Petra vezo great eta, eme Vunudik, enn eur grenn war he ziou c'har evel eur bar deliou. N'eo ket ebad kennebeut beza taget gant ar bleizi, hag e vezimp hep mar e-bed ma ne fell ket d'e-hoc'h rei golo d'e-omp. Marteze ar rounfl en devez truez ouz-omp.

Setu eta ann hini goz neuze ha rei digor ha lakaat anezho e korn pella ann ti.

— Naoun-ki am euz, eme ar rounfl o tont ebarz: bihan dra vezo evit terri va naoun, dibri ar maout a zo aze oc'h ar ber. Ha ne vezo netra ken da goania, va gregik koz?

— Neuze ec'h azezas oc'h taol da c'hortoz ha da ziskui-za. Me gleo c'houez ar c'hik fresk, eme-z-han o sellet a dreuz oc'h he hini goz. — Huvreal eo a rez, a lavaraz hou-ma; te gleo m'arvad kik ar maout. — Me ne ket eur rounfl iaouank ounn, eme-z-han enn eur zispourbella he zaoulagad; me lavar d'id, grek milliget, me lavar e klevann c'houez ar c'hik fresk, ha gwella zo, kik ar c'hristen, eme-z-han enn eur skrigna he zent.

Hag hen war vale dioc'h-tu ha mont da furchal e pep leac'h, ha gwelet ar seiz buguel. — Ne dal netra lavaret gevier d'in ravodez; anez ma'z oud re goz ha da gik kalet d'ann dent, ne vije ket hirr da abadenn. Daoust ha perak ne rafenn ket!

Neuze ar vugale en em strinkaz d'ann daoulin o c'houlenn truez, hag ar rounfl a reaz trugarez beteg antro-noz. Neuze ez eaz da gousket, goude beza great kof braz.

Tennet euz a Vignoun ar Vugale. A. TROUDE.

(Eur pennad all eur vech all.)

Eul Lean coz oc'h ober tr'or bed.

Eul lean en doa tremenet antercant vloaz er gouleac'h oc'h ober pinijen. Eno he vuez a voa bet henvel oc'h hini an Ælez; pidi Doue, gouzaon poan evit Doue, plijout da Zoue, n'oa bet ken en he zouch. Gouscoude pe guer santel bennag ma voa, ez oa eun dra hag a rea diaz dezhan; ne gave netra dioc'h he veno, dioc'h he zoare; eur fazi bennag a gave e pep tra. Lavaret a rea evel al labourer ma comz ar fablenn anezhan: « E petra eta e sonje an Aotrou Doue, lacat ar citrouillez oc'h treid ken dister hag ar mez oc'h guez braz evel ma zeo an dero? »

Er zouch-ze, setu-hen eun dervez hag oc'h en em lacat en hent evit mont da velet hag hen a gafje er bed eun dra bennag great gant muioc'h a furnez evit ar pe- en doa gwelet bete neuze. Ne voa ket eat a bell n'en em gavas nec'het; ne vouie ket pe hent da guemeret. Hoguen o tremen ebion da eur roc'hel vras, e cavaz eun den iaouanc gourvezet eno. Goulen a reaz digantha he hent, en eur lavaret en doa c'hoant da velet ar bed.

— Sell, eme an den iaouanc en eur zevel en he za, c'hui ra ive-ta evel donme? Me ia ive da velet ar bed. Mad, deomp eta hon daou kevret. Eun diot coz hag eun diot iaouanc, ne oufet ket caout guelloc'h da vont da ober tro'r bed.

Al lean coz a grizas he fri o clevet an den iaouanc o lavaret oant daou zen diot, gouscoude ne lavaraz netra. Mes pa voant eat en hent e cave abeg e kement a vele; ne blije tam muioc'h an traou dezhan evit ar pez a vele en dro dezhan en he goat. An den iaouanc hen leze da c'hrosmolat. Goulen a reaz outhan gouscoude pe hano en doa:

— Me so antercant vloas so er c'hoat du-hont, hag a rer tad Couer ac'hanon.

— Ha me so va hano breur Providans, ha n'oun bet o chom e nep leac'h.

Hano ar breur ne blijas ket ken nebeut d'al lean coz; hen he unan epken a gave hanvet mad.

Dont a reaz an noz hag al lean coz a voa skuiz bras. En em harpa a rea var breac'h an den iaouanc hag e couske en eur vont. Breur Providans hen dougas eun nebeut, ha pa zibunas, edont ehars dor ti eul-lean evel dhan.

— Han! eme tad Couer, ne ket bale mad a ran-me c'hoaz evit eur potr coz?

Setu penaus e voue trugareket breur Providans evit he vadelez.

Al lean a jome el lochen-ze ho diguemeraz hag a roas dezho da goania guella ma c'hellas. Al lean-ze a voa bet pinvidic araog en em denna eno da ober pinijen. Eus he oll zanvez n'en doa dalc'het nemet eun tas arc'hant da eva dour, hag eun tamig oa re stag he galon oc'h an tas-ze.

Antronoz, pa voant eat adarre en hent, breur Providans en em lakeas da c'hoarzin.

— Tad Couer, emezhan, ne ouzoc'h ket pe guer brao tro am eus-me great d'al lean mad hont?

— Pe guer brao tro?

— Ia, m'em eus laeret he das arc'hant. Sellit, setu-hen ama.

— Petra! laerez eun den hag en deus hon diguemeret ker mad? ha tad Couer o sonjal tec'het kuit dioc'h he guenbecher. Mes hema a grogaz en he vrac'h hag hen dalc'has. Da velet ar bed, emezhan, omp deut. An dra-ze ne deo netra. Deomp ato; c'hoaz a velimp.

An eil pardaezvez e tigouesjont e kichen eur guer. Glao braz a rea, ha gleb dour oant. Mont a rejont da skei var dor eun ti pinvidic. Perc'hen an ti a deuas da

velet piou a voa, hag en em lakeas d'ho gourdrouz. Ne fellas ket dezhan ho lezel da vont en t; gouscoude dre dreuz outho e lavaraz dezho tremen, mar carjent, an noz dindan an tamig toen pe disc'haven a voa a zioc'h an or, hag e roas dezho eun nebeut fa ne elle ket he vitizien ho dibri.

Dioc'h ar mintin, araog mont kuit, breur Providans a c'halvaz adarre mestr an ti, hen trugarekeaz hag a roas dezhan an tas arc'hant en doa kemeret divar goust al lean.

Pa voant eat ac'hano, tad Couer a lavaraz d'eguite:

— Pe seurt den oc'h-tu eta? Petra, deac'h al lean a rea deomp guella ma c'helle, hag e laerac'h he das arc'hant; henoz hema en deus great deomp evel a rer d'ar chas, hag e roit an tas dezhan!

— Deomp atao, eme vreur Providans; c'hoaz a velimp.

An trede dervez e voent diguemeret gant eun ozac'h coz pehini a ziskuezas dezho eul laouenidiguez ar vrasa hag a roas dezho ar pep vella a guement a ioa en he di. D'ar roue n'en divije ket great guelloc'h diguemer. An ozac'h-ze a voa intaon; n'en doa nemet eur map, eur paotrig pevarzeg vloaz, coant, sentuz ha speredoc dreist.

Pa edont o vont kuit, breur Providans a lavaraz d'an ozac'h coz; list ho map coant da zont ganeomp eur pennadig, gant aoun na fazifemp var hon hent pa vezimp eat er meaz a guer. An tad a lezas he vap da vont da ziskuez an hent-dezho. Da vont er meaz a guer ez eat dre eur pont striz; rag eur ster zoun a rede eharz he mogueriou. Digouezet eno, tad Couer a iea araog, ar potrig goude, ha breur Providans varlerc'h. Pa voant e creiz ar pont, breur Providans a grapaz er paotr hag hen strincaz en eun taol er ster. Neuze e criez oc'h tad Couer pehini n'en doa gwelet netra:

— Tad Couer! tad Couer! sellit-ta, ne velit-hu ket ar potrig-hont o veuzi? Ar potrig a voa deut ganeomp eo.

— O va Doue, eme tad Couer straufillet oll! penaus eo coczet aze!

— Me eo am eus he stlapet.

Tad Couer a voue ker saouzanet, hag en devoue kement a eus, ma crene he oll izili. Cridi a reas neuze mad oa breur Providans an droug-speret, hag e elascas tec'het kuit. Mes breur Providans a grogaz adarre en he vrac'h hag hen dalc'has.

— Clevit, tad Couer, emezhan, na dit ket d'en em drompla. Ne ket an diaoul eo ez ounn, mes æl ar Brovidans. Petra! antercant vloaz zo emac'h er gouleac'h o sonjal e Doue, ha n'oc'h eus ket gallet compren perag e ran evel am eus great! Me ne ran nemet seveni urziou an Aotrou Doue, hag an urziou-ze so ato leun a furnez. Mes c'hui gant ho sperejou ber ho c'haf alies diskiant. Doue en deus va digasset evit diskuez deoc'h eo c'hui so carguet a follentez.

Perag em eus lamet he das arc'hant digant al lean mad-hont? abalamour ma carie re an tas-ze. Great en doa al le da veza oll da Zoue, hag e talc'he eur c'hornig

eus he galon evit he das. Brema pa'z eo lamet digantha, ne zonjo nemet e Doue hag emac'h sur euz he zilvidiguez.

Perag em eus roet an tas arc'hant da eun den hag en doa hon diguemeret ker fall? An den-ze so eun uzulier. Ne glasc nemet madou an douar. Hoguen ober a ra gouscoude eur vad bennag avechou; ha Doue ne les ket an distera ober mad ep he c'hopr. Deomp en doa great eun tamig vad, ha setu perag en deus bet an tas arc'hant; ha n'en deus netra da gaout er bed-all.

Perag em eus taolet ar paotrig mad-ze er ster? Eanit da druezi dezhan. Evit he vrasa mad em eus he dennet eus ar bed-ma. Ma vije chomet e huez ar buguel-ze a vije coezet eun deiz er brassa dizurziou, hag a vije en em gollet da viken. Sellit! Neuze dre eur sclerijen abers Doue, an æl a ziskuezas d'al lean ar vuez dizuch en divije renet ar potrig-ze ma vije chomet var an douar.

— Ahanta! eme an Æl, avoale'h oc'h eus-hu gwelet?

— Ia, euruz eo ar buguel-ze da vezo maro epad ma zeo he ene didach.

— Mad, it eta en dro d'ho coat. Adorit Doue, ha na glaskit ket gouzout perag e ra an dra ma ha perag ne ra ket an dra hont; hoguen dalc'hit sonch mad e ra ato pep tra evit ar guella. G. M.

Hano ar Zent evit ar Sizun-ma.

Epad ar sizun-ma an iliz a ra bemdez an ofis eus a eisvet gouel ar Rouanez.

Dissul, 13 Guenver. — Eisvet gouel ar Rouanez.

An Avel hirio.

Ian-Vadezour a velas Jésus o tont d'he gaout, hag a lavaraz: Setu aze oan Doue; setu aze an hini a lam pec'hejou ar bed. Setu aze an hini m'am eus lavaret anezhan: Var va lerc'h e teu eun den hag a so en tu all din, rag ma edo em raog. Evidon-me n'hen anaien ket; hoguen evit he rei da anaout da oll bopl Israel eo ouñ deut da rei ar vadiziant dre zour.

Ha Ian a rentas neuze an testeni-ma: Gwelet em eus, emezhan, ar Speret-Santel o tiskan eus an env evel eur goulm, hag o chom varnezhan. Evidon-me n'hen anaien ket araog. Mes an hini en doa va digasset da vadezi en dour, en doa lavaret din: an hini ma velo ar Speret-Santel o tiskan hag o chom varnezhan, honnez eo a vadez er Speret-Santel.

Hag em eus gwelet; hag em eus rentet testeni eo hennez eo map Doue. — SAINT IAN I. 29. G. M.

KELEIER.

An Aotrou Olivier, vikel e Treflez, so maro er sizun dremenet.

Ar c'hardinal Gousset, arc'hescop Reims, a so maro an daou-varnugent a vis kerzu, d'an oad a bemzec vloaz.

ha triguent. Ganet e Montigny, oa bet vikel vraz e Besançon hag escop e Périgueux araog beza arc-hescop e Reims ha cardinal. — An Aotrou Escop a Verdun a so maro ive.

An tenna d'ar zort, er bloas 1867 a zigoro an unan ha tregont a vis guenver.

Mont a ra ato, eus a Frans ha dreist oll, a Vreiz, tud a volontez vad d'en em lacat e servich hon Tad Santel ar Pap.

Comz a rer euz eur martolot caloneg a Vinaroz, bet er brezel-mor diveza var listri Spagn en Americ. Epad ar stourmad al lestr ma edo varnezh an o veza en em gavet en tan dindan bouliji an enebourien, en em voestlas, mar chome beo, da vont da lacat lavaret eun oferen en iliz Itron-Varia-ar-C'harmel. Guelet a reaz an oll vartolodet all a zerviche ar memes pezh canol gantha, o coeza an eil goude eguile. Derc'hel a reas da denna he unan gant ar pezh canol-ze bete fin an abaden, ha kementse ep m'en devoue an distera droug. O tremen dre Vadrid e voue casset da gaout ar Rouanez. Hognen ne fallas dez an receo gopr ebet, ken na vije bet da guenta oc'h ober ar pezh en doa goestlet. Cridi mad a rea penaus mar doa chomet e brez, oa dre c'hallout an hini a hanver Stereden ar Mor, hag oa he zever, a raog pep tra, mont da baea he zle ha da drugarecat he brotectourez, he zifennouez ar Verc'hez gloriuz Vari.

Ar gazetenn hanvet *La France* a verk ez eo digouezet e Paris al lizerou aberz ar Pap pere a zao Escopti Aljer d'ar reng a arc-hescopti, hag a zao daou escopti all er vro-ze, Oran ha Constantina.

Eur soudart eus a arme ar Pap, eur zouav, eus a escopti Naonet, a voue dignemeret n'eus ket pell gant Pii nao, hen hag eur vanden eus he gamaradet.

An Tad Santel, ato leun a vadelez, a lavaras eur goms vad hennag da bep hini anezho. Pa voa digouezet gant hema, e c'houlennas digantha:

- Eus a beleac'h oc'h-hu?
- Tad Santel, eus a Naonet.
- Ah! Breton oc'h, eme ar Pap. Eun hano caer eo hennez.
- Mes, ha Breton mad oc'h-hu?
- Me gaf din, Tad Santel.
- Gouzout a rit-hu petra lexeer eus ar Vretonet?
- Ama ar zoudart ne grede ket respont.
- Mad, eme ar Pap, me na da lavaret deoc'h. Setu ama petra leverer: « eleac'h ma tremen an heol, e tremen ive ar Vretonet. »
- Souezet oc'h gant kementse?
- N'oun ket, Tad Santel.
- Mad, guell a ze. Guelet a ran ez oc'h eur guir

Vreton. Santez Catel a Zienn a lavaras vinonez, ma en he c'hear a Sienn var var da veza kementse gant sarazinet pere o doa grounnet kear, e sonas gant sicour digant ar Vretonet. Ar re-ma a deuas an heol. Hognen en despet d'ho nerz ha d'ho c'hourad, ma ma bourien a zalc'he mad. Abouez poania avout he gouscoude abenn da gas kuit ar sarazinet ha da goun ar seizi dijar guar ha divar ar zantez. Neuze eo e lavaras Santez Catel ar c'homzou-ma: eleac'h ma tremen an heol e tremen ive ar Vretonet.

En eur lavaret kementse, Pii nao a zalc'he he zorn var benn ar zoudart hag a scoe taoliouigou var he voue. Ar zoudart ne alle lavaret guer, kement a laouennonez hag a fongue a voa en he ene. Poket a reas caloneg da zorn ar Pap pehini a roas dezhan eur vedalen en eur lavaret: ho pet calon, va map, Doue n'ho digeze ket. Bezit eur c'hrouadur vertuzus, hag e vot eur Breton mad.

Araog ma zejomp kuit, eme ar zoudart, ar Pap a deomp he vennoz, ha biken ne ancounac hain an devez-ze, ar c'haera eus va buez.

Bep bloaz e vez cavet eur Maze bennag da lavaret pe seurt amzer a dle beza epad ar bloaz araog ma vez don an deiz kenta anezhan. Setu ama, ervez eur martolot nevez, eur guer bennag var an amzer er bloas 1867.

« Ar goad a vezo hir ha calet. An nevez amzer a vezo seac'h ha ien; an traoù a bouzo nebeut, scorm ha reo a vezo beteg e mis mae. E sonas ma pe en devezion kenta a even, e tremeno an douar eus an tennien d'an domder, hag e vezo neuze glao epad 109 pe bemzeg devez. »

« Goudeze e vezo eur sec'hor hag a bado abet mae here. Bez' e vezo eur bar glao bennag, mes an hano a vezo gouscoude seac'h bras. Vardro antep'heno e tremeno an douar eus an domder d'ar ienien, hag e vezo adarre neuze glaoeier. »

Kement-ma, lenner, ne ket tennet eus an Aviel, mes eus a scrijou *Maze an Almanager*.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 29 Kerzu.		PONT-NABAT. — 27 Kerzu.	
Priz ar c'hant liour.		Priz ar c'hant liour.	
Guinis.	45 lur, 35 c.	Guinis.	45 lur, 34 c.
Segal.	9 lur, 80 c.	Segal.	40 lur, 20 c.
Eiz.	10 lur, 00 c.	Eiz.	40 lur, 20 c.
Ed-du.	6 lur, 95 c.	Ed-du.	7 lur, 08 c.
Kerc'h.	9 lur, 87 c.	Kerc'h.	40 lur, 30 c.
Avalou-douar 4 lur, 00 c.		Avalou-douar 3 lur, 50 c.	

Ar Gerant: An. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand Ar. DE KERANGAL, Moulter an. Escopti.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL.

Da guement Christen a goms ar brezonec

Eun Abonnament d'ar Gazeten a goust:

- Evit eur bloas DAOU SCOUET.
- Evit c'huic'h miz EUR SCOUET.
- Evit tri miz C'HUEC'H REAL.
- Eur gazetenn ebken DAOU VENNEC.

Ar baecamant a dle beza great araog caout ar gazetenn.

KEMPER, 12 Guenver 1867.

Ervez ar c'hazetennou, biscoas noz Nedelec n'oa bet caeroc'h na solanizet gant muioc'h a zevosion evit er bloa-ma. Biscoas n'oa bet guelet muioc'h a gristenien o tostet oc'h ar zacramenchou en nosvez-ze hag epad ar gouelioù. Ha kementse ne deo ket en eul leac'h nag er c'haerieu epken, mes ive, ha dreist oll var ar meaz, ha kementse e pep carter. Mar deo caer guelet e kar meur a gant ha meur a vil den en em zestumet en ilizoù evit ober d'ar mabig Jesus ar guella diguemener a ellont da ober, ec'h eller lavaret ez eo caeroc'h c'hoas guelet var ar meaz tud oc'h ober diou, teir leo dre an hentchoù diessa, dindan eun amzer griz, evit dont da renta ho deveriou da Vap Doue diskennet eus an Env evit ho zavetei. Netra n'en deus mui a lienvolidiguez oc'h ar bastoret o vont dindan noz d'an c'hraou a Vethleem, evit an dud-ze o tont eus a bell d'an iliz dre hentchoù gouez pe a dreuz an douaron evit caout an heur da adori ho Zalver. Lavaret a ve' great e ve' ive en em ziskuezel an xelz dezho e creiz ar meziou, hag o defe ho aliet da vont da glase ar buguel a zo ganet evitho.

Petra livirit-hu var guementse, eme eur scrifagner, c'hui pe'te a gri a enep an Ilis santel had a lavar ez eo maro pe da viana toc'hor braz ar feiz etouez ar gristenien? Ma carjac'h beza deut d'an oferen a anteroz da unan eus hon ilizoù, e kar pe var ar meaz, o pije guelet ez eo c'hoaz, a drugare Doue, beo buezeg ar feiz-ze o pefe c'hoant da lacat er bez. An Ilis santel a zo ferm ha stard en he za, ha caer o pezo c'hoza an avelou foll eus ho kentelioù difeiz hag eus ho keier divez, ne allot ket he discar.

Ha gouscoude ne ket c'hoant eo a vanc dezho; ne ket fron a vanc dezho da zistaga gueier. Unan eus an dud divorc'het-ze, eo comz eus an nao missioner merzeriet e Coree n'eus ket pell, a lavare en dez-all: Mad so great evitho; perag mont dida glask deski d'an dud gouez ar pezh n'oa nag izom na c'hoant da c'houzont! Perag

Ar scrijou a ve' e ho acat da dleer da adressi oll d'an Beza
Ar paecamant a dleer da adressi SALAUN, ebken. An abonament a guemeter SALAUN librer, ru Kereon, e Kemper.

ne lezent ket an dud divadez-ze da veza ervez ho guiz evel ma pije gantho?

Ah! ma vije unan bennag eus an dud dizone eoa vije bet eat d'ar broiou pell-ze da glasc ho flijadur pe da glasc gounit arc'hant, hag e vije erouget an dud gouez enho, ha laket eun ezel bennag dezho oc'h ar ber, neuze o pije clevet an oll dud difeiz o iudal hag oc'h ober safar; neuze oll rouanet an vro-ma ha pa vijent eat digant ho oll zoudardet n'o divije ket gallet punissa an dud gouez-ze kement hag a ventont, mes evit nao missioner eat da glasc savetei an dud paour-ze, da glasc ho gounit da Zoue! An dra-ze ne deo netra; perag ne joment ket er gear dibreder? An dud ep relijion, bezit dinec'h, ne daint ket buan da gas ho fennou da drouc ha da dud gouez ar C'horee na da vro all ebet. Ar re-ze ne veachont nemet hano a ve da gaout plijadur pe meneg da serabat arc'hant; anez e chomont er gear da ziscrognal ho dent ha da harzal oc'h ar re a fell dezho ober eur vad bennag var an douar.

Doue a voar tenna ar mad eus an droug. Evelse mar deus en Itali brezel a enep an iliz, ar brezel-ze a ra ive dioc'h eun tu vad d'an iliz o lacat an virionez d'en em skigna muioc'h. An Eskibien, o tistred ho escoptioù, a garg a laouenidiguez calon an darn vuia; ar pezh a ziskuez ne deus nemet eun niver bihan a dud o stourm oc'h ar relijion. Ar venec'h laket er meaz eus ho c'houenchou, so red dezho, ervez comzou an Aviel, bija ar boutren dioc'h ho boutou ha mont e leac'h all da gas ar sclerijen eus ar virionez.

Eus ar penn pella ar bed e c'houlenner missionerien digant an tadou a gompagnunez Jesus, digant bugale S. Fransez, digant bugale S. Domipic ha digant kement urs menec'h so e Rom. An Itali e devezo ep dale kement a viisionerien o prezeg ar feiz dre ar bed evel e deuz ar Frans. Bez' e deus a vrema ouспен flaoù vil eus he bugale eat da zouguen ar c'helou mad dre an oll garteriou eus ar bed.

Gouscoude, da c'hortos mont er broiou-all cals eus ar venec'h-ze taolet er meaz eus ho c'houenchou a zo en eun dienez ar vrasa. Vardio Turin epken ez eus ouспен mit manac'h ha ne ouzont ket pelac'h mont. Rei a rer dezho, da lod antercant scoet, da lod all cant lur er bloaz epken; petra eo an dra-ze evit gallout caout bevans ha lojeiz? Guir eo an dud vad a deu d'ho sicour, anez cals anezho a varfehe gant an naoun var an douar noaz.

Unan eus ar re vraz eus an Itali, eus ar re o deus lakeat lamet he stajou digant hon Tad Santel ar Pap, teleur an eskibien er meaz eus ho Escoptiou, hag ar venec'h eus ho c'houenchou, a so maro n'eus ket pell. N'en deus ket gortozet ma teuje Doue d'he c'hervel, mes roet en deus ar maro dezhan he unan. Setu penaus e permet Doue avechou e teufe an dud difeiz d'en em bunissa ho unan, ha d'en em deleur etre daouan ar barker o deus disprijet epad ho buez, epad ma clascont epken tec'het araog d'ezamanchou ar vuez-ma. Maro spontus, hag a dle rei skuer d'ar re a ra ama ar brezel d'an iliz ha dar relijion.

E Russi, eur ministr all, pehini a iea da derri ar pez a jome c'hoaz eus an emgleo etre hon Tad Santel ar Pap hag ar vro-ze, so bet scoet gant eun taol goad, ha mar chom beo, ne vezo gnest da ober netra ebet mui. Cals a dud marteze ne velint e kementse nemet traou evel a veler bemdez; mes an dud a feiz a ell guelec'eno kenteliou roet gant Doue d'ar re ne respetont ket vikel J. C. var an douar. Caer o devezo beza galloudeg, ar re a glasco gouren oc'h Doue o devezo ato lamm abred pe zivezat.

Cals a gristenien a ziskuez brema evit hon Tad Santel ar Pap an deneridiguez hag ar garantez eus a vir bugale. Dioueret a reont ar pez o divije izom anezhan ho unan evit sicour ho zad. Ama e comzer euz eur vatez hag e deus roet en eun dro comanant eur bloaz, cant lur, evit diner Sant Per. Ahont eo diou labourerez, diou zervicherez hag o deus casset da Rom daou c'hant deg lur destumet gantho guenneg ha guenneg o tivoueret bemdez eun dra bennag.

Eun den pinvidig, evel ne vouie ket penaus eas sicour da Vikel Jesus-Christ dre n'edo ket he vugale e tro da ellout mont d'an arme, en deus roet peadra da zerc'hel e servich ar Pap ken aliez a zoudard evel a vuguel en deus. Pii Nao en deus scifet he unan evit meuli ha trugarecat an tad calonec-ze. Pemp cant lur er bloas so avoalc'h evit d'erc'hel eur zoudard e Rom; ha meur a zen pinvidig marteze a alfe kemeret skuer dioc'h an tad christen ma comzomp anezhan.

CHARTR. — E Chartre ez eus eur chapel eleac'h ma peder ar Verc'hez dindan an hano a Itron-Varia-dindan-an-douar. Eno, evel e calz a chapelou devot e veler mercou a anaoudeguez vad roet gant tud hag o deus bet eur c'hras bennag. Etouez cals a draou all a veler er chapel-ma ez eus croc'hen eur ren, eur stern brao en dro dezhan evel eun daolen. Var ar stern e lenner ar c'homzou-

ma : *Al Laponet da Itron-Varia-Chartr, 15 east 1866.* Al Laponet so o chom er c'harter pella eus ar bed eun an Anter-Noz. An dud-ze so bihan bihan, evel cornandonet. Ar vro-ze so ien braz; ato, pe couls lavaret ato vez goloet an douar gant ar scorn hag an erc'h. Hag e ket eur guiscadic scorn pe erc'h evel a vez lamet a vez eno, mes scorn eat meur a droatad en douar, erc'h hag a jom eis, nao miz ep teuzi. Ar ren so eul loen hag a vef er vro ien ze. Henvel eo eun nebent oc'h eur c'haro; ha kerniel en deus evel dan. Al Laponet a ra gant ar ren ar pez a rear er c'harter-ma gant kezeg, saout, denvet. Sevel a reont var he guein; he staga a reont oc'h ho zreinellou. Evel ma zeo ato goloet an douar gant an erc'h, ne aller ket beachi e kirri, mes e treinellou pere a ruz var an erc'h. En em vaga a reont gant he leaz hag he guig. He c'hloan, ha dreist oll he groc'hen, a zervich dezho da zillad.

Al Laponet a zo eta en eur vro eleac'h ma zeo criz meurbet an amzer. Kementse ne vir ket na da di missionerien da brezeg an Aviel. Unan eus ar re zo brema en ho zouez eo en deus digasset eus ho ferz ar c'broc'hen ren-ze da Itron-Varia-Chartr. An dud-ze o veza bet an heur da anaout ar guir relijion, a ziskuez ho anaoudeguez vad, ha ne dleer ket beza souezet ma tiskuezont an anaoudeguez vad-ze d'ar c'harter eleac'h maez ganet an dud vad so eat da gas dezho sclerijen ar feiz; da rei dezho anaoudeguez eus ar guir Doue, ha da zigueri dezho dor ar baradoz abenn ma kuitaint ar vro reuzeudig ma emaint o veva ephi.

HISTOR ZANTEL.

(C'HOUEC'HVED PENNAD).

Moizes hag Aaron a ia da gavout Pharaon.

Moizes hag Aaron a iez da gavout Pharaon, hag a lavaraz d'ezhan: Chetu petra a lavar ann Aotrou Doue Israél: List va bobl da vont evit ma rei d'eur zakrifis ebarz er gouelec'h.

Mes Pharaon a respontaz: Piou eo ann Aotrou, evit ma selaoufenn he vouez, ha ma laoskfenn Israél da vont er meaz euz va stadou? Ne anavezann ket hoc'h Aotrou, ha na lezinn ket Israél da vont kuit.

Hag e leverjont d'ezhan: Doue ann Hebreed eo en deuz hor galvet, evit ma'z ajemp er gouelec'h, a hed an dervez kerzed, ha ma rajemp eur zakrifis d'ezhan, gant aoun ne gouezse var-n-omp pe bosen pe kleze.

Moizes hag Aaron, eme ar roue d'ezho, c'houi zo o tistrei ar bobl euz he labourou, it hoc'h-unan d'ab labour. Neuze Pharaon a lavaraz d'he offisserien: Ar bobl se a zo denet eur bobl braz em rouantelez, guelout a rit pegement eo kresket ann dud-se, pegement muioc'h na raint-hi ket, ma roit arzao pe diskuiz d'ezho eun ho labourou? Hag enn deiz-se memes e roaz ar gourc'hemenn-ma d'ann Hebreed a oa e penn al labourou, ha d'ann Ejiptianed karghet da douch ar guiriou, ha da

recoo labourou ann Israélited dioue'h ma vijent tasset d'ezho: Hiviziken, emez-han, ne root mui ar c'holo, pe ar plouz, d'ar bobl-se da ober he vrikennou, evel kent, ra'z aint ho-unan da glask ha da zastum ar c'holo. Ha grit d'ezho furnissa ann niver brikennou a reant araok, hep distol ebed. Re vag int, n'ho deuz netra da ober, ha setu perag e kront, hag e lavaront: Deomp da ober eur zakrifis d'hon Doue. Ra vezint karghet a labour, evit n'e vaghint ket enn ho spered traou ha ne d'int nemet gheier.

Renerien al labourou, hag ar viraerien, pe tud ar guiriou, a iez eta da gavout ar bobl, hag a lavaraz: Chetu ama urz Pharaon: Ne roann mui ar c'holo; it, ha dastumit-hen eleac'h ma her c'hafot, ha ne vezo diminuet netra euz ho labour.

Hag ar bobl en em skignaz dre holl vro ann Ejipt da zastum ar c'holo. Ha renerien al labourou a starde var an dud, o lavarout: Grit ho lod-labour bemdez evel ma oac'h boazet da ober kent pa vije roet ar c'holo d'ehoc'h. Hag ar renerien ho-unan a vije skourjezet gant ar viraerien, pere a lavare d'ezho: Perag na zigassit mui ann niver brikennou a reac'h kent? Hag ar renerien a zenaz hag a griaz ouc'h Pharaon; perag, emezho, e rit-hu kement-all d'ho servicherien? ne roer mui ar c'holo, hag ar memes niver brikennou a c'houlenner. Ni ho servicherien, hor skourjeza a rear gant guiall, hag ho pobl a zo goall-aozet enn eur fesoun displeal?

Pharaon a respontaz: C'honi ro re zibrez, ha chetu perag e livirit: Deomp, ha greomp eur zakrifis d'ann Aotrou. It eta; ha labourit, ar c'holo ne vezo ket roet d'ehoc'h, ha furnissa a reot ann niver brikennou boazet.

Evel se ar re a oa e penn labourou bugale Israél, hag a oa Hebreed, evel m'hon euz lavaret, a oa goall nec'het. Ha pa zeuent er meaz euz a balez Pharaon, en em gavjont gant Moizes hag Aaron, pere en em zalc'he tost eno; hag e leverjont dezho: Ra velo an Aotrou, ha ra varno; great hoc'h euz ma eo fall-oc'h fall hon affer dirag Pharaon hag he zervicherien, ha roet hoc'h euz d'ezhan ar c'hleze evit hol laza.

Moizes a zistroaz da gavout Doue, hag a lavaraz: Aotrou, perag hoc'h eus-hu glac'haret ho pobl? perag hoc'h eus-hu va c'hasset da gavout Pharaon? Abaoe ma ounn bet o komz d'ezhan enn hoc'h hano, hen en deuz trubuliet mui-oc'h-vui ho pobl, ha n'hoc'h euz ket he zilivret?

(Er pennad kenta e velimp penaoz e respontaz Doue d'he zervicher. Abarz achui ar ghentel, taolomp evez var gomzou kenta roue ann Ejipt. Piou eo, emezhan, ann Aotrou evit ma selaoufenn he vouez? — Setu aze eur gomz ourgouilluz mar'z euz hini; hag ar penn-kaoz marteze ma laoskaz Doue kaloun Pharaon d'en em galedi. Rak Doue a hars ouc'h ann dud ourgouilloz, hag a ro he c'hras d'ar re vuel.

Rebechou ar bobl da Voizes a dleomp c'hoaz da verka. Ar bobl paour a zo prest ato da damallout d'he vistri ann droug a c'hoarvez gant-han; ha d'en em ghe-

mer avechou ouc'h Doue he-unan eleac'h gouzaon gant kourac'h he boanton, en em zikour vad mac'h-hell-ha gortoz neuze ma teuje doue ann Aotrou Doue d'he ziboniat.

EUR SKOL-NOZ.

(KENTA PENNAD).

Brema ez euz eun neubeud bloavezyou, eur beleg mad, kure, pe mar kerit, vikel en eur barrez euz a greiz ar Frans, a bempzeg kant den war-an-dro, a zigore eur skol-noz er barrez-se evid an dud vraz, evid ar voazed epken.

Beza edo er barrez eun neubeud bloavezyou a voa, ha ne gavo ket e yee re vad an traou enn-hi evid ar feiz. E-lec'h gwellaat, ar barrez a yee war fallaat beb bloaz.

Ag an abeg, ar penn-kaoz a gemment-se? Setu en ama e daon c'her: an dud euz ar barrez ha yeent mui pe koulz lavaret mui da zilaou komzou Doue, me content ar prezegennou pe sermonyou, ar c'hatekiz ha kelennadurezou all greet en iliz.

Diou oferenn a vize, beb sul, er barrez (ag a vez attao: ar barrez n'ed eo ket cherchet war ar poent-se), eun oferenn beure pe vintin ag eun oferenn bred. En oferenn beure ne vize na katekiz na kelennadurez all ebed (ar giz a voa evel-se, ha ne welet ket e vize ezet ober e feson all: an dud, yenet evel ma voant ouz komzou Doue, ne vijent ket chommet da zilaou). En oferenn bred epken e vize, peurvuia, eun tam sermon benag, ha c'hoaz e renke beza troc'het berr, berr ar pez ma oufflet didan boan da welet an neubeudig goazed a vize en iliz, o vont er meaz da zevi ho c'hornad, epad ma vize ar beleg er gador.

Lavaret a ran an neubeudig goazed a vize en iliz: rag, e gwiryon, en oferenn bred na welet nemeur a voazed, neubeud dreist-oll a bapred yaouank. Eur bochadig merc'hed e kreiz an iliz, frank d'ezo d'en em leda ar pez a gerent, eur goaz benag du-ma-du-ont herpouz ar c'hanevedennou (piliero) eun neubeud papred koz azezet war dreid an aoteryou e goled ar c'hroazellou, eur c'hanour pe zaou er c'heur gad eunan euz ar veleyen o trailla eun tam kan gad ho mouezyou raouyet ha diamzeret, eur bugel benag e hiarz troad an aoter o sellet en dro d'ezo ag ar beleg ouz an aoter, setu aze an oll bobl a welet en oferenn bred.

Ag ar re-all euz ar barrez? Ar re-all (ar re anezo ag a yee c'hoaz da eun oferenn benag: kalz na yeent mui da glask in ebed, pe dibad a wech), ar re-all oll a yee d'ann oferenn beure pe vintin, o veza ma voa berr, evid ma vijent liproc'h a-ze, epad ar rest euz an deiz santel, da c'hoar, da ebata, da rodeg, da elfa bannac'hou dre an hostiliero, pe da labourat, da ober ar pez a anvent traouachou, diotachou. Ha c'hoaz da be boent euz an oferenn eo he arrouent-hi aliez, kalz anezo, ha penaoz he c'hlevent-hi? Ar barrez a voa oll en eur vourc'hadenn ag an iliz

parrez e kreiz ar vourc'hadenn. Ar re a voa ar pella euz an oferenn, ho devoa daouzeg minud bale da ober evid mont d'an iliz. — Kemment-se a ziskouez d'eom n'ed eo ket re vad attao beza tost d'an oferenn? Piou a vank an alies a d'an oferenn? Ar re dost. Piou ar re a vez divezad en oferenn? Ar re dost. Piou eo paôtre an oferenn beure, pa yeont c'hoaz da eunan benag? Ar re dost. Ag ispisial pa na vez na katekiz, na kelennadurez all ebed en oferenn beure, en em daôlont muioc'h c'hoaz da vont d'an oferenn-ze, ec'hiz ma c'hoarvezaz er barrez ma komzom euz anezi ama.

Ne lavaran netra-euz ar gousperou er barrez kez-se. En ordinal na welet ket en iliz er gousperou teir dousenn dud, etre goazed ha merc'hed.

Hogen, setu ama brema ar frouez fall euz ar giz kemmeret gan tud ar barrez-se da vont kemment d'an oferenn beure ha da dec'het kemment euz ar zermonyou. O veza ne glevent mui, pe dibaôd a wech, komz euz a Zoue, euz ar gwiryonezou euz ar Feiz, an dud keiz-se a zeuaz, beb eun nebeud, da ankounac'haat ho c'hrouer, pe da viana ne zontent mui enn-ha, da ankounac'haat kemment ho devoa desket gwechall er c'hatekiz, en eur ger, da ankounac'haat ho relijion, ma ho devoa morse he gouezet mad, ar pez a zo douetuz (rag an den, c'hwï voar, a zeu da ankounac'haat beteg ar gwiryonezou en deffe desket ar gwella, pa ne glev ket komz euz anezo, eur wech an amzer).

Feiz an dud keiz-se eta a vianee bemdez; ho c'hous-tians a devalee, a frankee evid an drong ag a strisee evid ar mad; ho buezegez a fallec: an niver euz ar pec'hejou, an dizurzou, ar fallagriezou a yee bepred war griski en ho zouez; ar respet evid ar Relijion a zimjue taôl-ha-taôl. En eur ger, ar barrez a ree ec'hiz eur c'hlanvour, peini a zo attaket gad meur a voall glêved assamblez, a lammou braz e yee etrezeg ar maro euz ar Feiz.

Ha petra da ober evid miret ouz ar glanvourez kez da vervel? Petra da ober evit krevaat enn-hi ar vuez euz ar feiz, evid rei d'ez ar yec'hed euz a c'bras Doue?

Lavaret or beuz penaôz an abeg, ar vammenn euz an oll drong edo dre na yee mui au dud euz ar barrez da zilaou komzou Doue. Lavaret a-voale'h e vize d'ezo dont muioc'h d'an oferenn bred, da viana dont beb eil zûl, evid klevout eur gomz benag a relijion. Mes an dud na glevent ket, ag ar re a gleve, a leze lavaret ag a zalc'he d'ho stum.

An Aôtrou Kure pe Vikel euz ar barrez, beleg santel, leun a skiant, a vouiziegez, a c'hoantegez ag a beb sort donezonou mad, a voa o klask, pell a voa, eur voyen benag da lakaat gwellaenn er barrez. He berson en devoa sonjet ivez kentoc'h e kemment-se. Mes evel kollet en devoa kourach ag e leze an traou da vont ec'hiz ma yeent. He gure n'en devoa ket c'hoaz heanet da esperout. Pidi a ree an Aôtrou Doue da zigaz d'eza eur zont vad benag, da rei d'eza da anaout eur voyen da zont a benn euz ar pez a glasse. Hogen, eun deiz e teuz en he spered digori er barrez eur skol-nôz evid an dud vraz, evid ar

voazed epken, komz d'ezo er skol-nôz-se euz a galz a draou mad, mes da genta euz a draou pere a zellze ouz ar vuez-ma, konta d'ezo zoken a-wechou traou koant, divuzuz, traou evel-se pere a blij d'an dud, evid ho zehna, bonta e touez kemment-se oll geryennou a relijion, ag erruout beb eun nebeud beteg ober d'ezo eun tam katekiz mad, mes eb envel se katekiz: spontet e vizont bet.

Komz a reaz d'he berson euz ar zont deuet en he spered. An Aôtrou Person ne gavaz ket fall ar zont ag hen aliaz da c'houlenn kuzul ag aôtre an aôtrou Eskop evid kommans ar c'henta ar gwella.

Eun nebeud devezyou goude e voa an Aôtrou Kure e harz treid he Escop, o tispaka d'eza penn da benn ar pez en devoa mennet. An aôtrou Eskop hen approuvaz, a roaz d'eza he guzulyou, hen kourachaz ag hen binnigaz. An Aôtrou Kure a zistroaz laouen d'ar gær, mall gant-ha krog en he bez labour, ag he galon leun a esper da ober eur vad benag, dre he skol-nôz, er barrez ma voa lakeet enn-hi gant Doue dre zaouarn he Eskop.

Eur miz goude ar skol-nôz a zigore e parrez M.... An Aôtrou Kure en devoa, er wech kenta, en he skol eun tregont goaz benag ag euz ar pennou euz ar vourc'hadenn. An niver-ze a yeaz bepred war griski, ag ar vad a ree ar skol, a greske da heul.

J.-K KERZALE, *Beleg ar Zalet.*

(*Eur pennad all eur wech all.*)

MAM EUR MISSIONNER.

III.

Coulskoude setu sounet ar c'hloc'h hag ar chapel dija leun. Ebars er c'heur, beleien dija guen ho bleo, ha croummet a ziudan ar beac'h euz ar bloaveziou, a zo azezet en dro d'an aoter; izelloc'h eghetho ema ar glouer iaouanc, eur c'hant bennac anezho; erfin, e traon ar chapel, ez euz ive cals cristenien euz a ghear deuet da velet eur ceremoni ha ne vez ket gullet aliez.

Ar missionner a dle mont kuit a zo en he za en tu deou d'an aoter. Neuze unan euz ar veleien goz en em dro varzu eunhan hag a gomz outhan evel-hen: « Va breur ha va mab ker, c'hoaz eun nebeudic amzer hag ez it kuit diganeomp; ha credabl bras n'en em velimp biken mui var an douar. Araoc' kimiada diouzomp, recevit hon diveza kelennadurez hag hon aliou diveza.

« Doue, en he vadelez, eo en deuz lakeat en ho speret ar c'hoant da implija ho puez evit gounit eneou dezhan; hen eo en deuz roët d'ehoc'h ive an nerz da heul ar c'hoant-se en devoa lakeat en ho speret. Hoghen ar pez a c'houlenn diganeoc'h dreist peb tra, an Doue trugarezuz-se, eo ma n'o pezo en oc'h oll oberou hag en oc'h oll gomzou, ken sonch na ken ioul nemet da blijout dezhan ha da ober he volontez; ar pez a c'houlenn diganeoc'h dreist peb tra, eo ma tougoc'h e kement leac'h ma'z eoc'h eur guir galoun a velec.

« Choazet oc'h bet evit eur missionner hag a zo danjerus

meurbet. An hini ma'z it en he blas en deuz scuillet he c'hoad evit Jesus-Krist; hoghen, n'e ket eur garg vihan beza hanvet evit delc'her plas eur merzer.

« Ar vuez o pezo da ren hiviziken ne vezo tamm henvel ouz an hini o peuz renet bete vrema. El leac'h ma'z it, o pezo peb tra da zioueret. Great e vezo hu varnoc'h evel var eul lang gouez; clasket e vezo lakaat an dorn varnoc'h evel var eun torfetour, ha, mar bezit paket, e vioc'h lakeat d'ar maro eb truez ebet. N'o pezo nag amzer da ziskuiza epad an deiz, nag amzer da gousket epad an noz. Naoun o pezo, ha den ebet avc'hou ne gredo ober d'ehoc'h an aluzen euz eun tamm bara. Dare e vioc'h gant ar zec'het, hag aliez ne gavoc'h ket eur banne dour evit refreski ho teod. Red e vezo d'ehoc'h beza ato var vale, beza ato o tec'het en tu-ma hag en tu-hont, hag aliez ne gavoc'h ket zoken eun doënzoul evit en em lakaat er goudorr pe er goasket a enep ar glao, an c'erc'h hag a bep seurt goal amzer. Mes dreist peb tra, beza e vioc'h eno oc'h unan.

« Ia, beza e vioc'h oc'h unan, ha setu eno ar pez a raio ho prassa poan. Red e vezo d'ehoc'h tremen meur a vis, meur a vloaz marteze, eb clevet eur gher, eur gher ebken, euz al langach o peuz desket gant ho mam, eb gullet den ebet euz ar vro-ma, eb ghellout morse lakaat ho torn e dorn eur mignoun.

« Marteze zoken n'o pezo ket ar joa da velet ho labour o toughen frouez, hag e vezo red d'ehoc'h mervel ebars er broiou pell-ze, evel eun dra didalvez, evel eun den lezet en abandoun ha dianavezet gant an oll, eb ma ve eur mignoun en ho kichen, eb ma ve eur c'hristen da bedi evidoc'h var ho tremenvan ha da lakaat eur groaz var ho pez goude ma vo diskennet ho corf en douar. Hag evelse e rencoc'h marteze mont da skei var dor ar Baradoz eb doughen en ho torn ar gurunen a verzerenti, curunen ha ne ro ket ato an Aotrou Doue d'ar re o deuz ar muia c'hoant d'he gounit.

« Setu aze ar vuez hag ar maro a zo marteze ouz ho cortoz. Mes e creiz an oll hoanion-ze Doue n'oc'h ankounac'haio ket. An Doue-ze pehini en deuz ho calvet hag a behini o peuz clevet ar vouez, an Doue-ze ne c'houlenn nemet eun dra diganeoc'h, nemet ma labouroc'h calouec evit he c'hloar hag evit silvidighez an eneou. Pe e tougo ho labour frouez, pe ne raio ket, n'euz forz: Doue a c'houezo ho tigoll euz ho poan.

« Cant milion ene a zo ouz ho cortoz evit rei d'ehoc'h ho c'hassouni e plas ar garantez o peuz evitho. An eneou-ze o denz coustet goad eun Doue. Jesus en deuz mall da rei dezho ar vuez euz ar c'hras, da lakaat da bara varno ar sclerijen euz ar feiz, da ghemeret anezho evit he vugale. Ha c'houi eo a zo bet choazet evit ho gounit hag ho digass dezhan. C'houi eo a dle greff ar scourrou maro-ze var ar vezen ato beo ha glaz euz an iliz catholic, evit ma teuint dre c'hras ha dre vertuz ar Speret-Santel a ro ar vuez d'ar vezen-ze, da zoughen frouez evit ar bed all, evit ar vuez a bado da viken.

« Mar cav d'ehoc'h e labouroc'h en aner, re all a zastumo ar frouez euz an had o pezo taolet en douar.

Arabac eo e teuffac'h morse da fall-galoun. Ar Mestr ho cass evel eun oan etouez bleizi, evit deski d'ar bleizi-ze, dre ho tousder hag ho patientet, dont da veza eun deiz oanet evel doc'h.

« Gouzanvit peb tra, ha ne rit morse poan da zen ebet. Eürs e vioc'h pa vezo great brezel d'eoc'h abalamour ma tisennit ar justis hag ar virtonez. Eun ene ebken gounezet da Zoue a dal muioc'h eghet mil merzerenti.

« Bezit dous hag humbl a galoun evel an Doue dioc'h pehini e tleit kemeret scouer. N'o pat netra evidoc'h oc'h-unan: ra vezo ar groaz oc'h oll danvez hag oc'h oll binvidighez.

« Ne brezekit ket furnez ar bed; mes prezeghit Jesus-Krist ha Jesus-Krist stag ouz ar groaz. N'euz nemet ar groaz hag a c'helle sclerijenna ar sperejou ha toma ar c'halounou. List ar c'homzou caer gant tud ar bed, ha c'houi grit oberou mad; comzou tud ar bed a zo peur-vuia comzou goullou; ra vezo ho comzou hag ho labourou-c'houi leun a virit dirac Doue.

« It eta, va breur ha va mab, it en hanou Doue, hag o'pet sonch ato penaoz Doue ne gount nemet camejou an dud a brezec an aviel a beoc'h, hag a dremen var an douar, evel he Vap benniguet, en eur ober ar mad.

IV.

Evel eun ecleo euz ar c'homzou diveza-ze, e teuas ractal euz a c'hinou ar glouer iaouanc ar ganaouen zantel-ma: *Quam speciosi pedes evangelizantium pacem!* Nag en zo caer treid ar re a gass ar c'helou a beoc'h, ar c'helou-ze euz an aviel a ro er bed-ma ar peoc'h d'an ene, hag a ro dezhan evit ar bed all ar madou eternel euz an env. Neuze an hini a dle mont kuit o veza ato en he za dirac an aoter, an oll veleien hag ar glouer all a roa eno a deuas an eil goude eghile, ar re gossa da ghenta, da boket d'he dreid gant respet. An treid-se a dle en em lakaat en hent eb dale evit mont d'ar broiou pell da gass ar c'helou mad euz an aviel, ar c'helou-ze a ro ar c'hlevet d'ar re vouzar, ar gullet d'ar re zall, ar vuez d'ar re varo. Dre ghement-se oant henvel ouz treid Jesus-Krist he unan, an treid sacr-ze pere o deuz baleet, da ghenta, dre ghement corn zo er Judée evit deski d'an dud hent ar Baradoz. Oc'h ho heni eta evel ma reat, oa treid sacr hor Zalver Jesus-Krist he unan eo a heno-ret enno. Coulskoude ar missionner iaouanc n'oa ket evit miret da vouela o santout var he dreid muzellou he ghenvreudeur; muzellou ar visionnerien goz-se, he dadou, var bere ar maro en deuz great fae, ha pere, lod anezho, o deuz beac'h o plega dirazhan ho c'horf, dinerzet er broiou pell, hag avc'hou blonset gant ar vourrevien; hag ive muzellou ar re euz he oad pere o deuz kement a avi outhan, hag a garfe evel dhan caout diouaskel evit nijal en tu all d'ar mor bras da c'hounit eneou da Zoue. Epad ar ceremoni-ze ar glouer euz ar seminer a gane eur ganaouen c'hallec great gant unan anezho. Ar ganaouen-ze a zo re hir da lakaat ama penna-da-benn; setu ama ebken ar c'houllet kenta hag an diskant anezhi troët e brezounee:

It en hent, pnezegherien ar c'helou mad,
 Deuet eo an deiz o poa kement a vall da velet,
 Netra iviziken, n'o talc'h mui dre ama,
 It en hent-ta, mignounet, na e'houi zo e'ous,
 Nag en zo caer ho treid, o missionberien,
 Dridal a ra hor e'haloun en eur boket dezho,
 Nag hi vezo caer pa erpint'er brogou pell-ze,
 E leac'h ma ren e'hoaz ar gaou hag ar maro!

DISKAN :

It en hent, mignounet, kenavo evit an vuez-ma!
 It da gass pell hano santel hon Doue!
 En em gaout aramp eun deiz en env, hor guir bro,
 Kenavo, breudeur, kenavo!

Goude ar ceremoni-ze e oue canet litanrou ar Ver-
 c'hez, ha pa errijot gant ar c'homzou-ma : *Regina mar-*
tyrum, ora pro nobis, Rouanez ar verzerien, pedit evit
domp, ar c'homzou-ze a oue canet abenn teir gñeic
dfloc'htu.

VII

Hoghen, epad an amzer-ze, ez oa var he daoulin, e
 traou ar chapel, en eur c'hornic'henval, eur vaouez hag
 a zave, bep'eil mare, he daoulagad beuzet en he daelou,
 varzu mach an *Hina* a zo bet ar ghenta oc'h heul he mab,
 ha n'e devoa nemethan, betec' var menez Calvar. Ar
 vaouez-se ive a ioa mam, hag ar vam-ze e devoa ive eur
 galoun nerzus; santout a rea ive couls goude, evel he g
 ien eur c'hleze o sank a en he ene, hag evit, en em gñe-
 fat hag en em zouten, e tigassee en he speret ar zoneh
 euz ar brassa, mere a garantez hag a nerz-caloun a zo
 het roet var an douar, goude an him en deuz roet Jesus;
 ha neuze e lavare enni he unan : « O Mam, evit keme-
 ret scouer diouzoc'h me hen no d'an him en devoa he
 brestet, d'inn. Mar tell da Jesus caout he vuez evit
 « paca ransoun eun ene, o va Mam benniget, n'e ket
 « me a lavaro nan. Ar pez a roap-me ne d'eo netra e
 « scoaz ar pez o, peuz roet c'houi, o Mari, Couls goude
 « c'houi a c'hoar petra eo beza mam, ha petra eo rei
 « eur bughel pa ne vez nemethan. Daoulinet ehars ho
 « treid n'em euz nemet eur c'hras da c'houlen dig-
 « neoc'h, ar c'hras ma c'hello va rann-galoun rei tro
 « d'am mab da zavetei eun ene bennac' »

En eur gomz evelse he daoulagad a zalc'he da bara
 var an imach santel. Santout a rea kement banne goad a
 ioa en he goaziet o tout da veuzi he c'haloun; daelou
 druz ha tomm-bero, a rede hed he divoc'h gñen; eur
 heac'h pouner a ioa var he c'herc'hen; ar c'hlae'har
 hag an anken a voaske var doul he gouzouc evel dorn
 eur bourreo. En stad-se n'e devije gñellet lavaret gher
 ebet evit comz ouz an dud; mes scouarn ar Verc'hez
 Vari, soublet varzu enni, he c'hleve, ar vam gheaz, o
 lavaret a vouez izel euz a greis he hirvoud hag he gouel-
 van : « Rouanez ar verzerien, pedit evit-han. »

Tennet divar ar gazeten c'hallec' *L'Ouvrier*

GABRIEL MORVAN,
 Person Plaguen.

MUNUDIK.

Arabad eo enn taol-ma, bugale, beza e'chall gant
 mudik. Disz e ve, hep gaou, kavout mouale'h pa loza
 hevel out-han.

Ar rounfl en doa seiz merc'he; taouank-flamm e
 c'hoaz, hag ar vam, evel ma z'oa boaz da ober, e deu
 lekeat anezho ho seiz enn eur gwele braz a loazost
 gwele all; huasoc'hevrit eguille. Eno oe lekeat
 hag he vredeur.

He-ma o vont d'he wele en doa gwelet eun
 nag hag a lekeaz anezhan souezet-braz a
 rounfl a ioa gant, ho ho seiz peb a gurnennad
 fenn.

Setu Munudik neuze ha fureha enn he benn
 ret d'he vredeur diwiska ho boned koton, gwenn
 hen, ha dastum anezho en he zourn.

Petra reaz neuze, hor paotr? Sevel diwar he
 tonna ar c'hurunennou aour, ha tacaat ar seiz boned
 gwenn enn ho leac'h.

E-tro hanter-noz ar rounfl, o tihuna a lavaraz
 c'brek : Deuz va c'hountel-laz d'inn, ma weh
 paotredigou. Hag hen mont d'ar gwele tosta
 ar c'hurunennou aour a luge ne hed ann noz; arabad
 lazia, eme-z-han, enn eur vont d'ar gwele all. Sa
 hor paotred... ha krak... krak; hep taol e oe
 eur penn diwar gouzouk he vere hed.

Pa oe great ann taol, Munudik a zihunaz he vredeur
 hag a lavaraz d'ezho gwiska ho dillad sioulk
 ze a c'hellit kredi, ne oe ket mui eur
 vont bulian, hag ez eiont euz ann
 oant deuet ebarz. Hag hi neuze, enn
 etrezek ti ho zad, ha ne oe ket pell en em
 eno.

Ar Roue o veza klevet hano Munudik hag he daoulin
 kaer, a gasaz unan euz he berz da gaout he dad
 d'ezhan eur ialc'had mad a arc'hant. Oc'h penna-ze
 c'hemenn a reaz d'ann tad, ha da dud he di
 palez da veza jardour.

Eho e vevchont meur a vloaz ken euruz ha tra
 dik a oe kaset d'ar skol e ti eur mestr ar
 ne oe ket pell e oe lekeat da gabitan. Ha neuze
 a gasaz anezhan gant kefridi ha kemenn da
 hag he dud. Munudik na choumaz ket da
 mont a reaz dioc'h-tu gant he zoudarded
 oc' lazet ha tud he di ivez. Diwar neuze
 a rounfl nag a dud azo boaz da zibri ar
 vugale.

A-raok mont d'ho kwete, bugale, me ho
 skouarn d'inn eur pennadik c'hoaz.

Da zivuz ar vugale vihan eo ez euz savet a
 marvailhon; mojennon evel ar re em
 varet d'ehoc'h. Arabad eo ta kredi ez euz
 tud vleiz, na korriged, na bleiz-garo, na
 na teuz, na bugel-noz. Arabad eo ta
 vez lavaret : ar rounfl pe ar bleiz-garo
 bugale; ar bugel-noz pe ann teuz a zeu
 tud zo, ha traou all er c'hiz-ze. Kement a

war ho fenn n'ont nemet farsou, n'ont nemet
 grac hed a zo bet savet da ziverraat ann
 ho penn, bugale, enn eur c'hoarzin hag
 padre Breiz n'en devezo biken tersienn
 deiz. Gwaz aze d'ann neb en devezo:
 tou dre va c'hleze hirr, me bet koronal
 Tennet euz a *Vignoun ar Vugale.*

TAD COZ MIZER.

E Breiz-lzel e voa guech all eun denig paour,
 braz, ha henvel aneat *Tad Coz Mizer*.
 he vissac'h ganta oc'h he c'houe, hag
 o vale dre an hentrou evit clasc
 zas gantha daou aotrou gusket mad
 kement a velant dre eno a zion
 Doue ha Sant Per oant, hag oant
 zave ket potnar guiriou re divar
 paour.

— Eun draig bennag en han Doue!
 Mizer.

— Te so braz ha ere, eme Sant Per,
 zell treuz outhan. Sell, ar mor so
 dez ket da besketa? Te, credabl,
 dijentil pec'het dezhan labourat?

— Ne aller ket pesketa gant an dorn,
 Mizer. Sant Per zoken, hag he
 braz, en doa rouejou, ha c'hoas
 vicher. Gueit oue gantha beza
 he benn d'an traon, eguet chom
 viziet oc'h ober ar vicher-ze. —
 madelez, ken nebeut ha ma ker
 vad.

— Ro dezhan eur faen, eme an
 lavar dezhan eur beza contant.

Sant Per a hijaz he benn, gouscoude
 en he c'hodel; sell, emezha, pe
 Doue a fell dezhan e vez contant.
 eur faen.

Tad coz Mizer a zistroas d'he di
 lavaras d'he c'houe en doa guetel
 en doa bet eur faen.

— Eur faen? Mar ec'h eus bet
 neuze emaut mad. Mes petra
 An Aotrou Doue a elje da vian
 d'he foazat, amann da lavat
 d'he dibri. Oh, ia! mes den ne
 ra forz eus ar beorien.

Tad coz Mizer a zonjas neuze
 dijer he c'hreg hag hen gant
 flanta e gomp e oalet. Ar faen
 abenn an noz e save en meaz
 ket gñelet he beg. Ar person
 n'her guete ket.

Daou zervez goude, ar c'hreg a
 eur faen dreist evel kent en
 dit: Saoda gutuil fa deomp
 abenn ho d'enn.

Tad coz Mizer a dolaz he voutou
 gripac'oc'har vezen la a scour
 zeliem. Hoguen caet en doa
 Mont a rea ato en dra c'helle.
 an douar ha n'oa ket brassoc'h
 nen pis logot. Goude beza
 alan, e pignaz adarre, hag e
 alaouret; ar baradoz oa. Eur
 ha tad coz Mizer da skel, dao,
 dao.

— Pion so aze, eme sant Per?

— Me, Aotrou Sant Per, an
 ervad. Deut oan da glasc fa
 ma ve, ne zavont ket caer er
 vad so guelloc'h gangoc'h
 caout eun tam bara. — Bara
 guenn... mar be ho madelez.

— Bez e pezo ar pez aguin,
 pen bara, e pezo ive hec'h
 guin. —

Tad coz Mizer a ziskennas
 fa. Pa zigouezas, e voa pep
 he voalc'h, efa muioc'h c'hoaz,
 hag ez eas da gonsket
 laouen bras. Mes he c'hreg
 epad an noz. Antronoz e savas
 mole; pion a este c'ousket
 emeur ato en aoun, na goesse
 nag var ho penn. Te ne
 beza goulnuet digant Sant
 avoalc'h eun ti braz ha
 vije!

WAAAA

Tad coz Mizer ne respontas
 reu' he en divije. Ret ar
 da zital var ton an hani
 lavaret na d'he c'houe. Hoguen
 d'he lein, hag a c'hros mole
 o velet ar bebet ha ken
 ne rez forz ha pa ven-me
 te a gavo eur c'hreg an

Tad coz Mizer, boaz dioc'h
 ervad e rank neun pe veuzi.
 ket ker buan hag ar vech
 gant dor ar baradoz. Dao
 coz Mizer. — Adarre? ha
 petra vane dit c'hoaz?

— Aotrou Sant Per benniget,
 avel mogueriou hag all, ha
 nemet lacat raz da stanca
 daou gostez gant eur c'hillog
 aoun en eus enha; va greg
 noz tremenet.

— Mad, eme Sant Per, hag
 avo savet dit, ker stard en
 deuez mui da ravodi din,
 amzer dagoll gant pep
 meroz.

Tad coz Mizer a ziskennas
 n'eu em anaie mui en he di.
 Eur maner a voa savet

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezouneec.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten à goust :

Evit eur bloas	DAOU SCOUET.
Evit c'huec'h miz	EUR SCOUET.
Evit tri miz	C'HUEC'H REAL.
Eur gazeten ebken	DAOU VENNEC.

Ar baecamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijoun a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Belec e Kemper.

Ar paeamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonnamant a gueme er e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 19 Guenver 1867.

E leac'h ne ma mui ar Pap e penn an ilis, da lavaret eo er broion eleac'h ma zeus tud hag a lavar int christenien, mes pere so en em zistaguet dioc'h ar guir iliz, ar relijion a ia hag a zeu ervez ar c'hiz. Er bloa-ma ema ar c'hiz da heuilla eur gourc'hemen, hag er bloaz varlerc'h e teui ar c'hiz d'he lezel a gostez, o c'hortos ma vezi heuillet adarre marteze eun trede bloavez. Kementse ne all ket mancout da c'hoarvoud eleac'h ma rear pep tra ervez he frouden.

Hoguen ar re ne zilaouont ket hon Tad santel ar Pap, a vez ato ar re guenta o silaou kement gaouiad, kement furlukin a deui da brezeg dezho eun dra bennag a nevez. Ha ne vanc ket var an douar a furlukinet evelse ha ne c'houlennont ket guell evit mont da denna eur guenneg bennag digant an dud-ze a so o chom en denvalijen, hag a bae alies evit teoat c'hoaz ar c'honmoul a guz ar selerijen outho.

Evelse n'eus ket pell, e Brozaoz e voue guelet oc'h erruout, eus ar penn pella eus a vro Sao-Heol, eun den hag a dene, emezhan, evit staga iliz Brozaoz oc'h iliz ar Jacobitet eus an Asii, ha da rei a nevez an urziou d'an oll bastored ne voant ket sur da veza recevet mad an urziou. Evel a velit, hema a ia eun abostol hag en doa pep gallout. Ar pez a voa da lavaret, ne ket digant ar Pap en doa bet ar c'hallout-ze, mes digant eun doare escop pe ar c'hescop eus a vro Sao-Heol, hag an escop-ze, emezhan, oa escop ar bed oll. Pastored Brozaoz a voa fongue enho o velet eun escop eus a gueit all o tont beteg enho, hag hen diguemeraz mad. Cridi a rejont d'he gomzou ep goulen-ken. Unan azezho gouscoude en doa c'hoant da ober eur goulen bennag outhan araog kemeret evit guirionezou kement a lavare. Hoguen ar re-all a lavaras dezhan serra he c'hinou ha lezel an escop santel-ze e peoc'h.

Hoguen abenn eur pennad oar deut da c'houzout

petra oa an escop santel-ze. Ne deo nag a Syri, nag a vro Sao-Heol. Eun den eo guinidic a Frans, bet o redek bro, en deus kemeret he unan ar garg a gan-nad aberz eun Escop ha ne deo ket muioc'h escop evithan he unan. Eat oa epken da Vrozaoz evit caout tro da c'honuit ar c'hant, o teski da dud ar vro eun dra bennag a nevez divar benn ar relijion, ar pez a voue ervad a blije dezho.

Var an douar an den a vale etrezeg eur vro all. Hoguen an oll ne guemeront ket ar memez hent. Eur c'hem braz a zo etre an hent a guemeront; kem braz a dle beza eta etre al leac'h ma tigouezont; da lavaret eo lod a guerz etrezeg an Env, lod all a guerz etrezeg an ifern. Var guementse eur scrifagner a rea n'eus ket pell an daolen-ma pehini a ve lavaret tennet eus a daolennou Mikeal Nobletz pe an tad Maier.

Sonjit ema an dud var eur blenen e troad eur menez huel; ar Baradoz so var guern ar menez; an ifern so en eun toul lonc adren ar menez. Araog mont etrezeg ar Baradoz pe an ifern ez eus diou zor, unan striz ha moan, hag eun all franc ha ledan. En hent an Env ez ear dre an or striz. An hent-ze a zao eun var ar menez. Sounn eo; goloet a vein begog ha lem, pere a rent tenn ha riscluz ar zao. En daou du ez eus drez ha spenn pere a grog en dillad hag a rog an divesker ha zoken ar c'hort oll. N'eus na disheol na goudor. Evelse e teu avechou gorennoù heol hag a zeo, ha soufadou avel guesi da ziscar tud. Bez' ez eus gouscoude, charz an hent, chapelou, ilizou, couenchou, hospitalion eleac'h ma c'hell ar veachourien eana, diskuiza ha nezei ho nerz. Pa vezer savet eun tamig huel, e caver dour a deu eus a voase ar reier hag a dor ar zec'het; hag an xez a deu da guennerzi an dud skuiz ha d'ho zicour da zavel beteg beg.

Dre an or vraz ez ear en hent ledan. Charz an hent braz-ze ez euz roz ha bleun aleis; guez caer, guez frouez ha re all. An hent so plean evel an dis, ober a ra an dro

Ar zoudardet iaouanc deut da Guemper da dremen an tri miz diveza eus ar bloaz 1866, a zo eat en dro d'ar gear iac'h ha laouen. Eus a guement all ma voant, ne deus nemet unan clan. Ar pez a ziskuez n'o deus ket d'en em glem eus ar sourei so bet kemeret anezho.

E Brest ez ear da zavel eun iliz nevez dindan hano Sant-Martin. Pemp cant mil lur a zo sonch da zispign evit ar pez labour-ze.

E Castellin ez eus meneg da zavel ive eun iliz nevez. En em glevet a rer brema evit sevel peadra da zont abenn da gaout eun ti dereat d'an Aotrou Doue.

An ed a leverer so eat var gueraat er sizun dremenet. An aoun a so ne rafe ar glebor droug d'an ed so en douar, hag ive ar c'hilasc so var an ed abers tud ar broiou all eo so penn cauz eus ar c'hreseze. — Var al loened n'eus ket a vellenn. Al loenet lard a so lose varnezho; al loenet treud a ia eun nebeut guelloc'h; setu petra lavar *Cazeten ar Meziou*.

Ioun ar Beulz a iea da zimizi brema ez eus eur pennadig, araog an Asvent diveza. Mont a reas da di an hini a dle beza he bried evit en em glevet gant he dud caer divar benn an eured ha calz a draou all, ha setu ama penaus e comzas dirag an tad, ar vam hag ar verc'h :

— Me fell din e pettac'h cant den, ha me bedo cant all.

— Me fell din e ve an eured dimeurs ar penn sizun; da zeg heur eured an ti-kear, da unneg heur eured an iliz.

— Me fell din e ve ar banket en hostaliri vras.

— Me fell din e ve eur biniou.

— Me fell din e veac'h guisket e guenn, (o coms d'ar verc'h iaouanc).

— Me fell din ez afemp, antronoz an eured, da ober eur bale var ar meaz.

Pa voa eat Ioun en he dro, an tad a lavaras d'he bried ha d'he verc'h :

— Asa, ar map-caer a fell dezhan calz traou!

— Oh! list-hen, va zad, eme ar verc'h, edo o tiscleria he volonteze diveza! — Araog an noz e voue kemennet dezhan n'en doa izom da bidi den. G. M.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 5 Guenver.	PONT'NABAT — 5 Guenver.
<i>Priz ar c'hant tiour.</i>	<i>Priz ar c'hant tiour.</i>
Guinis.... 45 lur, 80 c.	Guinis.... 46 lur, 04 c.
Segal.... 40 lur, 23 c.	Segal.... 40 lur, 62 c.
Eiz..... « lur, « c.	Eiz..... 40 lur, 38 c.
Ed-du.... 7 lur, 87 c.	Ed-du.... 7 lur, 29 c.
Kerc'h.... 40 lur, 53 c.	Kerc'h.... 40 lur, 60 c.
Avalou-douar 4 lur, 50 c.	Avalou-douar 3 lur, 50 c.

Ar Gerant : AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand AR. DE KERANGAL, Moulter an Escopti.

dezhan. Solierou carguet a arrebeuri caer hag a gadorion bourret. Eur pors-cloz a ioa dirag an ti, eur pors-rastel varnezhan ha bandennou ier hag ouidi enha. Adren an ti e voa eul liors carguet a vez hag a vleun a hep seurt.

Greg tad coz Mizer, na petra-ta, a ioa fongue enhi he goalc'h. Araog an noz oa bet oc'h azeza e kement cador vourret a ioa er maner, hag o sellet oc'h kement mellezour braz a ioa oc'h ar moguerion. Hoguen ha pell e padaz he fongue? Er sizun a zeu, lenner, e lavarin an dra-ze deoc'h. G. M.

Hano ar Zent evit ar Sizun-ma.

DILLUN, 14 Guenver. — S. Hiler, escop ha doctor eus an Ilis.

DIMEURS, 15. — S. Paul, kenta hermit.

DIMERC'HER, 16. — S. Marcel, pap ha merzer.

DIZIQU, 17. — S. Anton, abat.

DIRGUENER, 18. — Cador S. Per e Rom.

DISSADORN, 19. — S. Canut, merzer.

DISSUL, 20. — Eil sul goude ar Rouanez. Gouel an hano santel a Jesus.

AN AVIEL HIRIO :

Pa voa deut an eisvet dervez, e pehini e tlie ar buguel beza emvoadet (circoncizet), e oe roet dezhan an hano a Jesus, hano hag a ioa bet roet dezhan gant an xel araog ma voa concevet e cof he vam. (S. Lucas. II. 21.)

G. M.

KELEIER.

An aotrou Madec, vikel e Henvic, so hanvet vikel e Plouegat-Moysan;

An aotrou Peron, beleg hospital Montroulez, so hanvet person e Gouezec;

An aotrou Guegan, vikel e Recouvrans, so hanvet beleg hospital Montroulez;

An aotrou Duclos, nevez beleguet, so hanvet vikel e Recouvrans;

An aotrou Morvan, nevez beleguet, so hanvet vikel e Bannalec;

An aotrou Paugam, vikel e Loc-Ronan-Leon, so hanvet vikel e Tregourez;

An aotrou Pouliquen, vikel e Plouescat, so hanvet vikel e Loc-Ronan-Leon;

An aotrou Faudeuil, nevez beleguet, so hanvet vikel e Plouescat;

An aotrou Poullaouec, nevez beleguet, so hanvet vikel e Rosnoën;

An aotrou Jacob, nevez beleguet, so hanvet vikel e Plouenan;

An aotrou Barazer, nevez beleguet, so hanvet vikel e Nizon;

An aotrou Velly, vikel e Tregourez, so hanvet vikel e Mespaul.

An Aotrou Fransez-Mari Tregaro, unan eus ar reng kenta etouez beleien an dud a vor, so laket e penn oll veleien an dud a vor, eleac'h an Aotrou Coquereau.

da droat ar menez, hag e cas d'an toul long pehini ne veler nemet pa vezer o coeza enha. Etre an daou hent ez eus ive eur venojennic voan bennag hag a gas eus an eil d'eguil. Guelet a rer, en hent an Env, unan bennag o falgalon hag o trei en unan eus ar guenojennouze. En hent franc ive e sao keuz gant hiniennou, hag en em lakeont da gripissa a hed eur venojen voan evit mont d'an hent mad.

E kichen an diou zor ma on eus comzet anezho e tigouez dalc'h mad tud a vandennou, lod e carroz, lod var varc'h, lod var droat. Cals anezho, goude beza great eur zell dre an or voan; pa velont pe guer sounn eo an hent, a ra minou, hag a ia dre an or vraz. Evit ar re so e carroz pe zoken var varc'h, ne ellont ket tremen dre an or striz. Ar re zoken a vez var droad, n'o deus ket a galon avoalc'h meura hini anezo d'en em lacat en hent diez-ze.

Evelse en dez-all e tigouezas Glauda ha Martha. Ar re-ma so pinvidic ho daou, ha ne fell ket dezho discreguñ eus ho danvez. Cridi a reant ez ajent brao da guern ar menez gant ho madou. Martha a ioa he danvez en dro-dezhi; mes kel ledan oa, ne ellas morse mont dre an or voan. Glauda a ioa mistr avoalc'h, he vadou a ioa gantha en aour, hag ez eas brao dre an or; mes an aour so pouner; n'en doa ket great deg camet en hent sounn-ze, patatao, e coezas var he fri hag e tiriillas d'an traon, ha ne deas ket da glase mont ken.

Goudeze en em gavas Noun. Chom a reas e kichen an or striz da zellet oc'h an hent var ziribi-se. Ne vouie petra da ober, ha bep en amzer ez ea drouglivet. En em denna a reas kuit trist hag ez eas da zellet en or vras. Eno e vele eun hent brao, e cleve canaouen, ha ne voa ken meneg nemet a blijadur. Gouscoude ec'h arguile, e chome da zonal. Mes setu-hen o clevet eun taol son binou. Neuze ne varc'hatas ken, ha kercent ez eas a brez en hent ledan.

Epad ma edo Noun oc'h ober he zouch, e tigozas Jaketa, Michela ha Perrina. Ar re-ma a ioa guisket ha fichet caer. Saeou seiz bete n'ouar ha killou dindanho; dantelez var ho fenn, dantelez en dro d'ho gouzoug, dantelez var ho diousoaz. Pa veljont an or striz, an hent sounn, an drez hag ar spenn, ez eas balc'h ho guinou. Guelet avoalc'h a reant ne aljent ket sevel eno ep regui ho zeiz hag ho dantelez: hag ar pez a rea muia nec'h dezho eo ne velent nemeur a dud var an hent-ze. Aze, emezho, n'eus den; piou a zello onzomp? Var guementse ez ejont d'an or vras varlerc'h Noun pehini ho renas var an hent franc eleac'h ma zoa tud aleis da zellet oc'h ho guenet.

Mauris a zigouez ive. Bale a ra gobius, ha prez zo varnezhan. Erruet e kichen an or striz, e ra eur zell, hag eun hij d'he zorn gant eun ear faeüs. Peuh! Petra eo an dra-ze din-me, emezhan! En eul lam eo tremenet an or gantha hag e sao d'ar red gant an hent sounn. Eun den coz a gaf o pignat ive, mes goustadic, teure hoczet. Tec'h eus va hent, eme Vauris, pe me da ziscaro! Eur pennadig goude e tiscolp eur mean gantha dioc'h an

douguen, hag e vuilloñt ar mean hag hen d'an traon. Blonset, brevet oalc'h oill izili, hapa ellas sevel, ne deas mai da glasc pignat!

Jord a deuas en eur c'harros, pevar marc'h outhan hag eur mevel oc'h he ren. Pa velaz an or hag an hent moan, ne brijas ket disken. Ober a reaz epken eur zell dre brenest he garroz hag e lavaras d'he vevel he gas ractal dre an or vraz.

Hoguen eus a guement a zigouezas eno, Godig oue ar vestrez. Houma a ieas da guenta dre an hent ledan. Neuze pa e deveze kemeret eun nebeut he ebat var an hent flour-ze, e kemere unan eus ar guenojennou treuz evit mont da hent an Env. Goudeze pa e deveze great eur gamet bennag var an hent diez ha strousus-ze, e tiskenne adarre d'an hent franc. Godig a gred penaus, o vont evelse eun dro-bennag var an hent striz, e tigouezo dres an velez d'he c'herc'hat ha d'he douguen var guern ar menez.

Godig, evel a velit, lenner, eo ar skeuden guirion eus ar gristenien-ze pere a ielo brema epad amzer an ened, da ebatal gant ar bed, ha goudeze er c'horaz hag en amzer fase, en em lacai adarre e reng ar gristenien fidel. Evelse a fell dezho da ober bep bloaz, hag esper o deus ive e vezint galvet d'an Env dres er mare ma vezint e mese servicherien Doue, ha ne zontont tam e c'helfent en em gaout gant an toul long epad ma zeont gant an hent ledan. Oc'h ober evelse o deus cavet an dro da zervicha Doue hag ar bed bep eil; ha goude beza ebatet gant ar bec'herien var an douar, e fell dezho pignat en Env gant ar zant. Mes ne ouzon ket hag hi a ello cas ar zouch-ze da henn.

Rom. — Setu ama eul loden eus eur brezeguen great gant hon Tad Santel ar Pap, en iliz ar Gabucinet, eleac'h ma voa eat da zisceria eurus Beneat a Urbin, manac'h eus an urz-ze.

« Bevech ma cavomp tro da renta gloar d'ar zant, e teurto var hor muzellou ar memes menleudiou, ar memes kentelion. Ar vertuziou o deus luguernet muia er zant eo ive ar re a dleomp muia da glasc lacat e calon ar gristenien. Evelse bevech ma kinnigomp d'ar gristenien eur servicher nevez da Zoue da enori, bevech ar speret a orgouil a sao he benn gant counnar hag a losc leoudouet dre c'hinou he esclavet. Er mintin-ma zoken, araog m'omp deut ama, ez eus lakeat deomp en hon dorn eul levr scrifet, siouas! gant eun den a iliz, mes eus an iliz dizuch. Eno e rebecher deomp, etouez cals a draou all, e reomp re a zant nevez!

« Hoguen perag kementse a safar? Perag kementse a gounnar o velet lacat var an aoteriou eur servicher da Zoue ha n'oa ket anavezet bete neuze? Ha ne deo ket dre ma e deuz an iliz santel eun alvocad hag eun difennour nevez dirag Doue? »

An Tad Santel a goms goudeze d'an tadou cabucinet eus a Zant Fransez ho zad, eus he garantez evit ar baourentez, eus he humilite hag he vadelez. Lavaret a ra dezho ne dleont ket falgalon evit beza ma emacr

en amzeriou diez. Ho alia a ra da guemeret skuer var ho zad, ha da ziskuez o deuz nerz avoalc'h evit herpel oc'h ar birou a denner var an iliz, pried Jesus-Christ. Lavaret a ra dezho c'hoas diskuez ho feiz; caout souch ne vezo morse trec'het an iliz, ha beva er garantez evit Doue hag an nessa.

E Rom emacr brema o labourat evit canonization naonteg merzer ha cant lakeat d'ar maro, er Japon, er penn kenta eus ar seitevet cantvet. Etouez ar verzerien-ze ez eus missionerien, tadou a Gompagnuez Jesus, tadou a urs Sant Dominic hag eus a veur a urz all, hag ive christenien eus ar vro pere a c'houzanvaz eur maro criz kentoc'h evit dinac'h ar feiz.

Etouez ar vanden verzerien-ze ez eus unan bennag ha n'o deus ket great a viraclou, ha setu perag e vior mariteze pelloc'h araog ho c'hanoniza. Broma e maer o testum an testenieu evit diskuez eo dre gassoni oc'h al lezen gristen eo int bet lakeat d'ar maro, hag eo evit difen ar feiz eo o deus roet ho buez.

Chin. — Missionerien ar Chin a gomz eus eur paotrig bihan o deus etouez ho c'hristenien hag a so eur burzud evit he oad. Ar paotrig-ze n'en deus nemet seis vloas, hag a zo a vrema eun abostol. Gouzout a ra ar pevar gatekis (katekiz ar Sinais so rannet e peder loden, hag ar gristenien a c'half ar peder loden-ze ar pevar gatekis), prezeg a ra d'ar baiagnet, hag e c'hounit meur a hini anezho da Zoue. Avechou pa vez o c'hoari var an hentchou, e tigouez tud da vont ebou, hag en em laca da lavaret dezho ez eo eus a relijion Mestr an env, da lavaret eo christen. Goudeze e c'houlten digantho: ha c'hui, a be relijion oc'h hu? Var guementse en em laca da brezeg dezho ar feiz.

En he di ez oa, abaoue daou vloaz, eur mevel hag a gouske er memes solier gant ar potric-ma. Meura vech oa bet clasket lacat ar mevel-ze da zeski ar pedennou ha d'en em ober christen. Morse n'oa falvezet dezhan hen ober. Petra ra ar potrig? Petra bennag m'en deveze lavaret he bedennou gant tud he di araog sevel d'he zolier, en em lakea d'ho lavaret eun eil guech, e troad he vele, a vouez huel; hag ar mevel a voa red mad dezhan ho c'hlevet pe stanea he ziscouarn. Ne ket eun dervez pe eur sizunvez bennag epken eo en deus great evelse, mes epad trivac'h miz en deus dalc'het d'hen ober, ken n'en deus great eur c'hristen eus ar mevel paien-ze.

Unan eus ar visionerien a ieas d'ar gueriad-ze, evit rei eur mission, e mis guengolo diveza. Kenta tra a reas oa goulenn ha bez' ez oa eur paien bennag gounezet da Zoue o teski ar c'hatekiz. Lavaret oue dezhan, n'oa nemet tri; ha daou epken desket avoalc'h evit beza badezet. Oh! eme an abostol bihan, ouспен so; m'em eus daou ive! an oll en em lakeas da c'hoarzin; mes ar potrig a ieas da guerc'hat an daou baien desket gantha, ar mevel ma on eus comzet anezhan hag eun all. Ar mevel-ze goude beza bet pell o silaou ar potr

da lavaret ar pedennou, a voa dreist ar mare en em lakeat d'ho c'hana gantha. Gouzout a reas ar pedennou a vouie he vestr bihan, hag ouспен e vouie mad epad eus ar pevar katekiz.

Eur marc'hadour en doa casset he vatez da di eur marc'hadour all evit paea eur zom arc'hant a die en ti-ze. Roet en doa dezhi eur pennadig scrif, hag eun nebeut *billejou-banc* evit ober ar bacamant. Ar vatez a lakeaz billet he mestr hag ar billejou-banc en eur follien baper, hag a ieaz en hent. O tremen dre eur ru e tigouezas kirri ha carroziou ganthi hag e devoe poan oc'h en em denna eus ho zouez. Gant he frez e doa lezet da goeza ar pacad paper a voa ganthi, ha ne velas kementse nemet pa voa digouezet e kichen ti ar marc'hadour ma'her c'hasse dezhan. Me ho lez da zonal pebez nec'h e devoe. Dont a reas buan var he c'hiz, mes caer e devoe ne gavas netra ha ne glevaz hano ebet eus he faper. Chom a reas c'hoas lavaret epad an deiz da vont ha da zont, rag ne grede ket dont d'ar guær.

Gouscoude pa voa dent ar pardaez e voue red mad dezhi distrei. Dont a reaz en eur vouela, hag en em daolas d'an daoulin da c'houlenn trugarez oc'h he mestr. Hema en em lakeas d'he gourdrous da veza lakat eun all da ober he c'hrefidi. Ar vatez ne vouie petra da zonal, hoguen setu ama petra voa c'hoarvezet: Eun den iaouanc, eur micherour en doa cavet ar pacad coezet digant ar plac'h eleac'h ma e devoa cavet ar ru stanket. O lenn ar billet e velas da biou oa ar pacad-ze, hag ez eas rag eun d'he gas d'ar marc'hadour, hag en em dennas ep lavaret he hano. Ar marc'hadour a gasas neuze eur mevel da gas d'he vignon eur billet evit diskuez en doa recevet he villejou-banc. Evelse pa zigouezaz ar vatez e ti he mestr, ar c'hrefidi a voa bet roet dezhi a voa great gant eun all.

An den iaouanc-ze a verite seul vui a veulenti ma voa falvezet dezhan euzet ar vad en devoa great.

G. M.

HISTOR ZANTEL.

(SEIZVED PENNAD).

Doue a ro kaloun da Voizes, hag a lavar d'ezhan e tenio a-bean euz Pharaon.

Doue a lavaraz da Voizes: Brema e velot petra a rinn da Pharaon. Rak eun dourn nerzuz a rai d'ezhan lezel bugale Israel da vont kuit, ha dindan eun dourn pouner e kasso anezho er meaz euz he vro. Meico ann Aotrou em euz en em ziskouezet da Abraham da Izaak ha da Jakob, evel ann Doue Hollc'halloudek, ha n'am euz ket diskenet d'ezho va hano, pehini a zo Adonai, pe er c'hiz all, Jehova. Hag em euz great korvredighez gant ho; evit ma rojenn d'ezho Douar Kanaan, douar ho fire himinded, douar ho felerinacht pehini int bet evel diavezidi.

Klevet am euz huanadou bugale Israel dindan goask ann Ejiptianed, hag ez euz deuet sonj d'in euz va c'he-vredighez. Rak-se, livirit da vugale Israel : Me eo ann Aotrou a denno ac'hanoc'h diouc'h bac'h, pe prizoun ann Ejiptianed, a zilivro ac'hanoc'h diouc'h ho sklaveres, hag ho taspreno gant eur vreae'h nerzuz, ha gant barnedighesion garo.

Hag ho kemer a rinn da vobl d'in, ha beza e vezinn ho Toue ; ha c'houi a ouezo ez ounn ann Aotrou ho Toue, pa em bezo ho tennet diouc'h prizoun ann Ejiptianed ; ha pa em bezo ho kasset d'ar vro am euz touet he rojenn da Abraham, da Izaak ha da Jakob.

Moïzes a gountaz ann traou-ze holl da vugale Israel, ha ne zelaouont ket anezhan, ker braz a oa enkreuz ho c'halou, ker grevuz ho labourou.

Ha Moïzes a lavaraz da Zoue : Chetu bugale Isral na zelaouont ket ac'hanou, penaoz am zelaoufe Pharaon, dreist peptra pa'z ounn dalc'het em frezeg evel ma'z ounn.

It, eme Zoue da Voïzes, ho lekeat am euz da Zoue var Pharaon, hag Aaron ho preur a vezo ho profed. C'houi lavaro d'ho preur ann traou a c'houe'hemen-ninn d'ehoc'h, hag hen a gomzo da Pharaon, evit ma lezo bugale Israel da vont kuit euz he vro. Pharaon na zento ket ; me galedo he galoun, pa fell d'ezhan ; hag evit diskouez va galloud, me raï taol-var-taol burzudou braz e douar ann Ejipt. Pharaon n'ho selaouo ket c'hoaz, hag ec'h astenninn va dourn pounnerra var ann Ejipt, hag e tenninn va bobl evel eun arme victoriuz euz a zouar ann Ejipt dre eur varn c'hâro. Hag ann Ejiptianed a ouezo ez ounn ann Aotrou, pa em bezo astennet va dourn var ann Ejipt ha tennet bugale Israel euz ho c'hreiz.

Hag ann Aotrou a lavaraz c'hoaz da Voïzes ha da Aaron : Pa lavaro d'ehoc'h Pharaon : Grit burzudou dira-z-omp, evit ma ouezimp aberz piou e tenit, kemerit ho koalen, ha taolit-hi d'ann douar, hag e vezo chenchet enn eun aer.

Moïzes en devoa pevar-ughent vloaz, hag Aaron tri bloaz ha pevar-ughent pa oent kasset evelse da zilivra ho brendeur. Mont a rejont eta ho daou da gavout ar roue, hag ober a rejont eun-hag-eeun evel m'en doa gourc'hemennet ann Aotrou.

Pharaon a c'houennaz burzudou ; kerkent Aaron a daolaz goalen Moïzes d'ann douar dirag Pharaon hag he zervicherien, hag ar voalen a oe chenchet enn eun aer.

Hoghen Pharaon a c'halvaz he dud fur hag he vajisianed, hag ar re-ma, gant chalmou ann Ejipt, ha gant ho ardoz kuzet, a reaz ar memez tra. Teuler a rejont ann eil goude eghile ho goaligner d'ann douar, hag e oent chenchet e serpanted. Mes goalen Aaron a lounkaz ho goaligner. Ha kaloun Pharaon a galedaz, ha ne zelaouaz ket Moïzes hag Aaron, evel ma en doa lavaret ann Aotrou.

(Penaoz ec'h hellaz sorcerien ann Ejipt ober ar burzudou a rea Moïzes ? Ann drouk-sperejou ho deuz anaoudeguez euz a ghemment tra a zo bet krouet var ann

douar ; hag a hell ober, gant kouje Doue, eleiz a draou en tu-all da ouisieghes ann dud. Petra a vir n'ho divije skrapet soutil ar goalennoù a zirag daoulagad ann holl, ha digasset serpanted en ho leac'h. Hon triaklerien-ni, enu ho c'hoariellou, a ra meur a dro ken diez hag ann dra-ze. Hoghen ma oa ann drouk-spered en tu gant ar vajisianed, Doue a oa en tu gant Moïzes, hag ar pez a c'hoarvezaz hen diskoueze hanad. Goalen Moïzes a lounkaz serpanted ar vajisianed). H.

EUR SKOL-NOZ.

(EIL PENNAD).

Ar skol-nôz edo digoret eur pennad a voa. An niver euz ar voazed ag he daremprede, a greske bepred ; ar c'hentelyou a gatekiz, ar prezegennou war ar Relijion a irree ; ar sklerijenn euz ar feiz en em skuille beb eun neubeud e touez tud ar barrez ; buezegez ar re-ma a wellee ; ho respet evid ar Relijion a greske ; ho respet ispisial evid ar zûl a voa kresket kalz : al labourou difennet d'an deiz santel a voa koulz lavaret kouezet en oll barrez, an ofisou gwelloc'h heuliet ha komzou Doue silaouet gan muioc'h a feiz, a blijadur ag a c'hoant da broffita euz anezo. Abarz ma edo het ar skol-nôz eur bloaz o rena, e voa sonjet ha gallet ober en oferenn beure pe vintin eun tam katekiz pe eur brezegenn all benâg, ag ar c'hatekiz pe ar brezegenn-ze a veze silaouet gan respet evel ar zermou euz an oferenn bred. Den ne zonje mui mont er mæz euz an iliz epâd ar gelennadurez kristen.

Hogen, ma mignoned, me am beuz sonjet eun dra. Perâg ne roffenn-me ket d'eoc'h e *Feiz ha Breiz* ar c'hentelyou mad a roe ar beleg santel-ze d'he dud en he skol-nôz ha divezatoc'h en iliz en he gentelyou katekiz ag en he brezegennou ? Ar pez a voa gwir enno, a zo gwir ama ; ar pez a ree vad enno, perâg ne raffe-ën ket vad ama, e Breiz-Izel, or bro ?

Ia, eviziken, e-lec'h ko nz d'eoc'h ma-unan, me a lezo da gomz d'eoc'h er gazetenn vian an Aotrou Ambroaz. — Ambroaz edo ano ar beleg mad-ze (ag eo attao, ma n'ed eo ket maro, ar pez ne ouzon ket).

E zân eta da roi d'eoc'h e *Feiz ha Breiz* kentelyou ar beleg santel-ze d'he dud, d. l. e. D'ar gristenyen euz ar barrez ma edo kure pe vikel enn-hi. Da genta e roin d'eoc'h he gentelyou war ar zûl, paegwir or beuz kom-manset gan-eoc'h dre enno.

KENTA KENTEL.

An Aotrou Ambroaz eo a gomz. « Va mignoned ker, mil blijadur a ra d'in gwelet ac'hannoc'h o tonet evel-se muioc'h mui da zelaou ar pezig em beffe da lavaret d'eoc'h. Dissût diveza e voa braz ar vandenn, mes hiryo ez eo c'hoaz brassoc'h. Mar tale'h da vonet evel-se bepred war griski an niver euz ar re a zeu d'am c'hlevont, eb dale ne vezo mui braz a-voalc'h ar zal-ma evid ho digemmer, petra benâg ma eff-hi brazig mad. A-bred e rankaffom monet da glask eul lec'h frankoc'h. »

« Va mignoned ker, ma lezit d'hen lavaret d'eoc'h :

deja e karenn kalz tud ar barrez-ma, mes ma c'harantez evit ho a gresk bepred. Ia, seul-vui ma tiskonezit d'in bolontez vad, seul-vui a joa em beuz ouz-oc'h. Kendal-c'hit eta, va mignoned ker, da zonet muioc'h mui da zilaou ar c'homzennou dister a dennan euz goueled ma c'halon da lavaret d'eoc'h ha da broffita euz anezo mad, ag eun deiz, esper em beuz, or bezo an eür, c'hwil ha ni ho peleyen, da welet ar barrez-ma o lugerni e tonez an oll barrezyou all euz an Eskopti dre he feiz, dre he buezegez vad, dre he devosion, dre he zantelez. O ! Ia, ar fizyans-se em beuz, don e ma c'halon, e welin, abarz mervel, hourc'hadenn M. ar genta pe eunau euz ar re genta a barrezyou an eskopti dre he feiz kre, dre he relijion vad. »

« Va mignoned ker, sikourit ac'hannoc'h e kemment-se ; sikourit an Aotrou Person, sikourit ac'hannoc'h da zigas da vad ar zonz-se ken dous d'or c'halonou, ar c'hoant bras-se or beuz da welet ac'hannoc'h oll sent er bed all, evuruz, eun deiz, er baradoz, ha kristenyen vad, kristenyen euz ar gwella war an douar, ha dre ze evuruz ama ivez kemment ha ma ouffer beza evuruz en draonyenn-ma a zaerou : rag, mar bezit kristenyen vad, mar bevit e gras ag e doujans Doue, peoc'h Doue a jommo gan-eoc'h en ho kalonou, ha peoc'h Doue eo ar brasa mad, ar prisiusa temzor a ouffe an den da gavout war an douar ; lakaat a ra aneza da veza evrusoc'h eged ne ouffe ober an aour, an arc'hant, ar madou, an henoryou ag an oll blijadurezou euz ar bed-ma. »

« Mes, va mignoned ker, ar c'henta-tra or beuz da ober evit dont da veza kristenyen vad, kristenyen ervez kalon an Aotrou Doue, eo gouzout mad petra eo ar zûl, eo lakaat en or c'halon eur respet ar brasa evid an deiz santel-ze ag en em roi da-vad d'hen miret ec'hiz ma eo dleet. Pa vezo anavezet ha respetet mad ar zûl e bourc'hadenn M. pa vezo miret, santelezet ec'hiz ma eo dleet, bourc'hadenn M. a zo salo : an traou all a zenio da heul ; me a respont a gemment-se war ma henor ha war ma c'houstians. »

« Gouezom eta mad, va mignoned ker, petra eo ar zûl. Deja em beuz lavaret d'eoc'h, aliez a wech, ez eo deiz an Aotrou Doue, an deiz en deuz Doue miret evit-ha, evid he zervich. Roet en deuz c'houec'h devez d'an dud evid ober l o labourou ordinal, evid pourvezi da ezommu ar vuez-ma, mes miret en deuz ar zeizved devez evit-ha, ag en deuz lavaret d'an dud, he vugale : « lezit ma deiz « gan-im-me, » eme-z-ha ; « divoallit en ho proffit ne « yaffec'h da lemmel ma deiz digan-im-me, o labourat « d'an deiz-se en ho labourou ordinal. »

« Lavarit d'im-me, va mignoned ker, ha ne vez ket se eun dra divalo braz mont da laerez on Tad peini a zo en Nev ? »

« Klevit ama eun dra ag a zo c'hoarvezet en eun tu, n'euz ket pell. »

« Eun tad a voa ag en devoa c'hoant da ranna he oll vadou, en he veo, etre he vugale. Gelter a ra eta he vugale da zont d'he gavout ag e lavar d'ezo evel-hen : « Assa : ma bugale, me am beuz sonjet ober eun dra, ranna etre-z-oc'h, e ma beo, ma zammig peadra. »

« Ar vugale a respont : « Va zad, c'hwil a zo mestr « ag a raio evel a garfot. »

« Ag an tad a rannaz he oll vadou etre he vugale. Digouezont a reaz da bep ini anezho c'houec'h kant skoed leve. Ne voa ket fall, neget ta ? »

« Ar paotr koz koulskoude a voe fin a-voalc'h evid delc'her gan-t-ha eun draig benâg, kant skoedig leve evid beva er rest euz he vuez. Lavaret a reaz enn-ha he-unan : « Martreze ma bugale, mar roan tout d'ezo, a « vezo divalo a-voalc'h evid ma lezel goude da gaout « dienez. Ne ez euz ket da fiyout re er vugale en amzer « ma e m'om. »

« Ar rannedigez eta o veza greet, an tad a lavaraz d'he vugale : « Assa ! va bugale, me gav d'in n'embeuz « ket greet goab ouz-oc'h. Roet em beuz da bep ini « ac'hannoc'h c'houec'h kant skoed leve, ha n'em beuz « dalc'het gan-in ma-unan nemed kant skoed leve, d. « l. e. ar c'houec'hved epken, komprent mad, euz ar « pez em beuz roet da bep ini ac'hannoc'h. E leit « mechans beza oll kontant ? »

— « Ia, » eme ar vugale, oll en eur vouez, « kon- « tant ez om ; an ini ac'hannoc'h na vez ket kontant, a « vez goall zirezon. »

« Ha-mâl ! » eme an tad, « Klevit ama brema : Ne « zonzjan ket e teuffe ini ebed ac'hannoc'h da glask « laerez ma lodennig dirvar-n-on. Mes, mar vez diskiant « a-voalc'h eunan benâg ac'hannoc'h evid ober an taol- « ze, e kousto ker d'eza ! »

Ag ar vugale da respont, oll a vouez uhel : « Malloz « ha mil malloz d'an ini ac'hannoc'h ag a vez divez ha « digoustians a-voalc'h evid ober d'eoc'h eun eveleb « divaloentez ! »

« Mad ! » eme an tad, « dalc'hit d'ho ker ; evid- « on-me a zalc'ho d'am ini. »

« Ar vugale neuze en em dennaz pep ini d'he du, « laouen braz gan ho lodennoù. »

Hogen, da benn eur maread, setu iniennou anezo, pezyou gloud, oc'h en em gavout drouk-kontant gan ho lodennoù, ag o sellet ouz lodenn ho zad, e kavent anezi braz, ag e yeent d'he di ag e laerent aneza, pa ne vize ket en war zonz. Na lezent gan-t-ha nemed ar pez na c'hellent ket samma. »

« An tad ne voa na bouzar na dall : gouzout a ree mad pedare troyou kam a ree d'eza he vugale disleal. Eun deiz, pa voe erfin leun ar muzul, pa voe skuiz a-voalc'h oc'h ho gouzant, e savaz he vouez ag e skoaz he daol. Ober a reaz rebechou c'houero d'he vugale digoustians ag e lammaz digan-t-ho an oll vadou en devoa roet d'ezo da guenta evit ho roi d'he vugale all furroc'h, honestoc'h ha gwelloc'h en he genver. »

« Va mignoned ker, piou eo an tad-ze, ha piou eo ar vugale laer-ze ? An tad-ze eo an Aotrou Doue ; ar vugale laer-ze eo al laboureriyen zûl. Ne zonjec'h ket martreze, o labourat da zûl, e reec'h micher al laeron. Ha-mâl ! Hen ober a reec'h. Doue en deuz roet d'eoc'h c'houec'h devez evid ober ho labourou, ha n'en deuz dalc'het gan-t-ha nemed eun devez, ar zûl. C'hwil a labour da zûl !

C'hwia zo laer; laerez a rit ho tad peini a zo en Nev. Ag ho tad peini a zo en Nev, pa vezo skuiz; pa welo ivez leun ho muzul, a zavo he vouez ag a skoio gan he voallennou. »

« Mes, va mignoned ker, arabad eo d'in ober d'ec'h rebechou. C'hwia en em gondaon a-voalc'h oc'h-unan brema, pa welit ar wiryonez sklær dirag ho taou-lagad... Lezom an amzer dremenet ha sellom ouz an amzer da zont. Ma or beuz greet fall beteg-hen, ni a raio mad en amzer da zont ag a raparo evel-se an oll faotou euz an amzer dremenet. »

Ia, lezom eviziken a gostez, da zül, an oll labourou difennet. Mirom, santelezom ec'hiz ma eo dleet an deiz benniget-ze, ag an Aotrou Doue, peini a zo eun tad mad, a bardono d'eom. Ni ho peleyen, ho tadou spirituel ag ho mignoned fidella, ni a bedo aneza a greiz or c'hallon, da bardoni d'ec'h an oll faotou tremenet, mar grit ho sonj da na pas ho renevezi mui en amzer da zont. Evel-se bezet greet, ag evel-se e vezo greet, neget-ta, va mignoned meurbed ker?

J.-K. KERZALE, *Beleg ar Zalet.*

(*Eur pennad all eur wech all.*)

LEVR AL LABOURER. III

AR PEZ A RANKER OBER PA VE KLANV AL LOENED.

Kentiz ha ma welit o sevel eur c'hlenved, Enn eul lec'h a gostez likit ar re tizet. Neuze, hep koll amzer, reit mesaerien, Redit da glask louzou, da glask louzaouerien; ¹³⁶ Ha d'ec'h mad e lec'h eul louzaouer, Na zeu ho zro 'med eur fall toueller, Fell d'ezhan ho gwellaat, en eur ober ardou, Hag ho lez da vervel e nerz ho c'hlenvejou.

Ouz-penn skarzit ann teil, ha netait ho kreic'hier; ¹³⁷ Mirit mad ho loened enep ar gwall-amzer: Hag e-berr ar c'hlenved euz ho mesk a lamo; Ar vanden a wellai; ho poan a dremenou.

Ho pet, mesaerien, soursi euz ho loened; Euz ho kevr, ho tenved, euz ho zaoud, ho ronsed. ¹³⁸ Nem blijit enn ho mesk; karit ho micherion; Enn ho mesk e kavot levenez ha madou.

Gwechall eur mesaer em euz anavezet; Euruc'h vit eur roue war he dron azezet, A wele hed ar bloaz ebarz he verouri ¹³⁹ He vadou o sevel, he loened o kreski.

He zaoud roe d'ezhan an amanen c'hueka, Ann deved gand ho gloan, ann dillad pinvika; Er foar, er marc'hajou e kreske he densor. Mes evel ma choume e kichen ann arvor, ¹³⁵ Hen wele aliez euz ar broiou pellan Kalz listri o-touara gand ar c'hargou kaeran. Ar meser touellet a werzaz he loened,

Reaz ober eul lestr, gervel martoloded, Lekeaz war ar mor he arc'hant, he vadou. ¹³⁹ Mes eunn taol avel fall ho laka a dammou.

Eunn eil labourer all, pinvidik ha minour, A werzaz he dachen vit beza marc'hadour, Ar werz a gerze kaer, mes hini na bae, Hag e-berr war ar plouz hon minour a gouske. ¹³⁹⁵

Tud iaouank euz va bro, choumit war ar meziou; Lezit ar boure'hizien da garout ar c'herion; Ha ne ket gwel beva enn ho ti dibredet, Eget beza e ker mewel eur skrivagner?

Le Délaiir. 57. M. D.

PAD COZ MIZER.

(*Eil pennad.*)

Greg tad coz Mizer, an dervez kenta ma e devoue eur maner, a azezas, evel ma on eus lavaret, var guement eador vouret a voa enha. An eil dervez e lakeaz en dro dezhi, an eil goude eben, kement sae vreo a voa en he armeliou, saeout seiz, arc'hantet, alaouret, perlez oc'h lod anezho. Noz oa hag edo c'hoaz dirag he mellezour. An trede dervez ne reas epad an deiz nemet rei he urziou d'he mitizien. Ar pevare devez ne vouie mui petra da ober. Enouet oa, digueri a rea he guinou da zislevi ien, ha setu-hi, evit tremen he amzer, da ober eur balé var ar meaz. Tenvat oa he fenn pa deuas d'ar guez, hag ez eas d'he guele ep tam.

Antronoz, kerkent ha ma velas he fried: Guelet ec'h eus biscoaz, emezhi, kement all? An amezeg zo digouezet ganhen deac'h, ha n'en deuz ket prijat zoken tenna he dog din!

— Cleo-ta, eme Tad Coz Mizer, bez'ez eus tud ha ne ouzont nemeur beva, petra fell dit; ne deo red da eun den tenna he dog nemet d'ar Roue ha d'ar Rouanez.

— Ha perag ne vemp-ni ket Roue ha Rouanez ive evel ar re-all? Te, nezonjez e netra. Ma carjez beza goulennet oc'h Sant Per, en doa roet an dra-ze dit avoalc'h!

Azaleg neuze Tad Coz Mizer n'en devoue mui peoc'h ebet. Ar c'hreg ne gouske ken. Bemdez e c'hros mole o c'houlou outhan peur ez aje da gaout Sant Per, ha bemdez, goude eun nebeut comzou dipituz, e rea eur pennad gouela.

Tad coz Mizer ne rea van oc'h he guelet; ne rea ken nemet bija he ziouscoas. Hoguen hi a gleme kement, ma lavaraz eun dervez evit caout peoc'h diouthi: mad, mad, varc'hoaz ez in. Neuze ar c'hreg a ias kel laopen ma voa eun dudi he guelet.

Ar paour kez den a vouie avoalc'h en doa lavaret eur gomz a re: Brema oa red dezhan mont, pe e vije guall vuez. Setu hen-ta antronoz o lacat he zillad da zül, hag o pignat adarre a scour e scour. Digouezet e kichen an or, e scrabaz he scouarn da guenta, ha neuze, lentig ar voalc'h, e scoas, dao, dao! Te adarre, pez divez! Eme Sant Per; me vouie eryad ne vije gallet morse rei he voalc'h da eur gargantuz evel dot-te!

— Sant braz, eme Tad Coz Mizer, pardonit din adarre en dro ma evel ma pardonan d'ar re'o deus great droug din. Va greg eo e deus great din dont. Truez e deuz oc'h an dud reuzeudig: Lavaret a ra ma ven-me Roue hag hi Rouanez, an dud paour a vellafe dezho.

— Mad, eme S. Per, p'eo guir eo evit ober vad e fell deoc'h beza Roue ha Rouanez, e pezo da c'houlou. Mes na deu ken var va zro; rag ma teuez, e coezo truez ouzit.

Tad coz Mizer a ziskennas buan; caout a reas he c'hreg azezet var eun tron, ha tud ar vro oc'h ober al lez dezhi hag o stouet dirazhi. Daou zervez dioc'htu e voue laouen evel an heol; fougueda ioa enhi he-goalc'h. Hoguen an trede dervez, epad ma kempennet he bleo dezhi, e teuz eur vleven venn da heul ar grib. Setu hi droug enhi dre ma leze Doue ar gosni da zont d'ar Rouanez. Antronoz e voue roet dezhi d'he lein crampeoz guiniz, viou ha sucr enho. Evel m'ho c'have mad e tebras kement, ma voue red elase ar medecin var he zro. An trede dervez e varvaz en he lez he c'henta itrou a enor, ha setu-hi glac'haret hag echu he levenez.

Epad ar sizun varlec'h ne zebzas couls lavaret tam; ne rea nemet sonjal. D'ar zül e lavaraz d'he fried: ia da, eun dregaer eo sur beza Roue pe Rouanez; hag e coezer elan, hag ec'h aller mervel zoken marteze. Ma vijez bet an Aotrou Doue ha me ar Verc'hez, neuze avad e vijemp bet tud! Tad coz Mizer a zonjas neuze e voa eat he fenning diganthi, hag he alias da vont en avel eun nebeut.

— Oh ia, emezhi, me vouie eryad, te ne c'heus biscoas caret ac'hanon-me! oh tra! Va deu keaz ne jomas ket d'he silaou. Mont a reas d'al liors da lacat he gorniat butun.

Hoguen bemdez e cleve ar memes son. « Ma pije bet eun tam calon, e poa goulennet beza an Aotrou Doue, ha pa na vije ken nemet evit rei da bep unan gao hag heol ervez he frouden. Bemdez e cleve ar memes rebech. Hoguen tad coz Mizer a zalc'has mad en dro-ma. Caer a ioa he c'hourdous, ne lavare guer. Laket e voue e pini-jen divar bara ha dour, mes ne rea van. Siouas, an den ne ell ket miret da fazia avechou. Eun dervez ma voa bouzaret he benn o clevet clemmou he c'hreg, ez eas droug enha; hag ben o lavaret diehec: peoc'h a roi di-me, randonen! ha kerkent e lakeas dezhi var he boc'h pevar bezad hag eur meutad, ha zoken calet. Neuze hi a reas eur safar evel pa vijet o vont d'he laza, hag a grie: va buez! va huez! Evit he lacat da devel e voue red dezhan lavaret ez aje adarre antronoz da gaout Sant Per. Ar c'hreg en em gavas pare dioc'htu.

Antronoz e voa red mad da dad coz mizer pignat adarre a hed he faven. Siouas, mont a rea lochore. Digouezet e kichen an or, e chomaz eur pennad mad da zoujal. Skei a reas gouscoude, mes goustadic. Clevet a reas eur vouez pounner hag a lavare: Claoustre'eo ar tadig coz mizer eo a zo aze adarre?

— Ia, da, Sant Per benniguet, me eo sur, ha great eo va zro, nemet c'hui a ve bet dimezet ive oc'h unan:

— Cleo, lavaret em oa dit na deujez mui pe e coesje

truez ouzit. Kea en dro; ker paour e vezi brema evel ma voas ar vech kenta ma tigouezis ganez.

Tad coz Mizer a felle dezhan goulou ma vije lezet gantha da viana eun tamig leve bennag. Mes n'en devoue ket a amzer. En em gaout a reas var au douar ne vouie ket penaus; ha kenta a velas oa he lochen goz, hag he c'hreg var an treuzou o neza stoup evel ma voa boaz diagent. Pep tra a ioa evel ma voant guech-all. An toulti a voa marteze c'hoas falloc'h, ha dillad he c'hreg muioc'h a billou outho evit biscoas. Houma pa her guelas, a zavaz en he za, hag en em lakeas da ober dezhan a bep seurt rebechou, o lavaret dezhan n'oa ket eun den, n'oa nemet eun azen, eun taltouz... Tad coz Mizer ne lavaraz guer, mes mont a reas d'ar c'hae, hage trouc'haz eur pezh penn baz, hag ar c'hreg a enas dioc'htu da sclancat. Nebeut goude e varvas gant he glac'h ar da veza collet oll o clase caout c'hoas. Tad coz Mizer n'en devoue ket kement a guenz d'ar madou a voa bet etre he zaouarn. Ar pezh a vire outhan marteze da gaout keuz dezho, eo m'en doa collet he c'hreg ive gantho. Abaoué ez a ato en dro da glasc he dam bara. Mar tigouez ganeoc'h, lenner, roit an aluzen dezhan abalamour da Zoue, rag paour braz eo bepret. G. M.

Hano ar Zent evit ar Sizun-ma.

DILLUN, 21 GUENVER. — Santez Agnez, guerc'hez ha mierzerez.

DIMEURS 22. — Sant Visant ha S. Anastaz, merzerien.

DIMERC'HER 23. — Dimizi ar Verc'hez glorius Vari.

DIZIQU 24. — Sant Timothee, escop ha merzer.

DIRGUEN 25. — Conversion Sant Paul, abostol.

DISSADORN 26. — Sant Policarp, escop ha merzer.

DISSUL 27. — Trede sul goude ar Rouanez. Sant Ian Chrizostom, escop ha doctor eus an Ilis.

Aviel ar zül:

Pa voa diskennet Jesus divar ar menez, eur bopl braz a dud hen heuillas. Ha setu eun den lovr o tont da stouet dirazhan d'he adori, en eur lavaret: Aotrou, mar kirit, e c'hellit va farea. Jesus a astennaz he zorn, a douchaz outhan hag a lavaraz: fallout a ra din, bezit pareet. Ha kerkent ez eas al lorgnez diouthan. Jesus a lavaraz neuze dezhan: diouallit na lavarac'h da zen, hoguen it d'en em ziskuez d'ar beleg, ha kinniguit an ofrans gourc'hemenet gant Moizes evit servichouit dezho da desten.

Pa voa eat Jesus e ker Capharnaüm, eur c'habiten hag a voa cant soudart dindanba, a deuas d'he gaout, hag her pedas evelen: Aotrou, va mevel so em zi seizet hag a c'houzaon poaniou criz. Mont a rin, emé Jesus, ha para a rin anezhan. An ofiser a respontas: Aotrou, ne d'oun ket din e teufac'h d'am zi; hoguen lavarit eur guer epken, ha va zervicher a vezo pare. Rag me zo eun den dindan re all. Bez' em eus d'indan hon soudardet, hag e lavaraz da unan: kea, hag ez a; da eun all: deuz, hag e teu; ha d'am servicher: gra an dra-ze, hag her gra.

Jesus a voue souezet o clevet kementse, hag a lavaraz

d'ar re a voa oc'h he heul : e guirionez, me hen lavar deoc'h, biscoas n'em eus cavet eur feiz evelse en Israel. Hag e lavaran deoc'h e tenuio cals tud eus ar sao heol hag eus ar c'huz heol hag a azezo gant Abraham, Isaac ha Jacob e Rouantelez an Env. Ha bugale ar Rouantelez a vezo taolet er meaz, en denvalijen, eleac'h ma vezo gouelvan ha scrign-dent.

Jesus a lavaras d'an ofiser : it, ha ra vezo great deoc'h ervez ma oc'h eus credet. Ha kercent e voue pare he zervicher.

SANT VAZE VIII. 1. G. M.

KELEIER.

An aotrou Goff so hanvet vikel e Conkerne ;
An aotrou Paugam so hanvet vikel e Treflez.

Beza eo bet hanvet : an aotrou Lavigerie, Escop Nancy, Arc'hescop en Aljer ; an aotrou Foulon, brema e penn Clouardi Paris, Escop e Nancy ; an aotrou Callot, Person e Paris, Escop a Oran ; an aotrou De Las-Cases, Person e Angers, Escop a Gonstantin ; an aotrou Thomas, Vikel-Vras e Autun, Escop a Rochel ; an aotrou Hacquard, Person e Versail, Escop a Autun.

An traou a ve c'hoant da gas da ziskuez da Paris, er bloa-ma, a vezo kemeret azaleg ar 15 a viz guenver betek an 10 a vis meurs.

An ed so adarre eat var gueraat er sizun dremenet, e Frans hag er broiou-all. Ar ienien hag an erc'h so deut en derveziou-ma a esperer a rai cals vad d'an douar.

En derveziou kenta eus ar miz ez eus bet eur c'hren-douar en Aljer hag er c'harter tro-var-dro. Cals tiez so bet discaret, ha muioc'h c'hoaz a zo great calz droug dezho petra bennag ma zint chomet en ho za. E kar Aljer eus bet nebeut a dud lazet, mes er c'heriadennou divar dro ez eus bet meur a zen flastret gant an tiez o coeza varnezho.

Bréma ez eus eun nebeut amzer, *Feiz ha Breiz* en deus roet eur pennad scrit divar benn eur c'hlenvet, hanvet ar *vurbuen*, hag a dague ar chatalou. Ar pennad scrit-ze a voa great gant an Aotrou Tanguy medecin loenet e Landerne. Ervez ar memes medecin, ema adarre ar c'hlenvet-ze en eul leac'h bennag. Bez'e tleer eta lacat evez. Ar pezh a dle an oll dreist pep tra da ober, eo derc'hel neat creier ho loenet hag ober dezho caout ear. Ar re o dese dalc'het ar gazeten-ma, n'o deus nemet clasc ar follennou bet moulet e miz even diveza, azalec an 9 a even betek ar 7 a viz gouere. Caout a raint eno pennad scrit an aotrou Tanguy divar benn ar *vurbuen*.

Lavaret a rer e vezo gullet ep dale, etre Brest hag an Americ, eul lestr bras divent, o tigas tud eus ar vro-ze e Frans evit gullet an traou caer a vezo

o tiskuez e Paris, hag oc'h ho c'has en dro. Al lestr-ze, eus a Vrozaoz, hag hanvet *Creat Estern*, eo credabl, brassa lestr so bet gullet morse. Deg mil den a leverer, a ello mont enha var eun dro.

Mar gra, evel m'hen esperer, an Americanet ho darempred dre Vrest evit mont da Paris, e vezo, a dra sur, kementse eur gounit evit tud ar c'barter.

Ar glaeier a so bet abaoe eun nebeut amzer o deus cresket cals an dour er steriou, hag e meur a garter ez eus aoun na ve adarre reverzi pe zour beuz. E' creiz ar Frans hag e tu ar c'hreizeiz dreist oll eo e c'hourdrouz ar steriou dont da louca an douar gant ho doureier dirollet.

G. M.

Yvonic bed er C'hatekismou.

Eur paotr bian en dez all a ioa bet er c'hatekismou, en em gavet er gueur e dad a c'houlennas digantan :

- Ac'hanta Yvonic, galvet out bed ?
- Ia, ia, eme ar paotr foug ennañ ; oh ! nac a draou a zo bed goulennet diganen-me !
- Lavar deomp un dra benac, ma vezo goelet.
- Da guenta en deus goulennet diganen da be zeis oa maro Jesus-Christ.
- A te petra peus lavaret ?
- E feac'h, le meus lavaret oan re bell dious ar bourg, ha ne gleven ket ar c'hleier.
- A goude ?
- Goude en deus goulennet ped doue zo.
- E michans e peus lavaret ne voa nemet unan ?
- Unan ! ah ! ia unan, lavaret e meus e voa seis, a c'hoas noa ket kountant.
- Aman an tad ne reas nemet c'hoarzin.
- C'hoas zo bet lavaret did ?
- Goulen en deus great a lavaret a rean va FATER : O ia e men, pa lavar va zad a va mam, mes a reze ne ne lavaront ket alies.

Aman an tad a reas eur c'hoars all ; goelet a reas ar vez en doa tennet varneza e leziregues e kenver e vab da c'hegal ar boan a reio dezan divezatoc'h. Ar re gos a lavare goeachal : Fall eo an tad da bidi, falloc'h c'hoas e vezo ar mab.

J. GUIAVARCH,
Vikel e Plouzane.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 12 Guenver :		PONT-NABAT — 10 Guenver.	
Priz ar c'hant liour.		Priz ar c'hant liour.	
Guinis	15 lur, 66 c.	Guinis	16 lur.
Segal	9 lur, 88 c.	Segal	10 lur, 63 c.
Eiz	9 lur, 64 c.	Eiz	10 lur, 63 c.
Ed-du	7 lur, 08 c.	Ed-du	8 lur, 03 c.
Kerc'h	10 lur, 06 c.	Kerc'h	10 lur, 60 c.
Avalou-douar 4 lur, 00 c.		Avalou-douar 3 lur, 90 c.	

Ar Gerant : AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gant AR. DE KERANGAL, Moular an Escop

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezouneec.

Eun Abonnament d'ar Gazeten a goust :

- Evit eur bloas DAOU SCOUET.
- Evit c'huec'h miz EUR SCOUET.
- Evit tri miz C'HUEC'H REAL.
- Eur gazeten ebken DAOU VENNEC.

Ar bacamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg e Kemper.
Ar pacamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 26 Guenver 1867.

Peadra so da vezet souezet evit an hini a zonzh hag a evessa penaus en em guemer Providans an Aotrou Doue evit difen ha skigna ar guir relijion ! Drouguiez an dud a stourm outhi, hag an drouguiez-ze zoken eo he laca d'en em skigna muioc'h mui. Guechall ar iuzevien a felle dezho cass an ebestel divar ho zro, ha dre eno e lakejont an ebestel da vont kentoc'h a ze da gass sclerijen an Aviel dre ar bed. Impalaeret Rom a fellas dezho distruja an oll gristenien, ha kementse a reas da veur a hini anaout al lezen gristen-ze oc'h pehini e touguet kement a gassoni ; ar pezh n'o divije morse anavezet anez al lazerez a reat eus ar verzerien. Ouspen, meur a hini evit tec'het araog ar maro, a dec'he d'ar broiou-all hag a gasse gantho sclerijen ar feiz.

Kementse a zigouez c'hoaz hirio ; e meur a garter eo iskinet ar gristenien catolic. Ho goall gas a rer bete ma zeo red dezho kuitat ho bro evit mont da glasc e broiou-all eul leac'h e pehini e c'halfent beva ; ha bepret, eleac'h ma zeont e roont da anaout ar guir relijion hag e c'hounezont eneo da Zoue.

Evit coms epken eus a eur vro eleac'h ma veler ar virionez-ze scler hag anat, ne deus nemet sellet oc'h an Irland. An Irlanded so christenien catolic, tud hag a zalc'h mad d'ar guir lezen. Hogueu ar Zaozon o deus ho goal gasset kement, a so a bell amzer ker criz en ho c'henver ma o deus ho laket da goeza er brassa dienez, ha cals anezho evit miret da vervel gant an naoun so red dezho kuitat ho bro evit mont da glasc bara e leac'h all. An Irlanded keiz so bet red dezho mont evelse a vandennou er broiou gouez, er broiou a bell, dianavezet : en Americ dreist oll eo en em dennet eun tol braz anezho. Mad, e kement leac'h ma zint en em daolet evelse, ez eus hirio christenien catolic aleiz, gounezet gantho dre ho skuer ha dre ho c'henteliou.

E kement leac'h ma zeus eus an Irlanded-ze, ez eus brema savet escoptiou, ilizou evel er broiou christen

a bell zo. A dra zur ar Zaozon o flastra an Irlanded evel o deus great, ne zonzent ket renta servich d'an iliz catolic, ne zonzent ket e voant evel eur benveg etre daouaru Doue evit cas sclerijen ar virionez eleac'h ma felle dezhan. Hogueu an den, evel a leverer, a dro hag a zistro, mes Doue eo hen ren.

Evelse eur serifagner a Vrozaoz a lavare brema ez eus eun nebeut amzer : « Ama ne glevet mui nemet ar c'han eus an iliz a Rom ; er ruiou hag er gouelec'hioù eo boazaret hon dioucouarn gantha. Ama, en hon douaron protestant an iliz a Rom eo ar vestrez ar Pap en deus ama diskibien a villerou. »

An Irlanded, eme eur missioner eus an Americ, a zalc'h ato mad d'ho c'hreden ; ha pa deusent da goeza en dizurs, e chomo ato ar feiz en ho c'halon. Pa zigouez gantho eur beleg var an hent, e pocont d'he zorn. Perag, a lavare eur protestant da eur marc'hadour red eus an Irland, perag e pokit-hu evelse da zorn eur beleg ? Eun den ne dlefe ket disken ken izel-ze. — Poket a reomp da zorn ar beleg, emezhan, abalamour dorn ar beleg a douch bep mintin oc'h corf Jesus-Christ.

An den a gomz evelse so eur marc'hadour a ia bemdez en hent, eur zam oc'h he gwein, evit gounit he vara. Ne gaf ket eaz ma na ell ket mont d'an oferen bemdez. Ha setu ana pe seurt kentel a roid he vap : « Dalc'h mad ato d'an iliz santel ha d'ar velenien, ne c'heuz izom nemet an dra-ze. Evit arc'hant a pezo ato avoalc'h. Daoust ha Sant Per a c'houlenno arc'hant diganez evit digueri dit dor ar baradoz ? Na, mes goulen a rai diganez ha te as pezo dalc'het mad d'ar guir feiz. »

Er broiou e tu an Anternoz e rer ato ar brezel d'an iliz catolic. Er Russi, ervez a leverer, e rer goassa ma eller evit miret oc'h tud ar vro d'en em ober catoliked, hag evit clasc ober d'ar re zo catoliked distrei da fals relijion ar russianet. A bep seurt cristeri o deus da c'houzaon ar re ne fell ket dezho senti. Coll ho danvez, beza iskinet e pep guiz, kementse so nebeut a dra. Beza

casset en harlu d'ar broion eleac'h ne hars den gant ar ienien ha lakeat da labourat eno evel forsalo, setu petra zigouez gant cal. Evit ober dezho kemeret ar fals relijion ho bazater bete ma varvont avechou dipdan an taoliou. Lod a laker da zizec'ha gant ar zec'het. Ne roer dezho da zibri nemet pesket sall, ep herad dour ebet morse, ha kementse ken na varvont gant ar zec'het pe ken n'o devez dinac'het ar guir relijion. Lod all a laker en dour (bain); an dour-ze a vez great tan dindanba ken a vez deut tom avoalc'h d'ho foazat, hag e vougont eno pe e troont kein d'ar relijion catolic. Setu petra ra ar visserien eno evit gounit eno d'ho fals relijion. Evel a velit, ne ket evelse eo a ra missionerien an ilis catolic.

E Sax ne rer nemeur guelloc'h. Avechou, pa varf eur c'hristen catolic, ne lezer ket ar belleg da vont arag ar c'horf d'ar veret; avechou all ne lezer ket soun ar c'hiteier. E lec'hiennou ar re a laca badezi eur buguet en ilis catolic a so red dezho paea eur zom; ha mar deo paour tud ar buguet badezet, ar beleg en deus great ar vadiant eo a rene paea.

E Sax eo red caout eur bloas varnuguent evit caout guir da ellout chench relijion. Ma ve hano da eur c'hristen catolic d'en em ober protestant, ne ve ket sellet nemeur oc'h he oad, hag e ve lezet al lezen a gostez; Mes mar fell da eur protestant dont d'ar guir iliz, neuze eo red mad dezhan caout he vloas varnuguent founis pe ec'h elle coust ker dezhan.

E Leipzig, eun den iaouanc protestant a fellas dezhan dont da veza catolic. Dont a reas da gaout unan eus ar velcien. Studiet en doa hag e vouie mad ar relijion. Mes n'en doa nemet naonteg vloas. Ar beleg hen alias da ober eur veach, ha da vont da dremen eun nebeut derveziou en eur barrez a vercas dezhan e Rouantelez Pruss eleac'h n'ema ket an difen-ze so e Sax. Kementse a voue gouezet, hag ar beleg en doa roet an alize a voue red dezhan tec'het ha kuitat ar vro. Setu penaus ez eo ato iskinet var an douar ar guir gristenien.

ROM. — E Rom e comzer calz eus a zaon pe dri varo zigouezet e mare Nedelec. Eun demzel eus a gueur Marsail, devot meurbet ha mad dreist d'ar beorien, e devoa kinniguet he huez da Zoue evit ma plicheze gantha kaenderc'het hon Tad Santel ar Pap, ha difen an iliz santel. D'ar c'huezeg a vis kerzu e voa en em voestlet, ha d'an naonteg eo maro. Ha ne deo ket he goulenn eo en deus roet Doue dezhi?

Eur manac'h eus a Bologn, an tad Ladislas Drucklin, eus a urs Sant Fransez, a voa deut er bloas 1835 d'an Itali, evit tec'het arag iskin ar Russianet. Goude beza bet e meur a leac'h, e coezas clan, hag ar vedesinet a reaz he gas da Rom brema, ez eus vardro bloas. Eno, evel e leac'h all, e rene eur vuez santel ha dianavezet. Belleg oa, mes ne lavare ket an oferenn, rag he glenvet hen dalc'he var he vele. Hoguen, deis Nedelec, pe guer souezet ne voue ket he vreudeur eus ar gouent ma edo, oc'h he velet o tont en ho zouez d'an ofis! Goude an ofis e cofesseaz, e communiaz, hag ez eaz en dro d'he

gampric. Antronoz e voue cavet maro var leuren ar gambr. Lavaret e vije e voa c'hoaz e buez, he izili ne voant ket sounnet, hag e voue gortozet daou zevet araog he lacat var varv-saon. Peder heur varnuguent goude he varo e voue goadet, hag e rede ar goad evel eus a eun den beo. Ar vedesinet ha calz re all so bet testou a guementse. He gorf ne deo bet lakat en douar nemet c'huac'h dervez goude he varo. Ar manac'h mad-ze a ioa ganet deis Nedelec, hag a so maro deis Nedelec d'an oad a zeg vloaz ha triugent.

Comz a rer c'hoaz eus a eur breur eus ar scolachou cristen a zo maro evel eur zant deis Nedelec.

An oll gristenien catolic a ia var vell da rei diner Sant Per. Bete inzevien a guemer perz en ober mad-ze. Guelet a rer anezho o rei ha zoken o tont ho unan da Rom da zigas ho arc'hant. Etouez ar re iaouanc a ia d'en em lacat e servich ar Pap, e veler tud deut var an oad, daouguent; antercant, bete triugent vloas, pere a fell dezho mont ive da ziskuez ho c'harantez da viket Jesus-Christ.

Eun dra zo hag a ra diez d'ar scrifagnerien difeiz. Ar zoudardet, emezho, a ia da Rom, a veler en ilizou o pidi evel menec'h. Soudardet o vont gant ho bra-gueier ruz d'an daoulin var leuren eun iliz, daoust hag an dra-ze a ve dereat? Daoust ha trous sabrinier o steki oc'h pave eun iliz ne ra ket a boan en diouss-couarn? Ha ne rafent-hi ket guelloc'h mont d'an hostaleriou da zevi eur segalen bennag? Ma vije c'hoaz brema ez eus tri pe bevar c'hant vloaz eo e vije guelet soudardet o vont evelse da hidi, neuze pa ne voa nemet tevalijen var an douar! Mes hirio, e creiz ab-sclerijen, er bloas 1867!

An dud difeiz a voar ervad ne deo ket euz trec'hi-na touelli soudardet hag a voar pidi. G. M.

AN AVE MARIA.

Da Aotrou escop Orlean eo e tiemp ar pez zo ama varlerc'h.

Eun dervez, emezhan, e voe roet din da anaout pe guer gallouduz eo an Ave Maria. E kichen guele ar maro eo e teskis kementse, e kichen guele eur vere'h spirituel din hag a garien calz, eur c'hreg iaouanc hag e doa great ganen, n'oa ket c'hoaz goal bell, he c'hom-munion guenta. Ar c'hiz an oa da alia ar vugale a reo ho fasc kenta ganen, da zerehel mad da lavaret an Ave Maria. Ar c'hreg iaouanc-ma ne doa nemet uguent vloaz, hag a veac'h oa bloaz abaoe m'am oa he eureu-jet. Dale het e doa mad diam-ali, ha zoken, ervez eun ali all a roen d'ar vugale, e doa lavaret bemdez eun di-zenez bennag eus ar chapelled. Er pevar bloas diveza e lavare ato ar chapelled-hed-ha-hed. Merc'h oa da eur mapechal coz eus an Impalaered kenta. He zad, he mam hag he fried, he c'harie dreist.

Pinvidiguez, iaouankiz, guenet, eurusdet, ne vanket netra dezhi. Edo o paouez goulloudi, hag e doab'et eur map. Mad, e creiz an oll eurusdet-ze eus an douar, setu

en eun taol e voa red dezhi mervet. Eur c'hienvet hag a laz ato a voa croguet enhi, hag e ranke mervet hag eo me a voa carguet da gas dezhi ar c'helou euzaz-ze. Mont a ris.

He mam a ioa mantret gant glac'har, he fried ne vouie ket petra rea gant he anken, he zad a ioa sebezet oll, calz muioch eguet ar vam, ar pez a veler meor a vecli. Allez em eus evesseat penaus, pa zigouez eun anken vras bennag, ar merc'hed cristen a gaf muioch a ners da zougner ho soan evit ar vrezelourien caloneca. Mont a riz eta en ti glac'haret-ze, ha ne vouien penaus tostaat oc'h an hinj glan. Pe guer souezet ne vouen-me ket, pa voan eat beteg enhi, oc'h he guelet laouen o vusc hoarzin ouzin! Ia, ar c'hreg iaouanc-ze pehini a iea da veza sammet dre eur maro trum eus a greiz oll blijadurezou ar vuez-ma, a iea da veza dispartiet dioc'h he zad he c'harie kement, ar c'hreg iaouanc-ze a vus-c'hoarze ouzin! Ar maro a dostea a lammou braz; her gouzout a rea, ha goascoude he laouenidiguez a voa trec'h d'he anken.

Ne allis ket miret da lavarar dezhi: Pebez taol, va merc'h! hag hi a respontas din gant eur vouez ha ne allin morse da ancounac'haat: — ha ne gredit-hu ket ez in d'an Env?

- Va merc'h, eme ve, esperans vad am eus.
- Ha me, va zad, a so sur.
- Ha petra ra deoc'h, va merc'h, beza sur?
- Eun ali o poa roet din guech all.
- Pa seurt ali?

— Paris va fasc kenta, o poa va aliet da lavaret bemdez, ha da lavarar caloneg an Ave Maria. Hen lavaret em eus ep mancout, ha zoken pevar bloas so em eus lavaret bemdez ar chapelled, ha setu perag oun sur da vont d'an Env!

— Ha penaus, eme ve?

— Ne allan ket criji, emezhi, hag ar zonc'h-ze ne da ket diouzin abaoe ma zoun clan, ne allan ket criji em befé, epad pevar bloas, lavaret antercant guech bemdez d'ar Vere'hez: *Santez Mari, mam da Zoue, ped-it evidon, pec'herez baour, brema hag en heur eus va maro*, lia ne ve ket Mari em c'hichen ama brema pa zan da vervel. Ema-hi aze, me zo sur; pidi a ra evidon, hag em c'hasso d'an env.

Setu eno petra lavare din ar c'hreg iaouanc-ze, ha neuze e velis ar pez n'oun ket guest da verca, eur maro e guirionez eurus. Guelet a riz ar grouadurez-ze diners, sammet divar greiz he c'haera oad, o kuitat oll blijadurezou an douar, eun tad, eur vam, eur pried hag he c'harie hag a garie ive kement, eur buguel hag a gouste ker ker dezhi; he guelet a riz o kuitat kementse oll, ne ket ep daelou, mes gant laouenidiguez, o consoli, o kengerzi he zad, he mam, he fried, o venniguen he buguel; hag etouez kementse ne vele nemet an env, ne gomze nemet eus an env, hag he huanad diveza a voue eur musc'hoarz oc'h dor ar baradoz. G. M.

EUR SKOL NOZ. L'annad...
 ...
 ...

En eur zigori ar pennad-ma, lavaram penaos en or skol-noz, epad an deg pe pemzeg minud kenta, ar gomz a vize da dud ar skol da lavaret ar pez ho divize da lavaret, da rei da anaout ho douctou, da c'houlenn eur sklerijen vrasoc'h war eur poent deja dispiket, da ziskleria ho c'hredenn, ho zantimant war an dra-ma, war an dra-ont. Ar re ho devoa c'hoant, ar re teotet mad ha diaonig a lavare euz ho fenn ar pez ho divize da lavaret, lod all a lenne divar eun tamm paper ar pez ho divize skriferet ho-unan pe lakeet skrifa d'ezho, ha lod all, nebeutoc'h hardiz, a gase ho faper da lenn d'an aotrou Ambroaz. Hem-ma a gemmere merk euz a gemment a vize lavaret, a zastume an oll dammouguen paper skriferet, hag, et d'he di, ho diskrite war he gayer. A-wechou e respoute war an heur d'ar goulenno greet, mes peurlvua e c'hortoze ken a vize er skol all goude evid respont d'ezo.

Hiryo, an honarnour kezeg euz ar vourc'haden anvet Fanch, eo a gemmer ar gomz da genta. Fanch n'ed eo na lent na besk-tebd. Sevel a ra en he zao hag e komz evel-heu: « Assa! aotrou Kure, ha c'hw! « kompagnunez, mar permetit e zan da lavaret eur gerig. »

An aotrou Kure: « Parlanit, Fanch. »

Fanch: « Ho kentel pe ho prezegenn diveza, aotrou Kure, he deuz piket ac'hannon beteg ar beo. « Ne vouiyenn ker oan laer; mes c'hw! oz peuz prouvet « d'in sklær ez on. Na vit ket koulskoude da zonal, « aotrou Kure, em belle drong onzoc'h evid se. Nann, « joa em bezz ouzoc'h, er c'hontrol da veza digorel « d'in ma daou-lagad. A-liez a wech oz peuz klevet « ha guelet ac'hannon oc'h honarna kezeg, da zil. « Brema e welan em boa tor. Evel ma leverec'h en « ho kentel: « Al laboureriyen zil a zo laeron; lae- « rez a reont he zeiz war an Aotrou Doue. « Ia, laer e voann, hen amzao a ran. »

« Evid gwir, ma em belle c'hoant d'en em zizamma « euz a eul loden euz ma bec'h (ar giz a zo evel-se « abaoe on tad liag or mamm genta; int ho deuz « roet skouer d'eom), e lavarinn penaos ma hos- « tizyen a voa eun tamm ar penn-kaoz a gemment- « se. Int a zeue da zil, a gave digarez n'ho devoa « ket amzer da zont war ar pemdez, a bromete ous- « penn paea eur banne, ha setu ar paotr Fanch « neuze, peini ne daol ket en he voutou, pa gav- « ha n'ed eo nemeur skrúpuluz a hend all, da grogi « en he darkez hag en he vourzou ha d'en em la- « kaat da labourat. Mes an dra-ze ne c'hoarvezo mui, « m'hen goarant d'eo'h. N'ed on ket gwelloc'h eged « eun all, hen amzao a ran, mes evid laer ne fall « ket d'in beza, na laer var an dud, na laer ken- »

« nebeud war an Aotrou Doué, o lemmel he zeiz « digan-t-ha. Evel-se, pidi a rân ma hostizyen da « na pas dont mui, da zûl, gan ho digarezyou, da « zonjal lakaat ac'hannon-me da houarna d'ezô ho « c'hezeg. Da zûl e kaffont ma c'hovel sarret. Nann, « birviken mui, da zûl, ne c'houezo ma megin na « ne vezo klevet ma mourzoul o koueza war an anneu « pe n'ed eo ket Fanch ma ano mad. Setu aze ma « ger diveza. »

Fanch a azeaz neuze, hag an oll gompagnunez a voa prest da sklapa ho daouarn evid diskouez hen approuvent, e voant kontant euz an eza.

An aotrou Ambroaz a gemmeraz ar gomz d'he dro hag a lavaraz :

« Fanch ker, ma c'houffec'h pegemmet a plijadur « a rit d'in brema! Ma c'houffec'h pegen evuruz e « réntot ac'hannom, an aotrou Person ha me, mar « talc'hit mad d'ho ker, d'an dezo oz peuz greet « da respeti mad ar zûl eviziken! »

Fanch a ra eur stou d'he benn, en eur denna eun ta distag mad euz a voeled he galon.

An aotrou Ambroaz a gontinu :

« Ma mignon ker, deja ec'h istimenn ac'hannoc'h, « petra benâg ma oz peuz greet poan d'in, meur a « wech, dre ho labourou da zûl. Gouzout a reenn « e veoc'h eun den eon, leal, greet evid anaout ar « wiryonez hag evid he heulya, eur wech anavezet, « hag evel-se ec'h esperenn evid-oc'h. Mes brema ma « istim evid-oc'h a gresk, hag ar joa am beuz ouz- « oc'h, a zo dreist ar pez a c'houffenn da lavaret. « Dalc'hit mad eta, ma mignon ker, d'an dezo santel « a zo brema en ho kalon, hag e rapparfot evel- « se ar goall skouer oz peuz roet da dud ar barrez, « an ofans oz peuz greet da Zoue, hag e roffot ivez « seul vui a gonsolation d'ho peleyen, ma oz peuz « greet a boan d'ezo beteg-heu dre ho labourou disen- « net, d'an deiz santel. »

Goude-ze an aotrou Ambroaz, oc'h en em adresi d'an oll, a lavaraz :

« Assa! va mignoned, e zân hizyo da respont « d'ar goulenn a reaz d'in, disûl all, eunan ac'ha- « noc'h. Goulenn a ree petra a ziniffi profani ar « zûl, « Ni a glev a-liez, » eme-z-ha, « ar veleyen « o komz euz profani ar zûl. Lavaret a reont e profa- « ner ar zûl dre an dizurzou, dre ar c'hoariou hag « an ebatou re drouzuz, follentezuz, ha pere a zistro « an dud euz servich Doué... Mâ! » eme-z-han, « Me a garffe gouzout, eur wech evid mad, petra a « ziniffi profani. Morse ne glevan lavaret ar gomz- « se e touez an dud. »

« Ha-mâ! va mignoned, e zân da zisplika deoc'h petra a ziniffi profani, profani ar zûl. »

« Da genta : remerkom penâz ar ger profani a zeu euz ar ger latin profanare. »

« Mes petra a ziniffi profanare, e latin? Profanare, e latin, a ziniffi, er memez amzer, evel ma lavarfec'h hag an du hag ar gwenn, da lavared eo, siniffiout a ra,

er memez amzer, daou dra disenvel braz ha zoken ene- beg, (kontrol). 1° siniffiout a ra *roi eun dra da Zoue, konsakri, dediq.* — Ni na room morse d'ar ger profani ar ziniffians kenta-ze.

2° Siniffiout a ra lemmel digan Doue ar pez a zo d'eza, ar pez a dle beza implijet evid he zervich epken, hag en em zervicha euz anezha on-unan, evid-om on-unan; siniffiout a ra ober goall implij euz a eun dra zakr, binniget, santel; sklabeza, mastara, saotra, goalla eun dra zakr; lakaat eun dra ha na dle servichout nemed evid ezo-nmou ar Relijion, da zervichout evid on ezommou kommun. Evel-se, ar c'halir a zo greet evit lavaret an oferenn, hag evid se epken. Mes c'hwi a gemmer ar c'halir-ze evid eta oc'h ho taol : c'hwi a ra eur zakrilach! An dour binniget a zo greet evid lakaat sin ar groaz en or c'herc'henn, evid taoler war-n-om ha war on traou da vinniga, da zantelezi anezo, da jasseal an drouk-spered diwar-n-ezo.... Mes c'hwi a gemmer an dour binniget, evel eun dour ordinal hag en em zervich euz an eza evid en em voelc'hi, evid ober ho soubenn ha traou-all : c'hwi a brofan an dour binniget-ze, c'hwi a ra eur zakrilach. Ar vered a zo eul lec'h santel, binniget, greet evid enterri korfou an dud varo. Hogen, c'hwi a ya d'ar vered da ober ho c'hoariou, ho tansou ha traou ken dizeread all : c'hwi a brofan ar vered, c'hwi a vane a respet d'an dud varo, d'ho relegou a renoz en douar zantel-ze, c'hwi a zo eun den difeiz ha sakrilach! — Hag evel-se euz an oll draou sakr, binniget, konsakret dre bedennou ha lidou an Iliz, ober goall implij euz anezo, a zo ho profani, a zo beza sakrilach. Hag evel-se ivez euz ar zûl; hen kemmer evid ober on labourou ordinal, evid en em roi d'an dizurzou, da zivertisamanchou trouzuz, follentezuz ha pere a zistro an dud euz servich Doue, evel ma eo an dansou, ar chaseou pe hemolehyou braz gan chas ha trompillou, ar redadegou kezeg, a zo profani an deiz santel-ze, a zo beza sakrilach en he genver.

Ar zûl a zo eun deiz a beoc'h, eun deiz a bedenn, eun deiz evid honori Doue en eur feson spesial, eun deiz evid sonjal, prederya er gwiryonezou eternal, evid pourvezi da ezommou on ene o vont d'an olisou hag o tostaat ouz ar zakramanchou, ha ne ket eun deiz a foar hag a vare'had, ha ne ket eun deiz evid en em zirolla, en em zisipa dre ar gwel euz ar marvailloù, o kemmer perz en ebatou, c'hoariou, divertisamanchou trouzuz.

J.-K. KERZALE, *Beleg ar Zalet.*

(*Eur pennad all eur wech all.*)

AR PAOUR KOZ HAG EUR BELEK.

Brema so eunn tregont vloaz-bennak, eur paour keaz coz en em zalc'he adaleg ar mintin beteg ann noz e toull-dor unan euz a ilizou Paris. Jacques e oa he han. En em lakaat a rea eno evit goulenn ann a-luzen digant ar re a ie hag a zeue. Trist ha teval e oa

he zremm gant-han. Morse ne lavare gher da zen e-bed. Plega a rea hep-ken he benn pa vije roet d'ezhan eur guennec bennac. P'en em zispartie ann truillou a oa enn dro d'ezhan, e vije guelet e oa eur groazie vihan enn he ghere'hen.

Eur belek iaouank, hanvet ann aotrou Paulin de *** a ie bep mintin da lavaret he overen da iliz Sant-Germen. Ouz dor ann iliz-ze en em gave ar paour keaz Jacques. Ha pep mintin en divije eur guennec digant ar belek-se. Eur bloaz goude, pe war-dro, ann Aotrou Paulin ne wel mui ar paour e toull-dor ann iliz. Daou pe dri deiz a dremenn ha ne glever kelou-e-bed euz a Jacques. Ha clanv a vefe-hen choumet? Na ouezer netra. Ann Aotrou Paulin, den a galon vad, mar so bet biscoaz, a c'houlenn digand hen-hont hag he-ma kelou euz ar paour coz. Dre fors goulenn hag enclask, e teu da c'houzout eo choumet clanv. Ha pelec'h eta, eme-z-han, e choum-hen! Unan bennag a lavar d'e-z-han e tlie choum e ru-nevez Sant Germain. Eur mintinvez eta, goude beza lavaret he overen, ann Aotrou Paulin a ieaz da welet ar paour coz. Erruet el lec'h ma choume, e skoaz war ann or. Eur vouez hanter-vouget a respountaz : Digorit. Mont a reaz e-barz ar gambr, pe kentoc'h, eunn toull du dindan toen ann ti. Jacques, evit gwir, a oa eno astennet war eur gwele, pe mar kirit, war eunn tamm kolo pe plouz. He zremm a oa teval hag he zaoulagad hanter-varo. Ah! eme-z-han, kenta m'her gwelaz, c'houi eo a zo aze, Aotrou Paulin? Re vad oc'h, Aotrou da zont da welet eur paour keaz evel-d-ounn. Ne veritann ket kement-se. Petra a livirit-hu aze, Jacques, eme ann Aotrou Paulin? Ha n'ouzoc'h-hu ket penaoz ar veleien a zo mignoned ann dud paour hag ar re glanv? Ha neuze, en em anavezout a reomp ann eil eguile pell amzer so? Ah! Aotrou, ma outec'h...., ma anavezfec'h ac'hanoun! na gomzfec'h ket ouz-in er ghis-se. Nan, nan, ne gomzfec'h ket ouz-in gant kement a garantez. Me a zo eunn torfedour braz, eunn den millghet gant Doue ha gand ann dud. Millghet gand Doue ha gand ann dud! Mes, Jacques, eme ar belek, ha sonjal a rit-hu er pez a livirit aze? Ah! Jacques keaz, ne livirit morse d'in euz ar seurt comzou. Doue a zo leun a vadelez. Mar hoc'h euz pec'het enn eunn doare bennac, ho pet keuz ha glac'har; covessait ho pec'hejou, hag e vezint pardounet. Doue a bardoun ann holl bec'hejou, n'euz fors peken euzus e vent bet, pa ve glac'har anezho er galoun. Oh! nan, evid-oun-me n'euz ket a bardoun, re vraz pec'hejou em euz great. Ha perak'ta, eme ar belek? Ha n'hoc'h-eus-hu ket keuz ha glac'har anezho? Mar am euz keuz ha glac'har? Mar am euz keuz ha glac'har, a respountaz Jacques, enn eur sevel war he goazeg, hag o tigheri daoulagad estlammet? Mar am euz keuz ha glac'har? Oh Lia, keuz ha glac'har am euz. Setu daou-ughent vloaz-so e ouelan va fec'hejou, hag ez ounn evelato eunn den millghet, eunn den hag a zo daounet. Ar belek a lekee he holl boan d'her c'honsoli ha da rei caloun d'ezhan : mes ne oa ket evid hen ober. Eur

myster spountuz a oa euzel e gouled galoun ar belek herkes, hag enn he zizesper ne oa ket evid ansao he doue jou. Coulsoude o welet peghen dous ha peghen garantez en em ziscoueze ann Aotrou Paulin. Jacques ne helle mui herzel hag a discargaz evel-hen he galoun d'ar belek mad-se.

Me a oa, eme-z-han, merer enn eur c'hiastel a oa da dud pinvidic bras, pa savaz ann dispac'h pe ar Revolution. Va mistri a oa tud euz ar re wella, ann Aotrou Comt, ann itrounn, ho diou vere'h hag ho mab. Kement mad am boa a zeue digant-ho, va c'har, va descadurez, ar pezik a vadou am boa dastumet. Mes, siouaz! pa er-ruaz ann deziou-se a spount hag a lazerez, e teuz d'ho gwerza. Cuzet e oant, ha me a ouie pelec'h. Ho discillia a riz evit caout ho madou, evel ma oa prometet d'ann nep a raje kement-se! Holl int bet condamnec d'ar maro; holl nemed ar mab Paulin a da re iaouank evit beza lazec. Ann Aotrou Paulin a fosc neuze eunn han-naden. Eur c'houezen ien a ziver euz he dal. Aotrou, eme Jacques (n'en doa ket lekeat evez ouz calhad ar belek) Aotrou, eme-z-han, ha n'e ket eunn dra euzuz kement-se? Clevet am euz ho c'hondaouni d'ar maro; gwelet am euz lakaat anezho ho fevar war ar c'harr, ha gwelet am euz ho fennou o coueza dindan contel ar ghillotin, den eriz ha dinatur ma zoann. Abaoue ann amzer-se, n'am eus na peoc'h, na renoz. Gouela a rann war-n-ezho, pedi a rann evit-ho. Ho gwelet a rann bepred aze dira-z-oun. Setu aze ho fortrejou a isplih d'ar vogher enn tu all d'ar goz liser-se. Ar crucifi a wellt e penn va gwele a oa hini ann Aotrou; ar groaz-vihan a zo em c'herc'hen a oa doughet gand ann Introun. Oh! va Doue, pebez torfed, pebez horrol, pebez iogratiri! Aotrou Paulin, ho pet truez ouz-in; pedit evid ar falla hag ar reuzeudika den so bet biscoaz.

Ar belek en em zalc'he war he zaoulin e kichen gwele ann hini clanv, mes couts lavaret, hanter varo e oa o clevet ar pez a glève. Choumm a reaz eunn hanter-heur hep finval na penn, na brec'h na troad. Goude e savaz sioul, hag e lavaraz : Jakes keaz, ho pet fizians. Doue a zo bet mad ha garantezuz meur-bed enn ho kenver. Me eo ar Paulin bihan-se a zo bet espernet, o veza re iaouank evit beza lazec gand ma zad, ma mamm ha ma c'hoarezed. Pardouni a rann d'hoc'h maro ma c'herent, ha mar kirit, warc'hoaz me selaouo ho covession, ha Doue he-unan a bardouno d'e-hoc'h ann holl dro g' hoc'h euz great. Ann deiz war lerc'h eta e oa covesseet ar paour coz gand ann Aotrou Paulin he-unan, ha war a sriver, eunn hanter-heur goude e varvaz. M. D.

Le Béguin: 57.

Hano ar Zant evit ar Sizun-ma.

DILLUN, 28 Guenver, S. Julian, escop.

DIMEURS 29, S. Fransez a Zal.

DIMERC'HER 30, Santes Martina, guere'he: ha merzerez.

DIZIQU 31, S. Per Nolazec, confesour.

DIRGUENER, 1 C'huevrer, S. Ignas, esco: ha merzer.

DISSADORN 2, Gouel ar Chandelour.
DISSUL 3, Pevare sul goude ar Rouanez. Santez Genovefa, guerc'hez.

An Aviel hirio :

Jesus a lavaras d'he ziskibien : Rouantelez an Env a vezo henvel oc'h deg guerc'hez pere a guemeraz ho c'hleuzeuriou hag a iez a ziarben d'an den nevez ha d'ar plac'h nevez. Hoguen pemp eus ar guerc'hez-ze a voa diskiant, ha pemp all a voa fur. Ar pemp diskiant, o kemeret ho c'hleuzeuriou, ne gaschont ket a eol gantho. Ar re fur avad a gassas gantho eol da lacat en ho c'hleuzeuriou; hag evel ma talec an den nevez, ar guerc'hez oll en em roas da voredi hag a gouscas.

Hoguen setu e creiz an noz e cloffer eur griaden : Ema erru an den nevez, it a ziarben dezhan!

Neuze ar guerc'hez a zavaz oll, hag a guempennaz ho c'hleuzeuriou, hag ar re ziskiant a lavare d'ar re fur : Roit d'eompni lod eus oc'h eol, rag hor c'hleuzeuriou ni ne jomont ket var elum.

Ar guerc'hez fur a respontas dezho : Gant aoun ne ve ket avoalc'h evidoc'h hag evidomp, eo guelloc'h deoc'h mout da gaout ar re a vers, ha prena ar pezo oc'h eus izom.

Mes epad ma zeant da brena, e tigonvez an den nevez, hag ar re a voa e pourchas, a voue diguemeret gantha c'ti'n eured, hag e voue serret an or.

Divezatoc'h e teuz ive ar guerc'hez all, hag e lavarent : Aotrou, Aotrou, digorit deomp!

Mes hen a respontas dezho : E guirionez me hen lavar deoc'h; n'oc'h anavezant ket.

Beillit eta, rag ne ouzoc'h nag an deiz nag an heur.

(S. Vaze XXV. I.)

KELEIER.

Setu deut ienien, scorn hag erc'h evel a ioa c'hoant da velet o tont pell zo. Doue en deus roet d'an dud ho goulen; an dud a dle ive ta he drugarecat. Ar scoulat ienien a zo a dra sur cre avoalc'h ha padout avoalc'h a ra ive evit laza an darnvuia eus ar prenet guenn hag eus an amprevanet all a so en douar hag a ioa aoun na deujent en nevez amzer da lonca ha da zistruja oll frouez an dobar, ar pezo a vije digouezet ep mar ma na vije bet epad ar goan nemet glebor ha clouarien evel a voa bet bete vrema.

E Kemper, en derveziou-ma eo diskennet ar benveg evit merca an domder hag ar ienien (thermomètre) eis merc hag ouspen izeloc'h evit ar scorn, da lavaret eo, ez eo eun tam mad ienoc'h evit na deo red d'an amzer beza evit rei scorn.

Lavaret a rer ez eus hano, e departamant Costezan-Nord, da lacat kibri tan da veachi var an hentchou ordinal, ep honarn, eus an eil kear d'eben. Eo unan bennag eus an departamanchou all oar comanset da veachi evelse eun nebeut so. Deut oar abenn a leverer, da ren ar c'hiri tan evelse var an

hentchou evel ma tener ar c'hazozion treinet gant kezeg.

An Aotrou Tregaro, nevez hanvet kenta beleg an dud a vor, a so hanvet vikel vraz a honor gant Aotrou Escop Guenet.

Er sizan dremenet ez eus bet adarre meur a dan goall en escopi Kemper. Eleac'h ma zeus lin dreist oll eo e bet an tan. Dre an amzer ien en em laker da guempen al lin, hag ec'h ancounac'haer avechou eo cas lacat an tan enha.

Ervez ar c'hazetennou ez eus erc'h e vals a garteriou, ha zoken muioc'h evit er c'harter-ma, bete ma zeo stanket an hentchou honarn e lec'hiennou. Comz a rer eus a dud chomet ama hag ahont da vervel gant ar riu etonez an erc'h, ha peurliessa tud vezo; ar pezo ne ket souez.

Caout a reomp en eur gazetec (Chronique religieuse) ar pezo zo ama varlerc'h, divar benn ar C'hardinal Gousset. Arc'hescop Reims, maro nevez zo. Map oa da eul labourer douar. Ar iaouanca oa eus ar vugale, azaleg he guenta bloaveziou en devoa c'hoant da studia; mes he dad hen dalc'he da labourat hag a lavare dezhan : Thomas, pa vezo savet da vredeur, ez i d'ar studi, mar kerez. Thomas eta a voue red dezhan chom da labourat an douar beteg he zeiteg vloas. Neuze e c'hellas mont da studia, ha ne voue ket pell evit dont da veza eun den goueziec.

Var guementse e leverer penaus labourerien douar, Bretonet eus a guichen Donges, o veza deut da Paris, eleac'h ma edo nenze ar C'hardinal, o devoa eur c'hoant bras d'he velet. Casset e vouent beteg enha. Ar c'hardinal ho diguemeraz mad, hag en em lakeas da goms dezho eus al labour douar. Meuli a reas cals ar vicherze pelhini a ro bara d'an oll. D'ar fin e lavaras dezho : Me ive, va mignonet, amiens troet an douar eveldeoc'h, me ive so bet erog e postel an alar. Mad, eme unan eus ar Vretonet, c'hui Aotrou C'hardinal, oc'h eus gouezet en em denna cals guelloc'h evidompni!

Eur vech all ar C'hardinal o veza oc'h ober tro he escopi, a zigonezas gant eul labourer a voa chomet he gar hag he ejennet en eun toul. Ne allent ket sevel anezan. Ar charretour a scoe gant he loenet hag a loske leoudouet. Ar C'hardinal a reas d'he vevel chom a za gant he garroz, a ziskennaz hag a iez da gaout al labourer : Va mignon, emezhan, perag e loskit-hu leoudonet evelse? Perag skei gant al loenet-ze pere ne ouzont ket petra fell deoc'h? Sellit, me ia da ziskuez deoc'h petra dleit da ober. Ar C'hardinal en em lakeas da gas an ejennet, ha kerken e teujont eus an toul bouillen ma voant chomet enha.

Ar C'hardinal he unan en deveze plijadur o coms a guementse divezatoc'h. G. M.

TAOLEN FEIZ HA BREIZ EVIT 1866.

31E BLOAVEZ.

N° 53. — 3 C'huevrer.

Keleier. — Ar Breur hag ar C'hoar. — Pense ar Boristhen. — Yvonic Timad. — Beterabéz. — Kan eur Vam. — Aliou ha Keleier. — p. 41.

N° 54. — 10 C'huevrer.

Mandamant an Aotrou'n Escop. — Histor zantel. — Ezañ ha Jacob. — Buez Mari Amis Picard. — Melchen. — An El hag ar Buguel. — Ar Breur hag ar C'hoar. — Keleier. — p. 9.

N° 55. — 17 C'huevrer.

Mandamant an Aotrou'n Escop. — Keleier. — Aluzen ar Bars. — Ar C'holera e Brest. — Ar Pap hag an diou Zemezel. — Keleier. — p. 47.

N° 56. — 24 C'huevrer.

Keleier. — Buez Mari Amis Picard. — Fals Doctoret. — Histor zantel; Dina. — Yvonic Timad. — Aluzen ar Bars. — Keleier ha Marvailhou. — Eun Aotrou trezus. — p. 23.

N° 57. — 3 Meurs.

Keleier. — Buez Mari Amis Picard. — An Tad Milleriot. — Levr al Labourer. — Nevezentiou. — Eun den madeleuz. — Uvre eun Ermit. — Eun toul douar. — Eur Zoudart nec'het. — p. 33.

N° 58. — 10 Meurs.

Keleier. — Histor zantel; Maro Rachel hag Izaac. — Aliou d'an Tiejien. — An Azen hag ar C'h. — Eur Pried criz. — Ali. — Keleier. — p. 41.

N° 59. — 17 Meurs.

Keleier. — Fals Doctoret. — Yvonic Timad. — Aliou d'an Tiejien. — Eal mad hag Eal fall. — Ar Scur Mari Billet. — Keleier. — p. 49.

N° 60. — 24 Meurs.

Keleier. — Histor zantel; Joseph. — Eur C'hrog. — Eal mad hag Eal fall. — Ar Jardiner diot. — Keleier. — p. 37.

N° 61. — 31 Meurs.

Keleier. — An Aotrou du Fretay. — Buez Sant Ervoan. — Yvonic Timad. — Cantic'en honor d'hon El mad. — Keleier. — p. 63.

N° 62. — 7 Ebrel.

Keleier. — Eur vro dindan ren an diaoul. — Pense. — Histor zantel; Joseph. — Buez Sant Erwan. — Eur Chreg kristen. — Aliou d'an dieien. — Levr al Labourer. — Kentel roet gant ar maro. — Keleier. — p. 73.

N° 63. — 14 Ebrel.

Keleier. — Tro an Aotrou'n Escop. — An den gouez. — Aliou d'an dieien. — Kentel roet gant eun eont d'he niz. — Keleier. — p. 81.

N° 64. — 21 Ebrel.

Keleier. — Histor zantel. — Buez Sant Erwan. — An dud brudet dre ho buez hir. — Person Mablen. — Yvonic Timad. — Aliou ha Keleier. — p. 89.

N° 65. — 28 Ebrel.

Keleier. — Fals Doctoret. — Ki ar zouavet. — Ar groas pounner. — Levr al Labourer. — Keleier. — Eul laer kezeg.

— Eun den enterret e plas eun all. — Marvailhou. — p. 97.

N° 66. — 5 Mae.

Keleier. — Tri Jesuist dirag ar Pap. — Histor zantel. — Buez Sant Erwan. — Ki ar zouavet. — Eur glaoustre. — Keleier. — p. 105.

N° 67. — 12 Mae.

Keleier. — Kentel spontus. — Fals Doctoret. — Yvonic Timad. — Levr al Labourer. — Eunedmad da Dimadeuc. — Keleier. — p. 113.

N° 68. — 19 Mae.

Keleier. — Kenteliou a skuer vad. — Histor zantel. — Fals Doctoret. — Buez Sant Erwan. — An Archer hag ar Zarpant. — Keleier. — p. 121.

N° 69. — 26 Mae.

Keleier. — Histor zantel. — Ar vam hag ar buguel elan. — An tad mad. — Buez Sant Erwan. — Yvonic Timad. — Eun den distroet oc'h Doue. — Marvailhou. — p. 129.

N° 70. — 3 Even.

Keleier. — Buez S. Erwan. — Mission Elliant. — Danevel divar ben maro an tad Gury. — Peric ar Milliner. — Goal'heur eur marc hadour iuzev. — Levr al labourer. — Keleier. — p. 137.

N° 71. — 9 Even.

Lizer ar Pap. — Keleier. — Histor zantel. — Buez S. Erwan. — Studi var an vurbuen. — Levr al labourer. — Peric ar Milliner. — Ar c'hanval. — Keleier. — p. 145.

N° 72. — 16 Even.

Keleier. — Buez S. Erwan. — Danevel var maro an tad Gury. — Ar Vurbuen. — Peric ar Milliner. — An azen hag ar marc'h coz. — Eus al labouset a-ra vad. — Keleier. — p. 153.

N° 73. — 23 Even.

Lavar eun Doctor. — Keleier. — Buez S. Erwan. — Ar Vurbuen. — Itron-Varia an Tabernacl. — Merzerinti S. Per. — Aliou. — Keleier. — p. 161.

N° 74. — 30 Even.

Procession. — Keleier. — Histor zantel. — Buez S. Erwan. — Devotion da S. Per. — Ar Vurbuen. — An ddu vecher. — Keleier. — p. 169.

N° 75. — 7 Gouere.

Procession ar Sacramant. — Keleier. — Histor zantel. — Kentel divarben ar Sacramant. — Ar Vurbuen. — Levr al labourer. — An Itron-Varia a druez. — Marvailhou. — p. 177.

N° 76. — 14 Gouere.

Procession. — Keleier. — Mission Plogastel S. G. — Buez Franseza Damboaz. — An Itron-Varia a druez. — Ar breur hag he c'hoarik. — Keleier. — p. 185.

N° 77. — 21 Gouere.

Ar bed var falla. — Keleier. — Histor zantel. — An Itron-Varia a druez. — Buez Franseza Damboaz. — Bleo guenn Lemier. — Ar c'hilleien raden. — Keleier. — An alvocad Kerguon. — Eur c'hi e Carroz. — p. 193.

N° 78. — 28 Gouere.

Keleier. — Histor zantel. — Cayenn. — An Itron-Varia a druez. — Buez Franseza Damboaz. — Levr al labourer. — Bragou kenta Paolic. — Keleier. — p. 201.

N° 79. — 4 Eost.
 Keleier. — Cayen. — Buez Franseza Damboaz. — Levr al labourer. — Salladen Sixt V. — Ar Bars. — Keleier. — p. 209.

N° 80. — 11 Eost.
 Keleier. — Histor zantel. — Ar vezen zero. — Caien. — Buez Franseza Damboaz. — Kan evit gopel anter-east. — Keleier. — p. 217.

N° 81. — 18 Eost.
 Keleier. — Eur guevridi evit ar Verc'hez. — Ferscol Trevarez. — Buez Franseza Damboaz. — Keleier. — An urziou. — p. 225.

N° 82. — 25 Eost.
 Keleier. — Histor zantel. — Buez Franseza Damboaz. — Eun torfet er Vandee. — Levr al labourer. — Maro Christina a Savoia. — Eur varnediguez dispar. — Keleier. — p. 233.

N° 83. — 1 Guengolo.
 Keleier. — Cayen. — Buez Armela. — Ar venec'h. — Keleier. — Ar zarpant. — p. 241.

N° 84. — 8 Guengolo.
 Keleier. — Histor zantel. — Buez Armela. — Ar venec'h. — An Trec' etc. — Keleier. — p. 249.

N° 85. — 15 Guengolo.
 Keleier. — Fals Doctoret. — Buez Armela. — Potr ar c'hrouer. — Eur micherour truezus. — Perag eo trec'h an dud venn. — Keleier. — p. 257.

N° 86. — 22 Guengolo.
 Keleier. — Buez Armela. — Cayen. — Marina. — Lizerou eur beleg iaouanc. — Keleier. — p. 265.

N° 87. — 29 Guengolo.
 Keleier. — Histor zantel. — Fals Doctoret. Lizerou eur beleg. — Marina. — Keleier. — Tad an ezen. — p. 273.

N° 88. — 6 Here.
 Keleier. — Histor zantel. — Fals Doctoret. — Buez Armela. — Marina. — Keleier. — Eur foar kizier. — p. 284.

N° 89. — 13 Here.
 Keleier. — Ar Zul. — Annaik hag ar Zoudart coz. — Buez Armela. — Ar manac'h hag ar c'hoant coustet. — Lizerou eur beleg. — Keleier. — p. 289.

N° 90. — 20 Here.
 Keleier. — Histor zantel. — Ar Zul. — Buez Armela. — Lizerou eur beleg. — An daou zorn bras. — An tad dizoue. — Keleier. — p. 297.

N° 91. — 27 Here.
 Keleier. — Histor zantel. — Buez Armela. — Ar Zul. — An daou zorn bras. — An Tad Dizoue. — Keleier. — Dourier beuz. — p. 305.

N° 92. — 3 Du.
 Keleier. — Histor zantel. — Buez Armela. — An daou zorn bras. — An Tad Dizoue. — An daou veacher hag an histren. — p. 313.

N° 93. — 10 Du.
 Keleier. — Histor zantel. — Buez Armela. — Ar Zul. — An tad coz hag he verc'h vian. — Purgator. — Keleier. — p. 321.

N° 94. — 17 Du.
 Keleier. — Lizerou eur beleg iaouanc. — Mission Pleuveil. — Buez Ian Discalceat. — Keleier. — p. 329.

N° 95. — 24 Du.
 Keleier. — Ar Zul. — Lizerou eur beleg iaouanc. — Buez S. Laurans Justinien. — Buez Ian Discalceat. — An Tad difeiz. — Keleier. — p. 337.

N° 96. — 1 Kerzu.
 Keleier. — Histor zantel. — Advision S. Gily. — Ar Zul. — Buez Ian Discalceat. — An tad difeiz. — Keleier. — p. 345.

N° 97. — 8 Kerzu.
 Keleier. — Ar Zul. — Buez S. Laurans Justinien. — Buez Ian Discalceat. — Munudic. — Lizer da rener ar gazeten. — Keleier. — p. 353.

N° 98. — 15 Kerzu.
 Keleier. — Histor zantel. — Buez S. Laurans Justinien. — Eur verouri nevez. — Munudic. — An tad difeiz. — Levr al labourer. — Keleier. — p. 361.

N° 99. — 22 Kerzu.
 Keleier. — Ar Zul. — Oferen anteroz. — Lizerou eur beleg. — Mission Kernonez. — Keleier. — p. 369.

N° 100. — 29 Kerzu.
 Keleier. — Arc'h-Breunier an Itron-Varia a Esperans. — Ar Zul. — Noz Nedelec. — Munudic. — Hano ar Zant. — Keleier. — p. 377.

N° 101. — 5 Guenver.
 Keleier. — Mam eur Missionner. — An tad difeiz. — Munudic. — Eul lean coz oc'h ober tro. — Keleier. — p. 385.

N° 102. — 12 Guenver.
 Keleier. — Histor zantel. — Skol noz. — Mam eur Missionner. — Munudic. — Tad coz mizer. — Keleier. — p. 393.

N° 103. — 19 Guenver.
 Keleier. — Histor zantel. — Skol noz. — Levr al labourer. — Tad coz mizer. — Keleier. — Yvonie o vofft d'ar c'hatekismou. — p. 401.

N° 104. — 26 Guenver.
 Keleier. — An Ave Maria. — Eur skol noz. — Ar Zul. — Eur paotr coz hag eur beleg. — Keleier. — Taolen. — p. 409.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 19 Guenver.	PONT NABAT — 17 Guenver.
<i>Priz ar c'hant liour.</i>	<i>Priz ar c'hant liour.</i>
Guinis 46 lur, 45 c.	Guinis 46 lur, 36 c.
Segal 40 lur, 47 c.	Segal 40 lur, 04 c.
Eiz » lur, » c.	Eiz 40 lur, 50 c.
Ed-du 7 lur, 62 c.	Ed-du 8 lur, 54 c.
Kerc'h 10 lur, 67 c.	Kerc'h 10 lur, 88 c.
Avalou-douar 7 lur, 00 c.	Avalou-douar 3 lur, 90 c.

Ar Gerant. Ar DE KERANGAL.
 Kemper, moulet gand Ar DE KANGAL, Moulter an Escopti.

